

AL LIAMM 174

TAOLENN

N' eo nemet pallenn indezat gant PER DIOLIER	3
Tri brezeliad gant JAKEZ KONAN	4
Eñvorennoù gant YEUN AR GOW	12
Skol Summerhill gant A. S. NEILL (tr. D. Bourdinière)	20
Istor Breizh gant LA BORDERIE (tr. R. Hemon)	30
Goanag Erin gant J. CONNOLLY (tr. Eflamm gKervilio)	42
Ar c'hensonennoù dibenn ger gant ROPARZ HEMON	54
Mari Vorgan gant BENEAD	59
Paourkaezh brezhoneg gant F. KERVELLA	61
Notennoù	66

FR ISSN 0024-1733

N'eo 'met ur pallenn indezat

N'eo 'met ur pallenn indezat, Señora,
nemet un tamm dilhad paour,
gant tresadennoù eeunek.
Hag ouzhpenn damuzet ez eo.
Ne c'hell kinklañ 'met ur pezh dister.
Hep mar an hini he deus e aozet
gant bizied gwastet
dre labour re grin,
a zo marv bremañ.
Lakaet he doa warnañ
livioù skedus he meuriad
ha tamm eus he c'harantez.
Goloet en deus
kein ar pone
hag huñvreoù bugale vihan
teñval o c'hroc'hen.
Ur gwiskamant a netra,
gwelout a rit,
n' eo ket danvez un dastumad,
lezit anezhañ d' ar gaezhidi,
n' eo 'met ur pallenn indezat, Señora.

Sant-Servan, 29.12.73

Tri brezeliad

(pezhig-c'hoari)

TUD AR C'HOARI :

MARIANNA, 45 bloaz, ostizez.

JOB AN DREV, 40 vloaz, bet soudard er Brezel Daou-ugent.

GWILH v-BERRESAE, 60 vloaz, soudard kozh eus as Brezel Pevarzek.

LUKAZ POUZEVARA, 60 vloaz, soudard kozh eus ar Brezel Pevarzek.

Tremen a ra an traoù e-tro ar bloavezh naontek kant hanter-kant, d' an unnek a viz Du, deiz gouel ar Soudarded Kozh, en un davarn vihan, enni un daol pe ziv, kadorioù, un daol-evañ hag a-dreñv homañ, ouzh ar voger, lañsedoù karget a voutailhadoù a bep seurt.

A diadreñv al leur-c'hoari ez eus ur prenestr bras o skeiñ war an hent.

Dek eur noz eo. Emañ Marianna, an davarnourez. o renkañ an traoù. A-greiz-holl e paouez gant he labour hag e chom da selaou un drouz iskis o tonet diwar an hent.

MARIANNA. - Job hag e daboulin ! Da zek eur noz ! Evelkent !

Monet a ra war-du an nor met a-raok dezhi bezañ erru e-kreiz al leur e teu en ti un den bras, blev louet stank war e benn, bihan e zaoulagad gant ar mousc'hoarzh a c'holo e zremm a grizennoù. Ur vedalenn a zo stag ouzh kolier e chupenn : Gwilh v-Berresae eo.

5

War e lerc'h ez antre ur paotr, en hevelep oadoù gantañ, met tev ha raz e zremm, moal e benn. Mousc'hoarzhin a ra laouen ivez hag evel e gomper e toug ur vedalenn ouzh kolier e chupenn : Lukaz Pouzevara an hini eo.

En diwezh e tegouezh Job an Drev, yaouankoc'h egeto, ruz-ruz e fri, dezhañ ur pennad blev du kreouichennek, dic'hoarzh avat, en ur daboulinat.

JOB (goude daou flap hag ur strap diwezhañ war e venveg).
- Salud Marianna !

Marianna emañ he daouarn ganti war he divskouarn.

AN DAOU ALL. - Salud, Marianna !

MARIANNA (o tiskouez Job). - Bouzaret on gant ar peñse-mañ.

GWILH. - Serjant-major an Drev, peoc'h gant ho tam-tam : bouzaret eo an ostizez.

LUKAZ. - Job n'eo bet biskoazh serjant-major.

GWILH. - Korporal an Drev, klenkit ho kastelodenn houarn-gwenn !

JOB. - Dismegañs ha dizenor, setu ar pezh a daoler ganin. Hag eñ d'ober un daboulinadenn hir.

MARIANNA (droug enni). - Ha n' ac'h eus ket klevet, Job an Drev, tabouliner bras Kerlev ? Lavaret ez eus dit paouez gant da dam-tam houarn-gwenn.

JOB. - Petore tam-tam ?

GWILH. - Da daboulin, mar deo gwell ganit.

JOB. - Un daboulin eo neuze. N' eo ket un tam-tam.

LUKAZ. - N' eo ket un tam-tam hag un tam-tam eo evel-kent.

JOB. - Mar deo ma zouboulin un tam-tam perak e rae Gwilh ur gastelodenn anezhi bremaik ?

GWILH. - Ur gastelodenn houarn-gwenn. Hi ! hi ! hi !

JOB. - Ur gastelodenn ma zam... ma zouboulin. Perak ?

GWILH. - Dre ma 'z eo ur gastelodenn.

JOB. - Feuket on.

LUKAZ. - Ur gastelodenn, trouz ar faout ganti.

JOB. - Ha gouest out-te, Lukaz Pouezevara, da anavezout ur gastelodenn diouzh un daboulin ?

LUKAZ. - Gouzout a ran ez eo ur gastelodenn a zougez war da gof, bepred !

JOB. - Soudard Pouezevara, lavarit din petore kemm a zo etre ur gastelodenn hag un daboulin ?

LUKAZ (sonn ha reut evel ur soudard war evezh). - Korporal an Drev, n' ouzon ket, evit bremañ.

6

Monet a ra Lukaz d'azezañ e penn an daol.

JOB. - N' on ket souezhet.

GWILH. -Hi!hi!hi!

JOB. - Soudard Berresae, kit en ho koazez ouzh an daol aze ha na rit mui « hi ! hi ! hi !

GWILH (o vonet d'azezañ en ur zerc'hel da c'hoarzhin). - Hi!hi!hi!

JOB. - Perak e talc'hez-te d' ober « hi ! hi ! hi ! » ?

GWILH. - Lukaz an hini eo a laka fent din... Hi ! hi ! hi !

JOB. - Penaos ?

GWILH. - Ne oar ket peseurt kemm a zo etre un daboulin hag ur gastelodenn... Hi ! hi ! hi !

JOB. - N' eo ket fentus.

GWILH. - Eo, fentus eo, hi ! hi ! hi !

JOB (o lakaat e daboulin war al leur hag o vonet en e goazez ouzh an daol a-geñver da Wilh). - Trist eo.

GWILH. - Trist ?

JOB. - Trist ! Soñj 'ta, Marianna, ur soudard kozh o tonet eus gouel ar Soudarded Kozh ha n' anavez ket ur gastelodenn diouzh un daboulin !

MARIANNA (goapaus). - Trist eo, sur.

JOB. - Tristoc'h eget se c'hoazh !

GWILH. - N' eo ket trist, hi ! hi ! hi

JOB. - Eo, trist eo. Pa n' anavez ket ar soudarded kastelodennoù diouzh taboulinoù e vez gwall-zizurzh en arme.

MARIANNA. - E tle bezañ.

JOB. - Hag e vez.

GWILH. - Me n' ouzon ket ivez.

JOB. - Petra n' ouzout ket ?

GWILH. - Peseurt kemm a zo etre... hi ! hi ! hi !

JOB. - Pa lavaren dit, Marianna ! Dizurzh en arme !

MARIANNA. - Gwelout a ran.

JOB. - Gwelout a ran, me ivez, perak ez eo bet tapet da brizonidi an daou oristal-mañ.

MARIANNA. - Perak 'ta ?

JOB. - Abalamour na oant ket evit anavezout ur gastelodenn diouzh un daboulin.

MARIANNA. - Ma ivez !... Met peoc'h gant ho kaozioù diboell ! Petra a vo servijet deoc'h ?

JOB. - Kement-se a hast a zo warnout ?

MARIANNA. - Hast a zo warnon, ya sur, hag a zo ! N' oc'h ket deuet amañ evit chom da randoniñ e-pad an noz, eo ?

JOB. - Klevout a rit, paotred ? Arabat randoniñ.

LUKAZ. - Damen, piv a zo o randoniñ amañ ?

7

GWILH. - Unan bennak a zo o randoniñ ?

MARIANNA. - Ho-tri emac'h o randoniñ, klevet hoc'h eus ? Ha bremañ petra ho po ?

LUKAZ. - War ma revr em bo fete(iz)"
Hag arc'hoazh 'm bo adarre ...

GWILH. - ... Nemet Gwilh a vankfe !... Hi ! hi ! hi !

LUKAZ. - N' eo ket te a rofe din war ar revr, bepred !

GWILH. - A gav dit ? Gouest a-walc'h e vefen, hi ! hi ! hi !

JOB. - Goustadik, paotredigoù ! Echu eo ar brezel ur pennad brav 'zo.

MARIANNA. - Mar n' hoc'h eus ket a c'hoant da evañ ur bannac'h ez eo me eo a zisklêrio ar brezel deoc'h, silerien a zo ac'hanoc'h !

JOB. - Intent a rit, soudarded, ma mignoned ? Amañ e vo brezel bremaik.

LUKAZ. - Brezel da zeiz gouel an Ehan-brezel !

GWILH. - Un dro lous e vefe an dra-se.

MARIANNA. - Un dro lous evidoc'h-hu, sur.

JOB. - Trenkañ a ra ar soubenn.

MARIANNA. - Mar ne livirit ket din diouzhtu petra ho po da evañ, roud ma zroad an hini ho po war ho penn-adreñv, deoc'h da garzhañ ac'hanen taboulin hag all :

« Erru ur gont a vez
Ez a ar paour en-gouez ! »

JOB. - Peurdrenk eo ar soubenn.

LUKAZ. - Evelato, Marianna, n' a ket da gemer an traoù evel-se.

GWILH. - Ya, kemer-i a-hend-all.

JOB. - N' eus nemet Marianna, amañ, a gement a gomzfe poellek.

GWILH. - Lavar 'ta ez on ur genaoueg.

LUKAZ. - Moarvat ez on-me ken genaouek all.

JOB. - Piv en deus graet genaoueien ac'hanoc'h-hu ?

LUKAZ. - Paotrig e gastelodenn houarn-gwenn !

GWILH. - Soudard bihan e dam-tam !

JOB. - Marianna, degas pep e vannac'h dour Vichy d' an daou gozh-mañ hag ur werennad win ruz din-me.

LUKAZ. - Ur bannac'h dour Vichy din-me ?

GWILH. - Dour Vichy ?

JOB. - Ya, dour Vichy.

LUKAZ. - Biskoazh n'em eus bet evet eus an evaj-houad-se ha n'eo ket fenozh eo a rin.

GWILH. - Dour Vichy, foei ! N' em eus tamm c'hoant ebet da vergliñ.

8

MARIANNA (goude diskenn ur bannac'h hini ruz e gwerenn Job). - Petra ho po, Gwilh, a-benn ar fin ?

GWILH. - Petra 'm bo ?

MARIANNA. - Ya, petra ho po ?

GWILH. - Ha te, Lukaz, petra az po ?

LUKAZ. - Petra 'm bo ? N' eo ket diganin emeur o c'houlenn petra 'm bo. Diganit-te an hini eo emeur o klask gouzout petra az po.

GWILH. - Ar pezh am bo e vo ar pezh az po.

LUKAZ. - Ha perak, didiac'h, e vo ar pezh az po ar pezh am bo ?

GWILH. - Ar pezh az po eo ar pezh am bo abalamour ez omp bet er Brezel Bras hon-daou.

MARIANNA. - 'M eus aon, paotred, « netra » eo ar pezh ho po. N' on ket o vonet da dremen an noz ouzh ho selaou o flabotat ho kenaouiou, eo ?

JOB. - Aze ec'h eus komzet mat, Marianna. Evidon-me, bepred, a gav ma bannac'h diouzh ar c'hentañ !

LUKAZ. - Hopala ! Ne vo ket lezet hemañ da evañ e-unan, bo ? Degas din 'ta ur bannac'h hini gwenn, Marianna.

GWILH. - Ha din-me ivez, memes tra gant Lukaz pan omp bet er Brezel Bras hon-daou.

MARIANNA. - A-benn ar fin hoc'h eus graet ho soñj ! Monet a ra da gerc'hat div werenn hag ur voutailhad win gwenn. Goude kargañ an div werenn e c'houlenn : Ha bremañ, piv a baeo ?

JOB. - Piv a baeo petra ?

MARIANNA. - An tri bannac'h-mañ

JOB. - Lukaz en deus pedet ac'hanomp.

LUKAZ. - N' am eus pedet den.

GWILH. - Me a gav din ec'h eus graet.

JOB. - Gwelout a rez, Lukaz : hon pedet ec'h eus.

LUKAZ. - Ho pedet n' am eus ket, na n' am eus.

JOB. - Ac'h eus avat !

GWILH. - Hag ac'h eus, hi ! hi ! hi !

LUKAZ. - Evelkent, Gwilh ! Emaout o reiñ ton da baotr ar brezel-koll !

GWILH. - Dampet e vo, gwir eo : ar brezel-koll !

LUKAZ. - Ya 'vat, ar brezel-koll.

JOB. - C'hwi, moarvat, a oa er brezel-gounit ?

LUKAZ. - Hag ez oamp.

JOB. - Daoust petra 'r foeltr hoc'h eus gounezet er brezel-se ?

9

GWILH. (o tiskouez e vedalenn). - N' ac'h eus ket bet unan evel-hen, eus ?

JOB (oc'h ober van da gempouezañ ar vedalenn). - Pegeit ez out bet prizoniad ?

GWILH. - Daou vloaz, ma faotr bihan, daou vloavezh leun !

JOB. - Daou vloaz !

GWILH. - Daou vloavezh mat !

JOB. - N' out ket bet paeet ker neuze ; mann nemet ur c'hozh tamm pezh daou wenneg a c'hiz gwechall gozh e-pign ouzh da grubuilh !

LUKAZ. - Klev ar « cholori » -mañ ! Mar n' eo ket ur vezh !

JOB. - Ur vezh ?

LUKAZ. - Ya, ur vezh ruz.

JOB. - Ur vezh ruz ? Dit-te eo ur vezh ruz paneogwir e nac'hez paeañ ar bannac'hou-mañ goude m' az poa lavaret ober.

LUKAZ. - N' am boa ket.

JOB. - Az poa, laouen !

MARIANNA. - Arsa, Lukaz, paeañ a refet ? Me n' on ket evit chom amañ e-pad an noz da glevout ho kaoziou paour, evel m' am eus lavaret deoc'h c'hoazh. Paeit ho pannac'hou ha goude ez ingalfet ho kontoù.

GWILH. - Ret eo dit paeañ, paotr ! Lavaret ez poa e rajes.

LUKAZ. - Dampret e vo, n' am boa lavaret netra.

JOB. - Hemañ a zo truch.

LUKAZ. - Truch ?

JOB. - Ya, truch !

LUKAZ (droug ennañ hag o tennañ ur bilhed eus e c'hodell). - Dal 'ta, Marianna. N' am boa lavaret netra met paeañ a ran memes tra !

MARIANNA. - Tenn eo dic'houinañ, Lukaz, hogen pa vez ret e vez ret !

GWILH. - Mat, mat eo se, Lukaz. Gouzout a ouien a-walc'h ez oas paotr d' az ker !

JOB. - Reishoc'h out eget na soñje din, Lukaz Pouezevara.

LUKAZ. - Reizh ? A-viskoazh ez on bet reizh, hogen n' am boa ket lavaret paeañ ar bannac'hou-mañ deoc'h.

JOB. - Az poa koulskoude.

LUKAZ. - N' am boa ket, met kement hoc'h eus pouezet warnon ken ma 'm eus ranket ober.

GWILH. - Paotr mat out, Lukaz.

LUKAZ. - Paotr mat, paotr mat... Ne vez ket graet troioù evel-se d' ur paotr a zo bet pemp bloaz prizoniad !

10

JOB. - Sede amañ ur golipetenn ! Pemp bloaz ez out bet prizoniad ?

LUKAZ. - Ya 'vat, pemp bloaz.

GWILH. - Hi!hi!hi!

JOB. - Klevout a rez, Mariana ? Hemañ a zo bet pemp bloaz prizoniad. Ha krediñ a rez an dra-se ?

MARIANNA (o tonet da reiñ moneiz da Lukaz). - Me n' houlan ket bountañ ma fri en

ho kaoz. Dalit ho moneiz, Lukaz.

Amañ e weler oc'h erruout war an hent, a-dreñv gwerenn ar prenestr bras, ur vaouez kozh hag a chom da sellout ouzh an everien en ur weañ he daouarn gant an nec'hamant.

JOB. - Te a zo bet pemp bloaz prizoniad ! Pemp bloaz ?

GWILH. - Hi!hi!hi!

LUKAZ. - Ya, pemp bloaz. Pet gwech e vo ret hen lavarout dit, Job an Drev, tabouliner ar brezel-koll ?

GWILH. - Hi!hi!hi!

LUKAZ. - Paouez d' ober « hi ! hi ! hi ! », Gwilh Verresae.

JOB. - Oc'holla ! Hemañ a zo bet prizoniad e-pad pemp bloaz !

Ur plac'h kozh all en em ziskouez, a-dreñv ar prenestr bras, e-kichen an hini gentañ ha droug enni, diouzh he gwelout.

LUKAZ. - E-pad pemp bloaz, sur !

GWILH. - Hi ! hi ! hi !

LUKAZ. - Monet a rin sot gant « hi ! hi ! hi ! » hemañ.

JOB. - E-pad pemp bloaz ! Neuze avat, paotr paour, e rankan ober « hi ! hi ! hi ! » ivez.

LUKAZ. - Abalamour da betra e rankez ober « hi ! hi ! hi!»

JOB. - Abalamour ma 'z out ar brasañ gaouiad a zo bet savet ha maget er vro-mañ biskoazh !

GWILH. - Hi! hi ! Hi!

LUKAZ (fuloret, o vonet en e sav). - Ur gaouiad, me ? Ur gaouiad, me ? Ouzh Gwilh : Kaoc'h gant da « hi ! hi ! hi ! ». Ouzh Job : Hag ar vedalenn-mañ, evit petra am eus-hi bet ?

JOB (o tirollañ da c'hoarzhin). - Klevit 'ta, pa lavaran deoc'h ! Lukaz, amañ, a zo bet prizoniad e-pad pemp bloaz, emezañ, hag ar brezel ne oa padet MANN NEMET PEVAR BLOAZ !

Un drede maouez, yaouankoc'h eget an div all, a zeu ivez da begañ he fri ouzh gwerenn ar prenestr bras.

11

MARIANNA. - C'hoarzhin a-walc'h a c'hellit, met, 'm eus aon, paotred, bremaik n' ho po ket kemend-all a blijadur !

JOB. - Petra 'n diaoul a zeuez-te da gontañ dimp, Marianna ? Perak, mar plij, n' hor befe ket a blijadur ken ?

MARIANNA. - Abalamour m' emañ ar brezel o vonet da gregiñ adarre.

LUKAZ. - Ar brezel ?

GWILH. - Hi ! hi ! hi ! E petore kazetenn ac'h eus-te lennet c'heloù-se ?

JOB. - N' he deus ket lennet se er gazetenn : e " Radio Poull-Kanañ "an hini eo he deus klevet ar voulc'henn-se !

MARIANNA. - C'hoarzhit ar pezh a gerfet ! Bremaik ne refet ket ken, na ne refet !

IUKAZ. - Emaout oc'h ober goap.

MARIANNA. - Ne ran ket.

GWILH. - Ha koulskoude e rez.

MARIANNA. - Na ran !

JOB. - Grez !

MARIANNA. - Ne ran ket a c'hoap, pa lavaran deoc'h. Ar brezel a zo erru tost hag e goll a refet.

JOB. - Hopala Marianna ! Un tamm ez ez amplik dezhi ! Ha fellout a ra dit tremen ac'hanomp da c'henaouerien ?

MARIANNA. - N' am c'hredit ket ?

O-ZRI. - Feiz 'vat, nann.

JOB. - Ni a zo evel
« Sant Tomaz ha na gredas
« Nemet pa welas ».

MARIANNA (o tiskouez ar prenestr). - Ac'hanta, sellit !

Hag an tri soudard kozh, o sellout war-du ar prenestr, d' ober ul lamm diwar o c'heder.

O-ZRI. - Didiac'h !

AR STIGN A GOUEZH

31.12.75.

EÑVORENNOÙ

Dek vloaz 'zo bet e miz C'hwevrer e varve Yeun ar Gow. Da geñver an deiz-ha-bloaz-se e krogomp da embann al lodenn eus e eñvorennoù a zo chomet diembann betek-hen. Emañ e soñj Mikael ar Gow e vab embann ivez un nebeut barzhonegoù chomet war-lerc'h e dad. Diouzh o zu Embannadurioù Al Liamm a adembanno er bloaz-mañ " E Skeud Tour bras Sant Jermen " ha moarvat ivez levr Stevenson " Enez an Teñzor " bet lakaet e brezhoneg gant Yeun ar Gow.

Pennad kentañ

AR BREZEL BRAS KENTAÑ

Petra eo, e gwirionez, ar pezh a zo anvet « an Emsav » gant un nebeut Bretoned hepken ? Netra nemet ul lusk, pe un hirnezh d' ur stad a vuhez dieub, evel hini o zadoù gwechall, un ezhomm da seveniñ c'hoantoù ar spered hag ar galon.

E Breizh eo bihan an niver eus an dud emskiantek-se, hag o freder da dizhout ur seurt pal ne zeu dezho nemet p' o devez kavet anaoudegezh eus o broadelezh. Ar vegenn ez int, eta, eus ar ouenn a ra hec'h annez e Breizh, pa 'z eo chomet ar bobl dianavez-kaer eus he buhez tremenet hag hec'h istor. Diveizus-krenn eo chomet ar ger Emsav d' hor c'henvroiz dizesk war hor broadelezh hag hon ezhommoù a bobl e-keñver ar speredelezh, ar boazioù ha mad ar vro dre vras. Dic'houzvez eo ar rummad-se eus an diforc'h a zo etrezañ ha poblañs Bro-C'hall hag e kredont ez int Gallaoued evelti. Emsav evito en deus ur ster disheñvel diouzh an hini a ro dezhañ ar vrogarourien. Un dra emsav, ur benveg emsav a zo evito un dra hag ur benveg talvoudus da espern arc'hant pe da ober aesoc'h ha founnusoc'h ul labour.

Aes eo gwelout, eta, pegen don eo an islonk a zisrann ar vrogarourien diouzh ar bobl. An deiz ma vo anat d' an holl Vretoned n' o deus netra boutin gant o amezeien, ec'h en em gavo dirouestlet buan kudenn o sujidigezh d'ar re-mañ.

13

Setu ar pezh en devoa meizet sklaer an aotrou Perrot (Doue d' e bardono !) pa savas ar Bleun-Brug. E vennad a oa tizhout ene ar bobl hag her c'haset en dije da benn paneve d' ar skoilhoù a gavas war e hent. Hogen pa welas an aotrou 'n Eskob Duparc ar pal a gerzhe war-du ennañ ar beleg kalonek, e lakaas un harz d' e fouge ha d' e drevell. Feiz, ya ! ha... Breizh ivez, gant ma chomje hep mont re bell war an hent-se. Ha koulskoude, ouzh e glevout da vihanañ, e oa an aotrou 'n Eskob ur Breizhad gredus. Bezañ Bretoned vat evitañ a oa bezañ feal da Vro-C'hall. Ne oa ket ennañ danvez ur Makarios hag e ziskouez en deus graet. Ha labour kure Plougernev a chomas difrouezh e-touez e genvroiz dalc'het en deñvalijenn a rae anezho damsklaved Pariz.

* * *

N' eo ket e vije chomet didalvoud-tre labour " Feiz ha Breiz " er vro. An holl, a-raok ar brezel bras kentañ a lenne ar skridoù brezhonek. Ma n' he devoa an dastumadenn-se nep pouez war dachenn ar politikerezh e roe skoazell d'ar yezh

e-ser lakaat kelennadurezh kristen ha kontadennoù diouzh doare ar bobl dindan daoulagad he lennerien. Da heul ar " C'hourrier du Finistère ", ur gelaouenn sizhunvezhiek a denne 35 000 skouerenn hag a embanne div bajennad brezhoneg, hep kontañ ar romant a veze warni dre bennadoù, he deus met skoazell da zerc'hel bev, e-pad pell, ar boaz da lenn hor yezh. Homañ ivez, eus ar gostezenn dehou, ne dalvezas ket da zihuniñ ar spered broadel ; ar re he sturie a oa katoliked ha tud a-du gant urzh vat.

Paperioù all a oa c'hoazh evel " Lizeri Breuriez ar Feiz " ha " Kannad ar Galon Sakr " a veze kavet plijus da lenn. Netra enno, avat, da vogañ ar spered broadel. Heñvel a-walc'h e c'hoarveze gant " Ar Bobl ", kelaouenn Jaffrenou, hag e stagadenn lennek " Ar Vro ". Gant ar gentañ e veze anv a rannvroelezh a-wechoù, padal e oa an eil ur stagadenn lennek evit ar Varzhed hag un nebeut tud kar-o-yezh.

Evito, eta, d' en em santout disheñvel diouzh ar C'hallaoued dre ar brezhoneg hag e gizioù, n' o devoa ket ar Vretoned ar skiant da soñjal e oant ur bobl all hep darempred ganto nemet pa zeued d' ober dezho paeañ o zailhoù ha da glask o faotred yaouank da gas d' an arme.

14

E-keit-se, e kolle ar Varzhed o amzer o sevel barzhonegoù entanet ha leun a gasoni a-enep da Vro-Chall ha na vezent lennet morse gant ar bobl. N' eo ket int, a dra sur o dije savet o mouezh dirak o c'henvroiz da brezeg dezho enebiezh ouzh gouarnamant Pariz. Daoust d' ar barzhonegoù a skrivent, edo warno levezon Bro-C'hall ha mezho o dije bet da vezañ kemeret evit tud diwezhat. Soñjit 'ta e oa d' an ampoent Frañs ha Republik an hevelep tra. Ha piv a vije bet sot a-walc'h da gavout abeg e hemañ pa lavare an holl :

Vive la République
he deus roet deomp, war hor bara, kig.

Ya, Gallaoued dre ar spered e oa ar Vretoned desket a dleje bezañ lakaet o levezon da zihuniñ ar garantez-vro e-touez o c'henvroiz. Skouerioù evel hini Kalloc'h, aet a-youl vat da zifenn Bro-C'hall pa ne oa ket ret dezhañ brezeliñ, a laka anat ez eo gwir ar pezh a lavaran. Ha bras meurbet e oa ar c'hemm etre hor brogarourien ha re Iwerzhon a glaskas ober o mad eus diaesterioù Bro-Saoz.

Eviti da vezañ stag mat c'hoazh ouzh Breizh, kalon he bugale a oa krignet gant ar preñv gallgar a viras, daou-ugent vloaz kentoc'h, ouzh Keratry da embann dieubidigezh ar vro. Hag abaoe, gant skolioù Ferry, n' eo ket kreñvaat en devoa graet ar menoz broadel dre amañ.

Koulskoude e oa ar brezhoneg ken galloudus hag ur ramz, an holl, nemet un darn eus tud ar c'hêrioù her c'homze hag e veze sellet a-dreuz ha gant fae, ouzh ar re a c'hoantae diskouez n' her gouient ket. A-drugarez d' ar veleien e chome divrall rak e pep iliz-parrez ne gleved nemet prezegennoù, misionoù ha katekiz e yezh ar vro. Meneg a voe da lemel o goprou diganto ma kendalc'hjent da reiñ kelennadurezh kristen e brezhoneg. Hogen, e-lec'h plegañ da urzhioù Pariz, e rejont fae warno hag e talc'hjont feal d' ober gant ar yezh kozh.

M' hon dije bet e Breizh, ur gwir spered broadel, da vare an disparti etre ar Stad hag an Iliz, hon dije gwelet ar vrogarourien o sevel d' en em lakat e penn ar bobl heuet gant displealded ha fallagriezh Bro-C'hall. An holl a vije bet aet d' o heul, met den ne fiñvas daoust ha ma kemeras darn o fuzuilhoù e meur a lec'h. Anaout a ran ur barrez hag a redas he gwellañ gwazed, armet holl, da zifenn hec'h iliz. E-barzh an iliz, morailhet ha sparlet he dorioù, e talc'hjont penn da dri c'hant den pe ouzhpenn, archerien ha soudarded kaset da ober dezho sujañ d' al lezenn. Goubet e oant da dennañ war ar c'homiser ha war an archerien ha, ma n' her grajont ket, ne voe nemet dre sentidigezh ouzh ar c'hure a oa ganto.

15

En ur barrez all, houmañ eus ar Menezioù Du, ec'h en em savas a-gevret an holl wazed da zifenn al leanezed ouzh an archerien a oa deuet d' o skarzhañ

diouzh o skol. E-pad meur a eurvezh e talc'has penn ar gouerien hag ar vengleuzerien-se da dud ar polis o teurel warno sailhadoù fank tennet eus ar priveziou.

Paotred ar gostezenn wenn a hopas war ar gouarnamant, met ne voe neb den kalonek en o zouez da genurzhiañ droukrañs ar bobl heget gant mevelien Combes. An eskopti e-unan en dije kavet abeg enno ha miret outo da gemerout an armoù.

Ar spered broadel eo a rae diouer da Vreizh, hag heskinerezh diaoulek ar C'hallaoued ne dalvezas mann d' e zasorc'hiñ. Er skolioù kristen, meneg ebet morse eus Breizh ; ne raed implij eno eus ar brezhoneg nemet evit deskiñ ar c'hatekiz d' ar vugale. War ar porzh-c'hoari, e oa difenn da gomz yezh ar vro, ha nep piv bennak a veze tapet o tiviz e brezhoneg en deveze ar vuoc'h hag e ranke chom e pinijenn war-lerc'h ar skol.

Ne vije ket bet ret, koulskoude, kaout kalz a dra evit lakaat lorc'h er re yaouank da vezañ Breizhiz. Pennoù gallek eo an anv a raemp, gant fae, ouzh an hiniennoù na ouient pe ne deurvezent ket ober gant hon lavar, holl bugale bourc'hizien. Hor brasañ plijadur, a-raok diwezh an devezh skol, a veze kanañ a-gevret ar c'hanaouennoù a zeskas deomp hor mestr, en o zouez, tra iskis, " Evomp chistr mat ", gant Botrel, ha " Sav, Breizh-Izel ". Brud Porzhmogger ne zeuas betek ennomp nemet dre hanterouriezh ur ganaouenn savet gant Botrel " Les gars de Morlaix " pe " Baotred Montroulez ". An emgann a renas ar Breizhad dispont ouzh ar Saozon hor souezhe hag a laouenae hor c'halonou.

O vezañ ma oamp lakaet da grediñ e oamp Gallaoued, istor Bro-C'hall hor sebeze hag a sile ennomp brazoni da vezañ ar ouenn dud-se. Trubarderezh ar Brusianed da gavout tu da ziskleriañ ar brezel, er bloaz 1870, an trec'h gounezet ganto war armeoù Napoleon III hag an diframm graet ganto eus an Elzas-Loreñ diwar hor c'houst, a voe abeg d' hor c'hasoni an Alamagn. Evidomp, da heul an torfedoù niverus tamallet dezho, e oa ar C'hermaned barbareo o terc'hel Gallaoued dindan ar yev ha, kentañ tra da ober, a vije lemel diganto frouezh o laeroñsi. Ha setu perak, pa darzhas brezel ar bloavezh pevarzek, e redas ar rummadoù Breizhiz bet kelennet en doare-se araozomp, d' an emgann gant kement a fouge.

*

16

Evel va c'henvroiz e oan Gall a spered, met ma c'halon, avat, a lamme evit Breizh. Ne oa ket bet difrouezh enni ar pennadoù tuet d' ar vro a lennen e " Feiz ha Breiz " hag er " C'hourrier ", doujus bepred ouzh ar stad a sujidigezh emañ enni hor bro. A-nebeudoù, evelato, e kemme va menozioù, ha, dre al levezon he devoa warnon va maeronez, ur wir roueelerez anezhi, e tegemeris ar c'hoant da welout ur roue e penn Bro-C'hall. Kerse am boa na c'hellas ket emsavadeg ar Chouanted diskarañ ar Republik, rak houmañ, d' am soñj, a oa gwashañ enebour Breizh ha, ma teuje ur roue war he lerc'h, ec'h adkavje hor rannvro he gwirioù a wechall. Komzoù dichek va maeronez hag ur skrid bennak lennet ganin hag o taolenniñ krizder soudarded Hoche ouzh hor c'henvroiz, a vroudas ennon enebiezh ha kasoni ouzh gouarnamant ruz Bro-C'hall.

Er bloavezh 1911, e tapis va fevarzek vloaz ha lorc'h a voe ennon o c'houzout o devoa un nebeut Bretoned yaouank graet trouz, e Roazhon, e-doug ar gouel a oa bet lidet da enoriñ ur skeudenn arem savet evit ober meuleudi stagidigezh Breizh ouzh Bro-C'hall. Neuze hepken e ouezis e oa bet va bro dieub gwechall ha n' he devoa netra boutin gant merc'h henañ an Iliz nemet ar relijion gatolik.

Evit ar reuz o devoa graet Bretoned yaouank Roazhon o tiskouez o enebiezh da sujidigezh o bro, e c'hounezjont va anaoudegezh-vat ha va doujañs. Ar pezh a lennis da c'houde diwar-benn an darvoud, n' eo ket tamalloù, daoust ha ma lavare kelaouennoù 'zo ne oa enebiezh ar baotred-se nemet ur froudenn a yaouankiz. Ar wask a voe kentoc'h a-du ganto pa lavare o devoa graet mat sevel o mouezh da gunuc'hennañ un delwenn vezhus o tiskouez Breizh war he daoulin dirak Bro-C'hall, padal n' eo ket trec'het e oa bet met en em roet dezhi dre garantez hag

a galon vat. Hogen, anv ebet eus " Breiz dishual " a chomas ur gazetennig dibaot he lennerien. Plijet e vije bet din kaout un niverenn bennak anezhi, met n' em boe morse ar chañs-se.

*

An amzer o vont e-biou a zegase keleier nevez d' ar c'helaouennoù. Kudenn an " Home Rule " e Bro-Iwerzhon, a laoskas diseblant an darn vrasañ eus hor c'henvroiz. Gant evezh e lennen kement skrid a rae anv eus an enez reuzeudik ha spi am boa d' he gwelout dieub un deiz, da heul he strivoù da c'hounit hec'h emrenezh. Siwazh ! protestanted an Ulster ne vennent a briz ebet bezañ distaget diouzh Bro-Saoz hag a stourme ouzh Iwerzhoniz ar rannvroioù all annezet gant ka**tolik**ed, da virout outo da dizhout o fal. Savet o devoa un arme da enebañ ouzh mennad ar re-mañ a savas ivez d' o zro bagadoù-difenn goubet d' en em gannañ.

17

Dare e oa ar brezel diabarzh da begañ pa darzhas ar brezel bras en Europa.

*

Evel un taol gurun en un oabl sioul ha digoc'henn e teraouas al lazhadeg bras.

D' an ampoent, seitek vloaz din, e oan kloareg yaouank e studi an aotrou Gilli, noter e Pleiben. Evit lavarout ar wirionez, ne blije ket ar vicher din. Digompren e kaven ar skridoù noter am beze da adskripañ hag al lezennoù a c'hoarveze ganin lenn. En ur galleg iskis e oant savet ha nep didu na gaven gantañ. Er gêr, betek neuze, e oa bet plijusoc'h va buhez o labourat er-maez hag oc'h ober, dibreder, war-dro ar seizh devezh-arat douar hag ar peder buoc'h a oa ganeomp hag ar pakadoù hag ar varc'hadourezh a stlejen eus an hent-houarn d' ar vourc'h gant Fani, hor c'hazeg kozh. Hogen ret e oa din mont da zeskiñ ur vicher, ha setu penaos e oan aet davet an noter. Karet em bije mont da benn d' un atant vras, rak gouzout a ouien mat falc'hat ha mediñ, met aliet e voen gant va mamm da zibab ur vicher dereatoc'h d' am c'horf, war zigarez m' em boa ur c'har fall.

Ouzhpenn ar c'hloareg bras, J. L., ur brezhoneger ampart troet d' ober gant ar galleg, e oa ur c'hloareg all. ur bloaz koshoc'h egedon, Loeiz Kefeleg e anv, ha ken dizesk ha me war ar vicher. Gant ar c'hoant am boa e komzje an holl brezhoneg e Breizh, her boazis da gomz ganin yezh ar vro hepken. Tro am beze, a-wechoù, d'en em gavout gant Yann Séverr, ur paotr un nebeut yaouankoc'h egedon ha da rannañ kaoz gantañ. Mab e oa d' an noter kozh; marv ur bloaz kentoc'h, ha, da c'houde, e teuas da vezañ breur-kaer d' an aotrou Gilli, an noter nevez. Ar bourc'hiz yaouank, evitañ da c'houzout brezhoneg, ne c'helle nemet komz galleg ouzh ar gamaraded eus ar vourc'h hag, evel-se, eo e tivize ganin.

O vezañ ma ouie e plije din al levrioù brezhonek, e roas din e prof *Barzaz Breiz*, ul levr am boa klevet alies anv anezhañ ha n' am boa bet tro da zigeriñ biskoazh. Bras e voe va levnez ha, gant fouge, e lonkis, e berr amzer, kement a oa er pezh labour dudius-se. Ouzhpenn an dudi a roas d' am spered, e startaas em c'halon ar garantez a zougen d' am bro. Estlammiñ ha tridal a raen gant ar gwerzioù hag ar c'hanaouennoù a oa meneg enno eus taolioù kaer ha nerzh-kalon hon hendadoù. Er vrasañ eürusted e vezen bewech m'en em gave al levr burzhudus etre va daouarn, hag an doug am boa bepred da Vro-C'hall a zisterae bep un tamm.

18

E diwezh miz Gouere 1914 e voe lidet eured an aotrou Gilli hag an dimezell Saeverr, an hini en devoa dibabet da zavez-pried. Evel an daou gloareg all, e oan pedet d' an oferenn eured ha d' ar banvez. A-bred ec'h en em gavjomp dirak ti an den nevez da c'hortoz ma 'z aje betek ti ar plac'h nevez ha m' o ambrougjemp neuze betek an iliz, bep a vaouez ganeomp ouzh hor c'hostez. A-nebeudoù e tostae ar re bedet, gwazed ha merc'hed, ha ni a oa bodet war an hent gant paotred eus hon anaoudegezh, pa dremenas paotr al lizhiri gant e sac'had

keleier ha kelaouennoù. Leuskel a reas lizhiri ha kazetennoù ar studi gant ar c'hloareg bras a zigoras unan eus ar re-mañ pa 'z eo gwir n' edo ket tre an eur da vont da di ar plac'h nevez.

« 'M eus aon, » emezañ oc'h estlammiñ, « emañ an traoù o vont da drenkañ etre Aostria ha Serbia ! Priñs susitour Aostria a zo bet drouklazhet gant ur Serbad, e Sarayevo, hag e vro a damall da Serbiz bezañ graet an taol. Un ultimatum a zo bet kaset da homañ gant Aostria hag, a-hend-all, emañ Rusia o vont da c'hervel he gwazed d' an armoù evit skoazellañ Serbiz, he mignoned ! »

Mantret e voe an holl ha darn a lavaras e oa arvar a vrezel evit Bro-C'hall o vezañ ma oa un emglev a genskoazell etrezi ha Rusia. Hervez un darn all e vije kompezet buan an droukrañs, rak n'eo ket marv un den hepken a roje tro da begañ gant ul lazhadeg veur a-dreuz Europa.

Gant ar spi da gement-se, e tienkrezas d' ar c'halonoù hag e voe laouenoc'h an holl.

Tonius kenañ e voe an eured gant un engroez kouvidi a ambrougas an daou zanvez-pried d' an iliz ha, da c'houde, d' ar pred dispar a voe war-lerc'h. Ur wir goantenn e oa ar plac'h nevez, daoust m' he devoa dilezet giz ar vro na zougas morse ken. An den nevez, kalz koshoc'h egeti, gantañ ul levitenn hag un tok moul hir, n' en devoa nep doare eus e gouvidi a zouge, an darn vrasañ anezho, gwiskamant paotred Pleiben. Evel ar c'hloareg bras e oa ganin un tok ledan, boulouzennet, ur jiletenn hag ur chupenn du o liv, hag ur gouriz glas. An holl verc'hed, koulz lavarout, a oa e koef, kroazedoù perlez ha tavañjeroù seiz a lies liv ganto.

19

Drev ha drant e oa an holl ouzh taol, sonerien hag all, rak falvezet e oa bet d' ar wreg yaouank kaout o seniñ gwellañ biniou ha bombard an tolead. Tad an ozhac'h nevez ivez, ur c'hozhiad bet micherour poultrer e Pont-ar-Veuzenn, a oa laouen meurbet ha lorc'hus gant e vab deut da vezañ noter ha graet gantañ ur fortun vat. Un nebeut devezhioù kentoc'h em boa klevet gantañ ar c'homzoù-mañ, rak un den digor e oa ha troet da gomz : « Me n' eo ket dav din bezañ nec'het gant va bugale na gant an amzer da zont. E-doug va gwellañ bloavezhioù em eus labouret er poultrerezh ha bremañ, bep mintin, e kavan, dindan va fenn-wele, seizh real bemdez da zispign ! ». Kement-se evit reiñ din da c'houzout en devoa ur bañsion a seizh real bemdez, ar pezh a oa ur binvidigezh d' an ampoent, war e veno.

Er vrasañ plijadur e tremenas an devezh hag, antronoz, e kendalc'hjomp da vanvezañ. Hogen ar c'heleier a zegase deomp ar c'hazetennoù eus ar riot a oa savet etre Aostria ha Serbia a yae war fallañ hag anv a oa a vrezel. Meur a zevezh a dremenas oc'h enkreziñ an holl gant an nevezentioù a c'hoarveze en o c'herzh. Firbouch a oa en Alamagn da sevel soudarded, e Bro-C'hall, e c'halved d' ar c'harzarnioù ar soudarded o devoa bet aotre da vont d' ar gêr, ha Bro-Saoz en em emelle eus ar gudenn.

D' ar sadorn war-lerc'h e oa foar gozh e bourc'h Pleiben. Rouez ar varc'hadourien loened a oa deuet dezhi ha bihan ivez an niver eus ar gouerien boazet d' he daremprediñ. Kalz a oa chomet war-dro an eost ha, meur a hini all, ankeniet gant ar c'heleier fall a glevet a bep tu, ne oant ket goubet da werzhañ na da bremañ.

E-kreiz an endervezh, em boe tro da dreuziñ al leurgêr vras ha da welout e oa dibaot an dud hag an anevaled warni hag e oa ar marchad koulz ha marv.

Sebezet gant grevusted an darvoudoù, ec'h en em vode ar wazed a zaouioù pe ouzhpenn, da gomz eus ar c'heleier falloc'h-fallañ bepred. Diouzh ar mintin em boa gouezet e oa bet galvet da Verlin Von Schoen, kannad an Alamagn e Pariz. Kalz gwiragez a ouie petra a oa douget e levrioùigoù-soudard o friedoù ha meur a hini, an daeroù en o daoulagad, a glevis o lavarout an eil d' eben : « Ma vez brezel, e ranko va gwaz mont kuit d' an eil devezh, ha tro ar mevel a vo eizh

deiz diwezhatoc'h. Penaos e rin, va Doue, da gas va-unan an tiegezh en-dro ? ».

(da genderc'hel.)

Skol Summerhill

Ar pennad kentañ a oa ur sell hollek war Summerhill dre vras hag ar menozioù en doa klasket Neill kas da benn en e skol. Amañ e vez taolennet ar vuhez pemdez er skol.

*

Pennad 2 - UR SELL WAR SUMMERHILL

Me zo vont da zisplegañ deoc'h penaos e tremen an deizioù e Summerhill. Debret e vez an etre 8.15 ha 9.00. Ar gelennerion hag ar skolidi a zegas o dijuni eus ar gegin betek ar sal-debriñ. Graet e vez ar gweleoù sañset da 9.30 pa vez kroget gant ar c'hentelioù.

E derou pep trimiziad e vez skritellet steuñv al labour. Ha neuze e c'hell Derek ar c'helenner kaout ar c'hlas 1 d' al lun, ar c'hlas 2 d' ar meurzh h.a. Me 'm eus ur steuñv-labour damheñvel evit ar Saozneg hag ar Jedoniezh ; Maurice evit an Douaroniezh hag an Istor. Ar vugale yaouankañ (oadet etre 7 da 9 bloaz) a chom gant o c'helenner e-pad an darn vrasañ eus ar mintinvezh dre vras, met mont a reont ivez d'ar skol-skiantoù pe d' ar sal-dresañ.

Skoliad ebet n' eo ret dezhañ heuliañ ar c'hentelioù. Ma teu avat, Yann d' ar skol - Saozneg d' al lun, ha n' en em ziskouez ket en-dro a-raok ar gwener goude, e vez rebechet gant ar re all - hag ar wirionez zo ganto - e tillañs labour, hag e c'hellont kas anezhañ kuit peogwir emañ o herzel outo da vont war-raok.

Ar c'hentelioù a bad betek un eur, met ar re vihan hag ar re etre a zebr da 12.30. Dre ret ez eus daou servij-pred er skol. Ar gelennerion hag ar re vras a zeu ouzh taol da 13.30.

An endervezh zo dieub penn-da-benn evit pep hini. Ar pezh a reont holl, avat, a-hed an endervezh ne nouzon ket. Ober a ran war-dro al liorzhañ ha ral a wech e welan ar vugale en-dro din. Gwelout a ran ar re vihan o c'hoari o diaouled. Emañ un darn eus ar re vras oc'h ober war-dro kefluskerioù pe skingomzoù, o tresañ pe o livañ. Pa vez brav an amzer e vez ar re vras o c'hoari er-maez. Lod all a vez oc'h ober mil vicher el labouradeg, o kempenn o c'hezeg-houarn pe oc'h ober bigi pe bistolennoù.

21

Merenn-vihan 'vez servijet da beder eur. Da 17.00 e vez kroget e pep seurt oberennoù. Ar re vihan a blij dezho pa vez lennet istorioù. Re ar rumm etre a blij dezho labourat e sal an arzoù : tresañ, ober traoù gant pezhioù linoleom, labourat al ler, ober paneroù h.a. Peurvuañ e vez lod oc'h ober priañ ; e gwirionez e hañval ar prierezh bezañ al lec'h ar muiañ darempredet diouzh ar mintin ha d' enderv. Ar re goshañ a labour adal 17.00. Al labouradeg koad pe vetal a vez leun bemnoz.

D' al lun da noz ez a ar vugale da skeudennva ar gêriadenn hag o zud eo a bae. Ar re o deus aes a ya da welout ur film nevez d' ar yaou.

D' ar meurzh da noz e selaou ar gelennerion hag ar re vras ar prezegennoù graet ganin war ar bredoniezh. E-keit-se e vez lennet d' ar re vihan a bep seurt istorioù. D' ar merc'her da noz e vez dañsadedeg, un dibab bras a bladenoù zo. Dañsal a ra mat ar vugale. Tud 'zo hag a zo deut d' ober ur gwel amañ o deus

lavaret o deveze mezh pa zañsent ganto. D' ar yaou da noz n' eus netra ispisial. Ar re vrasañ a ya d' ar skeudennva da Leiston pe Aldeburgh. Ar gwener 'vez lezet dieub evit ar darvoud bennak, da skouer pleustriñ war ur pezh-c'hoari.

N' eus ket a steuñv-labour evit al labour-dorn. N' eus kentel ebet evit labour ar c'hoad. Ober a ra ar vugale ar pezh a fell dezho. Hag ar pezh a fell dezho ober zo peurvuañ ur bistolenn, pe ur fuzuilh, pe ur vag pe ur sarpant. N' int ket gwall-dedennet gant ar c'halvezerezh luziet, zoken ar re vras. N' eus ket kalz diouto a gav dudius va albac'henn din : labourat ar c'houevr gant ur morzhol - peogwir n' eus ket ezhomm kalz faltazi evit aozañ ur bodez kouevr.

Ar sadorn da noz eo hon hini pouezusañ peogwir eo nozvezh Emvod Bras ar Skol. Peurvuañ e vez dañsoù da heul. E-pad ar mizioù du e vez nozvezh ar sul hini ar pezhioù-c'hoari.

Devezhioù 'zo ne vez gwelet paotr ebet e Summerhill. E kornioù pell e vezont oc'h ober taolioù fall. Met gwelout a reer ar merc'hed. E-barzh an ti e vezont, pe e-kichen. Morse ne vezont pell diouzh an dud gour.

22

Ar sal-arz a vez alies leun a verc'hed o tresañ pe oc'h ober traoù brav gant danvez. Dre vras, avat, ar baotred zo troet muioc'h da grouiñ traoù, a gav din ; da vihanañ n' em eus morse klevet ur paotr bihan o lavarout eo enouet peogwir ne oar ket petra ober, tra ma klevan a-wechoù ar merc'hed o lavarout an dra-se.

Marteze e soñj din o deus ar baotred un temz-spered muioc'h tuet da grouiñ traoù dre m' eo pourvezet gwelloc'h ar skol evit ar baotred eget evit ar merc'hed. Ne vez ket gwall dedennus ul labouradeg houarn pe goad evit ar merc'hed. Ne blij ket dezho ober war-dro kefluskerioù ; n' int ket dedennet kennebeut gant an tredan pe ar skingomz. O labourioù arz o deus : priaoù, troc'hañ pezhioù linoleom ha tresañ, pe wriat, met evit un darn anezho n' eo ket trawalc'h. Ar baotred a blij dezho keginañ kement hag ar merc'hed. Merc'hed ha paotred a skriv hag a c'hoari o fezhioù dezho, a ra o dilhad hag ar c'hinkladur. Peurliesañ e vez ar c'hoari a live uhel dre m' eo gwirion ha diardoù.

War a hañval e tarempred ar merc'hed an arnodlec'h ken alies hag ar baotred. Al labouradeg zo tost da vat al lec'h nemetañ na zedenn ket ar merc'hed adal an oad a nav bloaz.

Ar merc'hed a gemer perzh nebeutoc'h eget ar baotred en emvodoù ar skol, ha n' em eus diskleriadur ebet prest war ar poent-se.

N' eus ket keit-se 'zo e tegouezhe ar merc'hed diwezhat a-walc'h da Summerhill ; kalz anezho a zeue eus kouentoù pe skolioù merc'hed. Morse n' em eus sellet ouzh seurt bugale evel skouerioù gwirion un deskadurezh dieub. Ar merc'hed-se, deut ziwezhat, a oa peurliesañ bugale tud na anavezent ket pegen talvoudus eo ar frankiz, rak m' o dije graet, n' o dije ket bet diaesterioù gant o merc'hed. Ha neuze pa oa pareet doñjer ar plac'hig ouzh ar skol mañ e Summerhill e veze kaset buan d' ur « skol vat 'lec'h ma vez desket mat ».

Met nevez 'zo hon eus bet merc'hed o tont eus tiegezhioù a gred e Summerhill. Ur bodad plijus, bev ha dibar ez int, ha faltazi zo ganto ivez.

A-wechoù hon eus kollet merc'hed en abeg d' an arc'hant ; a-wechoù peogwir e veze kaset o breudeur da skolioù a gouste ker. Hengounel eo atav sellout ouzh ar mab evel an hini pouezusañ ; atav eo bev an hengoun-se. Kollet hon eus merc'hed ha paotred war un dro dre ma oa gwarizius-tre o zud : aon o doa na vije o bugale tommoc'h ouzh ar skol eget ouzh an tiegezh.

23

Summerhill en deus bet atav un tammig poan o vont en-dro. Nebeut a dud o

deus pasianted ha kred a-walc'h evit kas o bugale d' ur skol ma c'hell ar re vihan enni c'hoari e-lec'h deskiñ. Krenañ a ra an tad hag ar vamm o soñjal ne vo ket gouest o mab marteze da c'hounid e vuhez d' an oad a ur bloaz warn-ugent.

An deiz hiziv skolidi Summerhill dre vras 'zo bugale tud a fell dezho desav anezho hep kenurzh strizh. An dra-se zo mat-tre rak gwechall am boa mab un den mirour a gase din e vab peogwir ne ouie ket petra ober ken. Seurt tud ne gave ket dezho e oa talvoudus ar frankiz evit ar vugale, hag e kuzh e soñjent e oamp ur vandennad tud sot. Start-tre e oa displegañ an traoù d' an dud mirour-se.

Me 'm eus soñj eus un den : ur gwir soudard a felle dezhañ enskrivañ e vab, nav bloaz, er skol.

« Al lec'h-mañ zo mat-tre war a hañval, emezañ, met me 'm eus aon rak un dra. Va mab a c'hell deskiñ ar masturbasion amañ. »

Goulenn a ris outañ perak en doa aon rak an dra-se.

« Se 'vo fall-tre evitañ, » emezañ.

« Se n' eo ket bet ken fall-se evidoc'h pe evidon, 'ket ta ? » emezon evit c'hoarzhin.

Tec'hel a reas kuit gant e vab.

Ha neuze bez' e oa ur vamm binvidik a droas war-du he gwaz, goude bezañ graet goulennoù ouzhin e-pad ur eurvezh, hag e lavaras : « Ne c'hellan ket ober ma soñj kas Soaz amañ pe get ».

« Na rit ket a viloù, » emezon, « dibabet em eus evidoc'h. Ne gemerin ket ho merc'h. »

Ret ' oa din displegañ dezho perak. « Ne gredit ket er frankiz e gwirionez, » emezon. « Ma teufe Soaz amañ e kollfen an hanter eus va buhez o tisplegañ ar pezh a zo pal ar skol, hag a-benn ar fin ne vefec'h ket kendrec'het. Fall-tre e vefe an efed war Soaz, rak 'n em c'houlenn a rafe atav : gant pehini emañ ar wirionez, ar skol pe ar gêr ? »

Ar gerent vat zo ar re a zeu hag a lavar : « Summerhill a zo al lec'h nemetañ evit hor bugale, ha nep skol all ne vo mat ».

Pa voe digoret ar skol, hon eus bet diaesterioù grevus. Ne oa tu dimp da gemer nemet bugale eus klasoù uhel pe etre, rak ret mat e oa kaout arc'hant. Den pinvidik ebet a-du ganimp. E derou ar skol ur madoberour a felle dezhañ chom dizanv, a harpas ac'hanomp pa oan en ur pleg fall, ha diwezhatoc'h unan eus ar gerent a roas profoù brokus dimp - ur gegin nevez, ur skingomz, ur penn all evit an ti, ul labouradeg nevez. Ur madoberour a-zoare e oa, rak ne lakaas diviz ebet ha ne c'houlennas netra en-dro. « Summerhill en deus roet da Yannig an deskadurezh a felle din evitañ, » a lavaras, eeun-tre, rak an den-se a grede start er frankiz evit ar vugale.

24

Met n' hon eus morse gallet kemer bugale ar re baour-tre. Un druez eo rak rediet omp bet da studiañ bugale ar « c'hlasoù etre » nemetken. Ha diaes eo a-wechoù gwelout natur ar bugel pa vez kuzhet a-dreñv re arc'hant ha gwiskamantoù kaer. Pa oar ur plac'h e vo roet ur bern arc'hant dezhi d' an oad a ur bloaz warn-ugent, n' eo ket aes studiañ natur ar bugel enni. Dre chañs, avat, n' eo ket bet breinet al lod brasañ eus ar skolidi a-vremañ hag eus an amzer dremenet gant an arc'hant. Gouzout a reont holl e vo ret dezho gounit o bara pa lezint ar skol.

E Summerhill hon eus mitizhien eus kêr a zo o labourat evidomp a-hed an deiz, met mont a reont en-dro d' ar gêr diouzh an noz. Merc'hed yaouank ez int

hag a labour mat ha start. Amañ pa ne vez ket roet re a urzhioù dezho, e labouront gwelloc'h ha startoc'h eget mitizhien a vez mestroniet. Mezh am bez atav pa welan ez int rediet da labourat start peogwir ez int ganet paour, tra ma 'z eus bet ganin merc'hed mounounet gant o zud pinvidik ha n' o doa ket ar galon d' aozañ o gweleoù. Met ret eo din anzav am eus bet atav displijadur oc'h ober va gwele. Va digarez - gwan ma oa - a oa am boa traoù all d' ober, met se ne oa ket a-walc'h evit ar vugale. Ober a raent goap ouzhin pa lavaren dezho ne vez ket goulennet gant ur jeneral skubañ al leur-di.

Meneget em eus meur a wech ne vez ket tud gour Summerhill skouerioù parfed a Vertuz. Ni zo tud evel ar re all ha techoù an Den a zeu alies da c'hoari ennomp a-enep d' hor menozioù. Dre vras ma vez torret ur plad er gêr gant ur bugel, e krog an tad pe ar vamm da chikanañ - ar plad a zeu da vezañ pouezusoc'h eget ar bugel. E Summerhill ma lez ur vatezh pe ur bugel ur bern pladoù da gouezhañ, ne lavaran netra ha va gwreg ne lavar netra kennebeut. Ur gwallzarvoud eo, ha netra ken. Met mar amprest ur bugel ul levr hag e lez anezhañ er-maez dindan ar glav, ez a droug em gwreg rak al levrioù zo pouezus eviti. Me ne ran ket forzh eus un dra e-giz-se peogwir n' eo ket pouezus al levrioù evidon. Er c'hontrol va gwreg a vez un tammig souezhet pa chikanan evit un engraver torret. Pouezus eo ar binvioù evidon met eviti n' int ket.

25

Hon emvodoù bras d' ar sadorn da noz a ziskouez an dizemglev etre an dud vras hag ar vugale, siwazh. Un dra naturel eo, koulskoude ; rak en ur gevredigezh gant tud a bep seurt oadoù, aberzhiñ pep tra d' ar re yaouank a vefe breinañ anezho. An dud vras a glemm n' eus ket tu dezho da gousket en abeg d' ur bagad bugale hag a chom da c'hoarzhin ha da gomz pa vez aet an holl da gousket. Klemm a ra Loeiz en deus tremenet un eurvezh o renkañ ur banell evit an nor-dal, aet eo da zebriñ ha pa 'z eo deut war e giz en deus kavet en doa Fañch graet un estajerenn ganti. Tamall a ran ar baotred o deus amprestet va binvioù da soudañ ha n' o deus ket restalet anezho goude. N' eo ket laouen ar wreg peogwir zo deut tri faotr goude koan da lavarout o doa naon, ha neuze e voe roet bara ha kaotigell dezho hag ar mintin war-lerc'h e voe kavet an tammoù bara war al leur en trepas. Danevellañ a ra Per p' en deus ur bagad bugale taolet e bri prizius an eil ouzh egile e sal ar pri. Ha neuze kenderc'hel a ra ar stourm etre savpoent an dud vras ha diemskiant ar re yaouank. Met morse ne zeu da vezañ ur stourm a-enep hiniennoù. N' eus ket a santimant c'hwerv a-enep hini pe hini. An dizemglev a vir Summerhill bev-tre. Atav e c'hoarvez traoù, ha n' eus ket un devezh dizarvoud er bloavezh a-bezh.

Dre chañs n'eo ket ar gelennerion techet da berc'hennañ traoù, ha koulskoude e anzavan eo diaes din pa m' eus prenet ur voest liv ispisial ker-spontus ha neuze pa gavan eo bet kemeret an dra brizius-se gant ur plac'h evit livañ ur gwele kozh. N'em santout a ran perc'henn eus va c'harr, eus va skriverezh hag eus va binvioù, met n'em santan ket perc'henn eus an dud. Mar n' em santit perc'henn eus an dud ne dlefec'h ket bezañ kelennerion.

Uzet ha teuc'h e vez an traoù e Summerhill : anat eo. Ne vefe nemet un tu da vont a-enep :lakaat ar vugale da gaout aon. Met uzet ha teuc'h e teu da vezañ an nerzhioù spered ha n'eus ket tu da vont a-enep an dra-se : rak goulenn a ra ar vugale ha ret eo reiñ dezho 'pezh a c'houlennont. Hanter-kant gwech bemdez e vez digoret dor va burev ha setu ur bugel o c'houlenn : « nozvezh ar sinema eo ? », « perak n' em eus ket bet a gentel brevez ? », « gwelet oc'h eus Lena ? », « pelec'h emañ Anna ? ». An holl draoù-se a vez e-barzh va labour ha ne santan ket ar striv, daoust ma n' hon eus ket a vuhez prevez e gwirionez, evit un darn peogwir n' eo ket graet mat an ti evit bezañ ur skol - ket mat d' hor soñj dimpni, an dud vras, rak atav e vez ar vugale a-us dimp. Hag e fin an trimiziad e vezomp skuizh-marv

26

Un dra bouezus eo ne vez ket ar gelennerion alies e fulor. Se a ziskouez kalz traoù, ken diwar-benn ar vugale ken diwar-benn ar gelennerion. E gwirionez eo plijus-tre bevañ gant ar vugale-se ha n' eus ket kalz abegoù da vont e fulor. Ma vez ur bugel dieub, ne vo ket kasaus dre vras. Ne gava ket fentus lakaat un

den gour e fulor.

Ur gelennerez a oa ganimp, hag a oa kizidik-tre pa veze rebechet traoù dezhi, hag ar merc'hed a hegase anezhi. Ne c'hellent ket hegasiñ ar gelennerion all, rak hini ebet all ne rae forzh. Hegasiñ na c'hellit ober nemet tud a zo kizidik ha fougeet.

Daoust hag e vez bugale Summerhill tagnous evel kalz bugale ? Evel just pep bugel a zle bezañ tagnous en un doare, evit ober e hent dezhañ er vuhez. Pa vezont re, avat, eo peogwir n'int ket bugale dieub hag e enebont ouzh ar gasoni a zo bet diskouezet en o c'heñver. E Summerhill n' eus bugel ebet hag a santfe kasoni en e geñver a-berzh an dud vras he dre se n' eus ket ezhommm da vezañ tagnous. Ar vugale dagnous a zo ar re n' int ket karet pe gomprenet gant o zud.

Pa oan paotr bihan e skol ur gêr, e veze frioù o wadañ da vihanañ pep sizhun. Pa vez taer ar vugale en emgannoù e vez peogwir o deus kasoni. Hag ar re yaouank o deus kasoni enno o deus ezhommm d' en em gannañ. Pa vez ar vugale en un aergelc'h ma n' eus ket a gasoni, ne ziskouezont ket kasoni.

Pouezet en deus Freud war an daerded peogwir eo bet studiet gantañ ar familhoù hag ar skolioù evel m' emaint, d' am soñj. N' eus ket tu da studiañ bredoniezh ar c'hi oc'h evezhiañ ur c'hi chadennet. Ha n' eus ket tu kennebeut d' ober kelennadurioù start war vredoniezh an den pa vez an den staget ouzh ur chadenn stenn-tre - unan stummet gant rummadoù tud o deus kasoni ouzh ar vuhez. E skol dieub Summerhill - n' eus ket droug en dud en doare kriz - pell ac'hano - a vez gwelet er skolioù rust, a gav din.

E Summerhill, koulskoude, frankiz ne dalv ket chom hep skiant-vat. Eveshaat a reomp start surentez ar vugale. Ar vugale ne c'hellont ket mont da neuial nemet pa vez ur saveteer evit 6 bugel ; nep bugel dindan 11 vloaz ne c'hell mont war varc'h-houarn e-unan war ar straed. Ar reolennoù se a zeu eus ar vugale o-unan, degemeret en unan eus Emvodoù Bras ar Skol.

Met n' eus ket reolennoù o tifenn krapañ er gwez. Mont war beg ar gwez a zo un darn eus deskadurezh ar vuhez ; ha ma vefe difennet ouzh ur bugel pep ober dañjerus e teufe da vezañ aonik. Difenn a reomp ouzh ar vugale krapañ war an toennoù, ha difenn a reomp ar fuzuilhoù-dre-aer pe armoù all a c'hell gloazañ. Nec'het on bewech ma teu ar c'hlezeier-koad da vezañ diouzh ar c'hiz. Pouezañ a ran evit ma vefe ar beg toget gant kaoutchoug pe un tamm pilhoù, met zoken neuze e vezan laouen atav pa vez tremenet ar c'hiz. N' eo ket aes ober an diforc'h etre ar furnez wirion hag an nec'hamant.

Morse n' eus bet bugale moumounet ganin er skol. Atav am eus karet bugale 'zo muioc'h eget reoù all, evel just, met deut on a-benn da chom hep diskouez an dra-se. Marteze en deus graet berzh Summerhill peogwir e sant ar vugale e vez graet war o zro er memes doare hag ez eus ar memes doujañs evito. Aon am eus na vefe re drivliadel an emzalc'h e-keñver ar skolidi ; ken aes eo ober elerc'h eus gwazi, pe welout ur Picasso en ur bugel a c'hell strinkañ liv war ur follenn-baper.

En darn vrasañ eus ar skolioù ma m' eus kelennet enno e veze sal ar gelennerion un doare ifern en abeg d' ar gasoni, d' ar warizi ha d' an itrikoù. Sal ar gelennerion amañ zo ul lec'h eürus. Amañ n' eus ket eus ar youl fall gwelet ken alies e lec'h all. E-kreiz ar frankiz e teu an dud vras da vezañ ken eürus ha youlet mat hag ar skolidi. A-wechoù emzalc'h ur c'helenner nevez zo heñvel-tre ouzh hini ar vugale e-keñver ar frankiz ; dont a ra hep troc'hañ e varv, chom a ra en e wele re ziwezhat diouzh ar mintin, ha zoken tremen dreist lezennoù ar skol. Dre chañs, e vez dieubet an dud vras diouzh o c'hemplezhioù kalz buanoc'h eget ar vugale.

Pep eil sul d'an noz, e kontan un istor diwar o fenn d' ar re vihan. Graet em eus an dra-se 'pad bloavezhioù. Kaset em eus anezho e penn pellañ Afrika, dindan ar mor, hag a-us d' ar c'houmoul. Nebeut 'zo e kontis e oan marv. Summerhill a oa kemeret gant un den strizh anvet Pennek. Lakaat a reas ar

c'hentelioù da vezañ ret. Mar lavarec'h « kaoc'h » zoken, e vijec'h kastizet. Taolenniñ a ris pegen sentus e vezent holl d' e urzhioù.

Ar re oadet etre 3 hag 8 vloaz a oa e fulor a-enep din-me. « N' eo ket gwir. Tec'het hon eus holl. Lazhet hon eus anezhañ gant ur morzhol. Te 'gav dit e c'houzañvfemp un den e-giz-se ? ».

28

'Benn ar fin e kavis e vefent laouen hepken ma teufen en-dro d' ar vuhez hag e lakfen an Ao. Pennek er-maez gant un taol-troad. Ar re-se a oa bugaligoù n' o doa dre vras morse anavezet ur skol strizh, hag o emzalc'h fuloret a oa emdarzhek ha naturel. Ur bed ma ne veze ket ar rener diouzh o zu a oa ur bed spontus da ijinañ - ket hepken peogwir e anavezent Summerhill, met ivez peogwir er gêr ivez e veze Mammig ha Tadig diouzh o zu.

Un Amerikan deut d' ober ur gwel amañ, ur c'helenner war ar vredoniezh, a rebechas d' hor skol bezañ un enezenn, ne oa ket kenstaget ouzh ur c'hevredad brasoc'h. Setu va respont : « Ma fellfe din diazezañ ur skol en ur gêrig, o klask ober anezhi un darn eus ar gevredigezh, petra a c'hoarvezfe ? Diwar gant den, pet a vefe a-du evit ma vefe dieub ar vugale da vont pe chom hep mont d' ar c'hentelioù ? Pet a vefe a-du evit lezel d' ar bugel ar gwir da vasturbañ ? Adal an derou e vefen rediet da blegañ, da drubardiñ pezh a gav din eo ar wirionez ».

Un enezenn eo Summerhill. Ret mat eo dezhi bezañ un enezenn, rak ar gerent a vev e kêrioù pell pell, e broioù estren. Dre ma n' eus ket tu da vodañ an holl gerent e kêr Leiston (Suffolk), ne c'hell ket Summerhill bezañ ur perzh eus buhez sevenadurel, armerzhel, pe gevredigezhel Leiston.

Lavarout a ran buan ivez n' eo ket Summerhill un enezenn e-keñver kêr Leiston. Kalz darempredoù hon eus gant tud ar vro, ha plijus eo an darempredoù etrezomp. Ha koulskoude dre natur n' omp ket ur perzh eus ar gevredigezh-se. Morse n' am bije ar menoz da c'houlenn ouzh embanner kelaouenn al lec'h embann istor ar skolidi a oa e Summerhill hag o deus graet berzh er vuhez.

C'hoari a reomp gant bugale ar gêriadenn, met hor palioù deskadurel zo disheñvel-krenn. Dre m' hon eus liamm relijiel ebet n' hon eus darempred ebet gant strolladoù relijiel kêr Leiston. Ma vefe bet Summerhill ur perzh eus kreizenn gevredigezhel ar gêriadenn e vefe bet rediet da reiñ un deskadurezh relijiel d' e vugale.

D' am soñj, eo sklaer n' en deus ket va mignon amerikan meizet pezh a dalveze e rebech. Hervezon e talvez : Neill a zo a-enep ar gevredigezh. E hentenn ne c'hell ober netra evit soudañ ar gevredigezh : ne c'hell ket tostaat bredoniezh ar bugel ouzh ar gevredigezh a chom hep anaout bredoniezh ar bugel, ar vuhez ouzh ar re a zo a-enep ar vuhez, ar skol ouzh ar gêr. Setu va respont : « N' on ket evit difenn ar gevredigezh. Ne c'hellan nemet kendrec'hiñ ar gevredigezh e vo ret dezhi en em zieubiñ diouzh he c'hasoni hag he finijennoù hag he c'hevrinelezh. Daoust ma skrivan ha ma lavaran pezh a soñjan war ar gevredigezh, ma klaskfen adreizhañ anezhi dre va ober, e vefen lazhet gant ar gevredigezh evel un dañjer eviti.

29

Da skouer, ma klaskfen stummañ ur gevredigezh ma vefe ar grennarded enni dieub da gaout o buhez karantez naturel dezho, e vefen rivinet ha zoken lakaet en toull-bac'h evel lubaner dizereat ar yaouankiz. Daoust ma ne blij ket din an treuzvarc'hadoù, ez on rediet d' ober unan amañ, o veizañ n' eo ket adstummañ ar gevredigezh va labour pennañ, met reiñ eürusted d'un nebeut bugale.

Troet diwar ar saozneg gant Danielle BOURDINIÈRE.

ISTOR BREIZH LA BORDERIE

troet gant ROPARZ HEMON

Brezel Bleaz ha Monforzh

Stourm etre Charlez Bleaz ha Kontez Vonforzh

Seziz Henbont (Mezheven 1342)

« Pa zeuas an nevez-hañv, pa zistroas an amzer glouar, » eme Froissart, « an Aotrou Charlez Bleaz a gasas e gannaded da Frañs, en o zouez an Aotrou Beaumanoir, davet ar roue e eontr, evit pediñ anezhañ da gas tud evit e skoazellañ da adc'hounit ar peurrest eus Breizh. Ar roue a selaouas ouzh e bedenn, hag a gemennas d' ar c'hont Raoul d'Eu e gonestabl dastum marc'hegerien hag arbalastrerien, ha mont da Vreizh. Dug Bourbon, konted Bleaz ha Vendôme, an aotrou Loeiz Spagn, aotrounez Châtillon, Coucy ha Montmorency, Sant-Venant, hag e-leizh a varoned hag a varc'heien a Vro-C'hall en em urzhias hag a gemeras penn o hent. »

Ur pemzektez goude e tegouezhjont dirak Naoned, ma tlejed ober ar c'hreizennañ.

Arsav-brezel ar c'hentañ a viz Meurzh etre Janed Flandrez ha Charlez a bade betek ar 15 a viz Ebrel. Ne c'halljod eta adkregiñ gant ar brezel nemet en eil hanterenn eus ar miz-se. Hervez Froissart, e oa en arme c'hall 6.000 den-armoù ha 12.000 gant goaf ha skoed, en o zouez an arbalestrerien jenoat. Pennañ nerzh Charlez Bleaz oa ar skoazell bet kaset dezhañ eus Bro-C'hall. A bouez e oa dieubiñ Roazhon, an nor etre Frañs ha Breizh, hag ouzhpenn, Roazhon e dalc'h an enebour a c'hourdrouze Naoned atav.

Seziz Roazhon.

An arme c'hall a sezizas Roazhon, sur a-walc'h war-dro dibenn miz Ebrel. Ar gêr-se oa ur c'hreñvlec'h mat, pourvezet mat, enni ur gwarnizon mat dindan ur rener kadarn ha youlek, Gwilherm Kadoudal.

31

Evit mirout ouzh an enebourien da gavout lojeiz er fabourzioù, a oa ec'hon, Kadoudal a lakaas an tan enno hep termal. En em zifenn mat a reas. Derc'hel penn a reas « hir a-walc'h » ouzh argadennoù ar Spagnoled hag ar Jenoz, a oa niverus-bras en arme ar C'hallaoued, hag ouzh ar mein tev bannet e kêr gant ijinoù bras savet a-enep ar mogerioù.

Ar seziz ne dae ket nemeur war-raok. Hogen kêriz a skuizhe gant al labourioù kalet oant rediet da ober, e riskl da vezañ tizhet gwech an amzer gant darn eus ar mein tev-se. Gwall nec'het oant o welout o madoù war ar maez preizhet, gwastet gant an enebour, ha kement-se abalamour d' un tabut na raent forzh anezhañ, rak, e derou ar brezel-se, ar darn vuiañ eus ar Vrezhoned, dreist-holl re ar partabl, ne oant ket muioc'h a-du gant Bleaz eget gant Monforzh.

Bourc'hizien Roazhon a yeas eta da ziskleriañ da Gadoudal ne oa spi ebet da gaout harp, hag e vije ret en em zaskoriñ. Koulz e vije e ober raktal, kuit da c'houzañv reuz ur seziz hir. Ar c'habiten a nac'has krenn.

Nebeut amzer goude, en noz, e-pad e gousk, e voe tapet gant ar

vourc'hizien ha lakaet e prizon. Hag i neuze kas dileuridi e kamp Charlez Bleaz evit en em glevout gantañ a-zivout daskoridigezh kêr : pardon leun evit ar re a-du gant Monforzh, frankiz evit ar gwarnizon hag ar gouarner d' en em dennañ d' al lec'h ma karjent, ma ne felle ket dezho mont en arme Vleaz. Setu aze an divizoù kinniget gant Roazhoniz, hag aotreet gant ar sezizourien.

E-keit ha ma 'z ae an drec'hourien e kêr dre un nor, Kadoudal hag e vagad a yae er-maez dre un nor all hag a gerzhe war-eeun davet Janed Flandrez.

Seziz Henbont.

Ar briñsez-mañ n' edo mui e Brest. Evit galloud derc'hel penn gwelloc'h ouzh aloubadeg ar C'hallaoued, e oa tostaet ouzh ar reter hag aet da glask un annez kloz en Henbont, na oa nemet ur gêr vihan, hogen mogeriet-kreñv en amzer-se, darempred etrezi hag ar mor dre ar Blaouezh. Eno e vije aes kaout skoazell ar soudarded prometet gant Edouarzh III.

Kontez Vonforzh, kerkent ha ma klevas e oa kemeret Roazhon, a c'hortozas Henbont da vezañ sezizet. Se a ranke c'hoarvezout. O lakaat krog e kont Monforzh, o doa kredet ar C'hallaoued e oa pladet e gostezenn. Adsavet oa bet avat gant ar gontez. Ma vije lakaet krog enni d' he zro, e vije echu. Ne vije mui den ebet da gemer ar penn. O mab, ur hugel tri bloaz, ne gonte ket. Tud Vleaz, bet trec'h e Roazhon, a grede e vije aesoc'h c'hoazh bezañ trec'h en Henbont.

32

A-raok skeiñ etrezek ar gêr-se koulskoude, e fellas dezho bezañ mistri war un nebeut kreñvlec'hioù e Bro-Roazhon, en o zouez tour-meur Sant-Albin-an-Hiliberenn, en em zaskoras goude derc'hel penn taer-mat.

Ar C'hallaoued o tagañ.

Kement-se, kemeridigezh Roazhon hag all, a c'hoarvezas e-pad an darn vuiañ eus miz Mae, betek e-tro an 20, a c'haller krediñ.

Etre Roazhon hag Henbont ez eus un tregontad levioù, o vont war-eeun. Eizh devezh da vihanañ a oa ret d' un arme stank, hep kalz a urzh, hag o stlejañ pakadoù war he lerc'h, evit ober an treug dre hentoù fall.

Ar C'hallaoued a erruas eta dirak Henbont e deizioù diwezhañ miz Mae. O welout pegen kreñv e oa ar gêr-se, pennoù an arme, o soñjal e vije hir ar seziz, a lakaas o soudarded da sevel lojeizoù stabil, teltoù solut ha logelloù.

Ne oa ket c'hoazh diazezet o c'hamp ma 'z eas un nebeut tud yaouank, Jenoz, Gallaoued ha Spagnoled, da dagañ nerzhus belloù (1) pe lisoù kêr, da lavarout eo ar rakzifenoù, peulioù ha fozioù a wareze an dorojoù hag an taladoù-moger e-kichen, hag a rae zoken tro ar mogerioù a-wechoù. En amzer-se e veze taget alies ar belloù gant ar sezizerien evit klask dilojañ an difennourien diouto, ha neuze, dre ar c'hemmesk graet gant ar re-mañ o tec'hout prim, mont e-barzh kêr ganto. Monforzhiz avat ne voent ket tapet. Mont a rejont war-raok er-maez eus ar belloù, o tiarbenn an dagerien.

(1) E krennvrezhoneg e oa daou c'her **bell** : unan, implijet alies, a dalveze kement ha « brezel, emgann, taerder » ; egile, kavet hepken er pezh-c'hoari " Dismantr Jeruzalem ", a dalveze kement ha « rakzifenn ur gêr pe ur c'hreñvlec'h » ; klotañ a ra gant ar ger gallek kozh **belle** ; ar furmod gallek all **baile**, **baille** eo ar re implijet gant La Borderie.

33

Bleaziz war se a savas o c'hamp evit ober seziz a-zevri. Ne voent ket evelato evit gronnañ kêr a-grenn, rak ne c'hallent ket mirout ouzh al listri da zont war ar Blaouezh. Hag ouzhpenn, ar gêr sezizet e 1342 ne oa ket ar gêr gozh,

war c'hlann dehou ar stêr, hogen an darn eus Henbont a sav hiziv war ar c'hlann gleiz. Dor Bro-Wereg hag ar mogerioù kozh, ma chom dismantrou bras a-walc'h anezho en amzer-mañ, n'int bet savet nemet er 15-vet pe er 16-vet kantved. Ar c'helc'hiad treset ganto a zo moarvat evelato hini mogerioù 1342.

Abaoe kemeridigezh Roazhon, kalz eus baroned Vreizh a oa aet a-du gant Charlez Bleaz. « Edont en e gichen oc'h ober un ambrougadeg vras, gant gitonioù ha bannieloù e-leizh o c'hournijal gant an avel » (Ar Baot). Peuraozet e voe teltoù ha lojeiz evit an holl dud-se. Ha d' an trede deiz e voe taget ar belloù adarre, hogen kalz kreñvoc'h eget en deiz kentañ, « da welout doare ar re a oa e-barzh ha gouzout ha tu a vije da c'hounit tra pe dra » (Froissart).

An argad, deraouet da 6 eur vintin, ne echuas nemet da 3 eur goude kreisteiz. Tomm e voe ar c'hrogad. Bleaziz ne zeujont ket a-benn eus o zaol gwelloc'h eget diagent. P' en em dennjont, e lezjont war an dachenn « ur bern tud varv hag e kasjont en-dro ganto kalz tud c'houliet » (Froissart).

Pennoù an armead c'hall-ha-breizhat, gwall gounnaret gant an eil c'hwitadenn-se, a zivizas kaout digoll, koustjed a goustje. E-lec'h tagañ ar belloù e rejont o menoz arsailhañ kêr. Un nebeut danevellourien a seblant lavarout e voe graet an arsailhadenn-se en deiz end-eeun ma voe taget ar belloù evit an eil gwech. Hogen diaes eo krediñ. Arme ar sezizerien a oa bet gwall hejet gant ur striv ken hir, ken taer, ha ken difrouezh. Ret oa dezhi kaout amzer da dennañ he anal. Ouzhpenn se, un arsailhadenn, zoken ma n' eo nemet evit pignat gant ar mogerioù, a rank bezañ prientet tammpe damm. Ne voe graet eta nemet antronoz d' an abretañ, marteze daou pe dri devezh da c'houde.

Ar C'hallaoued-ha-Brezhoned, e-lec'h tagañ ar belloù, a yeas d' ar mogerioù, ar re a c'halle bezañ tizhet war-eeun. Hag i da lakaat o holl nerzh, o holl gadarnded, o holl ernez. Ar re daget, en o fenn Janed Flandrez he-unan, a enebas ken taer all. Barnit diwar an daolenn treset gant hon danevellourien gozh :

« Kontez Vonforzh, armet mat-tre, pignet war gein ur marc'h mat a yae dre straedoù Henbont, oc'h atizañ he zud da herzel ouzh an arsailherien. Lakaat a rae an itronezed, an dimezelled, ar bourc'hizezed ha merc'hed kêr da derriñ ar pavezioù ha da zougen an tammou betek ar c'hranelloù hag ar gedigoù d' o stlepel war an enebourien. Lakaat a rae ivez kas ar c'hanolioù hag ar bombezerezed d' al lec'hioù gwellañ evit skeiñ war an argaderien. Ha tud Henbont, tud a vrezel hag all, broudet gant he mouezh kalonek, a rede en arvar o buhez da herzel ouzh arsailh ar Frañsizien, hag a stlape a-nerzh eus krec'h ar mogerioù mein pounner, podadoù raz-bev, dour berv o devoa bec'h o teurel. Ma tifaragoelle d' an traoñ ar skeulioù karget a C'hallaoued o doa graet o seizh gwellañ da grapañ » (Ar Baot).

34

An tan e kamp ar C'hallaoued.

An arsailh a bade abaoe pellik amzer, pa bignas kontez Vonforzh betek lein unan eus uhelañ tourioù kêr, da welout penaos oa kont gant an emgann, petra a rae an arsailherien, ha pelec'h edont.

Setu ma verzas ne oa ket diwallet kamp ar sezizerien : an darn vrasañ eus ar soudarded a gemere perzh en argad, hag ar re all a oa tostaet ouzh lec'h ar c'hrogad da sellout. Hag ar gontez da ziskenn, mall warni, evit bodañ tri c'hant marc'heger da vont er-maez eus kêr dre un nor na oa ket an enebourien, re brederiet gant o stourm, o teurel pled outi, hag o kemer un hent-tro, da gouezhañ a-benn un nebeut munutennoù war gamp ar C'hallaoued.

Ne gav eno nemet un nebeut evezhierien-bakadoù, keginerien ha paotred-varchosi, a skar kuit kerkent ha m' he gwelont. Hag hi d' en em deurel dre ar c'hamp gant he zri c'hant paotr, flammerennoù ganto, ha da lakaat an tan dre-holl. An arsailherien, evito da vezañ en o gwellañ o tagañ mogerioù Henbont, a

verz buan ar mell tantad, hag en ur youc'hal « Trubarderezh ! trubarderezh ! » ez eont diouzh kêr da glask saveteiñ o c'hamp... re ziwedhat. Ne vane mui nemet glaou-bev ha ludu tomm.

Dizale e voe dizoloet gant piv oa bet graet an taol. Loeiz Spagn, marichal an armead c'hall-ha-breizhat, a c'harmas :

« War varc'h diouzhtu ! Hounhont hag he bandenn ne antreint mui biken en Henbont nag e nep kreñvlech e Breizh ! Tapet int, pe ne echuo biken ar brezel-mañ ! »

O krediñ e klaskfe Janed Flandrez distreiñ e kêr, e laka tud armet da ziwall an holl zorojoù, evit pakañ krog enni pa zeufe. Padal, Janed, he deus soñjet en dra-se, pell diouzh mont en-dro da Henbont, a bella d' an daoulamm gant he bagad, o krial :

« Da Vrec'h ! »

N' eo ket da Vrec'h avat e fell dezhi mont. Hent Brec'h a zo ivez hent Alre, ha da Alre, ur c'hreñvlec'h e dalc'h Monforzhiz, ez a da glask repu.

35

Loeiz Spagn, o welout en deus graet ur fazi, a red, kounnar ennañ, war he lerc'h. Ne dal mann ! Ne c'hell ket he zizhout, ha ne ra nemet pakañ un nebeut luguderien, a zo tra dister d' e frealziñ. Ar C'hallaoued o-unan, sebezet, bamet, a lavare etrezo :

« Sellit ar gontez kadarn-se, na brav e oar ober brezel ! Nag a daolioù-kaer en un deiz ! Aet eo diouzh Henbont en desped dimp, devet he deus hor c'hamp, hol lakaet he deus da ziskregiñ diouzh hon argad ha bremañ e vo e surentez en Alre, hep kaout droug ebet ! »

Henbontiz aval a leñve : da belec'h oa aet o c'hontez, a lakae fouge enno, o skore hag o gwareze ? Petra oa o vont da c'hoarvezout ganto hepzi ? Ar sezizerien ne raent nemet broudañ o enkrez.

« Kit, » a grient dezho, « kit da gerc'hat ho kontez ! Kollet eo ganeoc'h, kollet da vat, ha n' he gwelot mut biken ! »

Ne oa ket ar C'hallaoued evelkent evit tennañ o mad diouzh esmae tud kaezh Henbont ha kenderc'hel gant o seziz. N' o doa mui na lojeiz, na bitailh, na pourvezioù, nag ardivinkoù-brezel : losket e oa pep tra. Ret e voe dezho klask dre-holl, betek Roazhon zoken, da gavout an traoù o doa ezhomm. E-lec'h teltou ha logelloù, e savjont lochennoù brankoù ha delioù, a oa bourrus evelato. Hag e tostajont o c'hamp ouzh kêr.

An distro da Henbont.

Dugez Vreizh, kontez Vonforzh, n' he doa tamm c'hoant ebet da chom er-maez eus Henbont. Re e kare ar gêr-se hag an annezerien anezhi evit o dilezel. Goude pemp deiz tremenet en Alre, e tihunas he marc'hegerien war-dro hanternoz da lavarout dezho :

« Tud vat Henbont a zo gwall nec'het, me 'oar, abalamour din. Ret din o diboaniañ ha distreiñ daveto. Me a ziskouezo deoc'h penaos. »

War varc'h eta hag en hent ! C'hwec'h lev (26 km) a zo etre an div gêr. Da deir eur veure, da strink-an-deiz, bagad Janed Flandrez a verzas lochennoù-delioù kamp nevez ar C'hallaoued. Un taol-gwidre hardizh a ijinis : kas un nebeut tud distaget diouzh ar bagad, dindan urzhioù daou baotr dispart, Gwilherm Kadoudal hag Erwan Trezigidi, da denañ evezh an enebourien er c'horn eus o c'hamp ar pellañ diouzh kêr. Ar C'hallaoued, c'hoazh hanter gousket, a zeuas er-maez eus o lochennoù da glask ar re a dage anezho. E-keit-se e tigure dorjoù

Henbont dirak an dugez. Kadoudal, Trezigidi hag o ambrougerien a zegouezhe buan eno d' o zro. Hag int holl e kêr, kenyouc'het dezho gant tud a-vern o tridal gant al levez, e-kreiz tousmac'h an holl vinviou a c'halle ober trouz, trompilhou, kammgornioù, timbalennoù, kornboudoù, hag all.

36

Gant ar sonerezh trivlius-se e voe kemennet d' ar C'hallaoued taol her nevez ar gontez, hag an dro-gamm wadek nevez he doa c'hoariet dezho. An holl dudjentil-se, fuloret, a gemeras o armoù, ha gant o soudarded ez ejont da dagañ kêr, taer, adarre, da vezañ diarbennet ken taer all gant kêriz diwar lein o c'hanelloù. Dres evel diagent, war-dro teir eur goude kreisteiz, e rankas an arsailherien mont war o c'hiz, kollet ganto muioc'h eget n' o doa kollet an arsailhidi, « rak o zud en em leze da vezañ lazhet ha gloazet hep ezhomm » (Froissart), hag hep tro vat ebet.

Ar C'hallaoued, feuket, a lavare « e oa an diaoul a ziwalle ar gontez ».

Charlez Bleaz dirak Alre.

Charlez Bleaz, n' en doa bet nemet berzh-mat e brezel Breizh betek neuze, a oa hegaset o kaout netra nemet drouk-verzh bremañ, hag o welout ar c'hreñvlec'h a eil renk-se o herzel ouzh bagad pompadus an aotrounez c'hall-ha-breizhat deredet dindan e vanniell gant o armead niverus, a dleje bezañ bet gouest da ober div seziz evel houmañ. Divizout a reas rannañ an armead-se e div gevrenn : unan, bleniet gant Loeiz Spagn, a chomje dirak Henbont : eben, bleniet gant Charlez e-unan, a yaje e-keit-se da lakaat seziz dirak Alre. Pezh a voe graet antronoz.

Gant an darvoud-se e c'haller deiziadañ tost da vat degouezhadennoù ar seziz. Un akta gwiriek a chom, roet gant Charlez Bleaz « en hon teltoù dirak kêr Henbont, d' an trizekvet deiz a viz Mezheven, e bloaz an Aotrou 1342 ». En deiz-se eta ne oa ket aet c'hoazh Charlez Bleaz eus Henbont da Alre. Evel ma 'z eas da Alre an deiz war-lerc'h distro kontez Vonforzh, ne c'hell ket an distro-se bezañ c'hoarvezet goude an 13 Mezheven 1342, ha kement tra hon eus kontet a-zivout seziz Henbont betek bremañ a c'hoarvezas en hanterenn gentañ ar miz, a-raok an 13.

37

Ijinoù-brezel.

Loeiz Spagn (1) ne oa ket hepken kalonek-bras. Brudet e oa ivez da vezañ den-a-vrezel ampart. Kemañ a reas a-grenn an doare-argadiñ bet implijet dirak Henbont betek neuze. Ne gasas mui tud da vezañ lazhet o klask mont dreist peulioù ar belloù, hep dont a-benn atav, ha pa zeuent a-benn, d' en em deurel gant o skeulioù ouzh ar mogerioù, evit ober taol gwenn. Ken kaer ha ken kreñv e veze difennet kêr ma ne c'hallent ket pignat betek al lein. Ha dalc'hmat e rankent distreiñ d' o c'hamp gant e-leizh a dud lazhet hag a dud c'houliet. Aner oa klask kemer ar c'hreñvlec'h gant tud. Loeiz Spagn a zivizas e gemer gant ijinoù-brezel.

« An Aotrou Loeiz Spagn a lakaas degas ha charreat eus kêr Roazhon daouzek mell injin-brezel, » eme Froissart en e eil danevell, « hag o savas dirak Henbont. » En e drede danevell e lavar : « Ar Frañsizien a lakaas kilviziañ hag oberiata ijinoù bras, hag a lakaas degas re all eus Roazhon ha Naoned : an holl a voe savet dirak kêr Henbont ».

Ha setu amañ an disoc'h :

« Mein pounner, » a skriv Froissart c'hoazh, « a veze bannet dibaouez gant an ijinoù-se ouzh tourioù ha dorojoù kêr. Ma veze freuzet ha dispennet ar mogerioù, a yae laosk ha distabil. Hag aon a groge en difennerien rak ar riskl, seul vuioc'h ma n' o doa tamm keloù eus ar skoazell a dlee dont gant an Aotrou Amaouri Klizun. »

(1) Loeiz Spagn en deus kemeret perzh bras e brezelioù Breizh. Evel ma tiskouez e anv, e teue e diegezh a Vro-Spagn. Bez' e oa mab douaren Alfoñs X, roue Kastilha ha Leon, marvet e 1284, dre Ferdinant hêr Kastilha, lesanvet " de la Cerda ", mab Alfoñs X ha marvet en e raok, e 1275, o lezel war e lerc'h ur mab, Alfoñs de la Cerda ; hemañ, goude ma voe lamet digantañ ar gwirioù en doa war dron Kastilha, en em dennas e Frañs ; eno ez eas da letanant-mor ar roue Charlez IV, an Hini Kaer, e Bro-Yezh-Ok, hag e teuas da vezañ baron Lunel goude e zimeziñ gant Mahaot, itron Lunel ; eno e vervas e 1327. Diwar an dimezhiñ-se e voe ganet hol Loeiz Spagn, a voe Amiral Frañs e 1341, neuze Marichal an arme c'hall e Breizh. Graet e voe e 1344 Priñs an Inizi Gwenvidik (Kanariez) gant ar Pab Klemez VI. Bevan a rae c'hoazh e 1351 - (Notenn gant La Borderie).

38

Anat eo e voe mare hirañ hag arvarusañ ar seziz. Amzer a oa bet ret d' ar C'hallaoued da ober an ijinoù-se ha d' o lakaat da zont eus Roazhon ha Naoned. Anat eo ivez, da varn diouzh komzoù Froissart, ne glaskas ket ar C'hallaoued toullañ o hent a-dreuz mogerioù Henbont dre gleuzañ riboulioù na dre fontañ anezho. Ne rejont nemet o horellañ dre deurel mein ha bannadelloù all, pounner-bras, ouzh al lec'hioù gwanañ ha savet ar gwashañ. Seurt doareoù-argadiñ a oa kalz gorrekoc'h ha disuroc'h eget fontañ. Ar sezizidi a esaeas hep mar distrujañ an ijinoù, hep dont a-benn. An taladoù-mogerioù aozet-fall, mar doa anezho, a voe sur frailhet ha digoret gant ar bangounelloù, ar stokerezed, ar bannerezed o vont dezho dizehan. Ne vije ket bet diaes stankañ an toulloù bihan a raent. Hogen ar voger-dro a c'hallje disac'hañ e meur a boent a-greiz-holl, ha gwall denn e vije bet difenn kêr, ken niverus oa ar sezizourien. Hag e-touez ar sezizidi e oa eta ur re bennak a soñje en em zaskoriñ.

Emellerezh eskob Leon.

Tud oa e kêr a boueze war ar re all, gant youl, d'ober an dra-se. En o mesk e oa Gwion Leon, eskob Leon. Hemañ a oa chomet stag ouzh tuad Monforzh, ha koulskoude, e niz Herve Leon a oa, adalek kemeridigezh Naoned e 1341, unan eus gredusañ dalc'hidi Charlez Bleaz.

Ur fazi en deus graet Froissart avat o venegiñ an Herve-se e-touez an aotrounez eus arme Vleaz a sezize Henbont ; ne c'halle ket bezañ eno, peogwir e oa, evel ma welimp, prizoniad abaoe miz Mae gant ar Saozon. Hogen niverus oa e diegezh. Ur c'henderv dezhañ, Gwilherm Leon, aotrou Hacqueville e Normandia, a gemeras perzh bras hep mar er brezelioù-se. Evel Herve e oa niz d' an eskob Gwion Leon. Ar Gwilherm-se eo moarvat a oa dirak Henbont, hag e anv a dleer lakaat e-lec'h anv Herve en darvoud da heul.

Gwion Leon, broudet gant e holl gerent a-du gant Charlez Bleaz, a fellas dezhañ mont a-du gantañ ivez, ha se dre un taol brav : sujañ da Charlez kreñvlec'h didrec'hadus Henbont.

Gant e niz ar Bleazad e kavailhas evit na vije ket re galet feur an daskoridigezh lakaet war an difennourien. Gant ar re-mañ e kavailhas ivez d' o flegañ d' e c'hoant, oc'h ober dezho krediñ e oa brasoc'h ar riskl eget na oa e gwirionez. Janed Flandrez a zivinas e oad oc'h irienniñ en he enep. Ur c'hannad a gasas da Dangi ar C'hastell evit e c'hervel da zont d' he sikour. O c'hortoz, e oa gwall enkrezet, hag ez ae gant komzoù flour ouzh he zud.

« Tud vat, va mignoned, » a lavare, « me a oar em c'halon hor bezo keloù mat eus Bro-Saoz dizale, ha skoazell digant Amaouri Klizun. »

39

Eskob Leon, padal, a gendalc'he da bouezañ war an dud evit m' en em zaskorjent, hag an dugez a welas e oa prest kalz da selaou outañ. « O vont er-maez eus he c'hastell, ez eas e kêr da gomz ganto ha d' o fediñ en ur ouelañ da virout na rajent emglev ebet gant ar Frañsizien. Un nebeud a gemeras truez outi

hag a lavaras :

« Itron, nec'het omp o welout ne deu ket deoc'h ar skoazell prometet eus Bro-Saoz. An Aotrou Amaouri marteze n' en deus ket bet ho kemenn. War vor ez eus kement a riskl hag a zroukverzh ! Ne vern peseurt emglev a skoulmimp, touiñ a reomp deoc'h ne vo ket paket krog ennoc'h. Frankiz ho pezo d' en em dennañ en ho kreñvlec'h gwellañ, hervez ho c'hoant. Ouzhpenn se, ne raimp netra a-raok pemp devezh. Meur a dra a c'hell c'hoarvezout a-benn neuze. »

« Gwir a lavarit, » eme ar gontez. « Ho trugarekaat. »

Donedigezh ar Saozon.

Echuomp an danevell-mañ gant skrid Froissart (dornskrid Roma) :

« Tri devezh war-lerc'h an tamm kaozeadenn-se, e savas ar gontez mintin abred. Un nebeudig goude strink-an-deiz, o sellout ouzh ar mor, e spurmantas ur bern gouelioù o flamminañ. Bez' e oa strollad al listri saoz o tont. Ha dre ma c'hortoze ar gontez, e tostae ar gouelioù. Ha pa welas ar bannieloù o lufrañ hag o c'hournijal, e kouezhas d' an douar gant al levenez. He zud a oa en he c'hichen a savas anezhi. Pa gomzas, e lavaras :

« Diskennit diouzhtu e kêr da gemenn ar c'heloù d' ar varc'heien a zo eno. Emañ ar skoazell digant ar Saozon o tont. »

Marc'heien Janed Flandrez a roas prim da c'houzout d' an eskob e oa echu ar c'hendivizoù en doa boulc'het gant kement a c'hred. Hag eñ gwall zipitet, e klaskas c'hoazh derc'hel gant e vennad, o lavarout e oa e niz (Gwilherm Leon) dirak dor gêr gant ur bagad Bleaziz, tost da antren. Eilgeriet e voe dezhañ e c'halle e niz mont d' e gamp war e giz. Pezh oa d' ober n' oa ket en em zaskoriñ, hogen en em gannañ. Ar prelad, brouezet, a guitaas Henbont, o kas kemenn d' an dugez e tinac'he ar wazoniezh hag ar fealded en doa roet dezhi, evit mont a-du gant Charlez Bleaz:.

« Ra yelo kuit ! » eme Janed Flandrez, sart. « Tud estregetañ a zo ganin ! »

40

Al levenez a lugerne war he zal, o welout ar Saozon o touarañ e porzh Henbont d' ar poent-se.

Hervez Froissart, skoazell ar Saozon a c'hoarveze eus 120 lestr, o tougen 300 den-armoù ha 2.000 gwareger. Gant ar 500 den eus gwarnizon Henbont e oa trawalc'h da dagañ ha da zismantrañ ijinoù spouronus Loeiz Spagn : saveteet Janed !

An hini a zilestras da gentañ e voe Amaouri Klizun, gward ha kulator ar bugel Yann Monforzh, ar c'hannad kaset da Vro-Saoz gant an dugez da zistreiñ gant ar skoazell bet gortozet keit amzer.

Janed a yeas d' e vriata ha da bokat dezhañ flour-meurbet, o lavarout :

« A Amaouri, na pell hoc'h eus daleet, na pell em eus gedet ac'hanoc'h ! »

Amaouri en em zigarezas, gwelout a raimp diwezhatoc'h penaos, hag a lakaas an dugez d' ober anaoudegezh gant rener ar skoazell saoz, Gaoter Manny, a zo bet meneget e anv meur a wech diagent, hag a gemeras perzh bras er brezelioù-se.

« Edo, » eme Froissart, « en e c'hwec'h vloaz ha tregont pe war-dro, ur marc'heg kaer, livrin e zremm, plijus da welout, iziliet-mat. »

« Itron, » eme Amaouri, « setu amañ ar c'habiten. Ar garg-se a zo bet roet dezhañ. Roue Bro-Saoz hag holl aotrounez e Guzul o deus fiziañs ennañ. »

An dugez a vriataas ar c'habiten, evel m' he doa graet da Amaouri, « flour-meurbet », hag a reas heñvel d' ar renerien all. Neuze e kasas an holl varc'heien-se ganti da gastell Henbont, hag e kinnigas dezho ur banvez bras.

Diskar an ijinou.

Abaoe tri devezh, n' o doa ket ar sezizerien lakaet o ijinou da vont en-dro, war c'houlenn eskob Leon, ar c'henvreutaer gredus. Pa glevjont ne oa mui a genvreutaerezh, e lakajont anezho da drouzal adarre.

Ar varc'heien, a-greiz m' edont o vanvezañ, a glevas trumm tourni ar bannadelloù pounner o kouezhañ war ar mogerioù. Souezhet e voent, un tamm spontet zoken da gentañ gant ar sonerezh-se. Gaoter Manny, o vezañ graet enklask war ar pourveziou a oa e kêr, hag o vezañ klevet digant ar renerien vrezhon, dreist-holl Erwan Trezigidi ha Gwilherm Kadoudal, e oa e-leizh anezho, - rak a drugarez d' ar Blaouezh, na bitailh na pourveziou-brezel na pourveziou all n' o doa graet diouer da Henbont, - Gaoter Manny eta a lavaras :

41

« Da vare koan e fell din mont da welout ar pikol ijin-hont a ra kement a cholori. Lakait ho tud war devezh. Va re a vo ivez. A-gevret ez aimp da ziskar ha da zispenn ar wikefre-se, a zo re dost, hag a virfe ouzhimp da gousket. »

En abardaez-se end-eeun, ur miliad tud, Brezhoned ha Saozon, 500 marc'heger, 500 gwareger, a yeas diouzh Henbont da dagañ ar wikefre drouzus-se. N' o doa lezet ar Frañsizien d' e diwall nemet 100 den « houarnwisket » ha 100 arbalastrer. Derc'hel an dachenn a c'halljont, da reiñ amzer d' ar sezizerien da gas soudarded all evit difenn an ijin. Tec'hout a rejont avat hep emgann, hag ar Vrezhoned-ha-Saozon, o doa degaset kilvizien ganto, a droc'has buan saezh an ijin hag en diempras a-grenn.

Neuze e rejont un dro, o tistrujañ daou ijin all pe dri, ar re ziwezhañ, koulz lavaret, a chome eus an daouzek a oa bet da gentañ, rak ouzhpenn unan a oa bet diskaret gant gwarnizon kêr.

Disparti ar Frañsizien.

Ar Frañsizien, a-benn ar fin, a zeuas er-maez eus o linennoù, 2.000 anezho, da zifenn o ijinou ouzh soudarded Gaoter Manny. Hemañ, na oa gentañ nemet an hanter eus an niver-se, a harzas kalonek hag a zistroas gant urzh vras a-dreñv ar belloù. Eno ne voe ket taget gant ar sezizerien, rak edo an noz o kouezhañ. En em dennañ a rejont pinous en o c'hamp.

Antronoz, pennoù an arme c'hall a zalc'has kuzul. Edont abaoe ur miz dirak Henbont. Kollet o doa kalz tud, ha n' o doa gounezet netra nemet taolioù fall Bremañ ma oa deuet ar Saozon, e vije gwashoc'h c'hoazh. N' o doa mui tu da gemer ar c'hreñvlec'h. Ali e voent, an holl anezho gwitibunan, da ziskampañ. Pezh a rejont antronoz, abred-mat, goude lakaat an tan en o lochennoù-delioù.

Hag i da vont davet Charlez Bleaz, atav o lakaat seziz dirak Alre, a seblante bezañ gouest da herzel evel Henbont.

" GOANAG ERIN " (1897)

(DIBENN)

BROADELAÑ AN DOUAR

Evel just ez eo dic'hallus staliañ en-dro pobl Iwerzhon war an douaroù ma 'z int bet skarzhet diouto, met ne ra ar fed-se nemet reiñ ur poent ouzhpenn d'ar goulenn groñs e vefe broadelaet douar Iwerzhon e dalc'h ar stad iwerzhonat. A-hend-all, ha studiet o deus e gwirionez, hon difennerien perc'henniezh ar gouerien, lusk an ekonomiezh er mare-mañ ha diorroadur an ardivinkelezh e bed al labour-douar ? Mont a ra ar bed war-raok ha perc'henniezh ar gouerien war an douaroù a c'hellje bezañ bet un dra vat kant vloaz 'zo a vefe bremañ divarrek da virout ouzh gounezerezh Iwerzhon da gouezhañ en e boull. Tremenet eo mare ar gouerien vihan evel hini ar gapitalourien vihan ha forzh pelec'h e vefent c'hoazh kavet e welont ez eo dic'hallus evito keveziñ gant mekanikoù ijinekaet ha pikol atantoù Amerika pe Aostralia. Pa bouez war bep atant iwerzhonat bec'h e labourerien a-hed 365 devezh ar bloavezh e kemer kouer kapitalour ar Stadoù-Unanet e labourerien e gopr dre gantadoù evit an eost hag a zilabour anezho kerkent echu, o kas evel-se d' e balevarz gopr-bloaz e labourerien.

SKIANT EL LABOUR DOUAR

Penaos e c'hellfe hor c'houerien stourm ouzh seurt saviad, pe ouzh unan heñvel ouzh an hini displeget e danevell *Kevredigezh Amerikan ar Skiantoù Sokial*, ken abred ha 1878 ? Kontañ 'ra penaos ar skiant hag an ijin, goude bezañ bet ken pell amzer gouestlet d' ar greanterezh, o deus troet o evezh war-du ar gounezerezh hag o deus, evel disoc'h, degaset test ur reveulzi en dachenn-se eus obererezh mab-den. Erer a c'hell, stlejet gant kezeg, arat ouzhpenn pemp devezh-arat en un devezh, da lavarout eo, gorread meur a atant iwerzhonat, ha traktourien a ra kalz muioc'h ; mekanikoù da hadañ e c'hell ur c'hrennard hag ul loen-kezeg ober ganto teir gwech labour un den, hag henn ober kalz gwelloc'h ; eosterezed e c'hell ganto un den hag ur c'houbled pe zaou a gezeg ober labour d' an nebeutañ tri-ugent den gant filzier ; eosterezed a c'hell n' eo ket nemetken troc'hañ an eost met ivez e liammañ a zo bremañ ken boutin e Bro-Saoz hag en Amerika ken ne zeuont ket a-benn da sachañ an evezh, ha klevet e vez digant tud e c'heller fiziout enno diwar-benn mekanikoù a droc'h, a went, a laka e seier hep hantererezh daouarn den all ebet nemet re an teknikour a vlein ar mekanik. Evit troc'hañ ed, un den pe ur c'hrennard, gant ul loen-kezeg hag ur mekanik, a c'hell ober labour ugent den hag a droc'h un devezh-arat en un eurvezh.

44

An holl draoù-se, ret eo derc'hel soñj, n' int posubl nemet d' ar c'houer en deus miliadoù a zevezhoù-arat. Izelañ priz forzh pe hini eus ar mekanikoù-se a vefe trawalc'h evit rivinañ an darn vrasañ eus kouerien vihan Iwerzhon ha setu an disoc'h : e-pad m' emañ ar c'houer iwerzhonat o poaniañ start war e atant e gevezer amerikan a c'hell dastum e eostad, kas anezhañ miliadoù a vildouaroù pelloc'h dre hent-houarn, kargañ anezhañ war vigi, kas anezhañ a-dreuz ar Meurvor Atlantel hag, a-benn ar fin, e werzhañ tost da vat e toull hon nor ken marc'hadmat, ha marc'hamatoc'h, eget frouezh hon douar-ni. Kevererezh kig ejen ha kig dañvad skornet ar Zelanda-Nevez en deus dija graet un droug spontus da genwerzh iwerzhonat ar chatal hag er mizioù diwezhañ em eus resevet er prevez eus ur gefrad sinet Kompagnunezh Bigi-dre-dan al Ledenez hag ar Reter evit degas amann eus ranchoù sevel chatal divent Aostralia da forzh peseurt porzh eus Breizh-Veur hag Iwerzhon d' ur priz a dalv kement ha rivin evit atantoù gounezerezh laezh ar broioù-se. Neuze, daoust ma 'z eo gwelloc'h evit diwall

naveken diouzh tres an direizhder doujañ start ar « gwirioù a berc'henniezh » -se war an douar prenet gant hor c'houerien dre ar feurmoù o deus paeet, e tleomp anzav ne zegas drezi hec'h-unan ar berc'henniezh-se, spi ebet da gaout ur vuhez dieub ha didrubuilh - ha ket muioc'h d' ar c'houer perc'henn...

45

EFEDOU AN ALOUBADEG

A-raok gellout rakwelout an dazont e tleomp kompren an amzer-vremañ ha degas skiant reizh plas an traoù en hon doare da sellout ouzh Istor an amzer dremenet. Peseurt doareoù, neuze, a ren ar vuhez en Iwerzhon an deiz a hiziv, ha disoc'h petra eo an doareoù-se ? Hervez an dud brudet da ouiziekg hag o deus ur wech bennak pledet gant an danvez, e c'hell douar Iwerzhon magañ un niver a dud meur a wech brasoc'h eget an hini he deus biskoazh douget war he gorread, bez' emañ koulskoude Iwerzhon en ur stad padus a naonegezh. Pep bag a guita hor perzhier a vez karget a eostadoù da vezañ bevezet gant tud, e-pad m'emañ ar re o deus gant o daouarn kalet dastumet an eostadoù-se o tizeriñ en dienez hag o c'hoanta pe o nijal kuit pell diouzh an douar strujus-mañ evel diouzh traezhioù krin ur gouelec'h. Renkad perc'henned an douar, sodet gant ar seurt follentez-se a zeu bepred e raok an diskar, a bouez dizehan a-benn uhelaat priz ar feurmoù betek ar gwenneg diwezhañ e c'hellont kaout evitañ dre lubanerezh pe dre redi skoazell en o zorfedoù ur galloud lezenniñ pe seveniñ re zamantus. Ar vererien gapitalour, bountet en un hent dall dre nerzh ar c'hevezerezh, a glask en aner chom en o sav er vuhez en ur ren un emgann dizehan ouzh mistri an douar eus un tu hag en ur waskañ didruez al labourerien c'hopret eus an tu all ; ar merer bihan, lamet digantañ pep spi en dazont, en em stali, dic'hoanag, en ur stad a zienez sokial n' hell douar gouez ebet diskouez heñvel ; al labourer diwar ar maez, gant e genseurtered er c'hêrioù, a zegas e nerzh, e empenn, e varregezhioù a gorf hag a spered d' ar marc'had, hag a ginnig anezho d' e gendud pinvidikoc'h, da vezañ korvoet evit ur gopr a naonegezh. A bep tu e ren diarvar dizurzh ha mac'homerezh ken ma c'hellfer a boan en em c'houlenn hag-eñ ne vefe ket temptet ar re vuiañ reizhkredennour en hon touez da reiñ heklev da lavar ar spaniad Don Juan Aguila goude emgann Kinsale : « Sur, n' eo biskoazh marvet ar C'hrist evit an dud-se ».

IMPLIJ AN DOUAR

Setu an doareoù ma vez gouzañvet dindan o beli ar vuhez en Iwerzhon an deiz a hiziv. Petra eo o mammenn ? Bez 'z eus daou dra ret evit ma kendalc'hfe ar vuhez en Iwerzhon, koulz hag e forzh peseurt bro all. An douar hag al labour.

46

Gant an daou dra diazez-se e c'hell mab-den mestroniañ an holl elfennoù rekis evit hevoud ar ouenn. Eus an douar e tenn mab-den dre e labour koulz e voued hag ar pinvidigezhioù meinek e teu a-benn ganto da sevel ha da gempenn e annezlec'hioù ha da aozañ e zilhad. Bez' eo eta e pep lec'h piaouañ an douar an dra gentañ ret evit bevañ. O tegemer ar mennad-se evel re anat evit kaout ezhomm da vezañ displeget dre ar munud, e tegouezhomp diouzhtu d' an dastum-mañ : peogwir ez eo ken ret an douar evit hor bevañs, e tlefe bezañ kentañ preder pep kevredigezh renet mat, diwall en defe pep ezel eus ar gumuniezh, bezant pe da zont, ganet pe da c'henel, tro da implij an douar-se hag ar gwir da gaout, e pep frankiz, lod en e frouezhioù.

KENDERC'HIÑ EVIT IMPLIJ

D' ar mare ma 'z echu douar ur vro da vezañ e dalc'h al gumuniezh, fiziet e mererezh an holl, ma 'z echu da vezañ mad boutin ar bobl a-bezh evit dont da vezañ mad prevez hiniennoù, d' ar mare-se e krog ar sklavelezh evit ar bobl-se hag ar gwaskerezh evit ar vro-se. P' emañ an douar e dalc'h hiniennoù e vez krouet diouzhtu daou renkad enebour er gevredigezh - unan o terc'hel an douar hag o rediañ an eil da baeañ koumanant evit kaout aotre da vevañ warnañ, hag an hini all bountet dre gresk dizehan he niver da reiñ al lodenn vrasoc'h-brasañ

eus frouezh he labour evel truj d' ar renkad kentañ hag a zeu evel-se da vezañ mestr war vuhez he c'hendud. Ma vefe dalc'het an douar evel perc'henniezh voutin ar bobl un eostad fonnus a vefe degemeret mat evel ur c'hresk da binvidigezh ar gumuniezh, o tiwall diouzh an diouer pep hini eus hec'h izili. Pa vez dalc'het an douar evel perc'henniezh prevez, an eostad fonnus a dle bezañ gwerzhet evit respont goulenn diroll mestr an douar, ha, e-pad ma tint en e c'hodelloù frouezh gwerzh kenderc'h e vererien e c'hell ar familhoù o deus dastumet anezhañ mervel gant an dienez.

Evel ma tegas un torfed un torfed all d' e heul, evel-se e tegas, dic'hwitus, ur fazi ekonomikel un heuliad a fazioù war e lerc'h ha gant pep hini muioc'h a reuz o tont eget gant an hini kentañ. Pa 'z eo bet paouezet produiñ boued evit mad an holl evit labourat an douar gant gwerzh prevez e frouezh ha gounid prevez da bal, e oa tost didec'hus e kouezhfe an holl draoù all ret evit bevañ e dalc'h an hevelep doareoù. Evel-se e welomp ne vez ket produet boued, dilhad, tiez hag arrebeuri evit ma c'hellfe an dud bezañ maget, gwisket, lojet, roet dezho aezamant, met kentoc'h evit ma c'hellfe dre se ar renkad a zo deut a-benn da berc'hennañ an douar, ar mekanikoù, al labouradegoù hag ar stalioù ret evit produiñ an traoù diazez-se bevañ aes diwar goust o c'hendud. Ma soñj renkad ar berc'henned douar hag an implijerien e c'hellont tennañ ur feurm pe ur gounid en ur aotren ar bobl d' en em vagañ, d' en em wiskañ, d' en em lojañ, neuze e vez aotreet ar re-mañ d' henn ober dindan renerezh ar re gentañ - pa blijo, e-lec'h ma plijo, evel ma plijo d' ar vistri. Ma teu dezho, er c'hontrol, ar soñj e c'hounezint muioc'h o nac'h ar gwir-se (evel ma reont da geñver pep argasadenn, diskrog labour pe serr-stal), neuze e nac'hont an aotre-se hag o broiz a ya gant an naon, o bugale a varv gant an ezhomm dirak o daoulagad, o gwraez ha mammoù a zizeri er gwalleur hag en dienez er vro a oa bet o hendadoù boaz d'ober anezhi « Enezenn ar re Wenvidig ».

NERZH LABOUR

Abalamour d' abegoù istorel 'zo ez eo en em gavet diframmet diouzh al labourerien pep tra e c'hellont gantañ chom bev. Rediet int rak-se evit gounit o bara da werzhañ o barregiezh da labourat, o nerzh labour. Gwelout a ra neuze al labourer, ez eo gwerzhañ un darn eus e vuhez e servij hag evit gounit unan all, an dra retañ en deus d' ober evit gellout bezañ mestr warni. Gwerzhañ anezhi dre eurvezh, dre zevezh, dre sizhunvezh pe dre vizvezh, ne ra forzh. Gwerzhañ anezhi eo a zo ret, pe neuze, mervel gant an naon.

Koulskoude, un den eo al labourer, holl c'halloudoù ha barregzhioù un den ennañ koulz hag ur perc'henn, ur c'hapitalour pe forzh peseurt kinkladur eus ar gevredigezh. Met, pa dosta ouzh ar c'hapitalour evit ober ar marc'had-se a dalv kement ha gwerzh e vuhez a dammoù evit gellout dre se ober e vad diouti en he fezh, e wel ez eo ret dezhañ en em zizober gant aked diouzh pep goulenn da vezañ sellet evel un den, hag en em ginnig war ar marc'had dindan an hevelep lezenn hag an hini a ren ar prenañ hag ar gwerzhañ eus forzh peseurt mad divuhez ha diene e vefe, evel ur re votoù, un tog plouz pe ul levitenn. Da lavarout eo, ez eo ar priz a resevo evit e emwerzh a dammoù diouzh niver a re all a zo rediet gant an naon d' ober an hevelep marc'had euzhus.

48

DISHEÑVELDER EBET

Heñvel tra al labourer-douar o klask feurmiñ un atant er marc'had digor. Klask a ra pep kevezer trec'hiñ war egile n' ur lakaat kresk war gresk betek ma n' eus peurliesañ ar feurm divizet netra da welout gant ar priz da c'hortoz goude diwar gwerzh frouezh an atant bet kinniget kement evitañ. Gwelout a ra al labourer-douar penaos er bloavezhioù a builhder, pa ro dre ar bed a-bezh an douar e frouezhioù a vil vern, e laka ar re-ginnig e-keñver ar goulenn gwirion da zigreskiñ priz frouezh e labour betek ma tigoll a-vec'h anezhañ eus poan an dastum. En tu kontrol, e mareoù a ziouer, pa vefe tu da gaout ur priz mat, en deus nebeut da werzhañ, e glianted n' o deus ket peadra da brenañ ha perc'henn an douar pe ar prester arc'hant a zo bepred ken didruez en o goulennoù

dreistmuzul. Kinnig an Emrenerezh (Home Rule) evit mirout ouzh seurt morad a zroug en em ziskouez bezañ ur sotoni eus ar re splannañ. Pe ne dalc'h ar strolladoù a-du gant an Home Rule kont ebet eus ar gudenn pe e taolont o holl veiz war strivoù didalvoud evit peñseliañ ar reizhad gant raktresoù adreizhadur a goll bemdez un tamm muioc'h eus o brud. Ar merer a glask dirak Lezvarn an Douar prizadur dre varnerezh e goumanant a wel e-keñver diskenn dizehan prizioù frouezhioù an douar (tra sikouret gant ar prizioù izeloc'h graet war an hentoù-houarn da genderc'hoù estren) e teu da vezañ feurm « reizh » ur bloaz da vezañ ur feurm dreistmuzul ur bloavezh all. Ar merer a ra implij eus an tu roet dezhañ gant divizoù 'zo eus al « Land Act » da brenañ a verzh n' en deus graet nemet kuitaat gwaskerezh hiniennel ur perc'henn evit gwelout e wad sunet gant galloud dibersonel ar prester arc'hant.

UR REPUBLIK SOKIALOUR

Dirak seurt fedoù, al labourer iwerzhonat evezhiek a chom mantret hag a unan e vouezh ouzh hini ar Broadelour diblegus evit goulenn digant difenner ur Republik Sokialour Iwerzhonat un hent evit tec'hout diouzh milendall ekonomiezh an amzer vremañ. Bez' ez eo ar gudenn unan bouezus ha luziet, koulz abalamour da zianaoudegezh an darn vrasañ a-zivout an doareoù a ren anezhi hag abalamour d' an niver a wirioù diazezet e vo ret stourm outo ha diskar da bep pazenn davet an diskoulm. N' heller ket asur eta e vefe an diskoulm displeget amañ peurzisi en e holl vunudoù met nemetken e ro brouilhed ur berrdres a adreizhadur e vefe drezañ prientet an dachenn evit ar reveuzi e framm ar gevredigezh a c'hell nemeti diazezañ ar reizhad kevredigezhel an tostañ ouzh ar peurreizh.

49

N' hell ket mui gounezerezh Iwerzhon keveziñ gant kouerien vinviaouet en un doare skiantel Amerika. Dilezel a-grenn ar c'heveziñ evel reolenn vuhez eo ar spi nemetañ a chom bremañ, aozañ ar gounezerezh evel ur servij boutin meret gant kuzulioù merañ dilennet gant tud ar maezioù (ne vefent ken mererien ha devezhourien met keodedourien kevatal o c'hiriegezh hag o renk) ha kiriek dirazo ha dirak ar vroad dre vras, lakaet en o dalc'h an holl skoazell e mekanikoù hag e skiant a c'hell holl binvidigezhioù ar vro reiñ. Implij frouezh douar Iwerzhon da gentañ evit magañ tud Iwerzhon ha, ur wech miret trawalc'h a bourvezioù evit bezañ sur da seveniñ an dra-se, eskemm an dreistad gant broioù all evit talvoudegezh ar madoù oberiet-se he deus ezhomm Iwerzhon diouto met hep produiñ anezho hec'h-unan.

Evel-se e torrimp en un taol an aon rak ar c'hevezerezh estren hag e raimp un dra didalvoud a-grenn eus forzh pe arnod e sell da staliañ en Iwerzhon un ifern ijinerezhel war an digarez touellus da « ziorren hor pinvidigezhioù ».

Lakaat an hevelep reolenn da dalvezout el labouradegoù. Lezel aozadur a genober al labourerien kemer plas brezel ar renkadoù dindan ar gapitalouriezh hag ober eus ar c'hapitalour e-unan, e lec'h ur chaseour digiriek a c'hounid, ur c'hargad o seveniñ ur garg voutin dindan renerezh an holl. Ansav da bep hini ar gwir da gaout en un doare kevatal tu da gas d'o fenn pellañ an holl nerzhioù ha gouestonioù a zo ennañ. Evit se gwarantiñ d' hon holl genvroiz, d' an hini gwan koulz ha d' an hini kreñv, d' an hini eeunek koulz ha d' an hini gwidreüs, d'an den onest koulz ha d' an hini n'eo ket kement, ar vuhez a zen al leuniañ, an dieupañ, ar frouezhusañ a c'hell ur gevredigezh aozet gant poell reiñ da hep hini eus hec'h izili.

PEURZISRANN

« Met, » e vo lavaret, « se a dalv kement hag ur Republik sokialour ; diskar a ra an holl ensavadurioù a ra diazez impalaeriezh Vreizh-Veur - n' hell ket se bezañ sevenet hep an dieubidigezh vroadel. » Mat, krediñ a ran ne vo den evit tamall ac'hanon kaout c'hoant da adlakaat da flamminañ regez peuzvarv ar gasoni vroadel pa lavaran ez eo evidon ur gredenn start, prederiet ha don, e tle demokrated Iwerzhon strivañ gant poell da lemel ar yev a stag planedenn o bro

ouzh hini rouantelezh Bro-Saoz. Mad al labourerien er bed a-bezh a zo an hevelep hini, gwir eo, met gwir eo ivez ez eo gwelloc'h da bep bro gounit he silvidigezh-hi dre an hentoù a glot ar gwellañ gant he fobl-hi.

50

Dibarderioù a vroad hag a ouenn pobloù Bro-Saoz hag Iwerzhon a zo disheñvel, enep eo o istor politikel hag o hengounioù, n' eo ket diorroadur ekonomikel an eil war live an hini all, ha, a-benn ar fin, daoust dezho bezañ bet en tostañ darempred e-pad seizh kant vloaz, chom ' ra hiziv an Iwerzhonad kelt ur gudenn ken diziskoulm evit zoken ar c'harantezusañ Saoz hag e oa da vare ma voe liammet an div vro evit ar wech kentañ dre un eured ne oa sakr e doare ebet.

PIV EO « AR BOBL " ?

Met war biv e kouezh ar garg da gas da benn diskar ar renkadoù-ren en Iwerzhon ? War bobl Iwerzhon. Met piv eo Pobl Iwerzhon ? Hag-eñ ez eo ur c'hapitalour skrapet gounid gant frazennoù a vroadelouriezh war e vuzelloù hag ar breizhadenn sunet diwar vicherourien gorvoet Iwerzhon en e c'hodelloù ; hag-eñ ez eo an den a lezenn dizonest - ar fallañ eus an holl renkadoù ; hag-eñ ez eo ar perc'henn tiez-gutez a sav a-enep ar feurmoù direizh war ar maez hag a implij anezho er c'hêrioù ; hag-eñ ez eo unan eus ar rummadoù-se a ren hiziv war vuhez politikel Iwerzhon ? Hag-eñ n' eo ket kentoc'h renkad al labourerien iwerzhonat - an diazez sur nemetañ e c'hell bezañ savet warnañ ur vroad dieub - renkad al labourerien iwerzhonat hag he deus sammet bec'h pep stourmad politikel, ha gounezet dre hini ebet, a zo hiziv ar renkad nemeti n' he deus gounid ebet da c'hortoz eus peurastennadur an holl stummoù politikel ha re sokial ar gwaskerezh - an ere ouzh Breizh-Veur nag ar genreizhad kapitalour ? Dleout ' ra renkad al labourerien iwerzhonat en em zieubiñ, ha, en ur en em zieubiñ e tle, dre ret, dieubiñ he bro. An dieubidigezh sokial a c'houlenn groñs e tremenfe an douar hag ar binvioù produiñ eus dalc'h perc'henned prevez d' unan boutin pe a-stroll eus ar vroad en he fezh. Ret eo evit se kaout ur reizhad kevredigezhel an demokratelañ posubl, hag o tiazezañ ar reizhad ret-se e tle renkad al labourerien stourm ouzh pep stumm a ouarnamant a c'hellfe emellout e dishualañ mestroni pobl Iwerzhon war holl vinvidigezhioù he bro.

51

Da renkad labourerien Iwerzhon, eta, ar gefridi da c'hounit eviti kannaderezh politikel evel pazenn gent war hent ar galloud politikel. Ar gefridi-se n' hell bezañ boulc'het hep riskl nemet gant paotred ha merc'hed a ansav e tle ober kentañ un arme dispac'hel kaout an hevelep gwrizienn hag ar re a vo, sur a-walc'h, ar re ziwedhañ, ha, ne c'hell dispac'hour ebet goulenn hep arvar kenlabour tud pe renkadoù n' o deus ket o uhelvennadoù hag ouzh pere e c'hellont eta bezañ rediet da stourm en ur prantad arvarus bennak da zont eus ar veaj davet ar frankiz. Er rummad-se emañ pep darn eus renkad ar berc'henned, ha pep hinienn eus ar renkadoù-se a gred e reizhded e saviad a renkad. Dieubidigezh al labourerien a dle bezañ ober al labourerien o-unan. Ha ret eo derc'hel soñj e tegas abafted ar sklav herder d' an tirant, met e ra kardedded hag eeunded an dispac'herien bepred aon d' ar mac'homer e-unan betek lakaat da guzhat e rukunded dindan abid an adreizhadur. Hag o terc'hel soñj eus se, stourmit evit ho renkad war bep tachenn.

BERRAAT AR SIZHUNVEZH LABOUR

Hon tud a zo o nijal kuit betek pennoù pellañ ar bed ; klaskit reiñ tro dezho da chom er gêr en ur zigreskiñ niver an eurvezhioù labour e pep lec'h ma c'hellit henn ober hag o skoazellañ pep goulenn evit ma vefe digresket hervez al lezenn. Implijout a ra ho hentoù-houarn iwerzhonat milieroù a labourerien hag a labour, dre vras, daouzek eurvezh bemdez. Ma vefent dalc'het d' ur sizhunvezh labour a eizh eurvezh ha pevar-ugent e vefe roet labour da vilieroù a Iwerzhoniz a vez kaset bremañ en harlu pell diouzh o bro c'henidik. Lakit ho kannaded da c'houlenn ul lezenn a eizh eurvezh evit an hentoù-houarn. Hor c'huzulioù-kêr

iwierzhonat hag an ensavadurioù boutin all dilennet gant an dud a implij ivez meur a vil a baotred. Pet eurvezh e labouront ? Dre vras dek, ha gant evel gopr, just peadra evit tremen hep kaout naon. Pouezet war an holl ensavadurioù iwierzhonat evit ma tiazefent an eizh eurvezh en o holl labourioù. Int d' an nebeutañ n' o deus ket ezhomm da gaout aon rak ar c'hevezerezh estren. Ma ne vouezhit ket e-barzh an ensavadur e c'hellit d' an nebeutañ sikour da skarzhañ diouzh al leurenn bolitikel da lec'h all pep hini en em lavar broadelour hag a nac'h seveniñ an ober a justiz-se. Pep ensavadur iwierzhonat a nac'h diazezañ un devezh labour a eizh eurvezh evit e implijidi gant ur gopr dereat a gemer perzh, e gwirionez, gant gouarnamant Breizh-Veur en un irienn evit argas pobl Iwerzhon diouzh he bro kentoc'h eget paeañ un hanter benny ouzhpenn evit pep lur a dailhoù lec'hel. En hon holl gêrioù emañ bugale al labourerien o vervel an eil war-lerc'h egile a-raok o c'houlz abalamour d' an diouer a voued magus ha yac'hus. Evel ma pourchas hor c'huzulioù-kêr hag embregerezhioù boutin dour d'an dud hep paeamant eeun, o lakaat ar c'houst war an tailhoù lec'hel, lakait anezho da bourveziñ hor skolioù gant dijunioù, leinioù ha merennoù digoust evit ar vugale a zarempred anezho, ha paeañ anezho en hevelep doare. Ne vern peseurt brud a vuhezegezh a vefe gant o zud, saveteomp d' an nebeutañ bugale disikour hor gouenn diouzh skoanadur ar c'horf hag ar spered, ha miromp hor mistri-skol diouzh al labour dic'hallus-me : rediañ da zeskiñ ur bugel, e spered gwanaet dre m' en deus naon e gorf. Evel pazenn nesañ en urzhiañ, lakait ar c'hevredigezhioù hag an ensavadurioù boutin e pep lec'h dre ar vro da ziazezañ dastum-lec'hioù ma c'hell kaout enno an dud bara hag ar retañ evit bevañ d' ar priz-koust hep n' emellfe hanterour ebet.

52

P' hon devo, ouzhpenn an adreizhadurioù meneget a-us, goulennet groñs e vefe diskaret hor reizhad euzhus a diez evit ar re baour, hag e vefe savet tailhoù pounner ha buan war gresk war an holl leveoù a-us da 400 lur ar bloaz, evit reiñ pañsionoù dereat d' ar re gozh, d' ar re vac'hagnet, d' an intañvezed ha d' an emzivadeg, hor bo dihunet ur spered e-touez an dud, - diazezet hor bo hon emsav dispac'hel war ur meizadur difazi eus ezhommoù ar mare koulz ha war ziazezennoù ret ar justiz ekonomikel hag ar vroadelezh diblegus ; galvet hor bo, evel ma tlefe un dispac'hour gwirion ober bepred, da stourm eus hon tu hollad klok an nerzhioù hag an elfennoù a zic'hrad sokial ha politikel... Gant implij an doare dispac'hel da vouezhiañ hor bo karget betek aer Iwerzhon gant « trubarderezh », ken karget gant ar spered a emsavadeg hag ez eo hiziv gant yezh pilpouz an treuzvarc'hadoù ha pec'hed marvel al liperezh botoù ; hag evel-se hor bo prientet un diazez solud evit un ober efedusoc'h en dazont ; e keit-se e tle kred hor feiz en dispac'h sokial reiñ d' ar re hon eus da skarzhañ diouzh o flasoù en ur vont war-raok an asur, zoken ma flastromp hiziv o embregerezhioù da dennañ korvo, e vint, a-boan savet an heol war hor frankiz, m' o deus servijet gant lealded o c'hendud da vare ar stourm, int hag o bugale ha bugale o bugale diwallet diouzh ezhomm ha diouer da viken gant ar gwellañ kred biskoazh bet resevet gant mab-den : ur c'hred diazezet war holl anaoudegezh vat, kalonoù leal, speredoù hag aked el labour pobl Iwerzhon, dindan Republik Sokialour Iwerzhon.

53

Troet diwar ar saozneg gant Eflamm gKERVILIO.

UN NEVEZINTI ! RAKPRENIT DIOUZHTU !

Yezhadur Bras ar Brezhoneg

gant F. KERVILLA

Priz betek ar 15 a viz Ebrel : 38 lur e-lec'h 50 lur

Kasit ho chekenn da J. QUEILLÉ, 47, rue Notre-Dame

22200 Guingamp - C.C.P. 1136 82 Rennes

Ar c'hensonnennoù dibenn ger

Brudet a-walc'h eo kudenn ar c'hemmadurioù e derou ar gerioù. Un torr-penn eo d' ar re a gelenn ar yezh, ur spont d' ar re a zesk. Ar reolennoù a zo bet diazezet gant ar yezhadurourien, hag heuliet e vezont well-wazh gant ar skrivagnerien. Ne sav ket kalz a dabutoù war o divout. Lezomp anezho e peoc'h eta.

Er bloavezhioù-mañ e vezer prederiet gant ur gudenn all, hini ar c'hemmadurioù e dibenn ar gerioù.

An holl a oar e kemm alies kensonenn diwezhañ ur ger. A-wechoù ez eo kalet, pe da gomz resisoc'h, divouezh. A-wechoù ez eo blot, pe da gomz resisoc'h, mouezhiet. Da skouer : *ket, ked*. (Hag a-wechoù ez a kuit : *ke*. Hogen se a zo un istor all.)

E-giz-se eo bet abaoe ma teuas ar Vrezhoned en Arvorig. Hon tadoù ne oant ket chalet. E dibenn ar gerioù e skrivent ar c'hensonnennoù, blot pe galet, un tammig evel ma troe en o fenn. Dre vras, ar gensonenn galet eo a skrivent.

Ne voe ket reizhet an traoù, zoken gant ar reizher meur, Ar Gonideg. E penn kentañ ar c'hantved-mañ hepken, ma ne fazian ket, e voe klasket a-zevri diskoulmañ ar gudenn.

En " Emglev ar Skrivagnerien ", aozet e 1907 evit unvaniñ rannyezhoù Leon, Kernev ha Treger, e lenner an dra-mañ (treiñ a ran diwar ar galleg) :

« Daskemmadur ar c'hensonnennoù-dibenn-ger n' eo ket, evel ar c'hemmadurioù derou-ger, un darvoud yezhadurel diazez, sujet da lezennoù strizh. Evit tizhout un doare unvan a-walc'h da skrivañ pep ger, ha lakaat ar skrivagnerien d' en em glevout ervat war un dachenn ma'z eo aes hag hetus kaout unvaniezh, n' eus nemet heuliañ giz-ober tud Bro-Wened, sellout ouzh ar gerioù deveret, en ur lakaat kensonnennoù kalet muiañ ma c'haller, nemet en anvioù-kadarn. »

Diskleriomp spisoc'h ar reolennoù.

55

Anvioù-kadarn

Ar reolenn a zo lakaat an dibenn blot pa gaver ur gensonenn vlot er gerioù deveret, an dibenn kalet pa gaver ur gensonenn galet.

Dibenn blot : ar mad (madoù, madek, madelezh).

Dibenn kalet : ar park (parkoù, parkeier, parkad).

Aes a-walc'h eo ar reolenn-se. Nec'het e vezer avat pa 'z eus dizunvaniezh etre ar rannyezhoù. Da skouer : tog. Darn a lavar togoù, darn all tokoù. Ivez dug. Darn a lavar duged, dugez, darn all duked, dukez. Ivez katolig. Darn a lavar katoliged, darn all katoliked. Peurliesañ e vez lakaet an dibenn blot. Nec'het e vezer dreist-holl o c'houzout peur e tleer degemer an dibenn -aj hag an dibenn -ach. Al liester er yezh komzet a zo a-wechoù -ajoù hag a-wechoù -achoù. Ur boaz, iskis marteze, a zo bet heuliet : -aj evit an anvioù nepliv : beaj, bugaleaj, horolaj h.a. ; -ach evit an anvioù dezho ur ster gwashaus : luc'hach, trefodach, moc'hach h.a.

Anvioù-gwan

Un anv-gwan a dle, hervez an diviz graet gant " Emglev ar Skrivagnerien ", echuiñ peurliesañ gant an dibenn kalet :

1) o vezañ ma kaver ar gensonenn galet en derez-uheloc'h hag en derez-uhelañ : kalet, kaletoc'h, kaletañ

2) o vezañ ma reer evel-se an diforc'h etre ur ger implijet da anv-kadarn ha da anv-gwan : ar galleg, ul levr gallek.

Anzav a ranker e c'haller kavout abeg en diviz-se.

1) Kemeromp ar ger **kalet**. Gwir eo e lavarer *kaletoc'h, kaletañ*, hag ivez *kaletaat*. Lavarout a reer avat *kaledenn, kalediñ, kaledus* h.a. Mar lavarer kaletañ ha kaletaat, ez eo abalamour d'un **h** a oa gwechall a-raok an dibenn : -haff. -haat Ha kaletoc'h a zo aet da heul, daoust na oa ket a zibenn -hoc'h e gwirionez.

Kemeromp ar ger **bras**. Lavarout a reer *brasoc'h, brasañ, brasaat*, hogen *brazik, brazez*.

Kemeromp ar ger **dous**. Er gerioù deveret, n' eus nemet ar gensonenn galet **s** : *dousoc'h, dousañ, dousaat, dousik, dousoni* h.a.

Ar perag a c'hell bezañ kavet en istor ar yezh. Re hir e vefe displegañ kement-se amañ. Berr-ha-berr : poellek eo skrivañ *dous* atav. Poellekoc'h e vefe marteze skrivañ *kaled* eget *kalet*, *braz* eget *bras*, mar seller ouzh an deveradur hepken.

56

2) Ober an diforc'h etre ur ger anv-kadarn hag ur ger anv-gwan a c'hell bezañ talvoudus : *kalet eo kousket war ar c'haled, ne gaver ket galleg mat en holl levrioù gallek*.

A dra sur n' eo ket talvoudus-bras. Ha n' eo ket bepred aes gouzout peseurt dibenn lakaat : komz galleg (anv-kadarn) pe komz gallek (anv-gwan implijet evel rakverb).

Un esevded a zo graet gant " Emglev ar Skrivagnerien " : lakaat atav **z** pa plot ouzh **h** gwenedek (hiziv e skriver zh) : *koz, strizh, reizh, poazh*.

Esevedoù all a zo, ha n' int ket meneget en " Emglev " : *stag, gleb, kloz, ruz, nevez, disked, dianav, diimplij* h.a. Diskleriet e c'hellont bezañ dre abegoù disheñvel.

Verboù

Evit pezh a sell ouzh ar verb, e voe divizet echuiñ peurliesañ gant ar gensonenn galet, zoken evit an anv-verb : *labourat, kaout, mont, redek, kousket*.

Koulskoude e reer gant an dibenn **-ezh**, a glot ouzh **h** gwenedek : *laerezh, marc'hegezh*.

Ar reolenn a vez heuliet zoken pa implijer an anv-verb evel gwir anv-kadarn goude ar ger-mell : *an arat, an araokaat*. N' eus nemet un nebeud a zireizhadennoù : *gallout, ar galloud ; kaout, ar c'haoud* (e yezh an arc'hantouriezh) ; *bezout, ar bezoud*.

E displegadur ar verb, e voe divizet evelato ober gant un dibenn blot evit merkañ :

1) an diforc'h etre eil gour unan ar bremañ hag eil gour unan an amdremened, hervez skouer ar c'hrennvrezhoneg : hiziv e labourez (bremañ), dec'h

e laboures (amdremened). Evit klotañ gant an dibenn -es, e skriver ivez -fes, -jes : *labourfes, labourjes*.

2) an diforc'h etre ar furm diberson en amdremened hag an anv-gwan-verb : *bez' e kreded, kredet e veze*. Evit klotañ gant an dibenn -ed, e skriver ivez -jod, -fed, -jed : *kredjod, kredfed, kredjed*. Skrivañ a reer ivez *edod, oad*.

En eil gour unan an doare-gourc'hemenn hag e trede gour unan ar bremañ e lakaer an dibenn blot pa 'z eus ur gensonenn vlot dirak an dibeñn-anv-verb : *evañ, ev, Yann a ev ; krediñ, kred, Yann a gred ; stagañ, stag, Yann a stag*.

57

Gerioù all

Emglev ar Skrivagnerien " a erbed lakaat kentoc'h an dibenn kalet en holl c'herioù n'int ket anvioù-kadarn.

N' eus ket ezhome daleañ war ar raganvioù, an niveroù, ar rakverboù, ar stagelloù. Ret eo komz avat eus kudenn an araogennoù.

Hervez " Emglev ar Skrivagnerien ", ez eo ret heuliañ an doare-distagañ. Hag e ro an ali-mañ : skrivañ *eneb ar bed, enep kant*. Hogen implijout kentoc'h an dibenn kalet pa 'z eus amzivin pe dizunvaniezh etre ar rannyezhoù.

Ar reolenn erbedet a seblant bezañ eta : lakaat an dibenn kalet dirak ur gensonenn, an dibenn blot dirak ur vogalenn. Da vihanañ, hounnezh eo ar reolenn a voe heuliet gant Vallee e-pad ur mare. Hag heuliet e voe ivez e " Gwalarn " er bloavezhioù kentañ.

Koulskoude ne voe ket heuliet-strizh. Setu perak e tivizis implijout atav an dibenn kalet, da lavarout eo skrivañ *evit, gant, enep, hep, nemet, rak* h.a., zoken dirak ur vogalenn, morse *evid, gand, eneb, heb, nemed, rag* h.a, (Disheñvel oa ar gudenn gant *hervez* hag *ouzh* ; den ebet ne skrive *herves* nag *ous*).

Vallee a arguzas un tammig. Lavarout a reas din ne oa ket an araogennoù gerioù evel ar re all. Stag-mat e oant, emezañ, ouzh ar ger a zeu war o lerc'h. Ha me da respont : gwir eo, hogen gerioù all ivez a zo stag-mat etrezo er frazenn, ha ne verker ket ar c'hemmadur.

EMGLEV AR BEURUNVANIDIGEZH

Pa voe savet " Emglev ar Beurunvanidigezh ", e 1941, ne voe ket komzet zoken eus kudenn ar c'hensonennoù dibenn-ger. Ne oa dizunvaniezh ebet war ar poent-se etre an div yezh skrivet KLT ha gwenedeg. Gwenediz, evel merket en " Emglev ar Skrivagnerien ", o doa roet ar skouer, hag ar re all o doa heuliet.

HA RET EO KEMMAÑ ?

An diskoulm graet gant " Emglev ar Skrivagnerien " n' eo ket peurlvat. Lakaet em eus sklaer dirazoc'h ar sioù a gavan ennañ. Hogen klask un doare-skrivañ peurlvat a zo redek war-lerc'h un huñvre.

58

Merkañ ar c'hemmadurioù-dibenn evel ma vezont distaget ?

Ma vefe posupl, e vefe ur torr-penn muioc'h evit neb a skriv. Seul vui ma labourer war fonologiezh ar rannyezhoù, seul splannoc'h e weler ez eo luziet-meurbet an darvoudoù. N' eus ket a reolennoù strizh. Stokadenn kensonenn diwezhañ ur ger ha kensonenn pe vogalenn gentañ ar ger a zeu diouzhtu da heul, - anvet gant ar yezhourien « sandhi », - a c'hoarvez e kant doare. Disheñvel hervez ar rannyezhoù, hervez herrded al lavar, hervez orin ar ger (rak ar gerioù amprestet digant ar galleg pe ur rannyezh romanek a zo techet alies da herzel

ouzh ar c'hemmadur-dibenn, evel ar ger **dous** meneget uheloc'h er pennad-mañ)

Ha tostaat a reer un tammig ouzh an distagadur o lakaat a-vordilh kensonennoù blot e dibenn ar gerioù e-lec'h kensonennoù kalet, evel ma reer e karterioù 'zo bremañ : *evid, heb, nemed, anaoud, labourad, redeg, h.a., h.a.* ?

Ne reer ket, hag ez eer peurliesañ evel-se a-enep ar pezh a zo bet graet a-viskoazh.

Da betra e talvez skrivañ *an hend eeun, an hend braz* e-lec'h *an hent eeun, an hent bras*, pa zistager *an henn eeun, an henn pras* ? Peseurt gounid a zo o skrivañ *evid mond buan* e-lec'h *evit mont buan*, pa zistager *vi monn buan* ? Ha c'hoazh ne verkan ket an traoù resis, rak stummoù soutiloc'h a zo d'ar c'hensonennoù eget « blot » ha « kalet », ha n' hellont ket bezañ aroueziet gant lizherennoù ordinal.

Un doare-skrivañ n' hell ket bezañ peurv, a lavaran adarre. Bez' e c'hell avat bezañ hag e tle chom digemm e-pad ur maread hir. Un doare-skrivañ digemm a ro nerzh d' ur yezh. C'hoari kemm-digemm a zo he dinerzhañ. Hag ar brezhoneg, Doue 'oar, n' en deus ket ezhomm da vezañ dinerzhet.

Adreizhet e voe an doare-skrivañ e 1659 gant an Tad Maner, e 1807 gant Ar Gonideg, e 1907 gant " Emglev ar Skrivagnerien ", e 1941 gant " Emglev ar Beurunvanidigezh ". Adreizhadennoù rekis, evezhiek, fur. Krignet e voe, siwazh, ha dispennet an div adreizhadenn gentañ dre fazi er Vrezhoned. Hini 1907 a zalc'has mat, a drugarez da Vallee hag e ziskibien. Arabat eo e vefe krignet ha dispennet hini 1941.

" Mari Vorgan "

Romant gant ROPARZ HEMON

Emañ Al Liamm o paouez adembann romant kaer Roparz Hemon " Mari Vorgan ". Embannet e oa bet evit ar wech kentañ 13 vloaz "zo, e 1963, hag a-bell 'zo e oa peurwerzhet. Kavet e vo amañ ar varnadenn he devoa Benead savet d'ar mare-se.

Ur wech e oa, ur wech ne oa ken, hag ur wech e oa bepred... ur plac'hig a selaoue he zad o kontañ dezhi, a vouezh damizel, eñvorennoù e yaouankiz-eñ, kaer ha kevrinus evel gwir varzhonegoù. Ano a veze gantañ alies eus ul lenn dudius poblet stank gant evned a bep seurt ha pesked alaouret. Deut war an oad, ar plac'h-se e oa chomet koulskoude, e strad he c'halon, skeudenn al lenn vras achantet. Ha ne oa bet den abaoe evit dilojañ ar c'hrakhouidi mibin en em sile gwechall etre korzennoù ar ribloù, den evit lakaat ar melezour moredet da zaskediñ adarre dindan lagad an heol. Bennozh Doue da Roparz Hemon, en deus lakaet Lenn al Lec'h Meur da zihuniñ ennon diouzh he c'houisk burzhudus !

Kement-se evit ho lakaat da gompren n' on ket evit barn romant " Mari Vorgan " nemet gant kalz a deneridigezh. N' eus forzh penaos ne vin ket va unan-penn da vezañ dedennet gant oberenn Roparz Hemon : « Ur stumm a blij dimp... ar romant a faltazi ha n' eo ket koulskoude faltazi penn-da-benn... ar romant dreistgwirvoudel... ». Evel-se e komze Maodez Glanndour e Kendalc'h Keltiek Landreger diwar-benn : « ar re wellañ eus romantoù Roparz Hemon adalek An Aotrou Bimbochet betek Alanig an Tri Roue hag An Tri Boulomig kalon aour ». Hevelep tra e c'hellfe bezañ lavaret eus romant nevez Roparz Hemon " Mari Vorgan ".

60

Arabat klask ennañ un heuliad darvoudoù skrijus evel en "Teirgwern Pembroke " gant Jarl Priel, nag atiz gwidilus ar garantez diroll. Drevezañ a ra Roparz Hemon gant ampartiz an doare-soñjal ha skrivañ a c'helle implijout un den a-feson eus kreiz ar c'hantved diwezhañ. Ret eo teurel kont eus kement-se evit tañva da vat an arlivioù mibin skignet gant an daneveller, a chom seven hag elevezek bepred, hep sevel e vouezh, o tremen buan war an traoù a c'hell bezañ damveneget hepken...

Gortoz a rit moarvat e komzfen deoc'h eus tud al levr : eus ar mezeg yaouank, a goll e beoc'h, eurvad an oaled karet ; e skiant-vat hag e vuhez a-benn ar fin, o redek war-lerc'h ur stultenn... eus ar Vari Vorgan, plac'h dedennus ha truezus he stad, pe sorserez digalon, penaos gouzout ?

Rak betek ar ger diwezhañ e chomimp en entremar, war dreuzoù ur bed dianav hep diforc'hañ mat ar gwirvoud diouzh ar faltazi. Met pelec'h emañ ar wirionez evit buhez an den ? Hag-eñ n' eo ket gwelloc'h seblantout koll evit gallout seveniñ uheloc'h huñvre ? Hag-eñ n' eo ket a-benn ar fin, Mari Vorgan hec'h-unan, an hini birvidikañ, an hini gwirionañ eus tud al levr ?

Hogen, e romant Roparz Hemon ez eus un dra o strinkañ evidon nerzhusoc'h ha kaeroc'h eget bravañ kanenn Mab-den : an Dour an hini eo. Dour al Lenn veurdeus, a c'holo diseblant keoded rivinet pobl ar Vorganed. Dour laouen ar wazh, redennoù bihan o richanañ dousik er brizh-heol. Dour galloudus ha kemmus ar mor. Dour ar glav, dour ar vrummenn... An Dour, na vefe heptañ na red ar vuhez en hor c'horf, na Mari Vorganed o neuial e « stêr vras hor soñjoù ». An Dour a zo pinvidigezh ha kaerder evit Breizh hag a zo bet moarvat azeulet gant ar Gelted kozh...

Digorit levr Roparz Hemon ; me 'zo sur, n' hellot ket disterniañ a-raok m'
he devo Mari Vorgan diflipet da vat diouzhoc'h gant ar bajen diwezhañ...

Mari Vorgan, romant gant Roparz Hemon. 168 pajenn. Golo gant Tudual Huon. Priz :
22 lur ; war Ingres niverennet : 32 fur.

Paourkaezh brezhoneg !

Miz kerzu, ar goañv, an nozvezhioù hir ; ha gouelioù Nedeleg o tostaat... Gant ar bloaz o vont war e dalaroù ez eo techet an den da brederiañ war an amzer o vont e-biou. Ar sadorn 'zo pa grogan da sevel ar pennad-mañ a zo deut ar soñj anezhañ em spered en deizioù tremen p' edon o lenn niverennoù kozh eus va dastumad *Feiz ha Breiz*. Gant ar bloavezhiaed 1909 edon, ha dre ma lennen e chomen sebezet o welout gant pegement a ampartiz e ouied skrivañ d' an amzer-se.

Ha kement-se a lakae anat em spered pegen bras eo bet an diskar a-hed ar c'hwec'h vloaz ha tri-ugent aet e-biou abaoe. Ar re a skrive neuze, hag int a orin disheñvel, a zo anat e oant barrek war o yezh, ha desket a-walc'h evit chom hep teukañ war o lavar, gwriziennet mat ma oant c'hoazh en o bro. Na pegen anat e voe din an diskar-se dec'h da noz, ar gwener anezhi, da goulz ar vunutennig hanter a geleier brezhonek a vez en deiz-se war gaser skinwel Roazhon. War zigarez reiñ dimp da anaout ar pezh a vije gwelet antronoz er rummad Breizh o Vevañ e voe lavaret dimp e oa teknisianed an tele **aet e bro-Skos** evit filmañ danvez un abadenn war ar vro-se. A-benn ur wech all e vo lavaret dimp emichañs e vint **bet da Iwerzhon pe da Gembre** ! - En deiz a-raok e tegouezhe en ti Oberoù klok Prosper Proux, « adembannadur skoueriekaet ha kentskrid gant Goulven Pennaod », un oberenn ha ne oa ket kennebeut evit laouenaat va spered, pa welen penaos e oa bet graet al labour. Kennebeut all, er memes sizhun, o klevout e kentelioù brezhoneg Radio Brest, ar c'homzer oc'h ober anv eus « Mene Zomm » evit an uhelenn am boa a-viskoazh klevet ober « Mene C'homm » anezhi ! Hag ivez ober « Lokronan » eus ar gêrig a Gerne hag a vez graet anezhi Lokorn gant an dud. Aet omp, a vije lavaret, ur c'hant vloaz bennak war hor c'hiz, d' ur marevezh ma oa rouez an dud bet er skolioù pe o redek bro... « Locronan » eo, hep mar, an anv a vez graet eus ar gêrig-se e galleg, met daoust hag-eñ emañ ar galleg d' hor ren da viken ? Na bouc'h e rank bezañ spered Kerneviz pa lavaront **Lokorn** pe pa roont an anv **Reun** da zarn eus o faotred ! Ar Reun-se ha ne deo nemet ar stumm en deus kemeret bremañ an anv a oa **Ron** gwechall hag a zo diazez « Ronan » hag a zo en e geñver ar pezh eo **Laouenan** da **Laouen** hag **Inizan** da **Enez** (hag a oa « inis » a-gozh)... Met distreiñ a ran bremañ war oberoù Prosper Proux.

Hag e pajenn gentañ ar c'hentskrid setu ma kavan adarre an dro-lavar e oan o tamall da gomzer ar skinwel bremaik : « Distreiñ a reas an intañvez... e Gwerliskin », hag er bajenn da c'houde setu ma reer anv eus « div levrig barzhoniezh ». Skouerioù mat, ne gav ket deoc'h ? - Daoust hag aze emañ ar skouer vat roet gant hor « skoueriekaer » ? C'hoant am eus bet da welout eta penaos e oa bet graet al labour e-keñver skrid orin **Bombard Kerne**, bet embannet e Gwengamp e 1866. Hag on chomet batet !

Diwar linenn gentañ ar bajennad kentañ e oa anat ne oa bet tamm doujañs ebet evit ar c'hlotennoù. Hag er gwerzennoù 23-24 « Briz brezhoneg... Keginerezh » ; un dra souezhus eo klevout ar c'heginerezh o tistilhañ brezhoneg, zoken ma ne deo nemet brizh ! Petra 'ta 'ra neuze ar geginerez ? Ha n' eus ket ezhomm da vont gwall bell evit kavout gwazh. En eil barzhoneg, **Ma vijen barzh**, ez eo puilh ar mankoù, hag ar gwerzennoù 17-19 a vez kavet en doare-mañ : « A droc'h askell gant herr, :: Me garfe vel an aer :: Nijal dreist ar goabrenn » - ar sin (::) a lakan da zispartiañ ar gwerzennoù an eil eus eben. Ar pezh a zleje bezañ bet, er skritur bremañ : **A droc'h askell gant herr, :: Me 'garje 'vel an er :: Nijal dreist ar goabrenn**. An er, roue an evned, troet da aer, ar paour kaezh !

Ha dre ma 'z eer n' eo ket diaes pesketa sioù, ken eo diaes gouzout petra 'zeu diwar fazioù skriverezañ, ha petra 'zo reizhadennoù graet e gaou. Da skouer, e teu, er memes barzhoneg, ar pezh a oa, e skritur orin : **E trid ma holl ene :: O weled ar c'houmm eonuz, :: Gand eur c'hrozmol euzuz** da vezañ : « **E trid**

ma holl ene :: O welt ar c'houmm tonus... » Ha, pelloc'h, e *Kimiad ur soudard yaouank*, e c'helled lenn e mouladenn 1866 : **Pa welfot, war ann oalet, ma skabellik c'houllou :: Hag ar c'hifnid o steui war ma fenn-baz derou**, e kaver troet ar werzenn ziwezhañ-mañ e : « Hag ar c'hevniid o steuñviñ ma fennbazh dero ». Ha c'hwi ho pefe gwelet ur wech bennak ar c'hevniid o steuiñ pennoù-bazh (nemet ha pennbizhier a ouijent ober !) ? Met kaeroc'h a gaver c'hoazh pelloc'h er ganaouenn-se ; ar pezh a oa : **Da chasa war rubanou ebarz er varadek**, a zo bet lakaet da vezañ : « Da sachan war rubanoù e-barzh ar **varc'hadeg** ». - Kemer ur varr evit ur marc'had, pe marteze ur marc'h, a zo bezañ gwall drellet e zaoulagad, ne gav ket deoc'h ? Gwir eo n' eus ket bet graet bravoc'h da *Zistro ar soudard* eget d' e gimidiad ha gwerzenn 39 ar pezh-mañ : **Bed int skournet, bed int rouzet**, a zo deut da vezañ : « Bet int skoulmet, bet int rouzet », hag ar werzenn 46 : **Varc'hoaz vintin, abred vo de**, a zo troet e « Warc'hoazh mintin... ».

Eil rann **Bombard Kerne** a zo bet barnet kriz gant Goulven Pennaod en e gentskrid. Gwir eo e kaver enni dreist-holl un torkad fablennoù adaozet diwar « Yann ar Feunteun » ; met diouzh un tu all n' eus netra da damall d' ar brezhoneg a gaver enno, hag en un doare bev-mat eo ez int kontet. Ha n' eus ket bet kalz a druvez ouzh Perinaig, gant he fodad laezh. He vioù o vezañ bet troet en « uiou », ne weler ket mat petra 'zo c'hoarvezet gant he zri c'hlodad yer munut. **Goareet kloz barz enn ho chlod** int bet eme Prosper, met « gwaraet kloz » a lavar Goulven, oc'h implij aze ur verb ha ne oa ket bet c'hoazh klevet meneg anezhañ ; ne oa ket diaes koulskoude dizoleiñ dindan **goareet** hor ger « gwarezet », ur ger hag a gaver ivez e dilost « Ar C'hog-Raden hag ar Verienenn » : **Bepred he kav gware ha boed, :: Eur skabel e kourn ann oaled**. Bravoc'hik ez a an traoù da gentañ evit al laezh : « Setu din laezh a-leizh ar pod », daoust ma vije bet gwell lezel **a-leizh** hep barrennig-stagañ ; met trenkañ a ra an traoù pa lenner : « Amann melen er vazh-ribod ». Klaskomp 'ta buan petra eo ar vazh souezhus-se hag a c'hell bezañ amann enni ha lennomp petra a skrive Prosper Proux : **Aman melen a var ribod**, ar pezh a vije skrivet bremañ « Amann melen a varribot » hag a ziskouez n' eus bazh ebet e-barzh an afer : ne deo nemet un doare all da lavarout er pezh a gaver er bedenn ribotat : « Sant Youen, Sant Yann, leizh va ribot a amann, hag ur bannig bihan a laezh, da ober d'ar paour kaezh ». - Ar **barr** troet e **bazh** evel ma oa bet troet ar **varr** e **marc'had** pe e **marc'h**, hag an **er** lakaet da vezañ **aer**, setu avat sorserezh diaoulek ! N'eo ket souezh goude e vije **Ar pod a zo grizilloned**, hervez P. Proux, deut da vezañ « brizilhonet ».

63

Oberoù Prosper Proux a zo dister a-walc'h a-benn ar fin, met talvoudus-bras int aval e-keñver ar yezh o vezañ m'eo bet rouez ar skrivagnerien a oa bet savet e kreiz ar vro. Ret e vije bet eta mirout, ar muiañ 'r gwellañ, ar skrid evel ma oa bet embannet. Ar geñveriadenn graet gant G. P. en e raskrid etre daou zoare ur ganaouenn ne gas ket da bell, rak, mar deo bet kemmet un tamm ar gwisk, ne deo na gwelloc'h na gwashoc'h an eil doare pe egile, ar c'hemm brasañ o vezañ bet dreist-boll tostaat ouzh doare-skrivañ ar Gonideg. Ne deo ket hepken avat reiñ dilhad nevesoc'h d' ar skrid eo eo en deus graet ar reizhekaer, met ivez distummañ e gorf d'e lakaat da vezañ heñvel ouzh ur patrom kavet brav gant an dreiser.

Perak mont da lakaat « benniget » el lec'h ma oa skrivet **binniget** ? Ma reer evel-se e ve bet ivez ret lakat « berviñ », « torriñ » e-lec'h **birviñ** ha **terriñ** ! Ha petra soñjal diwar-benn an « ofrenn-bred » a zo bet lakaet e plas **ofrenn-bred** ar skrid ? Perak distummañ ar gwerzennoù en ur ijinañ gerioù nevez, evel pa lak, e *Distro ar Soudard*, ar pezh a oa skrivet : **Na meuz ked ankouet ma c'himiad**, da vezañ : « Na 'm eus ket ankouazhaet ma c'himiad », ar pezh a zo ivez lakat ur werzenn dek troatad e-lec'h unan a eizh. Plijout kaer a ra ar verboù en **-A + at** evit doare da G. P. Peogwir e lak reoù zoken el lec'hioù ma na oa ket diouto, e « Mouezh ar C'hleier » da skouer, ma kaver : « Ar soubenn, hep mar, vo **yenaet** » tra ne oa nemet **yenet** e skrid P. Preux ; evel ma ne ouije ket ez eus daou verb disheñvel, hag e **yen ar soubenn drempet** lezet da c'hortoz, tra ma yena, marteze, an amzer er-maez e keit-se. Evit doare ne wel ket kennebeut ar c'hemm a zo etre un anv en niver-daou, hag an niver daou, pe div, lakaet dirak un anv, peogwir e skriv : « Bouzaret eo ma **divskouarn** » (An Hent-Houarn) p' en

devoa ar skrivagner lavaret mat **ma diou skouarn**.

Ar fablenn « Ar miliner, e vab hag an azen » a zo bet ivez gwall lakaet war zigarez reizhadennoù. Mar boa ar miliner hag e vab **daou c'henaoueg ar re wasa**, ez int bet lakaet da vezañ « ... a'r re gwashañ ». Hag ar pezh a oa, reizh-tre : **He stakehont he bevar zroad stard, :: Vel ma welid er marc'hajou, :: Ar c'higer oc'h eren louelou**, a zo deut da vezañ : « E stagjont e bevar droad ... ar c'higer oc'h eren al leueoù ». Hag ar pezh a oa, er werzenn a zeu goude, **eur grennen**, da vezañ « ur grenenn » e-lec'h ur **grenenn** ma oa. Ha n' eo ket echu ; un tammig pelloc'h (gwerzennoù 31-32) emañ ar miliner war gein e azen, hag e lavarer dezhañ, hervez P. Proux : **Diek koz, brao eo d'id aze, :: Digor da c'henoù vel eul loue !** Ar pezh a zo lakaet da vezañ e skrid G. P. « Dieg kozh, brav eo dit azez » ! - Ar soudard, o tistreiñ eus an arme a salud e vro : **Da weled a ran adarre, :: Va bro gared, Menez Are** ; ar menez a zo troet en « Arre », ar pezh a ra d' ar glotenn bezañ pinvidik, met a bella eus ar wirionez. Poent e vije marteze kas unan bennak da strakal brullu du-hont evit gouzout petra eo. C'hoazh evit ar ger-se n'emañ ket an tamall da gouezhañ penna-benn war gein ar reizhekaer ; diskouez a ra avat pegen arvarus e vez mirout en ur geriadur sellet outañ gant doujañs, ur fazi re anat.

64

Ha pelloc'h, er werzenn 43, e c'helled lenn : **Lar-ta d'am mamm, zo mamm dide**. Ar pezh a zo bet troet e : « Lar 'ta da'm mamm, zo mamm dit-de ». Mar bije bet dit-te c'hoazh ! A bell 'zo e skrived, evit heuliañ an doare da zistagañ pa na ve ken, **d'am**, hag ivez **d'an, d'ar, d'az**. Setu bremañ, da heul ur stultenn, ma 'z eus c'hoant d' hol lakat da zegemer, evit « reizhekaat » moarvat, ar furmoù **da'm, da'z, da'n, da'r** ; ha zoken **e'm, e'z, e'n** e-lec'h **em, ez, en**, betek mont da skrivañ zoken penn all **a'r** park ! A-walc'h a skraboùigoù a zo evel-se er skritur evit ma vije ezhomm da greskiñ c'hoazh an niver anezho ; din, dit a zo bet lakat el lec'hioù ma veze skrivet **d'in** ha **d'it**, ne vije ket diaesoc'h skrivañ **dam** ha **daz** ma kaver ez eo fall **d'am** ha **d'az**... Gwechoù 'zo ma kaver seurt distummadennoù berniet gant re all c'hoazh, evel e « Mouezh ar C'hleier », a c'heller lenn e-barzh, e skrid G. Pennaod : « Kalz ne zegouezhont en iliz, :: Nemet un hanter a'n ofis », tra ma kaver en embannadur kozh : **Kalz ne zigwezont enn iliz, :: Nemed enn hanter ann ofiz**, ar pezh a zo, anat eo, an doare reizh da lavarout. Er pezh « An Hent-Houarn » e kaver un aridennad kunujennoù enep d' an hent milliget, an holl o kregiñ gant TE : **Te n'eus dallet ma frenestoù... Te n'euz gred d'in eur c'hoari-gaer !... Te n'euz skarzet ma zi kempenn...** Anat eo n' eo ket bet kavet mat ar verb en doare-se, hag ez eo bet ivez skoueriekaet, n' eo ket avat en ur lakaat en e lec'h ar furm klasel **te 'c'h eus**, hogen en ur lakaat en e lec'h ur furm ken « trefoet » all : **te teus**. Ha koulskoude m' en devije bet an oberour c'hoant ober gant ar stumm-se, en devije hen graet hep mar, rak anavezet mat e oa gantañ evel m' hen diskouez, e koublad diwezhañ ar son : **Ped c'hoar hena t'euz, ma zonik ?** Ha se a laka anat n' eo ket hep abeg e oa bet lakaet N er gwerzennoù all, ha splann eo perak : n' eus ket a rangav-gour rener er werzenn-mañ.

Zoken ar paourkaezh Lazar, daoust d' e stad truezus, a zo bet gwallgaset. Ha pa lavar : **Ma diou jod a zo melen :: Evel eur c'hoz anduillen**, ez eus bet graet dezhañ lavarout « ma divjod ». Eñ hag a lavare : **Gand eur banac'hik gwin mad :: E verve, gwech-all, ma gwad** », n' en deus bet aotre da gaout nemet ur « bannec'hig ». N'eo ket souezh e lavarje goude « Am lakae sart ha laouen » pa oa o klask an doare kempouezet ken mat : **Am lake zard ha laouen**.

Ne deo ket aze c'hoazh eta an embannadur a c'helled gortoz evit oberoù Prosper Proux. Gwell e vije bet mil gwech adreiñ ar skrid evel ma oa bet embannet, zoken gant ar faziou a c'helle bezañ chomet ennañ (ha bez' ez eus hiniennoù e Bombard Kerne) eget ne oa e zistummañ en doare-se ; tu a vije bet da nebeutañ da c'houzout petra a oa bet lakaet e-barzh gant an oberour. Zoken evit **Margodig Koant**, an dra nevez nemetañ degaset war-wel, hor bije karet gwelout ar skrid evel ma oa bet adskrivet gant Youenn Drenen ; un adskeudenn ne vije ket bet a re zoken.

65

Ezhomm bras hon eus da gaout danvez lenn evit ar vrezhonegerien. Ezhomm a zo ivez da reiñ da anaout dezho ar pep gwellañ a zo bet skrivet gant hon diaraogerien. Ret eo avat e vije graet al labour en un doare kempenn ha poellek. Pa vez evit reiñ danvez studi d' ar skolioù e c'heller tremen hep oberennoù klok, n' eo ket ret-holl zoken reiñ ar skrid ger evit ger mar kaver anezhañ re ziaes pe re luziet, met dereat e ve neuze merkañ ez eus aze ur skrid hervez Henahen ha neket gantañ e-unan. Mar bez graet hepken ur c'hempenn d' an dilhad kozh (an doare-skrivañ) n' eus digarez ebet da gemmañ ar gerioù hag an troioù-lavar, pe neuze e ve ret, pa na ve ken, lavarout en un notenn petra oa skrid an oberour ha perak ez eus bet kavet mat kemmañ ar pezh a oa ennañ. Pe neuze e c'hoarvezo adarre ar pezh a c'hoarvez gant an niverenn-mañ eus PREDER : c'hwec'h-ugent pajennad vras a skridoù, war baper mat, hag o deus kollet a-benn ar fin ar pep brasañ eus an dalvoudegezh a c'helljent bezañ bet.

NOTENNOÙ

Hor Mignoned

Gwendal ha Mael DEROUET a zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh o breur bihan Briag, en Naoned d'ar 27 a viz Genver 1976.

Hor gwellañ gourc'hemennoù d' hor mignoned.

Kañv

Gouezet hon eus gant glac'har e oa aet da anaon d' an oad a seizh vloaz warn-ugent Viviana CAOUI881N, merc'h Ronan CAERLEON. Hor gourc'hemennoù a gengañv a gasomp dezhañ ha d' e diegezh.

Mantret omp o kemenn ez eo aet da anaon en Naoned, d' an 18 a viz C'hwevrer hor c'heneil mat Yann POUPINOD. Daoust dezhañ bezañ galleger, bet oa e-touez skoazellerien gentañ " Al Liamm " ha bepred en devoa heuliet hor strivoù gant ur spered digor ha leun a gengarantez. Moarvat e vo kontet resis penaos en deus kenlabouret en un doare gouiziek hag efedus-dreist gant Framm Keltiek Breizh, Kêr-Vreizh (Pariz), ar MOB hag ur bern obererezhioù all evel B 5 en Naoned da skouer. Pell c'hoazh e vo dalc'het da bleustriñ war e labourioù, ha chom a ray bev-birvidik an eñvor anezhañ e-touez ar re - niverusoc'h-niverusañ - a zo o fal kentañ stourm evit adsevel hor bro.

D' e wreg, d' e vugale, d' e vugale vihan, hor c'halonekañ gourc'hemennoù-kañv.

Profoù

Miz DU :

R. Leon, 15 lur ; Y. Thomas, 8 ; L. Giraudon, 30.

- War un dro : 53 lur.

Miz KERZU :

C. Colleter, 25 lur ; Brezhonegerien Naoned, 10 ; J. M. Tilly, 25 ; F. Nedeleg, 50 ; L. Bihannic, 100 ; J. Pennec, 35 ; M. Le Guillou, 115 ; P. Rolland, 5 ; Y. Kergrenn 200.

- War un dro : 565 lur.

6 968 lur profoù hon eus bet e-pad ar bloavezh 1975. Bennoz d' an holl brofourien !

876 koumananter

Aet omp a-raok adarre sed an niver a lennerien a gontemp e dibenn miz Genver, lodennet evel-hen : Aodoù an Hanternoz, 137 ; Penn ar Bed, 231 ; Il ha Gwinum, 96 ; Liger Atlantel, 61 ; Mor-Bihan 56 ; Rannvro Bariz, 130 ; Departamantoù all, 93 ; Afrika, 5 ; Iwerzhon, 9 ; Kembre 16 ; Skos, 2 ; Bro-Saoz, 6 ; Bro-Alamagn, 6 ; Helvetia, 3 ; Izelvroioù, 5 ; Belgia, 5 ; Bulgaria, 1 ; Polska, 1 ; Stadoù-Unanet, 4 ; Kanada, 5 ; Haiti, 1 ; Aostralia, 1 ; Sri Lanka (Ceylan), 1 ; Sina

(Taiwan), 1 ; Gwadeloupa, 1.

67

Kemmet eo teñzorer Al Liamm

Hor mignoned Briag Cherel hag e wreg, re sommet gant o micher, a rank dilezel teñzorezh ar gelaouenn.

E-pad eizh vloaz o deus graet war-dro ar c'hontoù, ul labour n' eo ket plijus, met ret evit ma kerzhfe ur gelaouenn.

Izili ar burev a zo eta : Yann ar Beg, Frañsez Kervella, Andreu Latimier, Herve Latimier, Loeiz Bihannig, Per ar Bihan ha Ronan Huon.

Rener : Ronan Huon.

Teñzorer-merour : Per ar Bihan.

Sekretour : Loeiz Bihannig.

Priz " Al Liamm "

Niverenn 173 " Al Liamm " he deus koustet deomp 5 971,10 lur. Gant ar mizoù-kas e sav an dispign da 6 519,61 lur. Ma ne gresk ket ar prizioù e kousto 6 niverenn ar bloaz war-dro 3 milion 600 mil lur kozh.

En ur geñveriañ ar sifrennoù-se ouzh re ar bloaz 1974, e notomp kreskidigezh :

- priz ar moulañ (warlene, 29 450,82 L) ;
- ar mizoù-post (warlene, 1 064,07 L) gant ma 'z eo an timbroù div wech keroc'h bremañ ;
- an arc'hant dastumet gant ar c'houmanantoù (warlene, 20 489,11 L) kresket eo bet priz ar c'houmanant ha kalz lizhiri a zo bet kaset da c'houlenn adkoumanantoù ;
- gwerzh an niverennoù (warlene, 2 339,75 L) ;
- ar profoù (warlene, 6 496,07 L).

Spi hon eus e talc'ho hol lennerien da sikour ac'hanomp evel m' o deus graet betek-hen, ar prizioù-se a ziskouez deomp ne c'hellomp bevañ nemet gant o skoazell.

D' hor c'henskriverien

Anaoudek e vefemp ouzh ar re a gas deomp kemennadurioù da vezañ embannet war Al Liamm ma rafent ur striv. O fediñ a reomp da gas deomp o fennadoù skrivet en doare ma ne vo ket ret o adskrivañ penn-da-benn pe o reizhañ ha ma vo tu d' o c'has war-eeun d' ar mouler. A-hend-all emaint e riskl da vezañ daleet pe da chom diembann dre ma ne vo ket bet kavet amzer d' o dirouestlañ ha d' o adskrivañ.

Skrivit eta en un doare lennus, gant ur skriverez mar deo posupl ha diouzh un tu hepken en ur lezel ur vandenn wenn a-gleiz.

68

Ali d'al lennerien

Goulenn a reomp digant koumananterien Al Lliamm kas o adkoumanant hep termal,

nebeut amzer goude bezañ degemeret an niverenn o venegiñ war he bandenn « koumanant echu ».

Rankout a reomp pediñ hag aspediñ lennerien ' zo da gas o skodenn. An niverenn 173 a zo deut er-maez e dibenn miz Kerzu ha kalz a goumanantoù a echue ganti. E-kreiz miz C'hwevrer e rankemp kas 350 lizher da c'houlenn an adkoumanantoù evit 1976. Arc'hant hag amzer gollet ! Ra glevo hol lennerien hor galv, ra hor skoazellint d' ober labour gwelloc'h !

Deziadur 1977

Ar genwerzhourien pe an dud all a fellfe dezho kaout deziadurioù gant o bruderezh moulet war o c'hein a zo pedet da gas keloù deomp diouzhtu rak an deziadur a vo moulet e miz Gouere.

Priz an embann a zo 60 lur.

Kasit diouzhtu eta ar pennad da voulañ ha lavarit deomp pet skouerenn a fell deoc'h kaout. Un drederenn distaol a vezo graet azalek 50 skouerenn. Skrivañ da R. Huon, 2, Venelle Poulbriquen, 29200 Brest.

Niverennoù kozh " Al Liamm " da brenañ

Prenañ a c'heller an niverennoù meneget da heul :

- 5, 6, 29, 43, 53, 63, 65, 67, 69 betek 174 (nemet an niverennoù 98, 99, 100 hag a zo diviet).

Priz an niverennoù a zo :

- 5 : 4 lur ;

- an niverennoù all : 7 lur pep hini (nemet an niverennoù 65, 116, 151 hag a goust 9 lur pep hini, an niverenn 166-167 hag a goust 14 lur).

Tu a zo a-hend-all da brenañ ar bloavezhioù klok-mañ hag a goust 40 lur pep hini :

- 1959 (72-77) ; 60 (78-83) ; 61 (84-89) ; 62 (90-95) ; 64 (102-107) ; 65 (108-113) ; 66 (114-119) ; 67 (120-125) ; 68 (126-131) ; 69 (132-137) ; 70 (138-143) ; 71 (144-149) ; 72 (150-155) ; 73 (156-161) ; 74 (162-167) ; 75 (168-173).

Dre fazi hon eus meneget en niverenn diwezhañ e oa gouestlet an niverenn 99 da Fañch Elies-Abeozen. N' eus nemet e luc'hskeudenn enni hag an niverenn 100 an hini eo a zo e-barzh pennadoù a-zivout ar skrivagner leonat. A-hend-all, siwazh, diviet eo bremañ an 2 niverenn, ar 99 koulz hag ar 100.

69

Yezhadur Bras Kervella dindan ar wask

Embannet gant Al Liamm " Yezhadur bras ar brezhoneg ", oberenn ramzel F. Kervella a zo dindan ar wask. Reizhet eo bet gant an oberour e-unan, ha dont a raio er-maez a-benn ar 15 a viz Ebrel. Al levr-mañ ez eus ennañ 503 pajenn ha gwisket eo gant ur golo kaer ha kalet. Tu a zo da rakprenañ adalek bremañ evit 38,00 lur hep mizoù-kas (4,60 lur). Goude ar 15 a viz Ebrel e kousto 50,00 lur. Ur striv bras a reomp evit hor skoazellerien, hastit buan eta kas ho chekenn da J. Queillé, 47, rue Notre-Dame, 22200 Guingamp - c.c.p. 1136 82 Rennes.

Evit pezh a sell " Ar Baganiz " ez eus bepred tu d' e rakprenañ (betek ar 1añ a viz Meurzh) evit 20 lur e-lec'h 27 hag 25 lur war baper kaer e-lec'h 32 lur.

Lizhiri

Digant J. K. eus ar C'hanada :

« Emaon o paouez kaout Al Liamm (Niv. 172). Ur frealz eo evidomp. Soñjit ez omp bet tost da dri miz hep lizheroù : diskroget paotred ar Post diouzh o labour ! Evel m'emañ e plij din " Al Liamm ". Karout a rafen koulskoude gwelout aliesoc'hik " Skridoù skiantel " (naturouriezh, douaroniezh, zoken mezegiezh, h.a.). »

RESPONT : Seurt pennadoù a vez pe a veze embannet kentoc'h war gelaouennoù evel " Hor Yezh ", " Skol " pe " b-Preder " dre ma n'eo ket ken niverus a dud a vez dedennet ganto.

Digant L. ha D. M., Neuilly-Plaisance :

« Da gentañ hall ret eo deomp, va breur ha me, ho kourc'hemennaouiñ evit ho kelaouenn a zo dedennus-tre. Gwir eo, plijadur vras hon devez o lenn seurt kelaouenn skrivet en ur brezhoneg arnevez. Ouzhpenn-se, a bep seurt eo ar pennadoù-skrid, ar pezh a blij deomp kalz.

Met ar pezh a faot deoc'h gouzout eo petra a venn kaout ho lennerien en hoc'h oberenn. Ni a garfe kaout arroudoù diwar hor gwellañ skrivagnerien, pennadoù diwar-benn an holl skiantoù, gant o geriadurioù ispisial. Hag ivez, karet a rafemp kavout pennadoùigoù, skrivet e kerneveg hag e kembraeg, ar yezhoù tostañ ouzh hon hini. »

Digant Y. B., Lesneven :

« Bizet 'm eus koumanantiñ da " Al Liamm " evit ar bloavezh-mañ... Peogwir e plij deoc'h gouzout peseurt tud eo ho koumananterien, e lavarin deoc'h ez on 26 vloaz ha labourer-douar dre va micher... P' emañ ganti, bloavezh mat deoc'h, ha chañs vat da Al Liamm ».

Digant B. ar R., Loktudi :

« Abaoe daouzek miz on koumanantet d' Al Liamm ha plijout a ra din kalz. Kement a destennoù a dalvoudegezh ha plijus-tre a gaver e-barzh ar gelaouenn-mañ ! Met diaes-tre eo da lenn evit ur paotr yaouank a c'hwezek vloaz evel don hag a zo bet desket e galleg er skol, hag hanter-vrezhoneg hanter-c'halleg er gêr. Mankout a ra din kalz a c'herioù evit bezañ kad da lenn anezhi penn-da-benn hep ober ur sell war ur geriadur bennak.

C'hoant am befe c'hoazh gouzout ma 'z eus kalz a dud yaouank koumanantet d' ho kelaouenn (dre korn al lizhiri embannet enni ma ne zirenk ket ac'hanoc'h). Kalz a blijadur e rafe din-me ha trugarez bras e laran deoc'h en a-raok. Goulenn a ran an dra-se diganeoc'h abalamour ma soñj din ez eo pouezus ar yaouankiz evit dazont ar brezhoneg.

Dalc'hit start evit ma chomo yezh ar vro-mañ bev e-giz m' emañ hiziv !

70

Digant R. A., Sant-Nazer :

« Setu ma krog an trede bloavezh abaoe va c'houmanant kentañ da " Al Liamm ". Skoazellet-mat on bet, a-hed ar bloavezhioù-mañ, gant ho kelaouenn. Da gentañ evit deskiñ brezhoneg hag ivez evit traoù n' anavezen ket. Neuze em eus kavet bep daou viz em boest-lizhiri un doare plijus da lenn brezhoneg ha da soñjal e-pad un nebeut eurvezhoù e brezhoneg, hag hepken e brezhoneg. A-wechoù e oa diaes evidon lenn pennadoù ' zo hag e oa ret din klask sikour er geriadur : ret eo labourat un tammig memestra, zoken evit deskiñ gerioù un tamm re ziaes ha ne

servijont ket kalz da gaozeal gant ar vrezhonegerien. Mod all, ul labour graet mat ' vez kavet gant Al Liamm... »

Digant G. T., Pempoull :

« Reiñ a ran deoc'h da c'houzout penaos va c'houmanant-bloaz d' " Al Liamm " a zo echu, ha penaos ne adkoumanantin ken, peogwir, siwazh din, deuet war an oad (72 vloaz) va daoulagad a zo o vont da netra a-benn nebeut. Ha n' eus netra d' ober hervez ar mezeg.

Koumanantet da " Walarn " abaoe ma oa deuet er-maez, koulz laret ha d' " Al Liamm " goude, keuz bras am eus ha kalz a c'hlac'har ivez o rankout terriñ va holl goumanantoù da gelaouennoù brezhonek. Ret eo plegañ d' an oad ha d' e wanderioù.

Graet 'm eus gwellañ m' hellen evit hor yezh karet.

Kendalc'hit war hent skosellek ar yezh, rak kreskiñ a ra hon naoz ha prestig, a gredan, e teuio ar maout ganti.

Gourc'hemennoù kalonek. Kenavo. »

Digant P. C., Ossun :

« Degemeret ervat em eus ho lizher o c'houlenn diganin kemer ur c'houmanant d' ar gelc'hgelaouenn " Al Liamm " Hen ober a ran gant plijadur, daoust ma n' on ket c'hoazh ampart a-walc'h war ar brezhoneg. Kroget em eus gant studi ar brezhoneg daou vloaz 'zo hepken (gant ar Skol dre lizher " Ober "). Ul liamm e vo ho kelc'hgelaouenn etre ur breton divroet hag e vro c'henidik ».

Digant P. K., Hyères :

« Echuiñ a ra ma c'houmanant-bloaz er miz-mañ. N' adkoumanantan ket evit 1976, ha n'eo ket e vefen displijet gant ar gelaouenn, a gavan pinvidik war veur a dachenn. Kollet eo bet ganin va labour, nevez 'zo. En askont da se ez on oblijet da glask implij er gêr-mañ pe en ur gêr all, hep chomlec'h resis. Pa vo adkavet ganin amzer da lenn ha sioulder ar spered ez adkoumanantin d' ar gelc'hgelaouenn... »

71

Digant D. P. :

« Ur blijadur dreist am eus o reiñ deoc'h da c'houzout, ha da lennerien Al Llamme ivez mar karit, penaos em eus kavet un diskoulm brav d' an dilabour a ren er mare-mañ un tamm e pep lec'h, hag un tammig muioc'h c'hoazh e Breizh evel kustum !

Ya, dirouestlet e vefe ar gudenn en hor bro en ur c'hopraat ur rummad nevez a gargidi evit ober ar pezh mell labour-mañ a badfe sur a-walc'h bloavezhioù ha bloavezhioù ; difaziañ teulioù ofisiel mererezh Bro-C'hall e fell din lavarout. Ha c'koazh ne gomzan nemet eus ar pezh a anavezan un tammig : da lavarout eo an anvioù skrivet e brezhoneg !

Bet em eus tu nevez 'zo da c'houlenn digant mererezh ar c'hadastr roll anvioù parkeier ur menaj bihan e-kichen Gwengamp ha setu amañ da heul abeg ar souezhadenn am eus bet. ..

- **Park penn ar c'hoad bihan** a zo deuet da vezañ Parc pan an coal bian, hag an hini bras a zo Parc pen an coal bras.

Ma ne vefe bet nemet se !

- **Park war e gostez** a zo Parc houare loste, hag ur wech all e vo difaziet evel bezañ Park war e lost moarvat !

- Ha **Park Derrien** (anv den) a zeu da vezañ Park derriere evel just ! Gwir eo e

oa hennezh an hini gwellañ er menaj !

Traoù ken souezhus ha se a zo tu da gavout e pep aridennadig anvioù parkeier moarvat, setu perak e lavaran e padfe pell an difaziadur ! Un doare da vihanaat an dilabour a vefe, evel em eus lavaret, ha war un dro aesaet bras e vefe labour ar furcherien dielloù da zont, danvez Kervellaioù pe Falc'huned enno !

Ret eo lakaat menozioù mat dindan fri ar pennoù-bras a-wechoù. Sed aze unan hag a raio berzh, me a zo sur ! »

Digant T. C., kelenner e Skol Medisinerezh R.

« Lenn a ran bepred gant kement a blijadur da gelaouenn, ha levrioù embannet a-drugarez dit. " Romant ar Roue Arzhur " a oa dreist ! Gortoz a ran dihabask " Va Zammig Buhez " rak yezh J. Priel a gavan plijus-tre. Aesaet em eus ober araokadennoù - bihan e kembraeg, ha kaset am eus va dornskrid (ul levrig Mezekniezh e brezhoneg) - ul labour dihoalus emichañs - d' ur mignon da reizhañ. Kaer din bezañ pell diouzh ar vro, n' on ket dizamant e-keñver traoù Breizh. »

Digant Y. G. eus Waukegan, U.S.A. : .

« ... Degemeret em eus n' eus ket pell zo an daou levr hoc'h eus kaset din, trugarez adarre, lennet em eus " Romant ar Roue Arzhur " div wech endeo. Al levrenn-se a zo plijus-kenañ. »

... Setu ivez ur pennad-skrid am eus didammet e-barzh ur gelaouenn eus Waukegan, gwechoù 'zo e vez meneget anv Breizh evel amañ e skeud skrapadeg an tren e Veilen, hag ivez gant darvoudoù en Euskadi n' eus ket pell 'zo. Sevel a ra ar gelaouennerien ur roll eus an emsavoù all o stourm e Europa ar C'hornog, met hep re a vunudoù. Ar re a oar amañ pelec'h emañ lec'hiet Breizh n'int ket niverus, ne ouzont ket zoken lec'hiañ riezoù Europa war ar gartenn douaroniezh ; rez an deskadurezh er Stadoù-Unanet a zo kalz izeloc'h eget n' eus forzh e pelec'h en Europa ha koulskoude ober a reont berzh er vuhez... »

72

Digant A. K. :

« Lennet 'm eus Al Liamm a-hed bloavezh 1975 gant aked hag a bep seurt 'm eus kavet.

Evel ma 'z on dedennet gant barzhoniezh e kavan bepred dudius kregiñ gant kement-se, met, d' am meno, n' eus ket ezhomm ouzhpenn teir barzhoneg e pep niverenn darn eus an danevelloù 'oa mat-tre (" Distro eus ar skol " - " Pa varv an avel er straedoù didud " - " Ganet eus ur gwaz hag ur vaouez "), siwazh, alies tre ez int troidigezhioù, ar pezh a ziskouez e chom kalz labour war an dachenn-se.

Met ar pouezusañ eo ar pennadoù a vez gwelet bremañ er gelaouenn hag a rae diouer a-raok : pennadoù, studiadennoù war danvezioù liesseurt : an Euskareg er skolioù, Utopia, Skol Summerhill. Reiñ a reont tro da vegañ ur preder, un diviz war gudennoù hor bed hag hor buhez, ha se, e brezhoneg penn-da-benn. Sur e tiwano eus ar pennadoù-se, re all, skrivet war-eeun e brezhoneg. Ha n' eo nemet er stumm-se ez aio hor stourm war-raok.

Talvoudegezh an notennoù a zo bras ha pouezus ivez. Gant kalz a blijadur em eus bet tro da gavout keleier ha pennadoù talvoudus e-touez an notennoù : staj SAE war ar maez, tredanvaou nukleel, stourm ar broioù gwasket. »

Digant T. L. :

« Ur gerig a gasan deoc'h da reiñ da c'houzout va soñj diwar-benn kelaouenn Al Liamm. Plijet-tre on o welout muioc'h-mui a bennadoù diwar-benn kudennoù hor stourm hag ar bed a-vremañ dre vras, da skouer, diwar-benn " Utopia

? " (mv. 169, troidigezh J. Connolly gant Erflamm gKervilio, ur pennad eus " Skol Summerhill " gant Danielle Bourdinière, pe zoken notennoù hir a-walc'h a gaver enno danvez preder meur a wech.

D' am soñj ez eo roll ur gelaouenn evel " Al Liamm ", tost da vil koumananter dezhi bremañ, kinnig magadur spered d' ar Vretoned a stourm da zieubiñ o bro. Kavout a ra din ez eo ar pezh a glask ar re yaouank, ha n' eo ket hepken lennegezh c'hlan pe diazezet er stourm zoken. En doare-se e vo, a gav din, dedennet lennerien nevez hag e teuio emsaverien da skrivañ pennadoù a vo lennet gant ouzhpenn 50 den. " Al Liamm " a zo neuze ur benveg daremprediñ ha prederiañ evit an emsaverien.

E kreizenn S.A.E. Naoned e vez aozet bep sizhun un emvod-studi evit pleustriñ war un dro war ar yezh ha war ziazezoù hor stourm : ar pennadoù kentañ hon eus studiet a zo ur pennad diwar-benn an " Ikastolaoù " e Bro-Euskadi (niv. 169) gant Jorj Gwegen, hag hini Eflam gKervilio, " Utopia ".

Meur a hini eus ar re a zo er bodad-se n'eo ket koumanantet c'hoazh, met un digarez mat e vo d' o c'houmanantiñ.

A-hend-all eo mat derc'hel d' ar c'hempouez etre pennadoù aes ha pennadoù a vo diaesoc'h dre ret, abalamour d' an danvez anezho.»

Setu amañ un trede lizher hag a lavar tost da vat ar memes tra. Digant G. L. :

« Lenn a ran Al Liamm abaoe tri bloaz ha kavout a ran ez eo aet ar gelaouenn war wellaat. En niverenn diwezhañ, da skouer, am boa lennet gant plijadur het ur bloavezh mat « d' an holl bobloù bihan o stourm evit o buhez » ; prouiñ a ra an dra se c'hoazh eo ar gelaouenn ul liamm etre hon fobl ha pobloù all ar bed.

73

Dedennet oan bet ivez gant ar pennadoù : " Danvez-romant " Skol Summerhill ", " Goanag Erin ", " Ur staj war ar maez gant SAE " ; degas a reont menozioù dimp ha peadra da vagañ hon freder. Gwelloc'h eo ganin pennadoù ar seurt-se eget pennadoù lennegel-rik, rak klotañ a reont gwelloc'h ouzh ezhommoù tud a zo oc'h adsevel o bro, hag a zo rediet dre-se da brederiañ war ar bed, ar gevredigezh, evit gouzout penaos o c'hemm.

Ar pezh a ziskouez a-hend-all n' eus ket tu da chom war dachenn al lennegezh-rik eo e vez doanik peurliesañ an darn vrasañ eus ar pennadoù lennegel skrivet e-barzh " Al Liamm ", dreist-holl ar re skrivet gant reoù yaouank. Daoust ha ne zeufe ket seurt tra eus an dic'hoanag a sav enne dre ma n' eus ket tu da lakaat an traoù da cheñch en ur chom war dachenn al lennegezh-rik.

Er c'hontrol, harpet e vez lennerion " Al Liamm " en o obererezh gant ar menozioù a gavont e pennadoù politikel pe brederouriel pe diwar-benn traoù all c'hoazh. Ha n' int ket didalvez e-keñver al lennegezh, ouzhpenn-se, daoust ma 'z int marteze diaesoc'h da sevel dre ma 'z eo ret ober gant gerioù arnevez pe dre ma 'z int troet diwar yezhoù all.

Spi 'm eus neuze e vano " Al Liamm " digor da bennadoù nann-lennegel hag e tizho hep dale kaout 1 000 koumananter. »

Evel ma weler, en tri lizher a-us, lod eus hol lennerien, da vihanañ ar re a skriv deomp, n'int ket ken dedennet gant al lennegezh-rik ha ma 'z int gant ar studiadennoù a bep seurt. Un dra boutin ha hollek a-walc'h ez eo e gwirionez er mareoù-mañ. M' en dije Helias skrivet ur romant n' en dije ket graet ar berzh a ra. Daoust ha kavet e vo ivez tud evit difenn al lennegezh gant ar ster a vez roet dezhi peurvuiañ ?

Skourr Breizh ar C'hendalc'h Keltiek

Kendalc'h Etrekeltiek 76 a vezo dalc'het en Enez-Vanav eus an 19 d' ar 24 a viz Ebrel.

Kaoz a vo er c'hendalc'h eus dazont er broioù keltiek er bloavezhioù 80.

Ur vro gaer-tre eo Bro-Vanav, hogen leun a Saozon eo e-pad an hañv. Plijusoc'h eo da welout da Bask evit gallout kejañ gant tud ar vro.

Ne vo ket kendalc'h Manav unan bras moarvat. Koulskoude e vefe mat ez afe un toullad Bretoned eno da anavezout ar vro ha daremprediñ Kelted all a bep bro. E soñj emañ ar C'hendalc'h da aozañ ar veaj evit ur priz dereat, war-dro 340 lur gall ha marteze nebeutoc'h evit ar re dindan 21 bloaz.

Evit diskleriadurioù hiroc'h, skrivañ da : Kendalc'h Keltiek - L. Chapel - Roc'h Ar Bleiz - 29210 Morlaix.

74

Gouel ar Brezhoneg 1976

Pedet eo lennerien Al Liamm da gemer perzh e Gouel ar Brezhoneg a vo dalc'het e Pont 'n Abad er Vro Vigoudenn da vare ar Pantekost e-giz bep bloaz. Pevar devezh e pado ar gouel, d' ar 4, 5, 6, 7 a viz Mezheven. Setu ar raktres a zo bet soñjet evit ar mare :

- d' ar sadorn endervezh : forom bolitikel diwar-benn dazont Kerne ;
- d' ar sadorn d'an noz : pezhioù-c'hoari ;
- d' ar sul endervezh : Kermes gant c'hoarioù, standoù ar strolladoù sevenadurel, artizaned hag all... A-hed an amzer e vo kanerien ha sonerien a roio ton d' ar fest ;
- d' ar sul d' an noz : fest-noz ;
- d' al lun abardaez : fest deiz en ur sal ha diskouezadeg adarre.

Aozet eo Gouel ar Brezhoneg ar bloaz-mañ gant : Ti ar Vro Vigoudenn, Kevrenn ar Falz ar Vro Vigoudenn, Kreizenn Skol an Emsav Kerne-izel.

Gouel an Unvaniezh en Naoned

D' ar sul 25 a viz Ebrel o deus mennet stourmerien kevredigezhioù an Naoned bodañ er gêr-mañ tud a bep korn a Vreizh ha Bretoned divroet e-sell diskouez youl start ar Vreizhiz da zont a-benn da adunvaniñ o bro, a-enep da vriz-menoze an diskarerien hag ar falz-profeded. Spi o deus an aozerien e vo ouzhpenn 15 000 den o leuniañ d' an deiz-se Bali an 50 Gouestlad. An holl d' an Naoned eta d' ar 25 a viz Ebrel !

Kelaouennoù ha levrioù

Degouezhet eo ganeomp div levrenn eus **Geriadur Istorel** Roparz Hemon : rann 23 Merennañ-Moustrouzal ha rann 24 Mouz-Orget. Erru eo eta ar Geriadur Istorel d'

al lizherenn O hag hep dale e vo bet embannet an oberenn a-bezh 2 400 pajenn roneoskrivet enni hep kontañ al lizherenn A bet embannet e stumm ul levr moulet gant Al Liamm (204 pajenn). Ur wir vammenn e vo al labour divent-se evit ar glaskerien koulz hag evit ar skrivagnerien.

Koumanant da 6 rann eus Geriadur : 75 lur. Preder K.R.P. 160 93 13 Paris.

Imbourc'h. Niv. 70 ha 71-72 enno pennadoù diwar-benn an darvoudoù diwezhañ degouezhet e Breizh ha Korsika, pennadoù diwar-benn ar relijion, pennadoù politikel, barnadennoù levrioù ha keleier a bep seurt.

Koumanant-bloaz : 35 lur. K.R.P. Y. Ollivier 1 534 25 Roazhon.

75

Keleier an Naoned a zo deut da vezañ ur gelc'hkelaouenn gaer ha moulet, enni 24 pajenn ha skeudennoù e-leizh. Daoust ma vir hec'h anv ne roio ket mui hepken keleier eus Bro-Naoned. Setu amañ dibenn ar pennad-stur : « Ne vo ket Keleier Naoned ur c'hannadig-parrez evit Naonediz met ur gelaouenn vrezhonek, graet en Naoned ha kinniget da holl vrezhonegerien Vreizh. Ne vo ket ur gelaouenn lennegel nag ur gelaouenn bolitikel, bez' ez eus dija seurt kelaouennoù ha graet mat int. Ur gelaouenn hollek e vo, gant pennadoù enni diwar-benn ar sportoù, ar skiant, ar filmoù, ar beajoù, an tiegezh, an istor, an arz, ar vakañsoù, an darvoudoù e Bro-Naoned, e peurrest Breizh, er broioù keltiek all ha dre ar bed».

Evit padout ez eo ret d' ar gelaouenn kaout 250 koumananter. Chañs vat a hetomp eta d' ar gelaouenn nevez.

Koumanant-bloaz (10 niverenn) 20 lur. - Merourez : Gwenola Rossinyol, 11, rue de l'Ascension, 44700 Orvault. Kont-bank : niverenn 58 190 1081, Banque Populaire Bretagne-Atlantique, Agence du Pont du Cens, 40, Route de Rennes, 44300 Nantes.

Bleun-Brug e galleg ha brezhoneg. Merzout a reomp ez eus en niverenn-mañ kement a vrezhoneg hag a c'halleg ar pezh a zo ur wellaenn.

Koumanant : 20 lur. K.R.P. Nantes 329 30.

Visant Seite en deus kaset deomp eil levr **Le Breton par les ondes** ul levrig kentelioù gant tresadennoù diwar zorn J. hag R.J. Sevellec. Priz : 19,50 lur. Er stalioù.

Breiz a gendalc'h da embann peder bajenn dedennus hag aes da lenn e brezhoneg. Renet eo al lodenn-se gant J. C. Bozec. Koumanant : 20 lur. K.R.P. 144 67 Rennes.

Gwenn-Rann, kelaouenn e galleg (Ecologie - Culture - Economie) hag ur pennad brezhonek tennet eus " Al Liamm ". Miziek. Renet M. Barré, 19, avenue Lajarrige, 44500 La Baule.

Kelaouennoù estren a resevomp ivez evel **Lotta Federalista**, 00189 Roma, Largo S. Godenzo 3 ; ha **Dietsland Europa** en nederlandeg, B. Van Doghout, Jordaenskaai 3, 2000 Antwerpen Belgie.

Ul levr tev (349 pajenn) "**Les Bonnets Rouges**" a zo o paouez bezañ embannet gant E S B en Embannadurioù 10/18. Teir lodenn a zo ennañ, ur seurt digoradur gant E.S.B., ur pennad gant La Borderie hag unan gant diwar ar rusianeg gant Boris Porchnev. Komzet e vo hiroc'h diwar e benn war an niverenn a zeu. E gwerzh emañ er stalioù.

Emañ " Nature et Bretagne " o paouez embann ut levrig anvet " Une Bretagne libre est-elle viable ? ". Ar raskrid a zo gant Yann Fouere hag ar goude-skrid gant Per Bourdelles. Troet eo bet gant an Aotrou Bourdelles diwar " Is Wales Viable ? " gant Leopold Kohr, kelenner e Skol-veur Porto-Rico ha kempennet gant Yann Fouere ha Per Bourdelles evit klotañ gant Breizh. Ul levr da lenn pa weler er goude-skrid ez eo pal ofisiel ar gouarnamant gall ober eus hor bro un dezerzh

hag ul lec'h evit diskuizh an douristed e-pad an hañv hag e vo ret d' hor bugale hervez diviz ar gouarnamant gall mont da glask labour war-dro Paris pe e reter Bro-C'hall.

76

Dastum

Ar gevredigezh Dastum a gemenn ez eo deut er-maez ar c'haier sonerezh-pobl niverenn 4 (Bro Vur - Loudieg) hag e teuo er-maez an niverenn 5 (Bro Blin) e 1976. Ur bladenn, ur minikasedig pe ur vandenn (1 eur) a zo da heul pep levrig. Priz an niverenn 4 : 34 lur. Priz an niverennoù 4 ha 5 : 64 lur.

Dastum : Ti Degemer mat, 6, rue du Dispensaire, 29213 Plougastel-Daoulas.

Kentañ levr-kegin brezhonek

Embannet gant renerien BARR-HEOL, levrig kegin Soaz an Tieg zo unan eus labourioù pennañ savet a-c'houde bloavezhioù hir da reiñ buhez gwirion d' hor sevenadur.

Taolioù marzh al lennegezh uhel ha kaer zo ezhomm anezho da lakaat anat talvoudegezh espar hor yezh.

Doareoù ar vuhez pemdeziek zo ezhomm o brezhonekaat da gentañ-holl avat, rak kuit a zouar-mager strujus d' he gwrizioù ne ro gwezenn ebet he frouezh.

Brud ha berzh mat da levrig Soaz an Tieg, eta !
(Emglev an Tiegezhioù)

Ul levr aes da lenn, dezhañ 80 pajenn, 135 meuz ennañ, gant tresadennoù ha krennlavarioù. Ment : 21 dre 13,5 cm. Priz al levr : 15 lur dre ar post.

Barr-Heol, 22300 Lannion - c.c.p. 2 454 53 Rennes.

Ar brizonidi vreizhat ha Parlamant Europa. - Y. Fouere dieubet

Setu meur a viz emañ ar brizonidi vreizhat o louediñ e prizonioù Pariz hep ma vefe lavaret evit lod anezho ar pezh a damaller dezho ez-resis.

Betek an 12 a viz C'hwevrer e chome 8 anezho en toull-bac'h : Yann Fouere, an Aotrou Breton, Yann Puillandre, Pierre Loquet, A. Ar Gall, J. Laluyaux, G. Coriton ha D. Crochard.

Heur a lizher a zo bet kaset d' ar gouarnamant gall gant kannaded eus broioù estren ha chomet int holl direspont. En ur goulenn dre gomz e Komision Brussel o deus pemp kannad Breizhveurat eus Parlamant Europa diskleriet e oant chalet gant toullbac'hidigezh Yann Fouere ha tud all e Bro-C'hall hep barnadenn. Ar gannaded a garfe e c'houlennfe ar Gomision digant gouarnamant Bro-C'hall skorañ e damalloù a-enep ar brizonidi hag o c'has dirak al lez-varn hep mui dale.

Ar gudenn a zo bet komzet anezhi d' an 9 a viz C'hwevrer er vodadeg bras ha daou gannad « breizhad », Bourdelles hag an holl vrudet Landrin, ur beleg kristen sañset, o dije kavet an tu da gomz a-enep dezhañ.

Daoust da se, tri devezh goude, d' an 12 a viz C'hwevrer ez eo bet lezet Yann Fouere da vont. Toullbac'h et e oa bet d' an 13 a viz Here. Difennet eo outañ

distreiñ d' e labour en Iwerzhon.

77

Emglev Kristenion Breizh - 56310 Kistinid

Genver 1976.

Warlene ez eus bet dalc'het daou gamp gant E.K.B. hag E A T e Kistinid e miz Gouere hag e miz Gwengolo.

Hevlene e vo dalc'het adarre rummoù devezhioù-studi evit an emsaverion a fell dezho, war un dro, peurzheskiñ ar yezh ha studiañ ar c'hudennoù a sav er gevredigezh vreizhat a vremañ war dachenn ar politikerezh hag ar Feiz kristen.

Danvez an devezhioù-studi a vo, enta, diouzh un tu, ar politikerezh (Istor Breizh hag ar Broioù keltiek, Emsav Breizh hag ar Broioù keltiek) ha diouzh un tu all kudennoù ar Feiz hag an Iliz e Breizh hag ar Broioù keltiek er c'hendegouezh a hiziv.

Plaenaet e vo, peurgent levrioù a seurt gant " Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh ", " Istor an Emsav ", " Istor Kembre ", " En donvor da Vreizh" pennadoù a bep seurt deut er-maez e-barzh kelaouennoù kozh ha nevez. Roet e vo da c'houzout d'an danvez perzhidi peseurt levrioù o devo da zegas pe a vo pourchaset dezho e-pad an devezhioù-studi.

Ar rumm devezhioù-studi kentañ a vo dalc'het :

- etre al lun 22 a viz Meurzh 1976 da ziv eur hag ar sadorn 27 a viz Meurzh da ziv eur.

An eil rumm a vo dalc'het :

- etre al lun 5 a viz Gouere 1976 da ziv eur hag ar sadorn 10 a viz Gouere da ziv eur.

An trede rumm a vo dalc'het :

- etre al lun 16 a viz Gwengolo 1976 da ziv eur hag ar sadorn 11 a viz Gwengolo da ziv eur.

Ar pevare rumm a vo dalc'het :

- etre ar merc'her 29 a viz Kerzu da ziv eur hag ar gwener 31 a viz Kerzu da ziv eur.

Priz an devezh a zo pemzek lur. Goulennet e vo ouzhpenn digant ar berzhidi paeañ ur gwir enrollañ a 35 lur. Padal ne vo ket goulennet ar gwir enrollañ-se digant ar studierion.

Lojet e vo ar berzhidi en " Ti-parrez " e-barzh hunvaoù. Dav eo degas pallennoù pe seier-kousket.

Goude merenn, etre peder eur ha seizh eur hanter e vo graet pourmenadennoù dre ar vro a zo kaer dreist, treuzet gant ar Blavezh, ha war aod Gwened.

Buhezek mat eo brezhoneg Gwened er c'hornad.

Evit kaout diskleriadurioù e c'heller skrivañ d' an Ao. beleg Blanchard, Ti-Person, Kistinid, pe bellgomz dezhañ : (97) 51.06.21.

78

Kêr-Vreizh, 43, rue Saint-Placide, 75006 Paris

Abaoe tri miz hon eus kroget gant al labour : prezegennoù kentelioù brezhoneg pe

gembraeg hag oberoù arall a gaver amañ ur roll anezhe.

I. - Kemennadenn.

a) Displeget eo bet ar prezegennoù-mañ

E galleg :

- 8.11.75 : O. Mordrel, a-zivout e levr diwezhañ " La Voie Bretonne "
- 15.11.75 : Jeanne Laurent (" La quévaise ", " Bretagne et Bretons " h.a.) a-zivout ar " Bonedoù ruz ". Savboent an istorour.

E brezhoneg :

- 25.10.75 : R. Riec, " Al liverezh e Breizh ". Ur sellad ouzh an arzourien o deus labouret e Breizh hag ouzh o oberennoù.

b) Kentelioù brezhoneg :

- Bout hon eus bremañ peder c'hentel brezhoneg, teir evit an derez kentañ, unan evit an eil derez (levrioù Kelc'h Debauvais). Kentelioù brezhoneg arall, evit an derez kentañ, a grogo e miz Genver.

Kentelioù kembraeg :

- Kroget int abaoe daou viz, renet gant Alan Botrel. Displeget e vezont e brezhoneg.

k) Eskemm levrioù.

Un nebeut niverennoù eus " Ar Stourmer " hag " Ar C'hilhog gall " a zo tu da bremañ c'hoazh. Tu zo ivez d' ober eskemm gant ar re e a fello dezhe.

II. - Kedgred gant ar Brizonidl.

a) Kestoù zo bet aozet gant tud KV evit ar re a zo bet toullbac'het nevez zo. Kaset eo bet an arc'hant da Skoazell Vreizh.

b) Sinet hon eus an diskleriadur savet gant kevredigezhioù eus rannvro b-Pariz hag hini " Comité de soutien à Yann Fouere ".

III. - Bodadeg-veur KV zo bet dalc'het d' ar 16 a viz Du. Mouezhiet eo bet evit izili ar gwazva : D. S. Delorme, Ph. Jouët, Ronan Jolais ha Bernez Jestin.

Devezhioù-studi S.A.E. ha B.Y.V. E 1976

Pedet omp da embann kement-mañ :

EHAN-SKOL PASK

Bro Leon (B.Y.V.) : Sizhunvezh kentañ, staj divyezhek e Plouarzel ; eil sizhunvezh : ur staj hollvrezhonek e Landivizio e kenlabour gant Emglev Bro Leon (Kendalc'h) a zo da bal dezhañ kas en-dro ur a sizhunvezh ar vrezhonegerien » e Bro Landi ha studiañ kudenn ar stourm lec'hiet.

Bro Wened (S.A.E.) : Ur staj hollvrezhonek e Kistinid evit ar re a fell dezho studiañ gwenedeg.

Bro Dreger (S.A.E.) : Ur staj a bep seurt liveoù e Boulvriag.

Bro Gerne (S.A.E.) : Ur staj labour evit brezhonegerien e Bro Vigoudenn : sevel Oaled Sevenadurel ar Vro Vigoudenn e Plouneour. Ur staj a bep seurt liveoù e Pont 'n Abad.

HAÑV

Kampoù hañv bugale a vo aozet e Bro Dreger gant B.Y.V., eus kreiz miz Gouere da fin miz Eost. Daou anezho o padout teir sizhunvezh. Unan evit ar vugale a gomz brezhoneg dija, egile div yezhek, evit ar re a gompren pe e klask o zud deskiñ dezho (bugale betek pevarzek vloaz). Dindan paeroniezh U.F.D.L.E.A.

79

FIN MIZ GOUERE

E Bro Dreger ur staj divyezhek hag ur staj hollvrezhoneg gant B.Y.V.

MIZ EOST

Ur staj e Ploveilh (Bro Gemper) gant S.A.E. evit ar re o deus studiet ingal abaoe bloaz, er pemzektez kentañ.

Ur staj deraouerien hag ur staj divyezhek e Bro Leon, gant B.Y.V. en eil bemzektez.

Ur staj divyezhek e Rostren (Kerne Uhel) hag e Rieg (Kerne Izel, hag e Poullaouen, ur staj labour dorn ha kan ha diskan evit brezhonegerien (o zri gant B.Y.V.).

Daou staj war ar maez gant B.Y.V., e Bro Gastell-Paol er pemzektez kentañ hag e Bro Lesneven an eil.

DEROU MIZ GWENGOLO

Daou staj war ar maez :

- e Bro Dreger (Plouared) gant S.A.E. ;
- e Bro Leon (Lokournan) gant B.Y.V.

Ur sizhunvezh e-pad ar stajoù peurliesañ, nemet war ar maez ha hini Ploveilh. Etre 25 ha 30 lur e koust an devezh dre vras enno. Ar stajoù divyezhek a zo graet evit tud o studiañ dija abaoe ur pennadig. Estreget kentelioù yezh e vez sonerezh ha kelc'hioù studi hag er stajoù hollvrezhonek e vez stalioù labour a bep seurt hag e brezhoneg penn-da-benn.

Kemerit perzh hoc'h unan ha grit bruderezh. Evit titouroù skrivit en ur lakaat un timbr evit kement goulenn.

Evit S.A.E. : Bernez ROUZ - Ar Veleneg - An Erge Vras - 29000 Quimper.

Evit B.Y.V. : Ao. F. OLLIVIER - Glazvezenn - Al lividig - 29238 Brignogan.

B.Y.V. kevrenn Bro-Bariz a bed ac'hanomp ivez da embann ar gemennadenn-mañ :

« Emsaverien ar c'hevredad " Brezhoneg yezh vev " o deus divizet diazezañ ur gevrenn-lec'h eus B.Y.V. e Rannvro Bariz. En o soñj emañ :

1) aozañ devezhioù-studi ha dudi (divyezhek pe hollvrezhonek) evit reiñ tro d' ar re a oar pe a zo o teskiñ brezhoneg e Pariz da implij o yezh ;

2) krouiñ ur strolladig c'hoariva evit Bro-Bariz ;

3) aozañ beilhadegoù ha pourmennadennoù evit ar vrezhonegerien pe an damvrezhonegerien ;

4) kas ar stourm evit Breizh war-raok a-gevret gant kevredigezhioù all eus Pariz. (Evid ar brezhoneg, Skol an Emsav...).

Chomlec'h : Patrig Gouedig, 2, rue André-Chénier, 92130 Issy-les-Moulineaux. »

E ti Moulerezh ar Baol - Bali ar Marichal-de-Lattre-de-Tassigny

Diskleriet hervez lezenn : kentañ trimiziad 1976

Niverenn er voulerez : 38350 - Ar meneur : P. ar BIHAN

AL LIAMM 175

TAOLENN

Vijeled an Deiz Diwezhañ gant MAODEZ GLANNDOUR	83
Taolennig iwerzhonat gant RIVANON KERVELLA	99
Dreistbevañ gant KIVIJER	100
E koun ur stourmer gant PER AR BIHAN	111
Eñvorennoù gant YEUN AR GOW	115
Yezh komzet ha yezh skrivet gant ROPARZ HEMON	122
Istor Breizh gant LA BORDERIE (tr. Roparz Hemon)	137
Gouennoù loened-doñv e Breizh gant E. ROUGER	142
Ar Bonedoù Ruz gant PER PENNEG	144
Notennoù	147

FR ISSN 0024-1733

VIJELEZ AN DEIZ DIWEZHAÑ

Dediet da oberour dianav
Buhez Mab Den

Diskleriadur

Tri den er c'hoari : Mab-den, Breizh, Me va-unan.

Tri luskad : 1 Noz ar c'horfoù, 2 Noz an ene, 3 Tarzh an deiz. El luskad kentañ, Koroll Makabre ; en trede luskad, ur Profesional.

Danvez : kan evit deiz diwezhañ ar sizhun, ar sadorn, deiz ar c'hontoù, o c'hortoz ma tigor ur sizhun nevez gant splannder ar sul. Ar sadorn eo skeudenn pep echuadenn, maro an den, fin ur bed ha fin ar bed. Met ivez un engalv d'un amzervezh nevez a beoc'h doueel aroueziet gant ar sul, an dasorc'h evit ar vro, evidon, evit ar bed a-bezh.

*

Anat eo ez eus amañ soñj eus Chapel Kervaria an Iskuit e Plouc'ha gant he Dañs Makabre ha skeudennoù ar pevar Diouganer bras a zo livet war vogerioù an nev.

An eil luskad a zo taolennoù eus ur Purgator speredel, purgator un ene en em ouestlet da silvidigezh Vreizh, hag ivez Purgator pep den en e enklask relijiel.

An trede luskad a zo un diougan hag ur bedenn evit ma c'hell ar Vreizh a c'hoantaomp bezañ sevenet, ha mar n' eo ket amañ war an douar e c'hellfe pep tra dont da wir, ma vo en tu-hont d'an deiz diwezhañ eus hor bed, er beurbadelezh.

*

Ar barzhoneg-mañ a oa damechu dija ur pemzek vloaz 'zo, nemet un toull a chome. Setu pep tra kaset da benn.

D'ar c'houlz-se ne felle ket din en embann. Bremañ eo deuet va barzhoneg da vezañ evidon un doare diougan e-keñver an darvoudoù o tont, dezho d'en sklaeraat.

84

I

Ene va bro
Santual dismantret
Lec'h ma kouezh ar glav,
Lec'h ma c'hwezh an avel
A-dreuz d'an doenn freuzhet, dispennet !
Hag ar gaouenn o c'hoarzhin goap,
Labous Minerva
Poellek, lorc'hus ha skolveuriek,
O tont da gludañ
Ha da leuskel e gaoc'h hellenek
War bennoù ar Sent !
Daoust ha biskoazh ez eus bet anezho ?
Testeni ebet war o divout !

Boud ebet dezho dirak sell ar skiant !

A-dreuz d' an doenn dismantret,
Evel en un ograou rivinet,
E c'hwiban an avel,
E yud ar gorventenn
Evit lid an Deiz Diwezhañ.
Ha me deuet amañ da ganañ an ofis
Pebeilet gant garmoù ar mor,
O Gwerc'hez an Iskuit,
Da c'houlenn diganit
Sklerijenn ha pare.

Aze 'mañ bepred da skeudenn
Bet kehelet a wechall-gozh gant rummadoù
Te azezet peurbadel, Tron meurdezus ar Furnezh,
O tiskouezh da Vab, en e sav, war da varlenn,
Salver ha Tiern ar Bed
Ha perc'henn an Deiz Diwezhañ.

Rak hemañ eo an deiz ma reer ennañ
Kontoù ar sizhun diouzh an noz
Hag an drokerion skrap-ha-skrap
A soubl gant evezh war o sifroù
Da welout hag-eñ o deus rastellet a zoare.

85

Gra da gontoù, gra !
Setu ma teuan evel ul laer
Da lemel diganit

Pezh a vennez mirout ha ne c'helli derc'hel.
Setu ma teuan evel ur mestr taer
Da c'houlenn diganit, talant didalvez,
Kontoù da vuhez...

*

Emañ an dud-preñved
O vordilhañ war an aodoù :
Eneoù marv a flaer a bep tu...
An difankerion o deus graet holl diskrog-labour.
Ar c'haniou-skarz a vazailh
'Hed ar straed o liesgenoù...
War zremmoù an tiez e tiver an enoe
Evel an dour-c'hwez war zremmoù an dud...

Diwar ho preinadur
Tennit kuit ho masklou !
Tu gin ar c'hinkladur
N'eo ken nemet pilhoù.

Rok and roll,
Dañsadek foll
Orjalenoù.

Flaperezh
Ha stlakerezh
Ar chagelloù

86

C'hoarzhadeg
Ha youc'hadeg
Pennoù maro.

Pil ha paz
Ha lammou-kazh
War ar goullo.

Troidell,
C'hoari-sifell
Poupinelloù.

'Kreiz an hik
'Teu ar pistik,
Pik an Ankoù

Flak ar brall,
Sonnet eo bal
Ar relegoù.

Tennit kuit ho maskloù !
Goude meurlarjez ruz
'Mañ merc'her al Ludu.

*

Hag e klevis ar Pevar Brofed
Livet o skeudenn war vogerioù an Nev
O c'harmiñ a bep eil o c'hemennoù d' ar bed.

Dre m' o deus an ounnered blogorn
Livet e ruz karnoù o zreid
Evit mont da vresken
Dirak ar c'holeoù yaouank,
E kasin war o lerc'h, eme an Aotroù
Bualed urupailh ar c'hoadoù meur,
Ar bualed flaerius da dapout krog enno.

87

Dre m' hoc'h eus graet eus mammennoù ar vuhez
Un andon a varo,
Dre m' hoc'h eus lazhet ho pugaligoù
E kof o mammoù,
It da guzhat, tudoù, e tor ar menezioù :
Met eno ne viot ket en disgwall !
Ho lazhañ a rin e kof an douar.

Dihunit, tudoù, dihunit !
Met n'hellit ken dihuniñ, n'hellit ken !
Kement a louzoù moredu hoc'h eus lonket,
N'hellit ken, p' hoc'h eus graet.
Eus ar maro ar vuhez, hag eus ar vuhez ar maro.
Ha setu ma teu warnoc'h an Ankoù
P' hoc'h eus c'hwi hoc'h-unan dichadennet anezhañ.

Hastit, tudoù, lakit en ur bern
Pompad, dilhad, paramantoù,
Fardaj, moc'haj ho romantou,
Faragouilh ho kazetennoù,
Armoù-brezel, drougijinoù,
Bitailh, evaj ha boutailhoù,
Savit, tudoù, ho tour Babel !
Ha lakit war e veg ho kwellañ babouzer,
Un tric'horn war e gof,
Evit daeañ an neñv.
Pebezh danvez evit an tantad diwezhañ !

Ha te, chomet aze ankouaet
 A-istribilh ouzh un treust,
 Brañsellet gant fourradoù an avel,
 O babig ex-voto, bremañ dibaramant,
 O bag tasmant !

Peseurt dorn er-gwechall
 En deus da fesonet ?
 Peseurt kalon chomet sko
 En enklask an inizi
 Antreet amañ da bediñ ?
 Ha me, peñsead imramoù speredel,
 O tougen betek amañ gloaz va goulenn.

*

E-kreiz morenn divent ha mouk va huñvreoù
 E tremen a-wechoù, o riklañ diverzus,
 Evel seblant ur vag, hep gwern, hep gouel.
 O tont war wel a-drumm hag o steuziañ didrouz.

Den ebet war ar pont, nemet war an aroz
 Evel unan e gwenn, 'n e sav, mut ha diflach,
 A sell bepred a-dreñv, 'trezek roudenn al lestr,
 Maro pe vev, n' ouzon, didon e zaoulagad.

*

Deizioù 'zo pa choman da selaou em ene
 E kleven em endon kleier Kêr-Iz
 O son ar c'hlanz, ingal ha kriz,
 E-kreiz c'hoarzhadegoù merc'hed.
 Hag a-daol-trumm, tiridign skiltr
 Porselennoù o terriñ...
 Ha goude-se netra ken
 Nemet sioulder plomm ar bez.

Deizioù 'zo pa choman da selaou em ene
 E klevan em endon c'hwiban an Ankoù
 O kas kuit en e garr va huñvreoù maro :
 Ha gwigour an ahel da leñvañ,
 Ha c'hwirinadenn e varc'h da c'hoarzhin !
 Hag an teuz da steuziañ...
 Ha goude-se netra ken
 Nemet sioulder drouk an noz.

Deizioù 'zo pa choman da selaou em ene
 E klevan em endon evel ur c'hri,
 Hini ar Grouadelezh a-bezh en he gwentroù
 O klask genel ar joa hag o tiwaskañ poan
 'N ur c'hervel un dorn madelezh d'he dieubiñ.
 Hag hi da c'hortoz betek an eur merket
 O chom en he gwentroù hep genel levenez
 E-kreiz gwaskerezh didruez.

*

Deizioù 'zo gant spouron
 E klevan em askre
 'Vel un trompilh o son,

Trompilh ar Varn, hag e krenan,
Trompilh an Ael o c'harmiñ :
Dibadelezh an eur eo dija sin ar fin,
Taolioù-gong da galon ur c'hemenn d'an evezh !
Hag e klaskan tec'hout.
N'eus tec'h ebet !

*

90
Ar c'hozh kroc'hen-se,
Ma c'hellfen e zibourc'hañ,
Kroc'hen va fec'hedoù
Bepred ouzh va leskiñ,
Evel ur peg warnon o virviñ,
An holl flaer-se ken moumounet
En disteurel...
'Vel ma lezer ouzh ar c'hrog
En ur zistreiñ d' ar gêr
Ar vantell-veaj, didalvez

*

Klask a rez stardañ ez talc'h
Ar predig o tremen :
Evel ur bugel e valoñs kollodion,
Hag e strak ez taouarn.
Dibaouez e redez a joa da joa,
Rak hennezh eo reuz kalon an den
En em vezviñ gant frond ar momed o fuiñ
E-keit ma wigour ennout da gerse
Evel son trenk ur vandore en aer touforek.

*

Raosklenn emsoñjus, prederour Rodin,
O Narsis
N'out ket c'hoazh aet skuizh ganit-te ?
An emarvestiñ-se
A anvez Denelouriezh, pe me 'oar,
Emficherezh ur c'hagn gozh
Dirak he melezour
N'eo ken.

91
Beilhañ a ran ouzh da c'hortoz :
Ya, dont a ri gant da sklaerder.
Met pa soñjan, penaos em zi ?
Lastez ha diegi.

Daoust ha n'eo ket din-me da vont
D'az klask e-kreiz an entremar
Hag ar glac'har,
Din-me da vont ha ned an ket,
Tarlaskenn maz on !

*

Stoket em eus ouzh an nor
Met den n'en deus respontet din
Ha neuze em eus kemeret em divrec'h
Va lud,
Evit c'hoari warnañ d'am c'hariad
En ur c'hortoz ma tigorfe.

Met an holl gerdin a oa torret,
Ha gant va daouarn skornet
Em eus bizataet war ar c'hased
Ur son unton, ur son a reuz,
Ul lamento.

*

E-pad keid-all em eus kerzhet
Maz on aet skuizh dre forzh bale,
Hag e plijfe din arzaviñ,
Da dizhout erfin, o Doue !
Ha te pelloc'h bepred...
Risklet em eus er vouilhenn,
Gloazet va zreid ouzh ar vein,
Ha skuizh on, echu, divi.

92

E-pad keid-all em eus kerzhet
O klask mont kuit...
Ha n'em eus ket en em guitaet.

*

O nann ! Na gredez ket !
Biskoazh ne vi e penn an hent.
O nann ! Ne gredez ket !
Bepred etrezout hag Eñ,
An hed-se didreuzus, divent.
Ha te bepred o vourboulhat
E fank al liesegezh, an dic'hlan, an termenet.

Ha koulskoude perak ennon an tan-se ouzh va broudañ :
Sav alese ! War raok !
Perak mont pelloc'h ?
En-dro d'am zermenou 'z eus ur voger n'hellan ket treuziñ.
Va frizon 'zo ennon, va frizon eo me.
Hag e-barzh, me va-unan o teviñ.
Ifern pe Purgator ?
Ifern, mar ne zeuez ket te, gant trugarez, da zigeriñ.

*

Eus an daou hent am goulenne
Perak em eus dibabet hemañ ?
An hini strizh e oa,
Ha kaout a rae din e vlenie betek ennout.
Ha setu me kollet en arvar an noz,
'Mesk an drez, 'mesk ar spern,
Tra m' emañ ar gaouenn gant he goap.

93

*

Ha setu me e-kreiz an noz
Ene dibourc'h, digorf ha noazh
En avel hag er yenijenn o krenañ...
A-hed an deiz bet roet din
N'em eus ket da glasket a-walc'h :
Chomet on o straniñ,
Ha setu deuet an noz, ha me enni,
Ene dibourc'h, digorf ha noazh
En avel hag er yenijenn o krenañ.

*

Nann, trompilh ar Varn mar deufe a daol-trumm
Da son em ene,
'N ur skubañ didruez pep huñvre marvel,
Ne vefe netra.
Met da zaoulagad-te a-wechoù
O tont ennon da sklaeriañ pep tra,
Hag o sellout ouzhin, sellout hepken,
Da zaoulagad a dan hep lavarout netra,
Difiñv,
Nemet o sklerijennañ din va lastez...

Ha te da vont kuit evel ur rebech,
Evit va lezel va unan-penn
Kollet en noz du,
Ene dibourc'h, digorf ha noazh,
En avel hag er yenijenn o krenañ.

An heol, mar ne zeufe mui-ken en-dro
Da skarzhañ kuit bezañs plomm an noz,
Na gwerelaouen, na mintin biken ken
Em bez serret ha siellet :
Ha me o krial er yenijenn vut
Hep kaout respont, respont ebet, ebet !
Ha bloavezhioù o tremen hep fin, fin ebet, ebet !

94
Sioulder spontus, nannboud goullo,
Ne respontez ket ?
Met derc'hel a rin da grial,
Da grial forzh :
O te hag a zigor genoù dir ar maro
Pelec'h out ?

- Ar c'hri-se davedon, 'kreiz da galon,
Eo Me !

III

Un den douaret e-pad eizh deiz
E riboulioù ur vengleuz,
Pa 'c'h adsav da sklerijenn an heol
En deus poan o krediñ e vefe saveteet.

Hag un den bet beuzet
Ha semplet e-pad eurvezhioù
Pa 'c'h addihun d' ar vuhez
En em gav nevez-holl dirak ar bed.

Ha Lazar goude bezañ bet hanter-vrein
Pa savas ha pa welas en-dro dezhañ
An dud estlammnet diflach ha mut,
A vanas eñ ivez, seizet gant ar sebez.

Ha pa gouezhas dioutañ e vandennoù
Hag e liñsel flaerius endeo,
Ne grede ket e vefe bet tennet
Gant mouezh ar Vuhez eus daouarn an Ankoù.

95
O, deus Ael ar beure,
Ha rog gant da gleze

Pallenn teuc'h an noz.
Skarzh gant un taol troad
Ar maen bras siellet warnomp
Gant Sanedrin an tromplezon.

Hor barnet o deus eus lein o brasoni,
Hor flastret o deus gant seul o c'hasoni :
Ha petra hon eus graet evit bezañ bepred
Evel deñved mat da lazhañ ?

Sklerijennet, Aotrou,
Ar re buchet en deñvalded
Hag e skeud ar maro.
Ni sujidi ar bez a-raok bezañ bevet,
Aezet difiñv, morzet hor spered
Gant binim ar gaou.

O te, keid-all gortozet,
Sklerijenn welevus ha leun a yaouankiz,
Kemennadur an eizhvet deiz,
Digoradur d'ar bed nevez,
Par laouen war lein ar roz
Evel kannad ar Baradoz.

*

Gouzout mat a ran e teuez,
O Gwerc'hez an Iskuit,
Da verkañ hon douar
Gant gloar da gammedoù.

Dougen a rez 'tre da zivrec'h
An hini 'zo buhez ha trec'h,
Gwerelaouenn hag heol beure,
Ma roio dimp gant e vannoù, ar pare.

96

Setu er penn kentañ gant ar Groaz
An daou verzher mantellet-ruz,
Bet brokus en o marv evel en o deizioù,
O virout da viken en o c'horf merkoù o gloaz.

Ha war o lerc'h, letani hir
O sevel da lein uhel ar Vro,
Ar sent diniver o deus lezet en hor pri
Louc'hadurioù o zreid evel komzoù a dan.

Sed erfin mamm gozh Jezuz hag hon hini,
Santez Anna karet ha benniget,
Gant he servijer Nikolazig o tougen dirazi
E biled koar enaouet.

Hag holl e kanont da Werc'hez an Iskuit :
« Poent eo ! Diskuliit ho sekredoù,
Ar re miret d'ho tud e madelezh ho Mab !
Benniget ho poblad ha difennit ho tomani ! »

O Krist, bezet bremañ warnomp ho trugarez
Hervez m' hon eus ennoc'h a viskoazh esperet.

*

Nunc dimittis...
P'o deus gwelet va daoulagad.

Pouezder an eurvezhioù,
Untonerezh didon an devezhioù,
Sotoni, viloni an dud,
Fard ar vuhez, fardaj, fardell !...

Vel ur roued en-dro din en em we an danvez !
O, kan evelato, kanabaer kaouedet !
A-dreuz d'ar barrinier e lugern ar goulou,
Ar goulou sebezus.

97

Gortoz, gortoz an dorn madelezhus
A zigoro dit an nor.
'Mañ ar frankiz ec'hon, divent ha diziwezh
En tu-all d'an nor strizh, o bihañ-bihanik !

Ar c'hañvaled re vras ha re garget
N'hellont ket tremen drezi
Brasoni, pizhoni, n'hellont ket antren du-hont.
Met te, bihan, kan dizehan,
Emañ dija an nor o tigeriñ.

Kas ganit e skrin da galon
Kement a c'hell bezañ salvet :
Laka da dremen ganit
Reizhder c'hoantaet, glanded klasket,
Kement a zo kaerder gwasket.

Aotroù, pa ziskenni eus da gador-veur
Evit Deiz ar Varn,
Rent din ivez, evel Salomon d'ar vaouez,
Va herezh laeret.

Pa vin maro, va mignoned,
Va lakit kloz en douar Breizh,
Evel en ur vantell a lid
Marellet illur a glodoù.

Pa vin maro, va mignoned,
Va lakit kloz en douar Breizh,
Ma c'hellin, pa savin en-dro,
Kemer 'vit va c'horf dasorc'het,
Da zanvez bev, douar va bro,
Danvez a dan holl-lugernus,
Danvez va c'han peurbadus.

Amen !

98

Roll-gerioù.

Sed amañ un nebeut gerioù implijet e Vijevez an Deiz diwezhañ a c'hellfe bezañ faziet war o ster resis, pa na gaver ket er geriadurioù kustum.

Blogorn : gant ivinoù ha kerniel gwak (blot-korn). Amañ e kemer un tammig ar ster : impubère.

Dibaramant : hep paramantoù.

Difankerion : ar re a zastum al lastez er ruioù.

Faragouilh : bafouillage, baratin (ha n' eo ket babil).

Fard : e-touez sterioù all : trabas (ar vuhez).

Fardaj-où m. : tra landrammus ha didalvout.

Flak : faezh, divi.

Letani f. : litanie (er ster-se e lavarer aliesoc'h : Letanioù), hag ivez evel
amañ : heuliadeg.

Moretus : kouskus.

Straniñ : chom da lugudiñ, da ruzal hep ober netra (da sellout, da gomz) ;
ac'hano ivez : s'emberlificoter, dreist-holl en anv-gwan verb ; stranet out
h.a...

Tarlaskenn : teureug ; ac'hano : (loen, den) lezirek.

Tiridign : trouz listri torret, titirin kleierigoù (gw. diridignat).

Urupailh : kreouichennek, divalav.

Vijelez f. -où : (un) nocturne, lodenn eus ofis ar Matinezoù, ennañ teir vijelez
; an noz a veze lodennet gant ar re gozh e teir pe beder vijelez (vijelezoù an
noz), gw. ar salmoù.

TAOLENNIG IWERZHONAT

Unnek eur diouzh ar beure.

Dirak ar stalioù bras e-kichen ar blasenn ez eus ur paotrig gwisket fall ha lous, ur voest kartoñs gantañ etre e zaouarn. D' an eur-mañ n' eus ket kalz a vugale o kantreal dre kêr. Er skol emaint. Met hemañ, ur c'hanfard un daouzek vloaz bennak dezhañ a vez dalc'hmat dre aze. Marteze zoken ne oar na lenn na skrivañ.

Plijusoc'h 'vez d' an oad-se ruzañ e votoù dre Eyre square, dre Shop street pe mont da welout petra dremen du-hont er porzh-mor. Bihan eo evit e oad, n' eo ket bet maget mat pa oa babig moarvat. Hag ivez n' eus ket bet graet kalz war e dro, dre ma 'z eus meur a hini araokañ ha war e lerc'h en e familh. Diloeroù 'vez hañv-goañv, koulskoude ne seblant ket kaout riv.

Evit gounit un toullad pezhioù moneiz e kan, kanaouennoù diwar-benn Istor Iwerzhon pe darvoudoù c'hoarvezet dreist-holl er C'honnemara. E saozneg e vezont. Klasket am eus bet alies kompren ar c'homzoù met n' on ket bet deuet a-benn morse, rak meskañ a ra div pe deir sonenn asamblez evit ma vefe hiroc'h moarvat, pe neuze e paouez e-kreiz ur poz pa vez roet ur gweneg bennak dezhañ. Raouet 'vez e vouezh, evel hini un den kozh en defe butunet hag evet re e-doug e vuhez.

Pa vez echu ar skol pe diouzh ar sadorn pa vez ur bern tud e kêr, e weler anezhañ gant e vignoned o laerezh madigoù e Woolworth, ur stal vras war ar blasenn. Huchet 'vez warno gwech an amzer, met ne reont forzh, redek a reont neuze betek ur c'harter all eus kêr evit adkregiñ gant o c'han hag o zroioù fall.

Ne sellont ket ouzh o mamm pe o c'hoarezed a vez o kestral ivez dre ar straedoù, bugale ganto war o brec'h.

John, ar gipsy bihan, a gendalc'ho da ganañ c'hoazh e-pad pell, ha marteze diwezhatoc'h e raio evel e dad, koñvers ar c'hezeg.

Dreistbevañ

An hini en em gav, a-daol-trumm, en ur vro zianav e-lec'h ma n' eus den ouzh e c'hortoz, a rank, ma n' eo ket c'hwezhet e yalc'h, en em zifretañ buan da gavout labour ma ne fell ket dezhañ kaout naon.

War ar c'h-Cabo de Hornos, a zegase ac'hanomp da Santos, hor boa graet anaoudegezh gant ur Portugalad yaouank a ouie ur bern traoù a-zivout Bro-Vrazil. Hervezañ, ne oa ket ezhomm d' ober gwad fall abalamour d' al labour : en holl gelaouennoù e c'houlenned tud da labourat ; ur gelaouenn bemdeziek a oa, zoken - an Diario Popular - a embanne bemdez pajennadoù ha pajennadoù kinnigoù labour.

Deut e oa an noz dija pa eorias ar vag kozh e lenn-vor Santos. Ne zleemp dilestrañ nemet antronoz vintin. Evit an holl re a veaje er renkad izelañ, kazi holl Spagniz, daou pe dri Fortugalad, ha me, e oa ar wech kentañ gwelout douar Amerika. Ne oa bet kaoz ganeomp, e-doug ar pemzektez ma padas an treizh, nemet eus ar pezh a rajemp ur wech en em gavet e Bro-Vrazil. Pep hini, nemedon, a veule e ampartiz war e vicher. Hemañ a oa aozer karroñsadorioù kirri-tan ; kement a wall-zarvoudoù, a lare-eñ, a c'hoarveze gant ar c'hirri-tan e Brazil, ma ne vankje morse al labour dezhañ. Hemañ all a oaur c'halvez mat : ken sur e oa da gaout labour diouzhtu ma oa deut gantañ e wreg, e zaou vogel ha zoken un doare yar en ur gaoued, hep kontañ ur bern pakadoù ha zoken pezhioù arrebeuri. Me, peogwir n' em boa micher wirion ebet, ha n' eo ket bet plijet din morse ober va brabañser, a selaoue hepken. Ne ouien tamm ebet petra a rafen. Hogen, spi am boa da gavout un dra bennak disheñvel diouzh ar pezh am boa graet betek neuze. Peogwir e cheñchen bro e felle din ivez cheñch labour.

Chom a rejomp ur pennad mat, harpet ouzh al listenn, o klask gouzout petra a oa dirazomp. Tost dimp, war an tu kleiz, e tivinemp, oc'h heuliañ ar gouleier gant hon daou lagad, e oa un draezhenn gromm hir. Ur skleur damruz dirazomp : kreiz kêr ; gouleier o pignat gant un dorgenn : un hent pe un hent-houarn, o vont davet Sao Paulo. Ne gomzemp ket kalz : fromet e oamp. Spi hor boa atav, evel just. met me gred hor boa ivez un tammig aon, rak an deiz war-lerc'h e vijemp dirak ar gwirvoud.

101

Kentañ tra a voe antronoz a voe bizit paotred ar Yec'hedouriezh. Goude-se e voe stlejet ar vag betek ar c'hae hag e krogjed diouzhtu da ziskargañ ar varc'hadourezh ha pakadoù an enbroerien. Va zrivliad kentañ a voe fall-kenañ : kavout a raen d' ar simidi, koulz d' ar re wenn ha d' ar re zu, dremmoù chatalek, ha ma vije bet em galloud, d' ar mare-se, mont da lec'h all, e vijen aet. Heuliañ a ris gant va daoulagad va div valizenn o tilezel bourzh ar c'h-Cabo de Hornos hag o tilestrañ war blañchod ur c'harr-samm. Ne oa c'hoarvezet netra ganto. Goude ar pakadoù e voe tro an enbroerien. Ne zleemp tremen dirak ar valtouterien gant hor pakadoù nemet goude kreisteiz. Tamm spontus e oa an amzer : ne oa ket an disterañ mouch avel na koumoulenn ebet da derriñ nerzh an heol. Hanter faezh e oan aet o c'hortoz gwelout va malizennoù kemer hent skiber ar maltouterezh. Peogwir e chome amzer ganeomp ez ejomp d' ober un dro e kêr. Tremen a rejomp kloued ar porzh. N' hor boa ket graet hanter-kant metrad ma kavjomp ul lochenn goad lec'h ma werzhed banneoù kafe. Dont a reas soñj din neuze eus an alioù a oa bet roet din gwechall gant ur mezeg : e Brazil, arabat evañ en ostalerioù gant aon da dapout an naplez. Tostaat a rejomp ouzh ar c'hontouer. Sellout a ris pizh ouzh an ardivink d' ober kafe. A bep tu d' ar c'hreg vras e oa ur c'hombod hanter leun a zour ma oa lakaet ennañ an tasoù gwalc'het ; an dour a verve goustad. Ne welis abeg ebet da chom hep tanva ar c'hafe. Kemer a ris eta aze va c'h-cafezinho kentañ. Da c'houde em eus kemeret bemdez, hep aon, tri pe bevar, muioc'h marteze, ha n' em eus ket tapet an naplez.

Goude bezañ eskemmet hon arc'hant en un ti-bank ez ejomp pep hini diouzh e du. Me am boa divizet chom e Santos hag ez en em lakis da glask ur gambr evit an noz. Diskenn a ris en un ostaleri uvel e-lec'h ma kavis ur gambr evit 25 cruzeiro bemdez, hep ar predoù. N' edo ket pell pell diouzh ar porzh. Noz e oa dija pa voe echu bizit ar valtouterien. Gervel a ris un taksi ha lar yeo d'am ostaleri ! N' on ket sur, met kavout a reas din e kemeras paotr an taksi un hent hiroc'h eget an hini am boa kemeret me, emichañs evit gounid muioc'h, nemet evit diskouez din Santos by night e ve bet. N' on ket sec'hedik tamm ebet met sec'hed bras am boa. Hogen amañ e oa ur gudenn adarre : ar mezeg en doa kuzuliet ac'hanon en doa lavaret din ivez e vije mat lakaat an dour da virviñ a-raok e evañ. E spagnoleg e c'houlennis ouzh perc'henn an ostaleri hag-eñ e oa mat dour an duellenn da evañ. Bec'h am boe da lakaat anezhañ da gompren ; me ' gred ne oa ket abalamour d' ar yezh met kentoc'h abalamour ma oa souezhet o klevout ur seurt goulenn. An dour a oa mat da evañ, evel just. Pebezh goulenn ! Se a reas plijadur din.

102

Bemdez, e-keit ma chomis dilabour, e prenis an Diario Popular. Gwir e oa ar pezh en doa lavaret ar Portugalad : war bemp pe c'hwec'h pajenn e oa kinnigoù labour, nemet ar c'hinnigoù a weled ar muiañ a oa evit *arrumadeiras* ha *copeiros* ; a-wechoù, zoken, e c'houlenned ur c'houblad : hi *arrumadeira*, eñ *copeiro*. *Arrumadeira*, eus ar verb *arrumar*, renkañ, lakaat urzh, a zo ur vaouez d'ober war-dro un ti, d.l.e., ur vatezh (*criada*), evel ma veze lavaret gwechall. An anv a gemm met ar vicher a chom ! *Copeiro*, eus *copo*, gwerenn, pe *copa*, al lec'h ma vez lakaet ar gwer, a zo ur paotr da servij a-dreñv ur c'hontouer en un ostaleri pe un davarn, pe c'hoazh en un ti prevez. Se ne oa ket evidon. Bez e kinniged labourioù all ivez, evel just, met pa aen da welout e vezen atav re ziwezhat : a-raok ma 'm beze kavet al lec'h e veze bet un toullad tud dija oc'h en em ginnig.

En deizioù kentañ e vezen tapet ivez abalamour d' an temz-amzer. Da greisteiz e tegouezhen en ostaleri da zebriñ va merenn hag a-raok kreisteiz hanter e veze lipet ganin. Ar burevioù, siouazh din, ne zigorent ket a-raok div eur. Er-maez, e-kreiz an deiz, e oa tomm ha pounner : ur mare da glask skeud ha dour fresk evel ma leverer du-se. Pelec'h mont da c'hortoz div eur, nemet pignat em c'hambur ? Gourvez a raen war va gwele. Ne raen nemet predoù dister d' ar mare-se, met daoust da se, kerkent ha lakaet ganin va fenn war ar pennwele e teue din ur c'hoant kousket didrec'hus. Goude ur pennad e klasken dihuniñ met ken eürus, ken c'hwec'h, ez en em gaven em c'houk, ma lavaren din va-unan : « diwezhatoc'h, diwezhatoc'h ez in da welout ». Ya, met pa c'hellen sevel, en diwezhat, e oa war-dro peder eur hanter pe bemp eur. Re ziwezhat ! Goude bezañ bet tapet evel-se meur a wech e tivizis en em gemer disheñvel. O kantren dre gêr em boa dizoloet un dachenn, *Praça da Arvore* (Tachenn ar wezenn), gant, en he c'hreiz, ur wezenn vras skourrek ha deliaouek. Un doare feunteun a oa ivez hag un nebeud skinier. Eno ne voreden ket, zoken o lenn an Diario Popular.

103

E Breizh, hag e broioù all ivez, ez eur techet da varn, alies re vuan, tud ar broioù tomm pe, hep na vefent re domm, tud ar broioù izeloc'h eget hon hini war ar gartenn, oc'h ober diouto lezireien. Ma, ma 'z eus lezireien er broioù-se, ez eus ivez tud hag a labour hag a boagn. Paotr an tramgarr, an hini a zastum arc'hant ar plasoù, a c'hellfec'h soñjal marteze n' eo ket tenn e labour. Se a zo hervez ar *bonde* (tramgarr). Bez ez eus lod, modern, e-lec'h m' emañ an degemerer (*cobrador*) e penn a-dreñv an tramgarr, azezet dirak un draf-tro. O ya, hennezh a zo eürus. Hogen, bez' e oa tramgirri all, koshoc'h, bet prenet en Hong-Kong, a oa digor en daou du hag ar skinier enno lakaet a-dreuz, hep trepas ebet da vont eus ur penn eus an tramgarr d' egile. Ur marchepi a oa a bep tu. Diwar ar marchepi-se eo e tastume an degemerer an arc'hant. Ar paotr-se a ranke bezañ ouesk. Tramgirri evel-se a veze leuniet diouzhtu, ya, met da eurioù 'oa e veze muioc'h a veajourien er-maez eget e-barzh, war unan eus ar marchepioù. En ur dremen, ul lec'h dispar evit ar skarzherien-godelloù ! An degemerer a ranke kregiñ en ur varrenn gant un dorn, ha gant an dorn all reiñ bilhedoù, kemer

arc'hant, reiñ moneiz en-dro, plegañ brav ar bilhedoù-bank etre e vizied dre an hanter, a-led, gwaskañ lod anezho etre tri biz, lakaat ar re all aketus en e sac'h ler ha sachañ war ul lerenn, ur wech evit pep beajour, da verkañ war ur c'honter en diabarzh niver ar veajourien. Evit mont war-raok e ranke gaoliatañ ha briatañ betek pemp pe c'hwec'h beajour war un dro ha se oc'h evezhiañ ouzh ar c'hirri-samm a cheñch tremen e-biou. Gwir c'hoarierien-oesk e oa ar baotred-se ! Marteze e oant eürus memestra oc'h ober ar vicher-se, met me en o lec'h a vije bet gwalleürus-meurbet.

Tud oesk a ranke bezañ ivez ar re a zouge ispisiri d' an dud en o zi. Chom a raen estonet bewech ma welen unan eus ar re yaouank-se - yaouank e ranker bezañ d' ober se - ur samm bras war zoug-sammoù e varc'h-houarn, ur samm all en e zorn kleiz savet en uhel, hag o vleniañ ar marc'h-houarn gant an dorn dehou. Mont a raent buan, hep mont a-benn da netra pe da zen, neblec'h, o pignat en ur c'hoari war ar riblenn-straed, o ruilhal warni, se e-keit m' edo an dud o vont hag o tont, hag ar c'hirri o ruilhal dibaouez en eil tu hag egile. Ha pa vefen bet yaouankoc'h, n' em befe ket arnodet ar vicher-se ?

104

Bez' e oa ivez ar re a zouge sammou war o skoaz pe war o choug, sac'hadou kafe pe riz, er porzh, dindan an tommder bras. Lod all a ziskarge karradoù-samm a vleud er baraerdier. Goulenn a ris ur wech ouzh ur c'heneil din perak e redent gant o samm, ma oa abalamour ma oa bevennet an amzer ma c'hellent chom a-sav gant o c'harr-samm, hag e respontas din :

- Seul vuanoc'h ez eont, seul nebeutoc'h a amzer e rankont dougen ar sammou.

N' em boa ket soñjet e se. Mareoù a oa ma kave din ne oan ket mat d' ober netra. Abalamour d' am natur e oa ret din, eta, klask un dra bennak skañv d' ober. Hogen, ne gavis ket diouzhtu. An tammig arc'hant am boa a yae buan. Pemp cruzeiro warn-ugent bemdez evit ar gambr hepken a oa kalz re evidon. Evit nebeutoc'h e kemeris ur bañsion e-lec'h ma roent din, ouzhpenn ar gambr, dijuni, merenn ha koan. An dijuni ne oa ket fonnus avat. A-hend-all e oamp pemp en ur gambr : daou Vrazilad, ur Spagnad, ur Polonad ha me. Unan eus ar Vrazilis a oa o klask labour ivez. Aezamantou ne oa ket kalz : evit en em walc'hiñ e rankemp mont er porzh a-dreñv an ti e-lec'h ma oa un duellenn, na oa ket brokus gant he dour. Ur strinkell a oa ivez en ul lochenn. Dre ar prenestr, a ranke bezañ lezet digor, e teue a bep seurt pikerezed ha c'hwibu ; ar re washañ anezho, ar *pernilongos*, a bike a-dreuz ar roched. A bep seurt louzeier a veze kavet er c'henwerzh da gas ar pikerezed hag ar c'hwibu kuit, met hini ebet ne oa efedus. Deskiñ a ris gant ar re all penaos en em zifenn diouto : goleiñ va dremm gant ur servietenn. Ne oa ket din kemer va fredoù er bañsion ; pa ne zebren ket aze e veze diskontet din priz ar predoù. Alies, da goan, e tremenen gant bananez ; da greisteiz e kemeren ur pred marc'had-mat e ti-debriñ un oberenn gevredigezhel, ar SAPS. Eno e kemere pep hini, a-ziwar ur bern, un daolenn vetal, bet kleuzet dre waskadur, e tri lec'h, e stumm asiedoù ; en unan e veze lakaet an digor-pred, en eil ar fav, ar riz, ar c'hig pe ar pesked, hag an trede an dibenn-pred. Ul lec'hig ront a oa ivez evit lakaat ar werenn. Pep hini a yae da azezañ gant e daolenn ouzh un daol hep gorre, graet enni frammoù a-ratozh evit degemer an taolenoù. Peogwir ne oa ket ezhomm da c'hortoz etre ar meuzioù ne chomemp ket pell ouzh taol. Evit mont er-maez e oa un trepas ; e penn an trepas, tost d'an nor, e oa un endalc'her gant un duellenn hag en e gichen tasoù bihan gwenn, naet : al lodenner kafe. Pep hini en em servije e-unan rak ne oa den o servijañ nag oc'h evezhiañ. Me 'gave bihan ar c'h-cafezinho, dres evel ma lavar e anv : mont a rae daou ganin !

105

Gwechoù all e klasken bevañ gwelloc'h marc'had c'hoazh. Bez' e oa stalioù dalc'het gant Sinaiz, a werzhe gwestell-kig (*pasteis com carne*). An toaz a veze pladet e stumm un hirgarrezenn keit hag an daol ; a lec'h da lec'h e veze lakaet ur bernig bruzun kig. Da c'houde e veze troc'het an toaz en hirgarrezenoù bihan, a veze pleget e daou da c'holeiñ ar c'hig. Goude-se e vezent lakaet en eoul berv, da boazhañ. Ur wastell-gig evel-se ne oa ket ker, hogen ne zalc'he

ket er sac'h-boued.

Ar *rapadura* a ca un dra all am eus arnodet da glask lakaat va gwenneien da badout pelloc'h. Un dra galet eo, liv ar mel dezhañ ; bez' ez eo un is-frouezh diwar aozadur ar sukr gant korz-sukr. Mat e oa da zebriñ, hogen ur blaz heugus a-walc'h a leze war ar staon ur wech lonket.

En em lakaat a ris ivez da werzhañ ar pezh a c'hellen dioueriñ eus va zraoù. Ne oa ket aes rak ur gwerzher fall-meurbet a zo ac'hanon. A-hend-all, ar pezh am boa ar muiañ da werzhañ - levrioù saoznek - ne zedenne ket kalz tud Santos. Dont a ris a-benn, evelato, da werzhañ ur pallenn, hag ozhac'h ar bañsion, un den mat, a brenas va mantell, a oa didalvoud din e Brazil. Eñ a oa blenier kirri-samm ha beajiñ a rae alies en noz : kavout a raje gras lakaat va mantell en nozvezhioù yen.

Ar baotred a oa ganin er gambr a oa holl tud dereat. Goude koan e chomemp da gomz ur pennadig a-raok mont da gousket. Deskiñ a raen ganto ur bern traoù a-zivout Brazil, en em voazañ a raen ouzh yezh ar vro ha studiañ a raen he douaroniezh. Kennerzhet e vezen bep gwech ma tisplegen ur gartenn : en ur vro ken ec'hon hag honnezh e kavjen sur un dra bennak d' ober hag a vije diouzh va zammig nerzh ha va zammig ampartiz. Komz a raemp kalz eus ar gêr dostañ, Sao Paulo, « ar gêr a gresk ar muiañ er bed » (*a cidade que mais cresce nomundo*). War ar gartenn e welen linennoù glas o tremen dre ar gêr : stêrioù. Pa soñjen en ur stêr e welen diouzhtu em spered an Odet e Kemper pe ar Blañwec'h e Pondi, hogen war ar poent-se e fazien, rak stêrioù Sao Paulo n' int ket plijus da welout hag unan anezho, zoken, n' eo nemet ur c'han-distrouilh dizolo.

106

Div pe deir sizhun e chomis hep labour. Un deiz e teuas ur Spagnad da lavarout din e oa ul labour evidon mar karjen : skaoter-listri en un ostaleri. Merour an ostaleri a oa kataloniat, ar c'heginer a oa alaman hag ar perc'henn a oa siriat. Kemeret e voen diouzhtu. Ar gopr ne oa ket uhel, met bevet e oan. Ne oa ket fall ar geusteuenn. D' ar beure, pa 'z erruemp, e veze lakaet dimp bara, amann ha kaotigell war an daol ; kafe kement ha ma 'z afe ganimp. Tammou lipouzerezh a veze ivez alies, chomet e dilerc'h ostizien figus. Se ne zistroe morse d' ar gegin ! Daou e oamp oc'h ober al labour. Ne oa ket diaes met ret e oa bezañ kempenn-meurbet. Da ziwall e oa diouzh ar c'h-comando de sanidade, ensellerien a yec'hedouriezh, a dremene ur wech an amzer en ostalerioù hag en em lakae da derriñ asiedoù, pladoù ha listri all ma welent un dra bennak a zisplije dezho. Aon a oa razo. Estreget skaotañ al listri e oa c'hoazh ar yenezerezh da gempenn, ar servietennoù hag an doubieroù da gas da di ar gouezierezh, ha da gerc'hat pa vezent bet gwalc'het ha feret.

Ne oa netra el labour-se dreist d' am galloud. Ur wech an amzer e lavare din ar c'heginer mont da gerc'hat ur sac'had riz d' ar pourvezlec'h. Ar wech kentañ e voen lakaet nec'het : pounner e oa ar sachad riz ; ar sac'h, gwriet ar c'horre anezhañ, a oa leun betek ar gwri ; skouarn ebet da gregiñ ennañ ; tamm krog ebet neblec'h ! Ar gwashañ holl eo edo ar bec'h war al leur. Penaos e zibradañ alese ? Ken nec'het e oan hag ur c'hi o klask tapout krog en un heureuchin. Ur pennadig e soñjis mont da c'houlenn sikour gant egile met en diwezh ne dis ket. Peogwir ne c'hellen ket lakaat ar bec'h da zont betek va skoaz e lakis va skoaz da vont betek ar bec'h. Daoulinañ a ris, harpañ va skoaz ouzh kreiz ar sac'h, tapout krog ar gwellañ ma c'hellen e lein ar sac'h ha sachañ warnañ hag e lakaat da wintañ war va skoaz. Da c'houde e lakis un tammig bec'h war va divesker ha setu me em sav.

Goude ur pennad ez eas ur mevel-ostaleri kuit hag e voe goulennet ouzhin hag-eñ ne felle ket din kemer e lec'h. Asantiñ a ris. An hini a yae kuit a werzhas din ur bragoù du hag ur chupenn wenn ha me, e kêr, a brenas ur roched wenn hag ur skoulm du. Bep un tammig e voen lakaet da servijañ ouzh taol. Deskiñ a ris derc'hel ar plad gant an dorn kleiz ha kemer ar boued er plad gant ul loa hag ur fourcherez - al loa dindan hag ar fourchetez war-c'horre - hag e lakaat e asied an ostiz. Se ne oa ket re ziaes an holl nemet pa veze servijet toazennoù. Ne oan ket paeet muioc'h eget pa oan skaoter hogen ar gwerzh-butun ne oa ket

divalav. Ar skaoter all, chomet e-unan bremañ, a lavaras din : « Te 'zo gwenn ha te 'oar meur a yezh, pa ouezi mat da vicher e c'helli kaout labour e Rio de Janeiro, en un ostaleri vras e Copacabana. Eno e c'hellfes gounit kalz arc'hant ! ». Betek neuze em boa kredet e oa gwenn ivez ar paotr-se, un tammig rouz hepken gant an heol, a soñje din. Diwezhatoc'h e teskis ober an diforc'h etre ar re a oa gwenn-gwenn hag ar re na oant ket ken gwenn abalamour m' o doa un tamm gwad indian.

107

Dont a rae mat a-walc'h va labour ganin. War-dro dek eur ez en em lakaemp da walc'hiñ al leur, da gempenn an taolioù ha d' o staliañ. Ken tomm e oa eno ma stage va roched ouzh va c'hein netra nemet o stouiñ da dapout un dra bennak.

Ar merour a zegemere an urzhioù digant an ostizien. Alies e teue estrenien d' an ostaleri, ha pa c'hellen, e tistagen dezho ur ger bennak en o yezh ha se a aesae kalz an darempredoù. Soñj am eus e teuas ur wech da leinañ daouzek beleg hollandat gant un den all na oa ket gwisket e den a iliz. Soñjal a ris zoken diouzhtu en... daouzek Diskibl. D' ar mare-se e c'hellen en em zibab en izelvroeg. Goveliañ a ris ur frazenn da zistripañ dezho, ha pa voe distripet ganin e voent souezhet ha laouen bras. N' em boe ket da glemm gant ar gwerzh-butun ! A-raok mont da G-Capacabana, avat, e oa ret din bezañ ampartoc'h eget na oan. Magadurezh Braziliz a zo diazezet war ar riz hag ar fav, a vez debret div wech bemdez. Gant ar fav hag ar riz e vez debret un tammig a gig drailhet, pe un tammig pesk, pe kig disec'het (*carne seca*), pe un dra bennak all, hervez rannvro. Peurvuiñ e skigner war ar fav hag ar riz bleud maniok, a zo un dra zivlaz a-walc'h. Ar re a zo gwelloc'h an traoù ganto a lak *farofa*, a zo bleud maniok kemmesket gant morzhed-hoc'h drailhet munut, vioù poazh kalet drailhet munut ivez, kignen, ognon, piz-bihan, hag all, ha lakaet da veleniñ en ur billig gant un tamm druzoni bennak. Hen anzav a ran : gant *farofa* ez on gouest d' ober kofadoù riz ha fav. D' ar sul, ha pa vez gouel, e tebrer alies toazennoù pe riz darbaret hervez doare keginañ an Italianed.

108

E kalz tier-debriñ e kaver ar *refeição comercial* (pred kenwerzhel) diazezet war ar riz hag ar fav. E-lec'h edon me o servijañ ne veze ket graet, ne raed nemet « kegin etrevroadel ». An Italianed, ha Braziliz pinvidik ivez, a c'houlenne alies meuzioù graet gant toazennoù, diaes da zebriñ evit nann-Italianed, ha diaesoc'h c'hoazh da servijañ. Traoù froudennus : tammoù na fell ket dezho mont el loa, tammoù all na fell ket dezho chom e-barzh ; traoù risklus, leun a zruzoni hag a hilienn domatez, tarasus-kenañ. Lavaret e voe din ma vijen lakaet nec'het o servijañ toazennoù hir e c'helljen ober gant ur benveg ispisial divjavedek, a chome serret dre nerzh ur winterell, hag a gemere un tamm mat a doazennoù bep gwech. N' eus forzh, ne blije ket din servijañ ar meuzioù-se. Bez e oa ivez ostizien gant boazioù eston. Daou goublad a Italianed a zebre bemdez ouzh an hevelep taol ha pep lun e kemerent *canja de pato*, soubenn an houad, a zo bouilhoñs gant un tamm riz e foñs an asied, druzoni melen war-c'horre, a ranke bezañ servijet tomm berv. Iskis, pa soñjer en tommder a ra eno ! An hini a oa em raok a servije ar pevar asiedad bouilhoñs en un taol : un asiedad a gemere war e zorn kleiz ; uheloc'h, war e arzorn, e lakae unan all, hag uheloc'h c'hoazh un trede ; ar pevare a gemere en e zorn dehou. Se, evidon, a oa un taol-micher ! Ret ivez en lavarout, ar paotr en doa pezh melladoù daouarn, ken ledan hag ur c'holvazh ! Ret e vefe bet din kaout tu da arnodiñ, hogen pelec'h, peur ha gant petra ? Un diskoulm a oa evelato : an daolenn. Hogen, pa ran ul labour bennak e karfen e vefe direbech. Ur c'henskriver am boa neuze e Londrez ; skrivañ a ris dezhañ, hep kalz spi avat, d' e bediñ da glask din ul levr diwar-benn ar servijañ-ouzh-taol. Ne gavas hini ebet.

Pa oan dilabour em bije kemeret n' eus forzh petra d' ober evit n' eus forzh pe c'hopr, pe zoken evit va boued hepken. Bremañ pa oa un tammig gwelloc'h an traoù ganin e oan diaesoc'h da gontantiñ. N' eo ket plijus bezañ o labourat p' emañ an darn vrasañ o tiskuizhañ pe oc'h en ziduiñ. Ni a ranke lonkañ hor pred buan a-raok ma tegouezhe an ostizien gentañ, hag alies e vezemp direnket en hor pred. D' an noz ne oa eur ebet da echuiñ ; d' ar sul hor beze muioc'h a labour eget ar re all. Dont a reas Nedeleg. Bez em boa bet ostizien evel boaz,

ha da c'houde, da hanternoz, noz ar Pellgent, e voe graet din staliañ an daol evit un daouzek bennak a dud : perc'henn an ostaleri, e vreudeur, e c'hoarezed, e nized, e nizezed ha me 'oar piv c'hoazh ! Pegen hir e kavis va amzer an noz-se, pell diouzh ar gêr ! Teir eur ' oa pa zilezis an ostaleri da vont da glask un tamm diskuizh ! Me ' gav din e voe en nozvezh-se ma paouezis da huñvreal e Copacabana hag hec'h ostalerioù bras.

109

Perak e oan chomet e Santos ? A-raok dont da Vrazil n' anavezen, koulz lavaret, netra diwar-benn ar vro. Gouzout a raen hepken eo Stad Sao Paulo an hini a zedenne ar muiañ a Europiz, dre ma oa ar pinvidikañ hini, gant un temz-amzer gouzañvus. Dibab a ris kêr Santos abalamour ma oan chomet un nebeud mat a vloavezhioù hep gwelout ar mor. Ar spi am boa ivez da gavout ul labour er porzh pe zoken war vourzh ur vatimant, ul labour na vije ket ul labour burev hepken.

Gant an tommder a rae e Santos e raemp hor mad eus hon amzer vak da glask un tammig freskder er mor. N' eo ket bet plijet din morse an traezhennoù goloet a dud evel traezhenn vras Santos. Unan all hor boa kavet, va mignoned spagnat ha me, en enez Guarujà, a warez porzh Santos diouzh tu ar mor bras. E daou vunut e veze treuzet ar porzh gant ur vag-dre-dan. En tu all e kemeremp un tren bihan a gase ac'hanomp e dek munut, a-dreuz bananezennegoù, betek an aod all, dirak ar mor bras. Eno e veze kalz nebeutoc'h a dud. Kenderc'hel a ris da vont di betek an deiz ma voe darbet din chom en dour evit mat : ar mor e Guarujà a zo ken treitour ha ma 'z eo klouar.

* * *

Va labour ne blije ket din ken ; ne oan ket chalet ken gant ar mor ; n' en em ziskoueze labour dereat ebet e Santos ; ober a ris va menoz klask un dra bennak e Sao Paulo. M' am befe re a c'hoant da welout ar mor e teufen ar sul da Santos gant ar c'harr-beajourien, pe gant an tren.

Un dra all a oa, am lakae prederiet un tammig : ma kendalc'hfen d'ober ar vicher a vevel-ostaleri ne zalefen ket da ankounac'haat an nebeud a dra am boa desket. Al lennadur hag ar studi a oa deut da vezañ lod eus va buhez ; n' hellen ket o dilezel a-grenn. Dav oa din, eta, distreiñ da unan eus ar micherioù am boa graet betek neuze. Un dek bennak am boa graet ; pehini adkemer ? Ha ma lakafen da dalvezout e Sao Paulo, anezhi ur gêr ijinerezhel, ar pezh am boa desket, o pliediñ, e Bro-Spagn, gant ar berc'henniezh ijinerezhel ?

110

Evit ar re na oufent ket petra eo, hen displegin berr-ha-berr. Setu : bez ez eus, e kement bro a zo, tud ijinus-tre, a ra kavadennoù a bep seurt evit aesaat ar vuhez hag, evit mirout evito o-unan frouezh o c'havadennoù, e c'houlennont un testeni a gavadenn. Lakaomp en defe kavet ur micherour, pe un ijinour, pe n' eus forzh piv, da skouer, un « durkez mod-nevez da denañ tachou eus ar c'hoad hep o c'hammañ » hag e falvezfe dezhañ kaout un testeni evit ar gavadenn-se. Skrivañ a raio da Bariz d' ur burev ijinourien ha tud a lezenn oc'h ober war-dro seurt traoù. Roet e vo dezhañ un testeni (hep kred ar gouarnamant) evit ur badelezh - lakaomp - a 18 vloaz. An testeni-se n' en do talvoudegezh nemet er Frañs ha mar fell dezhañ gwareziñ e gavadenn en ur vro all ivez, lakomp e Brazil, ar burev bet dibabet gantañ e Pariz a skrivo d' ur burev e Brazil. En ur burev evel-se e Sao Paulo e felle din labourat. Eus ur seurt burev e oa tremenet meur a lizher etre va daouarn, p' edon e Madrid, o c'houlenn gwareziñ e Bro-Spagn kavadennoù graet gant tud o chom e Brazil. Skrivañ a ris. Va lizher a lakaas pemzektez d' en em gavout e Sao Paulo, setu perak n' em boe ket a respont a-raok teir sizhun. Hogen, ar respont a oa mat.

* * *

Va labour a oa liesseurt : ober troidigezhioù, skriverezañ lizhiri, derc'hel konterezh hag adaozañ ur fichennaoueg eus an holl destenioù bet aotreet e Brazil adalek an hini kentañ. Dizalc'h e oan em labour, hag hemañ ne oa ket dreist din. Edon em bleud. Er mareoù kentañ e veze brasoc'h va levenez c'hoazh

pa 'z aen, da greisteiz, d' an ti-debriñ. N' oufec'h ket emskeudenniñ ar blijadur am boa, goude bezañ bet o servijañ ar re all e-pad daou pe dri miz, o vezañ servijet d' am zro !

Er burev, da zek eur ha da beder eur e veze servijet ar c'h-cafezinho, ha se a oa ur blijadur all.

Da c'hwec'h eur e veze echu al labour. Peurvuañ ez aen, neuze, war va zrañkil, betek al lenndi, da dremen div pe deir eurvezh. An aer glouar d' ar mare-se a oa plijus-meurbet. Koaniañ a raen, en ur dremen, gant ur sandwich, hag a-raok mont el lenndi e kemeren banne kafe diwezhañ an devezh.

Er pezh a sell va sevenidigezhioù war dachenn ar vicher eo bet ar bloavezhioù tremenet e Brazil ar re wellañ holl. Ar re fallañ holl, siwazh, a zo deut diouzhtu da c'houde.

E KOUN UR STOURMER

War-dro ar 15 a viz Genver, e tregern ar pellgomz du-mañ. Hag e klevan ur vouezh o komz saozneg hag o c'houlenn keloù diganin. Souezhet, e respontan hep soñjal re en hevelep yezh, va c'henbrezeger o venel dianav din. Setu eñ o c'hoarzhin ha me o c'houzout piv eo neuze. Va c'heneil Yann Boupinod an hini eo a c'halv ac'hanon, o lavarout din goude ez eo klañv hag e vo ret dezhañ mont d' an ospital. An darvoud-se ivez a ziskouez peseurt stourmer e oa an den, a veze endeo o tisteurel meur a wech bemdez abaoe ur miz, dic'hallus dezhañ mirout an disterañ boued. Ur miz bennak goude ar bellgomzadenn-se ez ae va c'heneil da anaon.

Yann Boupinod, e geneiled vat a ra anezhañ Tito. Pep hini a anzav ez eo bras e ouiziegezh, ez eo eñ ampart-kenañ evit dastum danvez war destennoù a bep seurt hag evit ober anaoudegezh gant tud a c'hell e skoazellañ da bourchas seurt danvez. E-korf teir sizhun da skouer e kavo peadra da sevel lodenn vrasañ an niverenn " Al Liamm " gouestlet da Vro-Hungaria.

Yaouank-tre, un den kiriek eo endeo, gouestl da blediñ gant kudennoù a-bouez. A-raok ar brezel 40, en em stumm evel stourmer e strollad ar gomunisted, a guita goude evit mont da heul Doriot. Da 17 vloaz, e familh a enskriv anezhañ evit ur veaj a-stroll da Vro-Alamagn. Lezel a ra ar strollad tost d' an harzoù, ha mont a ra e-unan-penn da Yougoslavia, o tremen gant e varc'h-houarn dre odeoù an Alpoù. Da 22 vloaz, emañ gant ar re a ra war-dro FRAMM KELTSIEK BREIZH. E-pad ar brezel, setu eñ kuit gant e wreg yaouank evit Bro-Alamagn evel kalz, dastumet gant kevredigezh an S.T.O. (1). Dedennet gant kartennoù douaroniezhel Bro-Alamagn (e vicher a zo dres d' ar mare studiañ ha sevel kartennoù), e teu a-benn da biaouañ un toullad anezho. Kemeret gant lod evit ur spier, e vez kaset neuze e-giz pinienn d' ar mengleuzioù holen.

(1) Service du Travail Obligatoire.

112

Beajour bras, Yann Poupinod en deus baleet dre holl vroioù Europa. Aet eo zoken betek Bro-Rusia, ha da weladenniñ ar Sahara. Ma plij dezhañ lenn, e venn mont ivez war an dachenn, e-sell gwiriañ ha resisaat pezh en deus studiet. Betek e 40 vloaz e raio hent gant e varc'h-houarn, un tamm sac'h war e gein, hag o kousket en ostalerioù. Yaouank-flamm ez eo aet e-giz-se eus Pariz betek ar Baol, en un devezh. E veajoù war varc'h-houarn a bad un nebeut devezhioù hag a-wechoù ouzhpenn ur miz.

113

Ur stourmer eo ivez Yann Boupinod. Emañ e-touez an nebeut re a sav ar M.O.B. (1) goude ar brezel. Er mare ma 'z eo pouezus levezon ar strollad-se, kuitaat a ra Pariz e dibenn pep sizhun evit kenlabourat gant ar c'hevrennoù e pep korn a Vreizh, sevel kevrennoù nevez, stummañ stourmerien. Beajiñ a ra en trenioù-noz. Nozvezhioù all a dremenno o studiañ hag o skrivañ. E amzer vak, e yec'hed zoken, a ouestl d' e gredenn.

Ur politiker eus an dibab en em ziskouez e meur a dro. Gouest eo da gas d'an traoñ kengevredadoù an tu-enep, ha da gaout da skouer ul levezon war degouezh dilennadegoù Ti Breizh e Pariz. Gantañ e ra an M.O.B. un tamm hent gant Aleksis Gourvenneg ha peizanted Vro-Leon e 1961 hag emañ ivez goude e penn manifestadeg Kemper. Dre e levezon en em vodo kuzulierien-departamant al Liger-Izelañ ha kargidi en Naoned e miz Gwengolo 1973, e sell diskouez o youl da welout Breizh adunanet. Unan eus aozerien « Devezh an unvaniezh » eo ivez, o fal bodañ en Naoned 15.000 den, d' ar 25 a viz Ebrel 1976.

Yann Boupinod a zo un den bev, a oar ivez kemer dudi er momedoù diskuizh, ha farsal. Leal eo, ha feal d' e vignoned, d' e familh. E wreg he deus perzhioù gwreg an difraoster, ha gantañ e vo bepred, pe a-dost, pe a-bell, diouzh ret. A-drugarez d' he ferzhioù mat, e c'hell-eñ mont gorrek gant e hent.

Poupinod a zo ur skrivagner. Meneg eus e oberenn a zo bet, pe a vo graet, gant reoù all. Pezh en deus degaset er feur-se avat n' eo ket dister. Chalet eo bet muioc'h gant an danvez a ginnige eget gant ar stumm a roe d' e skridoù. E labour pennañ a zo marteze ar strobadoù souezhus a gartennoù en deus savet, da gantañ holl evit O.R.E.A.L. (2) Naoned-Sant-Nazer. An den-se hag a ouie ken mat dastum sifrennoù e-sell ober sichenn studiadennoù resis, a en em ziskoueze ken barrek all en e varnadennoù eneoniell. Fellout a rae dezhañ anavezout an dud betek en o donder, pe o distervez, evit dont d' un ober efedus. En e raok o doa degaset d' an Emsav paotred BREIZ ATAO elfennoù ar menoz broadel : ar ouenn, an istor, ar yezh. Poupinod, an hini kentañ, a zegas un elfenn all : lec'hiadur ar vro, danvez he douar, o deus levezon war doare-bevañ ha betek stumm an annezidi. Komz a ra eus kudenn Vreizh gant termenadurioù arboellerezhel. Hep brezhoneg, Breizh a zo anezhi evelato.

(1) Mouvement pour l'Organisation de la Bretagne.

(2) Organisation d'Etudes et Aménagement des Pays de Loire.

114

Yann Boupinod n' eo ket aet war skinvier ar skolioù-meur, ha koulskoude e voe goude ur c'helenner eus an dibab, koulz war an istor, an douaroniezh, an arboellerezh, e Kêr-Vreizh Pariz hag e lec'h all. Un emzeskad eo. N' en deus ket klasket ar plasoù uhelañ en Emsav, hogen fellout a rae dezhañ bezañ gant ar re a zalc'he ar stur. War e labour, n' eo ket degouezhet betek ar c'hargoù pennañ. Dres dre ma oa peurliesañ gouiziekoc'h, barrekoc'h eget e renerien, hag hep aon d' hen diskouez. Ne guzho ket kennebeut e soñjoù e-keñver politikerezh, ha ne asanto ket kenlabourat da oberennoù re vresk an diazez skiankel anezho. Seurt doareoù ne blijont ket, hag e c'heller lavarout en deus Poupinod kollet meur a wech e labour, ha chomet hep kaout unan all, en abeg d' e venozioù breizhat.

Un den eeun, gouiziek, kadarn, efedus, paotr e-unan e meur a zoare (lavarout a rae ne blijje ket dezhañ na ren war ar re all, na blegañ dezho), gouest avat da genlabourat diouzh ret, da sentiñ zoken mar deo talvoudus ar rener. Un den asur eus e sav-poent, barrek da gemmañ anezhañ hervez an darvoudoù. Un den hag a zo bet e-kreiz-tre an Emsav, e venozioù hag e ober, e-pad tost da 30 vloaz, un den aet skuizh marteze meur a wech gant ar Vreizhiz, met chomet start en e garantez ouzh Breizh. Setu d' am soñj pezh ez eo bet Yann Boupinod. Ur c'hile, ur mestr ivez. Un den dellezek da vezañ saludet.

EÑVORENNOÙ

(kendalc'h)

A-greiz-holl, e savas ur voudinell e-touez an dud hag e redas an holl etrezek an ti-kêr. Edo Per an Ansien, an tabouliner, o spegañ liketennoù gwenn bras ouzh e vogerioù. War ar penn-uhelañ anezho e oa daou vanniel tri liv e kroaz hag, izeloc'h, e lizherennoù bras, ar gerioù strafuilhus a c'halve ar vro d' an armeadeg, ha deiz kentañ an armeadeg a oa d' an eil a viz Eost 1914.

Edo, eta, o vont da zeraouiñ un drailh spouronus a badas ouzhpenn pevar bloaz hag a ziskaras nouspet milion a wazed e barr o brud a-dreuz broioù Europa, hag a reas kement a zismantr hag a zistruj !

E berr amzer e voe goullo al leur-gêr, tud ar foar oc'h hastañ distreiñ d' ar gêr. En em gavout a ris gant Yann ar Floc'h, hor c'hloc'her, a oa o vont d' an iliz ; gouelañ a rae an den kaezh ken frommet e oa gant ar c'heloù mantrus. « Deus ganin, » emezañ, « da seniñ ar c'hloc'h-galv ; re drubuilhet on d' hen ober va-unan. » D' e heul ez is hag e savjomp gant an diri vein betek kambr ar c'hloc'h bras a ra ar pouez anezhañ nouspet mil lur biskoazh.

War ar mell sol a oa izeloc'h egetañ e savis da begañ er vazoulenn bounner a lakais war va skoaz ar penn anezhi da skeiñ ouzh ar gantenn. A daolioù difrae e tregernas ar c'hloc'h bras gant e c'halv d' ar re a oa c'hoazh bev ha gant e sklankoù d' ar re a dlee mervel. Bouzaret e oan dindanañ hag un esmae don a dreuze va c'halon. Pa vezen aet skuizh, ec'h ehanen da skeiñ ha neuze ar c'hloc'her, savet ivez war an treust, a skoe d' e dro, gant ur morzhol houarn, war ar pezhriad arem.

Mezevellet e oan gant an trouz ha badaouet c'hoazh pa zispegis diouzh ar vazoulenn ha, p' edomp o kuitaat hor c'hloc'h, e lavaras din Yann ar Floc'h : « Moarvat ne ankouai biken an abadenn seniñ c'hloc'harus-mañ ! Plijet gant Doue na vo ket re a dud lazhet hag e c'hellimp dizale lakaat bole er c'hleier da geñver gouel an trec'h ! »

116

Daou zeiz goude, d' al lun vintin, e oa en em zastumet dirak an ti-kêr, ar wazed o devoa urzh da zeredek d' an arme. Ganto, an darn vras anezho a-ziwar ar maez, edo o c'herent, o mignoned hag o amezeien, deuet d' o ambroug evit ur c'henavo diwezhañ. Nebeut a verc'hed en tu all d' an hiniennoù, kurius ha nec'het, oc'h ober kavandenn da gar pe bar eus ar vourc'h. Nebeut a drouz ha, daoust da se, seder a-walc'h ar baotred. Ne oa ganto nep c'hoarzh, avat, hag o dremmoù prederiet a oa dinec'h ha leun a fiziañs.

En o zouez e rede ar vrud na badje ar brezel nemet un tri miz bennak hag e vije kannet an Alamaned e berr amzer. Peadra, neketa, da zienkreziñ ar re aonik ha da greskiñ nerzh-kalon ar re all. A-renkennadoù ledan en em lakajont a-dreñv strollad muzikerien an aotrou Rouz, bet kent noter e Kastell-Nevez ar Faou. Nevez savet e oa ar strollad-se ha ne oa ket gouiziek bras da seniñ gant e venviji kouevr hag e daboulinoù bras ha bihan. Edo o teraouiñ deskiñ ha ne ouie ket c'hoazh distagañ ar Marseillaise. Ton ul lastez son, deuet eus Pariz, a zeue difazi a-walc'h gant ar vuzikerien :

 Pour vingt-cinq francs cinquante,
 A Paris, chez ma tante,
 On a un pardessus

Avec du poil dessus !

Setu holl ar pezh a gavjod da reiñ da glevout d' ar re a gerzhe da wiskañ ar gapotenn soudard a-barzh kerzhout d' an tan, e-lec'h ar Marseillaise, ar c'han broadel gall a dlefe bezañ un atiz da zifennourien ar vro, pa 'z eus anv ennañ da walc'hiñ hon irvi gant gwad dic'hlan an enebourien.

En ur bagad, ez eas an danvez-brezelourien hag ar re a oa d' o heul war-du ar gar hag, a-hed an hent, e tilamme tud eus o ziez da gimiadiñ diouzh ar re a rae o c'hammedoù kentañ war hent ar brezel hag a laoskje, darn anezho, o c'hroc'hen pell diouzh bro o c'havell. N' ouzon ket pet e oant, o tiskenn gant an hent, hep safar na brabañserezh, goubet da stourm hep kilañ. Kalz anezho a soñje, gant tristidigezh, en o eost chomet da vediñ pe da zornañ hag a drueze war o gwraez o klask gouzout penaos e rajent evit en em geitañ. Dibrederoc'h e oa d' ar vevelien na laoskent war o lerc'h netra d' o lakaat chalet.

E-ser heuliañ ar vuzikerien, bepred o seniñ an hevelep tra ec'h en em gavas ar bagad e porzh an hent-houarn. Ur soudard, ruz e vragoù, a oa eno, fuzuilh ha baionetez gantañ harp e gein ouzh ur gloued. Urzh en doa da virout e tostajed ouzh ar c'haeou. War a lavaras, ne dlee ar re c'halvet mont kuit nemet war-dro kreisteiz ha dav e vije dezho gedal e-pad div eur pe war-dro, rak ne zeuje ket kentoc'h o zren.

117

Petra da ober da c'hortoz nemet mont d' an davarn da evañ. Setu ar pezh a reas an holl, darn anezho dreist muzul, ha dizale e voe meur a hini tommet mat. Kalz, enoet o kavout hir an amzer, a azezas war gostez an hent da zebriñ ar bevañs a oa deuet ganto.

E-keit-se, e tremene e-biou d' ar gar treniadoù o vont war-du Kastellin, leun-tenn o bagonioù beajourien ha da lakaat loened, leun-tenn a baotred tokeier plat eus tolead Karaez, youc'h ha kanaouenn ganto. O mouezhioù nerzhus a drec'he war drouz ar marc'h-du, o skignañ a bep tu sonioù seder a glevet, an heklev anezho pell goude ma vezent tremenet. War-dro teir eur hepken e tegouezhas un tren da gerc'hat gwazed Pleiben a gimiadas, d' o zro, diouzh o farrez hag o ambrougerien.

An deiz-se ivez, hag e-pad eizh deiz bennak da c'houde, e oa en em gavet ur strolladig ofisourien da lemel digant o ferc'henned gwellañ kezeg ar barrez : « Ouzhpenn tennañ hor gwazed diganeomp, » a hirvoude ar merc'hed, « setu ma kasont bremañ hon loened ganto ! Penaos e raimp hepdo da labourat an douar ? »

Diouzh tro e veze lakaet pep loen-kezeg da redek hag ar re a gaved mat a gemere, diouzh an abardaez, an hent da Wened oc'h hedañ da gentañ, ribl ar stêr Aon. N' ouzon ket perak, avat, o c'hased kuit a-zindan an noz, marteze gant aon rak spierien an Alamaned, evel ma lavare darn.

.

Er vourc'h e oa teñval ar pennoù ha gwasket ar c'halonoù. Eus a bep ti, koulz lavarout, e oa aet kuit unan bennak ha, gant mall, e c'hortozed keloù anezho hag eus a baotred all a rae o servij soudard hag a oa, a-benn neuze, o vrezeliñ e Belgia hag e hanternoz Bro-C'hall. Ranket o devoa an armeoù saoz ha gall kilañ dirak an Alamaned o tic'hlaniañ par d' ul lanv. Nebeut a geleier war ar c'helaouennoù, netra nemet ar pezh o deveze aotre da voulañ. Anv ebet eus an drailh a oa bet e Charleroi hag e Messain, e-lec'h ma stourmas hor c'henvroiz yaouank. Pa veze anzavet ur giladenn, e veze, hervez ar c'hazetennoù, evit kaout gwelloc'h tu war an enebourien.

118

Pa dec'has ar gouarnamant da Vourdel, e voe kredet na badje ket Pariz pell hag e rankje ar Re Unanet kodianiañ. Hogen, emgann ar Marn a lakeas un harz da redadenn an alouberien ha, raktal, e tirollas al levenez e pep lec'h. Da c'houde, siwazh, e teuas mortuajoù niverus ar re a gollas o buhez e plaenennoù

Belgia.

Pleibeniz a drueze war ar re lazhet hag o zud hag a grene evit buhez an holl soudarded a oa war an talbenn. Bep ur mare ha kement-se e-pad ar brezel, e kleved an hevelep komzoù : « Hemañ-hen, eus al lec'h-mañ-lec'h, a zo bet lazhet. » Pe c'hoazh : « Ozhac'h pe vab ar gêr-mañ-kêr ne zeu keloù ebet digantañ. » A bep tu e kaved tadoù ha mammoù, intañvezed, bugale, breudeur ha c'hoarezed o ouelañ hag o keinañ d' ur bugel, d' ur pried, d' un tad pe d' ur breur lazhet war dachenn an talbenn. Dalc'hmat e veze oferenoù ha servijoù evit ar re a vezed diarvar e oant marv er brezel. Ar spont hag ar vantridigezh a oa e kement lec'h dirak ar c'holloù grevus a rae poblañs ar barrez.

A-hed ar pevar bloaz ma renas an distruj, war an tri mil nav c'hant annezad hor boa, tost da vat, e voe diskaret tri c'hant seizh ha pevar-ugent anezho, m' am eus soñj, da lavarout eo, dek dre gant eus ar barreziad.

Bep ur mare e teue ur gloaziad bennak d' ar gêr, mac'hagnet pe dapet e fall gantañ. Gant ar soudarded gwall-aozet-se e klevet doare eus an emgannoù hag ar gwall-zarvoudoù. War a gontent, hag holl e lavarent heñvel, e oa bet drastus meurbet ar pegadoù da rejimantoù Breizh, da gentañ e Belgia ha, goude-se, e-kerz an dec'hadeg. Gwelloc'h armet hag urzhiet e oa an Alamaned egeto hag o soñj a oa e vije diaes bras kaout warno an trec'h.

Koulskoude ne oa ket digalonekaet ar baotred a vire start, evel ar bobl, ar spi e vije kannet, a-benn ar fin, armeoù Gwilhou II. War gement tamm paper moulet e kaved da lenn e varvje a-barzh pell an enebourien gant an naon o vezañ ma oa dister o fourveziou.

Meur a c'hloaziad distro d' ar gêr ne vagent ket nemeur a fiziañs er gredenn-se. War o meno, nemet e teufe skoazell vat dezho, ne c'hellje biken ar C'hallaoued reiñ lamm d' o enebourien, ken mat armet ha galloudus e oa ar re-mañ. Gant skiant-prenet e lavarent ne ouie ket an ofisourien gall ober brezel, pa gasent o zud d' an arsailh gant ar vaionetez war dachenoù dizolo e-lec'h ma kouezhent a-vil-vern dindan an tennoù kanol ha mindrailherez.

119

Va c'henderv kompez Yeun Frabolod, eus ar Menez Gwenn, bet gwall-c'hloazet gant ur boled fuzuilh a dizhas e vorzhed hag a risklas a-dreuz e gorf da sankañ e-barzh unan eus e skevent, a lavaras din e oa heuet gant ar brezel. Ne oa ket evit kompren, emezañ, e c'helle ar gouarnamantoù bezañ fallakr a-walc'h da gas d' en em zrailhañ kenetrezo tud ha n' en em anavezent ket ha n'o devoa nep rumm anezho kasoni ouzh egile. Don e oa e vorc'hed hag e geuz da vezañ lazhet un den da vihanañ hag o c'houzout petra a rae.

E Belgia, e-doug ur pegad drastus, e oa aet, da heul e gompagnunezh, da ziarbenn Gward an Impalaer Gwilhou, ar c'haerañ ha gwellañ soudarded en devoa hemañ.

War ar renkennad kentañ eus e strollad edo Yeun Frabolod pa gavas dirazañ ur mell gwaz yaouank, un ofiser pe un is-ofiser moarvat, ur bistolenn gantañ en e zorn. N' en devoe ket amzer da dennañ hag e voe treuzet gant baionetez va c'henderv o treuziñ dezhañ e boull-kalon. « Gwelloc'h em boa kavet, » eme Yeun, « bezañ kiger eget leue ». Met an eñvor eus an darvoud skrijus a vantre kement al lazher ma ne baras morse, da c'houde, an disterañ mousc'hoarzh war e zremm klañvidik. Gant an droug-skevent e varvas dizale, prederiet ha gwasket bepred gant ar c'herse da vezañ lamet e vuhez digant un den n' en devoa nep drougiezh outañ.

.

Daoust d' an diskred d' an trec'h e zegase ganto an testoù-se a oa o paouez gwelout petra a oa ar brezel, e viras ar bobl ar fiziañs e teuje ar gounid gant Bro-C'hall. Kemeret e voe evel ur burzhud an harz lakaet d' an Alamaned gant emgann ar Marn. Lavaret e veze na c'helle ket Doue dilezel Merc'h

henañ an Iliz ha bro ar sevenadurezh kristen etre skilfoù ar Varbared a oa bet a-viskoazh hec'h enebourien douet. Pedennoù a veze graet en ilizoù ha goulennet ouzh ar Galon Sakr ha Jann d'Arc o skoazellañ ouzh ar vac'homerien o devoa aloubet un darn vras eus ar Vammvro. Ar banniel tri liv, ur Galon Sakr en e greiz, a voe lakaet er vann, tost da aoter vras pep iliz parrez.

Ne c'helle ket ur vro ken kristen ha Bro-C'hall bezañ kannet gant kenvroiz an disivouder Luther, skraperien hor pinvidigezhioù ha tanerien hon ilizoù meur. Bruderezh ha gevier ar c'helaouennoù a rae o seizh gwellañ da zienkreziñ ar bobl ha d' he broudañ da vezañ habask betek an deiz ma parje heol ar Justis hag ar Gounid. Ne c'helle ket an deiz-se daleañ ken pell bras pa veze gwelet Alamaned du gant an naon oc'h en em zaskoriñ d' ar C'hallaoued kerkent ha ma tiskoueze ar re-mañ dezho un dorzh vara. Dalc'hmat e veze roet eus ar seurt poulc'hed-se da lonkañ d' ar c'henaouerien a veve a-dreñv an talbenn, evit kennerzhañ ar fiziañs er c'halonoù.

120

Hogen ar brezel na dlee padout nemet tri miz n' en devoa ket doare da vezañ dare da echuiñ. Dre vouezh ar c'hazetennoù, e rankas ar gouarnamant anzav e padje e-pad ar goañv a oa o tostaat. Aliet e voe an holl da gas dilhad gloan d' ar soudarded a gendalc'he er foziou-difenn a oa bet toullet en douar, war-lerc'h emgann ar Marn, da enebañ ouzh argadennoù an alouberien. Er foziou-difenn-se, leun a bri hag a zour, e oa truezus stad hor soudarded sammet gant ar yenijenn.

Diwar neuze e teuas meur a hini anezho d' ar gêr, e permission, hag e klevjomp ganto traoù iskis ha spontus diwar-benn ar vuhez a renent. Darn a lavaras e oa bet kaset o rejimantoù da dennañ en Elzas er penn kentañ eus ar brezel, war baotred ar pemzekvet korf arme eus ar c'hreisteiz kuitaet ganto al linenn da dec'hout diouzh an Alamaned. Ur spouron a oa ivez, emezo, padout dindan kanoliadegoù pezhioù pounner an Alamaned hag e tamallent d' ar pennoù bras lakaat ar Vretoned bepred en toulloù fallañ.

En desped da se e chome divrall ar bobl gant he menoz da c'hounit ar brezel. Un doare gouel a voe graet, dre ar vro a-bezh, en enor d' ar pezh kanol 75. Devezh ar Finister a voe ivez evit meuliñ kardeded Leoniz ha Kerneviz a stourme e rejimantoù an departamant, an 118vet hag an 318vet eus Kemper, hag an 19vet hag an 219vet eus Brest. Peadra, evel ma welit, da hisañ karantez-vro ar Vretoned, seul-vui ouzhpenn ma veuled dalc'husted d' al labour ar merc'hed hag ar re gozh a zalc'he da gas o atantoù en-dro.

Aour a rae diouer da gas ar brezel da benn ha setu ma voe pedet ar veleien da aliañ o farrezioniz da reiñ o fezhioù melen d' ar Stad. Hen ober a rejont dre brezegenoù entanet hag, a-barzh pell, e kasas an dud o aour da baotr an tailhoù. Da bep genaoueg, sot a-walc'h da zispegañ diouzh e bezhioù lintrus, e veze roet un testeni da wiriekaat e vrokusted e-keñver Bro-C'hall. Va mamm he devoe unan evit ar pemp loeiz aour ha pevar-ugent a roas evel-se.

121

Hogen an Unvaniezh Sakr a rene d' an ampoent hag ar skoazell o devoa roet an veleien d' ar rastellerien evit dastum an aour, ne virjont ket ouzh ar frañmasonerezh da wall-gomz eus an Iliz. War a lavarent, e kase ar veleien arc'hant d' an Alamagn, dre hanterouriezh hon Tad Santel ar Pab, evit reiñ skor da gannañ Bro-C'hall !

(da genderc'hel)

EMBANNADURIOU AL LIAMM

Oberennoù klok Tangi MALMANCHE

An Antekrist 7,00 lur
An Intañvez Arzhur (Pevar arvest) 19,00 lur

Buhez Salaun Lesanvet ar Foll (Tri arvest)	24,00 lur
Gwreg an Toer - Marvailh an Ene Naonek (daou bezh-c'hoari en un arvest)	13,00 lur
Gurvan ar Marc'heg Estrañjour (Tri arvest)	24,00 lur
Ar Baganiz (Tri arvest)	27,00 lur

Oberennoù Roparz HEMON

Alanig an Tri Roue	10,00 lur
Barzhonegoù (war Arches niverennet)	24,00 lur
Ho kervel a rin en noz (brezhoneg aes)	20,00 lur
Tangi Kerviler, romant	14,00 lur
Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh	20,00 lur
Nenn Jani, romant, 230 pajenn	25,00 lur
Mari Vorgan, romant	22,00 lur
Mari Vorgan (war Ingres niverennet)	34,00 lur

J. QUEILLÉ, 47, rue Notre-Dame, 22200 Guingamp
- C.C.P. 1136 82 Rennes -

Yezh komzet ha yezh skrivet

An holl a oar ez eus kemm etre ur yezh komzet hag ur yezh skrivet.

Pa glaskomp ober istor ur yezh, e rankomp diazezañ hor studi war destennoù. Kement a ouzomp a zeu diwar dielloù skrivet. Kement a zo bet lavaret er yezh-se a-hed ar c'hantvedoù a zo aet da get.

Mar fell deomp gouzout tra pe dra a-zivout ar yezh komzet gwechall, e rankomp tennañ hon anaoudegezh diouzh ar pezh a zo bet skrivet.

Gwir eo evit ar brezhoneg evel evit holl yezhoù ar bed.

* * *

Ar yezh skrivet a zo stag ouzh ar yezh komzet koulskoude. Ar gerioù a vez treset gant lizherennoù, pep lizherenn pe strollad-lizherennoù o klotañ well-wazh ouzh soniadoù al lavar. Ar frazennoù a vez aozet e seurt doare ma c'hellont bezañ intentet, pa o lenner a vouezh uhel, gant ar gomzerien, - da vihanañ, gant darn anezho. Gerioù ha framm yezhadurel an testennoù skrivet a zo eta heñvel a-walc'h ouzh gerioù ha framm yezhadurel ar yezh komzet.

* * *

Ur goulenn a dleer ober a vat : ouzh peseurt yezh komzet e klot ar yezh skrivet ?

Ret eo soñjal ez eo ar yezh komzet un dra liesseurt.

Bez' ez eus ar yezh komzet er vuhez pemdeziek. Disheñvel eo hervez an dud : un den desket ne gomz ket evel un den dizesk. Ouzhpenn se, un den ne gomz ket atav heñvel : ur vamm ne gomz ket ouzh he babig evel ma komz ouzh merc'hed all ; ur soudard ne gomz ket ouzh un ofiser evel ma komz ouzh e gamaladed. Kavout a c'hellit kement a skouerioù ha ma karit.

123

E-kichen ar yezh komzet bemdez ez eus yezhoù komzet all a bep giz : ar yezh implijet gant ur prezegour en un iliz ; gant ur barner el lez-varn ; gant ur c'helenner en e skol gant ur wrac'h kozh o tibunañ ur marvailh. Adarre e c'hellit kavout skouerioù e-leizh.

* * *

Houmañ eo, ar yezh komzet e darvoudoù 'zo, a vez peurliesañ skeudennet er skritur. Ar yezh pemdeziek ne vez lakaet dre skrid nemet dibaot a wech. Mont a ran betek lavarout ne vez lakaet dre skrid morse dres evel m' emañ. Ha padal, bez' ez eus anezhi, bez' ez eus bet anezhi a-viskoazh. Talvoudus-bras e vefe gouzout resis petra eo bet a-dreuz an amzerioù. Rak drezi eo deuet ar c'hemmoù er soniadur, er yezhadur, er geriadur a zo bet melezeuret er yezh skrivet, melezeuret-fall alies hag a-wechoù goude ur pennad hir a amzer.

Siwazh, dic'hallus eo kaout anaoudegezh eus ar yezh komzet er vuhez pemdeziek gwechall. Ne c'hellomp nemet he damspurmantañ er skridoù, dre ijinoù soutil. Da skouer, en un destenn aozet en ur stumm lennek, klasek, hengounel, e kavomp a-greiz-holl ur ger iskis. Da gentañ e kredomp ez eo ur fazi-pluenn pe ur fazi-moulerezh. Dre forzh prederiañ, e verzomp e tle bezañ ur ger a veze implijet gant ar skriver en e yezh pemdeziek, lakaet gentañ, gant mui pe vui a

ampartiz, evel ma veze distaget. Mar gellomp prouiñ an dra-se, ez eo prizius evit sevel istor ar yezh : diskouez a c'hell ur c'hemm c'hoarvezet e fonologiezh ur rannyezh, pe c'hoazh e c'hell diskouez e veze graet gant ar ger-se, daoust na veze ket degemeret gant al lenneien.

Seurt kavadennoù a zo rouez, anat eo.

Mat e vo derc'hel koun eus an evezhiadennoù-mañ evit kompren gwelloc'h ar studiadenñ amañ war-lerc'h, gouestlet d'an darempred etre ar brezhoneg komzet hag ar brezhoneg skrivet adalek an amzerioù kentañ betek hon amzer-ni.

HENVREZHONEG

Etre ar 5-vet hag ar 7-vet kantved, abretoc'h marteze, Brezhoned a veve e Breizh-Veur a dreizhas ar mor d' en em ziazezañ e kornog Galia, el ledenez anvet Aremorica. Un anv nevez a rojont d'ar vro : Breizh. A zo muioc'h, ganto e teuas o yezh : ar brezhoneg.

124

Diazezadeg ar bobl-se e Galia a zo bet keñveriet gant hini an drevadennerien a Vreizh-Veur e Norzamerika er 17-vet kantved. Ar re-mañ a gomze saozneg. Kenderc'hel a rejont da saoznegañ etrezo en o bro nevez evel ma raent er vro gozh. Ur yezh lennek o doa ivez, heñvel-mik ouzh hini Vro-Saoz. Ganto e oa levrioù, dielloù a bep seurt. Ar yezh lennek a voe implijet ganto er vuhez kevredigezhel, lezennel, melestrerezhel hag all.

Evel-se e voe kont e Breizh etre ar 5-vet hag ar 7-vet kantved.

War a greder e teuas ar Vrezhoned e Galia a vagadoù bihan, e penn pep bagad ur rener. Ambrouget e vezent, pe gentoc'h heuliet gant beleien ha menec'h. Hep mar ebet e komze an holl dud-se etrezo, en o buhez pemdeziek, evel ma komzent e Breizh-Veur. Gwirheñvel eo e komprene izili ur bagad pezh a lavare izili ar bagadoù all, daoust ma oa rann-yezhoù marteze. Da skouer, ar re a zeue Kernev-Veur ne gomzent ket dres evel ar re a zeue eus ar broioù pelloc'h er reter.

Ur yezh lennek o doa ivez. N' o doa ket a levrioù moulet, sklaer eo. Ha bezañ o doa dornskridoù pe dielloù skrivet en o yezh ? Ne ouzomp ket. Pezh a zo sur evelato eo e ouie darn anezho skrivañ latin, hag e rankent merkañ en o dielloù latin an anvioù tud hag an anvioù lec'hioù da vihanañ e brezhoneg. Hogen ur yezh lennek a c'hell bezañ komzet hep bezañ skrivet. An dud-se o doa sur-mat kanennoù ha barzhonegoù. Al lezennourien, ar velestrourien, ar gloer a rae sur-mat gant ur yezh lennek distag diouzh yezh an divizoù pemdeziek.

Bezef pe vezef, ma ne ouzomp ket resis pezh a oa da vare an diazezadeg, e ouzomp pezh a oa er c'hantvedoù da heul.

En e levr " Language and History in Early Britain ", ar c'helenner Kenneth Jackson a skriv (p. 67) :

« Tra arouezus, an doare-skrivañ implijet er mammenn-skridoù hengembraek, hengernevek ha henvrezhonek a zo, mar lezer a-gostez un nebeut fedoù dibouez, heñvel-rik ; ha ne gemm ket a-grenn e nep giz adalek dielloù koshañ an 8-vet kantved betek dielloù an 11-vet. En abeg da se, hogos dic'hallus eo amzeriadañ un destenn hengembraek, hengernevek pe henvrezhonek nemet dre an doare-skrivañ. »

Hag e skriv pelloc'h (p. 68) :

« Krediñ a dleer eta e tenn doare-skrivañ an hengembraeg, an hengerneveg hag an henvrezhoneg e orin diouzh un doare-skrivañ boutin bet stummet en Enez-Vreizh. »

Lakaomp zoken e teuas an diazezerien gentañ hep skridoù e Galia. Betek an 11-vet kantved, an dud desket, renerien ar gevredigezh, e Kembre, Kernev-Veur ha Breizh, ne oa ket deuet en o spered ar soñj e c'halle bezañ teir yezh disheñvel : kembraeg, kerneveg ha brezhoneg. Darempredoù strizh ha diehan a oa etre an teir bro. Ur manac'h kembreat, da skouer, en em gave evel er gêr en ur manati a Vreizh.

Evit pezh a sell ouzh Kernev-Veur ha Breizh dreist-holl, krediñ e oa ur yezh kernevek diforc'h diouzh ur yezh vrezhonek a vije bet diot. Lennet em eus e c'houlennas darn eus an uhelidi vrezhon a ambrouge Gwilherm an Alouber en 11-vet kantved kaout douaroù e Kernev-Veur, o vezañ ma komze ar bobl er vro-se ar yezh a gomzent.

Marteze e oa tu da c'houzout e teue un den desket eus Kembre, Kernev-Veur pe Vreizh dre e stumm-mouezh. An dud desket avat a skrive holl heñvel, ne vern a belec'h e teuent. Diaes-kenañ eo gouzout ha merket e voe ur spis-c'heriad etre linennoù un dornskrid latin gant ur C'hembread, ur C'hernevveuriad pe ur Breizhad. Holl e skrivent en ur yezh lennek unvan.

Evel pep yezh skrivet e chome stag-mat ouzh an hengoun.

Menegomp ar c'helenner Jackson adarre (p. 69) :

« Ret eo derc'hel soñj eus un dra : ne glaske ket skriverien an dielloù-se lakaat ar gerioù predenek dre skrid evit ar wech kentañ, hervez ma tizhent o divskouarn, evel ma ra ur fonetikour o treuzskrivañ hotentoteg. Gourdonet e oant bet da ober gant un doare-skrivañ peuranavezet ganto. »

Tost dic'hallus e vefe gouzout ha brezhonek eo ur spis-c'heriad ma ne oa ket deuet ar c'hiz e Breizh da implijout ar skritur douarbrazel e-lec'h ar skritur breizhveuriat. Hogen, evel ma lavar ar c'helenner Fleuriot, ur manac'h kembreat pe gernevveuriat o tont da chom en ur manati a Vreizh a c'halle hep poan degemer ar skritur douarbrazel. Un nebeut eurvezhioù a zo a-walc'h evit deskiñ stummañ lizherennoù en un doare nevez.

Bez' ez eus disheñvelerioù dister evelato etre an henvrezhoneg hag an div henezh all a orin predenek. N' hallan ket amañ o menegiñ dre ar munud. Ur skouer hepken a roin. Ar ger-mell strizh en henvrezhoneg a zo **in**. Ha bez' e oa ivez ar stumm **ir**, implijet en hengembraek ? War a seblant, ne vez kavet nemet en un dornskrid hepken. Ha dont a rae ar manac'h a spisc'herias an dornskrid-se eus Kembre ?

Ur wech c'hoazh e rankan lakaat sklaer e vez skrivet an holl henzielloù-se en ur yezh lennek. E-touez ar gerioù dastumet gant an Ao. Fleuriot en e C'heriadur, kalz a zo gerioù lezennel, yezhadurel, skiantel na vezent anavezet, anat eo, nemet gant un nebeut tud. Ne vezent ket implijet, na zoken komprenet gant ar werin.

E-pad meur a gantved eta, ar yezh skrivet a chomas digemm hag unvan, hep merk a emdroadur, hep merk a rannyezhoù. Sur eo e kemme ar yezh komzet keid-all. Ha krediñ a c'hellomp, daoust n' eus prouenn eus an dra-se, e oa rannyezhoù, rannyezhoù deuet eus Breizh-Veur pe diwanet e Breizh.

Neblec'h ne gaver bommoù henvrezhoneg skrivet dres evel ma vezent distaget. Ha koulskoude, yezhourien o deus klasket diwar studi an dielloù kaout un alberz eus ar yezh komzet, pezh a zo ken diaes ha klask gouzout peseurt latin a gleved e karterioù paour Roma diwar studi skridoù ar melestrerezh roman, ken diaes ha klask gouzout peseurt galleg a glever e Ménilmontant diwar studi ar " Journal officiel ".

Lavaromp eta ez eo an henvrezhoneg a anavezomp yezh kefridiel ar renkadoù uhelañ eus ar boblañs, hag e oa tost heñvel ouzh yezh kefridiel ar renkadoù

uhelañ e Kernev-Veur hag e Kembre. Ar yezhourien o deus strivet da daolennañ an henvrezhoneg komzet er vuhez pemdeziek, dreist-holl war dachenn ar fonologiezh, n' o deus graet nemet divinout hep prouennoù resis.

KRENNVREZHONEG.

Ur c'hemm bras a c'hoarvezas e frammadur ar gevredigezh vrezhon en 11-vet kantved. Kemmoù a oa c'hoarvezet a-raok, da skouer en 10-vet kantved, goude aloubadeg an Normaned, pa rankas ar renerien hag ar venec'h kuitaat ar vro e-pad meur a vloaz, ha pa voe distrujet ar manatioù hag ar c'hreizennoù sevenadur.

En 11-vet kantved, Breizh ne oa mui ur rouantelezh. Aet e oa da zugelezh. Gant ar c'hladdalc'helezh e voe merket ar renerien vrezhon, kalz muioc'h eget kent, gant o amezeien eus kornog Europa, dreist-holl re Frañs ha Bro-Saoz.

127

Tamm-ha-tamm e tilezjont ar brezhoneg evit degemer ar galleg. Ar brezhoneg, a oa bet komzet hogozik e pep lec'h er c'hornog d' ul linenn a yae eus Menez-Mikael-ar-Mor betek genou al Liger, a gilas er c'kuzh-heol d'ul linenn etre ar c'hornog da Sant-Brieg betek ar reter da Wened. Se a c'hoarvezas a c'haller krediñ, en 12-vet hag en 13-vet kantved. E Goueled-Breizh zoken e teuas ar galleg da vezañ yezh an noblañs hag ar renerien, hag ar brezhoneg ne voe mui nemet yezh an dud izel.

E Kembre e oa chomet ar c'hembraeg yezh ar renerien lec'hel, hag ul lennegezh kaer, miret betek hiziv, a ziwanas. Ne voe ket heñvel e Breizh. Al lennegezh savet etre an 11-vet hag ar 15-vet kantved, kaer pe zister, a zo bet kollet. Netra ne van nemet gerioù ha frazennoù e dielloù 'zo.

Neuze, er 15-vet kantved, e kaver testennoù. Niverusoc'h int c'hoazh er 16-vet. An testennoù-se a ra pezh a anver al lennegezh krennvrezhonek : barzhonegoù, pezhioù-c'hoari e gwerzennoù, oberoù relijiel e komz-plaen.

Krediñ a c'hallfed ez int bet savet e yezh ar bobl, er brezhoneg implijet gant ar werin, o tiskouez stummoù rannyezhel gerioù ha troioù-lavar boutin.

Er c'hontrol, avat, e kavomp er skridoù-se ur yezh lennek, arzoberiet. A zo muioc'h, eus an 12-vet betek ar 16-vet, zoken betek kreiz ar 17-vet kantved, e chom ar yezh skrivet-se hogos digemm. Souezhusoc'h c'hoazh, n' eus troc'h ebet, war a hañval, etre an henvrezhoneg hag ar c'hrennvrezhoneg-se. Hervez ar c'helenner Jackson, ar c'hemm « ne voe ket trumm, hag e gwirionez ur c'hemm doare-skrivañ e voe kentoc'h eget ur c'hemm yezh hervez ster resis ar ger... Doare-skrivañ an henvrezhoneg a gemmas dindan levezon boazioù skritur ar galleg ».

Da skouer, e-lec'h **u** e voe skrivet **ou**. Ar c'hensonennoù-dent dre c'hwezh ne voent mui skrivet **t**, **th** pe **d**. Ul lizherenn nevez, **z**, a voe implijet (hep kaout, gwir eo, talvoudegezh ar **z** gallek).

Ar pezh a c'hoarvezas gant ar brezhoneg a c'hoarvezas gant ar saozneg goude aloubadeg an Normaned. Ar saozneg a gollas kalz eus e c'herioù germanek, ha gerioù gallek a zeuas en o lec'h. Ar brezhoneg a gollas kalz eus e c'herioù keltiek, ha gerioù gallek ivez a stankas an toull. Framm yezhadurel ar saozneg a voe diskaret avat. Yezhadur ar saozneg-krenn a zo disheñvel-tre diouzh hini ar saozneg-kozh. Yezhadur ar c'hrennvrezhoneg avat a chomas dre vras evel hini an henvrezhoneg. Traoù 'zo, displegadur ar verboù, da skouer, a zeuas eeunoc'h. Hogen ne voe eilpennet netra.

128

Ar galleg, evel am eus lavaret, a zeuas mui-ouzh-mui da vezañ yezh an dud uhel. Pa voe dilezet al latin en dielloù kefridiel, e voent skrivet, n' eo ket e brezhoneg, hogen e galleg. Ha koulskoude, hep mar ebet, un nebeut tud desket a zalc'has c'hoazh d' ar yezh ha d' an hengoun broadel. Hervez doare e oant

beleien, bourc'hizien, zoken ivez tudjentil.

Penaos diskleriañ panevet se e vije bet savet, adalek ar 15-vet kantved betek diwez ar 17-vet ha marteze derou an 18-vet, barzhonegoù hervez reolennoù gwerzaouriezh dam-heñvel ouzh ar re implijet e kembraeg ? Anat eo, seurt reolennoù a zo koshoc'h eget ar mare ma voe troc'het an darempred etre Breizh ha Kembre, koshoc'h eta eget an 11-vet kantved

Mar sellomp pizh ouzh yezh ar barzhonegoù-se, e verzomp daou dra :

1) N' eo ket hepken reolennoù gwerzaouriezh a veze heuliet strizh. Reolennoù yezhadur a veze heuliet strizh ivez. Ar skrivagnerien a oa bet kelennet mat. Ret eo krediñ e oa skolioù ma tesked enno ar yezhadur koulz hag ar werzaouriezh.

2) Gerioù kozh, gerioù na vezent mui graet ganto er yezh pemdeziek, a veze implijet gant ar varzhed, darn anezho gerioù keltiek, kavet en henvrezhoneg pe c'hoazh e kerneveg pe e kembraeg. Penaos o dije anavezet ar gerioù-se hep studi ?

Neuze ez eus kudenn ar gerioù amprestet. Aloubet e voe ar c'hrennvrezhoneg gant gerioù romanek. Darn eus ar gerioù-se hep mar a zo deuet dre ar werin. Kemeret int bet er rannyezhoù romanek, kar d' ar galleg, komzet e kornog Frañs pe e Gorre-Breizh ; dont a reont eus al latin-pobl pe amprestet int bet diouzh ar frankeg, ar yezh c'hermanek komzet gant ar Franked en em ziazezas en hanternoz Bro-C'hall e dibenn ar 5-vet kantved. Hogen un darn vras a zo bet amprestet gant gouizieien diouzh al latin pe ar galleg lennek. E krennvrezhoneg evel en henvrezhoneg ez eus gerioù lezennel, yezhadurel, skiantel na c'hallent ket bezañ bet implijet na zoken komprenet gant ar bobl.

Bez' e oa eta, eus an 12-vet kantved betek ar 17-vet, ur rummad tud desket a skriva brezhoneg, evel ma oa bet a-raok. Ar yezh a anvomp krennvrezhoneg a zo yezh skrivet an dud-se. Evel an darn vuiañ eus ar yezhoù lennek e oa hengounel, arzoberiet, disheñvel e meur a feur diouzh ar yezh implijet gant ar gouerien ha tud izel ar c'hêrioù.

129

Souezhus eo, ha gwir koulskoude : hogos dic'hallus eo amzeriadañ ur skrid krennvrezhonek diouzh ar stumm anezhañ. Da skouer, miret ez eus bet ur barzhoneg savet da geñver kurunidigezh an dug Frañsez III (mab Frañsez I roue Frañs). Gouzout a reomp e voe kurunennet e Roazhon e miz Eost 1532. Hep mar eta e voe skrivet ar barzhoneg er bloaz-se. Diouzh an danvez e c'hallfemp divinout e teu eus mare an Azginivelezh. Diouzh ar yezh avat, ne c'hellomp lavarout nemet un dra : n' eo nag henvrezhoneg na brezhoneg-bremañ.

Kalz eus an testennoù krennvrezhonek a zo pezhioù-c'hoari. Gouizieien 'zo o deus kavet iskis e vije bet displeget dirak ar bobl pezhioù-c'hoari savet en ur yezh ken lennek. Padal, displeget e vezent, hag e teue tud a-vern d' o gwelout. An darn vuiañ eus an arvesterien ne gomprenent ket an holl c'herioù, hogen sur-mat e komprenent a-walc'h evit heuliañ an darvoudoù. Hag alies, er pezhioù tennet o danvez eus an Testamant Kozh, an Testamant Nevez ha buhez ar Sent e ouient an istor a-ziaraok.

* * *

A-hed ar wech, e-doug prantad ar c'hrennvrezhoneg evel bepred, e kemme yezh an divizoù pemdeziek hag e veze dispennet e rannyezhoù.

Petra a ouzomp-ni bremañ a-zivout ar yezh-se ?

N' eus nemet roudoù dister eus ar rannyezhoù en testennoù. Bez' ez eus ur roll, ennañ war-dro 40 ger, dastumet e dibenn ar 15-vet gant ur beajour alaman, skrivet gantañ evel m' en doa o c'hlevet, skrivet fall avat. War a seblant, an den pe an dud o doa komzet gantañ a zeue eus penn pellañ ar brezhonegva er

gevred, nepell diouzh Naoned. Hogen n' haller ket bezañ sur.

Div arroudenn verr eus ur barzhoneg, skrivet en ur stumm digustum, embannet gant J. Loth, a c'hell bezañ gwenedek. Ken distreset eo ar skrid evelato ma n' eus ket tu da c'houzout resis.

Neuze, pezh a zo pouezusoc'h, ez eus testennoù moulet er 17-vet kantved, a ro un alberz eus doare-distagañ Bro-Leon. Er c'hantved-se e voe embannet ul levr, e 1626 evit ar wech kentañ, a greder, ul levr-divizoù gant frazennoù gallek diouzh un tu, ha frazennoù brezhonek o klotañ outo diouzh an tu all : " Kolokoù Gwilherm Quicquer, eus Rosgo ". Ar brezhoneg, siwazh, a zo troet diwar ar galleg, a-wechoù ger-evit-ger. A-wechoù ivez, dre eurvad, an aozer en deus lakaet frazennoù brezhonek-rik. Sebezus eo ar c'hemm etre ar frazennoù-se hag ar re stummet diouzh patrom ar galleg. Kalz anezho a vefe lavaret hiziv c'hoazh gant tud ar bobl. Diskouez a reont e veze komzet hor yezh e bloavezhioù kentañ ar 17-vet kantved tostik-tra evel ma vez komzet bremañ.

130

Doare-skrivañ ar " C'holokoù " a zo koulskoude hini ar c'hrennvrezhoneg. Un nebeut gerioù hepken a zo warno tres al leoneg. An aozer a chom feal d' an hengoun lennek.

DEROU AR BREZHONEG ARNEVEZ.

E-kreiz ar 17-vet kantved e c'hoarvezas un darvoud bras en istor ar brezhoneg skrivet. Embannet e voe, e 1659, ul levr anvet " Le sacré collège de Jésus ", ennañ ur yezhadur, ur geriadur ha testennoù relijiel. Savet e oa bet gant ur jezuist, an Tad Maner, ganet e Breizh-Uhel. Ar galleg a oa yezh e gavell, ha desket en doa brezhoneg diwezhatoc'h en e vuhez. Merzet en doa pegen diaes e oa lenn ar skritur, hag e venoz a reas d'ober kemmoù.

Ur fonologour eus an amzer-mañ, evit kas da benn seurt kefridi, a zibabfe marteze ur rannyezh, a rafe un daolenn eus ar soniadoù anezhi, hag a savfe un doare-skrivañ nevez-flamm hervez e gavadennoù. Pe c'hoazh e studife meur a rannyezh hag e klaskfe skeudenniñ, e stumm pe stumm, pezh a zo boutin etrezo. An Tad Maner, na ouie mann eus ar fenologiezh, ne reas ket evel-se. Kemer a reas doare-skrivañ ar c'hrennvrezhoneg evel m' edo, lemel ar strollad lizherennoù ff, na veze mui distaget, lakaat ur virgulenn-grec'h er strollad lizherennoù ch (oc'h aber an diforc'h eta etre ch ha c'h), ha merkañ ar c'hemmadurioù e derou ar gerioù, na vezent ket merket betek neuze.

E zoare-skrivañ a voe diazezet war ar skritur hengounel. E yezhadur ivez a oa hini ar c'hrennvrezhoneg evel ma intende anezhañ. E-kreiz, ar 17-vet kantved ne voe ket graet ur yezh skrivet nevez. Ne voe graet nemet un nebeut kemmadennoù.

Ur frailh a oa digoret evelato, hag a yeas buan war ledanaat. Betek neuze ne oa nemet ur yezh skrivet unvan evit ar vro a-bezh. Setu ma voe frank an hent d' ar rannyezhoù d' en em ziskouez er skritur. An Tad Maner e-unan a roas ar skouer, rak mont a reas pelloc'h eget m' en doa merket, o skrivañ gerioù 'zo evel ma vezent distaget e Leon. Dizurzh ha dizunvaniezh a savas hep dale, ha se ne reas nemet kreskiñ gant an amzer.

131

Arabat krediñ koulskoude e stagas pep hini da skrivañ hervez e c'hiz evel ma komze er gêr. Ar skrivagnerien a oa alies tud desket, kalz anezho beleien. Levrioù ha dornskridoù brezhonek a oa ganto, a dalveze dezho da skouer. O oberoù a ranke bezañ komprenet, n' eo ket hepken en ur barrez, hogen ivez en ur c'hornbro, da vihanañ en un eskopti. Pevar eskopti a oa e Breizh-Izel : Leon, Kernev, Treger ha Gwened.

Ar pevar eskopti-se a zo a bouez evit istor ar yezh. E pep hini e oa ur melestrerezh. Lizhiri an eskibien, levrioù pedennoù ha kantikoù ha skridoù

relijiel all a veze graet evit un eskopti. Ar skridoù graet evit Bro-Leon a voe levezonet gant doare-distagañ Leon, ar re graet evit Bro-Dreger gant doare-distagañ Treger, ar re graet evit Bro-Wened gant doare-distagañ Gwened. Dre abeg pe abeg, ar re graet evit Bro-Gernev a voe graet hervez giz Leon, zoken a-raok unanidigezh eskoptioù Kernev ha Leon. A-boan ma kaver ur skrid relijiel levezonet gant doare-distagañ Kernev.

E-lec'h ur yezh skrivet hepken e voe, adalek kreiz ar 17-vet kantved, teir yezh skrivet : leoneg, tregerieg ha gwenedeg. Doare-skrivañ pep unan anezho ne oa ket diazezet-start, hini al leoneg hag ar gwenedeg stabilaet gwelloc'h eget hini an tregerieg koulskoude.

Dre an doare-skrivañ e c'hellomp damverzout penaos e voe distaget an teir rannyezh. N' hellomp ket avat gouzout petra oa distagadur ar rannyezh pe ar rannyezhoù komzet e Kernev. A-vec'h ma kavomp un nebeut gerioù skrivet, mat pe fall, hervez ar stumm kernevek, dreist-holl en 18-vet kantved, e geriadur bras Gregor Rostrenen ha Dom Le Pelletier.

* * *

Ret eo bremañ ober ur goulenn : ha gallout a c'hellomp ivez damverzout petra oa ar yezh pemdeziek etre kreiz ar 17-vet kantved ha derou an 19-vet ?

Setu amañ ar respont : n' hellomp ket e ober kalz gwelloc'h en amzervezh-se eget en amzervezh ar c'hrennvrezhoneg.

Er skridoù relijiel, troet peurvuiañ diwar al latin pe ar galleg, ez eo ar yezh disheñvel-bras diouzh ar yezh implijet en darempredoù etre an dud.

Er barzhonegoù hag er pezhioù-c'hoari ivez. Ar pezhioù-c'hoari a ra an darn vrasañ eus lennegezh ar mare-se, a zo savet en ur yezh arzoberiet evel ar pezhioù-c'hoari krennvrezhonek.

132

Dornskridoù niverus eus ar pezhioù-c'hoari-se a zo bet miret. Kemeromp ur skouer hepken : " Ar Varn Diwezhañ ". An dornskrid koshañ a zo eus an 18-vet kantved. Evel ar pezhioù-c'hoari all ez eo savet e gwerzennoù, war-dro 5.000 anezho. Rannet eo e pemp kevrenn, gant ur prolog hir dirak pep unan.

Mar sellomp pizh ouzh ar skrid, e welomp ez eo tennet diouzh ur pezh-c'hoari koshoc'h, krennvrezhonek. Lod eus gwerzennoù ar pezh-c'hoari kozh a zo chomet tost evel ma oant, gant enklottenoù. Aozer ar pezh-c'hoari nevez a oa gantañ hep mar un dornskrid eus an destenn gozh. N' en deus ket kemeret ar boan da gemmañ an arroudennoù en doa amprestet. Arroudennoù all avat en deus aozet e-unan. Ha krediñ a ra deoc'h en deus graet gant ar yezh a gomzed en-dro dezhañ ? N' en deus ket, zoken er pennadoù farsus. M' en dije graet, e vije bet feuket an arvesterien. Doue, an aelez, ar sent, ar brofeded n'hallent ket prezeg evel tud ordinal. Nag ivez ar gouerien, ar varc'hadourien, ar soudarded, pezh a zo souezhusoc'h. Ar c'hoariva a veze sellet outañ evel ouzh un dra distag diouzh ar vuhez voutin, ur meizad a rene, n' eo ket hepken e Breizh, hogen ivez e meur a vro. An aktored a ranke komz ur yezh ken espar hag ar gwiskamantoù a zougent.

Ur yezhoniour a vremañ a c'hell burutellañ ar pezh-c'hoari, linenn dre linenn, e spi da gavout un dro-lavar pobllel, hogos en aner. A-boan ma 'z eus unan.

E tregerieg ez eo savet ar pezh-c'hoari. Ennañ ez eus gerioù tregeriek-rik ha gerioù implijet dre-holl, dezho stumm Bro-Dreger. Bez' ez eus ivez avat gerioù niverus e stumm Bro-Leon, hag amañ-ahont gerioù e stumm ar c'hrennvrezhoneg.

Klasket ez eus bet nevez 'zo spisaat pelec'h ez eo bet savet ur pezh-c'hoari all eus an hevelep mare. Gant harp kartennaoueg-yezh P. Ar Rouz, o tresañ un niver linennoù, e kreded e vije bet tu da zizoleiñ al lec'h ma oa bet

ganet pe m' en doa bevet an aozer. N' eus netra da dennañ, da 'm soñj, diouzh seurt enklask. Aozerien ar pezhioù-c'hoari ne skrivent ket ar gerioù dres evel m' o distaged en o farrez. O skrivañ a raent peurliesiañ evel m' o doa o gwelet skrivet el levrioù hag en dornskridoù o doa lennet. Ouzhpenn se evit ober o gwerzennoù e tibabent alies ur stumm-ger a roe dezho ar glotenn pe an niver silabennoù rekis, hep derc'hel an disterañ kont eus an doare-distagañ. Mont a ran pelloc'h : ar stummoù iskis, dibaot, a blij dezho alies. Talvezout a raent da ginkladur.

133

BREZHONEG ARNEVEZ.

E bloavezhioù kentañ an 19-vet kantved e teuas un darvoud all en istor ar brezhoneg skrivet. Kregiñ a reas gant embannidigezh ur yezhadur e 1807 hag ur geriadur e 1821. An aozer oa Ar Gonideg.

Kemm a voe graet adarre en doare-skrivañ. Lavaret ez eus bet e oa un adreizhadur klok. Krediñ a reer en deus Ar Gonideg, genidik a Leon, skrivet ar gerioù evel m' o distaged en e rannyezh, o reiñ ur skeudenn resis eta eus ar brezhoneg komzet 150 vloaz 'zo e tu gwalarn Breizh-Izel. Studiet em eus labour Ar Gonideg pell amzer, ouzh e geñveriañ gant labourioù ar yezhadurourien hag ar c'heriadurourien a veve araozañ, hag e c'hallan lavarout ez eo faos.

E gwirionez, n' en deus ket graet kalz muioc'h eget eilskrivañ ar geriadurioù bras aozet en 18-vet kantved gant Pelletier ha Gregor Rostrenen. E " adreizhadur " eus an doare-skrivañ a oa bet tost da vat sevenet gant Pelletier. Hemañ ha Gregor o doa merket gerioù 'zo evel m' o doa o c'hlevet, hogen o labour a oa diazezet dreist-holl war dielloù savet er yezh lennek. Distagadur rannyezh Leon a oa chomet war-bouez nebeut pezh a oa a c'hantvedoù tremenet, ha setu perak e seblant Ar Gonideg reiñ stummoù leonek.

Strivadenn bennañ Ar Gonideg a voe c'hwennat diouzh ar yezh ar gerioù romanek a oa enni, dreist-holl ar re deuet a-vil-vern eus ar galleg. E bal ne oa ket taolennañ yezh ar bobl evel m' edo. Ur yezh c'hlan a felle dezhañ sevel, ken keltiek ha ma c'halle bezañ.

E oberenn vras, war-lerc'h e yezhadur hag e c'heriadurioù, oa troidigezh ar Bibl. Yezh an droidigezh-se a zo ken arzoberiet hag ar c'hrennvrezhoneg. Dre se e oa diaes da gompren evit ar bobl dizesk. Zoken ma ne vije ket bet berzet gant an eskibien, e vije bet nebeut lennet.

Ar Gonideg a gavas diskibien e-leizh. En 19-vet kantved e teuas skrivagnerien, a glaskas ober gant gerioù ha troioù-lavar ar werin, en ur lemel ar gerioù hag an troioù-lavar gallek. Ur yezh skrivet nevez a voe krouet ganto. N'eo ket avat ur melezour feal eus ar yezh komzet.

134

Glanyezhourien 'zo a yeas pelloc'h. Klask a rejont er skridoù kozh gerioù na oant mui e boaz, gerioù keltiek, daoust na oant ket holl ken keltiek ha ma kredent. Darn a gemeras gerioù kembraek, o reiñ dezho ur stumm brezhonek, a-wechoù gant nebeut a ampartiz. Gerioù nevez a voe ijinet, miliadoù anezho.

Er c'hontadennoù, er romantoù, er pezhioù-c'hoari embannet en 19-vet kantved, e kaver amañ-ahont tammoù kaozeadennoù a c'hell reiñ un alberz eus ar yezh komzet e korn pe gorn. Dastumet em eus kalzig anezho em " Geriadurig gallek-brezhonek an troioù-lavar poblet " (" Hor Yezh ", niv. 34/35), ha muioc'h c'hoazh em " Geriadur Istorel ". Ur fazi bras e vefe krediñ koulskoude e roont ur skeudenn klok eus ar yezh komzet.

* * *

Adalek kreiz an 19-ver kantved e voe graet studiadennoù skiantel war ar brezhoneg, hag ar ouizieien a gomprenas gwelloc'h eget kent talvoudegezh ar yezh

komzet. Ar « yezh vev », yezh ar bobl, a voe doujet, ha kregiñ a rejod da zastum danvez, n' eo ket diwar dielloù skrivet, hogen war-eeun diwar c'henou an dud.

Al lec'h kentañ avat a voe roet gant ar ouizieien-se d' ar marvailhoù, d' ar c'hanaouennoù, d' ar rimadelloù, d'ar c'hrennlavarioù h.a., en ur ger, d' al lennegezh-pobl. Dastumet e voent, a-wechoù mat, a-wechoù fall (rak an dastumerien ne oant ket atav yezhourien a vicher). Evel am eus lavaret, ar yezh-se a zo disheñvel diouzh yezh ar pemdez.

Studiadennoù yezhoniezh, dezho un diazez skiantel, a zeuas er-maez. Unan eus ar re bouezusañ a gaver e " Chrestomathie Bretonne " J. Loth, embannet e 1890. E dibenn al levr, e ro skouerioù eus nav isrannyezh en ur skritur soniadel.

E-lec'h reiñ avat treuzskrivadurioù eus divizoù ordinal etre an dud, e ro nav zroidigezh eus istor ar mab foran, tennet eus an Aviel. Ur fazi e oa. Ar re a skoazellas Loth da sevel an troidigezhioù-se a glaskas aozañ ar yezh evel pa vije bet kontet an istor gant un den dizesk. Hogen troidigezhioù e chomont, gant gerioù ha dreist-holl lavarennoù hag islavarennoù na vijent bet morse implijet er yezh voutin.

135

Neuze e kavomp taolennadurioù rannyezhoù. Darn anezho, evel hini rannyezh Kastell-Paol, gant Alf Sommerfelt hag hini rannyezh Plougouskan gant Kenneth Jackson, a zo mat. An distagadur eo avat a studiont peurgetket, hep teurel re a evezh ouzh an traoù all.

Kemeromp da skouer levr Sommerfelt. Ennañ ez eus 120 pajennad o taolenniñ ar soniadoù, 60 pajennad yezhadur (a lez ar gevreadurezh a-gostez, koulz lavaret), ha 16 pajennad « testennoù ». An testennoù-se a zo krennlavarioù ha pedennoù.

En e gentskrid, Sommerfelt a ziskler ez eo yezh ar pedennoù « ur yezh a-ziforc'h », pezh a zo gwir. Ar c'hrenn-lavarioù, er c'hontrol, emezañ, « a ro ur skeudenn resis a-walc'h eus ar yezh voutin », pezh a zo faos. Souezhus eo n' en dije ket ul lenneg evel Sommerfelt merzet ez eo disheñvel-bras yezh ar c'hrennlavarioù diouzh ar yezh pemdeziek, ha n' hellont ket skeudenniñ ur rannyezh.

Un dra all a zo. Ar re a daolenn ur rannyezh a glask alies kement a zo dibar, henstumm, livus. Pep ger, pep tro-lavar iskis a vez notennet gant aked. Kement a zo ordinal a vez lezet un tammig a-gostez. Goulennataet e vez tud kozh peurliesañ, war zigarez ez eo distreset yezh ar rummadoù yaouank.

Aes eo kompren perak e reont evel-se. Hogen daoust ha n' eus ket aze romantelezh ha n' eo ket skiantel-rik ?

* * *

Mui-ouzh-mui e vez graet bremañ gant bandennoù magnetek da studiañ ar yezh komzet. Lezet e vez tud da gaozeal evel ma reont bemdez etrezo, hag enskrivet e vez pep tra gant un ardivink. Dielfennet e vez neuze pezh a gaver war ar bandennoù, hervez distagadur, geriadur, ha yezhadur. An imbourc'herien a rank bezañ yezhourien a vicher.

Pa vezo graet evel-se gant ar brezhoneg, ha neuze hepken, hor bezo diskrivadurioù resis a-walc'h eus yezh ar pemdez.

* * *

Dalc'hit soñj dreist-holl eus ar pezh a fell din lakaat sklaer er studiadenning-mañ. Kement a ouzomp eus ar brezhoneg en amzer dremenet, - hag eus ar yezhoù all ivez, - a zo tennet diouzh skridoù. Tu a zo da heuliañ emdroadur ar yezh skrivet. Hogen eus ar yezh komzet ne ouzomp nemet nebeud, rak aet eo

gant an avel.

136

Hiziv hepken e c'hellomp kaout sonenskrivadurioù eus ar pezh a zo unan eus pouezusañ implij ar yezh : eskemm dre c'henou ar menozioù er vuhez ordinal. Arabat gortoz evit tennañ hor mad anezho.

NOTENN

Ar pennad-mañ a voe savet e 1970, hag a rae danvez ur brezegenn saoznek graet ganin en anv " Institiùid Ard-Léinn Bhaile Atha Cliath ". Abaoe ez eo aet war-raok studi ar brezhoneg komzet, a drugarez da labour ur rummad imbourc'herien nevez, darn anezho estrenien, evel Kenneth Jackson, W.U. Dressler, Elmar Ternes, M. McKenna, re all Brezhoned.

Evit ho pugale :

WANIG HA WENIG

kelaouenn skeudennet

Priz an niverenn : 1,50 lur

Koumanant : 10 lur

KERALORET - 29249 GWISENI

C.C.P. Roudaut 2 943 51 U Rennes

ISTOR BREIZH LA BORDERIE

troet gant ROPARZ HEMON

Brezel Bleaz ha Monforzh

Kendalc'h ar C'hentañ Maread

BERZH-MAT CHARLEZ BLEAZ

(Mae-Gwengolo 1342)

Saozon e Breizh.

Gwelomp bremañ perak e oa deuet diwezhat ar skoazell saoz gortozet gant kement a vall gant Janed Flandrez.

D' an 20 C'hwevrer 1342, evel hon eus lavaret, roue Bro-Saoz Edouarzh III en doa roet urzhioù evit ma vije kaset ur bagad soudarded da Vreizh. Loc'hañ a dleent d' ar 27 Meurzh. Gant an arsav-brezel etre Janed Flandrez hag ar Frañsizien, skoulmet d' ar 1-añ Meurzh evit echuiñ d' ar 15 Ebrel, e rankjod daleañ betek an deiz-se an disparti.

Ne voe nemet e deizioù kentañ miz Mae ma 'z eas ar soudarded war vor, dindan urzhioù Gaoter Manny. Dilerc'hiet kalz e voent gant ur barr-amzer ken spontus ma lakajont teir sizhun da vihanañ d' ober an treizh. Gaoter Manny a zilestras e Brest e-tro an 20 Mae. Ne oa ket c'hoazh sezizet Henbont, ha ne gredas ket mont diouzhtu da gaout kontez Vonforzh. Seul nebeutoc'h ma kavas digarez d' ober un dro-vrezel vrav, a-vec'h dilestret.

Kastell Tregaranteg.

Herve VII beskont Leon, unan eus startañ dalc'hidi Charlez Bleaz, a wele gant displijadur hogozik an holl dudjentil a Vro-Leon, en o zouez e wizien, o chom a-du gant Monforzh. E venoz a reas da lakaat un nebeud anezho da dreiñ, evel Tangi ar C'hastell hag Erwan Trezigidi. Hep mar ne ouezas ket penaos en em gemer, hag ez eas dezho gant gourdrouzoù ha rogentez. E-lec'h dont da grediñ eveltañ, e teujont da vezañ enebourien douet dezhañ.

138

Pa zilestras Gaoter Manny gant e soudarded, Tangi ar C'hastell a ginnigas dezho mont da gouezhañ war ar beskont lorc'hus. Edo hemañ e Tregaranteg, war-hed ur c'hwec'h lev bennak diouzh Brest en hanternoz. Ur c'hastellig dister e oa, ha n' halle ket herzel pell. An arsailherien kennebeut n'hallent ket ober ur seziz hir, rak an holl anezho, nemet ar renerien, a yae war droad. Herve Leon a oa gantañ un nebeut kerent pe geneiled hag ur gwarnizon a hanter-kant den-armoù.

Manny ha Tangi ar C'hastell a zegouezhas beure-mat, o soñjal hep mar skeuliata ar mogerioù. C'hwitañ a rejont, rak ar gwarnizon, dihunet abred a-walc'h gant ar c'hedourien, a savas raktal. Neuze e voe lakaet an tan e dor ar c'hastell. E-pad ma teve, marc'heien ha tud-armoù Herve Leon, pignet war gezeg kreñv, a oa prest da sailhañ taer er-maez, o krediñ e vije aes dezho, gant o mirc'hed-kad hag o harnezioù-houarn, lakaat d' an tec'h daou pe dri c'hant troadeg armet-fall.

Ar re-mañ avat a yeas prim e porzh ar c'hastell, a oa strizh, hag an dud war varc'h, re nebeut a frankiz dezho, a voe gronnet. Tregont eus hanter-kant

den-armoù a voe paket, en o zouez marc'heien a renk uhel, evel ar beskont Herve Leon, e vreur Elard pe Alard, e genderv Olier, aotrounez ar Pont, Rosmadeg, Charnelles, Pont-Plankoed, Joue. Holl e voent kaset da Vro-Saoz.

Ar Saozon en Henbont.

Setu aze kentañ taol Gaoter Manny e Breizh. Atizet gant an trec'h-se, e reas a-gleiz hag a-zehou ergerzhadegoù heñvel, n' anavezer ket dre ar munud. Hervez ur c'hronikour, n' en dije kollet en holl nemet daou wareger hag ur floc'h, pezh a zo diaes da grediñ. Ne vern penaos, seurt taolioù-kleze, evito da vezañ graet berzh, a oa darvoudoù a nebeut a bouez.

Un dra fall a zeuas da heul. Manny a zisoñjas e oa deuet e Breizh da gentañ-holl evit en em lakaat, eñ hag e vagad, dindan urzhioù Janed Flandrez, d' he skoazellañ en he stourm a-enep Bleaziz en doare a vije kavet ar gwellañ ganti. Dre se e tegouezhas gant kalz re a zale en Henbont. Ma vije chomet en hent tri devezh c'hoazh, e vije bet kollet ar briñsez. Ar skoazell vinniget-se, dilerc'hiet betek ar vunutenn diwezhañ, betek pred an dic'hoanag, a reas avat ma voe skedusoc'h ha fromusoc'h he zrec'h.

139

Ar bagad soudarded deuet gant Gaoter Manny a oa ennañ 3.000 den d' ar muiañ. A-walc'h e oa bet evit dieubiñ Henbont. Ne oa ket a-walc'h da virout ouzh an armead c'hall-ha-brezhon da vont war-raok, rak peder pe bemp gwech niverusoc'h e oa.

Ar Frañsizien o vont war-raok.

E nebeutoc'h eget tri miz goude bezañ aet diouzh Henbont (etre ar 25 hag an 30 Mezheven 1342), e sujias un darn vras eus Breizh, o kemer Ar Gemene, Alre, Gwened, Gwenrann, Kroazig, Karaez, Yugon h.a. Trec'h ar Frañsizien, pe ar Frañsizien unanet gant Breizhiz, a zo bet danevellet gant Froissart gant kalz a zudi, pezh a ziskouez ne dleer ket nac'h talvoudegezh e desteni, evel ma ra skrivagnerien 'zo, war zigarez e oa muioc'h a-du gant ar Saozon eget gant ar Frañsizien.

Brezel dre vor.

Evit kaout kemm, Loeiz Spagn a lakaas en e benn ober brezel, n' eo ket war vor, hogen dre vor. E porzh Gwenrann, da lavarout eo e Kroazig, e oa un niver bras a listri karget a win, kaset di gant marc'hadourien eus Poatev, Gwaskogn hag Ar Roc'hell evit gwerzhañ er vro. O c'hemer a reas, hag a-unan gant Oton Doria, rener ar Jenoz a harpe an armead c'hall-ha-brezhon, e leunias anezho gant gopr-soudarded spagnol ha jenoat evit redek ha preizhañ a-hed aodoù Breizh. Ar Vrezhoned a nac'has mont ganto.

« Pell amzer e verdeas Loeiz Spagn, Oton Doria hag o bagad Spagnoled ha Jenoz, o heuliañ ribl mor Breizh, ur wech e broioù Konk-Leon ha Kraozon, hag alies e-kichen Kemper ha Kemperle, - broioù a-du gant Monforzh, - « hag e lakaent war o listri preizhadenoù a gavent hep niver, a skrapent digant pobl ar maezioù hag ar bourc'hioù na oant ket mogeriet. Hag an dud a-ziwar ar maez a veve e-tal ar mor, dreist-holl e-tal ar porzhioù ma touare al listri, a veze ken gwasket, hag i dizifenn, ma lezent o ziez goullo evit mont da chom pell. » (Ar Baot).

Forbannerezh e oa, evel ma weler. Kastizet e voe en diwez.

140

Emgann Kemperle.

Keloù eus al laeroñsioù-se a voe klevet hep dale en Henbont. Eno en-dro da

Janed Flandrez, e oa c'hoazh darn eus ar varc'heien o doa stourmet e-pad ar seziz vrudet, en o zouez Manny, Amaouri Klizun, Trezigidi, Kadoudal, ar vreudeur Spinefort. Truez o devoe ouzh « dienez, sujidigezh ha gwaskidigezh an dud paour a Vreizh », hag e rejont o menoz o digabestrañ.

Listri a-walc'h a oa e porzh Henbont. Pignat warno a rejont gant o bagad soudarded a war-dro 2.000 den, gwaregerien ha tud-armoù.

Ar strollad-listri saoz-ha-brezhon, o c'houeliañ etrezek ar c'hornog, a welas buan e pleg-mor Poull-Du, e traoñ stêr Gemperle, strollad-listri spagnol-ha-jenoat Loeiz Spagn ha Doria. An daou-mañ a oa diskennet d' an aod gant o bagad, un 3.000 den bennak, hag edont a-zevri o preizhata hag o tangwallañ dre ar rannvro. War-dro kant den hepken o doa lezet da ziwall o listri.

Ar Saozon-ha-Brezhoned a zeuas buan a-benn eus ar c'hant den-se. Kavout a rejont al listri leun-barr a binvidigezhioù laeret. Ouzh o lezel dindan wardoniezh strizh, e redjont war-lerc'h al laeron spagnol ha jenoat.

Ne voe ket diaes o c'havout. Peurskrapet gante kement a oa e pep ti, e lakaent an tan ennañ. Peuliadoù flammoù ha moged, o sevel en oabl a bep tu, a verke an hent o doa kemeret. Kouerien a gerzhe harp war o roudoù, pikoù ha batarazoù ganto, e spi da lazhañ unan bennak eus ar forbidden-se ha da ziframmañ diouto tamm pe damm eus ar pezh o doa laeret. Kemenn a rejont d' ar Saozon-ha-Brezhoned edo ar breizherien o tistreiñ trema o listri.

Manny a rannas e vagad e teir c'hevrenn. An eil hag an trede a guzhas en ur bodad gwez, hag eñ a gerzhas e penn an hini gentañ, ambrouget gant marc'heien vrezhon, Gwilherm Kadoudal, Herri Spinefort, Jafrez Malastreg, ha re all.

Pa voent gwelet gant Loeiz Spagn, hemañ a gredas e oant kêriz Kemperle, diboell ha divergont a-walc'h evit dont d' e dagañ. Daou zen avat eus e arme, kaset da anavezadenniñ, a zistroas goude ur pennad da lavarout dezhañ :

« Aotrou, Saozon ha Brezhoned int. Anavezet hon eus giton Gaoter Manny, ruz gant teir c'hevrenn du, hag ar re a welit ahont a zo gwaregerien saoz. Deoc'h da c'houzout petra ober. »

« Ret eo stourm ! » eme Loeiz. « N' hellomp ket tec'hout ! »

141

Hag e redas taer etrezek kentañ kevrenn ar Saozon-ha-Brezhoned. Ar re-mañ, kalz bihanoc'h o niver eget hini ar Spagnoled-ha-Jenoiz, a voe gwallaozet. Tost e oant da blegañ pa zifourkas an div gevrenn all eus o bodad gwez. En em unaniñ a rejont gant ar gevrenn gentañ, ha gounit hep dale an tu kreñv war o enebourien. Kalonek e harzas ar re-mañ e-pad pell koulskoude, hogen peurfaezhet e voent en diwez. Ar gouerien a roe dorn d' ar Saozon-ha-Brezhoned d' o lazhañ. Eus tri mil ma oant, n' eus nemet tri c'hant a-boan a c'hallas tec'hout, hag hervez tud 'zo, tri-ugent hepken. E-touez ar re varv e oa Alfoñs Spagn, niz Loeiz. Hemañ a gare anezhañ evel ur mab hag a leñvas dezhañ pell.

Tec'hadenn Loeiz Spagn.

Loeiz Spagn ha Doria, o listri e dalc'h an enebourien, a gavas ur vag vihan en un oufig. Pignat a rejont enni raktal, ha goueliañ a-dizh etrezek ar reter. Manny, a felle dezhañ pakañ Loeiz, koustje pe goustje, a yeas diouzhtu e bourzh unan eus e listri gwellañ war-lerc'h ar vag hag a zeuas tost dezhi. Merdeñ a rejont a-hed an aod betek genou ar Wilun. Bag Loeiz a savas gant red ar stêr, lestr Manny atav ouzh he heul. Loeiz avat a zouaras e Redon, a lammas war gein ur bided hag a c'haloupas a-herr hep chom a-sav neblec'h betek Roazhon. Saveteet e oa.

Hennezh eo unan eus iskisañ darvoudoù ar brezel. Evit Loeiz Spagn, taer ha lorc'hus evel ma oa, e oa an drouziwez e Kemperle ur c'hwitadenn spontus, ur

mezhekadur gwadek. Er brezel dre vras koulskoude, an taol-kaer-se ne oa ket eus ar pouezusañ. Ne oa ket a-walc'h da ober kempouez d' ar berzh-mat o doa graet Bleaziz e kalz tachennoù all.

Ret e oa bet, gwir eo, da Vleaziz diskregiñ diouzh seziz Henbont, pezh a oa un droukverzh grevus, a dlee tennañ da vras. Padal e c'haller lavarout e oa deuet an trec'h hogos atav gant tuad Bleaz betek miz Gwengolo 1342 e kreisteiz Breizh, pennañ lec'h ar stourm.

Skoazell ar Saozon da Vonforzhiz ne oa en em ziskouezet betek neuze nemet dre ar bagad, bihan a-walc'h e niver, degaset gant Gaoter Manny. Skoazell ar Frañsizien da Vleaziz a roas da Charlez, e 1341 ha 1342, div armead kaer ha stank.

Ha tu a vo d'ar Saozon, dre ma kreskint o harp, kempouezañ an harp gant ar Frañsizien, trec'hiñ warno, ha kemmñ red an tonkadur er brezel ?

Se a welimp dizale.

Doktor-stad war or skiantoù natur Imbourc'her en I.N.R.A.

Gouennoù loened doñv e Breizh

Bez' ez eus e Breizh, gouennoù loened doñv na gaver ket e lec'h all.

Emañ greanteladur al labour-douar o kas da get ar gouennoù-se, nerzhus ha gouennus ha n' o deus ket a ezhommoù bras. Ar gouennoù-se a zo o vont da get buan-tre ha mall bras eo ober war o zro evit o mirout hag o gwerzhañ d' an estrenvro.

Ar gouennoù n'eus ket mui anezhe a zo yer Janzieg (Janze) hag ar roñsedigoù brezhon (" bided ").

Setu amañ ar gouennoù a chom c'hoazh anezhe :

AR OUENN GOUKOUG ROAZHON (yer). - Chom a ra anezhe e daou di sevel-yer, unan e Gwern-Roazhon hag egile e " Le Cellier " e Bro-Naoned.

Mentek eo ar ouenn-yer-se hag ar c'hilhog a bouez pevar c'hilo. Perzhioù niverus o deus kentoc'h eget ur perzh resis a vefe bet klasket e wellaat betek re. War un dro ez int dozverezed mat hag e roont ivez kig prizet.

MOC'H GWENN AR C'HORNOG. - Bras a-walc'h int ha korfet mat, o divskouarn hir ha ledan a gouezh muioc'h pe nebeutoc'h. Kreskiñ a reont buan-tre, o morzhedoù a zo bras ha tev. Ar gwizi a zo dous, magerezed ha mammoù mat int ivez. Gouennus-tre int ha moc'hañ a reont div wech ar bloaz.

MEOT ENEZ EUSA HA MEOT MENEZ ARE. - Loened bihan ez int, gant blev hir, du en Enez Eusa ha gwenn er Menez Are. Nerzhus-tre int, kustumet mat ouzh barradoù gwall-amzer an inizi hag ar menezioù. Gouennus-kenañ int ha n'eo ket rouez dezhe kaout tri oan war un dro. Menel a ra bremañ daou dropellad, unan er " Parc d'Armorique " hag egile e Bro-C'hall (Nord).

KEZEG MENEZ KREIZ PE MARC'HOUGOU-TENN BREIZH. - Kezeg-tenn nerzhus int ha tremen a reont gant peuriñ treut ar menez hag al lanneier. Evito da dremen gant nebeut a voued ez int kalet ha kreñv war un dro.

KEZEG-TENN BREIZH. - Dont a reont dre vras diwar ar " Percheron " bet implijet evit gwellaat ar ouenn. Loened plijus, sentus, nerzhus ez int ha bevañ 'reont diwar nebeut.

AR C'HEZEG-TENN POST BREZHON. - Deut int diwar paradur gouenn lec'hel Bro-Leon ha gouennoù gall ha saoz, war-lerc'h savidigezh an tiez-kezeg. Ar paradur gant ar ouenn Norfolk saoz eo en deus roet ar " postier " brezhon brudet. Kezeg kreñv ha tev ez int.

AR SAOUT BREZHON. - War ur ouenn hepken, ar saout brizh-du (pie-noire) ez eo diazezet an tri seurt dibar da Vreizh. Diwar ar ouenn-se e teu ivez ar saout " brizh-ruz " ha " Froment du Léon " en Hanternoz Breizh.

Ar saout brizh-du brezhon a zo unan eus ar gouennoù mistrañ. E-keñver pouez ez int saout-laezh dibar ha rouez eo ar gouennoù a c'heller kaout diwar o laezh kement a amann. Reiñ a reont dek gwech o fouez a laezh. N'int ket kizidik tamm ebet o vezañ ma vevont el lanneier. Bevañ a reont kozh, ur perzh hag a zo talvoudus-tre evit ar saverien chatal dre ma n' eus ket ezhomm kalz annoarezed

(unan diwar zek) evit kemer lec'h ar re all pa 'z eo ret kaout ur vuioe'h " Frizon " evit peder. Dre m' o deus ar saout brizh-du eskern moan-tre e roont muioc'h a gig eget saout Bro-Friz.

Ar saout breizhek brizh-ruz a zo disheñvel dre liv o c'hroc'hen, a-hend-all ez int heñvel dre vras.

Saout " Froment " Bro-Leon a zo brasoc'h. Ur ouenn wellaet ez eo. O blev a zo ruz-sklaer tost da liv melen-orañjez. Saout mat-tre int, pounner, mentek, stummet mat ha reiñ a reont kalz amann.

Pa bouez ar vuoc'h-se 400 kg, well-wazh, e c'hell reiñ war-dro 3 500 litrad laezh. Al laezh a zo druz ha c'hwezek litrad a zo a-walc'h evit reiñ ur c'hilo amann.

AR SAOUT ARVORIAT. - Diwar baradur ar ouenn vrizh-du gant saout Durham e teu ar saout arvorat. Mont a ra da get liv gwenn o c'hroc'hen hag o c'horf a zo brasoc'h. Daoust ma ne roont ket kalz a laezh e roont un tamm mat a amann hag un tamm mat a gig ivez. 2 300 litrad laezh e roont gant ur feur amann 36,4. Boued fonnus a rankont kaout ha ret eo o derc'hel er chraou pell a-walc'h.

SAOUT NAONED. - Ur seurt saout Vandeat eo hag a vez kavet tro-dro Pembro. Ur ouenn vat eo evit ar c'hig hag al laezh. Aet eo tost da vat da get.

Hervez an INRA (Institut de la Recherche Agronomique) ez a war goazhañ da vat, er mare-mañ, niver ar bared : 300 pe 400 kole-tarv a zo trawaic'h evit speriañ 75 % eus ar saout e Bro-C'hall. Niver ar gouennoù enne ouzhpenn 100 000 buoc'h a c'hell kaout leueoù a zo kouezhet eus 21 da 7 e 1971. Evit pezh a sell ar moc'h ne vano hepdale nemet div pe deir gouenn a orin estren. Koll kement a zoareennoù ma n' eo ket bet zoken studiet o efed e-keñver hon ezhommoù da zont a zo ur seurt « saotradur » ma vo diaes d'ar gevredigezh stourm outañ hep mestroniañ lusk hec'h emdroadur.

Ret eo dimp anzav o devoa graet berzh doareoù labour-douar ha sevel chatal hon tadoù. Abalamour d' an diaesterioù grevus a sav gant al labour-douar greantelaet ez eo dav dielfennañ ar c'hudennoù hag adwelout stad an traoù evit mad an amzer da zont.

Dre chañs hon eus e Breizh saverien-chatal fur hag o deus miret hor gouennoù kozh hag a oar petra eo labourat an douar.

Bezomp anaoudek en o c'heñver, a-drugarez dezho eo e c'hellomp rakwelout amzer da zont hol labour-douar gant nebeutoc'h a breder.

(Lakaet e brezhoneg gant Laorañs GUILLAUME.)

Ar Bonedoù Ruz

Petra 'zo nevez e Breizh
Nemet krougerezh e-leizh. (1)

Brudet e oa, hep dezañ anavezet mat, emsavadeg ar Bonedoù Ruz hag ar Paper Timbr. Strollad Broadel Breizh en doa graet kalz, etre an daou vrezel, evit brudañ an emsavadeg : lakaet e oa bet ur blakenn war di ar Balp e Kergloff, Kerlann en doa savet " Gwerz Ar Balp " (2). Tabut a oa savet etre " Breiz Atao " ha " Breiz " (kelaouenn renet gant Erwan ar Moal) diwar-benn ster an darvoudoù, hogen abaoe ar brezel ne oa ket bet alies keal eus ar Bonedoù Ruz.

Lidet eo bet warlene Trede Kantved Deiz-ha-bloaz an emsavadeg : aozet zo bet gant UDB un dro-Vreizh evit pezh-c'hoari Paol Keineg " Nevez-Amzer ar Bonedoù Ruz " (e galleg) ; ar PCF en deus aozet bodadegoù hag embannet ul levr " Les révoltes bretonnes de 1675 " savet gant daou istorour, Y. Garlan ha C. Bières, hag a zalc'h kont eus ar pennadoù embannet abaoe labourioù La Borderie ha J. Lemoine.

Setu bremañ ul levr all o tont er-maez " Les Bonnets Rouges ", embannet gant ESB er rummad levrioù " 10/18 ". Souezhet e vo moarvat al lennerien o sellout ouzh ar golo, rak lakaet zo warnañ ur boned ruz gant ur gokardenn triliv evel ma veze douget gant ar « Jacobins » (3).

Al levr a dalvez ar boan bezañ lennet. Teir oberenn ez eus ennañ : 1) ur studiadenn " Les Bonnets Rouges, les historiens et l'Histoire ", savet gant ESB a-ziwar pennadoù bet embannet e 1974-75 war ar gelaouenn " Emsav " (42 pajenn) ; 2) oberenn Arthur de La Borderie " La Révolte du Papier Timbré advenue en 1675 ", adembannadur ul levr deuet er-maez e 1884 (164 pajenn) ; troidigezh pennad Boris Porchnev " Paliou hag azgoulennou ar gouerien e-pad emsavadeg breizhat 1675 ", embannet e rusianeg e Moskva e 1940, ha troet e galleg evit ar wech kentañ (128 pajenn).

(1) Bomm-lavar klevet digant va mamm-gozh Jan ar Glas, eus parrez Lanveog.

(2) Lod anezhi a zo bet embannet war z " Dihun ". Mat e vefe embann anezhi en he fezh.

(3) Arabat krediñ e vefe gant al liv ruz ur ster dispac'hel bennak d' ar mare-se. Ar boned ruz - pe c'hlas - a veze douget gant ar gouerien vreizhat er XVIIvet hag en XVIIIvet kantved. Leoniz taolennet e Emgann Kergidu a zoug ivez ar boned, ha douget e veze c'hoazh gant Plougastelliz e dibenn an XIXvet kantved.

Anavezet mat eo Porchnev gant an istorourien evit e studiadennoù diwar-benn an emsavadegoù kouerien e Bro-C'hall e-doug ar XVIIvet kantved, ha tabutoù a zo bet etrezañ hag un istorour gall arbennigour war an hevelep kudenn, Roland Mousnier.

Evit Porchnev, an emsavadeg a zo un emsav rakdispac'hel, tarzhet eus stourm ar renkadoù etre kouerien ha noblañs ; en em sevel a ra kouerien Breizh-Izel a-enep an tailhoù nevez, a-enep ar gwirioù giaddalc'hel (ar C'hamparzh, an anerioù), an deogoù paeet d' an Iliz, ha goulenn a reont ma vefe lamet an holl druajoù-se ; goulenn a reont ivez ma vefe lakaet ar gouerien war an hevelep renk hag an noblañs. Ne savont ket a-enep d' an tailhoù nevez nemetken, evel ma ra er XVIIvet kantved ar gouerien c'hall pe okitan, hogen a-enep d' ar reizhiad gladdalc'hel hag a-enep galloud hollveliek ar Rouantelezh C'hall war un dro.

Setu perak ez eo an emsavadeg ur stourm « rakdispac'hel » o tiougan Dispac'h 1789, hogen evit B. Porchnev ar stourm renkadel a zo ivez ur stourm a zieubidigezh vroadel rak Breizh a oa abaoe 150 vloaz en ur stad a sujidigezh vroadel. Emsavadeg ar gouerien a zo ivez un taol-arnod evit disteurel mac'homerezh Bro-C'hall, un « tiraniezh enebet ouzh ar frankiz arvoriat », ar « Gabelle » (an tell war an holen) deuet da vezañ un doare euzhvil hag ar Paper Timbr o vezañ evito arouezioù ar gwaskadur estren ; gwashoc'h eo o enebiezh ouzh an noblañsoù hag ar veleien dre m' o deus « trubardet ar vro » oc'h en em lakaat a-du gant ar gouarnamant gall.

Kavout a ra neuze Porchnev en emsavadeg un diougan eus an emsav broadel en XXvet kantved. En em harpañ a ra ivez war ur studiadenn graet gant ar yezhoniour Nikolai Marr : " Yezh ar bihanniver broadel breizhat " e-lec'h ma skriv hemañ : « N' eus forzh pe anv a vez roet d' ar gudenn vreizhat : broadel, bihanniver broadel, arallpobl, douetus eo d' hor meno e vefe diskoulmet dre emglev, pe gentoc'h an diskoulm dre emglev ne zisoc'hfe war netra. Ur stourm a zo e go ma savo an elfennoù oberiant eus yoc'h labourerien Vreizh, ar gouerien unanet gant renkad ar vicherourien hag o c'hefredourien ». B. Porchnev a lavar neuze : « kavout a reomp er XVIIvet kantved gwriziennoù istorel pellañ ar stourm-mañ, » hag e verk « ne blij kit kalz d' an istorourien c'hall menegiñ an neuz a zieubidigezh vroadel a zo gant emsavadeg 1675 ». Setu perak marteze n'eo ket bet troet e-bennad e galleg betek-hen.

Kavout a reomp moarvat ur skouer eus an emzalc'h-se e levr Y. Garlan ha C. Nières ; daoust ma tegemer an daou istorour dezrann Porchnev e-keñver stourm ar renkadoù ne venegont ket tezenn an istorour soviedel diwar-benn ar stourm broadel.

Studiadenn E.S.E. a dalv ar boan bezañ lennet, rak goude un diverrañ eus an darvoudoù istorel, e ra un dezrann eus an div destenn all hag eus an diskleriadurioù a zo bet kinniget. Diforc'h a reont teir dezenn pennañ :

1. An emsavadeg a zo sellet da gentañ evel ur stourm a-enep an tailhoù hag a-enep kreizennadur ar stad, evel an emsavadegoù all c'hoarvezet er Stad C'hall e-doug ar XVIIvet kantved (levrioù R. Mousnier).

2. An emsavadeg a zo da gentañ ur stourm rénkadel etre kouerien ha noblañs (La Borderie, Y. Garlan ha C. Nières daoust d' o sav-poentoù enebet).

3. An emsavadeg a zo war un dro ur stourm renkadel hag ur stourm broadel (B. Porchnev).

146

Dezrannet eo menozioù La Borderie, goude bezañ meulet talvoudegezh istorel e-levr, ha studiadenn E.S.B. a laka anat n' en em ziskouez tamm ebet brogarantez vreizhat La Borderie en e levr ; se a c'hell bezañ displeget dre m' eo La Borderie difenner an noblañs hag enebour an dispac'h (soñjal a ra e darvoudoù Kumun Bariz pa skriv e levr) met ivez dre m'eo troet broadelouriezh vreizhat La Borderie davet an tremened ; istor Breizh a zo echu evitañ.

Dudiusoc'h c'hoazh eo dezrann pennad Porchnev, rak daoust ma tegemer aozerien ar pennad klozadur Porchnev ez eo evit abegoù disheñvel. Dezvarn a reont an hentenoù implijet gant an istorour, an hentenn varksat dogmatour hag ar pleg da zisplegañ an darvoudoù tremenet (emsavadeg 1675) dre an darvoudoù c'hoarvezet en amzer-da-zont (Dispac'h 1789, Emsav broadel Breizh en XXvet kantved). Tostaat a reont er c'heñver-se displegadur Porchnev ouzh hini meur a istorour breizhat, tuet da glask diarogerien d' an Emsav.

Aozerien ar studiadenn a zegas neuze o meizadur eus an darvoudoù hag eus an Emsav ; nac'h a reont e vefe an Emsav broadel a-vremañ un herezh eus ar vroad vreizhat deuet eus an amzer dremenet hogen diogeliñ a reont ez eus anezhañ un anadenn nevez : n' eo ket ganet an emsav eus gwaskadur ar bobl vreizhat, hogen an Emsav an hini eo a grou ar gudenn vroadel. Evel just hep istor Breizh hag an elfennoù broadel degaset gantañ ne vefe ket a Emsav, hogen an istor n' eo nemet

un « amplegad » eus an Emsav. Tarzhañ a ra bremañ a-benn ar fin n' eo ket kement eus gwaskadur ar vroadelezh vreizhat met eus enkadenn ar vroad c'hall hag ar sevenadur gall. An enkadenn-mañ a c'hell reiñ d' an Emsav an tu da dizhout an hollvedelezh o tec'hout evel-se eus ar brovinsiadegezh. E.S.B. a nac'h a-hend-all bezañ broadelour rak evitañ ar vroadelouriezh a zo deuet da vezañ provinsiadegezh. Souezhus eo ar menez-se, rak abaoe ur c'hantved an holl stourmoù-dieubiñ o deus kemeret ur stumm broadel ha tizhet evel-se an dachenn hollvedel (ar Viet-Nam evit kemer ur skouer) ha gwir eo ivez evit al lennegezh. Met se 'zo ur gudenn all...

Spi hon eus e vo graet studiadennoù all diwar-benn emsavadegoù ar Paper Timbr hag ar Bonedoù Ruz, rak n'int ket bet studiet a-walc'h. Ret e vefe keñveriañ anezho muioc'h gant an emsavadegoù all c'hoarvezet e Breizh hag e Frañs, rak kudennoù a chom hep respont : da skouer perak eo chomet emsavadeg ar gouerien bevennet da Vreizh Izel ? peseurt roll o deus c'hoariet ar re ne oant ket kouerien en emsavadeg ha peseurt ster reiñ d' o emzalc'h ? perak n' eus mui a emsavadeg a-enep an noblañs da c'houde ha perak er c'hontrol en em led ar chouanterezh dre Vreizh a-bezh koulz lavaret ?

Istor kevredadel hag armerzhel Breizh a chom c'hoazh diglok.

GERIOU N'INT KET E GERIADUR R. HEMON :

- dezrann : dielfennadur ;
amplegad : condition ;
reizhiad : système ;
azgoulenn(où) : revendication ;
arbennigour : spécialiste.

NOTENNOÙ

Hor Mignoned

Jean BOULBRIA ha Denise KERLOC'H a zo laouen o kemenn deoc'h ez eo bet lidet o eured e Sant-Gwenole, d'an deiz kentañ a viz Mae. Hor gwellañ gourc'hemennoù d' hor mignoned.

Kañv

Gant glac'har hon eus gouezet e oa aet da anaon an Itron GUIEYSSE, gwreg ar stourmer breizhat Marcel Guieysse, d' an 2 a viz Meurzh 1976, d' an oad a 98 vloaz, e Vitry-sur-Seine.

Hor gourc'hemennoù a gengañv a gasomp d' he ziegezh.

D' an 31 a viz Kerzu e varve e Pariz ar beneadad anevezet mat Dom GODU, bet ganet en Naoned e 1888. Ur roll pouezus en deus c'hoariet en Emsav ha chom a ray bev-mat e eñvor e-touez ar vroadelourien.

Aet eo da Anaon, d'an 21 a viz C'hwevrer, an Amiral Jakez de LESQUEN du Plessis-Casso, e Dirinon. Ganet oa bet d' an 13 a viz Here 1903 e Langedig. Abaoe bloavezhioù en devoa sikouret Al Liamm, ha bepred e oa bet prizius-kaer e alioù.

D' ar 16 a viz Meurzh ez eo aet da Anaon e Lanuon, Yann RAOUL, tad hor c'heneil ha skoazeller feal Lukian Raoul.

D' an 12 a viz Ebrel ez eo marvet an Ao. Frañsez KENEC'HDU, dezhañ 91 vloaz. Tad e oa da Dangi Kenec'hdu en deus bet tro meur a wech da zisplegañ ha da zifenn brav kudennoù Breizh er gazetenn vrudet Le Monde.

Deut eo betek enomp keloù mare an Ao. Kont du PLESSIS DE GRENEGAN, koumananter feal d' Al Liamm, d' an 2 a viz Here 1975. Edo o vevañ e kêriadenn Les Arcs e departamant ar Var.

D'an holl diegezhioù glac'haret hon tristañ gourc'hemennoù-kañv.

892 koumananter

E derou miz Ebrel, ne vanke nemet 8 koumananter evit tizhout an niver a 900. Bec'h dezhi eta !

Hor c'hef evit 1975

DISPIGNOU

	lurioù
Moulañ :	
Niv. 168	5.351,05

Niv. 169	5.537,90	
Niv. 170	5.586,65	
Niv. 171	6.194,25	
Niv. 172	5.889,90	
Niv. 173	5.971,10	
		34.530,85
bandennoù		345,60
Mizoù-post, bruderezh		2.849,37
War un dro		37.725,82

ENKEFIADURIOU

	lurioù	
Koumanantoù		28.328,25
Niverennoù gwerzhet		3.273,94
Chomlec'hioù kemmet		38,00
Profoù		6.968,20
War un dro		38.608,20

STAD AR C'HEF

	lurioù.	
Gounid e 1975		+ 882,38
Dic'hounid ar bloavezh 1974		- 2.762,02

Un toull er c'hef, d' an 31 a viz Kerzu 1975 - 1.879,64

149

Profoù

Miz GENVER. -

C. Barbotin, 5 lur ; Y. Bonvallet, 15 ; T. Caulet, 53 ; C. Millour, 15 ; F. Tourmen, 15 ; L. Bothorel, 25 ; C. Le Brazidec, 5 ; P. Cadoret, 4 ; J. Rivoal, 15 ; M. Briand, 15 ; J. Renault, 15 ; A. Cornic, 15 ; M. Gourlaouen, 5 ; R. Guern, 15 ; Y. V. Renault, 50 ; G. Boivineau, 65 ; F. Le Calonnec, 10 ; S. Bourdet, 5 ; J. P. Cloarec, 15 ; G. Kerouanton, 20 ; A. Maudet, 15 ; A. Rousseau, 5 ; F. Vossen, 26,74 ; M. Mazé, 15 ; A. Larnicol, 15 ; F. Prigent, 25 ; A. Gachet, 15 ; Y. Goarin, 5 ; G. Mahé, 15 ; Y. Grall, 303 ; M. Joubin, 5 ; L. Morvan, 15 ; A. Souffes-Després, 85 ; G. Kernevez, 5 ; T. Le Goff, 95 ; B. Audic, 15 ; R. Audrain, 5 ; F. Le Bleiz, 5 ; Y. Quellec, 15 ; H. Le Lan 100 ; Y. Le Deunff, 15 ; R. Le Sclotour, 10 ; J. J. Le Tilly, 15 ; L. Morvezen, 5 ; M. Le Floc'h, 5 ; F. Kervella, 45.
- War un dro : 1 261,74 lur.

Miz C'HWEVRER. -

Dizanv, 54,70 ; Y. Assaoui, 15 ; R. Delaporte, 10 ; M. Le Goff, 65 ; F. Jestin, 39 ; J. Rohou, 15 ; Y. Ollivier, 35 ; J. Le Meliner, 395 ; H. Cam 15 ; A. Le Marouille, 15 ; Y. Creff, 65 ; Y. Rosmorduc, 5 ; X. Le Cossec, 65 ; A. Herry, 60 ; L. Orhand, 25 ; G. Bailloud, 15 ; A. Le Bihan, 35 ; A. Stivell, 65 ; L. Raoul, 15 ; Y. Miniou, 15 ; G. Cloarec, 35 ; P. Le Gall, 15 ; Dizanv, 834,97 ; R. Bizien, 5 ; C. Chauvez, 30 ; A. Hervieu, 35 ; R. Le Hir, 15 ; F. Le Calonnec, 40 ; R. Brisson, 90 ; H. Le Floc'h, 15 ; G. Rossinyol, 20 ; C. Delalande, 35 ; G. Clocher, 15 ; A. Guilcher, 45 ; A. Coquio, 15 ; B. Assicot, 15 ; Y. Ar Beg, 200 ; Y. Chapel, 15 ; Y. Conan, 5 ; G. Le Floc'h, 15 ; P. Herbert, 10 ; N. Peyr, 36 ; J. Ducamp, 15 ; I. Cochevelou, 15 ; M. Miniou, 15.
- War un dro : 2 609,67 lur.

MEURZH :

L. Andouard, 15 ; Y.N. Beaufrère, 5 ; L. Bothorel, 15 ; M.J. Karadeg, 15 ; M. Drean, 14 ; E. Lacroix 15 ; R. Pellen, 5 ; J. G., 15 ; E. Ropers, 50 ; V. ar C'haer, 10 ; H. Kalvez, 85 ; E. Konan, 10 ; A. Daniel, 65 ; R. Droget, 10 ; J. al Lae, 5 ; B. ar Rallig, 70 ; H. Tardy, 65 ; J. Tricoire, 15 ; J. ha M.G. Derouet, 10 ; I. Laurent, 5 ; M. Piron, 5 ; J. Oulchen, 15 ; F.C.K., 65 ; J. Kadoret, 15 ; K. Vincent, 25 ; E. an Heveder, 10 ; A. Gwegen, 15 ; R.

Radenne, 65 ; Ao. Beaulien, 5 ; R. Korr, 15 ; Y. ar Gwaz, 15 ; M. Jegouzo, 15 ; T. Kenec'hdu, 5 ; J. Lagadeg, 5 ; F. Le Ny, 15 ; R. Plouhineg, 5 ; B. Poirier, 65 ; P. Puireux, 15 ; M. an Toazer, 15 ; E. Tymen, 5 ; J. Boulbria, 2 ; A. ar Beg, 15.

- War un dro, 911 lur.

Bet hon eus abaoe derou ar bloaz 4.781,41 lur a brofoù.

Kalonekaus eo gwelout niver ar re a zegas o skoazell er stourm evit ar brezhoneg.

Niverennoù kozh " Al Liamm " da brenañ

Prenañ a c'heller an niverennoù meneget da heul :

- 4, 6, 29, 53, 63, 65, 67, 69 betek 175 (nemet an niverennoù 98, 99, 100 hag a zo diviet).

Priz an niverennoù a zo :

-4 : 4 lur;

- an niverennoù all : 7 lur pep hini (nemet an niverennoù 65, 116, 151 hag a goust 9 lur pep hini, an niverenn 166-167 hag a goust 14 lur).

Tu a zo a-hend-all da brenañ ar bloavezhioù klok-mañ hag a goust 40 lur pep hini :

- 1959 (72-77) ; 60 (78-83) ; 61 (84-89) ; 62 (90-95) ; 64 (102-107) ; 65 (108-113) ; 66 (114-119) ; 67 (120-125) ; 68 (126-131) ; 69 (132-137) ; 70 (138-143) ; 71 (144-149) ; 72 (150-155) ; 73 (156-161) ; 74 (162-167) ; 75 (166-173).

A-hend-all e vez e gwerzh ivez skouerennoù eus « Rannyezh Douarnenez » savet gant Per Denez, ha « Roll anvioù-lec'hioù Breizh-Uhel », diwar dorn Teo Jeused. Priz pep levrig a zo 5 lur.

Ar goulennoù a zo d'ober da : P. Le Bihan, 16, rue des Fours à Chaux, 35400 Saint-Malo - C.C.P. 5349-06 Paris. An niverennoù a vez kaset kuit a vizoù-post.

150

Deiziadur 1977

Ar genwerzhourien pe an dud all a fellfe dezho kaout deiziadurioù gant o bruderezh moulet war o c'heïn a zo pedet da gas keloù deomp diouzhtu rak an deiziadur a vo moulet e miz Gouere.

Priz an embann a zo 60 lur.

Kasit diouzhtu eta ar pennad da voulañ ha lavarit deomp pet skouerenn a fell deoc'h kaout. Un drederenn distaol a vezo graet azalek 50 skouerenn. Skrivañ da R. Huon, 2, Venelle Poulbriquen, 29200 Brest.

Chekennoù nac'het

Chekennoù skrivet e brezhoneg a zo bet kaset en-dro deomp gant ar bank C.I.O. e Brest. Aet omp da welout ha degemeret e vefent bet e bankoù all. N' eus ket bet tu.

Goulenn a reomp eta digant hol lennerien skrivañ o chekennoù e galleg. Gouzout a

reomp e vez degemeret chekennoù e brezhoneg pa n' eus ket kalz anezho ha pa 'z int splann met pa gasomp teir pe beder chekenn e brezhoneg war un dro e vezont nac'het.

Levrioù Al Liamm

Deut eo er-maez " Ar Baganiz " gant Malmanche. En doare-se ez eo bet embannet en un nebeut bloavezhioù holl bezhioù-c'hoari hon dramaour kerkent ha m' eo bet roet deomp an aotre. Priz al levr a zo 27 lur ha 32 lur war Ingres niverennet.

" **Yezhadur Bras ar Brezhoneg** " gant Frañsez Kervella a zeu er-maez er miz-mañ. Ouzhpenn 500 pajenn ez eus ennañ. Ar priz a zo 50 lur.

" **TI Vatriona** " gant Soljenitzyn, bet lakaet e brezhoneg gant Ernest ar Barzhig, a zo bet kaset d'ar mouler ivez. Al levr a vo da rakprenañ betek an 30 a viz Mezheven : 10 lur war baper boutin hep mizoù-kas e-lec'h 13 lur, ha 17 lur war baper kaer.

151

Lizhiri

Digant D. P. eus Sant-Brieg :

« Setu a-gevret gant al lizherig-mañ ur baperenn ket kavet e boestoù-lizhiri tud kanton Bear da geñver an dilennadegoù diwezhañ. N'eo ket ur pezh lennegezh moarvat, Met evel m'emañ eo gwelloc'h eget netra. Embannet eo bet gant an Doktor Michel Personnic, en em ginnige «distag» eus pep strollad. Chomet eo er-maez goude an eil tro.

Deoc'h d' ober ar pezh a garot gant ar baperenn-se. »

Setu amañ an tamm skritell a zo bet kaset deomp, moarvat ez eus bet re all. Da vihanañ ez eo ur skouer da heuliañ : « Ar gommunisted a lar : « Ni a diven al labourerien-douar... » ze n' eo ket gwir, barz broioù kommunist, an douar n'eo ket d' ar re a labour 'nean. Labourerien-douar kanton Bégard n'int ket zod a-walc'h vit votañ kommunist... ». Lezet hon eus ar skritur evel ma oa. »

Digant ur C'hatalan hon eus bet al lizher-mañ e brezhoneg :

« Me a blijfe din kenskrivañ gant ur paotrig, war-dro dek vloaz anezhañ. Ha posupl eo kaout ur brezhoneger bihan ? N'eo ket ret dezhañ bezañ ur mailh war ar brezhoneg, n' on ket kennebeut !

Katalan on, tri bloaz warn-ugent am eus hag ez on studier war ar skiantoù (jedoniezh ha naturoniezh) hag e karan kalz ar vugale.

Gouzout a ran ez eo ral kenañ ar vugale gouest da gomz brezhoneg hirio an deiz met spi am eus e vo, e-touez lennerien " Al Liamm ", unan hag en devo desket brezhoneg d' e baotrig.

Ra skrivo din ar baotredigoù dedennet. Skrivañ da : Cid Jean-Claude, 42, rue des Mésanges, 66000 Perpignan.

Trugarez en a-raok. »

Digant D. Guichard eus Saint-Herblain hon eus bet al lizher-mañ :

« Er gelaouenn " Le Monde " em eus lennet ur pennad-skrid mezhus. Evel

just e kaver aze divizoù skoachet a-enep d' ar brezhoneg ha n' eo ket nevez na souezhus.

Siwazh, aze e welan ez eo lakaet levr Helias (hag e zivizoù er skingomz hag er skinwel) da dalvezout a-enep Breizh ha zoken da gondaoniñ e yezh !

Piv a c'houlenno digant P.J. Helias diskleriañ e soñj dirak an holl ?

Piv a c'houlenno digantañ enebañ ouzh an implij-mañ a vez graet eus e levr hag eus e zivizoù ? Spi am eus e vo kavet re varrekoc'h egedon evit hen ober. »

RESPONT : Da heul e lizher en deus hor mignon kaset deomp ul luc'hskeudenn eus ar pennad a zo bet skrivet gant P. Viansson-Ponté war " Le Monde " (4-5 a viz Ebrel) dindan an anv " Langue et Civilisation ". Ne vern penaos en deus P.J. Helias diskleriet e vennoz e niverenn 2 " Bretagnes " pa lavar kerkent-mañ : « On me pose souvent la question de savoir ce que peut devenir le breton. A quoi je réponds que, personnellement je m'en moque éperdument (se ne gaver ket e pennad Viansson-Ponté, tra ma kaver ar pezh a zo amañ da heul :) étant donné que je fais mon boulot qui consiste à parler breton aussi souvent que je peux et à écrire le plus de breton que je peux » .

152

Digant G. P. :

« ... Gwell ' vije embann traoù nevez eget adembann dalc'hmat (Deiz ha bloaz, Mari Vorgan, Va Zammig Buhez...) ken ma teuer da grediñ ne vez ket skrivet ken tra nevez erbet. Perak ne vez ket dastumet ur meni levr-stroll ennañ danevelloù berr gant lies den ? Ul lod a c'hellfe bout tennet diouzh " Al Liamm " ma 'z int strewet a-hed ar bloavezhioù hag ul lod all chomet diembann pe skrivet a-ratozh ? Sur, ne glemman ket e vez adembannet " Ar Baganiz ", ken diaes ma oa kaout ar skrid orin, na memes oberenn veur Kervella... Kavout a ra din memes tra e hañval dont da hesk un tammig al lennegezh vrezhonek. »

Ar pezh a lavar G. P. a zo gwir evit ul lodenn. Koulskoude " An deiz ha bloaz " ne oa bet morse moulet. Un nebeut skouerennoù hepken a oa bet roneoskrivet gant an oberour. Mari Vorgan ne oa bet moulet nemet 500 skouerenn anezhañ ha se e 1962 hag o vezañ ma oa unan eus ar romantoù kaerañ a c'heller lenn e brezhoneg e oa ret e adembann. Va Zammig Buhez ne oa bet moulet anezhañ nemet 500 skouerenn ivez e 1954, daou vloaz warn-ugent 'zo eta. Danevelloù berr gant tud disheñvel a zo ur menoz mat ha graet eo bet e 1960 pa'z eo bet embannet " Kontadennoù an amzer-vremañ ".

Gwir eo avat n'eus ket a draoù nevez e-touez hon embannadurioù diwezhañ. Gortoz a reomp !

Digant C. V. :

« Spi 'm eus 'vo posubl d' " Al Liamm " kenderc'hel rak ur gelaouenn a-bouez eo evidomp holl.

A-du on gant T. L. eus Naoned, dreist-holl pa lavar (niv. 174) ez eo " Al Liamm " ur benveg daremprediñ ha prederiañ evit an emsaverien. Met, ur benveg evit deskiñ hor yezh eo ivez ha ret e vefe diwall a-wechoù diouzh ar yezh implijet (frazennoù re hir a vez kavet e pennadoù 'zo, ha troioù-lavar iskis !...).

Daoust da bep tra e tegemeran ar gelaouenn gant kalz a blijadur. »

Digant S. N. :

« Plijet on bet atav gant ar gelaouenn. Karout a rafen kavout muioc'h a bennadoù evel hini Eflamm Gervilio, " Utopia ", o vurutellat kudennoù ar bed a-vremañ. »

Digant S. L. D. :

« Gant al lizher-mañ e koumanantan d'ho kelc'hgelaouenn " Al Liamm " evit ar wech kentañ. N' em eus lennet nemet ur skouerenn anezhi hag evit gwir e kav din ez eo " Al Liamm " ur gelaouenn blijus ha dudius.

Anavezout a ran un tammig istor ar gelaouenn-mañ, pezh a zo bet graet ganti a zo sur muioc'h eget un arouez a garantez evit ar brezhoneg, ha setu perak ez eo graet va menoz ganin koumanantiñ dezhi.

Ra gendalc'ho " Al Liamm " gant he fal. N' emañ ket ken hec'h-unan-penn evit se bremañ. Ra vo bodet 'ta an holl strivadennoù evit « dieubidigezh » ar yezh ha gant ma 'z aio ar maout gant ar brezhoneg hag ar Vrezhoneg ! »

153

Priz Lennegel Langleiz

KUZUL AR BREZHONEG a ro da c'houzout kement-mañ :

Ur Priz Lennegel Langleiz a zo kinniget er bloaz-mañ evit un oberenn, e gwerzennoù pe e komz-plaen, savet e brezhoneg. Lennet e vo ar skridoù gant ur juri a zo ennañ : Maodez Glanndour, Per Denez, Y. Bouessel du Bourg, Ronan Huon, Vefa de Bellaing, Per Roy.

Ar skrid e komz-plaen en devo 50 pajenn (skriverezet) da nebeutañ. Evit ar varzhoniezh ne verk ar juri niver izelañ ebet evit ar pajennoù.

Ar skridoù a vo da gas da rener ar juri (Maodez Glanndour, Keresperz, 22700 Louanneg) a-benn an 30 a viz Gwengolo 1976, e teir skouerenn, skriverezet e brezhoneg unvan.

Roet e vo ar priz e miz Kerzu. Ar priz a vo 1 000 lur nevez. Ar juri a c'hell divizout chom hep reiñ ar priz.

Ar juri a c'hell ivez lakaat embann an oberenn bet ganti ar priz, goude emglev gant ar skrivagner.

Embannadurioù

" **Bleun-Brug** " Bro-Wened a zo bet adsavet ha kaset eo bet deomp niverenn gentañ ar gelaouennig. Un nebeut pajennoù evit c'hoazh o kemenn adsavidigezh ar gevredigezh e galleg ha derou levr-skol an Ao. Kalvez " Herve ha Nora " e gwenedeg ha kanaouennoù eus Bro-Wened. Hetiñ a reomp ur vuhez hir d' ar gelaouennig nevez. B.P. Pluvigner - c.c.p. Bleun-Brug Bro-Gwened 1 813 68 Y Nantes.

Niverenn 11 **An Nerzh** ma kaver enni pennadoù gant ar rener, Riec, ha gant G. Pennaod : Trevadennerezh - Marx hag ar Vro - Gwengel an ugentved kantved - Europa, hag all. Ur stagadenn da " Bretagne Réelle " ez eo. Koumanant-bloaz : 20 lut - C.C.P. 754-82 Rennes.

Hor Yezh, niverenn 104, a zo tost da vat penn-da-benn diwar zorn Mikael Briant hag a ro deomp ur geriaoueg eus Bro-Lanuon : anvioù loened ha plant. - Koumanant 30 lur. P. Denis, C.C.P. 1499 51 Rennes.

Niverenn 74 **Imbourc'h** a ro deomp studiadennoù ha keleier : Roll ur strollad broadel e Breizh ha Luskad Kevredigezh Broadel Breizh war-lerc'h ar brezel kentañ " Le Bretagne Intégrale " eo ar pennadoù pouezusañ. - Koumanant 35 lur. C.C.P. Y. Ollivier, 1 534 25 Rennes.

Resevet hon eus ivez embannadurioù e galleg : Vouloir vivre Breton, niv. 4. En niverenn-mañ e kaver pennadoù gant Gwennved, R. Marin, P. Denez, E. Vallerie, G. Caro. Priz : 9 lur ; 10 lur dre ar post. Diffusion Bretonne, 110, rue de Saint-Malo, 35000 Rennes.

Digant Skol-Veur Brest hon eus bet ul levrig " Le Centre de Recherche bretonne et celtique ", renet gant hor c'houmananter Yves Le Gallo. Ur roll hir eus labourioù izili ar C.R.B.C. a gaver el levrig. - B.P. 860. 29279 Brest Cedex.

154

Trede levr Jules Gros diwar-benn yezh Bro-Dreger, 400 pajenn ennañ, a zo o paouez dont er-maez. Embannet eo bet evel stagadenn da " Varr-Heol " hag e gwerzh emañ e ti Giraudon, 30 str. Keranpont, Lanuon. Talbenn an trede levr-mañ a zo : Le Style populaire. E div lodenn ez eo rannet al levr : " Displegadur ar menozioù " hag " Hengoun ar yezh komzet ". Ur studiadenn hiroc'h a vo kavet e niverenn a zeu " Al Liamm ". - Ar priz er stalioù a zo 63 lur.

Kanaouennoù gant Patric

Ar c'haner okitaniat Patric a gemenn deomp eo deut er-maez e drede fladenn " Cançonetas ", 10 pennad diembann. Priz ar bladenn (Patric) a goust 35 lur. Cercle occitan de Béziers, 34 Av. Gambetta, 34500 Béziers.

Pladennoù

Resevet hon eus pemp pladenn.

Da gentañ niverenn 4 **Dastum** gouestiet da Vro-Loudieg. Atav ez eo ken dudius hag a-bouez bras evit an holl re a zo dedennet gant sonerezh Breizh. Ur perzh mat a veze dija kavet en dastumadennoù all a gaver amañ ivez : al liammoù etre ar sonerezh ha personelezh an dud, o doareoù da vevañ a zo studiet pizh. El levrenn a zo da heul ar bladenn e kaver ur studiadenn resis a-walc'h eus ar yezh gallo (distagadur, yezhadur, geriaoueg, istor ar yezh).

War ar bladenn e kaver dañsoù damheñvel, dre ar c'homzoù ha dre al lusk, ouzh re Vreizh-Izel kanet pe sonet e vijent. Ne gaver ket avat gwerzioù istorel dre ma vefe bet ket kollet an hengoun. Kavout a reer ivez un nebeut rimadelloù unan anezho dibunet e brezhoneg gant ur vaouez a n' eo ket brezhonegerez.

Pinvidigezhioù Breizh-Uhel a zo, sur, bras met n' int ket bet ken prizet a re Vreizh-Izel. Dastum a ro tro amañ d' un nebeut enklaskerien (Le Bris, an aotrou hag an itron Bourel ha Noac'h) da embann ul labour a vije chomet dianav deomp a-hend-all.

Gwerzhet e vez (kaier ha pladenn asambles) 34 lur. - Dastum "Degemer mat ", 6, rue du Dispensaire, 29213 Plougastel-Daoulas.

An eil pladenn a zo ivez gouestlet da Vreizh-Uhel : *Chants traditionnels des pays d'Oust et de Vilaine*. Kanerien ken anavezet ha J.L. Latour ha A. Poulain o deus kemeret perzh el labour-se rak ul labour sevenadurel eo evel ma 'z eo skrivet war golo ar bladenn : n'eo ket ur bladenn kenwerzhel (an arc'hant a vo bet dastumet a yelo d' ar strollad enklask). He fal a zo reiñ da anavezout d'an dud pinvidigezhioù ar vro. Ne vank, e gwirionez, nemet ur c'haierig da vont da heul. Ar c'han (n'eus benveg-seniñ ebet) a zo bev-birvidik ha lusket-kaer. Embannet eo bet ar bladenn-mañ gant Coop Breiz 1001.U. n'eus priz ebet war ar golo.

An teir fladenn all a zo disheñvel, dre an awen hag ivez, siwazh, evit an div diwezhañ, e-keñver sonerezh.

155

Les Nammètes (Breizhuheliz int ivez) a zo ur strollad « folk » a ra implij fonnus eus ar binvioù sonerezh : gitar, banjo, fleüt met gouzout a reont kanañ hepto (" Dessus le pont de Nantes "). Dibab an tonioù n'eo ket da damall daoust ma 'z eo bet klevet lod-kaer anezho gant strolladoù all dija. Ar re dedennet gant ar sonerezh « folk » a vo plijet ouzh o c'hlevout. Embannet eo gant ti Ar Folk.

Kistinidiz. *Chants à danser du pays Pourlet.* Gwenediz int. An tonioù kanet ganto n'int ket anavezet-tre hag an darn vrasañ anezho a zo kaer met koufounet int un tamm gant ar binvioù seniñ. Dav e vefe dezho marteze deskiñ ar yezh. Kalz a labour a chom d' ober.

Kanerien en noz. Kalz tamalloù a c'heller ober dezho ken e-keñver an distagadur hag e-keñver dibab ar c'hanaouennoù hag an doare da doniañ o binvioù. Gwelloc'h e vefe dezho gortoz a-raok enroll ur bladenn... (embannet e ti Ar Folk).

G. H.

Sonerezh

Er bloaz-mañ e vo krouet div sonaozadenn bet savet gant hor mignon ha lenner feal P. Herbert.

An hini gentañ anvet " Skilfoù skorn " a dlefe tremen er radio e miz Meurzh pe Ebrel.

An eil : " Eizhadenn (Octuor) evit an amzer deuet " a vo krouet e-doug " Festival estival de Paris ". C'hoariet e vo gant Octuor de Paris.

Kanaouennoù Breizh-Uhel

Pedet omp gant ti-embann G.P. Maisonneuve et Larose, 11, rue V. Cousin, 75005 Paris, da gemenn e teuio er-maez hepdale un Dibab eus Kanaouennoù Breizh-Uhel (Anthologie de la Chanson de Haute-Bretagne) gant Simone Morand.

Tu a zo da rakpreañ al levr en holl levrديوù. Ar priz rakpren war baper boutin a zo : 80 lur. Daou c'hant skouerenn war baper kaer Romana niverennet eus 1 da 200 a vo moulet ivez, ar priz rakpren o vezañ : 225 lur.

C'hoariva e Bro-Bagan

Goulc'hen Kervella a bed ac'hanomp da embann ar pennadig-mañ :

Prestig e krogo Strollad Bro-Bagan gant e droiad c'hoariva dre ar vro. Abaoe 6 miz 'zo emaoomp o labourat war 2 bezh-c'hoari : MEURLAJEZ gant Roparz Hemon hag ur pezh all diwar DOGAN (Jakez Riou).

156

Meurlarjez a zo bet embannet e-barzh niverenn 114 " Gwalarn ", e miz Mae 1938. E Bro-Gembre edo an istor o tremen er mouladur-se. E-pad ar brezel avat ez eo bet kempennet a-nevez gant an aozer ha lakaet da dremen e Breizh. Diouzh an eil doare-se eo hon eus graet-ni daoust ma n' omp ket deut a-benn da gavout an destenn nevez. Tro zo bet da lenn pezh a soñje Y. Olier diwar-benn ar pezh-se e-

barzh e studiadenn a-zivout R. Hemon. Ni avat a gav deomp ez eo **Meurlarjez** ur pezh dreist, unan eus ar re wellañ e brezhoneg ha dreist-holl ur pezh bet skrivet evit ar c'hoariva.

Dogan a oa bet skrivet gant Jakez Riou da heul tarzhadenn monumant an Unvaniezh e Roazhon e 1932. Ne gav ket din e vije bet e soñj Jakez Riou sevel ur pezh da vezañ c'hoariet ur wech bennak pe n' eo ket bet. Ne oa ket tu e 1976 c'hoari ar pezh-se e-giz ma oa bet skrivet. Setu abalamour da betra hon eus lakaet an istor da dremen en amzer hirio ha graet hon eus hor mat eus darvoudoù ar bloavezh tremenet evit adkempenn Dogan. Politik eo ar pezh-mañ ha lakaet e vo tud 'zo da skrignal o dent gantañ.

Kentelioù, buan hag aes...

Warlene (*) e oa bet dalc'het dindan renerezh Per Denez, e Skol-veur Breizh-Uhel (Roazhon-Keryann), ur rummad kentelioù stank kenañ an danvez anezho (en tu-hont da eizh eurvezh bemdez) hag a vez graet anezho gant an anv saoznek " crash-course ". Berzh a reas en un doare sebezus ; neuze e vo adgraet er bloaz-mañ : adalek al lun 5 a viz Gouhere betek an 9 (pe an 10), ur sizhunvezh labour efedus-kenañ evit ar re o deus c'hoant e gwirionez d'ober buan ur gammed vras en anaoudegezh ar yezh komzet.

Goulenn pep resisadur digant Per Denez, Kevrenn ar C'heltieg, Université de Haute-Bretagne, 6, Av. Gaston-Berger, 35043 Rennes Cedex - Pellg. (99) 59 20 33.

(*) s.o. AL LIAMM niv. 169, Meurzh-Ebrel 1975, p. 153.

Kemenn

Nevez 'zo ez eus bet krouet ur C'helc'h eus B.Y.V. e Bro-Bariz. Ar c'helc'h a zo rannet e peder c'hevrenn :

- Hanternoz Bro-Bariz : Herve Hubert, 47, Av. Jean-Jaurès, l'Ile-Saint-Denis
- Pariz : Annaig Desmars, 6, Av. Montespan, 75116 Paris ;
- Paris-Montparnasse : Mona Cassagnou, 23, rue Harpignios, 91120 Villebon-sur-Yvette ;
- Kreisteiz Bro-Bariz : Bernez Aodig, 29, Av. Fontenelle, 92330 Sceaux.

Setu amañ an oberiantizoù a vezo kinniget en trimiziad a zeu :

- d' ar sul 11 a viz Ebrel : Devezh studi ha dudi divyezhek azalek 10 eur diouzh ar beure : avenue Jean-Mermoz, Cité de l'air, Athis-Mons ;
- d' al lun 19 a viz Ebrel : Pourmenadeg evit ar vrezhonegerien e Buc ;
- d' ar sul 25 a viz Ebrel : Devezh studi ha dudi e brezhoneg e Les Lilas ;
- d' ar sul 9 a viz Mae : Devezh studi e Saint-Denis ;
- d' ar sul 16 a viz Mae : Devezh studi divyezhek e Maurepas.
- d' ar merc'her 28 a viz Mae : Beilhadek e " Ti ar Yaouankiz " ; 26, rue Charles-Fourrier, 75013 Paris.

157

Skingomz ha Skinwel

Ar gevredigezh Skingomz ha Skinwel a c'houlenn digant ar re a fellfe dezho kaout ur c'henskriver pe ur genskriverez skrivañ dezho : 18 bis, rue Duguay-Trouin, Sant-Brieg gant ur golo, un timbr hag ho chomlec'h. Lavarit gant petra hoc'h dedennet.

Ur galv a ra ar gevredigezh d' ar vutunerien : Arc'hant e-leizh evit " Skoazell Vreizh " hep dispign muioc'h ma fell deoc'h ! Ganeoc'h, milionoù a ya e maged bep bloaz e Breizh ha mont a ra hoc'h arc'hant-butun e kefoù ar waskerien.

Na vutunit ket ken ha kasit hoc'h arc'hant butun da " Breuriezha Skoazell Vreizh ", C.C.P. Paris 18 233 93.

Trugarez a-greiz kalon deoc'h en a-raok en anv hor c'henvroiz ezhommek, ha soñjit e vo mat-tre evit ho yec'hed tremen hep butun !

Skodenn-vloaz " Skingomz ha Skinwel ". Houmañ a zo bepred 20 real (5 lur) daoust d'ar prizioù da vont war grec'h hep paouez. C.C.P. 2031 55 Rennes war anv an Itron Omnes.

Abadennoù brezhonek FR3

Ur c'hemm a zo evit pezh a sell abadennoù " Breizh o vevañ " war ar skinwel. Skignet e vo bepred bep pemzek deiz, d' ar sadorn d' abardaez, da 6 eur ha kard (ha n' eo ket da 6 eur hanter) war an trede chadenn FR3 ha d'al lun war-lerc'h da un eur pemp (ha n' eo ket da un eur hanter ken) war an eil chadenn A2.

Roet e vo ur priz " Per Trepos " gant FR3. An oberenn a ranko bezañ diembann hag a vo displeget er radio. Arabat dezhi padout ouzhpenn 20 munud. Ar skridoù a ranko bezañ skriverezet ha bezañ kaset a-benn ar 15 a viz Gwengolo, d' an diwezhatañ

Daou briz a c'hell bezañ roet : ur priz kentañ a 1 000 lur, hag un eil priz a 500 lur.

Evit kaout ar reolennoù pe displegadurioù all, skrivañ da : Abadennoù brezhonek FR3, Studio Brest, er P.A.C., avenue Clemenceau, 29200 Brest.

Brest - Buhez Oaled Sant-Erwan e 1975

Savet eo bet Oaled Sant-Erwan e 1968 da labourat war an dachenn sevenadurel dre ar brezhoneg ha gant ur spered katolik. Dalc'het en deus da vont gant e hent e-doug ar bloavezh 1975.

Div lodenn 'zo e buhez an Oaled : al labour sevenet e teir sal vihan an Oaled hag al labour kaset da vat er maez, e Brest peurliesañ, e lec'hioù all a-wechoù.

158

Bep brasañ ar vuhez en diabarzh eo dreist-holl an eurvezhioù diastal : 6 eurvezh bep sizhun betek miz Gouere ha dek eurvezh adalek miz Here a-drugarez da vrezhonegerien a youl-vat nevez deuet en Oaled. E-kerz an eurvezhioù-se eo bet digor an Oaled da neb piv bennak en doa c'hoant dont tre : asur e oa da gavout ur brezhoneger pe ur vrezhoneger d' e zegemer.

Skol vrezhonek a zo bet ivez : div eurvezh bep sizhun evit ar c'hentañ derez hag un eurvezh evit an eil.

Un abadenn barzhonegoù en hor yezh a zo bet a-drugarez da Chanig ar Gall, d' an Itron Salou ha d'an Aotrou ar Gwenn. Un diskouezadeg engravadennoù ha dourlivadennoù gant Gwenn Kaigre (dek devezh lerc'h-ouzh-lerc'h e chomas digor neuze an Oaled). Peder gaozeadenn a voe ivez : div a-zivout ar Bloavezh Santel e Rom gant un nebeut tud a oa bet eno o pardonñ, unan diwar-benn Plougernev gant G. Kervella hag unan diwar-benn temz-spered ha dazont hor pobl. Div gaozeadenn a

voe brezhoneg rik, an div all a voe divyezhek.

E meur a zoare ez eus bet graet labour en diavaez :

- pemzek gwech ez eus bet peget liketennoù brezhonek, dreist- holl a-zivout ar Bloavezh Santel ;

- nav gwech ez eus bet darnaouet traktoù war ar straed e Brest ha marvailhet gant an dud ;

- nav gwech ivez ez eus tud hag o deus bet kemeret perzh e pedennoù brezhonek en ur chapel e kêr ;

- seizh gwech eo bet dispaket stalioù levrioù, pladennoù, traktoù... en Oaled pe e Brest, pe e lec'h all, da geñver ur Fest-Deiz, ur Pardon... Hag adarre marvailh gant an dud hag un tamm gwerzh.

Prestet eo bet ingal ur sal eus an Oaled d' ar C'helc'h Studi Katolik brezhonek ha da Emglev an Tiegezhioù evit skol vrezhonek ar vugale.

E-kerz ar bloavezh-skol 1975-76 e vez digor an Oaled (28 straed Charles Berthelot - Brest) bep meurzh eus 18 eur da 20 eur, bep merc'her eus 18 eur 30 da 19 eur 30, bep yaou eus 17 eur da 19 eur, bep gwener eus 17 eur 30 da 19 eur 30 ha bep sadorn eus 17 eur da 19 eur. Degemer mat da gement hini a zeuy !

Y. S. DESPRÉ.

Saotradur Enez Eusa

Ur pikol lestr-eoul nevez-flamm anvet " Olympic-Bravery " (ul lestr eus Bro-C'hres perc'hennet gant hered Onassis) a zo aet da stokañ ouzh kerreg lemm enez Eusa d' ar 24 a viz Genver. Tour-tan ar C'hreac'h a oa bet prim koulskoude o reiñ da c'houzout da gabiten al lestr e oa deut re dost eus an enezenn met hemañ, re brederiet da gas e lestr etrezek ar c'herreg, ne reas van ebet.

Edo perc'henn al lestr, war a seblant, o n'em c'houlenn penaos en em zizober eus ul lestr ne gase gounid ebet dezhañ. Ha setu deuet an taol da vat, an asurañsoù a ranko paeañ priz ar vag.

159

Dija e penn kentañ an en sizhun e save mouezhioù tud an enezenn chalet gant dazont al lestr. Spouronet e oant gant ar soñj e c'hellfe ar vatimant divent-se terriñ e daou ha lezel da redek ur bern eoul. Darbet e oa bet dezhi terriñ en deizioù kentañ rak ur barrad-amzer bras a oa savet. D' an tri a viz Meurzh, goude ar reverzhi bras hag ur sourrad avel da zigornañ ar saout, poulzet amañ hag ahont, e torras al lestr e daou. Rener ar verdeadurezh ne voe tamm ebet souezhet gant an darvoud. Setu al lanv du o n' em astenn war aodoù Eusa daou viz goude ar peñse.

Tud Eusa a zo aet trenk o c'halon ha n'eo ket souezh ! Magañ a reont ur gasoni divuzul ouzh ar prefed en deus graet skouarn vouzar e-pad keit-all, ouzh ar « pouvoirs publics », dic'halloudus ha didalvoud a-grenn, chomet nouspet amzer da guzulikañ war ar milionoù a vefe foranet o kas estrenien da c'houlonderiñ al lestr.

Met penaos e rafe ar paour-kaezh Bretoned-se evit kas an dorzh d' ar gêr ?

Ar Stad n' en deus graet netra ha ne stourm c'hoazh, bremañ e miz Ebrel, nemet a-nebeudoù hag en un doare laosk-kenañ. Emeur c'hoazh o c'hortoz binvioù evit sunañ an eoul o tont er-maez ingal eus al lestr (15 a viz Ebrel). Ar " Plan Polmar " e-unan a zo gwall-zister : un dornad soudarded o klask dastum gant youl

vat, palioù ha sailhoù, al loustoni distaolet gant al loen euzhus. Implij a reont, evit netaat ha lufrañ ar reier, un dourenn bennak kalz dañjerusoc'h eget an eoul e-unan. An eoul dastumet e vez taolet e fozioù don, ken don ma 'z int en arvar da saotrañ dour tud an enez.

An Aotrou J. Chapon a lavare kement-mañ d' an 13 a viz Meurzh : « Ne dalveze ket ar boan lakaat en arvar buhez un nebeut tud evit skarzhañ 1 200 donell eoul. An ardivinkoù rekis a oa diaes da gaout. Pep tra a oa tu d' ober a zo bet graet. Ar pezh a zo c'hoarvezet n' eo ket grevus, kasaus ne lavaran ket ».

Ha koulskoude dañjeroù ar saotradur a zo puilh-kenañ, dreist-holl evit an natur. Bloavezhioù labour start evit mirout tachadoù gouez d' al loened a zo kaset da netra. Ral eo gwelout boc'haniged, pe godezed o c'hournijal en-dro d' an enezenn. 9 bloaz 'zo an " Torrey Canyon " en doa lazhet 90 % anezho, ar peurrest pe dost a dremenno ar wech-mañ. Ar reunigoù ivez a zo e dañjer bras da vervel, ar re yaouank dreist-holl.

Ar besketaerien ivez a zo droug enno ha goulenn a reont digoll evit ar gaou a zo bet graet outo. Pelec'h e kavint pesked bremañ ? Divizet o deus ober ur prosez d' ar Stad, ur prosez hag a chomo e toull ar skubennachoù e-pad pell, m' eus aon !

R. ha T. H.

Levrioù nevez

J. LE DU / Y. LE BERRE : **Dictionnaire Pratique Breton-Français. I. A-Bêcher** -- STUDI, niv. 4, Kezu 1975, 88 pajennad - Embannet gant CRDP Roazhon.

A bell 'zo ez eus diouer bras d' ur geriadur galleg-brezhoneg a-zoare. Setu perak e oa meur a zen war evezh pa voe klevet e oa deuet er-maez kaierad kentañ un « Dictionnaire » hag a fell dezhañ bezañ « pratique ». Savet eo bet gant daou gelenner skol-veur ha soñjal a c'helled e vijent deuet a-benn da ober ur benveg dereat evit ar re a zo war studi ar brezhoneg. Ar c'haierad-mañ a ro dimp un tañva eus al labour.

160

Adalek ar pajennadoù kentañ ez eo bet ret diskanañ, avat. Anat e oa diouzhtu ne oa ket aze tamm ebet un « dictionnaire », ha pa ve an disterañ eus e rummad. Ur roll gerioù d' ar muiañ, ha ne roerennañ nemet hiniennoù eus gerioù ar galleg. Deskiñ a ra deomp penaos e vez troet « aber » e brezhoneg ! Peadra da grediñ ez eo an aber-se ur ger implijet-kaer e yezh ar C'hallaoued, a vez klevet kalz aliesoc'h emichañs eget ne vez gerioù evel « abandon » pe « abattage », « abolir » pe « abondance », pe c'hoazh « abus », o vezañ ma ne gaver ket ar re-mañ e-barzh... Ha gwelit pegen « pratique » eo al levr ! Ha c'hoant deoc'h gouzout penaos e vez lavaret « abondant » e brezhoneg, ez oc'h aliet da vont da sellout penaos e vez troet « beaucoup » ha « nombreux » (hag etc. ivez !). Ha mar fell deoc'h gouzout penaos e ranker treiñ **abréger**, e vo dav deoc'h mont da sellout dindan « raccourcir » pe « résumer ». Evel avat ma tle bezañ pemzek kaierad er geriadur-mañ unan anezho o tont er-maez bep bloaz, e vo ret-mat deoc'h gortoz un dek pe unnek vloaz ac'hann evit gouzout penaos ober. Peadra deoc'h da daeriñ ha da goshaat.

C'hoazh ma vije an droidigezh rik eo a vije kavet e-kichen ar gerioù a zo bet miret el levr. Pell emañ ouzh bezañ evel-se, hag alies, a vefe lavaret, ez eus bet roet bod d' an troioù souezhusañ ha lezet a-gostez ar re anavezetañ. Evit treiñ « aviron » e kaver **roev** ha **reu**, hep meneg ebet eus ar stumm « klasel » **roev** hag a zo koulskoude ur ger anavezet-mat. Ar galleg « avis » a vez troet gant **soñj**, gant ur c'hornig bihan evit **ali**, met **meno** a zo ankounac'haet krenn. Daoust ha re vrezhonek e vije bet kavet ? - Eus ar gerioù niverus o treiñ ar galleg « avare » n' eus bet meneget nemet daou : **tost** ha **pizh**, hag, evel dre

zegouezh, ez eo an hini ne dalv « avare » nemet dre ledanaat e dalvoudegezh eo a zo bet lakaet da gentañ ! - Dindan « abîme » e kaver merket ez eo **islonk** ur ger « livresque », ar ger mat o vezañ **poull-don**, peogwir ne gaver ger all ebet. Moarvat e vo kavet meur a zen hag a gavo dezhañ ez eo bet kentoc'h eilpennet an traoù : evidon ur **poull don** a zo pell eus bezañ un « abîme », daoust ma c'hellje, anat, bezañ anavezet e lec'h pe lec'h gant an dalvoudegezh-se. Ha ma fell da hini pe hini gouzout penaos e vez lavaret « s'abîmer » e brezhoneg ez eo pedet da vont da sellout ouzh « se casser » hag « etc. ». A roio amzer deoc'h da vezañ bet koñfontet d' ho tro a-raok bezañ kavet.

Ha ma teu da unan c'hoant da c'houzout penaos e vez lavaret « basse-cour » en hor yezh e vo lavaret dezhañ mont da glask un dra bennak dindan « poule, lapin, etc. » !

Trawalc'h e vo moarvat an nebeud skouerioù-se evit reiñ da c'houzout d' hol lennerien petra 'zo ouzh o gortoz pa fello dezho kaout un « dictionnaire pratique » en o levraoueg.

F. K.

E ti Moulerezh ar Baol - Bali ar Marichal-de-Lattre-de-Tassigny
Diskleriet hervez lezenn : eilet trimiziad 1976
Niverenn er voulerez : 38625 - Ar merour : P. ar BIHAN

EMBANNADURIOU AL LIAMM

FRANSEZ KERVELLA
YEZHADUR BRAS AR BREZHONEG
503 pajenn
Eil mouladur reizhet
Priz : 50,00 lur
Da rakprenañ betek an 30 a viz Mezheven

Alexandr SOLJENITZYN
Ti Vatriona
lakaet e brezhoneg gant Ernest ar Barzhig
War baper boulin : 10 lur hep mizoù-kas e-lec'h 13 lur
War baper kaer niverennet, hep mizoù 17 lur
Mlle J. QUEILLÉ, 47, rue Notre-Dame, Guingamp
- C.C.P. 1136 82 Rennes -

AL LIAMM 176

TAOLENN

Digor an nor gant JORAN AR GRUG	163
Boudoù ar c'houmanant lusennek, spontadenn gant JEF PHILIPPE	164
Langleiz, gant KERVORC'H (Brezhoneg E. ar Barzhig)	173
Eñvorennoù gant YEUN AR GOW	196
Istar Breizh, gant LA BORDERIE (tr. Roparz Hemon)	204
Al Levrioù gant Y.O.	212
Yezh gant YANN GLEVAREG	214
Notennoù	

Skeudennoù : Peder zaolenn gant LANGLEIZ.
 Tresadenn gant TUDU.

Digor an nor

Digor an nor war an hañv
 ar sterenn o plavañ war eskell kuñv an noz
 evel un evn en e huñvre wevn un aerlestr
 o tont gant lanv an ec'honder
 o tont e-maez plegoù don an arc'hoazh
 ha c'hoari goustad ar spered en e gorzenn-vaen

daoulagad ar spont o parañ
 war dremmwel ur sevenadurezh-vac'h
 yenienn reut tierned an heug
 o steuñvekaat ar pemdez
 hag e pign
 ouzh kevnidenn vut al Loar had
 ar Vuhez en Douar
 ha meuriad ar vugale ankouaet
 e milendall ar gouelec'h trec'h ennañ
 Dir an Ankou

Dreistvevañ
 gant skourroù kras gwezenn ramzel
 ar Skiant ar gabell ma koag dindani
 kor tousegi an hañv luc'h ar sterenn diwezhañ
 un evn spurmant ar pluñv e gwasked
 ar peoc'h Kened habask
 kent tarzha ar bed

Boudoù ar c'houmanant lusennek, spontadenn...

1. LIZHER VA BREUR.

« Va breur kaer ha mignon mat,

'Klask gouzout out perak on bet serret e ti ar re foll. Te a oar mat piv on, dre belec'h 'm eus bet tremenet, ha pegen yac'h eo bet va spered a viskoazh. Ya. Dit-te e c'hellan larout penaos on deut da vezañ foll... Ma 'z eo gwir on foll.

Rak e gwirionez, n' ouzon ket, nann, n' ouzon ken pelec'h emañ ar furnez nag he c'hontrol. Ha ma soñj d' an dud on klañv, eo abalamour d' an huchadennoù o deus klevet diganin an noz ma oan deut d' ar gêr eus Roc'h an Evned.

Pa erruis e ti va zud, liv fall war va c'herc'henn, stenn ar c'hroc'hen war va dremm, hag o yudal 'n ur vouezh-penn gerioù diboell ha diskiant, komzoù hep penn na revr, o deus klasket diouzhtu ar medisin war va zro. Goulet 'zo bet evel just petra 'oa c'hoarvezet ganin, petra 'm boa bet gouzañvet, eus pelec'h e oan 'tont, hag an holl litanioù. Met, me gred, ma 'mbije roet dezho ur respont gwir ha klok, e vefen bet lazhet ganto kentoc'h eget kaset d' ar c'hlañvdi.

Ya. Foll n' on ket avat. Met an hini 'n deus gwelet ar pezh 'm eus gwelet-me, a c'hell bezañ trec'het gant an hirvoud hag ar glac'har ; ha krediñ 'ran penaos em lec'h, e vefe chomet marv kalz a dud war an dachenn.

E Roc'h an Evned e oan o labourat, te 'oar, ur c'houmanant dister a Gernev Uhel, etre Lokarn ha Sant-Servez. Eno e tarempreden tud spontus a-walc'h e gwirionez, tud vut pe dost. Ne gomzent, koulz laret, nemet dre o daoulagad pikous, daoulagad gwenn disliv gant gwazhiennoù ruz niverus strewet enno evel rouedoù da besketa.

165

Pa gomzed ganto, e savent o selloù pilpous war-zu an oabl, kement ha reiñ da gompren ne ouiemp ket an hevelep yezh, pe ivez ne oamp ket ganet war memes douar. Piv 'oar ? Pezh am eus desket abaoe diwar-benn an " dud " -se a zo trawalc'h da lakaat 'n den d' amgrediñ war e vuhez e-unan.

Ha ma oa boemus-tre ar boudoù-se, an traoù ne oant ket pell diouzh ar memes pal, 'vit pezh a sell an dic'histed. Ne oa e Roc'h an Evned, pe d' am soñj, Roc'h an Diaoul, nemet geot du treut, luziet evel blev sec'h ur sorserez bennak. Un tammig menez a zispake e gein 'us d' an tier teñval, war-zu ar c'hreisteiz, se 'zo kaoz moarvat ma ne veze nemet un tammig deiz abaf er gêr-se, etre kreisteiz hag enderv, un tammig heol trist, lagadig dister ha disliv. War ar marc'had e veze goloet ar c'houmanant noz ha deiz gant ur vorenn c'hleb ha pegus.

E kêr ne oa nag iliz na person, met ur vered azezet 'vel un tog war beg an dachenn.

Alies, pa veze dizoloet lein ar menezig un tamm pekenn bennak, e oan kustum da bignat war an dosenn, dre wenodennoù treuz ha risklus, e-lec'h 'm bije an digarez da astennañ va joscenn bep eil paz, treuzet 'vel 'oant gant banal, lann, radenn, brugoù hir-euzhus, uhel ha kreñv daoust ma oant hanter vreïn... Ha brein en un doare dic'hortoz : ne oa ket e-giz keuneud sec'h mat d' ober tan met heñveloc'h ouzh al louzeier marv a c'heller kavout e paludoù, gleb, gludek, litous, libous, hag o teurel ur flaer, me 'lar dit, ur flaer ken heugus hag ar c'hwez fall a sav diouzh korf ul loen marv bet chomet war blad an douar, 'pad

pell, e kreiz an hañv.

C'hoant ac'h eus moarvat, da soñjal e oa ret din bezañ trelatet dija 'benn tremen sklaerañ va amzer o redek dre runioù droch evel-se. Met un nerzh kuzh a sache warnon ouzh lein ar grapenn. Ret 'oa din mont da welout ar vered.

Ar vered ? Setu aze ul lec'h, a lavarfes, ul lec'h euzhus da zismantr abardaezioù, 'vit un den yac'h a gorf hag a spered...

N' ac'h eus ket soñj eta, penaos e plije din, pa 'oan studier e Roazhon, mont dre kêrioù Breizh, gant va son-enrollerez, da zastum e yezh ar re gozh marvailhoù an amzer dremenet ? Setu 'm boa klevet eno kontañ eus sunerien-wad. Hervez un den kozh-tre, e oa bet gwechall ur suner-gwad er vro. Hennezh, ur wech diskleriet e dorfedoù, 'oa bet drouklazhet ha beziet e-kichen ar vered, en un toull er roc'h. Stouvet 'oa bet ar c'hev gant mein pounner. Met gouez d' ar gontadenn, a-raok mervel 'n doa prometet ar suner-gwad dont en-dro un devezh arnev ; an dud ne blije ket dezho klevout ar gont-se. Ha pa veze gwrez e rae pep hini sin ar groaz... Betek gout...

166

Ret eo din anzav penaos dre forzh soñjal en dra-se, 'm boa c'hoantaet - na foll e oan - klask mougev ar suner-gwad, daoust n' am boa tamm ebet kred e siklezennoù hudur evel-se. Koulskoude 'zo bet savet alies istorioù a bep seurt diwar-benn un dra wir, ha posupl 'oa din dizoleiñ ster ar gontadenn-mañ un tu bennak e kof ar menez, skoachet gant drez, spern, linad, iliav pe broustaj. Ha setu perak e valeen gant ur vazh hag ur wigned war ar grapenn reut, 'vel un den dall, o klask va hent e-touesk al lorgnez flaerius, pennek ha kalonek 'vel ma oan.

Skrivet 'm eus dit a-raok, ne oa ket aes ober kont gant tud ar c'houmanant. Met 'benn 'oan bet o chom ganto e-pad tost d' ur bloaz, 'm boa bet un tammig hentadur dister a-walc'h gant daou anezho, daoust ma ne veze kazi tamm komz ebet etrezomp. 'N em gaout a raemp a-wechoù tro noz d'evañ ur chopinad pe zaou en un davarn deñval er vourc'h. Ur ger eo dav din dispakañ c'hoazh diwar-benn an ostaleri-se : rak bremañ e komprenan ur bern traoù, daoust din bout chomet dall er c'houlz-se. Da lavarout eo, kaer 'm boa 'n em gemer evit yac'h ha leun a furnez, n' hellan ket intent sklaer pegen souezhus 'oa daleañ e-touesk spontailhoù ken blaouac'hus.

E gwirionez, en davarn-se, ne oa nemedon oc'h evañ bannac'hoù. Ar re all a zeue eno da brenañ a bep seurt madoù : diaes displegañ petra. Hag er forn kañvaous-se, pep planken, pep kador, pep taol, an holl vinvioù, an nor, stignoù lous ar prenestrig strizh, an dour da walc'hiñ ar gwer, betek dilhad an espes hudurenn a veze 'tegerer 'n den, an holl o doa an hevelep liv, etre glas-moug ha du, louedet ha dilufr eus an tristañ. Ret 'oa kaout ur gwall sec'hed, pe glac'har da veuziñ, 'benn mont en ur seurt kraou-moc'h da charinkañ ur fistolenn.

Eno, bepred, 'm boa graet anaoudegezh gant daou zen, a zeue bemnoz d' ober ur pennad kaoz ganin. Tamm-ha-tamm 'oant deut d' en em zoñvaat, gouez 'vel ma oant da zi-gentañ. O, ne veze ket prezegennoù hir etrezomp, met a-gevret 'oamp, ha peogwir n' am boa mignon all ebet... e raen ganto hep c'hoari va milzin. Tuet 'oan da lipat ur banne ur wech an amzer, hag int a selaoue va c'hohz kaozioù hep teurel ger na grik, kuit da c'hoarzhin ha da evañ an disterañ lonkadenn a netra.

167

'Karfe da Zoue, ma 'z eus unan en tu bennak en neñv, bezañ laket ac'hanon da darzhañ gant ur gwallgleñved, kentoc'h 'vit bout va laosket da vont pelloc'h gant va darempredoù. Ya ! Bezañ deut da vignon d' an aerouant pe me 'oar peseurt spontailh daonet sailhet diouzh an Ifern war an douar, se 'zo ur blanedenn re griz 'vit ur paour-kaezh den ha n' en deus graet droug ebet da nikun.

Evelkent, dalc'homp eta war hor c'hont. Kompren 'rez, va spered 'zo bet ken mastrouilhet ha labistret gant arvestoù heugus, ken eo chomet direnket. A-

raok kenderc'hel va lizher ez an da gemer kachedoù, rak aon am eus a-hend-all e faoutfe va faour-kaezh penn. Daonet, milliget on moarvat ! Kerse din bout intentet abretoc'h, ha bezañ kuitaet al lec'h brein-se buanoc'h... Ha biken-gast ne vin kavet ken o furchal war roudoù marvailhoù ar re gozh ! Ra varvo ganto o c'hevriñoù, ra vezint kaset ganto d'an ifern, pe donoc'h c'hoazh maz eo posupl !

Ma, dav din larout, forzh penaos.

Setu 'm boa merzet, un deiz, penaos 'oa krog unan eus va daou vignon - Krudlaa e anv - da gastizañ, hag ur pennad goude, tra dic'hiz a-walc'h, e krogas egile, Dru-Kall, da bounneraat. Soñjet 've bet e koeñvfe an eil gant anal egile ! Rak eus ar memes ment e oant, krenn ha youst. Ha setu an hini kentañ o kreskiñ 'n ur dreutaat 'vel ur c'hi naonek, keit ma 'n em bade an hini all, o tont war ar marchad tev ha gwak 'giz un touseg. Bizied Krudlaa, eus ront ha berr 'vel ma oant, a grogas da hiraat, ha gant ivinoù lemm e teuent heñvel ouzh krabanoù ur burtul... Pa gomzan eus laboused-preizh e teu soñj din ivez e teraoue e fri da zont kamm 'vel pigos ur sparfell. Ha petra 'larfen eus selloù ifernus va mignon, nemet e taolent tan ha luc'hedennoù, o lugerniñ en deñvalijenn 'vel re ur c'hazh ! Hirisiñ 'raen da ziwezh pa em gaven gantañ 'Pezh a gaven gwashoc'h c'hoazh 'oa e c'henou. A-wechoù e lipe e ziweuz gant e deod bilimus, ul lardinenn ken hir hag hini ur vuoc'h, ha kalet 'vel un askorn. Ur spont 'oa 'n em gaout dirazañ ! Pa c'hoarzhe, e tizoloe e zent, hag a oa krog da hiraat ivez kement ha re ur porc'hell gouez laret vefe bet 'oa pep hini ur minaoued breolimet. E groc'hen 'oa deut melen ha louet 'giz un tamm paper kozh bet staget 'kichen ur siminal. Ken moan 'oa erru da ziwezh, ken e seblante e zilhad bezañ re ur spontailh-brini stennet war bizhier.

168

Hag egile, ma Jezuz ! Me 'zo sur, war va feiz dall ha daonet, n' eus medisin ebet war an douar hag en deus bet gwelet ur c'hrouadur, ur boud evel hennezh ! En e gichen, kakouzien, roñfled, kornandoned, tud tort ken divalav ha mac'hagnet a garfec'h, 'oa tud koant-kenañ ! Hemañ, Dru-Kaal, e vije bet kredet a oa o vont da darzhañ, 'vel bolodoù a vez roet d' ar vugale er pardonioù, pa vez c'hwezhet re greñv enno. Keit ha ma tremene an amzer, gant heol klañv an devezhioù lusennek, deiz ha deiz, ken ma yae Krudlaa war greskaat, e geneil a golfe e hed hag a ledanae a bep kostez 'vel pri bouk nevez-berniet. Un touseg, un dra euzhus ! E dreid a rede 'maez e votoù-koad, e zivhar a zeue 'vel kaoutchoug. E gof, ur mell penton gwak, 'n doa torret da viken boutonou e borpant. E c'houzoug... met 'n doa gouzoug ebet ken, peogwir e oa plantet e benn war e choug 'vel hini ur boulomig-erc'h ! Ha daoust hag e vez graet ur penn ouzh an spes pigos distumm a heje hep paouez 'us d' e zivskoaz ? Alies, 'pezh a sponte ac'hanon, alies e lipe e vuzelloù koulz hag e geneil, met breugeudiñ 'rae war ar marchad, o skignañ din aezhenn e anal vilimet, ha kaer 'm boa bout seven a-walc'h, pell kreñvoc'h c'hoazh 'oa va c'hoant da zistreiñ ma fenn, da sailhañ er-maez, ha da skarzhañ ar pellañ ma c'hellen diouzh an teroer trelatet-se, e-lec'h 'oan bet kaset, d'am soñj, 'vit kaout keuz ouzh va fec'hedoù.

Ret 'oa gwelout an daou astrafer-mañ o kerzhout ! An hini bras, an diskrouger-anduilh, 'n doa kemeret stumm un tasmant hudur o vreskenn dre parkeier didud Mor ar C'hreisteiz, pignet war div vazh evel mesaerien al Landoù. Egile a stleje e soav diframm 'vel ur reunig-hirzantek pe ur morgazh war an draezhenn, heñvel-Doue-bev ouzh ur vuoc'h prest da halañ, ha c'hoazh ur vuoc'h he deus divesker, e-kichen e kerzhe hemañ koulz laret war e feskennoù, peogwir ne oa ket e zivhar kaoutchoug nerzhus a-walc'h da zerc'hel anezhañ 'n e sav. Un dra spontus all a chom da anzav : morse n' em eus gwelet an daou-mañ nag oc'h evañ, nag o tebriñ an disterañ begad ! Hag ivez, bremañ e teu soñj din, n' o devoa ti ebet, rak anavezout 'raen an holl diegezhioù er c'houmanant, hag hini 'bet 'oa dezho !

Da ziwezh e kave din 'oa ma fenn o vont da faoutañ dre forzh daremprediñ ar c'hrouadurioù-se, etre loen ha den, hag o treiñ da loened mui-ouzh-mui. Krog 'oa an aon d' aloubiñ va buhez, dreist-holl pa zegouezhe d' unan anezho skeiñ warnon e sell pilpous ha lontek, digor Frank e c'henou, 'n ur lakaat e deod da strakal 'vel 'ra al liñselioù o sec'hañ en avel greñv.

Un deiz, ha poent 'oa, 'm boa soñjet 'n em zistagañ diouto ha chom hep o gwelout. Da heul 'oan krog da glask labour en ur gêr all, ar pellañ ma kaven. Erru 'oan skuizh gant Roc'h an Evned, gant he zud vut, he louzeier brein, he morenn zu hag hec'h istorioù euzhus o redek eus ti an eil foll d' egile.

Met beg an uheladenn, du-hont, a sache war va spered ha va zreid sentus a responte, 'vel ma vefen bet galvet eno gant ur vouezh hollc'halloudek, un nerzh trec'h.

Ha setu penaos, un abardaevezh 'n em gavis c'hoazh o redek e karidennoù lous ar menez, gant va jalp, ur vazh hag ur sac'had binvioù a bep seurt. Arnev 'oa. Gleb dour-teil 'oan, o c'hwezhiñ 'n ur bignat ar grapenn, ha start 'oa bale gant al lousnaj etre va zreid. Gwech an amzer 'veze ret din ober un ehan. Azezañ 'raen ur pennad war al leton naonek. Neuze, skuizh 'vel ur bleiz, pounner va divrec'h ha va morzhedoù, pa baouezen da vont 'raok, ha gant ar flaer heugus en-dro din, e krogen da vezvigenniñ. Pa 'm beze adkemeret va anal, ez aen un tammig pelloc'h, ha reiñ 'raen duilhenn dezhi da furchal er broustailh.

N' em boa tizhet c'hoazh nemet hanter-grapenn, pa welis pe stumm 'n doa gwisket an duchenn... Un dra voemus : heñvel 'oa ouzh penn un den klañv da vervel, gant eon o flistrañ eus pep kostez d' e c'henou. Hogen se a zeue diouzh div rinier, o lugerniñ e teñvalijenn lusennek ar vorenn, hag a rede ouzh kof ar run, ganet o-div en hevelep mammenn. Spontus 'oa an arvest. Meur a wech, d' an abardaez-noz, on bet kustum da gavout ar gwez heñvel ouzh un dremm dianav bennak, ha pa oan bugel ne greden ket kerzhout er-maez diouzh an noz, gant aon e tegouezhfe ur bochad haleg da deurel e zroukrañs war va c'hein !

Met va spered, va breur, va spered 'oa yac'h, hag un den kreñv evel don n' eo ket nec'het a-walc'h gant ken nebeut-se a dra, evit chom da derlepal. Ha me 'raok atav ! Ul letern 'm boa kaset ganin ivez, peogwir ne veze morse tamm sklerijenn ebet er vro daonet-se.

Ur mare 'oa, setu me degouezhet dirak ur mell roc'h n' am boa ket merzet c'hoazh. Ha souezhus ar maen ! Laret 've bet ur roc'h doñv e-touez ar re ouez ! Perak ? N' ouzon ket. E gwirionez, kement a loustoni 'n em gave en-dro dezhi, ha ken flaerius an dachenn hag e lec'h all. Hogen pep tra a seblante bezañ renket, dreset en un doare seven evel en ul liorz. Krenañ 'rae va c'halon o tostaat dezhi, rak komprenet 'm boa en un taol 'm boa kavet 'pezh 'oan o klask ! Tremen 'ris a-dreuz ar foustaj, krabiset ganto va c'hroc'hen, met ne rae forzh. Aze 'oa diskoulm an anken. Pa erruis dirak ar roc'h, e welis penaos 'oa faoutet, hag ar frailh a yae don-tre. Goloet 'oa en un tu gant man ha geot, ha me da ziskrapañ anezho. Neuze, d' am brasañ spont, ar vein berniet e toull ar vougev 'n em ziskouez din dispak, hag e kavis ar gerioù-mañ kizellet war ur maen ! « ARABAT MONT ! ». Ha pelloc'h : « C. AGR. MESTR AN NERZH KII7H ».

N' ouzon ket ha lennet ac'h eus levr Kornelius Agrippa diwar-benn ar sorserezh : me 'm eus graet ma fri-furch e-barzh. Ul lennadenn arvarus, trawalc'h da lakaat spered an den da drenkañ. An diskonter-se 'oa hollc'halloudek gant ar pezh a oare. Gast ! Daoust perak n' on ket retornet primoc'h d' ar gêr ? Bez' ez eus traoù, ma breur, hag eo gwelloc'h chom hep anavezout anezho...

Ya ! Met an den a skriv dit 'oa yac'h e ene, peurbennek ha kalonek ! Ne oan ket bet pell oc'h intentiñ penaos ar vein-se ne oant ket peget mat. Dreist-holl, laret 'vije 'oa bet kemmet lec'h dezho meur a wech. Ha setu 'm boa diskaret ar bern, ha me 'barzh an toull ! O ma Doue ! Dav din kemer va louzoù en-dro.

Gastañ tra vrein milliget ha daonet bet stlabet war an douar gant mesaourien euzhus ha fallakr Roue an Ifern, n' eo nemet butun-chik e-kichen an arvest spontus 'zo bet dizoloet en toull kañvaous-se gant sklerijenn va letern.

Ma 'z eus un Doue madelezhuz en ul lec'h bennak, e kemero truez ouzhin, buan, hag em c'haso d' e Varadoz, pe lec'h ma karo, met ne welan ken gwelloc'h evit ar marv emsav 'walc'h da zisammañ va spered diouzh ar skeudennoù diaoulek o deus aloubet anezhañ da viken.

Ma breur, ma breurig mat, te 'gredo pe ne gredi ket. Me wel eno va daou vignon, Krudlaa ha Dru-Kaal, tizhet ganto ar gwashañ pal en o c'hleñved. Oc'h ober petra gast, eta ? Siwazh ! va breur ! En em vagañ an eil gant korf d'egile !

171

An hini brasañ, an hini askorn-tout, 'oa o sutellat ha raskognañ askorn diwezhañ e genseurt ! Gwir eo, gwelet 'm eus, gwelet am eus, war va feiz dall ha daonet, an hini bras oc'h ober un toull gant e zent hir e kein egile, hag o tistagañ pezh diwezhañ gwalenn e gein, evit hen debriñ ken aes ha ma ra ar vugale gant ur sutell-lod ! Hag egile ? Egile, va breur paour, 'oa stag e veg ouzh kof-gar diwezhañ e vignon, o evañ, o sunañ e gig, e soav, e vuhez ! O ma Doue ! 'Vel ur waderez ! Me 'oa chomet 'vel ur pezh koad o sellout ! Hag int 'oa ken klok an eil ouzh egile, pep hini o lonkañ egile, ken ne oant ket direnket ganin ! Hogen a-daol-trumm, me 'wel an hini bras o kouezhañ war e grabouchoù, ne oa nemet eskern sec'h outañ, ha moarvat e galon e-unan 'oa bet sunet ivez. Ur relegenn ! E groc'hen stenn 'vel paper ur c'hraou Nedeleg, 'oa skalfet e pep lec'h, hag an amzer da laret, ne chomas outañ nemet eskern treut diliamm, disklochet, hadet war leur ar vougev...

Hag egile ? Mallozh ruz ! Hennezh avat 'oa buhez ennañ ! Ur pezh sac'had soav litous ha noazh, un toufouilheg hep stumm na framm ebet ! Un euzhadenn ! 'N em ledañ 'reas war an douar, hag e krogas da dostaat sa din, 'n ur ruzañ 'vel un naer. D' ar mare-se hepken e teuis da verzout penaos, gant gwad ha soav fresk mesk-ha-mesk o tiverañ ouzh an daou du d' e chenou, e zremm 'n em gave heñvel-rik ouzh an duchenn un tammig abretoc'h. Ul ledouet ! Ur pec'hed bev !

Founnus e tremenas an traoù goude.

Pa welis ar c'hozh tra vreïn-se o tont warnon, me 'adkemeraz nerzh a-walc'h evit tapout em sac'h-binvioù, un tenn-dinamit, ha lakaat ar vougev en poultr, o kinnig anezhi d' ar foeltr. Diston 'rae c'hoazh an trouz em divskouarn keit ma oan o reiñ douar d' am zreid da ziskenn prim an duchenn daonet, hep derc'hel kont eus an drez hag ar spern a c'hloaze va c'hroc'hen.

Pa erruis er vourc'h, me 'wel en-dro din, o kerzhout 'vel tousegi marnaonek, korfoù huñvreüs ul lodenn vat eus va amezeien. Bep an amzer e skoën va zreid en ur bern eskern hep buhez.

Ha neuze 'm eus redet e-pad tri deiz diouzhtu-kaer, kuit da selloù war va roudoù, ha n' ouzon ket penaos on deut a-benn da dizhout ti va mamm ha va zad, o huchal 'n ur vouezh-penn : « Krudlaa ! Krudlaa ! Dru-Kaal ! Dru-Kaal ! »

Ar pezh en deus heuliet a ouies kenkoulz ha me.

Va breur, va breurig kaezh, setu 'balamour da betra on bet dastumet er folldi. Perak 'm dije anzavet ar wirionez d' ar vedinised, d' an holl dud ? Piv 'n dije kredet kemend- all ?

Bremañ, se 'zo spontus, eo eeun va spered. O c'hortoz mervel on, rak te 'oar, ar sunerien-wad. sunerien-buhez, int ne varvint biken. Kavout 'rint va c'huzhadenn. Ha pa gren an oabl gant ar gurun, me 'bed ma-unan em gwele. Kan an avel e barradur ar gwez uhel, c'hwitell drant an draskenn er prad, lagad tomm an heol ha farserezh an dud lirzhin tro-dro, se n' eo ket evidon. Nann. O c'hortoz mervel on. »

172

2. ABAOE.

Setu al lizher kaset din gant va breur, teir sizhun 'zo. Evel just, truez 'm eus bet outañ, paour-kaezh den trelatet aet da zivalav. Ya, foll-tre a oa, 'vel 'c'hell pep hini soñjal. Pa erruas al lizher ganin, e c'houlennis digant an archerien ober un enklask war ar c'houmanant e-lec'h 'laboure. N' o deus kavet netra. Den ebet 'n deus klevet komz eus Roc'h an Evned. E kartenn ebet ne vez kavet ar gêr !

Hogen ar pezh a lak ac'hanon da embann ar c'haozioù-mañ (na troet on da sot ivez ?) eo penaos 'mañ bet kavet va breur, tri deiz 'zo marv er folldi.

N' eo ket dre 'n askont 'mañ marv.

Gwashoc'h eo ! Pa erruas ar glañvdiourez en e gambr d' ober war e dro, e kavas e gorf ledet 'tal-kichen e wele. Follet eo bet ar plac'h abaoe. Eus korf va breur paour, ne chome ken nemet eskern, eskern noazh peurlipet, hep kig na kroc'hen. E benn hepken 'oa chomet 'n e bezh hag e zaoulagad divarc'het a lare e pebezh anken 'oa tremenet.

Prenestr e gambr 'oa digor 'vel an holl 'balamour d' an tommder, rak e-kreiz an hañv 'oa, gant arnev. An deiz a-raok 'oa kouezhet ar gurun tostig-tre.

An archerien o deus kavet, dindan e brenestr, roudoù un dra dizivizus, 'vel ma vije bet stlejet ur sac'h leun war draezh ar bali. Met ur wech tizhet an hent bras, just dirak ar vered, ne oa roud ebet ken.

Ar re foll-all o deus laret penaos o deus klevet ma breur, noz an torfed, o hopal 'vel un den mezh : « Dru-Kaal ! Dru-Kaal ! Krudlaa ! Krudlaa ! » mouezh e benn. Ha gant an aon, bep hini 'oa chomet en e wele.

Met piv 'n deus kred da lerbaj tud foll ?

16.01.1974.

Echu e miz Ebrel 1974.

E Roazhon.

(Bet embannet war " Skrid ".)

LANGLEIZ

Xavier de Langlais a zeuas war an douar d' ar 27vet a viz Ebrel 1906 e Sarzhav en ur familh eus noblañs Bro-Ereg. An tiegezh Langlais des Ouches a oa genidik eus Matignon (bro Penteür). Ur skourr eus an tiegezh-se, perc'henn da zomani Premorvan (anv a servijo da Xavier da sinañ meur a bennad) a oa aet da chom, er XVIIvet kantved, da Sant-Sebastian, stok ouzh kêr an Naoned a gemero chuined e-touez izili ar familh. Goude un dimezi, setu homañ oc'h en em ziazezañ en Alsas, e 1780, met distreiñ a ra da Vreizh e 1820. Prenañ a ra Aogustin de Langlais, e 1850, daou c'hant devezh-arat Kervers, e Sant-Gweltaz-ar-Ruiz, hag eno en em ziazez da vat an tiad. E vab a gemeras da bried un dimezell de Francheville, en un tiegezh ne oa ket hepken breizhat a ouenn, met e-lec'h ma veze komzet brezhoneg a rumm-da-rumm. Istor ar familh-se a ya da heul hini ar ragenez koant, abaoe un deiz a viz Ebrel 1442. An deiz-se Per de Francheville a zilestras e pleg-mor Susinio gant Izabel Bro-Skos, danvez-pried an Dug Frañsez I, hag he lez. Francheville a gavas ar vro hag an dud ken plijus ken e tiazezas eno e diegezh evit ur viken. (1)

Ar Francheville kentañ a oa bet hanafer Dug Breizh, unan all gouarnour kreñvlec'h Susinio ha Xavier de Langlais a raio meneg eus an den meur-se betek e zevezhioù diwezhañ. Un nebeut sizhunioù a-raok e varv e konte Langleiz din war e wele ospital e oa ar Francheville-se ken madelezhus ha pinvidik. Pa veze ur fest ganto, er sal-degemer e lakaent ur paour er penn-kentañ, plas Hor Salver, o mestr hag o aotrou. (2)

Tad Xavier, Roger de Langlais, a oa bet ganet e Sarzhav, e " Kerjorjed Bras ", savet gant ar barzh, livour ha skrivagner brezhon Amédée de Francheville a rae Xavier kement a stad anezhañ. Goude bezañ graet studioù a-zoare, aet e oa Roger de Langlais da gargiad dindan ar gouarnamant, met, siwazh, se a oa da goulz renabloù an ilizoù. Evel ma ouie an denjentil breizhat ne oa nemet disfiz outañ dre avani e venozioù politikel ha relijiel, e kavas gwell mont d' ober war-dro e zouaroù hag a da chom e Kohanno (e Surzhur), un ti nevez savet gantañ e-giz ar maread. E vuhez a voe hini ur " gentleman-farmer " ac'han ma teuas brezel Pevarzek d' e laerezh d' e vro ha d' e dud evit pemp bloaz. Dimezet e oa da Varc'harid Huchet du Guermeur, genidik eus Kemperle. Nag an eil nag egile ne ouie brezhoneg. Gant o rummad e oa bet torret ar chadenn aour, tud-kozh ha kerent-kuñv Xavier de Langlais ne gomzent nemet brezhoneg etrezo, evel ma veze graet e tiez all ar gourenez. Ne raent ket fae war dud ar bobl ha kerent o doa en o zouez. E-kerz unan eus an diwezhañ gweladennoù graet ganin dezhañ, e komzas Xavier de Langleiz din eus e « vamm-gozh koueriadez » a oa bet kaset gant e gerent-kuñv Francheville da gemer kentelioù seurezed ur gouent. Honnezh eo marteze an hini he deus degaset dezhañ ar gwellañ gwad gant anien hag ijin.

Komz a rae Xavier ivez eus un eontr, breur e dad, Elie de Langlais, ur bourrus a baotr a blije kalz dezhañ. Mignon bras d' ar re yaouank hag unan eus diazezerien ar skoutelezh er Mor Bihan eo bet. Plijout a rae ar brezhoneg dezhañ ha dont a rae gantañ bravik a-walc'h. An eontr Elie a oa maer Sarzhav (evel ma oa bet araozañ e dad hag e dad-kozh) ha darempredoù pemdeziek en deveze eta gant an dud diwar ar maez. Eñ, emichañs, eo an hini a gasas Xavier gantañ d' ur vodadeg renet gant Loeiz Herrieu. Eno e tihunas e garantez evit Breizh hag he yezh. Unnek pe daouzek vloaz en doa ha setu digoret e galon hag e spered. Klevout a ra en-dro dezhañ, evel ur ganenn-veur, ar yezh komzet gant an holl nemet gant e dud. Selaou a ra komzoù liorzhour kozh e dud, re ar venajerien diwar-dro... Ya, selaou a ra ha kompren buan. Prim a-walc'h e teu gantañ yezh e bobl, n' eo ken un estrañjour en e vro ha biken ken ne ankounac'ho ar vro-se.

Digeriñ a ra e zivskouarn, digeriñ a ra e zaoulagad war an dud, war an traoù a gav holl hent e ene.

Un aergelc'h all a zeu da binvidikaat e galon. Ur blijadur eo evitañ mont da di e vamm-gozh, an itron du Guermeur, e Fregel, parrez Gemene-Pennfao. Ur vaouez desket eo, barzhez, muzikerez, sot gant an holl arzoù-kaer. Karantezus-bras eo an hini gozh en e geñver, met, pezh a zo rouesoc'h, gouzout a ra lezel anezhañ dieub ha gellout a ra ar paotrig kantreal hervez e froudennoù. E lec'h m' en em blij ar muiañ eo o huñvreal e-kreiz ar c'hoadoù ha ribl al lenn vihan a gave-eñ kalz brasoc'h eget ne deo e gwirionez. Eno e kav e eontred hag e dintined : Ivona Jochaux du Plessix (ganet du Guermeur) hag he gwaz, o chom en Naoned, Teofil du Guermeur, e baeron, ha dreist-holl an hini dedennusañ, e donton Rene, ken plijus, atav e galon war e zorn, un arzour anezhañ marc'heger ampart, servijet gantañ e-pad ar brezel dindan ar jeneral Gouvello en deus skrivet pajennoù kaer diwar e benn. Eñ a blij e niz dezhañ ivez ha kompren a ra mat-tre e demz-spered. E Fregel, ez a ivez Xavier da c'hoari gant ar vugale all diwar-dro hag ober a ra evel-se anaoudegezh gant Iv-Mari Rudel a chomo e vignon betek e varv.

Adalek neuze ez eo eta gwriziennet mat sichennoù e vuhez : ar barrioù amzer fall a c'hall dont ha gwentañ anezhañ pell eus al lec'hioù ken tost d' e galon. Netra na den ne c'hello laerezh digantañ baradoz marzhus e vugaleaj. Ennañ e-unan emañ al lec'hioù dudius-se kendeuzet en e bersonelezh. Pa zegouezho dezhañ bezañ harluet, pell diouzh ankounac'haat Breizh, ne soñjo nemet enni ha kleñved-ar-vro a raio dezhañ kompren gwelloc'h ar pezh ez eo evitañ.

- II -

« 'El ul loar a gañv hag a lorc'h... »
BLEIMOR.

1914. - Tarzhañ a ra war Europa a-bezh ar brezel foll, kriz, didruez ar brezel-se hag a vo ken noazus evit pobl Vreizh. Evit ar wech kentañ abaoe an Unvanidigezh, e weler Stad Bro-C'hall o soudardiñ an holl Vretoned varrek. Ne restaolo nemet nebeut a-walc'h anezho, mac'hagnet o c'horf ha saotret o ene, ha lakaat a raio sevel bernioù monumantoù ar Re Varv, gwellañ siell e breizherezh hag e sevenadur.

Galvet eo tad Xavier ha setu war ar marc'had e vamm e kouezhañ klañv. Aliañ a ra ar vedisined dezhi mont da vevañ stok ouzh ar menezioù. Kohanno a zo feurmet. Xavier a ya gant e vamm ha gant e vreur da g-Cambo, e-kichen Baiona hag eno e chomint e-keit ha ma pado ar brezel, met n' eus ket ur fall ha na servij d' ur vad. E-touez ar Vigourdaned, en ur vro ken disheñvel eus an hini m' eo bet savet enni, e kompreno gwelloc'h ez eo-eñ ur C'helt, ha ne raio e garantez evit Breizh, e vamm-vro, nemet kreskiñ. Ober a ra anaoudegezh gant Bro-Euskadi hag he fobl, ret dezhi ivez strivañ evit difenn he buhez hag he yezh.

Fellout a reas d' an itron de Langlais mirout he bugale en-dro dezhi ha goprañ kelennerien evit soursial outo. Siwazh ! ne gavas ar peurliesañ nemet mistri divalav e pep seurt keñver ha diakuit war ar vicher. Hep bezañ re figus e veze ret mat cheñch kelenner bep c'hwec'h miz pezh a ra noaz, se 'zo sklaer, ouzh ar vugale, dreist-holl ouzh Xavier. Tri bloaz hanter en doa e vreur Herri warnañ. Ur paotr a-feson, met disheñvel diouzh e vreurig ha diaes a-walc'h e oa dezho en em gompren. Gwir eo e plije da Xavier bezañ e-unan-penn.

Erfin e voe kavet ur mestr mat, dispar zoken, ur beleg okinat, an aotrou Tarrazé, genidik eus Saint-Pé-de-Bigorre, eskopti Tarbes. D' ar mare-se e oa kure Argelès-Gazost ; e 1928, e teuo da vezañ aluzenner chapelioù Lourdes ha mervel a raio person Loubadac, e-kichen Lourdes, e 1952. Henezh a zo beleg penn-kil-ha-troad, devot, troet d' ober pinijenn, kalon aour, spered digor ha deskamant bras dezhañ. E-pad daou pe dri bloaz e soursias ouzh Xavier. Santout a reas e oa e skoliad un arzour ha leun a zoujañs e voe evit e demz-spered, o vont dezhañ gant an doareoù a zeree outañ hep morse lakaat skoilh ebet war an hentoù

mat dibabet gant ar bugel, o kas anezhañ d' e heul, o skoazellañ anezhañ evel ma reas an ael evit Tobi a-hed e veaj hir. Moarvat ez eo a drugarez dezhañ e oa ken don feiz kristen Xavier, ur feiz a santer sklaer ha fraezh kerkoulz en e levrioù hag e livadurioù.

177

Echuiñ a ra evelkent ar brezel ha gellout a ra ar paotrig yaouank distreiñ da Vreizh. Setu peurechu e studioù a eil derez hag eñ studier war an Arzoù-Kaer en Naoned da c'hwezek vloaz. Arvarus a-walc'h e kave an tad an hent dibabet gant e vab, met lezel a reas anezhañ d' ober e benn e-unan. Degemeret eo Xavier gant e eontr Jozef du Plessix hag e wreg a gemer kalz a breder gantañ e-pad pevar bloaz. Ur mare eürus eus buhez hor mignon. Alies ez a da Fregel. Eno e kav ar marc'h kinniget dezhañ gant e eontr Teofil a Gerveur. Soñjit 'ta ! Ya, ur mare eürus evitañ ! Hemolc'hiñ a ra war varc'h (hag ampart eo) e koadeg ar C'havr gant e vignoned Boisfleury. Soñj a zalc'ho anezhi hep ket a var pa gomzo eus koadelier Brekilien en e levr " Romant ar Roue Arzhur ".

Chom a raio sod-nay gant ar marc'hegerezh e vuhez-pad, anavezout mat a ra ar c'hezeg, se 'zo aes da welout dre e daolennoù hag e livadurioù.

Echu e studioù gantañ en Naoned, setu eñ o vont da glokaat anezho d' ar Sorbonne, e Pariz, e-lec'h ma tremeno daou vloaz. Met, selaouit, n' emañ ket war-nes ankounac'haat Breizh ; en em lakaat a ra da studiañ ar brezhoneg lennegel, daoust ma ne ra ket al labour diouer dezhañ. « Me am eus desket ar brezhoneg er métro, » a lavare din evit va c'halonekaat.

Kavout a ra ivez mignoned e Pariz. Pa oa paotrig yaouank, en doa graet anaoudegezh gant ur Xavier all, Xavier Haas, Alsasian bihan klañvidik (paket en doa ar polio). Tud hemañ o doa prenet un ti, Lann-er-C'hoedig, e Sarzhav, war-hed div pe deir lev eus Kohanno, o soñjal e vefe bet kennerzhet o mab gant aer yac'hus ar ragenez. En em gavet e oa dre zegouezh an daou Xavier en ur c'hermes e Sarzhav, ha dre bouez un neudenn vrein ez ae goude Langleiz betek Lanner-C'hoedig, pa veze o varc'hekaat a-dreuz ar paludoù hag e disheol an hentoù-don. Ma oa heñvel anv-bihan an daou zen yaouank, liammoù all a oa c'hoazh etrezo, liammoù kuzh ar c'halonoù. O mignoniezh a chomas bev e-keit ma padas buhez berr Xavier Haas, paotr jentil hag arzour awenet. Pep tra a dosta an eil paotr yaouank ouzh egile : al livadurioù, ya, met ivez o c'harantez evit ar Vro, rak Haas a zo deut da vezañ ur gwir Vreizhad. Kalz a vad a reont an eil d' egile, derc'hel a reont dorn-ha-dorn gant o hent, pep hini anezho a zo meleour evit egile. Gwerzhañ a reas diwezhatoc'h kerent Haas o zi Sarzhav, met bev-buhezek e chomo mignoniezh an daou arzour, eskemmet e voe ganto ouzhpenn eizh kant lizher, a vo tu da embann ur wech bennak, spi am eus. (3)

178

E Pariz e oa an tiad Haas o chom hag eno e veze kavet alies Xavier de Langlais : aergelc'h laouen halennek war un dro. Xavier Haas a zo leun a faltazi blijus, ijinañ a ra lazoù-koroll gant e vignon hag e c'hoarezed Fofi ha Kosi evel c'hoarierien. Hag e-giz-se, setu ma kav Langleiz ar c'hoarezed a rae diouer dezhañ, dont a ra, e gwirionez, da vezañ o breur, ur breur a ali mat. Ur c'hoariva merc'hodennoù o deus ivez ha graet e vez a-gevret kalz a sonerezh. En Naoned e oa kroget endeo Langleiz da seniñ ar violoñs hag ar gourrebed. Eñ a zesk ober gant un heskenn vizikel. Sod-nay eo an daou vignon gant an tonioù keltiek.

Met diwezhatoc'h e vo ret da Langleiz dilezel un tamm ar sonerezh, a blije kement dezhañ, evit en em reiñ korf hag ene d' al liverrezh.

-III-

Echu e studioù gantañ, hastañ a ra Langleiz distreiñ da Vreizh ha ne guitaio ken. Ar 6vet a Vezheven 1931, e kemer da bried en Iliz-Veur Naoned, Annig Gabet du Chatelier (ganet e Fay-de-Bretagne, met genidik eus Saint-Léger-les-Vignes). An dud nevez a ya da chom e Kohanno Nevez (4) e-lec'h ma oa kent tad Xavier. Eno e voulc'h hor mignon ur vuhez a labour tenn met plijus, rak ma

ne zastum « nag aour na perlez » (5), gallout a ra da vihanañ ober ar pezh a fell dezhañ, heuliañ an hent dibabet gantañ evit tizhout pal e vuhez. Krouiñ a ra neuze oberennoù kaer. Troet e vezer d' ar mare war an Arzoù Sakr ha dre hanterouriezh James Bouillé, eus Perroz, tiijinour ha prezidant ar Bleun-Brug, ez eo galvet da gempenn ar skolaj Sant-Jozef Lannuon. Livañ a ra e chapel nevez ar skolaj, savet dre urzh ar chaloni Merseur, un hent-ar-groaz dispar. Unan ken brav all a ra er Baol. En oberennoù-se, al livioù a zo dreist, pezh a ziskouez, moarvat, an araokadennoù graet gant Langleiz, rak e vignon X. Haas eñ e-unan a lavare, e 1932, e oa « trist » livadurezh X. de Langleiz, ha ne oa ket ennañ danvez ur mesker livioù.

179

Gant al labourioù bras-se e tegas Langleiz dour d' e vilin hag a bourchas muioc'h a aezamant d' e diad. Kement ha ken bihan ma ne gavas ket Langleiz kalz amzer a-raok ar brezel evit pleal gant livadurioù-war-lien a vent vihan.

Kinniget eo dezhañ, e 1939, ar priz Blumenthal. Gant ar priz-se ec'h echu ur mare hag e krog unan all : ur prantad start ha treut, nebeutoc'h-nebeutañ e kaver labour d' ober en ilizoù. Ha koulskoude ret eo dezhañ gounit bara d' e vugale : tri mab, Mikael, Gaetan, Tugdual, hag ur verc'h, Rozenn, ganet holl abaoe ma oa deut o zud da chom e Roazhon.

Ne oa ket bras-bras Xavier de Langlais, met ur youl ken kalet hag an dir en doa. Adalek e gentañ bloavezhioù labour e oa kroget d' ober enklaskoù war doareoù teknel al livadur, o c'hounit brevedoù niverus, o krouiñ binvioù nevez ha meskadurioù ken nevez all (6). Ar meskajoù-se a raio dezhañ tapout ur gouli en e stomok, rak mont a ra betek tañva anezho. Klañv e voe ha ret dezhañ, e-pad ur pennad, lezel a-gostez e enklaskoù.

Xavier de Langlais a zo ivez ur gwerinoniour. Dre ma oa troet war ar sonerezh ha ma sot gant ar yezh, setu ma kaver anezhañ dre Bro-Wened a-bezh, er bloavezhioù 1938 ha 1939, gant ur sonskriverez - ne oa ket bet gwellaet c'hoazh da vat seurt binvioù - oc'h enrollañ kanaouennoù niverus a gas da Virdi an Den.

180

D' ar c'houlz-se e krogas ivez Xavier da skrivañ e oberennoù brezhonek. Adalek 1932, e oa aet da heul Roparz Hemon ha kenskriverien all ar gelaouenn " Gwalarn ", e-lec'h m' en doa embannet un teskad barzhonegoù romantel leun e bromesa, " Kanoù en Noz ". Graet en doa tresadennoù evit mont da heul, evel ma tle ober evit e holl oberennoù lennegel, pezh a ziskouez fraezh an div bersonelezh a oa ennañ. Diwezhatoc'h ec'h embanno daou bezh-c'hoari diazezet war e venozioù, evel re Synge : " An div zremm " (1933), " An Tamall " ; hag ur barzhoneg hir dre ziviz, " Koroll ar Vuhez hag ar Marv ". Arabat eo ivez ankounac'haat un oberenn deknikel, " Ene al linennoù " (Skridoù Breizh, 1943) gant pemzek ha tri-ugent skeudenn war goad.

Tamm-ha-tamm e teu ivez war e spered hag e skriv e romant iskis ha diouganus " Enez ar Rod " ma kendeuz an destenn hag an tresadennoù met re fromus ar wech-mañ, evel ur c'h- « cartoon » spontus. A-raok mont d' ar brezel, e 1939, gant aon na vefe bet kollet ar romant-se, meleour e galon hag e spered, en doa kleñket an dornskrid en ur pod-pri douaret e Kohanno. Tristik (7) e oa e stad pa adtoullas warnañ ha n' eus ket peadra da vezañ souezhet, lakeda. Gwell a se ne oa ket ar skouerenn nemeti !

Poent bras eo bremañ degas da soñj e oa Langleiz ur broadelour emouestlet. Darempredoù en doa dreist-holl, se 'zo sklaer, gant al livourien hag arzourien vreizhat all, troet d' ar garantez-vro eveltañ. Da driec'h vloaz e oa deut da vezañ ezel eus " Unvaniezh ar Seizh Breur ", krouet gant Rene-Erwan Kreston. Ober a ra e-giz-se anaoudegezh gant Suzanna Kreston, James Bouillé, Jan Malivel, Jorj Robin, Paol Durivault. D' o heul e laka e labourioù e servij ar Vro. Engravañ a ra dibaouez war goad kement ha kaeraat pajennoù hor c'helaouennoù, hor c'hazetennoù (Feiz ha Breiz, Ar Vuhez Kristen, Dihunamb, ha kalz a re all) ha skritelloù a bep seurt ment savet evit difenn ar yezh hag ar sevenadur keltiek. Langleiz a zo deut da vezañ tresadenour ha livour ofisiel an Emsav.

Ober a ra pep tra, evel just, evit ur bennozh Doue, rak gouzout a ra ez eo an emrousted ar c'hentañ eus gourc'hemenoù an emsaver. Kement ha ken bihan ma ne vo biken posupl ober istor an Emsav adalek dibenn brezel pevarzek betek bremañ hep menegiñ e obererezh.

181

Feiz ha Breizh ! Setu aze lezenn-stur Xavier de Langlais, ul lezenn rik a reas dezhañ kenlabourat gant an Aotrou Perrot betek ma voe drouklazhet hemañ. Ar c'hristen penn-kil-ha-troad-se a dremenas ivez kalz a amzer o tresadenniñ evit Kabusined an Oriant taolenoù livet e-giz re Mikael an Nobletz hag an Tad Maner.

E-kerz gouelioù bras ar Bleun-Brug, e 1935, en ur pezh-c'hoari istorel skrivet gant Kornou hag an Ao. Perrot, ez eo eñ an hini a ra ar manac'h brogarour Yann Landevenneg.

Brokus eo eta e pep stumm.

Gwenedour a ouenn hag a lavar, Langleiz a zo bet prederiet atav gant unvanidigezh ar yezh. Ma n' eo ket eñ a vould'has ar gaoz, ma n' eo ket bet ar pennlusker, bet ez eo da vihanañ ar gwellañ kabaler a sikouras kalz krouiñ an unvanidigezh-se, e 1941, war diazezoù prientet abaoe 1936. Pezh a lakaio teodoù-fall ha pennoù-gaouiad da gontañ penaos ne oa nemet labour an Alamaned (ma teu pobloù all - Doue ra viro - da aloubiñ hor bro, an Amerikaned pe ar Re Velen, e vo klevet adarre, emichañs, seurt tezennoù kleuz). Kerkent e skriv-eñ e peurunvan, o tiskouez skouer vat hag o tegas d' ar yezh lennegel douster hag ivez aour fonnus ar gwenedeg.

1939. - Adarre ar brezel-gaoc'h ! Kaset eo Xavier da rejimant-war-varc'h Gwened e-lec'h m' eo anvet da gentelier dindan ar jeneral Le Bleu. Tapant a ra, a-drugarez Doue, bezañ disoudardet « in extremis », e 1940. Er bloaz a-raok e oa bet skrapet e jav " Paulette " digantañ gant lu Bro-C'hall. Distreiñ a ra da Gohanno gant ur marc'h da lu Bro-C'hall, ur gaer a gazeg zu a ouenn rik, " Ysère ". Ha kitez an dud, mutu !

Ma ! Setu eñ disoudardet eta, met, siwazh, n' eo ket sklaer an oabl evitañ, tamm ebet zoken : treut eo ar peuriñ. Derc'hel a ra ar brezel ha n'eo ket troet spered an dud gant arzouriezh, pep hini en deus trawalc'h d' ober kavout peadra d' en em vagañ. E 1941, e teu Xavier de Langlais da labourat da Roazhon dindan askell e vignon Yann Fouere a zo o paouez krouiñ kazetenn an abardaez **La Bretagne**, a venozioù didaer. E-pad ouzhpenn tri bloaz e vo karget Langleiz eus ar pennadoù war an arzouriezh. Mont a ra e wreg hag eñ da chom er 7vet eus straed Viktor-Hugo ha chom a reont eno e-pad ugent vloaz. Goude ez eont e-barzh unan eus tiez-meur met kozh, plasenn al Lisoù, en niverenn 28. Siwazh ! ne vo ket pell Xavier - un druez ! - en e ranndi kaer ar 6vet kae Richemond, en doa prientet enni ur sal-labour hervez e galon, evit tremen e amzer hervez e faltazi, peogwir e oa bremañ war e leve.

182

Deut e oa eta Langleiz da Roazhon, e 1941, evel skrivagner e " La Bretagne ". E tu-hont d' ar skridoù war an arzouriezh, e soursie ouzh ar pennad brezhonek pemdeziek " Lan hag Herve " a veze ret dezhañ alies skrivañ eñ e-unan. Skeudennañ a reas ivez levrioù evel *Goulven le goémonier* ha dreist-holl *Les Amazones de la Chouannerie Teofil Briand*. An engravadurioù-prenn niverus turgnet evit al levr-se a zo pennoberenoù. Siwazh, ne dint ket bet embannet c'hoazh, e stumm ul levr, da vihanañ.

Daoust dezhañ da zuañ kalz a baper evit " La Bretagne ", kement ha gounit e vara, menel a ra amzer vak gant ar c'hi-labour-se. Derc'hel a ra, evel just, da liveañ. Krog e oa evitañ e varead a boltredoù ha taolenoù bihan a c'hello Roazhoniz estlammiñ outo o gwalc'h e meur a ziskouezadeg. Me n'ankounac'hain biken e oberenn ken fromus " Breizh en argoll " (1944), e gorfoù noazh disi ha ken glan hag e werc'hez niverus ken koant an eil hag eben. Met, selaouit 'ta, derc'hel a ra ivez war e enklaskoù micherel. Penaos ar foeltr e kav amzer da

bleustriñ war kement a draoù ?

Gwir eo n' emañ ket e-unan o labourat d' ar mare-se a laz-korf e Breizh. Paotred an Emsav a zo birvilh enno ken a zo evit krouiñ diehan, evel m' o defe bet c'hoant da zastum teñzorioù ha madoù a-raok ar barr-reverzhi didruez ha gouez a oa o tont da vougañ e-pad ur prantad buhez ar Vro. Xavier a zo eus ar re a zaoubenn ar muiañ, evel ma vefe krog terzhienn ennañ.

183
-IV-

« Setu adarre koumoul du... »
(Kan an emsaverien garc'haret.)

1944. - Sachañ a ra an Alamaned o skasoù ganto eus hor Breizh ha kerkent war o seulioù, setu an Amerikaned ha d' o heul " Frañsizien Londrez ". Gwazh-a-se evit kalz a Vretoned ! Kregiñ a ra un hemolc'h didruez a-enep d' ar vrogarourien. Klask a reer distrujañ betek ene hor Breizh. Ha setu harz diouzhtu war an holl emsaverien a voe paket, zoken ar re ne oa nemet disfiz warno, kozh, yaouank, paotr pe blac'h, hag int dastumet kloz e kampoù (pep hini eus ar pemp departamant en doa da vihanañ e hini). Tapet e voe krog zoken e paotredigoù o bragoù berr (8), dre m'o doa c'hwezhet en ur sac'h-biniou, ha gouizieien war an oad, re zedennet gant gwriziennoù ar c'heltieg kozh !

E 1943, a-raok zoken ma voe diazezet ar c'h- « Comité d'épuration », an Aotrou Perrot, an tad, ar mignon, sant Doue, a oa bet drouklazhet ha war e lerc'h kalz a vrogarourien.

Unan eus gwellañ keneiled Xavier de Langlais, James Bouillé, tiijinour a dalvoudegezh vras (9), krouer ti-labour breizhat ha kristen " An Droellenn ", e labouras eñ e-unan ennañ, den dous ha sioul, a zo kaset da gamp Langueux e-kichen Sant-Brieg, e-lec'h ma c'houzañvas kalz. Pa voe laosket da vont, e oa re ziwezhat evit e yec'hed. Goude bezañ tremenet ur pennad e Kraon gant Langleiz, e teuas da vervel da glinikenn Seurezed Malastreg.

Mougerezh didruez ya, met n' eo ket dall rak he fal a oa gwall resis : ret e oa kas da anaon ar vrogarourien veur evit dibennañ an Emsav hag ar vro a-bezh. Xavier de Langlais a oa unan eus ar vrogarourien veur-se. Petra a vefe graet dezhañ ? Daoust ma n' en doa graet nemet war-dro ar sevenadur, war gazetenn " La Bretagne " hag a-hend-all, skrivet e oa bet e anv - va Doue, ya 'vat ! - war roll an deñved klañv hag o vont da vezañ taolet en toull e oa.

184

Met ar re o deus anavezet an den-se a oar pegen plijus, pegen hegarat e oa ha gwelet mat e oa ken e oa gant an holl en ti bras e oa o chom ennañ. Unan eus e amezeien an aotrou Lemoine (ra vezo miret anv an den kalonek-se en istor) a zeuas a-benn da zigemenn dezhañ e kouskfe er prizon, nemet skarzhañ a rafe kuit diouzhtu, pezh a reas kerkent. Eñ etrezek departamant ar Mayenne e-lec'h ma oa endeo e diad e ti an eontr hag ar voereb Jochaux du Plessix. Evel hon eus gwelet, an eil gwech e oa d' ar re-mañ da ober vad d' o niz. Chom a reas eno un toullad mizioù ac'han ma voe sioulaet un tammig ar speredoù. Ya, un toullad mizioù, met ne oa ket den da chom pell en e grogen, hag adalek m' hellas, e teuas, daoust pegen dañjerus e oa, da zifenn e vignoned.

Deiz e varnedigezh en Oriant, e oa e-kichen Loeiz Herrieu, evel test-didamallour. Soñj am eus da welout anezhañ e prosez Roparz Hemon, e Roazhon, ha klevout a ran c'hoazh e vreutadenn, kaset da benn plaen ha brav, en desped da vouezh put prezidant al lez-varn da droc'hañ dezhañ dibaouez e gomz. Karout a rafed gwelout kalz a dud a seurt-se ! Xavier de Langleiz a oa un denjentil, hag unan gwirion.

Sikour a reas e vignon Yann Fouere, a oa o paouez tec'hout diouzh e doull-

bac'h, da gemer hed e c'har etrezek Pariz da c'hortoz treuziñ ar " Channel " (10).

Tremenet ar Reveulzi, ec'h adkrogas Xavier gant al labour evit ar Vro. Adsevel a ra Kevredigezh ar C'helc'hioù Keltiek (eñ a voe ar prezidant) ; krouiñ a ra gant Vefa de Bellaing ha Ronan Huon kentañ Kamp ar Vrezhonegerien, ur skol-hañv hag he deus graet berzh ha kalz a vad. Bez' ez eo unan eus renerien Bleun-Brug 1948, gant Roperzh ar Mason hag an Doktor Liberal, a voe enoret ennañ eñvor an aotrou Perrot, daoust d' ar c'hozh sponterien da deurel tan ha moged. E 1949, e laka war droad gant Kervella hag un nebeut tud yaouank kevredigezh ar BALB a voe karget da werzhañ al levrioù brezhonek e kêrioù ha maezioù Breizh-Izel. Evel m' hon eus lavaret uheloc'h, gant a BALB eo embannet a-benn ar fin e levr diouganus **Enez ar Rod** ha na reas ket kalz a berzh, e gwirionez, rak ne voe ket komprenet. Hervez ar pezh en deus lavaret din eñ e-unan, dipitet a-walc'h e voe Langleiz dirak diseblanted e genvroiz, met ne voe ket digalonekaet. Skrivagnerien all o deus gouzañvet dirak an islonk-se etrezo hag ar bobl, dreist-holl Roparz Hemon ha Maodez Glanndour. Ret mat eo d' ur skrivagner kaout lennerien, peogwir skrivañ a zo komz gant tud all.

185

C'hoant a zeu da Xavier skrivañ evit ar rummadoù da zont. Gouzout a ra ar pezh a zo pouezus ha divarvel, ha setu perak e fell dezhañ adaozañ evit ar bobl al lennegezh kollet ganti romantoù an Daol Grenn a zo bet er GrennAmzer mammennoù lennegezhioù meur Europa : al lennegezhioù okitanek, gallek, alamanek, saoznek, spagnolek. Siwazh kalz re ankounac'haet e oa ar romantoù-se dre-holl. Skrivañ a ra eta e oberenn gaer Tristan hag Izold haskeudennoù a-zoare a ra eviti, evel just. Met n' eo ket a-walc'h, fellout a ra dezhañ dibunañ danevell glok ar Roue Arzhur hag e varc'heien. Dont a raio gantañ ur pikol oberenn a ouiziegezh (11), met ivez frouezh e ijin eñ e-unan, rak kavout a reer roud e bersonelezh strewet dre-holl : en dibab graet gantañ etre an danevelloù ; o pellaat a-wechoù eus ar gonterien c'hall evit ober e vad eus Wolfram d'Eschenbach, ar Mabinogion hag ar skridoù keltiek dre vras ; met muioc'h c'hoazh en un doare dezhañ e-unan da skrivañ, da zibunañ ; en e garantez evit an natur a ra eus ar pemp levr-se ur barzhoneg ha ne skuizher ket o lenn hag oc'h adlenn. Hag aesoc'h eo c'hoazh kavout e bersonelezh e prennengravadurioù ar pennlizherennoù, ken plijus da lagad al lenner.

D' ar mare-se en deus Xavier meret kalz a bri, barrek- tre eo war ar podouriezh.

Met distroomp d' al livadurioù. E 1953, e livas hent-ar-groaz ar Richardais, e-kichen Dinarz. Goude e voe tro hini Itron Varia ar Mor " (iliz Etel) ha daou all e kêr Sant-Brieg : hini kev-chapel ar c'hloerdi-bras hag hini chapelig an eskopti. Ret eo menegiñ e tu-hont seizh hent-ar-groaz all evit ilizoù eus ar vro (hini Plounevez-Kintin, da skouer). Unan anezho, e Plomeur - An Oriant a voe graet e prierezh. Er bloavezh 1962, e tegemer Xavier de Langlais priz New-York.

Poent eo bremañ addistreiñ war e enklaskoù. Dre forzh meskañ, merat, c'hwesañ, santout ha... tañvaat, ez eo deut da vezañ ur strilhour gwirion. Ret eo bezañ gwelet e gambr-vras-labour straed Viktor-Hugo gant buredoù, korzennoù ha tuellennoù a bep seurt e pep korn. War aspled ar prenestroù, e veze dalc'hmat eolioù o wennaat, ur bern paperioù ivez ha livadurioù, se 'zo sklaer, gant pep hini e niverenn iskis warnañ, un niverenn ha ne oa lennus nemet evit an arzour eñ e-unan. Gedal gant mall a ra sklerijenn heol miz Meurzh an « argadusañ » hini er bloaz. Daoust hag en ne soñjer ket er ouizieien wechall o klask ar maen-aour ? Tamm-ha-tamm e tastum evel-se un teskad mat ha fonnus e ziskleriadurioù a zeu da vezañ ur pikol oberenn vicherel a-bouez war al livadur dre eoul, hag a zo deut da vezañ aviel ur bern livourien, a zo bet advoulet dija tregont gwech ha troet e meur a yezh, evel ar japaneg (12).

186

Met diaes eo bevañ gant al liverezh hepken. Xavier ne oa ket un den a arc'hant, ur « Job an aour », evel ma vez lavaret, met, evel pep kristen, ret e

oa dezhañ evelkent kaout a-walc'h evit e ezhommoù ha re e diad. Met, va Doue, islinennet eo e anv e ruz abalamour d' e venozioù e-keñver Breizh ha ne brener ket digantañ kalz a oberennoù-meur. Setu m' eo ret dezhañ tremen ul lodenn vras eus e amzer ken prizius oc'h ober fardajoù, « arzouriezh biftek », evel ma lavare : skeudennadur romantoù e kazetennoù a bep seurt, h.a.

Tapout a ra gantañ neuze mont da gelenner da Skol Arzoù-Kaer Roazhon. Setu aze ur vicher a zegas aezamant d' an ti, met siwazh, laerezh a ra digantañ ul lodenn vras eus e amzer e-pad seizh vloaz warn-ugent. Gwir eo, ne gav ket pounner ar vicher-se, rak plijout a ra dezhañ hag ur c'helenner eus an dibab eo. Sot eo e skolidi gantañ abalamour d' e ouiziegezh hag e ampartiz, dre ma oa donezonet-kaer, met ivez en abeg d' an holl berzhioù-mat a oa ennañ : e sevender, e zouster. Er gwashañ degouezhioù e voe doujus e studierien en e geñver, an denjentil a ouenn-se en doa ul levezon hag ur veli naturel. Ha koulskoude ne oa ket paotr an urzhioù hag ar gourc'hemennoù groñs, gwelloc'h e oa gantañ aliañ, enaouiñ ar menozioù reizh : « Ne soñj ket deoc'h e vefe kerkoulz ober evel-hen ? ».

187

Eñ hag a veze gwisket kran dalc'hmat (ne veze gwelet morse hep e dro-c'houzoug " balafenn ") ne rae van ebet ouzh truilhoù kalz studierien an Arzoù-Kaer : « Reishoc'h eo ur flipad o c'halonoù eget o dilhad, » emezañ. Gwashañ pennoù fall derou ar bloaz a veze ar re gentañ o kinnig ar champagn a-raok disparti ar vakañsoù bras.

Gant an holl labourioù diehan ha fonnus-se e tremen buan ar bloavezhioù (13). N' en em veske ket kalz Langleiz gant an dud, ma veze kavet e zor prennet alies, komprenet hoc'h eus perak : o labourat e veze a lazh-korf. Hervez an Aviel, ret e vo dimp rentañ kont eus pep momed eus hor buhez ; pep gwech ma teu ar gomz-se war va spered e soñjan e Langleiz, sur on n' en deus ket bet mezh o tegouezhout dirak ar Barner. Ur gentel d' ar re a vez o foraniñ o amzer en ur bilat o genaouioù aliesoc'h eget d' o zro d' ar bevar avel.

Ma lavar in deoc'h bremañ en deus kaset Langleiz an holl draoù-se da benn, daoust dezhañ da vezañ kavet, evel pep kristen, skoilhañ a bep seurt war e hent, da vezañ bet e lod a drubuilhoù hag a gleñvedoù. Ne c'houzañve ket avat e ve komzet dezhañ eus e yec'hed, biskoazh ne veze klevet o klemm, ha koulskoude, pa laran, ne voe ket ankounac'haet gant ar boan. War-dro ar bloavezhioù 50, e kouezh trumm ar remm warnañ evel ur roched reun hag o vezañ ma voe louzaouet fall, setu hanter seizet e vrec'h dehou betek e blankenn-skoaz. Petra a zo gwashoc'h evit ul livour ? Ar vedisined ne gavont da gentañ netra evit aesaat dezhañ evurusamant, a-benn ar fin e voe roet un ali fur dezhañ gant ur mezeg eus Kemper : lavarout a ra dezhañ penaos en em bareañ e-unan. Ober a ra Xavier stagañ a-us da zor e sal-labour ur varrenn blaen, ha bep ar mare ez a, e-kreiz e labour, d' en em wintañ e-pign ouzh ar varrenn-se. Pegen sebezet e voe an holl o welout e vrec'h o tireudañ, o tont da vezañ ken gwevn ha ken ampart ha kent !

188

Siwazh, ne voe ket ar barr diwezhañ, met ne ra ket aon ar marv dezhañ, gout a oar n'hell ket bezañ ha bezañ bet. Hag e lavar : « Gra da vad eus an devezh a zo o tremen ». Ya, met n' eo ket evit c'hwistañ, finfontañ ha koll e amzer e plijadurioù divalo, geo moarvat ! Ma peg gant e holl nerzh ouzh moue an amzer o tremen, ez eo evit labourat ar muiañ 'r gwellañ. Evitañ e vuhez n' eo nemet un oberiad da gas da benn. Kuit a derzhienn ha gant daoulagad dibikous e wel war begeit e c'hell bezañ en gortoz c'hoazh ha lodennañ a ra e amzer evit bezañ suroc'h da echuiñ kefridi e vuhez.

Ur wech e lavar in dezhañ pegen souezhet e oan o welout anezhañ skrivañ danevell Arzhur hag an Daol-Grenn e galleg, aon am boa da welout anezhañ dilezel ar brezhoneg. « Mignon, emezañ, ne ran ket se hep gwir abeg, n' eo ket tamm ebet ur froudenn... Kalz aesoc'h eo din skrivañ da gentañ va oberenn hir e galleg, dre m' eo e galleg e ran an darn vuiañ eus va enklaskoù. Gant se ez an primoc'h e galleg ha suroc'h on e-giz-se da echuiñ. Diwezhatoc'h, ma plij gant Doue, e rin hervez va c'halon : adskrivañ an oberenn-se e brezhoneg. » D' e veno, dek

vloaz en defe ezhomm evit ober enklaskoù sirius ha skrivañ al levr, pe gentoc'h al levrioù, e galleg, ha da c'houde, c'hwec'h vloaz pe eizh d' ar muiañ, evit peurechuiñ e vennad : reiñ d' ar Vro an oberenn en he yezh.

Siwazh ! ne oa e zrouksant nemet re wir : eus e droidigezh e brezhoneg, n' en deus bet amzer nemet da skrivañ al levrenn gentañ.

Setu penaos eo tremenet bloavezhioù diwezhañ Langleiz e karter koshañ kêr Roazhon a blije dezhañ. Parrez " Itron Varia ar C'heloù Mat " a oa e hini (14). Ma plije Roazhon dezhañ, plijout a rae ivez da Roazhoniz, deut e oa da vezañ unan anezho. Met ret eo din hastañ buan lavarout n'ankounac'hae ket e Vro-Ereg a oa chomet an hini gentañ en e galon (15). Adalek ma kav un tamm amzer vak, pe laoskoc'h da vihanañ, e nij d' e Gohanno kozh e oa bremañ echu mat al labourioù ennañ ha kempennet hervez kalon e berc'henn. Eno en deus sinet Xavier e levrenn ziwezhañ eus istor an Daol-Grenn.

*

E-kerz unan eus bodadegoù Urzh Malta Breizh e derou an diskar-amzer 1974, e klevis gant spont e oa dalc'het Langleiz gant ur galedenn a grign-bev en e empenn. Ne oa ket pell em boa gwelet anezhañ e Kendalc'h Keltiek an Naoned, rak ne c'hwhite kammed ur vodadeg vreizhek a-bouez. D' ar mare-se e seblante bezañ yac'h ha sonn war e dachou, daoust dezhañ da vezañ livet iskis, met evel-se e oa bet atav muioc'h pe nebeut. Mezh am eus oc'h anzav e kaven war e zremm livioù niverus e bladennig. Diwezhatoc'h en deus lavaret e vab Gaetan din en deveze un tamm 'oa barrioù poan-benn spontus. Gouzañv en e greiz a rae ivez dre m' en deveze muioc'h-mui a boan o skrivañ hag o reiñ buhez d' e venozioù. Pezh a veze lakaet gant e vezeien war gont an oad met eñ a ouie hiroc'h ha ne voe ket evitañ un abeg dister a dristidigezh soñjal e c'helle eñ hag en em sante c'hoazh ken leun a yaouankiz hag a c'halloud-krouiñ bezañ heñvelekaet ouzh ur c'hoziad kabac'h.

Ar mizioù diwezhañ e oa chomet kloz en e ranndi o labourat diehan hag a lazh-korf, evel m' en dije gouvezet pegen tost e oa e eur ziwezhañ ha m' en defe bet aon e chomfe diechu an oberenn e oa o pleal ganti, kentañ levrenn vrezhonek Romant ar Roue Arzhur, Marzhin.

Echuiñ a reas an dresadenn ziwezhañ d' ar 15vet a viz Kerzu hag an 18vet ez eas d' ar C'hlañvdi.

N' eo deut ar marv nemet tamm-ha-tamm ha betek an termen ez eo chomet e spered sklaer, sioul ha leun a habaskted. « Eñ hag e oa kement a dan ennañ evit e labour en deus gouzañvet gant pasianted un ael lezennoù kriz an natur betek an tremenvan hag a ra kement a aon da dud a-vremañ » (16).

O vezañ ma oa bet kaset d' ar c'hlañvdi Sant-Viñsant, keñver-ouzh-keñver gant va zi, n' em boa nemet ar straed da dreuziñ evit mont d' e weladenniñ. Gwechall em befe bet plijadur o vont d' e saludiñ aliesoc'h, met aon am beze d' e zirenkañ en e labourioù. Ne oa kudenn ebet ken evit pezh a sell ouzh al labour ha gallet em eus ober gwelloc'h anaoudegezh gantañ ha dizoleiñ stummoù eus e bersonelezh ha n' em boa ket merzet a-raok.

190

Ma c'houzañve gant pasianted, dalc'het en deus penn evelkent betek e dremenvan. Pa 'z is d' e welout ar wech kentañ d'ar c'hlañvdi en doa lavaret din : « N' hellin ken skrivañ, met spi am eus da zerc'hel da livañ ».

E miz Ebrel en em gavas sañset gwelloc'h ha gellout a reas kuitaat e ospital evit e ranndi nevez war gae Richemond. Adkroget e oa da sevel ha gellout a reas livañ ur rummad poltredoù noazh dispar. Gwelet em eus an hini diwezhañ war ar stern hag un dra en deus dedennet va daoulagad : an dresadenn e oa en-dro dezhi ur c'helc'h du, pezh a oa ar wech kentañ dezhañ d' ober. Marvailhat a ris gantañ a-hed un hanter-eurvezh leun. Soñj am eus e komzjomp diwar-benn Debauvais, an itron de Bellaing (kalz a vignoniezh en doa eviti), eus istor Breizh Jan Laurent nevez embannet, ha Leonard de Vinci. E vuhez-pad en doa

kemeret skouer diwar oberoù hennezh.

*

Ar wech diwezhañ e oa din d' e welout er bed-mañ. Pa zistrois d' ar c'hae Richemond, e oa a-nevez war e wele hag erru pell ganti. N' em boe ket hardison a-walc'h evit goulenn bezañ degemeret gantañ. Yann Fouere a zo bet e weladenner diwezhañ ha diskouez a reas dezhañ pegen laouen e oa : « O ! erru eo Fouere, an Aotrou Doue e zegas davedon... ». Unan eus e wellañ keneiled a voe eta an hini diwezhañ o c'hellout ober kaoz gantañ.

Mervel a reas d' ar sadorn d' abardaez 14vet a Vezheven. Lakaet e voe e wele marv en e sal-labour e-mesk e levrioù, e dresadennoù hag e vinvioù. Bez' e oa aze zoken ar poltred diwezhañ em eus komzet anezhañ uheloc'h. Pep tra a oa 'n e blas : glanded, sioulded, peoc'h ha kenreizhidigezh, taolenn e vuhez.

Chom a rae paret va daoulagad war dremm treutaet ha strishaet va mignon, peoc'hus e oa an dremm-se met lennet e veze evelkent warni anken meur an dremenvan en deus bet ar marc'heg feal da dreuziñ a-raok tizhout ar c'hastell marzhus.

War unan eus sternioù koad an arzour, e weled unan eus ar gwellañ oberennoù pri meret gantañ livet e du ha gwenn : penn meurbet truezus Hor Salver war ar groaz. Daoulagad Gaetan a oa paret ivez war ar C'hrist-se. « Va zad, emezañ, a ouie petra e oa gouzañv. »

191

Lidet e voe e obidoù d' ar meurzh 17vet a Vezheven, deiz gouel sant Herve, en iliz Toussaint (17). Dindan ar porched ar banniel Gwenn ha Du a zegemere ar genvroiz. Daoust ma ne oa ket bet gouvezet ar c'heloù mantrus gant an holl, e oa leun-kouch an iliz. Ma oa Roazhoniz a-vil-vern, kalz a dud all a oa deut ivez eus Breizh a-bezh... Stern an aoter alaouret a luc'he evel dor ar Baradoz. Plaen ha kaer e voe pep tra, evel ma plije dezhañ. Ne oa nemet brezhoneg gant al laz-kanañ. E penn ar veleien e yae war-raok, oc'h erruout dre an ale-kreiz, Loeiz ar Floc'h, deut da lidañ obidoù e vignon : stad a voe ennomp oc'h anavezout Maodez Glanndour, penn hael an diouganer hag ar barzh awenet, ur gensoniezh a oa etre e vlev gwenn hag e zilhad-oferennañ kañv An homelienn, pe gentoc'h an div homelienn graet gantañ, unan e brezhoneg, eben e galleg, a oa kaer-da-ouelañ. Eus lein an neñv, Xavier a dlee gwelout anezhe livet en arc'hant hag en aour. Kendeuziñ a rae an oferenn al latin hag ar brezhoneg.

Kaset e voe neuze korf hor mignon d' e vro ken karet, da vered Sarzhav. Un engroez a dud a oa ouzh e c'hortoz, meur a veleg (evel Klerg, deut a Vro-Dreger), tud ar rann-vro, met Bretoned all ivez eus pevar c'horn ar Vro, ha meur a brezegenn a voe graet.

- V -

Setu aet kuit eta yaouank a-walc'h c'hoazh an den-se ken awenet ha ken ampart e meur a geñver ! Ar Gwenedour-se ken leun a vuhez ha ken oberiant en defe gallet chom c'hoazh pell ganimp. Diaes eo dimp kompren ne welimp mui e vouc'hoarzh ken hegarat, e zaoulagad birvidik hag e " rozetenn ", ne glevimp mui e c'hoarzh « eeun, didro, skiltr ha dibaot a-walc'h » (18) o tregerniñ evel un taol trompilh. Rak an den-se, poellus, sirius ha parfet-bras, ar galon gizidik-se a gaver en e varzhonegoù yaouankiz, e vefe bet diaes koulskoude ober ur pastor puritan anezhañ. Gout 'ouie bezañ ur c'heneil plijus-tre ha ken joaus hag ar re joausañ. Levenez ar re c'hlan ha kreñv.

192

Livour, engravour, arzvarnour (dindan al lesanv a b-Premorvan), micherelour war al livañ hag al livajoù, skrivagner : setu ar pezh a ouio ar Vretoned da zont. Met ret eo din adlavarout c'hoazh ur wech pegement e plije dezhañ ar sonerezh, an tonioù keltiek, evel just, met ivez ar vuzikerien vras alaman, dreist-holl J.-S. Bach. Ur mailh e oa war ar violoñs, ar gourrebed, an

heskenn-da-son hag e fleüt e raio ganti betek e zevezhioù diwezhañ.

Ma oa paotr-e-varc'h (hag unan dispont), ober a rae ivez sportoù all : an tennis, ar riklerezh-war-glerenn, an neuierzh hag an dornataerezh (soñjit en deveze alies en e c'hodell pa oa yaouank ur manegoù dornata, piv en defe kredet se ?). War-dro ar bloavezhioù 50, e oa bet dedennet ivez gant ar c'hlezeiataerezh.

Diaes e vo eta skrivañ istor hor rummad hep kavout Xavier de Langlais war bep tachenn, met ar pep gwellañ eo ar pezh en deus bet c'hoant da zegemenn dimp, an hêrezezh laosket gantañ war e lerc'h a zo kalz a-us d' ur rummad hepken. Abenn ar fin, ar pezh a blij din en oberoù ken niverus an den-se ez eo unanelezh pal e vuhez : enklask ar gened kaset gantañ bepred war-raok hep paouez, hep diskuizh, evel Galaad. An uhel-mennad-se ne vez ket ken aes-se da gas da benn ! Soñjit e tistruje eñ e-unan al livadurioù ha ne gave ket eus e c'hrad. Bremañ ez eus un nebeut bloavezhioù e lavare Gaetan din ne soñje ket dezhañ e oa daou-c'hant taolenn livet gant e dad e-touez an dud. Tanfoeltret en doa ar re all, savetaet e oa bet darn " in extremis " gant Gaetan, oberoù o defe graet brud arzourien 'zo.

Dre ar gened peurbadus, ar gened vreizhek, e teu da zaoulinañ dirak e Grouer. Ur seurt romantelezh eo, sellout a ra ouzh ar pezh a zo ennañ e-unan, doare Langleiz a zo doare Langleiz hag a vez e darn vuiañ eus e livadurioù, e boltred eñ e-unan (19), met ivez hini e ouenn vreizhek. Xavier de Langlais a zo klasel dre blaender e dresadenn hag hegenlusk e Ved a soñj dezhañ bezañ kavet en " Niverenn Aour " (20). Evel m' hon eus lavaret endeo, Leonard de Vinci eo ar mestr a blij ar muiañ dezhañ, oc'h adlenn e vuhez e oa, eñ ken tost d' e varv, ha chomet e oa al levr war an an daol-noz Langleiz a sante sklaer al lezennoù didorrus a ren ar Grouadelezh en he buhez a-bezh, evel ar Gelted gwechall gozh a oa ken tost d' an Natur, da red an amzer ha da vareoù ar bloaz, evel ma oa c'hoazh al labourerien-douar gozh hon eus anavezet.

193

Langleiz a zo bet ar muiañ keltiek eus livourien hon rummad, hini all ebet n' eo bet a-us dezhañ evit e genunvaniezh gant lezennoù digemmus an holl ved hag an enklask diarsav-se a zo bet pal meur e vuhez. Diamzeret e oa, se 'zo sklaer, en ur c'hantved ez eo tremenet ar c'hiz ennañ evit an dud da gemer poan na trefu, ur c'hantved lez-da-vont. Skouer Langleiz a zo ur gentel evit kalz ac'hanomp : diwallit da vezañ, dre re, Yann-ho-penn-hoc'h-unan betek ober ur si eus an enbodelezh, diwallit ouzh ar veizelouriezh c'hall, diwallit da nac'h fedoù a zo sklaer d' an neb a oar c'hoazh sellout en-dro dezhañ ha kompren, diwallit ouzh ar re a zo dare da zifoltriñ diazezoù ar sevenadur hag ar meizerezh poellek.

Langleiz en doa komprenet unanded madoù ar c'horf ha re an ene, al liammoù etre an douar hag an neñv, liammoù ar relijion, liammoù hor gouenn. Ur C'helt hag ur c'hristen e oa hag ar sklaerder a zo war dremmoù e livadurioù a zo ur sklerijenn o tont eus krec'h. Dirak kaerder ar bed, Xavier de Langlais a zo fas-ouzh-fas gant e Zoue hag e oberoù arzel a zo an eil hag eben ur bedenn dezhañ, ha n' eo ket hepken en e livadurioù relijiel, met zoken e gorfoù noazh ken glan : gwerc'hezidisaotr pe un Eva bennak dasprenet.

Plijout a rae kalz liderezh an Iliz da Xavier ha sur on en deus bet desped o welout an distrujadedg kaset da benn gant ar veleien int o-unan. Kompren a-walc'h a rae an ezhomm da gemmañ traoù 'oa un disterañ ha ne oa ket enep implij ar yezhoù poblek, met ur rangalon e oa evitañ gwelout lec'h al latin laeret gant yezh an estren hag hini ar gwir oferenn gatolik, da lavarout eo hollvedel, kemeret gant « oferenn ar Barizianed ». D' e veno, bez' e oa se ul laeroñsi hag ur gwallerezh nevez o tont an taol-mañ betek an aoterioù. Evel katolik-rik en doa aon eus ar pezh a c'hoarvezfe diwar-se evit ar relijion kerkoulz hag evit Breizh.

194

Na dit ket da grediñ e oa Xavier de Langlais ur c'hilstourmer, a-du gant

ar frankizioù e oa. Hep bezañ unan eus tabuterien 1968, ne oa ket eus ar re o doa mouchet o daoulagad ha lakaet o fenn en ur sac'h bleud, kammed ha kammed en doa heuliet ar c'hemmadurioù, dreist-holl en-dro dezhañ e skol an Arzoù-Kaer. O ! mousc'hoarzhin a rae avat o komz, da skouer, eus an tammig talabao ha charre graet gant an tiijinourien.

Soñj am eus en doa plijet dezhañ levr Morvan Lebesque **Comment peut-on être Breton** ? Evel m' em eus lavaret e derou an tamm buhezskrid-mañ, ne oa ket troet war ar politikerezh, met gant an dispriz en doa evit ar madoù, ne oa ket a-du gant hollc'halloudegezh an arc'hant. N' en doa doujañs nemet evit an hini gonezet gantañ dre e labour. Gwerzhet en doa an atantoù diwezhañ a oa deut dezhañ a-berzh e dud. E vab Gaetan en deus anzavet din e oa bet neuze evel disammet eus ur seurt morc'hed en doa gant an nebeut leve a vane gantañ. En e greiz e soñje e oa mat ha reizh e ve perc'hennet an douar, a-benn ar fin, gant ar re a ra war e dro.

Ur studiadenn war Langleiz ne vefe ket klok ma ne gomzfe ket eus e zoareoù e-keñver e diad. Daou bleg-natur en doa, eme e vab Gaetan : an arzouriezh hag e garantez evit e familh. Etrezo en deus lodennet e vuhez, ul lodennerezh diaes a-walc'h, ret diwall dalc'hmat da vont re war un tu pe war an tu all. Evel just, al labour a oa un dra sakr ha ret e oa bet d' e dud deskiñ e zoujañ ha reiñ peoc'h... Dav e oa d' an ti bezañ sioul. Met nay e oa Langleiz gant e vugale hag ober a rae war o zro adalek m' halle, ganto e tremene pep endervezh eus e vakañsoù. E-pad ar brezel, pa ne oa kazi gwetur ebet ken, ez ae an tiad a-bezh da bourmen war varc'h-houarn ha dougen a rae-eñ ar re vihanañ. Ret e oa d'ar vugale doujañ, se 'zo sklaer, met digor bras e oa ezivskouarn hag e galon da venozioù pep hini.

Ha bremañ eo dleet din komz eus e itron a zo bet dalc'hmat e vignonez feal ha karantezus. Sur on ez eo a drugarez dezhi, evit ul lodenn, en deus gallet ober kement a labourioù. Evel un ael mat eo bet evitañ, ken diwelus alies hag en hon levrioù katekiz gwechall, met ken efedus all. Kavet e vez levezon an ael mat-se en oberennoù ar mestr hag en e vuhez-den, sikouret he deus e zonezonoù-natur da vleuniañ ha da greskiñ. Keuz bras he deus bet da chom hep dont a-benn eus ar brezhoneg, daoust dezhi da vezañ pleustret a galon vat war ar gudenn. Ma lavar in bremañ evit echuiñ gant pegement a galon hag a breder he deus graet war-dro he fried karet e-pad e gleñved diwezhañ. Siwazh ! he glac'har a zo bras, met ur vaouez nerzhus a zo anezhi.

192

Meur a dra a chom da lavarout diwar-benn Xavier de Langlais. Plijout a rafe din klokaat un deiz ar skrid-mañ en ur glask donoc'h ennon va-unan hag o c'houlennata ar re o deus e anavezet ha karet, met an dazont n'emañ ket etre hon daouarn. E-lec'h gortoz re bell, gwelloc'h eo bet ganin lakaat diouzhtu war baper ar pezh a ouien a-zivout un den ken plijus ha ken lies donezonet, hag evel-se ez on sur ne vo ket kollet pep tra eus e vrud.

Trugarekaat a ran an Itron de Langlais hag he mab Gaetan, va mignon, da vezañ degaset dour d' am milin, hepto e vefe bet dister a-walc'h va labour.

Trugarekaat a ran ivez a-greiz kalon Ernest ar Barzhig, ken bras keneil din evel ma oa da Langleiz, da vezañ asantet lakaat an tamm buhezskrid-mañ e brezhoneg, o tegas dezhañ e tu-hont d' an droidigezh : e demz-spered, e dro-pluenn hag un tañva eus e vignoniezh.

(1) Hervez rakskrid Xavier de Langlais da levr Ivon Mauffret : Presqu'-ile de Rhuy.

(2) Langleiz en deus kinniget e Romant ar Roue Arzur da : « Amédée de Francheville, va zad-kuñv (1802-1890), en deus labouret em raok evit yezh Sarzhav ».

(3) Kalz a lennerien o devo soñj eus Lommig, ul levr evit ar vugale diwar bluenn ha kreion Xavier Haas. Bez' ez eo istor un elf ganet eus un dakenn zour. Skeudenn ene kadarn ha laouen an oberour.

(4) Tostik ouzh Kohanno Nevez emañ ar maner kaer Kohanno Kozh a oa ennañ ur vereuri d' ar c'houlz-se. Tregont vloaz diwezhatoc'h, e raio Langleiz adkempenn anezhañ brav-tre, pezh a oa o sorc'henniñ abaoe e yaouankiz.

(5) Daoust dezhañ da gaout pratikoù, ne oa ket pinvidik an tiad, pa soñjer e oa kengoumanantet Langleiz d' ar gelaouenn " Art et Décoration " gant pevar pe bemp eus e gamaradoù kozh, evel X. Haas. Re ger e oa ar goumanant evit ur yalc'h hepken.

(6) Bez' e oa un enklasker touet. Pa oa bihanik e vab-henañ, e kemeras ur breved evit ur seurt chutig graet gantañ, dre ma ne blije ket ar re voutin dezhañ.

(7) Tonket e oa al levr-se d' an droukchañs. E 1944, an ti-moulerezh a oa o peurvoulañ anezhañ a voe bombezennet ha ne savetaed nemet lod eus an amproennoù. Ne voe echuet nemet e 1949, dindan paeroniezh BALB, met kregiñ a reas un tangwall en ti ma oa al lodenn vrasañ eus ar skouerennoù ennañ ha setu devet kalz anezho. Kement ha ken bihan ma lavare Xavier de Langlais gant ur minc'hoarzh : « Ma vin maout ma n' emañ ket an Diaoul war-lerc'h al levr-se ! ». E 1946, e embannas Langleiz un droidigezh eus e Enez ar Rod, dindan an anv L'Ile sous cloche (Aux portes du large, 3, allée Jean-Bart, Nantes).

(8) Soñjal e merzherinti ar vreudeur Tastevin eus an Naoned ha kalz a re all.

(9) Gantañ eo bet savet chapel ar skolaj Sant-Jozef Lannuon hag iliz vihan ken koant Logivi-Pleraneg.

(10) Evel ma oar pep hini, distreiñ a reas Fouere un nebeut bloavezhioù goude evit bezañ barnet reizh ha didamallet e voe.

(11) Le Roman du roi Arthur (Mezheven 1965), Lancelot (Gwengelo 1967), Perceval (C'hwevrer 1969), La quête du Graal (Genver 1971) ha La fin des temps aventureux (Miz Du 1971) - Edition d'Art H. Piazza, 21, rue du Cardinal-Lemoine, Paris.

(12) Dre veritoù e levr ha marteze ivez dre n' ouzer ket peseurt kerentiezh kuzh, Langleiz a zo brudet bras e-touez arzourien Bro-Japan. Edo o paouez mervel pa erruas e Roazhon studierien eus ar vro-se a oa bet e skolidi. Fellout a rae dezho adgwelout ar mestr. Degemeret en he ranndi kae Richemond gant an itron de Langlais, sellout a rejont gant doujañs bras ouzh e vinvioù hag e ziwedhañ livadurioù. A-raok distreiñ d' o bro, e kinnigjont dezhi bleunioù hag ur gelc'henn berlez e testeni eus ar bri a zougent dezhañ hag eus o c'heuz d'e varv.

(13) E tu-hont d' e labour kelenner, d' e fonnusted evel arzour ha skrivagner, Langleiz a reseve lizheroù eus ar bed-holl. Ne laoske hini direspont ha war-dro eizh pe zek en deveze pep abardaez da gas d' ar post. Skrivañ a rae d' e skolidi gozh, d' e veulerien (ret mat e oa !), d' un niver bras a arzourien ha skrivagnerien. Kavet em eus meneg eus Jean Rostand, Frappier, Trémois, Matisse ha kalz a re all. Hag arabat eo, evel just, ankounac'haat izili an Emsav.

(14) Bremañ avat e vez lavaret kentoc'h " Sant Albin ", met ar Vretoned emskiantek a dle mirout an anv kentañ, peogwir e tegas da soñj, e gwirionez, eus ur c'heloù mat ha laouen : trec'h Yann IV a Vonforzh war Charlez Bleiz hag ar C'hallaoued, en Alre, d' an 29vet a Wengolo 1364.

(15) Unan eus barnerien ar priz Kalloc'h e oa (gant P.J. Helias, Goulven Pennaod, Ernest ar Barzhig hag unan pe daou all). E-kerz bodadenn miz Kerzu 1973, e Tour bras Montparnasse, e Pariz, e voe karget da gomz (e brezhoneg 'vel just) eus al levr a oa aet ar priz gantañ (Kan an Douar Anjela Duval). Jañ Marin a rebechas dezhañ gant ur minc'hoarzh goapaus e « bouez-mouezh gall ». « O hola, eme Langleiz, n' eo ket ar pouez-mouezh gall, hini Bro-Wened ne lavaran ket,

hini va bro, ac'hano ez on ha n' eo ket a lec'h all, ha lorc'h a zo em c'halon, aotrou Jañ Marin. » (Notenn gant Ernest ar Barzhig.)

(16) Komzoù e vab Gaetan.

(17) E iliz-parrez abaoe ma oa o chom war gae Richemond.

(18) Yann-Jakez Durocher.

(19) Anavezet mat eo « pennoù Langleiz » gant o dremmoù aziat. Xavier, a-hervez, a oa heñvel ouzh e vamm-gozh du Guermeur, genidik eus Douarnenez, ha diouti e teue dezhañ e stumm aziat un disterig.

(20) Ene al Linennoù, Skridoù Breizh, 1943.

EÑVORENNOÙ

(kendalc'h)

War-dro hanter ar bloavezh 1915, ez is da labourat davet unan eus noterien Kastellin. Nep kloareg er studi, eñ e-unan a oa soudard dizarm oc'h ober skrivagner en ur burev bennak e Kemper. Lojeiz a roas din en e di hag e kavis da bredañ, tost d' ar studi, e ostalidi ur vourledenn, Mari Mevel hec'h anv, ha pried d' ur Breizh-Uhelad anvet Jozef Robin. Ur vaouez hegarat e oa Mari Mevel ha plijout a rae dezhi kalz d' ar re a zaremprede hec'h ostaleri. He c'hoar, giz Kastellin ganti, a raed outi Mari Faou, he skoazelle da gas ar stal en-dro, abaoe ma oa galvet he gwaz d' ar brezel. O div e komzent brezhoneg kenetrezo hag ouzh an devezhourezed a veze o servijañ en ti. O bugale koulskoude a zesevent e galleg.

An dinell a oa mat ha kalz tud a veze en davarn hag ouzh taol, soudard war ar pemdez ha kouerien da yaou da geñver ar marc'had. Divroidi o tremen a gave eno boued ha lojeiz. Kalzig eus ar re-mañ eus departamant ar Somm, a zeue da welout kerent dezho bet galvet d' ar seizhvet rejimant ha pevar-ugent war droad degaset eno da repuiñ abaoe aloubadeg vras Alamaned. Alies, e-ser tremen, e rae soudarded vreizhat o vont d' ar gêr pe o tistreiñ diouti, o diskenn e ti Mari Mevel. Neuze ne gleved nemet brezhoneg ha kanaouennoù a lakae trouz ha tregern en ostaleri. Sebezet gant ar fouge a lakae ar Vretoned da ganañ ha gant ar c'homzoù ne intentent ket, e c'houlenne an divroidi, bamet holl, pe yezh a veze ganto. Pa ouient e oa brezhoneg, e lavarent o dije kredet bezañ en ur vro estren, paneve d' an dilhad soudard gall a zouge ar ganerien.

.....

Renet e oa ar studi gant an aotrou More, un urcher bet anvet gant al lez-varn ar zerc'hel lec'h an noter aet d' an arme. Ken anavezet e oa gant ar gouerien ha ken boazet e oant outañ, m'her galvent Jañ-Mari a oa e anv bihan. Un den gouiziek war ar vicher e oa an aotrou More. En em blijout a ris en e ser ha meur a dra dalvoudus a zeskas din. Ma ne oa ket ur brogarour rik, e oa troet gant traoù Breizh ha brezhoneg mat a veze gantañ, daoust ha ma oa tuet a-walc'h da vont war ar galleg.

197

Un deiz ma oa bet el lez-varn oc'h ober hervez e garg, e verzis e oa droug ennañ. War a lavaras, e oa deuet an urzh eus Pariz hag a rae difenn da verraat skritur an anvioù tiegezh. Ne c'helled mui, hiviziken, ec skridoù savet el lezioù-barn hag en tiez-kêr, lakaat K evit Kêr, da skouer Knalegenn e-lec'h Kernalegenn. « Ur vezh, » emezañ, « n' o devo ken ar Vretoned ar gwir da skrivañ anvioù 'zo eus o bro evel ma plij ganto ! »

Nebeut a aferioù a veze da renkañ er studi, ar pezh na oa ket souezhus o vezañ ma oa aet an darn vrasañ eus ar wazed d' an arme. Da yaou, avat, deiz marc'had, e veze enni ostizidi boaz, tud aet war an oad, o tont da gerc'hat al leveoù a dleed dezho evit arc'hant roet ganto e prest.

Alies e weled soudarded o tistreiñ d' an talbenn, o tont gant o gwragez da lakaat o danvez d' an diwezhañ bev, evel ma 'z eo ar c'hiz da lavarout : ha kement-se gant aon e c'hoarvezje gwalleur gant an ezhec'h war an dachenn vrezel. Fromus ha skouerius e kaven an difreoù-se, e-skoaz an testamant pompadus a gouezhas etre va daouarn hag a zeraoue gant ar c'homzoù-mañ : « Legadiñ a ran va ene da Zoue ha va gwad da Vro-C'hall... ». Gant un den eus kêr e ranke bezañ

aozet, rak ur c'houer n' en dije ket klasket ober implij eus orbidoù ar seurt-se.

D' ur mare ma oa berr ar stal gant ar gouarnamant, e reas un amprest bras da leuniañ e gef goullo. Evit seizh lur ha pevar-ugent ha dek gweneg e kinnige ugent real leve. Skritelloù niverus a voe speget ouzh mogerioù kêr hag e-barzh ar studi da gemenn an nevezenti ha brudet e voe ouzhpenn en ilizioù gant ar veleien a alias ar gristenien da fiziout o arc'hant er Stad evit ma vije gounezet ar brezel. Niverus e voe o tont d' ar studi ar re a zegasas o arc'hant laosk d' an amprest. Moarvat m' o dije gouezet na dalvezje, dek vloaz diwezhatoc'h an ugent real leve prenet ganto seizh lur ha pevar-ugent ha dek gweneg, nemet tregont bennak, ne vije ket bet kement a vall warno da deurel o arc'hant diouto.

198

Hogen pep tra a zegase da soñj edomp e brezel. Strolladoù soudard, o vont pe o tont eus an embregerezh, a gerzhe war ar ruiou, o fuzuilhoù ganto war o skoaz ; re all gant o ofiserien en o fenn, o vont da gemerout an tren war-du an talbenn ; hag ar vindrailherien o tennañ, dreist ar Stêr-Aon, diwar ar bernioù atred mein-c'hlas a zo a-gleiz da hent bras Pleiben. Pa veze ar re-mañ, tud diseven anezho, o tistreiñ e kêr war-lerc'h o zaolioù arnod, e vezent dizereat alies ouzh ar merc'hed yaouank a gavent war o hent, oc'h ober dirazo jestroù hudur gant gwinterelloù o mindrailherezioù. Ar poz brizh-vrezhoneg « Pek an taol » a veze ganto dalchmat, o tiskouez evel-se e oant gwir verc'hetaerien.

E-keit ha ma oa tuet ar re-se d' an orged, tud ar vro a oa er glac'har en abeg d' o c'herent o vevañ bemdez en arvar eus o buhez. Keloù eus marv unan bennak en em gave dalc'hmat, o tegas kañv ha tristidigezh e meur a diegezh. Chalet e vezed ivez gant ar vuhez spontus a rene hor soudarded er fozioù-difenn, er pri ha dindan an obuzioù. En enep, nep keloù kennerzhus eus an talbenn e-lec'h ma kolled bewech kantadoù soudarded da c'hounit un nebeut devezhioù-arat a veze adkemeret prim gant an enebourien. Habasketed an holl a oa souezhus ha netra ne zeue da semplaat o fiziañs en trec'h diwezhañ.

Unan eus paotred burev an hipotek, e anv Marc'heg, klañvidik ha bet martolod kentoc'h e-lec'h m' en doa tapet e fall, a estlamme o kontañ taolioù-kaer fuzuilherien an amiral Ronarc'h o devoa bet urzh da zifenn linenn ar stêr Yser e-pad eizh eur ha daou-ugent hag, en dour betek o c'hof, a zalc'has penn d' an Alamaned e-pad teir sizhun penn-da-benn. « Gwellañ soudarded a zo bet biskoazh, » emezañ, « eo ar vartoloded. M' am bije bet yec'hed, nag eürus ha laouen e vijen o vont ganto d' ar Voched ! »

P' em eus tro da gomz eus ar vartoloded, e teu soñj din eus un droiad a ris e Kemper, gant va mamm, nebeut goude an diskleriadur brezel. Aet e oamp d' ar foar da brenañ moc'h da lardañ. P' edomp o tistreiñ d' ar gêr, e welis, e-tal kazarn an 118vet, un toullad gwazed, trouz bras ganto. Gwisket evel martoloded ar Stad, e tougent bep a gepi soudard, ar pezh a oa kiriek dezho da vezañ drouklaouen. « Ni n' omp ket deuet amañ da c'hoari Yann Soudard, » a hopent, « pa 'z eus tud a vor ac'hanomp ! »

Er penn-kentañ eus ar brezel, war a lavared, e c'houlenne paotred an aod, e Kemper, ouzh piv e tleent kaout krog. War o meno, e oa ar Saozon an enebourien ha n' eo ket an Alamaned na anavezent ket.

199

.

Graet em boa anaoudegezh gant ur paotr yaouank genidik eus Gourin, e anv Benead. Gwall c'hloazet e c'har er brezel, e oa bet kaset da labourat da stal-boultr Pont-ar-Veuzeñ. Pañsion a gavas e ti Mari Mevel ha buan e teuas da vezañ ur c'havandad mat din. Diouzh an abardaez e vezemp hon daou oc'h ober ur pennadig bale war ribl ar Stêr Aon. Ur brezhoneger mat e oa Benead ha didu a gaven en e ser. War a glevis gantañ en devoa bevet, e-pad meur a vloavezh, e Stadoù-Unanet Amerika. Eno edo c'hoazh pa oa tarzhet ar brezel hag ac'hano e oa

deuet da gemerout perzh er bec'h.

Kontaouer e oa bet en ur gêrig, n'ouzon mui e pe hini eus ar Stadoù, tost d' un tolead gouez, meneziek ha koadet. Bep bloaz, d' an hevelep mare, e tiskenne er gêr-se, da glask sav d' ar c'hrec'hin o deveze da werzhañ, un nebeut Bretoned a rae micher da chaseal er menezioù. Goude bezañ gwerzhet o marc'hadourezh e prenent armaj ha dilhad, peadra evit tremen ur bloavezh all, hag e lakaent ar rest eus o arc'hant en un ti-bank, war o anv. A-raok distreiñ da gantreal er c'hoadoù, e kemerent un tammig amzer vat. E-doug meur a zevezh, e vevent evel priñsed, oc'h ober dispignoù foll hag o pediñ ar re a veve en o ostaleri da gemerout perzh en o festoù.

D' an ampoent ma oa mennet Benead da vont da vrezeliñ da Vro-C'hall, ec'h en em gavjont, evel boaz, hag e klaskjont ober dezhañ dilezel e venoz ha mont d' ho heul da ren ur vuhez dudius-kenañ, war a lavarent. Ar Gourinad, avat, n' o selaouas ket ha keuz ruz en devoa d' ar pezh a anve e follentez. « Ma karjen, » emezañ, « bezañ sentet outo, ne vije ket bet un den mac'hagnet ac'hanon hag, e-lec'h tremen gant ur pae dister ha mezhus, e vije bet an aour ganin war ar radenn. »

.

Pell a oa, n' hor beze nemet brezhoneg ar C'hourrier da lenn, hag un drugar e voe din pa gouezhas unan eus niverenoù *Kroaz ar Vretoned* etre va daouarn. N' ouzon ket penaos e c'hoarvezas kement-se, met kerkent e koumanantis d' ar gelaouenn. Meur a wech e kavis anv enni eus ur Gedez, eus Kerc'hoenn, e Kastellin, soudard d' an ampoent. D' an aotrou Vallée e kase pennadoùigoù a veze embannet war ar gazetenn.

200

Laouen e voen o c'houzout e oa ur C'hastellinad troet gant hor yezh ha n' edon ket va-unan o tifretañ e mor ar galleg. Meur a wech, abaoe, ez on en em gavet gant ar Gedez, met, e-lec'h kenderc'hel da skrivañ war-lerc'h ar brezel, e laoskas mut e bluenn hag e tilezas ar stourm evit Breizh.

*

Bep sadorn e tistroen da Bleiben, dre an tren bihan, da dremen ar sul. Leun e veze ar c'hombodoù gant paotred ha merc'hed eus tolead Karaez o vont war-du o c'hêrioù goude ur sizhunvezh labour e stal-boultr Pont-ar-Veuzenn. Tud seder e oant ha kerkent en em gavet er bagonioù, e stagent da ganañ, e-ser merkañ ar vent, gant o botoù, war al leurenn.

Kanerien vat e oa ar baotred plat o zokeier, hag ar merc'hed pennoù paket a ziskane, war un dro, d' ar gwellañ gourlañchennoù a veze en o zouez. Lammet o dije da zañsal ma vije bet frank a-walc'h pep kombod. Diouzh ar goañv, e amc'houlou an tren, ennañ hepken lampoù pikouzet da reiñ sklerijenn, e oa iskis klevout, en-dro d' ar fornigelloù-tommañ ruz-tan, ar ganiri drant o tregerniñ gant nerzh, endra ma oa prederiet ar speredoù gant ar pezh a dremene war an dachenn vrezel.

E-doug ar goañvioù kalet a zeuas, didruez, da deñvalaat bloavezhioù hir ar brezel, e voe a-wechoù ken tev ar skorn ma veze goloet an hentoù gant ur glerenn risklus na c'helled ket bale warni. Neuze e ranken diwiskañ va botoù tachet evit mont, war va loeroù, eus ar gar da di va mamm, dre foz an hent bras. E Kastellin hor boa gouloù tredan hag er gêr, pa oa ken dibaot an eoul-maen, n' hor beze nemet goulou lutik ul lamp Pigeon da gaout sklerijenn. Amzer an dienez a oa, rak diouer a veze c'hoazh a galz traoù.

Goude koan e veze re deñval da lenn ar C'hourrier a gemered bep sizhun hag ec'h en em zastume ar familh en-dro d' an oaled da gomz eus ar brezel. E Kastellin e kleven anv eus an darvoudoù a c'hoarveze hag o c'havout a raen ivez da lenn er c'helaouennoù. D' am zro o displegen d' am zud hag e kleven ganto piv a veze bet lazhet ha piv a veze distroet d' ar barrez goude bezañ kollet ur

vrec'h pe ur c'har.

201

Edo neuze ar C'hallaoued o tilestriñ e gourenez Gallipoli a zo d' an Durked aet e brezel a-du gant an Alamaned. Tenn e oa eno ar pegadoù hag an dachenn gounezet gant an alouberien ne oa ket bras. Klask a reas an amiral Guépratte sevel, e penn e listri houarnet, gant strizh-mor an Dardanell. Hogen kanolioù pounner an Durked o zizhas hag e c'houeledas meur a hini anezho. Kalz martoloded, an darn vrasañ Bretoned, a chomas da veuziñ er strizh-mor, ha setu Breizh e kañv adarre. Diwezhatoc'h e teuas keloù e oa bet kaset d' ar strad gant ul lestr-splujer alaman, er Mor Kreiz-douarek, al lestr houarnet gall Amiral Charner. Holl vartoloded ar bourzh, nemet unan, a gavas eno o marv hag en o zouez, e oa ur paotr yaouank eus Pleiben a anavezen mat, Rolland e anv.

D' al lun vintin, pa zistroen d' am labour, e kaven bepred er c'hombod an hevelep skritelloù gallek : « Tavit ! Bezit war ziskred ! Diskouarn an enebour a vez ouzh ho selaou ! » Kement-se ne vire ket ouzh ar soudarded da gomz a vouezh uhel eus al lec'hioù m' edo o rejimantoù o stourm, eus o skuizhder da rankout bevañ e bouilhenn ar foziou-difenn hag eus an digalonegezh a zeue d' o c'hriñañ bep ur mare.

Ar re a veze laosket eus an talbenn da zont da ziskuizhañ d' ar gêr e-pad dek devezh a veze, kalz anezho, goloet a bri melen a galed e dilhad. O barv hir hag o neuz digempenn a lakae anat e oa gwir o stad reuzeudik war linenn an tan.

Un deiz e klevis e oa bet lazhet ar Gaonac'h, un den genidik a Blonevez-ar-Faou, deuet da chom da vourc'h Pleiben. Ne ouie ket galleg hag, ouzhpenn, e oa loariiek ha froudennus. A-greiz ma veze o labourat, ez ae hep abeg da vouzat d' ar gêr pa bege ennañ ur barrad melkoni. Daoust da se e oa ur poanier hag ul labourer, ha du-mañ edo war zevezh pa rankas mont d' ar brezel.

Da gentañ e kredis e oa bet diskaret e-kerz un emgann, met dont a ris da c'houzout e oa bet barnet d' ar marv gant ur c'huzul brezel ha fuzuilhet da c'houde. Moarvat n' en devoa ket sentet ouzh un urzh a oa bet roet dezhañ pe, marteze, e oa bet trevariet e spered gant ur gaouad diwar e gleñved iskis. War e lerc'h he devoe e intañvez pañsion ha sikourioù evit o zri bugel yaouank.

Mantrus eo bet planedenn an den paour-se, evel hini paotr Meilhonég a voe fuzuilhet ivez o vezañ ma oa dizesk war ar galleg ha ma ne gomprenas ket ur gourc'hemenn roet dezhañ er yezh-se.

N'ouzon ket pet all eus hor c'henvroiz a c'hoarvezas ganto heñvel o tifenn ar Moloc'h gall a aberzhe didruez e vrezelourien divarrek war e lavar !

.
202

Ar repuidi flandrezat a gavas degemer ha labour e Breizh a oa tud feal d' o yezh. Ar re a yeas da vevañ war ar maez a zeskas buan brezhonég. Ur blijadur e veze komz ganto, daoust ha ma ne oa ket uhel an deskadurezh en o zouez. Tud eus ar bobl e oant holl, bet un nebeut bloavezhioù skol nemetken.

Graet em boa anaoudegezh, koulskoude, gant ur Flandrezad desket ha gouest da gomz eus kudennoù e vro. Lavarout a reas din e oa bras an diaesterioù a veze dalc'hmat o lakaat enebiezh etre ar flandrezegerien hag ar c'hallegerien. Ur stad, ken kreizennet hag hini Bro-C'hall, a venne kaout ar re-mañ en o bro hag a rae o seizh gwellañ da astenn levezon ar galleg war Vro-Flandrez a-bezh. Hogen, emezañ, edo o emskiant vroadel o tont da Flandreiz a gavje tu da lakaat o gwirioù da gaout an trec'h, en desped da Waloniz !

Ouzh e glevout, e tomme va c'halon o c'houzout e lakaed harz, e lec'hioù 'zo, da lanv ar galleg. Souezhet e voe ar Flandrezad pa lavaris dezhañ e oa e Breizh ur gudenn o tennañ d' an hini a rene en e vro. « Ur yezh hoc'h eus, » emezañ, « hag a garfec'h mirout ha gwelout kelennet er skolioù. Ur bobl ez oc'h disheñvel-kaer diouzh ar C'hallaoued, e gwirionez, met betek-hen, n' em eus

kavet nep Breizhad hag a vije chalet gant gwirioù e vro nag amzer da zont ar brezhoneg. Ennomp eo divrall ar spered broadel, e-lec'h c'hwi a zo deuet da vezañ Frañsizien evel ho mistri. Flandreziz a zo niverus hag e devo an trec'h, abred pe ziwezhat, padal ne doc'h nemet un dornadig e-skoaz ar C'hallaoued na asantint morse d' ho koulennoù. »

« Diwezhatoc'h e vo gwelet, » emezon, « pa vo echu ar brezel. »

Siwazh ! barnet mat en devoa va mignon belgiat ar vro a zifenne ar frankiz hag ar pobloù gwasket ha Breizh ken difenn all pa vez anv eus he gwirioù.

Alies abaoe em eus bet kalonad ha keuz d' ar gwad breizhat skuilhet evit dasorc'hiñ broioù bihan e-keit ha ma chome diseblant ar Vretoned e-keñver o mad o-unan.

.

203

Seitek vloaz hanter n' em boa ken, war-dro hanter an nevez-amzer eus ar bloaz 1915, pa voen galvet da heul ar baotred ganet en hevelep bloaz ganin, dirak ar C'huzul en devoa kefridi da zibab en hon touez ar re ac'hanomp a oa mat da zougen an armoù. D' ar medisin a lavaras din : « Mat evit ar servij », e tiskouezis va gar kleiz na c'helle ket plegañ. « Gortoz, » emezañ, « me a raio dezhi direudañ ». Hag, hep damant, e tapas peg enni d' he flegañ. Boud e voe hag e tistagas gant keuz : « Gwazh a se ! Hemañ en dije graet ur soudard mat er fozioù-difenn e-lec'h ma 'z eus ezhomm a baotred kerkoulz korfet hag eñ ! » War ar c'homzoù-se e voen laosket kuit hag edon o vont da gavout va c'henseurted eus ar vourc'h a oa oc'h ober tro an tavarnioù gant ur banniel tri liv, pa glevis un danvez-soudard all o lavarout : « Paotred bourc'h Pleiben a zo tud dister ar bloaz-mañ ! Re gamm ha frioù lous ez int holl ! ».

Feuket an tamm ac'hanon : « Ne anavezan nemet unan kamm en o zouez, » emezon dezhañ dichek, « ha me an hini eo. Mar karez kenderc'hel da zismegañsiñ paotred ar vourc'h evel ma rez, ez on dare, hep mui gortoz, da reiñ dit ur fread evit diskouez dit petra a dalvezont ». Ne voe ket hiroc'h ar riot rak ne wikas ket ar c'hanfard am boa spontet, a gredan. Laouen da vezañ difennet, d' am meno, enor va c'hamaraded, ez is d' o heul d' ober ur weladenn d' ar merc'hed yaouank en oad deomp.

Hervez ar c'hiz e pokjomp dezho hag e kinnigjont deomp da evañ. Youc'h ha c'hoarzh a savas e ti pep hini anezho hag, a-barzh pell, e voe badaouet ar baotred gant an trouz a rejont hag an evaj a lonkjont. Keuz a zeuas din d' o bezañ ambrouget hag e soñjis e vije bet furc'h din chom er gêr, rak gwall c'hallekaet e kaven ar yaouankiz dirollet-se.

(da genderc'hel.)

ISTOR BREIZH LA BORDERIE

troet gant ROPARZ HEMON

Brezel Bleaz ha Monforzh
Dibenn ar C'hentañ Maread

Ar Saozon e Breizh
Ergerzhadeg Roperzh Artez
(Gwengolo-Here 1342)

Teir ergerzhadeg saoz a voe graet e Breizh e 1342 gant ar roue Edouarzh III evit harpañ e gevredad Yann Monforzh. An dilestrañ a voe graet e Brest, pe tre e-kichen Brest bep tro.

1) An hini gentañ, war-dro an 20 a viz Mae, dindan urzhioù Gaoter Manny.

2) An eil, d' an 18 a viz Eost, renet gant Roperzh Artez ha Gwilherm Bohun kont Northampton.

3) An trede, daou zevezh a-raok deiz an Hollsent, d' an 30 a viz Here, renet gant Edouarzh III, roue Bro-Saoz, e-unan.

An ergerzhadeg kentañ.

Komzet hon eus eus an ergerzhadeg kentañ. Gwelet hon eus e oa bet a-bouez e darvoudoù ar bloaz 1342, rak Gaoter Manny an hini eo en doa, etre traoù all, prizoniet ar beskont Herve Leon, disezizet Henbont, faezhet Loeiz Spagn e Kemperle, - hep menegiñ taolioù bihanoc'h na c'hellomp ket kontañ amañ dre ar munud. Ha koulskoude, Manny a oa dister e c'halloud. A-boan 3.000 den a oa en e arme.

En ergerzhadeg kentañ a echuas d' ar 7 Gouere 1342. Ar rener, fouge ennañ, a gasas gantañ Herve Leon hag ar re all bet paket e Tregaranteg. Evit ma vije kontez Vonforzh dibreder, skoulmet en doa un arsav-brezel gant Charlez Bleaz, a dlee padout betek an Hollsent. Roue Bro-Saoz, avat, hag eñ oc'h aozañ un eil ergerzhadeg e Breizh, brasoc'h eget an hini gentañ, a nac'has gwiriekat an arsav-brezel-se.

205

Aozidigezh an eil ergerzhadeg.

Kalz a boan a voe kemeret. D' ar 27 Meurzh 1342, Edouarzh III a roas urzh da zastum listri e Portsmouth evit kas da Vreizh, d' an 10 Ebrel, Gwilherm Bohun kont Northampton hag aotrounez all a Vro-Saoz. D'an 10 Ebrel, e roas urzh da zerc'hel ur bagad saezherien gembreat prest da vont gant Gwilherm Bohun. D'an 20 Mezheven, e roas urzh da aozañ listri e Portsmouth evit treizhañ ar mor gant Gwilherm d' ar 5 Gouere. D' ar 25 Mezheven, d' an 3 ha d' ar 14 Gouere, e voe roet arc'hant da bevarzek denjentil eus ar re wellañ a Vro-Saoz, - en o zouez Raoul Stafford, Roperzh Artez, konted Suffolk, Warwick, Oxford, Devon, Gloucester, - evit paeañ ar soudarded a dleent kas ganto da Vreizh. D'an 20 Gouere, e voe roet dre lizheroù roueel da gont Northampton ar garg a gabiten, letanant-meur roue Bro-Saoz e dugelezh Vreizh, en doare ma oa-eñ rener ar bagadoù a dlee mont da Vreizh gantañ En diwez, d' an 23 Gouere, ar roue a c'houlennas digant uhelidi Iwerzhon kas dezhañ soudarded, « o vezañ m' emañ kont Northampton », emezañ, a o vont da Vreizh gant un arme ».

Ne voe graet an disparti nemet d' ar 14 Eost evelato. Ar strollad 260 lestr-dre-lien, hep kontañ ar bagoù bihan, a zegouezhas e-kichen Brest d' an 18.

Bohun kont Northampton oa letanant ar roue, hogen rener an armead oa Roperzh Artez. Eñ eo a voe kret evit an darvoudoù, mat pe fall, a vezo danevellet da heul.

Pet den a oa er bagad-ergerzh-se ? En ul lizher da arc'heskob Canterbury, d' ar 15 Eost 1342, Edouarzh III a skriv emañ o kas « ur vras a armead ». Ne gredan ket avat e c'haller jediñ e oa muioc'h eget 5.000 soudard enni. Bremaik e vo gwelet perak.

An dilestrañ.

Ar gadourien a zouaras e morlenn Vrest, hogen ne voe ket er porzh. Rak pa zegouezhjont edo un armead c'hall, niverus a-walc'h, o c'hronnañ kêr, en he fenn, etre re all, Charlez Bleaz, kont Foix, kont Savoia.

206

Pevarzek gale gall a oa diouzh tu ar mor. Tri eus ar galeoù-se, kerkent ha gwelet ganto al listri saoz, a dec'has prim etrezek an Elorn hag a c'hallas mont e surentez. An unnek all, tri anezho bras, a redas dievezh er Benfell, na oa neuze nemet ur wazh-dour, re strizh, ha re vas an dour enni. Ar vartoloded a lammas skañv d' an douar hag a skampas dre ar parkeier. Ar Saozon, divarrek da sachañ ar galeoù ac'hano, a gasas bagoù bihan, flammerennoù warno, d' ober ur brav a dantad.

An armead a oa o c'hronnañ Brest diouzh tu an douar, o vezañ na oa mui evit kemer ar c'hreñvlec'h, a gilas hep gortoz ar Saozon, o tilezel kastell Goueled-ar-Forest e-kichen, a oa leun a vitailh. Brest a voe dieubet raktal hag an dieuberien degemeret, kenyouc'h het dezho laouen gant ar gwarnizon, dreist-holl gant ar rener, a oa, evel am eus lavaret, Tangi ar C'hastell.

Seziz Vontroulez

Ar vro a-bezh en-dro da Vrest a oa a-du gant Monforzh. Ne voe graet eneberezh ebet ouzh ar Saozon. Kement a aotrounez uhel hag a varc'herien galonek, deuet eus an tu all d' ar mor, o doa nag a-walc'h a soudarded nag a ijinoù-brezel, na netra rekis evit lakaat seziz. Roperzh Artez ne oa ket chalet avat, ha ken feuls e oa, ken diharz e herded ma krede e c'halle dont a-benn eus pep tra.

Gwall hardizh e oant, rak ar gêr-se a oa kreñv, pourvezet fonnus, diwallet mat, hag ar Saozon er c'hontrol n' o doa nag a-walc'h a soudarded nag a ijinoù-brezel, na netra rekis evit lakaat seziz. Roperzh Artez ne oa ket chalet avat, ha ken feuls e oa, ken diharz e herded ma krede e c'halle dont a-benn eus pep tra.

D' an 3 Gwengolo 1342 e reas un arsailhadenn ouzh Montroulez, dre skeuliata ar murioù hep mar. C'hwitañ a reas, ha kalz Saozon a voe gouliet, en o zouez Herri Percy, a oa bet graet marc'heg a-ratozh da geñver an arsailhadenn-se. Iod zoken a voe lazhet. Unan eus ar re-mañ, an Aotrou Jalm Lowel, a oa un den a bouez. Ar Saozon ne ziskrogjont ket diouzh ar seziz koulskoude. Skoazell a c'houlennjont digant Monforzhiz Vreizh, ha soudarded a voe kaset dezho pemzek devezh goude, hogen, war a hañval, ne oant ket niverus. E-keit-se, Charlez Bleaz, en em dennet e Gwengamp, a oa o tastum hag oc'h armañ bagadoù evit disezizañ Montroulez.

207

Emgann etre Montroulez ha Lanveur.

D' an 29 Gwengolo, e klevas ar Saozon edo Charlez Bleaz o kerzhout en o enep. Gant aon da vezañ tapet etre armead ar priñs ha gwarnizon Montroulez, e loc'hjont e-pad an noz da vont en arbenn da Charlez. Antronoz edont diazezet etre Montroulez ha Lanveur.

Roperzh Artez a harpas e vagadig ouzh ur c'hoad da virout na vije taget dre an tu a-dreñv. Dirak e linenn-emgann e lakaas kleuzañ ur foz kuzhet gant ur gwiskad leton ha geot. N' edo an enebourien nemet war-hed ul lev ac'hano. Ne chome nemet nebeutoc'h eget 5.000 den gant ar Saozon, goude ar c'holloù o doa bet dirak Montroulez. Gant Charlez e oa etre 20.000 ha 30.000 den, en o zouez 3.000 den-armoù, 1.500 arbalastrer jenoat, ar re all troadeien ha tud voutin. Rannañ a reas e arme e tri strollad. An hini kentañ, renet gant ur marc'heg kalonek, Jafrez Charni e anv, ne oa ennañ nemet troadeien na oant ket soudarded reizh, anvet « riboded ». Tagañ a reas ar Saozon war-dro teir eur goude kreisteiz, ha faezhet e voe diouzhtu. Ar Frañsizien, mantret, a chomas a-sav ur pennad hep gouzout petra ober. Fiziañs a zeuas dezho pa weljont pegen nebeut a Saozon a oa. An eil strollad, ennañ marc'heien gant kezeg mat, a sailhas d' an daoulamm evit flastrañ an enebour en ur redadenn. War o hent e oa ar foz trubard. Kalz a gouezhas enni hag a voe friket. Hanter-kant a varc'heien a varvas. Daou c'hant a dud-armoù a voe prizoniet, en o zouez ar marc'heg mat Jafrez Charni. Ar re all a gemeras an tec'h.

Daoust d' an div c'hwitadenn-se, avat, e chome tolpad bras ar Frañsizien-ha-Brezhoned start e renk, hep bezañ en em gannet. Spontet e voe ar Saozon ganto, ken niverus e oant. Pa grogont da gerzhout daveto evit o zagañ, ar Saozon, aon dezho bezañ lonket gant ar froud, a glaskas repu er c'hoad a oa e-kichen. Gronnet e voent a bep tu. Chom a rejont sioul e-pad ur pennad, o soñjal e skuizhje o enebourien gant an amzer. En diwez n' o doa mui netra da zebriñ. Armeadig Roperzh Artez eta, marnaoniet, a reas un dilammadenn galonek, a dorras linennad an enebourien en ur lazhañ kalz anezho, hag a yeas da lakaat seziz dirak Montroulez adarre.

208

Eil seziz Henbont.

Charlez Bleaz ne glaskas ket harpañ ar gêr-se un eil gwech. Bodañ a reas e soudarded, niverus c'hoazh, ha d' o c'hreñvaat e tegasas ur bagad dastumet gant Loeiz Spagn goude ma oa bet faezhet e Kemperle, hag e deizioù kentañ miz Here ez eas da chronañ a-nevez Henbont, ma edo c'hoazh an dugez Janed Flandrez gant ar re bennañ eus he dalc'hidi.

En dro-mañ e teuas Charlez dirak Henbont gant c'hwezek a ijinoù-brezel evit freuzhañ kêr. Hogen abaoe miz Mae e oa bet adaozet-start ar murioù hag e c'hallent herzel ouzh ar pikoloù mein stlapet gant an ijinoù-se. Kêriz a c'hoarzhe goap outo, ha pa zeue ur vannadell da stekiñ ouzh o ramparzhioù hep o hejañ, e torchent al lec'h gant o c'hebell, en ur lavarout :

« Petra a dalvez deoc'h kousiañ hor murioù ? It kentoc'h da zihunañ ho kenseurte a gousk war dachenn Gemperle ! »

An diskar-amzer a dremene. Marc'heien Frañs, o santout ar yenijenn o tont, a yae d' ar gêr an eil war-lerc'h egile. A-benn ar fin, Charlez Bleaz, skuizh o c'hedal en aner dirak Henbont, a savas ar seziz diwar ar gêr-se e-tro gouel sant Lukaz (18 Here) hag a zistroas da Naoned.

Maread-brezel 1342 ne oa ket echu koulskoude. A-enep ar boaz a rene er Grennamzer, e kendalc'has e-pad ar goañv.

Ar Saozon e mervent Breizh.

Roperzh Artez a skuizhas ivez o welout ne oa ket evit kemer Montroulez, hogen ne oa mennet tamm ebet da ehanañ d' ar c'houlz fall-se eus ar bloaz. N' eo ket evit an dra-se e oa deuet da Vreizh. Divizout a reas aozañ un ergerzhadeg hardishoc'h eget hini Vontroulez : arsailhañ kontelezh Naoned, a oa sujet en he fezh da Charlez Bleaz.

Listri a zastumas e Brest. Hag eñ da verdeiñ gant e dammig arme etrezek Beauvoir, ur porzh en aod Poatev dirak Enez Nermouster, sko ouzh harzoù Breizh.

E vennad oa dilestrañ eno ha mont hep poan e-barzh Bro-Naoned. Dre wallchañs, pe marteze dre varad pe dre ma oa bet diskuliet re abred e raktres, e kavas e porzh Beauvoir strollad-listri Charlez Bleaz, renet gant Loeiz Spagn hag Ayton Doria.

209

Klask a reas douarañ e-kichen. Setu ma welas o sevel dirazañ ur bagad niverus a Jenoz. Hag eñ o herzel outo, e voe taget a-ziadre gant listri Charlez Bleaz. N' en devoe nemet amzer da adlestrañ evit diarbenn an arsailherien. Abenn e teuas da doullañ linennad al listri enebour, gant kolloù bras avat, hag o skeiñ prim etrezek ar gwalarn, e tivizas douarañ e-tal Gwened, ha tagañ ar gêr-greñv-se raktal, daoust ma oa digresket kalz niver e soudarded. E Gwened e oa ur gwarnizon stank a-du gant Bleaz, dindan urzhioù pevar eus gwellañ renerien an tuad : Olier Klizun, aotrouez Louzieg ha Tournemin, hag un aotrou eus lignez Leon.

Goude bezañ gronnet Gwened eus e wellañ ha stourmataet un tammig en-dro da vardelloù kêr, en em lakaas da breizhañ. Bro-Wened a-bezh nemet Henbont, dreist-holl an arvor a oa sujet da Charlez Bleaz. Roperzh Artez a wastas ferv an dachenn, adalek Ar Roc'h-Vernez er reter betek Ar Faoued hag Ar Roc'h-Periou er c'hornog, o leskiñ, o skrapañ, o trastañ ar maezioù, ken na rankas an dud en em serriñ er c'hêrioù, diwallet gant kreñvlec'hioù o c'hostezenn. Gwenediz a rae a-wechoù disailhadegoù frouezhus. Un deiz, ar Saozon, war o distro eus un taol-skrap, ganto traoù laeret e-leizh, a gouezhas en ur spi-brezel aozet gant ar sezizidi. Kalz anezho a voe lazhet, ha kement a doa preizhet a voe lamet diganto.

Kemeridigezh Wened.

Roperzh Artez a soñjas neuze a-zevri kemer Gwened. Un nebeut deizioù war-lerc'h e tagas tri foent eus ar murioù-difenn, gant kalz nerzh, an devezh-pad.

« Ar waregerien saoz a denne ken ingal ha ken stank ma krede a-boan an difennourien en em ziskouez etre ar c'hranellou. » (Froissart)

Goude o devezhiad hir a stourm, soudarded ar gwarnizon ha kêriz a zistroas d'ar gêr, skuizh-divi, a ziwiskas o harnezioù, a goanias hag a yeas da gousket didrabas, o krediñ e c'halljent kaout betek antronoz un ehan gounezet-mat.

Faziet oant. E-kreiz an noz e klevjont o tarzhañ trumm dirak div eus dorojoù kêr garm an trompilhoù, trouz an armoù hag ar bannadelloù, tousmac'h ha stirlink ar brezel. Tantadoù bras enaouet dirak an dorojoù-se a daole strinkadoù flammoù ruz-gwad en deñvalijenn. Gwenediz, o welout ur ruzenn a wall ziougan dameuc'het gant ar c'hogus, a gredas edo kêr o teviñ. Sevel a rejont a-hast, hanter wisket. Lod a redas dre ar straedoù evit mogañ an tan lavaret. Re all, ur 1.200 bennak anezho, Olier Klizun en o fenn, a yeas da zifenn an dorojoù m'en doa Roperzh Artez enaouet tan dirazo, oc'h ober van da dagañ e daou lec'h a-gevret.

210

E-kreiz ar strafuilh lakaet dre-holl gant ar fals argadoù-se, e-pad m' edo ar gwarnizon ha kêriz o klask herzel ouzh dañjerioù faltaziet, ar gwir zañjer a oa buan o tont hep harz ebet. En tu pellañ diouzh an div zor a oa bet taget, dirak un darn eus ar murioù-tro ma ne grede nikun e oa riskl, hag a chome dizifenn, ur bagad soudarded eus an arme saoz a zegouezhas sioul-sibouroun, ganto skeulioù krogaoek, a daoljont war ar murioù. Tri c'hant den-armoù, Brezhoned ha Saozon, a yeas e-barzh evel-se. A renkadoù stank e treuzjont kêr, en ur lazhañ kement den a gavjont dirazo, hag ez ejont da zigeriñ an div zor ma oa bet dedennet holl zifennourien ar c'hreñvlec'h gant fals argadoù Roperzh Artez, endra raed an argad gwirion e pep frankiz.

Digoret an div zor, holl armead ar Saozon a yeas drezo e kêr. Kêriz ha soudarded ar gwarnizon, saouzanet, kelc'hiet gant enebourien o tont war o lerc'h a bep tu, a dec'he pennfollet, hep gouzout penaos e oa c'hoarvezet an traoù, er-

maez eus kêr, o renerien da gentañ.

Antronoz, dugez Vreizh, kontez Vonforzh, Janed Flandrez, o klevout ar c'heloù, a yeas da Wened, pedet gant Roperzh Artez. E veuliñ a reas hag e chomas e kêr pemp devezh evit lidañ an trec'h.

Bleaziz o tistreiñ war-zu Gwened.

Ne oa ket un trec'h klok koulskoude. Ar renerien a-du gant Bleaz a oa bet e Gwened, - Olier Klizun, Louzieg, Tournemin, Leon, - a voe beuzet gant rebechoù ha kunujennoù a-berzh tud o c'hostezenn : dioded, tud laosk, treitourien a voe graet anezho, dezho da zibab ! Sur a-walc'h, « dioded » a zeree mat a-walc'h outo.

Evit reizhañ an traoù, ez advodjont da gentañ ar soudarded a oa tec'het diouzh Gwened, ha neuze e c'houlennjont sikour digant o mignoned eus ar gwarnizonoù a dro-war-dro ha digant Charlez Bleaz, a oa e Naoned. Un dek devezh goude kemeridigezh Wened gant ar Saozon, e tegouezhjont nepell diouzh ar gêr-se gant un armead a zek pe zaouzek mil soudard, hervez ar gronikourien, en ur embann a vouezh uhel e felle dezho kaout digoll.

211

Marv Roperzh Artez.

Roperzh Artez, evel ur c'hoarier brav, atav hardizh, ne oa ket evit gouzañv chom gronnet pell amzer. Pemp kant soudard a lezas e kêr evit digeriñ an dorojoù dezhañ diouzh ret, hag o vont er-maez e kerzhas war-eeun davet an enebourien, ouzh o zagañ ken feuls ha biskoazh. E vagadig, siwazh, ne oa ket ur palevarzh dre an niver eus an armead a stourme outañ. Kaer en devoe en em gannañ kalonek, an niver eo a voe trec'h. Ma rankas kilañ evit distreiñ da Wened.

Eno e kavas ur gerseenn all. Un taol-reuz a oa c'hoarvezet. Ar bagadig Saozon bet lezet gantañ da ziwall an nor a oa bet taget trumm gant Gwenediz, - ha zoken, a lavarar, gant Gwenedadezed, - hag argaset diouzh kêr. An nor a oa sparlet ha diwallet-mat. Armead Klizun ha Louzieg a oa o tont arloupet war e lerc'h, ha n' en doa mui lec'h-repu ebet. Netra d' en em saveteiñ nemet e gadarnded dizoñvus. Gant strivoù bras, hep goanag, en ur skuilhañ e wad a-builh, e teuas a-benn da gas pezh a chome eus e vagad betek Henbont, ma edo kontez Vonforzh. E gorf a oa skejet a hep tu ha goloet a c'houlilioù don. Ne harzas ket pell. E deizioù diwezhañ miz Here 1342 e varvas.

Da heul peseurt drougeurioù en doa ranket ar c'hadour dispar-se, ganet e Frañs, bet e-pad pell amzer servijer kalonek e vro, tec'hout diouti ha stourm en he enep, n' omp ket evit kontañ amañ. Lavaromp hepken e teu e-doug ur pennad berr e brezel Breizh evel un den meur hag un haroz. E daou viz a-boan, e tiseziz kastell Brest, e tistruj ur strollad pevarzek gale, e faezh un armead 30.000 den, e treuz Breizh eus an eil penn d' egile, e kemer Gwened hep ardivinkoù-brezel dre un taol-gwidre ijinek, - kement-se gant 5.000 den d' ar muiañ.

Ar c'hurioù marzhus-se a gemm red an tonkadur. Betek neuze Charlez Bleaz, gant skoazell armeoù bras Frañs, a veze trec'h dalc'hmat. Setu torret neudenn ar blanedenn, diskaret an achanterezh. Ha setu adsavet berzh-mat Monforzh, harpet hepken gant ur vaouez hag ur bugel. Ha daoust da varv Roperzh Artez e pado.

Al Levrioù

ETIENNE (Guy) . - Diazerc'h. Barzhonegoù ha skridoù all. - (Roazhon) PREDER (1976). - In 8e, 61 p. (Talm 2. Preder. Kaier 191-192. Mae-Mezheven 1976)

Emañ ar gelaouenn Preder o paouez embann un dastumad barzhonegoù gant Guy Etienne, darn anezho embannet abaoe pell 'zo, darn all diembann, - lod anezho savet e gwerzennoù, reoù arall e yezh-plaen barzhoniel.

Dudius eo an oberenn-man dre vras dre m' en em ziskouez enni mennoziou displeget a-hend-all gant ar skrivagner e-barzh skridoù liesseurt bet moulet endeo el **Liamm**, e **Preder** pe **Emsav** (daoust ma sav ur gudenn evit ar gelaouenn-mañ o vezañ ma n' eo ket sinet ar pennadoù a vez embannet enni). Un doare diverra eus ar mennoziou displeget er pennadoù-se a gaver er pezhioù-barzhoniezh e yezh-plaen kellusket. Moarvat e vo nec'het hini pe hini o klask merzout poent-kejout ur meizerezh diseurt awenet gant ur brederouriezh zo hag ur relijielezh a liv kristen ha na veizer ket mat hag-eñ e tever diouzh ur feiz wirion pe get hogen kaer ha sklaer eo ar stumm ha gant kement-se e vo kalonekaet al lenner da lenn-dilenn ar pezhioù-mañ ken n' en devo poellet ar ster anezho.

Aesoc'h e kollo kalon o klask intent talvoudegezh pezhioù zo savet e gwerzennoù a zo hiniennou anezho ken " serr " ha barzhonegoù Kerverziou ; tentet e vo da reiñ d' ar gerioù, neuze, ar ster a blijo dezhañ-eñ hep bezañ re e chal gant an hini a zo bet roet e gwirionez gant ar barzh ; hag o kompren an diaested-se; emichañs, en deus diskleriet hemañ e-barzh ar rakskrid ne selle ket ouzh ar skridoù-se evel ouzh e re peogwir e rank pep lenner o adkrouiñ evit e gont, - nemet en dije roet da gompren dre ar c'homzoù-se ez eo bet kuzuliket ar pezhioù-se ivez gant an Awen, moarvat.

An holl varzhonegoù e gwerzennoù n' int ket ken teñval (pe " liessteriek ") , e gwir n' eus nemet pevar pe bemp m' on chomet boud ouzh o lenn (ne lavaran ket an dra-se evit fogasiñ). An darn vuiañ a zo e krog al lenner poblek zoken, pezh na vir ket outo a vezañ kaer evel hemañ, da skouer :

EBREL

Ur c'hazh
er geot glas o piltrotat,
o treiñ mar-du ennout
e benn du
ha sellout.
Na loen na den ken sellou
Deviñ 'ra gloaz an didrouz
Aezet oc'h e barlenn an amzer.

Setu unan eus bravañ pezhioù an dastumad.

213

Plijet on bet o lenn an dastumad-mañ ha moarvat em bo tro ur wech bennak d' ober hiroc'h addispleg dezhañ. Hogen daoust ha ne zlefe ket ar barzh ober seurt addispleg ? Pep barzh a grou ur yezh arbennik ; dezhañ da reiñ ivez an alc'houez anezhi ; se a ra barzhed zo hag a ra istor o barzhonegoù ; ha me va unan, - peogwir em eus embannet barzhonegoù ivez - ez on en em c'houlennet ha ne zlejen ket bezañ roet un alc'houez d' ar pezhioù savet ganin hag a c'helle ivez seblantout bezañ serr pe bezañ intentet a-dreuz. Rak darempred eo al lennegezh ha ma ne c'hell ket ar barzh tizhout al lenner, daoust ha talvezout a ra ar boan dezhañ skrivañ hag embann ?

Diskouezet kaer eo al levrenn, gant ar moulerezh ordinal hag ur golo e daou liv.

Priz : 15 lur. c.c.p. " Preder " 16 039 13 Paris.

Y. O.

Ne c'houlenner ket an aluzenn evit ur gwir reizh. En em gannañ a reer evitañ.

W. Reich.

Yezh

Jules Gros : LE TRÉSOR DU BRETON PARLE (Eléments de stylistique trégorroise).
Lodenn Iañ : Le langage figuré, eil vouladenn, Sant-Brieg, Les Presses bretonnes, 1970, 250 p. - Eil lodenn : Dictionnaire breton-français des expressions figurées, *ibid.*, 560 p. - Trede lodenn : Le style populaire, stagadenn d' ar gelaouenn " Barr-Heol ", niv. 88, e gwerzh e levr di Giraudon, 30 str. Keranpont, Lanuon, 1976, 400 p.

En amzer-se, da lavarout eo war-dro ar bloavezh 1262, e savas ar Firenzad Bruno (pe v/Brunetto) Latini (1220 ? - 1294 ?) un " Trésor ". E galleg, peogwir e oa ar yezh-mañ, war e veno, «parler plus délectable et plus commun à toutes gens». Mallozh ruz dezhañ ! gouez d' an Dante Alighieri (1265-1321), bet e skol gant Latini. E-barzh *La Divina Comedia* ez eo bet lakaet Bruno Latini en ifern, gant e ziskibl : kavet e vo er c'helc'h-se eus an ifern e-lec'h ma kaver ivez Sodomiz, hag e oar pep unan pehini 'oa tech gwazed ar gêr-hont. E gwirionez, ar pezh a damall an Dante da Latini eo en deus pec'het a-enep d' e yezh-mamm, en ur skrivañ e " d/Trésor " e galleg. En e gichen, e kan XV an Inferno e kaver Accursus ha Gratianus, bet gwallgaset gant hemañ ar yezhadur, gant egile ar gwir... Diwezhatoc'h e voe lakaet e gwerzennoù latin " Trésor " Brunetto Latini, ha brudet dindan an anv a d/Tresoretto.

Evit doare ne oa ket gwall figus Latini war ar yezh a gemerje da venveg : harluet e oa e Bro-C'hall pa skrivas e galleg e " d/Trésor ". Met evit an Dante en doa graet fae Latini war yezh Firenze, ha gwashañ pezh 'zo, en doa klasket tizhout an holl-vedelezh, en ur skrivañ e yezh oñl ar Gapesianed villiget. An holl-vedelezh, ya, a lavar an Dante, pa skriv, feal d' e vestr : « Mamm-vro eo din ar bed a-bezh, evel ar mor d' ar pesked. Met gwirizennet em bro-me ». Setu ne c'helle ket an Dante mont da heul e vestr pa lavare hemañ : « Ne vern da belec'h ez in, em bro-me e vin, e doare ma n' eus bro ebet hag a vije evidon bro an harlu pe vro estren, rak eus an den eo, ha n' eo ket eus al lec'h, e teu ar bezoud reizh » (" Trésor ", II, 2).

Forzh penaos, e galleg eo bet savet an " Teñzor " kentañ. Goude-se e teuas an Thesaurus, hini Estienne. Un tiegezh a voulerien hag a ouizieien e oa an Estienned. Gant an tad, Roperzh Iañ Estienne, e voe savet an *Thesaurus ligae latinae* 1531-32), ha gant ar mab Herri II Estienne, an *Thesaurus linguae graecae* (e 1572-73). Diwarne eo bet savet abaoe kement geriadur gresianek pe latin, hag o daou int bet brudet bras... Gant Mistral, d' e dro, e voe savet *Le Trésor du félibrige*... A-benn ar fin ez eus deuet ar ger thesaurus-trésor-teñzor da vezañ heñvelster ouzh « kelc'heriadur ».

Er bloavezh 1912 e savas ur froudenn en un den yaouank o chom er penn pellañ eus kornog Europa lakaat dre skrid kement a gleve eus lavar e amezeien. Ur froudenn ? En ur ober tri-ugent vloaz, pe dost, ez eo bet aketus an den-se, Jul Gros e anv, da zuañ karnedoù pe gaieroù, hag evel-se ez eus bet skrivet gantañ ouzhpenn tri-ugent mil a frazennoù brezhonek bet distaget dirazañ gant tud Tredrez ha Lokemo dreist-holl, met ivez gant re Lokmikael-an-Traezh, Plouillo, Plourec'h, Servel Langoad ha Ploumagoar... Ha setu hon eus ni ivez, evel-se, hon " Teñzor ", hini ar brezhoneg komzet.

Moarvat e soñje Jul Gros ne oa an tri-ugent mil frazenn-hont nemet un darn eus pinvidigezh ar brezhoneg, ha setu perak en deus roet da istalbenn d' e levr " Eléments de stylistique trégorroise ". Gwir eo ez eo diaes, dibosupl a-grenn, gouzout ha dastum ar brezhoneg en e bezh, pa ne ve nemet hini Treger. Setu ne vo kavet e levrioù Jul Gros nemet darn eus ar brezhoneg komzet, darn zoken eus hini

Treger. Anat eo koulskoude ez eo aes-kenañ ar brezhoneg-mañ, an hini bet pennaouet gant Jul Gros, da vezañ lakaet keñver-ouzh-keñver gant n' eus forzh peseurt brezhoneg all. Hogen, na pegen talvoudus e vije bet kavout meur a zen heñvel ouzh Jul Gros, ha barrek da zastum un tamm e pep lec'h e Breizh-Izel « malzennoù » aour brezhoneg ar bobl.

Emichañs ez eo bet barnet alies a-walc'h an div levrenn gentañ eus " Teñzor ar brezhoneg komzet ". Neuze, brezhoneg o tont war-eeun eus genou an dud eo e kaver amañ : n' eus bet kemmet netra, gouez d' an oberour. Pe 'vo kavet difeson pe ne vo ket, emañ aze deomp, evel ma teu e teu. Na kinkladur, na pompadoù, seurt ; al malzennoù pri hag all, ma 'zeus pri.

N' eus den ebet, sur a-walc'h, hag a gredje ober fae war ar brezhoneg kinniget aze deomp gant Jul Gros, hep ma vije hennezh « brezhoneg Jul Gros » koulskoude. Zoken ar re a ra van da chom hep azeuliñ ar rannyezhoù (ha daoust ma komzont ha skrivont ur paour-kaezh « brezhoneg » truilhek) e vo ret dezhe anzav penaos ne c'hell ar brezhoneg, forzh pegen arnevez e ve, chom hep kemer da ziazez lavar hengounel hon tadoù : gant hemañ emañ an ijin, an nerzh-krouiñ, ar plegoù hag ar wevned a ra diouer bras da dud zo pa gomzont pe pa skrivont brezhoneg.

Diaesañ labour Jul Gros moarvat ez eo bet urzhiañ kemend-all a frazennoù, en ur gavout talbennoù ledan ha resis a-walc'h war un dro, evit ma ne vefe ket re start furchal e-barzh e levr...

Lodennet eo bet al levrenn gentañ e daou bennad : 1. " Le langage figuré " (hag amañ neuze e teu war wel un nebeut gerioù retorik gante blaz ar c'hozh, n' eus ket da dortañ, e-giz « métaphore » ha « métonymie », ha bez emañ ivez, va zud vat, ar « synecdoque » !) ; 2. " Les prépositions ". Peadra aze dija da voueta ur bagad deskidi vrezhonek e-pad meur a sizhunvezh.

An eil levrenn zo anezhi ur geriadur, hini an « troioù lavar skeudennel ». Moarvat ez eo homañ an aesañ ober ganti. Urzhiet eo ar gerioù hervez lizherennoù ar groaz-Doue. N' hon eus ket amañ koulskoude ur geriadur klok, n' hon eus nemet ur roll gerioù, daoust da hemañ bezañ stank-mat. Diouzhtu war-lerc'h ar ger brezhonek e kaver an droidigezh c'halleg anezhañ, ha goude-se, frazennoù brezhoneg komzet, livus meurbet peurvuiañ, ar re gentañ o tennañ d' ar ster eeun, an eil rummad d' ar ster skeudennel. (Ret eo anzav ne vez ket splann dalc'hmat an diforc'h graet etre an daou rummad). Evit gerioù zo ez eus skouerioù e-leizh, evit ar gerioù-mañ peurgetket : amzer, bec'h, brav, derc'hel, dont, dor, dorn, dour, genoù, gouzout, jeu, korf, kozh, kregiñ, krog, lakaat, mad, mont, mor, nevez, ober, paotr, penn, pezh, revr, sac'h, sevel, tamm, taol, tennañ tra, tro, tu. Ha n' eus ket stankoc'h eget ar gerioù-se er yezh komzet, ha gwell-a-se ma ro Jul Gros e-leizh a skouerioù deomp eus o implij, rak ken liesseurt eo o degouezh ma c'hell an den arlivañ e soñj gante kement ha ma kar, hag i gerioù boutin-kenañ.

216

An drede levrenn nevez deuet er-maez ez eus bet roet dezhi da dalbenn : Ar stil poblel. Daou bennad a gaver amañ : 1. " L'expression affective de la pensée " ; 2. "Les traditions orales". Ur wech ouzhpenn e verzer pegen diaes eo bet da Jul Gros kavout talbennoù resis ha reizh da lakaat dindane e eost fonnus. Moarvat ne vo ket kavet kendrec'hus gant an holl e renkidigezh e-barzh ar pennad kentañ. Met petra 'vije bet da ober ? Ne oar ket un den, e gwirionez. Ken uhel e save e vent gant an eoster, m' eo bet ret dezhañ ober bernioù bihanoc'h. Ma 'z eus ur si gant ar renkidigezh, hastomp da lavarout ez eo dister ar si-se, pa seller ouzh ar bernioù aour. Ha ma kavo da lod ez vint o vale e diabarzh ur « souk » arabeg, urzh ebet ennañ nemet an dizurzh, anat e vo dezhe buan o do dirak o daoulagad pinvidigezhioù par da re gev Ali-Baba, hag e vo ur misi evite.

Pa vo graet mat ar gont, sed aze deomp 1.214 pajennad hag a dalvez aour, ur wech c'hoazh. Hag e vo dav d' an holl re a zo prederiet gant ur brezhoneg yac'h teurel pled ouzh ar brezhoneg komzet. Pa gomzer eus trefoedach a-zivout ar brezhoneg komzet ez eo ret teurel evezh : bez e vez a-wechoù, marteze, ul lavar

trefoet eus ar parlant mesket (galleg ha brezhoneg) a glever gant tud ar bobl war ar maez. Diwar ar gwaskadur yezh e teu kement-se, arabat hen ankounac'haat. Ha ne vern : hag-eñ mesket ha trefoet, glan e chom, peurliesañ brezhoneg ar bobl e-keñver ar frammoù diabarzh.

Ma n' heller ket bezañ aketus da zaremprediñ brezhonegerien ar maeziou, ra vior da zaremprediñ levriou Jul Gros.

Ne vo ket roet da Jul Gros trawalc'h a c'hourc'hemennou evit e labour (hag ez eus ur bedervet levrenn gantañ war ar stern, meulet ra vezo !). Pourchaset en deus deomp boued speredek eus ar re yac'husañ hag eus ar re fonusañ. A drugarez d' e labouriou e c'hell brezhonegerien hon amzer chom feal da vrezhoneg o hendadoù : hag i dizesk, diglod, ha divadoù a-gren, un dra bennak o deus legadet deomp evelkent : o yezh. Ma vez mastaret ganeomp, pe dilezet e vimp treitourien, ha mat da vezañ kaset d' an ifern, da welout hag-eñ emañ eno ar Brunetto kozh... Chom a ray ul lec'h, sur, e-barzh Paradiso an Dante Alighieri evit Jul Gros, unan hag a zouj kemend-all « yezh santel e vro ». Met amzer zo c'hoazh ac'han di ! Gourc'hemennou, ya, da diskriver Lokemo. Arabat bremañ ober fae war « deñzor ar brezhoneg komzet ».

NOTENNOÙ

Hor Mignoned

- An Ao. hag an It. Alan J. RAUDE, an Ao. hag It. Job ar GAG a zo laouen o kemenn deoc'h dimeziñ o bugale Tegwenn ha Job, lidet d'ar sadorn 5 a viz Mezheven en iliz Gwiskriv.

- Laouen eo Anna-Vari CHAPALAIN ha Tangi LOUARN o kemenn o eured, lidet en iliz-parrez Kastell-Paol, d'an 19 a viz Mezheven.

- Eured Evelyn POUPINOT ha Yann YONNET a zo bet lidet e Saint-Lo d'an 19 a viz Mezheven.

- Nolwenn EVENOU, merc'h Erwan Evenou hag Anna Wlagen, e bried, a zo stad enni o kemenn deoc'h ganedigezh he c'hoarig Gwenola, d'an 28 a viz Ebrel.

- Glenn LAOUER a zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh e vreurig Owenn. Glenn hag Owenn a zo mibien vihan Koleta CELTON ha Kaourintin FAOU.

- Gwenola GACHET a zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh he c'hoar vihan Karine-Rozenn, en Naoned, d' ar 15 a viz Mae.

Dezho holl e kasomp hor gwellañ gourc'hemennoù.

Kañv

Aet eo da Anaon d'an 9 a viz Mae an Itron CAOUISBIN, 87 vloaz dezhi. D' he bugale, anavezet mat e-touez ar vrogarourien, e kinnigomp hon tristañ gourc'hemennoù-kañv.

Tad hor mignon Gaston LATIMIER (An Timeur) a zo aet da anaon d'ar lan a viz Ebrel, e Boharzh, d' an oad a 81.

Ho gourc'hemennoù a gengañv a gasomp d' hor mignon.

Evnig Penn ar C'hoad

Eujen ar Rouz, bet ganet e Peurid-ar-Roc'h a zo marvet e Plouvouskan, d'an 19 a viz Ebrel, d'an oad a 84 bloaz.

Kemeret en doa evel anv barzh " Evnig Penn ar C'hoad ", diwar an anv-lec'h ma oa bet ganet. Brudet e oa bet gant abadennoù " Breuriez ar Brezoneg " a veze dalc'het e kastell an Aotrou Provost de Launay dindan renerezh an Aotrou Beskond, person Peurid d'ar c'houlz-se... a-raok ar brezel Pevarzek.

«Eno, eme Dirnador e kentskrid al levrig " Eun dornad brug ", embannet gant mouladurioù "Breiz " e 1930, eno, dindan ar gwez bras bodennek e vountas deoc'h ho tivaskell hag e savas deoc'h ho mouezh tener ha skañv».

218

Sonioù an dastumad-se a oa bet, da gentañ, moulet war gelaouenn Erwan ar Moal - Dirnador " Breiz " : Son ar C'hafe, Son ar Sistr, Salud, Breizh e-touez ar re

anavezetañ, bremañ c'hoazh, e Bro-Dreger.

D'ar c'houlz-se - 1930 - e veve Evnig Penn ar C'hoad e Paris, o labourat e Ministrva an Arc'hant. Ezel e oa eus Kelc'h Keltiek Pariz hag e oa bet lakaet e-touez barnerien ar c'henstrivadegoù displegañ ha kanañ e brezhoneg a veze dalc'het bep bloaz eno.

Ar bloavezhioù war-lerc'h e tistroas da Vreizh, anvet da dailhour, da gentañ e Rosgo. Eno en doa bet d' ober war-dro gouelioù ar Bleun-Brug e 1934. Ha goude, evel ezel eus Bleun-Brug Bro-Dreger e kemeras perzh e meur a ouel ha kenstrivadeg vrezhonek. E sonioù a c'houneze brud, prizet ma oant gant an holl evit o doare brezhoneg eeun ha brav.

Deuet en oad da gemer e retred e teuas da vevañ e Perwenan, o kenderc'hel da gemer perzh e strivoù sevenadurel, kement evel ezel Poellgor Goursez Barzhed Vreizh, hag o terc'hel da sevel sonioù a rae berzh dreist-holl e Beilhadegoù Bro-Dreger, ar strollad-se a chom bev bepred, kaset gant Maria Prat eus Brelevenez.

Marvet eo Evnig Penn ar C'hoad goude ur pennad kleñved berr a-walc'h, rak tro hor boa bet da welout anezhañ sart a-walc'h, en e di e Plouvouskañ, e deizioù kentañ mis Meurzh.

E obidoù a zo bet lidet d'ar merc'her 21 a viz Ebrel en iliz hag e bered Plouvouskan. An oferenn-gañv a zo bet e brezhoneg hag e latin, gant an Ao. Klerg da oferenner, an Ao. Floc'h ha beleien all en-dro da intañvez hor mignon, d'e zaou vab ha d' e vugale vihan, hag un toullad mignoned o tougen priz da oberennoù ar barzh evit difenn hag enoriñ ar brezhoneg, hag a viro an eñvor doujus ha karantezus anezhañ,

Erwanez GALBRUN.

Oberoù Evnig Pen ar C'hoad :

- UN DORNAD BRUG, dastumad sonioù, Mouladurioù Breiz, 1930.
- WAR VA ZELENN, dastumad sonioù, 1942.
- Pezhioù-c'hoari (evel ar Barner barnet, ar Barr-amzer...).
- Aozadurioù evit korolloù bugale, evel " va Botoù-koad ", h.a.
- War hentoù Breizh in Kanaouennoù ar Beilhadegoù, Emgleo Breiz, Embannadurioù ar bobl.

Profoù

MIZ EBREL :

D. Guichard, 15 lur ; Mestr Merdrignac, 65 ; E. Souffes-Despré, 50 ; H. ar Bitouz, 10 ; Erwan Libouban, 5 ; F. Ters, 15 ; M. Toudig, 15 ; H. Grouhel, 10 ; Erwan Gwegen, 165 ; P. Peneg, 300.
- War un dro, 650 lur.

Miz MAE :

Y. P. ar Rol, 15 lur ; M. Landivineg, 15 ; Y. V. Bouessel du Bourg, 120 ; M. Colleau, 5.
- War un dro, 155 lur.

Degemeret hon eus adalek derou ar bloaz 5 587,41 lur a brofoù. Talvoudus-meurbet eo evit AL LIAMM seurt skoazell hag e trugarekaomp a wir galon hor skoazellerien.

Niverennoù kozh " Al Liamm " e gwerzh

Prenañ a c'heller an niverennoù meneget da heul :

- 4, 6, 29, 53, 63, 65, 67, 69 betek 175 (nemet an niverennoù 98, 99 ha 100 hag a zo diviet).

Priz an niverennoù a zo :

-4 : 4 lur ;

- an niverennoù all : 7 lur pep hini (nemet an niverennoù 65, 116, 151 hag a gouest 9 lur pep hini, an niverenn 166-167 hag a gouest 14 lur).

Tu a zo a-hend-all da brenañ ar bloavezhioù klok-mañ hag a gouest 40 lur pep hini :

- 1959 (72-77) ; 60 (78-83) ; 61 (84-89) ; 62 (90-95) ; 64 (102-107) ;
65 (108-113) ; 66 (114-119) ; 67 (120-125) ; 68 (126-131) ; 69 (132-137) ;
70 (138-143) ; 71 (144-149) ; 72 (150-155) ; 73 (156-161) ; 74 (162-167) ;
75 (168-173).

Ar goulennoù a zo d'ober digant Per ar Bihan. An niverennoù a vez kaset kuit a vizoù-post.

Koumananterien " Al Liamm "

E miz C'hwevrer hor boa 892 koumananter. E miz Mae avat ez eo bet ret deomp ehanañ da gas ar gelaouenn da 27 koumananter ha ne baeent ket, kaer hor boa kas lizhiri dezho. Ur miz war-lerc'h hor boa tizhet en-dro kaout 890 koumananter ha teñzorer ar gelaouenn a gemenn deomp e vo en tu-hont da 900 pa zeuio an niverenn 177 er-maez.

Levrioù Al Liamm

Deut eo er-maez **Yezhadur bras ar brezhoneg** gant F. Kervella Ouzhpenn 100 skouerenn a oa bet rakprenet. Trugarekaat a reomp an holl brenerien a ro deomp evel-se ur skoazell a-zoare.

Er miz-mañ e teuio er-maez pevar levr bihan : **Ti Vatriona**, gant Soljenitsyn, troet gant Ernest ar Barzhig. Deut omp a-benn d' ober un emglev gant Ti " Le Seuil " ha da baeañ nebeutoc'h a wirioù eget ne c'houlenne an ti-se da gentañ. Ar golo a zo treset gant Yann Vaze. Priz : 13 lur. War baper kaer : 20 lur. An tri levrig all a zo levrioù evit ar vugale enno skeudennoù e liv. Lakaet int bet e brezhoneg gant Kenan Kongar, Tudual Huon ha Riwal Huon. Priz al levrig a zo 8 lur. Setu amañ an titloù : 1. **Ar C'hazhig penn-skañv** ; 2. **Istor ar poñsin melen** ; 3. **An nadozig vurzhdus**.

Ul levr di nevez

Ul levr di nevez, dalc'het gant an Itron J. Richard, a zo o paouez digeriñ e Naoned, e kreisteiz ar stêr Liger, 42 Bd Joliot-Curie (pellg. 75 07 73). Gwerzhañ a raio levrioù Al Liamm. Gallout a rit ivez prenañ ho paper hag ho kelaouennoù eno.

Lizhiri

Digant R. an H. :

« Kas a ran deoc'h priz va c'houmanant-bloaz hag un tammig ouzhpenn evit skoazellañ al labour dreist a rit e-keñver hor yezh.

Ur rebechig a rin, daoust m'emañ un toullad eus ho kenlabourerien o vevañ en estrenvro ha rediet da zaremprediñ ar saozneg, re a droidigezhioù a zeu e niverennoù " Al Liamm ".

Danvez a-walc'h a zo e Breizh 'm eus aon evit sevel pennadoù tostoc'h ouzh hor buhez vroadel hep klask tramor an awen.

N' eo nemet ur rebechig ha n' it ket d' o digalonekaat rak plijet on memes tra gant pezh a skrivont en harlu ha moarvat un torfed e vefe o dispartiañ diouzh an tiegezh broadel pa n' eus nemet al liamm-se a ro dezho an nerzh da genderc'hel gant o uhelvenoz... »

Digant B. K. :

« En niverenn 174 ho peus embannet meur a lizher digant lennerien o c'houlenn ma vefe muioc'h a studiadennoù a bep seurt war " Al Liamm ", diwar goust al lennegezh eta : war o lerc'h e c'houlennec'h hag-eñ e vije lennerien evit difenn plas al lennegezh.

Me a zo a du evit ma chomfe ken bras ha m' eo (ha zoken brasoc'h mar deo posupl) plas al lennegezh en ho kazetenn. Un abeg eeun-kenañ am eus evit se : meur a gazetenn vrezhonek all a vez embannet bremañ war bep seurt tachenn. Evit pezh a sell al lennegezh avat n' hon eus nemet " Al Liamm " - gant " Barr-Heol " un tammig ha " Brud " evel just - a embann ingal-ingal barzhonegoù, kontadennoù, troidigezhioù lennegel ha romantoù a-wechoù ; ur c'holl bras e vije eta evit ar vrezhonegerien ma paouezfec'h d' henn ober.

N' on ket a-enep ho notennoù koulskoude rak mat eo kemenn d' ar vrezhonegerien - hag " Al Liamm " a zo unan eus lennetañ kazetennoù brezhonek - ar pep pouezusañ a zo o paouez erruout e Breizh. Evel se e vefe mat, d' am meno, reiñ da c'houzout d' an holl - e-barzh unan eus ho niverennoù da zont, e vo rannet Breizh adarre e-pad ehanoù-skol miz C'hwevrer 1977 :

- eus ar 6 betek an 13 e vo an ehanoù-se e Bro-Naoned ;
- eus an 13 betek an 20 avat er peurrest eus Breizh.

A-hend-all e hetan " Al Liamm " ober berzh (gant ma vo buan en tu all da 1 000 koumananter !) hag evit ho skoazellañ e kasan amañ va frofig dister. »

Digant Y. B. D. da heul ul lizher bet embannet war an niverenn diwezhañ :

« N' on ket a-du tamm ebet gant G. P. ha spi am eus e vo adembannet gant " Al Liamm " kalz oberennoù a-bouez diviet a-bell 'zo ha ne c'hellont bezañ kavet e neblec'h. Soñjal a ran e " Emgann Kergidu " da skouer pe oberennoù kentañ Roparz Hemon, Abeozen, Youenn Drezen, Jakez Riou, h.a.

Petra eo ul levr nevez a-benn ar fin ? Nevez eo evidon al levr a lennan evit ar wech kentañ ha ne c'hell bezañ a gultur breizhek hep anaoudegezh eus hon oberennoù gwellañ, ar pezh na viro ket da embann traoù nevez, evel just. Ar gudenn a zo e lec'h all.

221

Ma brenfe an dud ingal al levrioù a zeu er-maez ne vefe ket ken diaes he diskoulmañ ha ne vefe ket gwall bounneraet arc'hant-roll an tiegezhioù evit se. Un dlead broadel ez eo. »

Digant P. C., soudard :

« Amañ, e kêr Savannakhet el Laos, ez omp un ugent bennak a " C'hallaoued ", hag en hon touez ur person hag a zo Breizhad ; met n' hell ket komz brezhoneg mat ; warlene e oa ur beleg all hag a ouie brezhoneg mat a-walc'h ; a-wechoù e c'hoarveze deomp komz er yezh-mañ.

Ret eo din lavarout deoc'h un dra : ar brezhoneg a zo ur yezh talvoudus-bras, ha setu perak ; gouzout a rit n' eo deut al Laos da vezañ ur " stad-pobl " komunour, a-boan ur bloaz 'zo ; dav eo eta teurel evezh war ar pezh a skriver el lizhiri abalamour d' an ensellerezh ; me 'm eus kavet an tu da zisplegañ darvoudoù ar c'hontre-mañ hep bezañ ensellet va lizhiri : e brezhoneg e skrivan-me, d' ur mignon brezhoneger evel-don-me ! Evel-se me 'zo (kazi !...) sur na vezin ket argaset eus ar vro en abeg da vezañ skrivet traoù " enepreveulzius... " »

Digant H. C. :

« Ma brezhoneg n' eo ket gwall vat. Ganet on er bloaz 1931 en Angers, ur gêr vras ha n'eo ket pell eus al lec'h m' emañ o chom ennañ. Eno on chomet abaoe va ganedigezh. Spi am eus memestra da vont da echuiñ va buhez er vro.

" Al Liamm " n' eo ket atav aes din da lenn. Plijadur a rafe din ma vije skrivet e brezhoneg aesoc'h da gompren. Trugarez. Fidel e vin deoc'h evelato... »

Digant E. H. :

«... Daoust hag e c'hellot kas ho kelc'hgelaouenn din-me un nebeut amzer c'hoazh. Va gwreg a ra ar c'hontoù. Evit bremañ ne c'hell paeañ netra. Evidomp-ni, kouerien, ar vuhez a zo deut da vezañ diaesoc'h-diaesañ, grevus, muioc'h-mui. Ar sec'hded a zo deut da vezañ ur wall daol. Mar kendalc'h c'hoazh, e vo fin ar bed... Ur skouer danvezel : a-benn nebeut evit al loened ne vo mui netra da evañ. En ur welout an dañjer e prenomp foenn hep koll amzer. Ne c'hellomp ket kaout ar c'hementad goulennet, ha koulskoude hon eus goulennet ar muiañ posupl. N' eus ket mui e ti ar varc'hadourien. Kouerien, a bep tu, o deus aon, hag a c'hourc'hemenn bremañ. N' eus mui tra ebet. An deiz a hiziv hon eus dleadoù kreñv a-walc'h. Ha ret eo herzel gant prenañ levrioù, dastumadennoù, kelaouennoù. Gortozomp da welout.

Ha pet ha pet a gouerien valc'h o deus graet savadurioù a bep seurt ha n' hellint ket servijañ. Ha biken ne c'hellint dont a-benn d' o faeañ. Dizale, an douaroù a vo d'ar bankoù, da lavarout eo d' ar Stad. Evel-se e vo siwazh ! Hag ar gwez a zo bet diskaret, devet gant fioul. Hag an temz-amzer cheñchet. Daoust ha dont a raio Breizh da vezañ ur gouelec'h, ur Sahara. Un derou a vevomp !... »

223

Gerioù Bro-Rostren

Setu amañ ster un nebeut gerioù implijet e kontadenn J. Philippe « Boudoù ar c'houmanant lusennek ».

Pekenn ; un tamm pekenn : un tamm bihan.

Joskenn : amañ jod.

Siklezenn, lerbaj : ravoderezh.

Burtul : barged (labous-preizh).

Lardinenn : teod.

Pigos : beg al labous hag amañ pezh koad pounner.

Astrifer : den leun a ardoù, fentus met genaouek un tamm.

Uheladenn : uhelenn.

Karidenn : gwenodenn pe riboul-loened.

Chalp : kouch, trañch.

Lousnaj : loustoni.
Mezvegenniñ : mezevelliñ.
Duilhen (reiñ duilhen da) : reiñ tro, mont buan d'ober al labour.
Terlepat : termal.
Foustaj : plant a bep seurt (lann, drez, spern).
Sutellat : sunañ.
Raskognat : krignat gant trouz.
Sutell-lod : madig da sunañ, ur madig gant ul lost koad, bonboñ lost koad e Gwened. Lod a dalvez limigoù, madigoù e Bro-Rostren.
Krabouchoù ; war e grabouchoù : war e barlochoù, war e grabosoù.
Disklochet : distaget.
Toufouilheg : amañ un den tev-kenañ.
Sa : etrezek.

Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien

Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien a gemenn e vo dalc'het e staj eus an 18 d'an 31 a viz Gouere e ti-Kendalc'h, war zouar Sant-Visant war Oud (Mor Bihan), war-dro 10 km diouzh Redon.

Evel kustum e vo ar brezhoneg ar yezh nemeti implijet a-hed ar 15 devezh-se. Gant se ne vo degemeret nemet ar re o devo studiet a-walc'h ar yezh evit bezañ tizhet d' an nebeutañ 20vet kentel " Cours " R. Hemon, pe " Brezhoneg buan hag aes " gant P. Denez.

Evit an titouroù hag an enskrivadurioù, skrivañ, en ur lakaat ur golo-lizher timbret evit ar respont, da Anna ar Beg, 12 rue Astor, 29000 Quimper.

Pris an devezh (lojeiz, lein, merenn, adverenn ha koan) a vo 30,00 lur.

Lojeiz : Ar berzhidi a lojo e kambreier 2 pe 4 den. Un nebeut kambreier evit un den a zo ivez (goulennet e vo ur skodenn ouzhpenn).

Evit mont da Sant-Visant war Oud : Emañ Ti Kendalc'h 10 kilometrad eus Redon. Kirri a vo o c'hortoz e ti-gar Redon da 17 eur 30 d'ar sul 18.

224

Staj war ar maez gant Skol an Emsav

Skol an Emsav a ro deoc'h da c'houzout e vo aozet ur staj war ar maez e-pad pemzektez kentañ miz Gwengolo, e Plouared (Bro-Dreger).

Met petra eo ur staj war ar maez ? Disheñvel eo diouzh ar stajoù all rak mont a ra ar stajidi da labourat e ti ar venajerien ; unan e-barzh pep menaj. Eno e vez lojet ar stajiad, bevet ivez evel just. Ne goust ar staj mann ebet dezhañ (nemet an enskrivadur). Evel just, ne c'honz mann ebet kennebeut.

Hag abalamour da betra ec'h aozomp seurt stajoù ?

- Evit reiñ tu d' an nevez vrezhonegerien (barrek endeo war ar yezh) da gomz gant an dud. Rak da betra servij deskiñ ur yezh ma n' erruer ket a-benn da gompren an darn vrasañ eus an dud a ra ganti ?

- Met n' eo ket aozet seurt stajoù hepken evit deskiñ ar yezh. Graet eo ivez evit kaout darempredoù gant ar gouerien hag an tiad : komz gante diwar-benn o c'hudennoù, o emzalc'h e-keñver ar brezhoneg, hag all..., met ivez diwar-benn hon menozioù-ni, hon mennadoù. Evel-hen, ez eus tu da eskemm menozioù etrezomp, tud eus kêr dre vras, kefredourien, hag int, tud diwar ar maez, dizesk, herveze, met e gwirionez desket war draoù dianav dimp.

Warlene e oa bet ur seurt staj dija. Talvoudus-tre e oa bet. Hag abaoe, e vez darempredoù etre ar stajidi hag ar venajerien, ar pezh a zo pouezus-tre (gwelout un notenn war niv. 173 " Al Liamm " p. 474 : Ur staj war ar maez gant SAE).

Ma 'z oc'h dedennet, pe ma fell deoc'h kaout muioc'h a ziskleriadurioù, skrivit da :
Evelyne RAOUL, Kervoucher, 22420 Plouared.

Kistinid, Emglev Kristenion Breizh -

Genver 1976.

Warlene ez eus bet dalc'het daou gamp E.K.B. hag E.A.T., e Kistinid e miz Gouere hag e miz Gwengolo.

Hevlene e vo dalc'het adarre rummoù devezhioù-studi evit an emsaverion a fell dezho, war un dro, peurzeskiñ ar yezh ha studiañ ar c'hudennoù a sav er gevredigezh vreizhat a vremañ war dachenn ar politikerezh hag ar Feiz kristen.

Danvez an devezhioù-studi a vo, enta, diouzh un tu, ar politikerezh (Istor Breizh hag ar Broioù keltiek, Emsav Breizh hag ar Broioù keltiek) ha diouzh un tu all kudennoù ar Feiz hag an Iliz e Breizh hag er Broioù keltiek er c'hendegouezh a hiziv.

Plaenaet e vo, peurgent levrioù a seurt gant " Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh ", " Istor an Emsav ", " Istor Kembre ", " En donvor da Breizh " ha pennadoù a bep seurt deuet er-maez e-barzh kelaouennoù kozh ha nevez. Roet e vo da c'houzout d' an danvez perzhidi peseurt levrioù o devo da zegas pe a vo pourchaset dezho e-pad an devezhioù-studi.

225

Rumm devezhioù-studi :

- ar rumm devezhioù-studi kentañ a vo dalc'het : etre al lun 21 a viz Meurzh 1976 da ziv eur hag ar sadorn 27 a viz Meurzh da ziv eur ;

- an eil rumm a vo dalc'het : etre al lun 5 a viz Gouere 1976 da ziv eur hag ar sadorn 10 a viz Gouere da ziv eur ;

- an trede rumm a vo dalc'het : etre al lun 6 a viz Gwengolo 1976 da ziv eur hag ar sadorn 11 a viz Gwengolo da ziv eur ;

- ar pevare rumm a vo dalc'het : etre ar merc'her 29 a viz Kerzu da ziv eur hag ar gwener 31 a viz Kerzu da ziv eur.

Priz an devezh a zo pemzek lur. Goulennet e vo ouzhpenn digant ar berzhidi paeañ ur gwir enrollañ a 35 lur. Padal ne vo ket goulennet ar gwir enrollañ-se digant ar studierion.

Lojet e vo ar berzhidi en " Ti-parrez " e-barzh hunvaoù. Dav eo degas pallennoù pe seier-kousket.

Goude merenn, etre peder eur ha seizh eur hanter e vo graet pourmenadennoù dre ar vro a zo kaer dreist, treuzet gant ar Blavezh, ha war aod Gwened.

Buhezek mat eo brezhoneg Gwened er c'hornad.

Evit kaout diskleriadurioù, skrivañ da : Aotrou Person Kistinid, Ti-Person, 56310 Kistinid.

Gouel an Unvaniezh

Da geñver an devezh-se en em vodas en Naoned ur 5 000 bennak a dud, a leunias porzh ar c'hastell ha goude straedoù ar gêr betek ar prefeddi, o youc'hal sloganoù e brezhoneg koulz hag e galleg hag o tougen skritelloù ha bannieloù.

Berzh a reas en un doare an emvod rak talvoudus e voe er c'hastell koulz lodenn ar ganerien, en o zouez Alan Stivell, Jil Servat, Gweltaz, hag hini ar brezegennerien, pep tra o vezañ klevet fraez-meurbet. Komz a reas eus un tu paotred Kendalc'h, ar C.E.L.L.B., Ar Falz - Skol an Emsav hag a-hend-all dileuridi strolladoù an tu kleiz. Gi Karo ha Per Denez (taer hag awenet) a gomzas en o anv.

Muioc'h a vanifestidi a vije bet gallus bodañ, gant ma vije bet ledanoc'h ar bruderezh. A-hervez e oa bet tizhet dreist-holl ar strolladoù stag ouzh Kendalc'h ; ar c'hevredigezhioù all a chomas hep degemer, war a seblant, na lizhiri na skritelloù. A-hend-all e chomas Naonediz, dre vras, er-maez eus an afer, daoust ma voe graet degemer mat war ar straed d' ar vanifestidi gant an nebeut anezho a seblante bezañ er gêr an devezh-se. Keuz a c'heller kaout n' o deus ket meizet tud ar gêr vras pouez ar vodadeg, a zedennas tud holl rannvroioù Breizh, Bretoned divroet, dileuridi eus minorelezhioù all hag un toullad a gelaouennerien.

Skridoù

BRUZUN (Skol Nnn 62). - 7 danevellig embannet gant SKOL e doare ul levr godell. Anatañ perzh mat an danevelloù-se eo ez int bet skrivet gant ur vaouez, ur vamm, dezhi ur galon dener, faltazi ha mousfent. E-touez an istorioù-se, berr-tre hogen skeudennus, div zanevell dreist-holl a zo heverk : **Ar Veaj** hag **Adenkorfadur** hol laka da vont - hep poan en holl sterioù ar ger - eus ar bezoud d' an divezoud. Disheñvel-krenn met ken plijus-all, **Ar Baniel** a gont penaos e vez degaset trabas en holl vroioù ar bed gant jestr ur breizhad bihan aet da gampiñ war ar Menez Gwenn.

Dre e stumm moanik-tre, al levrig-se - moulet mat - a ro deomp ur skouer eus ar pezh a zo tu d' ober evit reiñ boued d' ar re a garfe lenn brezhoneg ur c'hard- eur bemdez e lec'h pe lec'h, ha kaout war un dro testennoù klok ha dedennus.

(Skol, niverenn 62, 9,00 lur. Yola Chariou, C.C.P. 2616-33 Roazhon.)

226

Embannadurioù ar gelaouenn " Imbourc'h "

E-pad an hañv e teuy er-maez un nebeut skridoù embannet evel stagadennoù d'ar gelaouenn **Imbourc'h**.

Bez' e vo, da gentañ un droidigezh eus **Antigone** ar skrivagner Sofokles, a zeuy er-maez gant un nebeut skeudennoù. Troet eo bet ar skrid-se diwar ar gresianeg. Bez' ez eo an tem pennañ anezhañ ar stourm etre ar galloud hag al lorc'h stadel hag ar goustiañs hiniennel oc'h en em harpañ war al lezennoù doueel.

An eil stagadenn a vo **An Diskoulm diwezhel**, ur vojenn e stumm ur reuzc'hoari savet gant Youenn Olier. Un doare rakc'hoari d' ar romant **Enez ar Vertuz** bet embannet dek vloaz zo e vo an oberenn-mañ.

E derou an diskar-amzer e teuy er-maez ivez un droidigezh eus an **Divina Commedia, lodenn an Ifern**, lakaet e brezhoneg gant Per Bourdelles.

Priz ar stagadennoù-mañ a vo : 10, 20 ha 30 lur. Da gas da : Y. Ollivier, c.c.p. 1 534 25 Rennes.

Priz ar c'houmanant ordinal d'ar gelaouenn : 35 lur.

Pezhioù-c'hoari

Tri fezh-c'hoari a zo bet c'hoariet nevez 'zo evit ar wech kentañ dirak tud ar vro. Daou strollad c'hoarierien, hini ar Vro Bagan bet savet gant tud yaouank diwar ar maez hag hini Skol-Veur Brest savet gant studierien.

Ar pezh c'hoariet gant ar studierien a dremen en ur feurm hag anvet eo « Un tamm douar divalo ». Strollad Skol-Veur Brest renet gant Remi Derrien en deus dibabet un hent diaes er bloaz-mañ en ur sevel ur pezh-c'hoari int o-unan. War un danvez boutin a zo bet hini meur a bezh patronaj e derou ar c'hantved ez int deut a-benn d'ober un dra dereat. Displeg a ra diaesterioù a sav etre ur vaouez skolaerez eus he micher hag a fell dezhi mont da vevañ e kêr hag ur c'houer sindikalour o tifenn e damm douar. Hirderioù ha randonnerezh a zo a-wechoù. Eürusamant ez eus fent hag er fin pa weler daou boliser o kas ganto ar c'houer a zo fromus. Ar pezh a zeu da vezañ politikel ha kement-se a ro dezhi he dalvoudegezh hag e tisoñjer ar fazioù evit gwelout ar stourm dizingal etre ar galloud kreiz hag ar c'houer e-unan, hep sikour e wreg zoken.

227

Strollad ar Vro Bagan en deus graet ivez un dibab kalonek en ur c'hoari " **Meurlarjez** " gant Roparz Hemon. Ur giriegezh bras e oa lakaat war al leurenn ur benn-oberenn vodern ken e-keñver danvez ken e-keñver c'hoari. E lodennoù eus ar pezh e toug ar c'hoarierien maskloù kaer oc'h aroueziañ an diaester o deus an dud d' en em gompren ha da guzhat hep gouzout dezho o zemp-spered gwirion. Gouel Meurlarjez a ro an tu d' an dud d' en em zieubiñ. Amañ avat ar pezh a zo nevez eo ne zeu an dud d' en em zispakañ nemet goude m' o deus lammet o maskloù. Ar maskloù a zo arouez ar vuhez pemdeziek hag a lazh pep faltazi. Ar pezh a zo kaer, gant gouleier ha sonerezh hag a glot mat ha meur a c'hoarier a zo danvez enno.

An eil pezh a zo anvet " **Dogan** " diwar anv pezh Jakez Riou. Hogen evel ma n' eus " Cantatrice Chauve " ebet e pezh Ionesco n' eus dogan ebet amañ kennebeut. Diwar vennoz Jakez Riou, un darzhadenn, ez eo bet adkempennet ar pezh o reiñ tro da c'hoarierien hag a zo brezhonegerien ampart da ijinañ ha da c'hoari.

Tarzhadenn Ti Vougeret, donedigezh " Diskarg c'histr trenk " e Brest, « ar petrolie chaviret e Ouessan », ar soudarded gall o treuziñ al leurenn en ur lavarout e galleg « l'armée offre des débouchés » (hag int da zistouvañ div voutailhad sistr !) o deus lakaet an dud da c'hoarzhin leizh o gwalc'h kement hag an abadenn radio pe doare-c'hoari an dud. Kalz a fent ha flemm war un dro. Arvestourien ar pezhioù e brezhoneg a vo skoet sur-mat gant an niver a soudarded pe a archerien a vez gwelet war al leurennoù er bloaz-mañ. Se a ziskouez e chom ar pezhioù-c'hoari tost eus buhez ar Vretoned yaouank ha darvoudoù ar vro. Hor stourm a gendalc'h war al leurennoù ha kement-se a zo mat.

Embannadurioù

Hor Yezh niverenn 105. - Kavout a reer en niverenn-mañ ur studiadenenn hir diwar-benn ster hag implij ar ger « pelloc'h » gant T. G. Trevidig, ur roll gerioù dastumet e Landeda gant Loeiz Bihannic ha dihelloù (kanaouennoù, gwerzioù ha skridoù kozh all). Koumanant 30 lur peder niverenn - c.c.p. P. Denis 1499 51

Rennes.

War ar gelaouenn **Celtica** ez eus bet embannet ur studiadenn e saozneg gant Roparz Hemon dindan an talbenn " Diminutive suffixes in Breton ".

Deut eo er-maez Rann 25 **Geriadur Istorel ar Brezhoneg** gant Roparz Hemon (Orglez-Penndommet). Embannet gant " Preder ", kaier 189-190. Koumanant da 6 rann eus ar Geriadur : 75 lur. - Preder, c.c.p. 16 093 13 Paris.

Barzhas Yod Kerc'h. Barzhonegoù a bep seurt, re vat en o zouez he ha re falloc'h. Gwerzennoù skeudennus-tre a gaver evel

Me zo 'vont da ziskenn e daoulagad an noz

pe

A-benn nebeut e vo ret mont da glask huñvreoù an netra

War roudennoù ar glizh

pe c'hoazh

Lasoù e votoù

Lasoù e soñjoù

Ne oar ket o diskoulmañ.

Ar c'haier 46 pajenn ennañ a zo skeudennet en un doare modern ha kaer meur a wech.

Stagadenn da " Yod Kerc'h " niv. 9. Komz hag Arz Breizhek, B. P. 1305 Rennes-Villejean. - 6 niverenn evit 10 lur.

228

Ar gelaouenn **Imbourc'h** a zeu er-maez bep miz. Bet hon eus eta an niverennoù 75 ha 76. Enno e kaver dreist-holl pennadoù gant Youenn Olier ha Jil Erwan. Pledañ a reont gant ar brederouriezh, ar politikerezh hag ar relijion. En niverenn diwezhañ e kaver ur pennad diwar-benn U.D.B., ur pennad diwar-benn steuzidigezh ar Feiz Katolik e Kembre ha notennoù gant Jil Erwan diwar-benn e bennad " En donvor da Vreizh ". Lod eus ar skridoù a zo diaes da lenn en abeg d' ar menoz hag ivez d' ar gerioù nevez a-vil-vern a zo bet savet gant o oberourien.

Koumanant-bloaz : 35 lur. Y. Ollivier, c.c.p. 1 534 25 Roazhon.

Kaset zo bet deomp ivez kazetennoù divyezhek evel **Breizh, Skol Vreizh, Bleun-Brug** ha levrioù e galleg pe e saozneg. Ar gelaouenn **Pluriel** e kaver enni pennadoù dedennus war gudenn ar broioù bihan. Intercontinental Press (New York) a ro k^{le}ier eus ar bed a-bezh. Daou levr e galleg hon eus bet digant Nature et Bretagne : " Prêtres de demain " ha " Le Breton langue celtique " gant Yann Brekilien.

Gouel ar Brezhoneg e Pont-'n-Abad

Er bloaz-mañ e oa Gouel ar Brezhoneg e Bro-Vigoudenn d' ar 4, 5, 6, 7 a viz Mezheven.

An danvez kinniget d' an dud a oa fonnus. D' ar gwener da noz e voe ur veilhadeg e Ploneour, kaset e oa an traoù en-dro gant A. Peron hag ar Meur. Ur bern koñchennoù saourus-kenañ a voe dibunet ha kaniri a voe ivez gant Andrea ar Gouil.

D' ar sadorn e voe dalc'het ur forum politikel ha ne voe ket ken dedennus hag hini Kastell er bloaz a-raok. Diouzh an noz e voe diskouezet daou bezh-c'hoari gant strollad Brest : " Ki Luks, un nozvezhiad gant re Bariz " hag " Un tamm douar divalo ".

D' ar sul e voe un diskouezadeg hag ur c'hermes. Kalzig a dud a oa deut, siwazh ne oa den ebet evit kas an traoù en-dro war al leurenn na tamm kaniri ebet.

Diouzh an noz e voe daou bezh-c'hoari all gant Strollad ar Vro Bagan : " Meurlarjez " gant Roparz Hemon hag ur pezh all diwar " Dogan " Jakez Riou. A-raok ar pezhioù-mañ e oa bet kanerien war al leurenn : Glenmor, Manu Lanhuel ha Gweltaz.

Ur fest-noz a-zoare a voe d' ar sul da noz hag un fest-deiz d' al lun en endervezh gant ar Sonerien Du.

229

Diskleriadur ar Strolladoù Sevenadurel Breizhek

Ur bern pennadoù, ur bern bodadegoù, divizadegoù, gouelioù, manifestadegoù hon eus gallet gwelout er bloaz-all, o tiskouez penaos e vez o kemer eo lañs muioc'h-mui ar stourm evit an dasorc'hidigezh... Alies a-walc'h da skouer, e vez graet meneg amañ-ahont eus an diskleriadur degemeret e Brest d' an 18 a viz Gouhere gant dileuridi ar strolladoù sevenadurel bodet eno. E gwirionez n' eo ket anavezet gant an boll, ha kalzik a dud o deus goulennet diganeomp embann an destenn vrezhonek. Reiñ a reomp amañ tost-da-vat an hini a zo bet skignet gant Emgleo Breiz. Forzh petra a c'heller soñjal evel just diwar-benn goulennoù ar seurt-se, hogen ret eo derc'hel kont eus ar c'henlabour pouezus a weler bremañ, o liammañ emsavididi disheñvel a-walc'h a-wechoù o abegoù stourm, ur c'henlabour na oa nemet un huñvre gaer n' eus ket c'hoazh gwall bell 'zo...

« Setu bloavezhioù ha bloavezhioù m' emañ ar Vretoned, forzh a be gostezenn e vent, o c'houlenn digant ar gouarnamant gall ma vo dalc'het kont eus ar gwir o deus da lakaat o yezh hag o sevenadur da dalvout e-barzh an Deskadurezh, ar C'helaouiñ hag ar vuhez foran, kement hag eus ar gwir da ober o-unan-penn war mererezh o aferioù war an tachennoù-se, pe da nebeutañ da gaout o lod ennañ.

Gant se, ne c'houlennont digant galloud Pariz nemet heuliañ menozioù-stur ha doareoù-ober an darn vuiañ eus broioù all Europa ha sentiñ ouzh reolennoù un toullad Emglevadegoù ha Diskleriadurioù etrevroadel bet sinet gantañ.

Ar galvadennoù, goulennadegoù, klemmoù ha manifestadegoù a bep seurt, ar mennadoù-hetiñ a-berzh an « asambleoù » dilennet, an danvez-lezennoù renevezet dibaouez gant ar gannaded, ez eus bet bernioù anezho e-sell kaout evit ar brezhoneg ar plas reizh a zere outañ e-barzh ar skolioù hag an obererezhioù sevenadurel, war ar skingomz hag ar skinwel, e kement degouezh 'zo ar vuhez ofisiel.

Ouzh pedennoù darn 'zo, koulz hag ouzh klemmoù darn all, ouzh ar c'hant bennak a « vennadoù » votet gant ar C'huzulioù-departamant koulz hag ouzh difreioù ar gannaded, ar pennadurezhioù aheurtet o deus dalc'het, betek nevez 'zo gant chom mut pe ober fae, re gant komz eus « studiadennoù », eus « diouer a arc'hant hag a reoliadur »... E-barzh ar Parlamant, ar skridoù-dezrevell o skeiñ a-du gant yezhoù « minorezel » ar Vro-C'hwec'hkorn a veze harzet outo gant ar gouarnamant da zont dirak an « asambleoù » ; an darn vuiañ eus ar c'hinnigoù ne vezent ket studiet zoken. Nag a strivoù ha n' eus deut diwarno nemet barradoù kerse lerc'h-war-lerc'h !...

En ur ober ugent vloaz, n' eo ket degouezhet nemet teir gwech - e 1951, e 1970, e 1971 - m' en deus ranket ministrerezh an Deskadurezh plegañ da reiñ, evel ma roer an aluzon, un nebeut reolennoù gwall strizh o tennañ da gelenn ar yezhoù « lec'hel » pe « rannvroel », kuit diouzhtu goude, da enkañ c'hoazh tachenn implij an urzhioù nevez. Ken n' o deus gallet chom en o sav tra ken nemet ur rummad bennak a zegadoù kentelioù brezhoneg, tra ma 'z eus miliadoù ha miliadoù a Vretoned yaouank o virviñ gant ar c'hoant studiañ yezh o bro.

230

Heñvel eo war dachenn ar skingomz hag ar skinwel, pa n' eus eno evit

c'hoazh nemet un niver bihan a skingasadennoù en hor yezh, dezho gwall nebeut a arc'hant hag a dud evit o c'has endro. Hag a-hend-all e chom difennet ober gant ar brezhoneg er vuhez foran (melestradurioù, lezvarnioù, postoù, panneloù-lec'h, lidoù ofisiel, hag all).

Hag evit an dister-tre a « Adstumm » ar Rannvroioù bet lakaet en hent abaoe 1974, ne ro galloud ebet, gwir-evezhiañ ebet evit pezh a sell danvez ha mererezh an Deskadurezh hag ar mass media d' ur Vreizh bet diframmet diganti ar bempvedenn eus he douaroù.

Ur seurt stad d' an traoù, noazhus-kenañ evit araokadur sevenadurel ha sosial ur boblad a-bezh, a zo taolennet enni an arsailh disehan a-enep ar bersonelezh vreizhek hag ar riskl marvus o pouezañ war binvidigezhioù dibar. Bez' ez eus eno ouzhpenn-se, un taol-gwallañ re anat d' ar gouestioù sinet gant Bro-C'hall war an dachenn etrevroadel a-zivout an doujañs ouzh Gwirioù an Den hag ar minorelezhioù. An niver bihan a reolennoù, un ugent vloaz bennak etrezo, bet ranket d' ar gouarnamant gall aotren, - hag a gred ar C'hentañ ministr fougasiñ ganto e doare un alibi, - n' hellont ket kuzhat e talc'h d' ober e reuz ar brezel ouzh hor yezh, o klask he mougañ, ur brezel kaset war-raok a-wel d' an holl e-doug dekvloaziadoù hag a c'hoari, hiziv an deiz, en ur c'hiz korvigellet ha masklet, ken didruez ha kent, avat.

Doare zo bet, ar mizioù diwezhañ-mañ, da heul komzoù 'zo digant ministr an Deskadurezh dirak Senad Pariz, e oa ur chañs bennak e teufe an traoù da dreiñ marteze en ur stumm disheñvel... Betek-henn avat, hini ebet eus ar reolennoù ha kemennadurezhioù meneget gant an Ao. Haby n' eo deuter-maez hag a c'hellfe talvezout adalek digor ar skolioù, e miz Gwengolo ! N' eo ket ar frazenn verr hag amsterek diwar-benn ar yezhoù ha sevenadurioù « rannvro », bet silet e-barzh lezenn an Deskadurezh e Bro-C'hall, hag a zegaso fiziañs ez eus keal gant ar gouarnamant da cheñch war ar poent-se. An dro-lavar « a c'hell bezañ kelennet » bet degemeret evit echuiñ a roio an tu da dud ar ministrerezh da chom hep mont pelloc'h eget bremañ, tra ma 'z eo ret bezañ gwarantet e vo kemmet an traoù da vat.

Setu ni erru en tu all da hanter-C'houhere hag emaomp war-varr e tigor ar skolioù a-benn un nebeut sizhunioù ac'han hep ma ve ket kemennet an nevezadennoù goulennet dre-holl e Breizh evit bremañ-diouzhtu. Ur bloavezhriad all a vo kollet adarre evit kelenn ar brezhoneg, evel warlene... hag e c'hellor stagañ en-dro da glakenniñ a-zivout « enklaskoù a-raok pep tra », « taolioù-esaeañ » da embreger, « mennadoù-studi », hag all...

Hag a-hend-all, n' eus anv ebet na da wellaat na da astenn ar c'hasadennoù brezhonek war ar skingomz hag ar skinwel, na da implij hor yezh er vuhez foran, hag ez eus bet klevet ar C'hentañ ministr o nac'h e ve kresket ez-wirion galloud ar « rannvroioù » ha demokratelet al lezennoù ouzh o ren...

Penaos eta neuze ne savfe ket brouez ha kounnar e-touez ar gelennerien, ar re yaouank hag an holl Vretoned dirak c'hoari pennoù uhel Pariz ?

N' eus den e Breizh ha n' en defe e walc'h gant komzoù faos o tont da heul an diouer a respont hag an dismegañs a oa kentaou !

231

Trawalc'h a enklaskoù diziwezh ha kaset a-dreuz, evel hini an Ao. Bruch ! Trawalc'h a skridoù-dezrevell leun a fazioù anat-splann evel hini ar prefed Phillip ! Trawalc'h a c'hevier livet kaer, evel e komzoù an Ao. Chirac o reiñ da grediñ da gelaouennerien estren eo bet embannet abaoe dek vloaz, gant ar Stad, ar « reolennoù ret » evit « ar yezhoù lec'hel » ! Trawalc'h a bromesaoù evel re an Ao. Haby ha n'eur ket chalet evit o seveniñ.

Touellet m'int bet dek he dek gwech, ar bloavezhioù diwezhañ-mañ, evit pezh a denn da staliañ o bro ha da gas o ekonomiezh war-raok, ar Vretoned ne daolont ket mui evezh ouzh promesaoù ne zeu netra d' o heul ! N'eo ket ankounac'haet ganto taol ganas al lezenn-stur evit Breizh !

Evit kement a sell ouzh digeriñ hor skolioù da yezh ha sevenadur hor bro, da ledanaat ichou ar brezhoneg war ar media, da implij anezhañ er vuhez foran, ni, dileuridi an emsavioù sevenadurel breizhek, hag o tisplegañ menoz ar pep brasañ eus hor c'henvroiz, graet eo ganeomp hor soñj ne vo ket gortozet pelloc'h !

Douget e vez bri, en estrenvro, war gwirioù hor 600 000 a gendirvi a Vreizh-Veur, kembraegerien anezho, ar 400 000 a Friziz an Izelvroioù, an 50 000 a Romanched a vro-Suis, an 30 000 Sorab eus an DDR, an 20 000 Lapon a vro-Norge : fellout a ra deomp e ve sellet gant kemend-all a aked da nebeutañ, gant renerien vro-C'hall, ouzh gwirioù ar milion a vrezhonegerien ma 'z omp du-mañ !...

Ni a c'houlenn groñs ma ve savet ha lakaet da dalvout ac'hann da vloaz ul lezenn, ur statud modern ha klok o termeniñ al lec'h da reiñ d' hor yezh ha d'hor sevenadur war dachenoù an Deskadurezh, ar C'helaouiñ hag ar vuhez ofisiel.

Da c'hortoz ma vo peursavet hag implijet ur seurt lezenn, e fell deomp e ve divizet hep dale ken an toullad reolennoù a vo kavet pelloc'h, ha lakaet da dalvout dindan daleoù resis.

Ma ne vez ket divizet e koulz ar c'hemmoù goulennet, neuze e roio lañs hon emsavioù d' un stourmad nevez, ken start ha ma vo ret, o reiñ brud dre-holl da emzalc'h a-ziwar-lerc'h ar Stad c'hall o klask, hiziv kenkoulz ha dec'h, mougañ pinvidigezhioù...

Ur c'hlemm a vo diskleriet dirak Komision Europa Gwirioù an Den, o tamall d' ar gouarnamant gall mont a-enep reoliadur Emglevadeg Europa Gwirioù an Den hag Frankizoù a-ziavez. Savet e vo ur Gevredigezh etrevroadel da harpañ gwirioù Pobl Vreizh ha pedet e vo dileuridi eus ar broioù diavaez da zont amañ da welout ha reizh eo hon tamalloù.

An Emsavioù sevenadurel o sinañ an Diskleriadur-mañ a zo mennet da stourm ken na paouezo ar gouarnamant gant e bolitikerezh enepbreizhek, ken na sento ouzh lezennoù doujet dre-holl a-hend-all ha ken na vo kroget da vat da zic'haouiñ Pobl Vreizh evit an droug divent graet dezhi gant e waskerezh ouzh he yezh hag he sevenadur. »

E Brest, d'an 18 a viz Gouhere 1975.

Emgleo Breiz, Kuzul Ar Brezhoneg, Skol An Emsav, Ar Falz, Bleun-Brug.

Ha da heul e teu roll ar goulennoù retañ hag a c'hellfe bezañ bet sevenet aes-kenañ pa oa krog ar skol, e miz Gwengolo...

232

Ret eo bet gortoz niverenn an 11 a viz Kerzu 1975 Kannadig Ministrdi an Deskadurezh (B.O.M.E. niv. 45, p. 3778) da c'houzout e vefe posupl, da heul ur c'helc'hlizher niv. 75-426 (deziadet : 21 a viz Du 1975), ober dindan giriegezh ar rektor stajoù « sevenadur » ha stajoù studi war ar yezh... adalek kreiz miz Gwengolo 1975 !... ha se evit kelennerien an eil derez hepken. Bruzun gwall zister e-keñver ar pemp goulenn, uvel a-walc'h o-unan, bet adkemeret gant pennoù Kuzul Breizh (pe Kuzul « rannvro ») e diwez miz Gwengolo.

Bezeta vezo, gouvezet hon eus e vefe aozet daou staj a dri devezh pep hini. Unan war ar sevenadur (?) d'an 28, 29 ha 30 a viz Ebrel e CRDP Roazhon, evit 60 kelenner. Egile kement a stajidi ennañ, war ar brezhoneg, a vo dindan renerezh Skol-vistri Gemper e penn kentañ miz Mae. N' eus, anat eo, nemet nebeut a dra da c'hortoz digant an traoù-se savet prim-ha-prim, hep tamm studiadeg sirius, hep reiñ dezho ur brud dereat, ha graet dreist-holl, war a seblant, evit pourchas ur respont d' ober d' ar goulennoù, ur seurt « alibi » eta.

Petra soñjal ? pa ne rafe ur boycott nemet kennerzhañ tu ar gouarnamant, ret

heuliañ a-dost ar pezh a vez graet, daoust pegen pilpouz ha disonest e c'hell bezañ an doareoù, hogen war memes tro ha da gentañ-holl derc'hel da labourat start evit pinvidikaat gwir sevenadur Breizh ha strewiñ ur spered birvidik a stourm. E gwirionez ne raio biken ar rannvroelerien ha tud ar galloud gall nemet « kaoc'hkezeka » war-lerc'h karr an emsav, lec'h ez eus ur gwir youl da adsevel ar vro.

E ti Moulerezh ar Baol - Bali ar Marichal-de-Lattre-de-Tassigny
Diskleriet hervez lezenn - trede trimiziad 1976
Niverenn er voulerez : 38816 - Ar merour : P. ar BIHAN

EMBANNADURIOU AL LIAMM

FRANSEZ KERVELLA
YEZHADUR BRAS AR BREZHONEG
503 pajenn
Eil mouladur reizhet
Priz : 50,00 lur

Alexandr SOLJENITSYN
Ti Vatriona
lakaet e brezhoneg gant Ernest ar Barzhig
War baper boutin 13 lur
War baper kaer 20 lur

Tri levr evit ar vugale :

1. AR C'HAZHIG PENN-SKAÑV
2. ISTAR AR PONSIN MELEN
3. AN NADOZIG VURZHUDUS

PRIZ : 8 lur pep levr

Mlle J. QUEILLÉ, 47, rue Notre-Dame, Guingamp
- C.C.P. 1136 82 Rennes -

AL LIAMM 177

TAOLENN

Selaou, breur gwenn gant ATAHUALPA YUPANQUI (tr. R. Kervella)	235
Imbourc'h gant PER DIOLIER	236
Marvoret gant GWION KLOAREG	238
Ar bevig gant ALAN BOTREL	240
Trokadenn gant REN' SKEREN	242
Burtul, ar suner-gwad gant JEF PHILIPPE	243
Sevenadur gant JORAN AR GRUG	248
Eñvorennoù gant YEUN AR GOW	253
Ar banniel gant YANN BOUESSEL DU BOURG (brezhoneg gant E. ar Barzhig)	264
Istor Breizh gant LA BORDERIE (tr. Roparz Hemon)	271
C'hoariva brezhonek gant GOULC'HEN KERVELLA	280
Al Levrioù	
(Breuriezh-Vreizh 1790, gant Erwan ar Menga) gant ROPARZ HEMON	286
Notennoù	287

Skeudennoù :

- Strollad ar Vro Bagan o c'hoari " Meurlarjez " Roparz Hemon, gant Gwenael HUON.
- Dracula,
- teir skeudenn war vrezel 1914-1918,
- Myrddhin o seniñ telenn gant aotre hegarat " Ouestfrance ".

FR ISSN 0024-1733

Selaou, breur gwenn

Me eo ar gordillera, ar stêr hag an huanaco
 Me eo an douar hag ar savanenn alaouret
 Ar mais burzhudus, an heiz glas don.

Ha gwelet ac'h eus kreñvoc'h tra
 Eget va esper divent ?
 Anavezout a rez brasoc'h tra
 Eget va dislavarded ?

Me,
 N' am eus salvet eus an deñvalijenn
 Nemet un dornad bugale
 Ganto liv ar beurbadelezh, an arem hag ar maen
 Dit-te eo e fizian anezho, breur gwenn.
 Sikour anezho !
 Adsav anezho !
 An douar 'zo bras ec'hon
 Evel glac'har un Indian.

troidigezh gant Rivanon KERVELLA

Imbourc'h

Klasket 'm eus aour me ivez,
 met mein hepken am eus kavet,
 kargoù anezho 'm eus douget
 devezhioù-pad 'vel an azenez.

C'hoant kanañ 'm eus bet me ivez,
 sonerezh a vennen aozañ,
 war va c'hitar ur wech ar bloa
 'vez ganin son ar jenoflez.

Kelenner ' vijen bet me ivez
 'vit klask giz nevez da zeskiñ,
 diskibien 'm boe ur wech pe ziv
 ken gouest ha me war an danvez.

Pedet am bije me ivez
 e peoc'h teñval an ilizoù,
 'm eus ket gouzañvet seurt skolioù
 o vitonañ galleg kompez.

Redet am bije me ivez
 war wenodenn blat va buhez,
 siwazh pistig ' oa ganin-me
 divhar ponner 'vel an annev.

Klasket 'm eus er broioù estren

pezh a oa dres dirak va dor,
chomet on dianav d' ar goskor
p' on bet distro skuizh 'vel ul loen.

237

Bleunienn disterik ar menez
n' am eus ket klasket liestro,
padal he frond blin ha tanav
n' on ket 'vit e zisoñjal ken.

Klasket 'm eus aour me ivez
hag a-wechoù roz 'm eus kavet.

Sant-Servan, 23.4.73

238

Gwion KLOAREG

MARVORET

Ur sul heñvel ouzh ar re all
e-kreiz ar Mor-Bras Indian.

Disul d'an abardaez

Leun-chouk stal ar Sinaad : rom ar re baour,
moc'hach krign-bouzelloù.
Bugale, koeñvet o c'hof, a lonk plusk orañjez taolet war an teil :
netra ken da zebriñ...
Mezv an tad, jabadao bremaik en ti.

Jestroù bourc'hizien ar Gêr-Vras
Lorc'hus
Emc'hloar c'hlaourennet
O staliañ reor ouzh reor breinadurezh o c'hig

Ur c'harr flastret en draonienn
Ha strinket war ar bleunioù
Gwad birvidik ar paotr nerzhus a boke c'hwek
Nebeut 'zo
Da vronn noazh ar vorianez

N'out ket deuet hiziv
Ha me da rambreal, traezh du em daouarn
Eurier an arvar

« Le vié gra moune l'est mort » : marv eo an tad-kozh
Brevet gant ar vuhez
Skuizh-divi
'Vel ar pesketaer o sachañ war e roued en derou-noz

239

Doueez ar riblenn
N'on ket evit ankounac'haat flouradenn he mouezh
Kan 'ta Mari n'ouzon ket piv
Da ganaouenn, avat, ne blij ket din

Radio an amezeg
Ar brezel du-hont... Evit piv ? Evit petra ?

Ur soudard o vervel
Goustadik
E fank ar rizeg
Mammig, mammig
O pegen kaer eo mervel evit ar sevenadur, na petra 'ta !
Soudarded ar C'hrist, 'lavare Spellmann kozh
Ro peoc'h 'ta, glabouser mintret
Ha selaou, e fank ar rizeg
Mammig, mammig

Che ! Petra 'n diaoul a ravodan evel-se ?

A-barzh nemeur
Sioulder an deñvalijenn 'brenno dorioù an enez
Kreskiñ a ra ivez mordoenn va spered
Dre ma kresk an amc'houlou war uheldirioù
Tévelave

A ! Deuomp neuze
Un devezh evit netra

Miz Gouere 1972.
Etang-Salé Les Bains,
Enezenn La Réunion.

Ar bevig

*

Blaz ar gwad tomm a oa gant ar vantell ruz a astenne an heol war gornog ar gompezenn. Freskted ar souezh a oa steuziet abaoe pell er bed-se ha marv peurbadel an deiz en doa kollet nerzh ar gened evit gounit kreñvder goular ar boaz.

E penn ar gompezenn, a-zehou da gelc'h leun an heol, e oa un nebeut savadurioù uhel ha strizh, gwenn-kann, hep toull prenestr ebet en o mogerioù. En em c'hronnañ a raent e pallenn du an noz o trec'hiñ war an tangwall, lorc'hus ha digenvezet. Etrezo o doa en em silet un nebeut tiez hirgarrezek ha plat, gwennerc'h ivez. Ha netra ken, nemet geot glas ar gompezenn a yae war zuaat, melezeour an oabl.

Trouz ebet ne zassone war ar bed, roud ebet a vuhez, evel ma vijent diwanet diouzh an douar, gant o buhez dezho, o abeg dezho o-unan.

Hogen, war an hent nemetañ a gase d' ar gêr, ur paotr a gerzhe, dinec'h-kaer.

Ur mousc'hoarzh ha daoulagad o luc'hañ a roe un tamm buhez d' e zremm. Kigenn ebet ne fiñve koulskoude, en-dro d'e vousc'hoarzh faos, d' e zaoulagad a vije bet lavaret e oant gouleier sanket en ur penn koar.

Kenderc'hel dalc'hmat gant e hent a rae, e zorn dehou don en e c'hodell, an hini all o kempouezañ e gammedoù. Tostaat a rae d' ar gêr sioul, ken peoc'hus e bannoù toc'hor al lagad meur o vont da glozañ. A-benn ur pennadig, e gerzh a c'horrekaas, e zaoudroad o 'n em virout a ober trouz ebet ken, hag e chomas a-sav.

Bep ma 'z ae ar munutennoù e-biou, div steredenn e zaoulagad a yae war vihanaat a-feur ma 'z ae an heol diwar-wel, o lezel war e lerc'h ul lostoù-kazh bennak, ruz ha poultrennek.

E zorn a dennas diouzh e c'hodell neuze, o kas anezhañ betek e vuzelloù, goustadig, ha pokat dezhañ en ur lavarout : « Kae, bevig ! » dres d' ar mare ma veuze an heol hag adskedoù e zaoulagad.

241

D' an ampoent e tibradas diouzh dorn ar paotr, herrek, ur skeud tec'hus a droas uhel en aer sin, hag a nijas a-denn-askell trema 'r gêr, ha seul vui ma tostae an evnig d' ar savadurioù, seul vui e horjelle ar mogerioù ramzel, e-keit ha ma kroze ha ma krene penn-da-benn ar blaenenn skrij braouac'hus ur bed o vont da goll a rae d' an noz don brallañ betek an didermen.

Kreñvoc'h-kreñvañ e horjelle ar mogerioù o frailhañ, hag o skarroù a rae dezho evel c'hoarzhadennoù tud foll en o souflam. Tarzhañ a rejont gant nerzh o follentez, ha d' o goleiñ e tiwanas, didrouz, ur goumoulenn uloc'h o plavañ, rusaet gant goulou an dremmwel.

Ha da c'houde e teuas ar peoc'h.

Ne oa tra ebet ken war ar gompezenn, na ti na den, nemet ur bevig o richanañ, diwelus en noz o vougañ skleurioù diwezhañ an deiz.

* BEVIG a zo golvan, filip, e gwenedeg.

Trokadenn

- Trugarez, Aotrou Rener evit ho pleunioù.

- N' eo nemet balan, dimezell, da lakaat war ho purev. Kutuilhet em eus anezhe en-dro d' an ti kozh am eus prenet e Breizh ; brav ar vro ur souezh ! Nemet anv ar gêriadenn diaes da zistagañ : Kervoualc'h...

- Pelec'h 'oa da benn, paotr kaezh, evit leuskel da viz-yod gant ar waskell ?

Aotrou Doktor, d' ar c'houlz-mañ eus ar bloaz, evel kustum, 'mañ ket va fenn gant va labour, sorc'hennet on gant soñj ar balan a greske gwechall tost da di va zud, e Kervoualc'h, Breizh.

DEIZIADUR GODELL 1977

An dek 10,00 lur

Ne vez ket gwerzhet a-unanoù

Distaol 1/3 evit un niver bras

Kasit ho chekenn gant ho koulenn da R. HUON

2, Venelle Poulbriquen, Brest - C.C.P. Rennes 1629-14

Burtul, ar suner-gwad

Sk. tennet eus ar film " DRACULA, priñs an deñvalijenn "

- « Suner-gwad, a laran-me i'é ! Ya ! Suner laezh ribod ! Kouskadenn ! Marvadenn ! Ha daoust hag-eñ e chomi da stlejal da beurbadelezh, souchet en da liñsel vreïn ?... pa 'z eus bronnoù leun a laezh fresk o c'hortoz da zent d' o zoullañ ! Da betra 'talv dit bezañ eus hor gouenn lorc'hus, hag enoret a-walc'h gant Satan an Tad betek chom bev goude mervel, ma n' ez ket d' az tro da sunañ o buhez gant an dud birvidik ? Foeltr an Diaoul Meur ! »

244

Morlk Marc'hfhlopzin, Mestr ar Bed Kuzh, ne oa ket skilfer (1) da c'hoarzhin na da derlepal. Dimeus e ziweuz morlivet e vere c'hoazh gwad fresk un inosant, hag e vreugeude gant ar blijadur, leun e wazhiennoù a vuhez, hag e zivougenn kazi kollet ganto liv ar paper. Fae oa gantañ, koulskoude, e Rouantelezh ar Vampired, bezañ ar suner nemetañ o sentiñ ouzh an Diaoul. Pep tra vat, ac'hanta, a ya da goll. Ar sunerien-wad a seblante aet skuizh, heuet gant o micher rukunus. C'hoant mervel da vat a oa ganto : c'hoant peoc'h. Bourret en o beziou, en o archedoù louedet. Didalvez. Hag hemañ dreist ar re all, diegi-holl ma oa, ne rae vann ouzh e stad, nag ouzh e anv kennebeut : Burtul a veze graet outañ.

- « Burtul ! a skrijas Morlk Marc'hfhlapzin d' ar relegenn divalav. Ya ! Burtul, nemet ha Buzhugenn a vefe ! Ar Mestr a gomand dit dihun, ha sevel, ha dizouarañ. Sioul e kousk an Dud Bev, ma mab ! Re sioul ! Re voredet ! Sav ha kemer buhez un den, ur gour, ma mab, ur gwaz, ma teuio nerzh ar Gwall d' az magañ... »

Ar relegenn a fiñvas, krek, krek, krok, krok, krok. Flibennoù kroc'hen brein, distag ha gant kontron warno, en em glozas war an eskern. Toupennoù blev, reut e-giz reun, a begas war ar penn marv. Muzelloù disliv, sec'h ha lontek, a c'holoas ar javedoù, troñset un tammig war-c'horre daou zant hir-euzhus. Ar Burtul a glevas un tamm pekenn bevusted bennaket o redek dre e framm sklaset. Ha da heul, ur sec'hed spontus, ur c'hoant lonkañ, ploupañ, trankañ forzh petra, gant ma vefe birvidik. Hogen e ouze a-walc'h ne oa ken evit e zent hir nemet friko gwad-er-geinou... Plegiñ d' e natur a oa d' ober, setu mat, ha setu holl. En aner e klaskas en em zic'hourdañ en e arched dolmet. Ne oa ket lec'h da ebatiñ aze ! Un nerzh marzhus a sachas anezhañ war-c'horre an douar, hag ho pefe gwelet gant spont ha kalon laosk, e gwirionez, ar maen-bez o sevel dindan al loar vouset, hag ar Burtul o 'n em silañ er-maez, flek war e zivhar evel ur mevier kras, gwisket gant dilhad bet kaer gwechall, ha troet da bilhoù ha da lastez flaerius e yenijenn an toull don. Divorzañ a reas e vembroù o tañsal, heñvel ouzh ur spontailh hejet gant an avel, o vrañskellat etre kroazioù ar vered sioul, ken didrouz hag ar Marv Skornet.

(1) Skilfer = vampir, suner-gwad.

N. ar R. - E niverenn 176 AL LIAMM, p. 223, ez eo bet embannet ur roll gerioù eus Bro-Rostrenen.

245

Ur vouezh a-ziabarzh a roe urzhioù dezhañ, hag e tec'has kuit, pell diouzh an douar benniget, rak n' eo ket pikol yac'hus d' ur skilfer tostaat ouzh kompezennoù an Aotrou Doue.

- « Tan de'i, bremañ, Burtul ! a lare ar vouezh a-ziabarzh. D' ar gwad fresk, ma mab, d' ar vuhez ! »

Hag ar relegenn da vale, da glask he c'hont gwad, da glask he gwalc'h a vuhez.

* * *

Trouz ur werenn strinket gant ur voger a harlinkas e skouarn. E lec'h ma strinker gwer e tle bout tud ivez, ha buhez. Buhez ! Da gentañ e paouezas ar suner un tammig, da selaou heklev drev an davarn, en noz dant. Buhez.

- « Na pa vefen bev bemnoz, a soñjas, morse ken ne vo roet din da dañva buhez wirion an Dud Bev. Lonkañ, dre laer kaer, gwad a-walc'h da adtommañ ma gwazhioù entanet gant ar sec'hor, da reiñ ul lezvuhez d' am c'horf diene, ha tizhout ma arched da c'houlou-deiz... Doanusañ planedenn, pa gousk er sioulder ma c'heneiled marv da vat... Ma ! Tonket on da lazhañ evit bevañ. Ha gant piv an Diaoul e stagin fenozh ? »

Ne vez ket galvet an Diaoul en aner. A-boan ma voe echu e soñjezon gant Burtul, e welas un den kozh bountet e-maez an ostaleri. An trouz a greskas, a sailhas er porzh dre an nor digor, evel pa heulfe ar mezhvier. Mouezh an ostizez a gurunas etrezek hemañ.

- « Kozh lonker brein ! N' eo ket trawalc'h dit kargañ da gorf ! Ret eo dit ouzhpenn-se ober un teilhad en ti, skandalat an dud, kunujenniñ an ostizez, dislonkañ war an daol ha stlepel da werenn gant ar voger ! Sklanker milliget ! Skarzh alese a-raok ma 'z po graet 'n ez pragoù ! Ha kav soñj emaut tri miz 'zo war ar c'hoch ! Ma n' eo ket ur vezh paeañ tailhoù d' ar stad evit kinnig leveoù da stoliadoù dic'hailh evel hemañ ! Sach da dreid ar pellañ ma c'helli, ampoezon ! »

An hini kozh, avat, a yaras dindan ar c'houad. Honnezh, ur penton a blac'h, barrek da vadaouiñ ur gour a daolioù bronn, ne oa ket da c'hoari ganti ! Klask a reas ur respont da bremañ he genou d' ar ramzez spouronus, nemet ne zeuas ger ebet gantañ. Kemerout a reas e anal, a-raok mont kuit en ur hopal kaozioù espoell.

246

- « Dampasion ! Revrioù lous ! Pa vefen suner-gwad e teufen dre ar prenestr da raskognal hoc'h eskern ! »

Hag e skoe taolioù dorn kounnaret en aer.

- « Hemañ en deus ma galvet ! » a soñjas Burtul. Ur mousc'hoarzh a zizoloas e zaou zant hir, hag e krogas da dostaat sag ar paotr kozh.

Ar mezhvier a zistagas ur mell bramm war greiz ar straed, hag a zigoras e bicheri evit leuskel ur staotadenn hir da redek betek an touflez. Kanañ a rae mouezh e benn, ivez, kement ha dihuniñ ar vourc'hizien gourvezet e pluñv o gweleoù.

« Manul a staot u'l,
Manivel a staot pell ! »

Ar Burtul, avat, a soñjas e oa tremenet poent dezhañ dont a-benn eus e dorfed, a-raok ma teufe tud d' ober ar bambocher reiñ peoc'h. Spinañ 'rae ar voger, evel ur c'hazh noz o klask e breizh. Pa zegouezhas kazi rez gant an den, o kemer lañs da sailhañ warnañ, e klevas stalafioù o tigeriñ a-zioc'h e benn, hag e rankas chom kuzhet. Ur vouezh damgousket, met fuloret-naet, a hopas diouzh ar prenestr :

- « Sakre gast fall ! Job ar Sistr 'n hini eo ! Kar-e-doull ! Preñv

douar ! Gortoz un tamm, 'an da dremen da c'hoant kanañ dit ! »

Ur vunutenn c'hoazh, hag e kouezhas an dic'hlann e-kreiz ar straed : ur c'helorniad dour yen a oa bet stlapet gant paotr ar prenestr war benn an Aotrou Lonk-e-Sizhun, hag un diveradenn bennak a c'hlebias blev reut ar skilfer da heul.

Spontus e oa an noz, bremañ. Gouleier an tier a oa lazhet holl. Ar mezhvier a gemeras hent e di, ur sac'had mezh en e benn diabafet, rividik en e zilhad mouest. Ne glevet nemet strejadennoù skiltrus ar c'hizhier-noz, un targazh pe zaou, moarvat, o c'hoari d' ur gazhez e tommijenn, ha kann etre dezho. Ur gaouenn a hopas a-zioc'h gwez ivin ar vered.

En ur c'horn didud e lammas Burtul war e breizh, hep poan. Daouarn ar relegenn a stardas gouzoug an den kozh d' e dagañ, kouek, keit ha ma skoe ar skilfer e zent hir, ken lemm hag ur minaoued, e lerenn elgez ar mezhvier. Hemañ a laoskas ur skrifadenn wic'hus, a-raok kouezhout war an douar da vervel. Diwadet. Burtul a gemeras e amzer, neuze, da beursunañ laezh ar gwazhioù, daoulinet e-tal ar c'horf gourvezet. Gwad fresk a garge e vembrou, hag e teue ar vuhez nevez da heul.

247

- « Ar wech-mañ en do Morlk Marc'hfhlopzin e vennad ! » a soñje Burtul, bourret un disterañ. Torchañ 'reas e c'henou, ha buan e klaskas e hent sa 'r gêr, pe sa 'r vered, mar karit gwelloc'h.

Ya. Met petra c'hoarvezas, d' ho soñj ? Rak c'hwi, lennerien gogez, a gav deoc'h ez eo pare ur Vampir pa 'n deus karget e vouzelloù a wad fresk ? Mat, gant gwad fresk, eta, ne laran ket. Nemet ne oa ket gwad ar paotr kozh-mañ eus ar re freskañ. Na pell ac'hane !

Pa 'n em gavas ar suner-gwad war e sav, e santas flek e zivhar. O, daonet 'vo ! Na petra 'ta ? Seblantout 'rae dezhañ e oa o vont da nijal, pe da bradañ. Pradañ an hini 'reas evel just, mezh-dall ma oa, 'leizh e dog, blaz ar gwin ruz o teviñ e c'horzailhenn, pounner e deod ha sammet e gof. Ha morse n' hellas adsevel ken, digustum da zougen alkool !

D' ar beure, pa gokoc'hokas ar c'higi e leur-gêr ar person, tud o skarzhañ d' o labour a gavas an daou gorf, unan anezho diwadet 'vel ur porc'hell, hag egile beuzet er gwin dislonket. An holl a anaveze mat Job-ar-Sistr, ar sklanker kozh ; met an hini all ? Pa glaskjont paperoù ar Burtul en e c'hodelloù, e teuas ganto un dornad kig brein flaerius, mesket gant kontron. An divrec'h en em zistagas diouzh an divskoaz pa grogjont enno da gas ar c'horf kuit. Ne oant ket bet pell o kompren petra oa c'hoarvezet, rak er vered e oa chomet digor bez ar skilfer.

Ar person a bateras, an dud a gontas kozh kaozioù diboell, hag ar vugale a gouskas aes adalek an deiz-se.

Rak, gouzout a ouzit, ur suner-gwad a varv da vat ha da viken pa n' hell ket tizhout e arched 'raok goulou-deiz.

E-giz-se e kavas Burtul un diskuizh evit ar beurbadelezh, e-maez galloud Morlk Marc'hfhlopzin, Priñs Meur ar Skilferien. Repoz dezhañ.

Ha me 'm eus skrivet ar marvailh evel m' eo bet kontet din, un nozvezh hiraezh, ganin ma-unan.

Sevenadur

« Gwechall oan paotr yaouank
er gêr e ti ma zad . . o ye !
er gêr e ti ma zad... »

« Opala, tudoù ! Gwall laouen oc'h hirie ! 'M eus aon n' oc'h ket diwar
zour ! Petra zo nevez ganeoc'h ?

- Petra zo nevez ganimp ? Emaomp 'vont da gêr Gwened, da welout ministr ar
penn-bazh, a zigoro fenoz ur palez d'ar sevenadur. 'Michañs vo lojet brav . Soñj
'ta ! Ur miliard hanter diwar-goust tud Gwened. Ouzhpenn-se e vo un abadenn
digor d' an holl gant tud 'giz Glenmor, Servat, ha me oar-me ! Hag un dibunadeg
e kêr Gwened ! Evel just, ned imp nemet d' an abadenn ! Ne reomp ket
politikerezh, ni !

- Ma ! Mont a rin ganeoc'h. Kentoc'h 'vit chom amañ da ruzañ ma botoù, rak
n' eo ket gwall yac'hus ar skol-veur evidon ! »

Ha setu penaos en em gavis asambles gant tri c'hamarad, Alan ha Yann, daou
Dregeriad evelton, ha Gweltaz, ur C'hernevad, war hent Gwened. Kuitaat a rejomp
Roazhon war-dro teir eur goude kreisteiz. Alan a vlenie ar c'hozh daou jav, a
dlee kas ac'hanomp betek ar sevenadur-se sparlet en ur " Palez ", pe gentoc'h
betek un neizh polised, C.R.S.-ed hag all. E-touez ar re gentañ e oamp da vont,
met dleout a raemp adkavout kamaraded all eno en un ostaleri. Edomp e soñj
koaniañ e kêr Gwened, kerkent ha degouezhet. 'Michañs ivez e vije kavet
archerien war an hent. Ba ! Laret e vije dezho e oamp o vont da Giberen da
dremen un devezh pe zaou : seier kousket a oa ganimp, hag un deltenn ivez. Ar
c'harr-tan ne dae ket en-dro ar gouleier warnañ, ha n' hallfemp ket distreiñ da
Roazhon diouzh an noz. Amzer a oa ganimp, forzh penaos. Echu oa an arnodennou,
ha tremen skuizh oamp gant ar skol-veur.

249

Mat e voe eta ar veaj... betek an Elven. Tremenet ganimp ar vourc'h, hon
devoa kemeret lañs en-dro, pa weljomp dirazomp war lez an hent ur polis a rae
sin dimp gorrekaat. Sentiñ a rejomp, hag eñ gourc'hemenn dimp en em renkañ
pelloc'h war ar ribl. Ur polis all a dreuzas an hent da zont davedomp : « Ho
paperoù, mar plij ! ». Hag en ur gemer anezho : « Da belec'h emao'h 'vont'?

- Da Giberen.
- D' ober petra ?
- Da gampiñ e-pad daou zevezh.
- Digorit koufr ar c'harr. »

Moarvat e oa e soñj kavout barrennoù-houarn pe bizhier-koad. Forzh penaos,
poan gollet. Treuziñ a reas an hent en-dro da vont d' e garr-tan " Estafette ",
hon paperoù gantañ. Evit pellgomz da Wened, 'michañs.

E-keit-se e oa deut ur c'harr-tan all d' en em renkañ a-dreñv dimp.
Studerien all eus Roazhon. Diskenn a rejont holl, hag unan anezho, ur vombard
gantañ, a grogas da c'hwezhañ e-barzh. Seniñ, avat, ne oa ket gouest d' ober. «
Spi 'm eus, eme Alan, e vimp holl laosket da vont, ne gav ket din e c'hallfe an
archerien gouzañv pell amzer blejadennoù a seurt-se. »

« Sell 'ta, eme Gweltaz, petra 'zo er park en tu all d' an hent ? N' eo ket ur c'harr-samm polis ? »

A-dreñv kleuz ar park e oa un ugent C.R.S. bennak, prest d' ober war hon tro mar teurvezfemp c'hoari ar re fin.

Degouezhet e oa bremañ pevar c'harr-tan all. Evelato e veze laosket da dremen an holl vourc'hizien pe labourerien. War a seblante, ne veze harzet nemet ar re yaouank, o devoa betek re neuziou-studier. Mont a ris er-maez da astenn va izili brevet. Ma gwalc'h chom er c'harr. An tri all a reas kemend-all war ma lerc'h. Ur steudad kirri a oa bremañ a-dreñv dimp, ha 'michañs e teufe reoù all c'hoazh.

Un eur bennak e c'hortozjomp e-giz-se, pa zegouezhas daou " votard " ; an archer a zeuas neuze da larout deomp e vijemp kaset da Gêr-Gwened betek ar c'homisaria, « evit sellout spisoc'h ouzh ho paperioù, » emezañ. Ha ni pignat 'barzh ar c'hirri en-dro. Ur motard en hon raok, un all a-dreñv, e voemp ambrouget betek ar c'homisaria, a oa 'tal 'kichen Palez ar Sevenadur. War an hent ne veze gwelet nemet kirri du an Archerien, " Land Rovers " ha me oar. Ur c'hwez iskis a save e kêr Marcellin.

250

Hor c'hirri a voe lezet war un dachenn 'kichen ar c'homisaria, ha ni mont e-barzh, ambrouget bepred gant an archerien. Eno e ranke pep hini tremen dirak un enseller evit reiñ dezhañ e anv, anv e dad, hag ur bern traoù all c'hoazh. Kaer hon devoe larout e felle dimp bezañ lezet da vont rak gortozet oamp e Kiberen, ne voe ket taolet pled. Kaset e vezemp goude, unan hag unan, en ur sal vras, e-traoñ ar savadur. En em gavout a raemp aze ur c'hwec'h bennak, div blac'h en hon touez. Yann a yeas da c'houlenn un tamm kleiz digant an archer a oa e toull an nor, « evit c'hoari troadig-kamm, » emezañ. Pa voe roet dezhañ e damm kleiz e stagas da skrivañ war ar mogerioù : " Breizh dishual " Tañvañ sevenadur ar boestou-mir, an hini gwellañ" , ha traoù hegarat-tre evit ar ministr.

D' ar c'houlz-se e teuas un archer da larout ne oa ket dereat lakaat paotred ha merc'hed mesk-ha-mesk. Youc'hadennou a voe klevet neuze : « Apartheid ! Archerien, beleien ! Gwashoc'h evit site ar studierien ! » hag all. An disparti a voe kalet. « Penaos, eme Alan, e c'hellin-me tremen an amzer en toull-mañ ? ».

« Ouzhpenn se, eme un all, e tapin poan-revr ma n' em eus tra da lakaat dindan. » Met klemm ne dalveze ket ar boan, hag en em gavout a rejomp hon-unan. Gweltaz a lavaras en doa keuz o chom hep bezañ kaset levr ebet gantañ kement hag ober un dra bennak.

« Ha boued ivez ! » eme Yann, paotr e gof.

Ha ni d' en em c'houlenn pegeit e vefemp lezet aze da louediñ. Bep an amzer e tiskenne unan bennak all d' hon bete. Ur paour-kaezh studier bet tapet war an hent evelomp, kaer en devoa bet tabutal gant paotred Mari Robin. Souezhus an niver a studierien o vont da Giberen an deiz-se.

Da seizh eur oamp degouezhet e Gwened. Da seizh eur hanter e oamp pemzek e sal vras an traoñ. Da eizh eur e oamp tremen tregont. War-dro dek ac'hanomp a oa brezhonegerien. Kregiñ a rejomp da ganañ kanaouennoù : reoù kozh, *An Alarc'h*, *Gwerz marv Pontkallek*, hag all, reoù nevesoc'h : *Emgann Montroulez*, *Komz a ra kalz ar C'hallaoued*, *Pa vo Breizh digabestr*, *Maez al lezenn*. Kement tra a ouiemp a voe kanet. Ar re ne gomprenent ket brezhoneg a gane memes tra. Un toullad archerien oa deut da welout ar pezh a c'hoarveze. Chom a rejont da selaou e toull an nor. Mont a reas Alan, ha Gwendal, da gaozeal ganto. Unan anezho a gomze gwenedeg, hag Alan, a oa kustum da zaremprediñ gwenedourien, a reas kaoz gantañ. Souezhus e kave gwelout tud yaouank o komz brezhoneg evel-se. « Ne reomp nemet gant ar brezhoneg etrezomp, » a lare Alan. Hag int krog da dabutal war ar yezh, ar sevenadur, Breizh. Plijus e oa an den, ne oa ket aheurtet tamm ebet, ha

dont a rae brav ar brezhoneg gantañ. E gamaraded ne oant ket evit kompren anezho, darn oa eus Breizh Uhel, al lodenn vrasañ a oa Gallaoued. Jentil e oant, ma Doue !

251

«Pegoulz e vimp lezet da vont ?

- N' ouzomp ket, emañ 'vont da welout.

- O ! 'Michañs e viot lezet dizale.

- Sec'hed am eus ! » a huchas ur paotr e foñs ar sal. Hag an holl da huchal : « Sec'hed hon eus ! Sec'hed hon eus ! »

«Bez' eus evaj amañ, eme un archer, ez an da welout hag e c'hellin reiñ deoc'h. » Hag eñ mont.

Pemp munud goude e oa deut en-dro. Nac'het e oa bet, hervez kont. Adarre an dud da huchal. Pemp munud goude c'hoazh e teue an archer gant kasedadoù chug frouezh : an dud a roe tri ugent lur, darn a huche ne oa ket reizh, o vezañ ma oa ar C.R.S.-ed o lonkañ bier. Unan all a oa krog da c'houlenn sandwichoù. Un archer a bennfolle, un all a oa keuz, keuz bras ennañ chom hep gellout ober muioc'h evidomp.

« Pelec'h e staoter ? eme Yann.

- Gortozit, eme an archer madelezhus. Mont a refet da staotañ tri-ha-tri, hoc'h ambroug a rin. » Ha ni mont.

Eus ar privezioù, dre ur prenestr bihan, e vije gwelet ar sal ma oa bet serret ar merc'hed.

« Penaos emañ kont ganeoc'h ? eme Alan d' ur plac'h harp ouzh ar prenestr.

- Madik. Ha ganeoc'h-c'hwi ?

- Eus ar c'hentañ. Evañ, kanañ a reomp. Ne vank nemedoc'h evit dañsal. Pet oc'h ?

- Un ugent bennaket, ouzhpenn marteze. Amañ ne c'hoarzher ket kement-se. Ne ganomp ket, ni. Dont a ra ivez C.R.S.-ed d' hon gwelout bep ar mare. Poufañ, fougasiñ a reont. Kas a reomp anezho da sutal. »

Ar gaozeadenn a voe troc'het gant an archer a laras e oa tud all c'hoazh o devoa c'hoant...

Pa larjomp e c'hellemp kaozeal gant ar merc'hed eus ar staotlec'h, e voe c'hoazh muioc'h a dud o vont di. Reoù zo a yae zoken bep kardeur. Ne baoueze ket ar monedone eus ar sal d' ar staotlec'h.

252

O vezañ ma ne veze ket diskleriet deomp da bet eur e vefemp lezet da vont e krogomp da grediñ e tremenfemp an noz aze. Goulenn a ris aotre mont da gerc'hat ma sac'h-kousket e-barzh karr-tan Alan. E krec'h, en trepas, e oa c'hoazh studieren, a oa da ziskenn ganeomp. Ur c'hamarad a laras din en doa gallet tec'hel kuit ur paotr all a oa gantañ. Tapet e oant bet en ur zont er-maez eus un ostaleri o huchal war ur c'hamarad : n' o doa ket gallet dont en-dro da gemer o forpantoù ; o arc'hant hag o faperoù a oa e-barzh. Penaos e rafe-eñ evit tremen dirak an enseller ?

Ur c'hardeur goude e oan en-dro gant ar re all, er sal vras. Kanañ a rae an dud c'hoazh. Ur studier a glemme peogwir en doa arnodennoù an deiz war-lerc'h. Spi en doa e vije lezet da vont a-raok ar beure. Tri-ugent e oamp neuze. Hag e-giz-se e kendalc'has an traoù betek un eur. Un eur diouzh ar beure. Skuizh

e oa an dud. Naon gante ivez. A-greiz-holl e teuas un archer da larout deomp e vijemp lezet da vont, hag e vije daskoret deomp ar paperioù a oa chomet gant an enseller.

Er-maez e kavis kamaraded gant ur pezh gwenn-ha-du. Gallet o devoa tremen war an hent. Hogen n' o doa kavet tra ebet e kêr. An ostalerioù a oa bet serret da zek eur, war urzh ar maer. Kavet o doa Paol, ar paotr a oa tec'het kuit eus ar c'homisaria, ha deuet e oant eno, gant o banniel o huchal : « Frankiz evit hor c'hamaraded ! ». Ar gribed a lare dezho tevel... anez se e viot dastumet ivez.

« Met se eo a fell deomp, just a-walc'h ! » Klevout a raent ac'hanomp o kanañ a-bouez-penn, hag int aze er-maez. Met poan gollet. Chom a rejont aze evel paour-kaezh tud... betek hon dieubidigezh.

N' hor boa mui tra ebet d' ober ken, e kêr Gwened. Divizout a rejomp distreiñ da Roazhon. Lezel a ris Alan, Yann ha Gweltaz evit mont gant Yann-Ber, paotr ar gwenn-ha-du. Naon em boa, graet em bije forzh petra evit debriñ un tamm kreun. Ha ni war an hent.

An deiz war-lerc'h e lennen en ur gelaouenn ar pezh a oa tremenet en derc'hent : « Manifestadeg, mouget gant ar C.R.S.-ed... Glenmor e lise Kergado... Kleizourien bet kaset d'an toull a oa o kanañ e brezhoneg ».

« Petra zo gwelloc'h, emezon d' ur Gall penn-kil-ha-troad a oa em c'hichen en ostaleri : ur sevenadur sparlet en ur palez, pe unan a vez kaset d' an toull ? »

Ne ouezas ket petra respont.

EÑVORENNOÙ

(kendalc'h)

Gant an darn vrasañ e teue sonioù gallek hag ar re bet kavet mat da zougen an armoù a oa dare da vont diouzhtu da Verlin da gastizañ an impalaer Gwilherm. Seurt dizurzh ha brabañserezh a gaven displijus ha dizereat, met penaos chom hep mont da heul an danvez-soudarded ? Deuet e vijent d' am c'hilask da di va mamm evit ober an hu warnon.

Gouezet o devoa ar C'hallaoued sankañ er c'halonou kasoni don ouzh an enebourien a raed outo gwashoc'h gouezidi eget re Afrika. En hon touez, paotred ar bloavezhiad seitek, e oa bras hon drougiezh ouzh an Alamagn, ha bras ivez ar c'hoant e vije kannet. Ar re ac'hanomp a voe graet danvez-soudarded anezho a dride gant ar fouge da c'hellout mont, a-barzh pell, da argas an alouberien ha da dalvezout dezho o zorfedoù. Ar re vac'hagnet evel don hag ar re re-zister pe nammet en un doare bennak, un tri pe bevar ac'hanomp, a geuzie gant an dichañs da rankout chom er gêr.

Ur c'henderv bihan din, fall e weled ha kizidik e zaoulagad, a oa chalet ha mezhekaet o vezañ na oa ket bet kavet barrek da ober ur soudard. En davarn ma oamp troet holl, div zousennad ac'hanomp, da evañ ur banne muioc'h, e c'houlennas ar vestrez outañ : « Ha c'hwil, Laorañs, petra a zo graet ac'hanoc'h ? »

« Allas ! itron, n' on ket bet kavet mat, » a respontas dezhi. Dre fent hag hep soñjal e feukañ : « Ho tad, » emezi, « a zo kuzulier ti-kêr hag hir e vrec'h. Klaoustre en deus graet implij eus e c'halloud evit ho terc'hel gantañ er gêr ! ».

Kant gwech gwelloc'h e vije bet dezhi mirout kloz he genou.

O klevout ar c'homzoù kasaüs-se, ez eas ar paotr gwalllivet ha, droug ruz ennañ, e c'harmas a-bouez-penn : « Ma vijec'h bet ur gwaz, itron, em bije ho prevet ha graet deoc'h lonkañ ho teotadoù binimus ha gaouiat ! Penaos hoc'h eus ar fallagriezh da damall d' am zad ha din, e gaou, traoù ken dizoare ha mezhus ? D' am zad ken anavezet e garantez e-keñver ar vro, ha din ar brogarour na c'houlenn nemet skuilhañ e wad evit saveteiñ ar Frañs ! » .

254

Ken heget e oa Laorañs ma rede an daeroù eus e zaoulagad ha m' hor c'huitaas, en ur gunujenniñ ar vaouez. Glac'haret ha fromet ez eas d' e di ha n' her gweljomp ken an deiz-se.

255

N' em eus ket ar menoz da zibunañ an darvoudoù a c'hoarveze war an talbenn na buhez ar soudarded hag o c'hurioù war an dachenn-emgann. Kement-se a zo bet displeget gant Abeozen war ar gelaouenn lennek *Gwalarn* ha gant Loeiz Herrieu war e zastumadenn *Dihunamb*. C'hoant am eus bet hepken da reiñ un alberz eus ar pezh a welis hag a glevis e Breizh e-kerz ar c'hentañ brezel bras.

Kaer o deveze ar Saizon hag ar C'hallaoued argadiñ, ne zeuent ket a-benn da doullañ difennoù an Alamaned ha d' ober dezho kilañ. Bras e veze ar c'holl eus an daou du, tud lazhet ha gloazet diouzh an druilh. Medalennet stank e veze ar c'hloazidi, diframmet diouto ur vrec'h pe ur c'har pe muioc'h gwall-aozet c'hoazh, dirak o c'herent hag un nebeut soudarded dindan an armoù, gant un ofiser bennak a rae dezho un tamm prezegenn verr.

Diwar-benn an diskoulm eus ar brezel e oa nec'het ar speredoù. Setu ma veze anv dalc'hmat, war ar c'helaouennoù, eus ar rouller-hentoù rusian a flastrje dirazañ an armeadoù alaman hag aostrian, evel e-ser c'hoari. Ha koulskoude, pa veze deuet ar c'hazh da razh, e klevet e veze bet flastret soudarded an Tzar.

Pa 'z eas Turkia a-du gant an div impalaeriezh enebour, ne reas ket ar bobl nemeur a van, met fougeet e voe o welout Italia o tont da reiñ skoazell d' ar C'hallaoued. Diwezhatoc'h, pa voe trec'het Italiz e tolead ar stêr Piave ha pa voe ret reiñ harp dezho, e komze hor soudarded anezho gant fae ha dispriz. N' eo ket brezelourien e oant, emezo, met konikled dare da skarzhañ kuit, kerkent ha ma klevet an disterañ trouz.

Ouzhpenn listri brezel a yae d' ar strad ha kalz listri kenwerzh a voe goueledet deomp. Rouez e teuas da vezañ pourvezioù 'zo, evel an eoul-maen, ar c'hafe hag ar sukr, ha fall e oa ar bara. Bras e oa an droug a rae al listri-splujer alaman ha, pa 'z eo gwir, bewech ma 'z ae fall an traoù, e rank ar bobl kavout unan bennak da damall, e kouezhas ar bec'h war ur marc'hadour pinvidik eus Kemper. Hemañ a rebeched dezhañ kas pourvezioù, vioù hag amann dreist-holl, da dud al listri-splujer a verdee tost da aodoù Breizh ! War a lavared, ez ae ar bevañs gant ur vag-pesketa, betek al lec'h ma veze kavet gant an enebourien.

N' ouzon ket petra a oa gwir pe c'haou en istor-se, hogen kalz trouz a reas dre hor bro ha, d' an diwezh, e voe toullbac'het ar marc'hadour. N' on ket evit lavarout, avat, petra a c'hoarvezas gant ar marc'hadour da c'houde.

.
256

Prientet e oa bet listri-roueder, pezhioù-kanol bihan warno, da redek war-lerc'h ar splujerien ha d' o gouelediñ mar galljent. Ur mignon din, Gwenole e anv, a oa war bourzh unan anezho hag en devoa e borzh e Leixoes, e Portugal. Hervez ar paotr, e oa start-bras ar vicher, dreist-holl diouzh ar goañv, ha daoust dezho da vezañ dalc'hmat o verdeiñ, ne welas nep splujer, nemet unan a voe kaset d' ar strad gant ur c'hreunadenn, war a seblantas. An eoul savet dioutañ war ar mor a reas d' ar vartoloded krediñ e oa deuet ganto o zaol da vat.

.

Er bloavezh 1915 e voe drastus d' ar C'hallaoued an arsailhoù a rejont e Bro-Artez hag er Champagn. Kalz tud a golljont, evel an Alamaned e-kerz o gwashañ tourtadoù. Keloù a zeuas deomp eus marv un den e-kreiz e vrud, bet mevel ganeomp kent, Per Rannou e anv. En em staget e oamp du-mañ ouzh ar paotr-se ha keuz hor boe dezhañ. Ur galonad a voe deomp gouzout penaos e kollas e vuhez. Edo oc'h argadiñ gant e gompagnunezh pa voe diskaret e-touez ur steudad orjal dreinek e-lec'h ma chomas tri devezh ha teir nozvezh da c'houzañv ur verzherinti spontus a-barzh mervel. Ne ehane da c'harmañ da c'houlenn skoazell, met den ne c'hellas mont d' e gerc'hat ken arvarus e oa tostaat outañ gant an tennoù mindrailherez a gouezhe en-dro dezhañ. E-kerz e bermision diwezhañ, en devoa anzavet ouzh va mamm n' her gweljem ken.

E-kerz emgann ar Somm e oa bet lazhet va c'henderv Yann Rannou, eus ar Stank, ur paotr ugent vloaz a garen kalz hag a oa unan eus va gwellañ mignoned d' ar mare ma vezen gantañ o tiwall ar saout e kêr e dud. Neuze ivez e varve er gêr va c'henderv Yeun Frabolod, eus ar Menez Gwenn, tapet e fall gantañ e Belgia nebeut amzer kentoc'h.

Ouzhpenn ar pegadoù a lakae ar vrezelourien da lugañ dindan sklerijenn an deiz, ur brezel all a dremene dindan an douar. Evel gozed, e toulle an Alamaned, koulz hag ar C'hallaoued, riboulioù hir a-is da zifenoù an eil rumm hag egile d' o lakaat da strinkañ gant danvezioù tarzhus. E-leizh a soudarded, mouget ha flastret gant pouez an douar o tisac'hañ warno, ne voe kavet morse o c'horfoù

douaret er pri hag er vein.

257

Dibaot a wech ec'h anzave ar c'helaouennoù ar wirionez p' o deveze bet ar C'hallaoued an tu-koll. En enep, pa c'houneze ar re-mañ an disterañ tachenn, e kaved da lenn e-leizh a fougeoù hag a veuleudioù pompadus. Ret e oa mirout divrall da dud an a-dreñv ar fiziañs da gaout an trec'h diwezhañ ! Ha dalc'hmat e veze meneg eus gounidoù ha kurioù hor soudarded e Menez ar C'hizhier, Milin Laffaux, Hent an Itronezed, an Argonn, ar Woevr, an Hartmannvillerkopf, hag all.

War-lerc'h gouelioù Pask ar bloaz 1916, e tridas va c'halon gant an esmae pa ouezis e oa en em savet Iwerzhoniz ar Sinn-Féin ouzh ar Saozon hag e oa bet embannet ar Republik e kêr-Dulenn. Tra souezhus ! Ne gavas ar bobl nep abeg en emsavididi nemet tud 'zo hag a lavaras n' edo ket ar mare da glask rev ouzh ar Saozon o devoa trawalc'h da ober ouzh an Alamaned. Ne ouient ket, an dudigoù, e stourme gouroned Iwerzhon evit frankiz o bro, brasañ teñzor a zo er bed, padal e poagne ar Saozon da bilañ galloud an Alamagn a lakae war var o ijinerezh hag o c'henwerzh a-dreuz an holl vroioù.

Allas ! trec'het e voe an emsavididi kelt, hor c'hendirvi tramor, ha lazhet pennoù ar reveulzi. Doaniet-bras e voen gant ar c'heloù glac'harus, hogen ar gwall-zarvoudoù all o c'hoarvezout bemdez a reas din ankouaat, evit ur pennad al lamm o devoa bet stourmerien Enez ar Sent.

.....

E miz C'hwevrer 1916 e tirollas gwashañ argadenn an Alamaned war gêr Verdun. Un drailh spouronus hag a badas war-dro c'hwec'h miz ! Kreñvlec'h Douaumont a voe kollet buan ha, dirak al lanv german o c'hounit tachenn, e tleas ar C'hallaoued kilañ a-nebeudoù. Ur milion a dud, ken Gallaoued, ken Alamaned, a dremenas dre an ifern-se o leuskel war o lerc'h n' ouzer ket pet kant mil korf marv ; miliadoù Bretoned en o zouez, darn anezho, distroet ac'hano dre vurzhud, a lavare na c'helle ket spered mab-den ijinañ, dre e faltazi, euzhusoc'h drailh ha lazhadeg. Meur a hini a gollas o fenn dindan ar vombezadeg dibaouez, gwashoc'h eget holl daranoù an neñv, a vouzare hag a bulluc'he ar paour-kaezh merien a oa anezho, motet holl e-barzh an douar dispac'het gant an obuzoù.

Pal ar " c'honprinz ", mab an Impalaer Gwilherm, a oa toullañ al linenn vrezel, da reiñ tu d' e armeoù da gerzhout war Bariz, ha d' en em strewañ, da c'houde, war Vro-C'hall a-bezh. Diarbennet e voe gant poan, daoust d' e ganolioù niverus ha da nerzh-kalon e soudarded. Bep un tamm, o welout e oa aner dezhañ kenderc'hel gant e dourtadoù drastus, e rouesaas e argadennoù hag e sioulaas ar reuz e tolead Verdun.

258

E-doug ar c'hwec'h miz enkreuz-se, ez aen bemdez d' an ti-post, a gaved speget ouzh unan eus e stalafioù ar pell-lizher pemdeziek a rae meneg eus darvoudoù ar brezel. Ankeniet e vezen bepred, evel an holl er vro, gant ar soñj e trec'hje an Alamaned hag e vijemp sklavourien dezho da viken.

War-dro ar mare-se pe, marteze, er bloaz a-raok, e komzas ar c'helaouennoù eus an difreoù a glaskas ar ministr kozh Caillaux kas da benn, anezhañ e-unan, gant pennadurezhioù Aostria, evit lakaat diwezh d' ar brezel. Nag a vuhezioù a vije bet espernet hag a zistruj miret outañ ma vije bet gouest da seveniñ e venoz ! Allas ! ar gostezenn a-du gant ar brezel eo a rene Bro-C'hall d' an ampoent. Aes a-walc'h e vije bet ober ar peoc'h, da vihanañ gant Aostria aet skuizh o vrezeliñ. Hogen fall e voe kavet mennad Caillaux o vezañ ma oa bet divizet e ranke impalaerezhioù Kreiz Europa bezañ diskaret evit lakaat harz da vrezelioù all diwezhatoc'h. Embannet e voe e oa Caillaux un trubard ha goulennet ma vije barnet gant al Lez-Varn Uhel. Dismegañs ar bobl a gouezhas warnañ, kement e oa graet haro war an torfetour, evel ma raed outañ.

*

E-kerz ar bloavezh 1917, e troe fall an traoù evit ar C'hallaoued hag ar Saozon. Kantadoù listri-kenwerzh d' ar re-mañ a voe goueledet gant ar splujerien alaman, ken e teuas dienez a voued e Breizh-Veur. Edo eno an naonegezh o tostaat ha chalet bras e oa ar gouarnamant diwar-benn ar bevañs a rae diouer bemdez muioc'h-mui. Ma karje d' an Alamaned bezañ kendalc'het gant o distruj e vije aet an holl Saozon gant an disvoued ; met da heul barnadennoù kalet ar broioù didu, e tigreskas ar brezel dindan vor ha poblañs Breizh-Veur a voe dibrederoc'h hiviziken.

259

Hogen, e Rusia, edo an traoù war o zu fall. Deraouet e oa, e Sant-Petersbourg, kêr-benn ar vro, ar reveulzi a briente enni ar gomunourien pell a oa. Ar bobl hag an arme a yeas d' o heul, ker skuizh ha ma oant aet gant ar gwalleurioù o draste abaoe tri bloaz. Ar soudarded a droas kein d' an talbenn, hag an armeoù ne voe mui anezho, steuziet ha teuzet evel an erc'h dindan bannoù an heol. Netra ne harze ken an Alamaned diouzh an tu-se. Bro-Suomi, pe Finland, gant skoazell ar re-mañ, he devoa kavet tu d' en em zieubiñ diouzh impalaeriezh kozh an Dzared.

Kouezhet e oa, a-stok e gorf, ar ramz slav, hag ur gwall-daol e voe kement-se d' ar Saozon ha d' ar C'hallaoued. Amañ e fallgalonas tud ar bobl hag ar soudarded war-bouez un nebeudig a vage c'hoazh ar fiziañs na c'helle ket bezañ trec'het broioù ar Frankiz gant ar Varbared. Nijet e oa spi hor brezelourien da drec'hiñ hag e c'houlennent kenetrezo penaos herzel pa zeuje warno an enebourien a stourme war talbenn ar Reter.

Ur gwir abeg, eta, da vezañ enkrezet. E meur a gêr vras e voe soudarded da nac'h distreiñ d' an talbenn. Raktal e tlee pennadurezhioù lakaat harz d' an disentidigezh anez gwelout an dispac'h oc'h en em ledañ. E garioù 'zo e c'hourveze ar vrezelourien a-dreuz an hent-houarn evit mirout ouzh an trenioù da vont larkoc'h war-du linenn an tan. Hogen neuze e kasjod, war-dro ar baotred disuj, strolladoù Bretoned feal da lakaat an urzh-vat a-nevez ha d' ober d' ar re zisent distreiñ d' al lazhadeg.

D' an ampoent eo e klevis, evit ar wech kentañ, Pikarded ar seizhvet rejimant ha pevar-ugent war droad, annezet e Kastellin, ur ganaouenn fromus ha leun a zizesper :

Kenavo da viken d' ar vuhez,
D' ar garantez ha d' an holl verc'hed !
N'eo ket echu, bepred e pado
Ar brezel fallakr-mañ.

E Kraonn eo, war ar gompezenn,
E tleomp leuskel hor c'hroc'hen,
Rak barnet omp d' ar marv,
Ni 'zo tud aberzhet !

260

Ne oa ket anv mui da vont da Verlin gant ur vleunienn ouzh beg pep fuzuilh !

Kemeret en devoa Clemenceau ar stur e Pariz, hag e zorn dir hag e youl didrec'hus a gastizas kalet ar re gablus, hag a lakaas ar spi en trec'h da advevañ. Ha kement-se seul vui ma tilestre e Brest, niverusoc'h-niverusañ bemdez, an Amerikaned gant o armoù souezhus hag o fourvezioù ken stank. Ar re anezho a welis, tud wenn pe vorianed, a oa paotred vras ha frammet mat un neuz dispont dezho. An dilhad a zougant a zegase soñj din eus gwiskamant ar cow-boys a gaver e levrioù savet diwar-benn rederien ha diwallerien saout ar Bed Nevez Dizale e tiskouezjont bezañ kadourien a-zoare, e Koad Belleau ha Saint-Mihiel.

O donedigezh a sioulaas ar speredoù ankeniet a zeuas da vezañ diarvar war ziskoulm ar brezel. Ya ! penaos e c'hellje an enebourien talout pell ouzh tud ken kadarn, kerkoulz armet ha ken pinvidik ?

.

E-kerz ar bloaz-se e kuitais studi noter Kastellin da zont da labourat d' ar gêr. Bevañ klozet en ur burev a noaze ouzh va yec'hed hag aer yac'h ar maeziou a rae diouer din. En em voazet a-nevez ouzh labourioù ar gêr, e vezen oc'h arat, o falc'hat, o vediñ hag o tornañ hag ez aen alies da reiñ dorn d' hor mignoned eus Sav-Glanvez hag ar C'hrann. Ken barrek ha ne vern piv e oan da falc'hat ha, betek pemzek deiz diouzh renk, e ris ar vicher galet-se.

Yac'haet e oa din ha va darempredoù gant an dud a-ziwar ar maez a blije din kalz. Peurliesañ goude koan ha da sul e kaven an tu da lenn al levrioù brezhonek a gouezhe etre va daouarn hag an div gelaouenn, ar C'hourrier ha Kroaz ar Vretoned, o-div ken gallgar hag ar c'hazetennoù all. Brezhoneg da vihanañ a gaven enno, ha diouzh va menoz e oant pa ne c'hortozen, evel an holl, nemet trec'h hor bro war an Alamaned disakr.

*

Dont a reas ar bloaz 1918 ha ne weled c'hoazh nep diwezh d'an darvoudoù euzhus. Argadennoù divent a voe adarre a bep tu, gwashoc'h eget biskoazh. Da gentañ e c'hounezas ar C'hallaoued tachenn hag e kasjont o enebourien war o c'hiz un nebeudig. Met ar re-mañ, goude un tenn-anal, a sailhas ken gwazh d' o zro m' en em gavjont, e berr amzer, tostoc'h ma oant bet morse da Bariz. Ha setu, ur wech muioc'h, chal ha nec'hamant er vro a oa war-nes gwelout an armeoù alaman oc'h en em skignañ warni.

261

E-keit-se, koulskoude, arme ar Sav-Heol, er Balkanioù a faezhe Bulgariz hag o redie da c'houlenn un arsav-brezel. Bro-C'hall, a-nebeudoù, gant skoazell nerzhus an Amerikaned, a dape an tu war-c'horre hag a vunte kalet he brasañ enebourien d' o skarzhañ kuit diouti.

Neuze, a-daol-trumm, ec'h echuas ar brezel, rak aet e oa d' an arvar impalaeriezhoù Alamagn hag Aostria, dre ziouer a voued hag a zanvezioù ret evit kenderc'hel da stourm. An Alamagn o kodianañ a sinas an arsav-brezel gant ar Re-Unanet, hag e tavas ar c'hanolioù da grozal a-hed roudenn wadet an emgannoù.

Savet e oa heol skedus ar peoc'h da frealziñ ha da laouenaat an holl galonoù. Pa zegouezhas ar c'heloù eürus e voe ur barrad laouenidigezh a sederaas an holl zremmoù hag a lakaas pep den da youc'hal gant an dudi hag an eurvad. Echu e oa an hurlink spontus hor gaske abaoe keit-all hag a strewe kañv ha gwalleur e pep lec'h. D' an iliz ez is, d' ar red, da lakaas bole er c'hleier, met dija e oa pevar pe bemp gwaz en istribilh ouzh kerdin ar c'hloc'h bras. Va lod eus al labour a ris ivez rak, o vezañ ma oan bet o seniñ ar galv, e kreden em boa ar gwir da lakaat brall e kloc'h an trec'h. Ha Yann ar Floc'h, fromet holl o tegas da soñj n' edomp nemet hon daou oc'h embann keloù ar brezel gant ar c'hloc'h bras, a rede daeroù druz war e zivjod.

Dizale e voe laosket ar soudarded da zistreiñ a-vagad d' ar gêr da c'hortoz bezañ dieubet evit mat. Prizonidi brezel ivez en em gave er vro, goude bezañ gouzañvet naon ha yenijenn en Alamagn. A-barzh pell e voe Wilson, prezidant galloudus Stadoù-Unanet Amerika, e Pariz. Deuet e oa da zerc'hel lec'h e vro e divizoù an emglev a beoc'h edo oc'h aozañ etre ar re drec'h hag ar re drec'het.

O vezañ ma oa meneg da reiñ frankiz da bobloù gwasket Alamagn hag Aostria, e klaskas Vallée sachañ evezh an Amerikaned war hor Breizh. Pep koumananter da Groaz ar Vretoned en devoe da heul unan eus niverennoù ar gelaouenn ur baperennig da c'houl ma plijfe gant ar broioù meur a oa o tiazezañ ar peoc'h teurvezout reiñ d' hor bro ar gwirig dister d' en em emellout ouzh kelennadurezh ar skolioù. Kement-se evel ur c'haredon evit ar c'holl spontus a dud he devoa ranket gouzañv e-kerz ar brezel.

N' ouzon ket hag-eñ e voe kalz lennerien da gazetenn Vallée o sinañ ar baperenn, na kennebeut hag-eñ en devoe morse Wilson anaouedegezh eus ar pezh a venne kaout evit e genvroiz aozer ar skrid. O lakaat en dije ar c'helenner sant-briegat tizhet ar pal-se hag ar pennrener amerikan komzet a-du gant Breizh, petra a vije c'hoarvezet nemet he dije Bro-C'hall da zinac'h ouzh ar Vretoned ar gwir a c'houlenne evito un toulladig tud hepken ? Kavet he dije da respont e oa ar re-mañ huñvreerien hag ar Vretoned, ha na c'houlennent netra evito o-unan, eus ar re wellañ e-touez ar C'hallaoued.

Brasañ preder Bro-C'hall a oa adkavout Alzas ha Loren kollet ganti er bloaz 1871, ha diskarañ galloud an impalaerezhioù kreiz, evel ma lavared. Krignet e voe an Alamagn diouzh tu ar Reter hag ar C'hreisteiz ha roet da Bolonia, gant porzh Dantzig, un trepas ledan da dizhout ar mor, ar pezh a voe kiriek, gant meur a abeg all, da vrezel ar bloavezhioù 1939-45. Eus Aostria, rannet e nouspet tamm, e voe graet broadoù nevez na glevet nep anv anezho kent.

E-keit-se e tañse yaouankizoù Breizh ouzh son ar pianoioù mekanik, keit-all a oa n' o devoa ket bet tu d' en em ziduañ. Gant eurvad ec'h adkavas an ezhec'h o gwraez hag o bugale, o atantoù hag o micherioù. Euredoù niverus a voe ha savet evel-se tiegezhioù nevez, e-kreiz al levenez hag ar blijadur. Dirollet e oa an holl, kozh ha yaouank, hag ar gwin ruz a rede a bep tu. Lorc'h a oa er soudarded kozh da vezañ bet an trec'h, evel gwir C'hallaoued ma oant, ha diseblant hag hep c'hoantegezh, e welent o c'henel broadoù bihan n' o zalvezent ket hag o devoa stourmet outo, war an tachennoù brezel dindan dilhad soudard Alamagn hag Aostria.

.

Petra he devoa gounezet Breizh oc'h aberzhiñ he bugale evit ul lezvamm vac'hom na soñje nemet enni hec'h-unan ?

Aes eo ar respont da reiñ ; daou c'hant daou-ugent mil den lazhet ha nouspet hini gloazet ha mac'hagnet, ha netra ken.

Den ne soñje mui er re varv, nemet an intañvezed hag an emzivadad. Arc'hant a oa e-touez darn eus an dud, rak meur a hini o devoa kavet tro da zont pinvidik o vezañ ma oa keraet kement tra ha ma oant chomet pell diouzh an drailh. Unan eus kouerien parrez Pleiben, chomet disoudard e-doug ar bec'h dre m' en devoa kalz familh, a voe klevet o lavarout, ma karje ar brezel bezañ padet hiroc'hik, en dije peadra da brenañ bep a atant vat d' e vugale. Meur a diek all moarvat, hep bezañ ken flav hag eñ, a soñje eveltañ. Evit ober o mad eus ar goulenn a oa deuet d' an avaloù-douar a werzhed ur priz mat, e save darn gwarizi enno ouzh tud ar pennoù-tiez a veze ganto un devezh-arat douar pe zaou da gaout o boued. M' o dije an tachennoù-se e kreskje kalz o bloavezhiañ avaloù-douar, ur binvidigezh e-skoaz ar gouel-mikaelioù bihan a dennent diouto. Hag evel-se e rankas kalz mevelien kuitaat o fennoù-tiez, e-lec'h ma c'hellent magañ ha sevel o zud e-ser koumanantiñ en tiegezhioù. Darn a yeas da benn-ti sec'h pe d' ar vourc'h da chom pa ne guitaent ket ar vro.

(da vezañ kendalc'het.)

Ar Banniel

D'am mignon ker Ernest ar BARZHLG en deus bet ar vadeiezh da lakaat e brezhoneg al linennoù-mañ. Heptañ e vijent chomet dianav.

Adkavet em eus an eñvorennoù krennard-mañ en ur c'harnedig kozh a soñje din bezañ kollet. N' em eus kemmet netra en destenn. Kavout a ra din e c'hellint bezañ talvoudus evel un testeni eus ar pezh a soñje an dud da heul darvoudoù sabatuus ha kriz ar bloaz 1940. Bez' ez int ivez evel ur meleziour eus temz-spered ur Breizhuhelad yaouank hep darempred ebet gant an Emsav. An holl fedoù hag an holl gomzoù dastumet a zo gwirion penn-da-benn.

* * *

E-kreiz ar boultrenn skañv e tiskenne gwetur-dre-dan va zad ar rabin etre an div renkennad gwez sapr glas-du. Ha ni da vont holl gant tizh d' e zegemer : mamm, mamm-gozh, va breur ha me, hag ivez un tiad tec'hidi c'hall kar pe gilhoroù d' am mamm, degouezhet du-mañ ur miz 'oa bennak ; un toupard a zen gant mourroù berr, e wreg, un tamm brav a blac'h, hag o bugale, unan vihan re yaouank evit ma vefe komzet anezhi amañ hag ur mab d' ar memes oad gant va breur ha me, ur paotrig jentil ha speredek.

Abaoe pemzektez e oa degouezhet an Alamaned er vro. Ar re gentañ, an 18vet a Vezheven 1940, a oa bet daou soudard war varc'h-dre-dan. Graet o doa o diazez, evel daou ward, e krec'h hor bali. Ganto ez eas da brizonidi ar soudarded c'hall (ur bataillon) a oa chomet er barrez, unan e pep lec'h, goude ma voe dianket o ofiserien.

Kuzhet o doa ar soudarded c'hall o c'hirri-samm en hor bali ha torret, diframmet ha joget e oa bet ar skourroù ganto, pezh a zisplijas kalz d' am breur ha din, rak desket e oa bet dimp kaout truez ouzh ar gwez. Ha neuze, Gallaoued e oant !

265

Ne gredemp ket kalz mont betek penn ar rabin. Spurmantiñ a raemp an daou Alaman a-dreuz ar brankoù. Tremen a rae ar soudarded c'hall dirazo en ur skeiñ o armoù war ur bern hag o harnez war ur bern all. Goude ez aent un tammig pelloc'h d' en em gendastum en ur park. Darn, avat, a gemere ar gwenodennoù, ar re a oa fin a-walc'h evit sachañ o skasoù ganto.

Setu mare koan. Emaomp bodet holl en-dro d' an daol pa welomp ar c'hentañ karr-dre-dan alaman o tiskenn ar rabin, o tremen kuit da dortal, ar pezhioù divergont, war al letonenn disec'het ha rousaet gant an amzer sec'h. Ha setu meleganed yaouank o gwiskamant liv ar c'haol, dizarm, dimp da welout, da vihanañ, o tont da skeiñ war dor gwerennet ar sal-debriñ.

Trumm en em gavomp en hor savioù, enkrezet. Mamm, avat, a chom difrom a-walc'h hag a ya da zigeriñ goude bezañ gourc'hemennet d' an holl azezañ. Met mont a reomp war he lerc'h. Hag hi da gomz saozneg a ouie mat gant unan eus an Alamaned. Fellout a ra dezhañ gouzout hag-eñ ez eus soudarded en ti. Derc'hel a ra ar gaoz goude ha reiñ a ra d' an toupard lod eus o freizh-brezel : sigaretinier dilezet gant ar Saizon war an tec'h.

Setu aze penaos en em gavis evit ar wech kentañ gant Alamaned.

E tu-hont d' ar soudarded kalz-kalz a dec'hidi all - un amheuliadeg gwall drist - a oa tremenet war an hent. Echu e oa bremañ hag e-pad an noz e krogas un

amheuliadeg all, hini ar " panzer" -ien, a badas un devezh hanter.

E-keit-se, an nijerezed " Messerschmitt " a vouzare ac'hanomp gant an izel e oant, ret dezho ober chiboud a-us d' hor chiminaloù hag hor gwez-sapr.

Mamm he doa lavaret dimp

« Dalc'hit soñj, bugale, n' ankouait biken ar fasadenn a zo bet roet dimp ! »

Mamm a zo ur C'hallez.

Daoust din da vezañ nemet ur bugel, e sellen en-dro din abaoe ma oa krog an " iskis a vrezel ". Gwelout a raen doareoù ar C'hallaoued, ne soñjent nemet en un dra : sachañ pep hini d' e du, an hini a dap a dap. Kavout a rae din ne oant ket dellezek da c'honit ar brezel.

266

An deiz war-lerc'h ma oa tarzhet ar brezel - edon c'hoazh eCaen (1), e skolaj Santez-Vari - e lavarais da unan eus va c'heneiled c'hall :

« Ma va faotr, setu krog ar brezel.

- Un taol kaer ! ma soñj dit, emezañ, ez on-me nec'het gant se ! »

Setu hepken ar pezh en doa kavet da respont. Me ne oan ket aet kennebeut kalz pelloc'h war an taol, n' em boa ket klasket diouganañ dibenn ar brezel ha ne welen liamm ebet etrezañ ha va zemz-spered breizhek, ket an disterañ hini.

Ne oan nemet ur bugel dizesk ha ne oa den evit va c'helenn, ne oa ennon nemet santimantoù dispis ha distag an eil diouzh egile. Lennet a-walc'h em boa war kazetenn va zad e oa bet Debauvais ha Mordrel barnet d' ar marv. Dalc'het em boa soñj, met hep prederiañ.

Un devezh, setu me o lavarout d' am mamm n' ouzon ket perak (ha n' ouzon ket kennebeut penaos e oa difluket se em spered) :

« Me 'soñj din e vo gonit an Alamaned da gentañ ha gonit mat zoken... met diwezhatoc'h, emichañs, e vint koll. »

Ar pezh am boa lavaret e dibenn ar frazenn a oa, moarvat, kement hag ober plijadur dezhi. Respontet he doa din :

« Evel just, dalc'hmat ez out bet evito, ne dout nemet ur Boch ! »

Ha koulskoude ne oa ket gwir. Abaoe ma oan bihanik e oa bet roet din da lenn levrioù eus ar rummad " Patrie " e veze kontet enno a-hed hag a-dreuz traoù spontus graet gant ar " Voched ". Hag evel just chomet e oa disfiz em spered enep dezho ha padet en deus an disfiz-se a-hed ar brezel.

* * *

Hag an devezhoù o doa tremenet. Goude ar gweturioù hobregonet alaman, e oa deut an hent da vezañ sioul. Bremañ ne veze gwelet koulz lavarout tec'hiad ebet ken.

N' em eus ket soñj mat, n' hor boa resevet keloù ebet diouzh va zad kaset da Bondi evit kemer lec'h ur barner yaouank aet d' ar brezel. Kompren mat a rit bremañ gant pegement a blijadur e welemp anezhañ oc'h erruout. Va breur Alan ha me a voe ar re gentañ war stleug e garr-dre-dan o pokat dezhañ.

(1) e-lec'h ma oa bet anvet va zad daou vloaz a-raok.

267

Tomm en doa. Soñj am eus c'hoazh eus e c'hwez, c'hwez va zad : ret eo lavarout ne oa nemetañ a gement a vutune en ti. Ur gwiskamant sklaer a oa en-dro dezhañ. Soñj am eus eus e dro-linenn. Bez' e oa warnañ neuz un den yaouank, doareoù un den-jentil, un aotrou kaer, ur gwir aotrou penn-kil-ha-troad. Ha neuze, bez' en doa ur c'harr-dre-dan en ur mare ma veze ret da gement a dud mont war o zreid.

An deiz-se e voe kannad va Bro, evit ar wech diwezhañ, ya, an hini diwezhañ !

Pokat a reas dimp en ur gontañ pegement en doa soñjet ennomp.

« En em c'houlenn a raen hag-eñ ne oa ket bet un emgann bennak e Malnoe. Klevet em boa e oa bet devet an ti hag aon bras am boa d' ho kavout marv. »

Ha kerkent goude en em droas davet an tammig toupard a enseller-asurañsoù (moarvat, e vefe bet kerkoulz gantañ gwelout anezhañ e lec'h all) :

« Gouzout a rit emamp o vont da vezañ dieub ? »

Ha raktal goude :

« Laouen e vo Yann-Vari... Distroet eo Debauvais ha Mordrel da Vreizh da heul an Alamaned. Ur C'huzul Broadel Breizh a zo bet bodet e Pondi. Seblantout a ra an holl bezañ a-du hag an traoù mont didermal war an tu-se. E parrezioù 'zo emañ banniel Breizh war an ti-kêr. E Breizh-Izel, evez klevet beleien o tegemenn er gador-sarmon : « Emaomp oc'h adtont da vezañ Breizhiz... » Ya, an holl Vretoned a seblant bezañ a-du, hervez ar pezh am eus klevet ha gwelet en holl lec'hioù ez on tremenet enno (1). Piv en defe soñjet se : ar Stad Vreizhek a ya da vezañ adsavet. An *Heure Bretonne*, kazetenn an " aotonomisted " a vez lennet dre-holl. Degaset em eus un niverenn evit Yann-Vari. »

Me da lavarout dezhañ 'vat :

« O, ro anezhi din, tadig. »

Va zad a gendalc'has :

« Evidon-me, dleout a ran anzav ez on Breizhad a-raok bezañ Gall. »

An tammig enseller-asurañsoù a oa pell eus dislavarout anezhañ. Kompren a-walc'h a rae e klaske holl " dud vat " Breizh chom hep bezañ friket war ar memes pillig ha Bro-C'hall trec'het. Pegeit en deus kanet goude war an ton-se ? N'ouzon ket.

(1) Karget e oa bet va zad gant gouarnamant Bro-C'hall d' ober un enklask war an " emrenerezh breizhek ". Ha setu perak en doa eoul-maen hag e c'halle bale evel ma kare.

268

Met va zad n'en doa ket echu :

« Deomp da welout Yann (1) emezañ, kement ha degemenn dezhañ ez a Breizh da vezañ dieub, kontant-bras e vo, un tamm brav a lorc'h eo an hini a vo ennañ. »

Yann gozh a oa war dreuzoù e zor, e krec'h e skalier maen. O kousket da greisteiz e oa ha trouz karr va zad en doa dihunet anezhañ.

« Arsa Yann ! Gouzout a rit emamp o vont da vezañ dieub ? Bevet a-walc'h ho po evit gwelout se, Yann gaezh (tost da 80 vloaz e oa).

- Hola 'vat, Aotrou, daoust hag e vo ret c'hoazh d' ar Vretoned bezañ

soudarded evit Bro-C'hall ?

- Ne vo ket, laouen, se 'zo sklaer, peogwir e vimp distag, distag-lib, »
eme va zad.

An deiz-se a zo bet an hini kaerañ eus va buhez. Biskoazh n' em boa karet
kement hon ti kozh, hor gwez bras hag hon aergelc'h a-bezh. Biskoazh ne oa bet
Malnoe un domani ken burzhudus, biskoazh n' en doa luc'het kement an heol !

Ul levenez divent ha don, ul levenez skedus, glan, hep an disterañ
koumoulenn du a gargas va c'halon ha va spered. Al lusk-se a zo chomet em
c'hreiz hag a zo kentañ eienenn va buhez.

« Ret eo dimp lakaat banniel Breizh war hon ti, » en doa lavaret va zad

« Diouzhtu, » em boa respontet.

« Marteze e vefe gwelloc'h gortoz ur c'houblad deizioù ac'han ma vo sur,
n'eo ket kaset an aferoù da benn c'hoazh. »

Ne oa ket ur banniel a seurt-se en ti ha divizet e voe ober ober unan war
an tomm. Kavet e voe un troad skubellenn a voe livet e du, un tamm lien gwenn.
En un doare dic'hortoz e voe echuet, hor mignon gall, hag a oa dorniet mat, a
zeuas a-benn eus an erminiged a voe staget war an tamm danvez.

Setu aze ar banniel breizhek a voe an hini kentañ eus ar rannvro o strakal
en avel abaoe m' he doa kollet Breizh he frankiz. Na dit ket d' ober goap,
marvet e vefemp evit hor banniel a voe skeudenn ar Vro e-pad un toullad deizioù.

(1) Yann Gicquel a oa ur servijer kozh eus hor familh, genidik eus Pispiriag.
Bet e oa blenier-karroñs, gward-chase, melestrour, en ur ger, mat e oa da bep
tra. Dleour on dezhañ eus an hanter eus va c'harantez evit Breizh.

269

Stagañ a ris anezhañ war pondalez diavaez Malnoe, goude ma voe aet va zad
kuit, rak eñ ne oa ken a-du.

Goude eo chomet hor banniel war e gemend-all (dastumet un tamm poultrenn
gantañ evelkent) e kambr va bugaleaj. E-pad ar marevezh gwashañ, e koachis
anezhañ a-drek an armel.

Ar sizhunioù war-lerc'h a voe implijet gant va breur ha me e-dro d' ar
fuzuilhoù hag ar c'hartouchennoù dilezet gant ar soudarded c'hall. Stagañ a
raemp ar fuzuilhoù war gern hor sapr uhel, a-hed korf ar wezenn. E-kichen pep
fuzuilh e lakajomp ur vuzetennad kartouchennoù. Diwezhatoc'h e voe kuzhet pep
tra ganimp dindan diri aoter ar chapel gozh. Ar bloaz goude ec'h anavezen al "
Lu Brezhon " ha gout 'ouien eta da biv reiñ va arsanailh. Met un darvoudig sot
pitolh a c'hoarvezas, chom a reas sachet ur c'harr hag an armoù a vanas war va
choug. Roet e voe din neuze urzh d'o distrujañ, gant aon e vefent kavet gant an
Alamaned. Pezh a ris gant kalz a geuz en ur zarc'haouiñ anezho e poull an
Dervenn Vras, dindan ar roc'h, e-kichen ar stivellig.

D' ar mare-se e oa peg an debron en teodoù hag ar milinoù en-dro 'vat !
Hor mignon gall Jañ-Pier en doa tennet preñved diouzh fri ar perukenner a oa
ivez ar sakrist :

« Amañ ez omp holl a-du gant difennerien Bro-Vreizh. »

An *Heure Bretonne* a oa erru e ti ar varc'hadourez vutun ha diskouezet he
doa an niverenn din gant ur minc'hoarzh. An " tad " Divay, ar fornier, en doa
lavaret en ur reiñ din un dorzh-vara :

« Prenet em eus ur gazetennig hag a blij din. Lennet ec'h eus anezhi ? Pe
vin daonet, Bretoned omp, hag ez omp ! »

Aet e oan gant va marc'h-houarn betek Felger hag eno an dimezell gozh Feuillet he doa lavaret din en he zammig levr di :

« Va Jezuz, ni, 'vel ouzoc'h, a zo Bretoned. »

« Didiac'h ! Bretoned omp, n'omp ket 'ta ! » en doa lavaret ivez an aotrou Gaudin, noter kozh va familh, ha reiñ a reas hemañ degemer da izili kentañ S.B.B.

D' ar c'houlz-se ivez, e oa, a-hervez, e Roazhon, an arc'hantour L. oc'h aozañ ur moneiz breizhek a dalvezfe teir gwech hini Bro-C'hall. E gwirionez, e-pad an nebeut deizioù-se, ne oa e kêrioù ha kêriadenoù-se eus Breizh-Uhel nemet Bretoned, e-giz gwechall en Dugelezh. Evel da netra e oa aet kantvedoù a-bezh gant an darvoudoù iskis e oamp o paouez gwelout abaoe donedigezh an Alamaned.

270

Ya, ankouaet e oa, evel un huñvre bonner, al lodenn eus an istor a groge gant emgann Sant-Albin-an-Hiliberenn hag a echue gant amheuliadeg ar " panzer "-ien alaman war an hent bras.

Holl vugale Vreizh a oa addeut da vezañ Bretoned nemetken, evelseik, dindan taol bazh-tud Marzhin dihunet. Siwazh, ne badas ket an huderezh, er sizhunioù a zeuas war-lerc'h, ec'h adkavas pep hini pouez an istor hag ar sklavelezh. Ne voe ken nemedomp-ni, soudarded Vreizh, o terc'hel da stourm hon-unan, troad-ouzh-troad, evel Kouc'houlin, o klask tapout krog e flamm ar frankiz evit e zerc'hel uhel a-us d' hor penn.

Distreiñ a reas va zad. Ha dieubidigezh Vreizh ? Diskenn a ris prim-ha-prim ar viñs, met unan all en em gavas en traoñ buanoc'h egedon : an enseller-asurañsoù. Hag eñ da stardañ e zorn d' am zad en ur c'houlenn :

« Penaos emañ kont gant aferoù an emrenerezh ?

- Se a zo un dra echu, eme va zad. Ur c'hwitadenn n' eo ken. Peogwir emañ an Alamaned a-du, ez a an dud a-enep. Ha n' eo ket me, pichoñs, a yelo da sikour diskar ar Frañs ! »

Adsevel a ris gant an diri betek va c'hambr, hep ur ger. Teñvalaet e oa an ti hag an holl draoù a oa ennañ, deut e oa pep tra da vezañ boutin ha dilufr. Gwasket e oa va c'halon gant un dorn kriz, kriz spontus. Hogen mirout a ris va glac'har evidon ha den ne welas netra.

Tennet eus va danevell paotrig yaouank.
Lakaet e brezhoneg gant Ernest ar Barzhig.

ISTOR BREIZH LA BORDERIE

troet gant ROPARZ HEMON

Brezel Bleaz ha Monforzh

DIBENN AR C'HENTAN MAREAD

Roue Bro-Saoz ha Roue Frañs e Breizh
(Du 1342 - C'hwevrer 1343)

Edouarzh III e Breizh.

D' an 20 a viz Gouere 1342, Edouarzh III, roue Bro-Saoz, a lavare e vije e berr amzer war an Douar-Bras, hag urzh a roe da gempenn armoù evit ar soudarded a dlee mont gantañ.

D' an 23 eus ar miz-se, e tisklerie e oa graet e venoz da vat gantañ ober an treizh dizale.

D' an 20 a viz Eost, e c'houlenne digant eskibien e rouantelezh pediñ evit berzh e ergerzhadegoù-brezel da vezañ graet war un dro e Frañs hag e Bro-Skos

D' ar 4 a viz Here, edo e Sandwich e kontelezh Kent, prest da lestrañ, war a hañval rak reiñ a rae d' ar c'hañseller ar siell veur a dleed implijout en ezvezañs ar roue, ha d' ar 5 e karge e vab henañ Edouarzh, lesanvet ar Priñs Du, da ziwall ar rouantelezh.

D' ar 6 a viz Here, ez eas da b-Portsmouth evit lestrañ. Fall oa an avel, hag e rankas gortoz betek an 23 evit kaout gwelloc'h amzer. Ne oa ket an amzer gwall vat koulskoude. Eizh devezh e padas an treizh. Al listri a zegouezhas e Brest kentderc'hent Gouel an Hollsent, d' an 30 a viz Here.

A-raok kuitaat Bro-Saoz, Edouarzh III en doa klevet sur-mat e oa bet trec'het Roperzh Artez e Gwened ha gloazet da vervel. Marteze zoken e ouie e oa marv.

Ur wech e Breizh, e fellas d' ar roue kaout digoll eus an droukverzh hag ar marv-se. Ha padal, hervez ur c'hronikour a ouie mat an traoù peurliesañ, edo, kerkent hag erru, o hemolc'hiñ demmed en ur maner a oa da zugged Vreizh, e-kreiz ur c'hourliorz a bemzek lev tro.

272

Meur a ziell sinet gantañ a chom c'hoazh, eus etre ar 4 hag an 12 a viz Du, graet e maner " La Rozère " pe " Le Rosier ", a c'hell (hervez Yann Lemoine) bezañ al lec'h anvet " Le Rosier " e-kichen bourc'h Plougastell-Daoulaz, nepell diouzh Brest. Hogen eno n' eus bet biskoazh ur maner piaouet gant duged Vreizh (1).

Raktres Edouarzh III.

Hep mar ne lakae ket Edouarzh III e holl breder gant an hemolc'h, da vihanañ gant hemolc'h an demmed. Edo o klask hag o tastum keleier hag o sevel raktres ar brezel.

12.500 a soudarded, a c'haller krediñ, a oa en e arme, an niver roet gant Froissart. Ouzhpenn se en doa tud engouestlet e Breizh gant heulierien Vonforzh. Ne dleent ket bezañ re stank, rak ar bobl a chome diseblant ouzh ar stourm etre

an daou gevezer. Lakaomp en doa marteze 15.000 pe 16.000 a soudarded en holl, a-walc'h, gant o implijout hag o ren ervat, da c'hounit Breizh.

Euñ hag ijinus e oa raktres-brezel Edouarzh III. E bal oa kemer teir c'hêr : Gwened, Naoned ha Roazhon. Gwened a oa ar porzh-mor pennañ en aod ar c'hreisteiz, alc'houez Breizh-Izel. Roazhon ha Naoned a oa evel div zor d' ar Frañsizien evit mont da Vreizh-Uhel, ha ret e oa o serriñ kloz evit mirout outo da dremen.

Kerzhadeg ar Saozon.

War-dro an 10 a viz Du, ez eas Edouarzh en hent. D' an 11 edo e Karaez. Eno e rannas e armead e div gevrenn : unan, renet gant kont Northampton, a aloubas kreiz ar vro, o kemer kêrioù an eil war-lerc'h eben, en o zouez Pondivi, Roc'han, Plouarzel, Malastreg, Redon. Hep mar ebet e kerzhe trema Roazhon.

(1) Hervez un enklask graet gant Ivona Martin, al lec'h anvet gant La Borderie, er c'hreisteiz da vourc'h Plougastell, a reer anezhañ bremañ " Ar Rozeg " e brezhoneg ha " Les Rosiers " e galleg.

273

Ar gevrenn all, ar roue e-unan en he fenn a skoas eus Karaez etrezek ar c'hreisteiz, a gemeras Ar Faoued ha Roc'h-Periou, hag o tostaat ouzh ar mor en ur vont war-zu ar reter, e kemeras Pouskorv d' an 19 a viz Du, ha neuze Gregam. Eno e chomas ar roue c'hwec'h devezh, eus an 21 d' ar 26 eus ar miz. D' an 21, e reas e venoz lakaat kas korf Roperzh Artez da Vro-Saoz hag e roas urzh da lidañ e obidoù war an ton bras.

Skrivañ a eure d' e gañseller ha d' e deñzorier :

« An Aotrou Roperzh Artez hor c'henderv o vezañ aet davet Doue, e kasomp e gorf da Vro-Saoz abalamour d' ar geneilded hor boa en e geñver. Gourc'hemenn a reomp deoc'h ma vezo kaset d' an douar gant ar Vreudeur Brezegourien en hor c'heoded a Londrez, en doare a gavot gwellañ evit hon enor. Roet dindan hor siell brevez e Gregam, d' an unanvet deiz warn-ugent a viz Du, er c'hwezekvet bloaz eus hor ren e Bro-Saoz, hag en trivet bloaz eus hor ren e Frañs. »

E Gregam ivez hep mar e kasas ar roue anaouderien hag ijinerien evit studiañ an doare da sezizañ Gwened, pezh a voe graet e deizioù diwezhañ ar miz. A-raok ar 6 a viz Kerzu. Edouarzh III a zistagas diouzh e armead ur bagad, renet gant konted Norfolk ha Warwick ha Hugh Spencer evit sezizañ Naoned (sellit ouzh al lizher izeloc'h).

Kiladeg ar Frañsizien.

Dirak kerzhadeg an armead saoz, galloudek hag aozet-mat, e rankas ar Frañsizien-ha-Brezhoned kilañ ha klask repu a-dreñv startañ murioù o c'hreñvlec'hioù. En toleadoù eus Breizh ma edo e arme o tremen, Edouarzh III a roas urzh da espern ar vro muiañ ma c'halled. Difenn a reas lazhañ ha tangwallañ ; erbediñ a reas chom hep kemer muioc'h eget ma oa ret evit bevañ ar soudarded. An darn-se eus an dugelezh a blegas dirazañ hag a anavezaz beli kont Monforzh.

D' ar 5 a viz Kerzu 1342, e skrive ar roue d' e vab henañ ar Priñs Du, chomet e Bro-Saoz :

« Va mab karet, gouzout a reomp hoc'h eus c'hoant bras da gaout keleier mat ac'hanomp hag eus hor stad... Reiñ a reomp deoc'h da anaout hon eus marc'heget kalz dre zugelezh Vreizh, a sent bremañ ouzhimp, gant kêrioù kreñv ha fortarasoù, da lavarout eo kêr Blouarzel, kastell ha kêr Valastreg, kastell ha kêr Redon, holl mogeriet-start. Gouezit ez eo deuet a-du ganimp baron Klizun, unan eus uhelañ tud Poatev, ha pevar baron all, aotrounez Louzieg, Machikoul, Raez, Reuz-Meur, ha marc'heien all eus ar vro gant o c'hêrioù ha fortarasoù,

pezh a gonter evel ur splot bras er brezel. Ha kaset hon eus da Vro-Naoned hor c'henderv Norfolk, kont Warwick, an aotrou Hugh Spencer ha marc'heien vannielek all, hag un niver bras a waregerien ha pevar c'hant a dud-armoù evit ober muiañ ma c'hellint... Roet dindan hor siell guzh, e-pad seziz Wened, derc'hent Gouel Nikolaz. »

274

Seziz Naoned.

D' ar poent ma edo oc'h echuiñ al lizher-se, e teuas d'ar roue keloù ar seziz lakaet en-dro da Naoned gant Norfolk ha Warwick. Ne voe sezizet Roazhon nemet goude ar 5 a viz Kerzu. Hogen diouzh an hent kemeret gant kevrenn-arme kont Northampton eo ret krediñ e voe graet ar seziz-se, meneget evel an div all (Naoned ha Gwened) e kronik Froissart hag e kronikoù all an amzer-se.

Froissart a ouie nebeud eus munudoù ha darvoudoù an teir seziz-se. Hervezañ e oa e penn gwarnizon Gwened, a-du gant Bleaz, Olier Klizun hag Herve Leon, ha taolenoù hir a ra eus emgannoù an daou rener-se ouzh ar Saozon. Olier Klizun avat a oa e Naoned. Herve Leon a oa c'hoazh prizoniad e Bro-Saoz. E gwirionez Loeiz Poitiers, kont Bro-Valañs, an hini eo a oa e penn e Gwened. Diouzh lavar Froissart e vije bet e Naoned. Barnit eta pezh a c'haller krediñ eus e zanevell.

Kerzhadeg Edouarzh III e Breizh, hag an teir seziz dreist-holl, a lakae Charlez Bleaz gwall nec'het. Aspediñ a rae roue Frañs da vodañ ha da gas da Vreizh un arme barrek da ziarbenn aloubadeg ar Saozon.

D' an 12 a viz Du, Fulub Valois en doa ret urzh da aozañ dastumlec'hioù-boued bras en Angers, ma tlee kreizenniñ e nerzh. Ma ne rae nemet reiñ urzh d' ar poent-se avat, ur miz da vihanañ a oa ret evit aozañ an dastum-lec'hioù-se, ha da heul kreizenniñ un arme.

E-keit-se, kevrenn-arme Norfolk ha Warwick a oa atav dirak Naoned, o redek dre ar maezioù hag o tagañ ar rakdifenoù. Ur bagad Brezhoned a-du gant Monforzh a oa en em lakaet e ged e-kichen Pirmil, ha distrujet o doa ar pont evit mirout ouzh ar Frañsizien deuet eus Poatev da dremen. Charlez Bleaz en doa aon ivez na gavje e enebourien tud prest d' o skoazellañ e kêr Naoned.

275

Dug Normandia, rener ar soudarded c'hall a oa oc'h en em vodañ en Angers, a yeas un abardaez, evit sikour Charlez, a-raok zoken bezañ aozet e arme, da gampañ dirak murioù Naoned, gantañ ur bagad niverus a-walc'h. E vennad oa tagañ Norfolk ha Warwick antronoz.

En noz-se end-eeun, un nebeut Naonediz a yeas er-maez eus kêr evit en em glevout gant Norfolk ha kavout an tu d' e lakaat da zont e-barzh. Paket e voent gant marc'hegerien a oa oc'h ober ged dirak kamp ar Frañsizien, hag anavezet evel treitourien. Antronoz e voent holl dibennet e Naoned war urzh dug Normandia. Triwec'h a oa anezho.

An dug neuze, o lezel un nebeut soudarded gant Charlez Bleaz, a zistroas da Angers.

Seziz Roazhon.

Ne ouzer ket kalz a dra eus seziz Roazhon. Gouzout a reer avat ez eas ar sezizerien, renet gant kont Northampton, da stourm pell, pe mar karer gwelloc'h, da redek ha da wastañ en trowardroioù. D' an 12 a viz Kerzu, edo Gwilherm Kadoudal gant ur bagad bras a-walc'h a Vrezhoned a-du gant Monforzh e koad Kergarter, oc'h eveshaat ouzh Bro-Dol hag harzoù Normandia betek Pontorson. E-tro an 20, ez eas kont Salisbury da dangwallañ ha da rivinañ fabourzioù Dinan.

Saozon ha Frañsizien tal-ouzh-tal.

Peurvodet e voe an armead c'hall e-tro ar 14 a viz Kerzu, hag un nebeut deizioù goude e voe kaset gant he rener davet an enebourien. E-lec'h mont war-eeun avat etrezek Gwened, ma edo roue Bro-Saoz, e voe lakaet gant dug Normandia d' ober un dro hir hep ezhomm ebet. Eus Angers ez eas da Roazhon, eus Roazhon da Blouarzel. Ar gêr-se a voe kemeret hep stourm, hag eno, war-hed un 40 kilometr bennak diouzh Gwened, etre ar 25 hag an 30 a viz Kerzu 1342, e tiazezas dug Normandia e benngarter. Roue Frañs a zeuas di ivez dizale.

O veizañ pegen risklus e oa donedigezh an armead c'hall, Edouarzh III a c'halvas en-dro davetañ raktal ar bagadoù bet kaset da Roazhon ha da Naoned. Fur e oa ober se. Hervez an darn vuiañ eus ar gronikourien, 50.000 den a oa gant dug Normandia, ha 12.500 hepken gant roue Bro-Saoz, hervez Froissart. Kamp ar Saozon evelato a oa kreñv e lec'hiadur, gouest da herzel ouzh tagadennoù ar Frañsizien, goloet ma oa a zifenoù skrijus, hag eno e talc'he Edouarzh III da c'hronnañ start kêr Wened (Genver 1343).

276

Aloubet en doa ar fabourzioù, tostaat a rae ouzh kêr, hag edo o sevel e ijinoù-brezel evit teurel bannadelloù e-leizh hag evit ober toulloù-freuz er murioù dre zifontañ ha kleuzañ an douar.

Roue Frañs, diouzh e du, a oa ivez e-kreiz e soudarded, mall gantañ dieubiñ Gwened ha Breizh diouzh ar Saozon en un emgann diskoulmus. Ne oa mui nemet c'hwec'h lev etre rakgedlec'hioù an daou gamp. Ar stourm bras a oa o tont.

Kefridi an daou gardinal. Arsav-brezel Malastreg.

A-greiz-holl, daou gardinal, daou legad eus ar Pab, a oa bet e-pad meur a viz o prezeg ar garantez hag ar peoc'h e lez Frañs hag en hini Vro-Saoz, en aner, a zeuas a-benn da lakaat skiant e spered an daou roue. Gounit warno a rejont d' ober un arsav-brezel hir a-walc'h evit prientiñ ur peoc'h padus.

War-dro kreiz miz Genver 1343 e oa. An arsav-brezel a dlee mont betek Gouel-Mikael (29 Gwengolo 1343). Ma ne vije ket sinet ur gwir feur-emglev a beoc'h etre roue Frañs ha roue Bro-Saoz a-raok an deiz-se, e vije astennet an arsav-brezel hep kaout ezhomm d' ober unan nevez, betek Gouel-Mikael 1346, evit reiñ amzer d' en em glevout evit mat.

O c'hortoz, e tlee an daou roue, o c'hevredidi hag o dalc'hidi paouez d' en em gannañ, ha menel evel-se betek ar peoc'h pe dibenn an arsav-brezel, pep tu o virout ar pezh en doa gounezet hag o chom e-lec'h ma edo. Da skouer, ar Saozon a oa o sezizañ Gwened a c'halle lezel o armead eno, - hag he lezel a rejont e gwirionez, - hogen kêr a voe lakaet dindan wardoniezh an daou legad.

Sinet e voe an arsav-brezel d'an 19 a viz Genver 1343, en iliz prioldi ar Vadalen e Malastreg.

Abegoù an arsav-brezel.

Souezhet e c'haller bezañ gant an diskoulm-se roet d' ar gudenn, daoust na oa nemet un dra evit gortoz.

277

Setu aze daou roue galloudus, n'o doa ken c'hoant nemet d' en em gannañ, d' en em ziskar, pe da vihanañ da amprouiñ o nerzh dre ar c'hleze. Unan a oa deuet a-ratozh eus ur vro tramor gant ur strollad bras a listri, hag an hini all, goude bezañ bodet un armead 50.000 den, a oa en em lakaet e-unan en o fenn. Edo an div armead tostik an eil d' eben, krogadoù a oa bet, ar stokadenn vras a ranke dont hep mank. Ha koulskoude ne zeuas ket. Gant daou zen-a-Iliz, n' o doa

graet o strivoù nemet c'hwitañ betek neuze, e voe lakaet harz ha graet ar peoc'h evit tri bloaz da nebeutañ.

Penaos eta e teuas an diskoulm-se, ken dic'hortoz ?

Aes eo kompren ez asantas Edouarzh III d' an dreverz. Peder gwech kreñvoc'h e oa armead e enebour eget e hini. Ar Saoz a c'halle fougeal, hogen spontet e voe, evel ma tiskouez ar goulennoù hag an azgoulennoù a reas e Bro-Saoz evit kaout soudarded ha skoazell, zoken goude emglev Malastreg, en e gemennadurioù eus an 20 a viz Kerzu 1342, eus an 3 hag ar 26 a viz Genver, eus ar c'hentañ a viz C'hwevrer 1343. Urzh strizh a roe enno da gas dezhañ nerzhioù nevez e Breizh, « o vezañ, » emezañ, « ma 'z eo ret-holl dimp kaout skoazell buan digant hor sujidi feal, rak dreist eo galloud hon enebourien d' hon hini ».

Diaesoc'h eo gouzout perak ez asantas Fulub Valois ivez. Emfiziuz evel ma oa dre natur, gantañ un armead peder gwech brasoc'h eget hini ar Saozon, e tlee bezañ sur da c'hounit an trec'h. Pe abeg en doa neuze da gilañ d' ar mare end-eeun ma oa tost da dizhout ar pal ? Ar gronikourien a veneg an amzer fall, ar yenijenn, ar fank, an olboued o dije graet o reuz en div armead, gant poanioù kalet, kleñvedoù ha mervent. O lakaat e oa gwir, e vije bet digarez da stourm gant mall, ha n' eo ket da groaziañ war an trec'h. Pezh a c'haller krediñ eo e oa aozet-fall an tolpad bras-se a soudarded. Ar re furañ eus ar benngadourien c'hall o devoe aon da gas ar bern tud-se d' en em gannañ gant ar vrezelidi saoz, gourdonet ha kenurzhiat kalz gwelloc'h, ha kendrec'hiñ a rejont ar roue e oa ret paouez. Ma vije bet emgann, e vije bet gwelet hep mar dirak Gwened pezh a dlee c'hoarvezout diwezhatoc'h e Crécy.

Goude arsav-brezel Malastreg.

Hervez e gemennadurioù diwezhañ evit lakaat bagadoù soudarded nevez da vezañ kaset dezhañ eus Bro-Saoz (26 a viz Genver ha kentañ a viz C'hwevrer 1343), Edouarzh III a gave diaes krediñ en doa roet ar roue Fulub VI e asant leal d' ar feur-arsav-brezel, hag aon en doa na adkrogje ar stourm dizale. Fraziañ a rae. Fulub Valois a zistroas da Frañs gant an darn vrasañ eus e arme.

278

An arme saoz a voe divodet ivez. Ar Saozon a yeas en-dro d'o enezenn dre veur a hent. Ar varoned hag ar varc'heien vrezelgar evelato, ken Saozon, ken Frañsizien, a gerzhas da Vro-Spagn evit en em zigoll. Eno, a lavared, e vije un emgann meur d' an 11 a viz Ebrel etre ar Vaourien hag ar Gristenien.

Edouarzh III a chomas c'hoazh ouzhpenn ur miz e Breizh goude skoulmidigezh trevez Valastreg, war a hañval, en e gamp e-kichen Gwened hogozik an holl amzer. Bez' ez eus aktaoù graet gantañ eus an 20, 22, 23 a viz Genver 1343 « dirak Gwened », un all eus ar c'hentañ a viz C'hwevrer « e porzh ar Mor-Bihan e Breizh ». D' an 21 a viz C'hwevrer, edo e « Lokmaze e Breizh ».

Distro Edouarzh III da Vro-Saoz.

Eno, en deiz-se end-eeun hep mar e lestras evit distreiñ da Vro-Saoz gant e goskor hag e ambrougerien. En unan eus e listri e oa dugez Vreizh, kontez Vonforzh, gant he mab oadet a dri bloaz. War hemañ e lakae Monforzhiz o holl spi abaoe ma oa bet prizoniet e dad, hag a bouez e oa mirout na vije paket gant e enebourien.

Hag int o klask e wareziñ, e voe tost dezhañ koll ar vuhez. War-bouez nebeud ivez, Edouarzh n' en dije ket adwelet e rouantelezh. Ur gorventenn spontus a darzhas dirak Lokmaze, a badas eizh devezh. Hejet-dihejet e voe al listri, skignet, darn anezho distrujet. Dek devezh goude, d' an 2 a viz Meurzh, ar roue a dapas douar e Weymouth, e kontelezh Dorset, hag an eil antronoz edo e Londrez. E-keit-se e tilestre Janed Flandrez gant he daou vugel yaouank (he merc'h hag he mab) en aod kontelezh Devon. En Exeter e chomas betek Pask.

Stad Bleaz ha Monforzh e dibenn kentañ maread ar brezel.

Gant an darvoud a wall ziougan-se ez echu kentañ prantad ar brezel etre Monforzh ha Bleaz.

279

Emellerezh ar Saozon e Breizh e 1342 a adsavas ervat nerzh Monforzh, hep reiñ dezhañ krenn hag assur an tu-gounid war e enebourien. Fiziañs ar Frañsizien-ha-Brezhoned, chomet start ha diharell betek neuze, a yeas war wanaat goude dieubidigezh Vrest, trec'h Montroulez, ha zoken, daoust ma c'hwitas en diwez, kemeridigezh sebezus Gwened gant Roperzh Artez. Ergerzhadeg-vrezel Edouarzh III a reas muioc'h c'hoazh. Terriñ a reas fouge, ha diskar e doare pe zoare kevredad renerien uhelidi Vreizh unanet gant Charlez Bleaz. Embann o doa graet re daer e ranke hemañ trec'hiñ, harpet ganto evel ma oa.

An hini lorc'husañ anezho, Roc'han, en doa gwelet e ziv gêrbenn, Roc'han ha Pondivi, kemeret ha laosket gant Edouarzh III. Lod eus ar varoned-se eta a zeuas buan d' en em unaniñ gant tuad Monforzh, a oa ivez tuad ar roue saoz galloudus. Gwir eo ne chomjont ket pell gantañ, nemet Louzieg ha Klizun.

En diwez, ouzhpenn ar c'hestell hag ar c'hêrioù a eil renk kemeret gant Edouarzh III, a vanas a-du gant Monforzh, Gwened, evel a welimp, a gouezhas evit mat etre daouarn roue Bro-Saoz, hag a chomas, betek fin ar brezel, goude Brest, al lec'h kreñvañ e dalc'h Monforzhiz, hag o gwir gêrbenn.

Gwander tud Vonforzh oa ma vane c'hoazh o rener prizoniad Fulub Valois.

C'hoariva brezhonek

Setu erru an hañv hag aet ur bloavezh all e-biou ! Bremañ p' eo ehanet Strollad ar Vro Bagan da vont en-dro evit ur frapad e c'hellomp ober evel warlene, taoler ur sell war ar pezh a zo bet graet ha tennañ kentelioù ma vez kavet da dennañ. Kendalc'her e raio ar strollad da zisplegañ e bezhioù er c'hozh-amzer hag er goañv, kement ha lakaat un tamm buhez vrezhonek er vro, da c'hortoz e vefe desket pezhioù-c'hoari nevez. Daou bezh a zo bet kempennet gant hor strollad er bloaz-mañ : MEURLARJEZ skrivet gant Roparz Hemon hag un all diwar DOGAN Jakez Riou.

Tro am boa bet da glevout Meurlarjez er radio ha d'e lenn diwezhatoc'hik. Brav-tre am boa e gavet, modern hag iskis, un estlamm. Sed aze a soñjen, ur pezh-c'hoari gant R. Hemon hag a c'hellfe bezañ kempennet evit al leurenn. Hogen ne greden ket hen ober. Aon da voc'hañ al labour pe disfiz ? Dreist-holl evit pezh a selle tudenn Veurlarjez, un duden dreist ordinal anezhi. 'Barzh-ar-fin e voe kavet un den barrek d' e c'hoari ha war aters ur vignonez e krogjomp da bleustriñ. Souezhus eo penaos e c'hell ur pezh-c'hoari kemm, penaos e teu da vezañ ul lodenn eus buhez ar re a labour warnañ, en ur ober un nebeut mizioù. Ha pegen diaes eo c'hoari ur pezh dres evel m' eo bet skrivet gant an oberour. Un nebeut traoù a zo bet cheñchet e-barzh **Meurlarjez** dre ma 'z aemp donoc'h ennañ. « *En derou eta, a skriv Y. Olier en e levr diwar-benn R. Hemon (1), en em zoug an teir zudenn gentañ evel ma c'heder e rafent : evel bourc'hizion emouez mat ouzh o dellid ha karget a zereadegezh ; Gwen, ivez, a c'hoari mat he roll a vatezh onest e ti ur pastor. Evit diskouez avat ne glot ket an doare sirius-se gant o gwir natur hag e talc'hont holl ur roll ha ne blij ket nemeur dezho o deus gwisket an teir zudenn ur maskl war o dremm.* »

Er stumm kentañ e tremene an istor e Bro-Gembre, Alois o vezañ pastor diouzh e vicher. En eil stumm ez eo e Breizh eo emañ lec'hiet an istor, Alois deut da vezañ alvokad. Hon Alois deomp-ni a zo maer ur gomun vihan : un den gant ur garg uhel hag a rank dre se sentiñ ouzh reolennoù 'zo eus ar gevredigezh, da lavarout eo ur roll da c'hoari. « *Kemm a ra an daolenn-mañ penn-da-benn pa zegouezh Meurlarjez. Stignet ez eus ur c'hinkladur nevez. Alois, Dora ha Owen a lam o maskloù.* » War dudenn Meurlarjez emañ diazezet ul lodenn vat eus ar pezh. Ha pa lamm e-maez ar voest a zo e-kreiz al leurenn e sav un tamm souezh e-touez an dud : piv eo hennezh, petra ra aze ha petra a deuo da vezañ ? Krog eo ar "suspeñs". War ar maskloù hag a zo gant an teir zudenn gentañ ivez emañ diazezet ar pezh ; hag e-lec'h ober maskloù bihan o c'holeiñ an dremm hepken eo bet gwell ganimp ober re vras ha n' int ket maskloù ken met pennoù tud. Re vray-kenañ hag arouezius-tre a zo bet graet gant ur c'henlabourer deomp. « *En un taol e fell d'an holl tanva ar madoù difennet a-raok ma vo re ziwezhat, ar madoù berzet ouzh bourc'hizion dereat ar grez-hont. Evañ, butuniñ, selaou djazz. Evit echuiñ e stag an holl da zañsal.* » Dañs R Hemon a oa un dañs ruz-botoù bennak pe gof-hakof. Ni avat hon eus lakaet aze un dañs-round peogwir emañ an istor lec'hiet e Bro-Bagan. Reizh-tre e oa eta lakaat dañs-ar-vro, o tiskouez ouzhpenn ar vourc'hizien o tistreiñ evit ur pennad berr da sevenadur o fobl, an hini o deus anavezet marteze pa ne oa ket savet bras c'hoazh an tamm diouto.

(1) " Imbourc'h " 58/1 (1975).

« *A-benn-ar-fin e son daouzek taol hanternoz. Steuziañ a ra kuit Meurlarjez. Kerkent ez adwisk an tudennoù o maskl hag adkregiñ a reont gant o buhez kent.* » « Meurlarjez a zo marv, » a lavar an dud pa vez echu gouel Meurlarjez. Hor mad hon eus graet eus al lavarenn-se. Mervel a ra eta Meurlarjez war al leurenn a-greiz-dañsal, pa son hanternoz e tour an iliz. « Meurlarjez 'zo

marv ; poent eo deomp lakat hor maskloù en-dro. » Marv trumm ar paotr yaouank a lak an dud strafuilhet. Lod a vez troet da c'hoarzhin er penn kentañ, met diouzhtu goude e tav ar c'hoarzhadeg hag e sav un doare enkrez e-mesk an arvesterien. Lavaret zo bet e oa techetoc'h ar wazed da c'hoarzhin eget ar merc'hed. Kizidigezh a-berzh ar re-mañ pe ar c'hoarzh o talvoud da vaskl d' ar wazed evit kuzhat o c'hizidigezh ? Echuiñ a ra ar pezh evel ma oa kroget. Gwazhwelouriezh o deus laret darn ha gwir eo ne deo ket gwall laouen ster don ar pezh-mañ.

Graet hor boa hor soñj c'hoari daou bezh o vezañ ma oa niverus a-walc'h tud ar strollad. Hag evit kempouezañ an traoù unan farsus hag un all sirioc'h. MEURLARJEZ oa ar pezh sirioc'h hag EN DRO DA VARI-SENT gant J. Priel ar farsadenn. Kroget mat e oamp gant pezh R. Hemon pa savas diaezamantou a bep seurt evit hini J. Priel. Re a gaoz a gavemp ez oa ennañ diwar-goust ar c'hoari. Dilezet e voe war-dro Nedeleg ha kemeret DOGAN gant J. Riou. Ouzhpenn ur farsaden blijus ez eo ur pezh diwar-benn ar gwaskerezh a-enep ar menozioñ hag an oberoù breizhek. Kemmet e voe ivez ar pezh-se ha dreist-holl e voe lamet kuit an eil arvest anezhañ ha ne deo nemet un doare " vaudeville " gall.

An arvest nemetañ a voe lakaet da dremen en amzer-vremañ. Diamzeret eo istor monumant an unaniezh e Roazhon ha gwelloc'h eo bet ganeomp ober anv eus seziz an arme war ar vro diwar-goust al labour-douar, ar peskerezh, an ijinerezh, ha neuze gwaskerezh a-enep an emsaverien. Traoù nevesoc'h eta hag anavezet gant an holl e Breizh koulz lavaret. Laret ez eus bet deomp n' hor boa ket kredet komz diwar-benn stagidigezh Breizh ouzh Bro-C'hall, ar banniel gwenn-ha-du hag all... Me 'gav din ez omp aet pelloc'h hag e-lec'h sevel kaoz a-zivout traoù kourmoulok d' ar peb brasañ eus ar Vretoned hon eus diskouezet traoù resis dezho. Mont da c'hoari ur pezh ken engouestlet gant pennadoù ken taer-se war ar maez a oa un dra gourajus. Tremenet eo mat-tre dre ma oa ur farsaden anezhi... Gant an daou bezh-se, unan hag a zo prederouriezh diwar-benn ar vuhez dre vras hag egile diwar-ben buhez ar Vreizhiz a-vremañ, hor boa un abadenn glok ha plijus a-walc'h.

282

Al lavarenn " pezh-c'hoari poblek " a gavomp ez eus c'hwez ar c'hozh ganti. Petra eo ur pezh poblek evit ar re a impij ar ger-se nemet ur pezh savet evit ar bobl, a c'hell plijout d' ar bobl ha dreist-holl hag a c'hell bezañ komprenet gant ar bobl. Traoù 'zo neuze na c'heller ket c'hoari dirak ar " bobl " ? Sed aze 'pezh a soñje tud 'zo diwar-benn MEURLARJEZ, skrivet gant R. Hemon ouzhpenn ! « Va Doue, se n' eo ket poblek tamm ebet ; gwelloc'h e vije bet deoc'h kemer sketchoù Jakez Kroc'hen pe traoù a seurt-se. » Gwir eo ne deo ket ar pezh-se eus an aesañ da gompren. Hen gwelet ervat hon eus da geñver an abadennoù kentañ. Divizet hon eus goude-se d' ober un tamm displegadenn a-raok kregiñ. O ! nebeut-tre a dra : pelec'h edo an istor o tremen gant peseurt tud o c'hoari e-barzh. Mat, gwelloc'h eo bet da-c'houde se. Sioul e chome an dud ha mall warno gwelout an diskoulm. Abeg a c'heller kavout en doare-se d' ober hag a zo un doare " kil-c'hoariva ". Met diaes eo tremen heptañ a-wechoù ha keit ha ma chomo divoaz an dud ouzh ar c'hoariva brezhonek e vo ranket ober gantañ beb an amzer. MEURLARJEZ daoust d' ar pezh a soñje deomp er penn kentañ, ha ganeomp-ni ivez a oa ur c'hempleks a emsaverien, a zo deut da blijout d' an dud muioc'h eget an DOGAN alies, hag a zo aesoc'h koulskoude. Ar wellañ barnadenn am eus klevet eo bet « brav e vedo, fromus evel ar vuhez » da laret eo ez oa ennañ pennadoù laouen ha trist. Ar vuhez hag ar marv. Traoù subtil 'zo n' int ket bet komprenet atav mes petra vern peogwir eo bet santet ar pezh. Ha n' eo ket ret dimp mont da zielfennañ an destenn evel ma 'z eus bet desket deomp ober er skolioù gall. Pep hini a gemer amañ pezh a fell dezhañ. MEURLARJEZ 'zo ur pezh hag e c'heller arvestiñ outañ meur a wech ha bep tro e kaver traoù nevez da zastum ha da brederiañ.

283

Daoust hag e vez merzet eus ur bloavezh d' egile ar c'hemm o tont war dachenn ar c'hoariva brezhonek ? Soñj mat am eus eus an abadenn gentañ am eus bet tro da welout gant tud ar C.D.U.B. e Kêr-Vrest. E 1973 edo hag endeo e teue brav-tre ar c'hoariva ganto. Ur poent zo bet ha n' eus ket keit-se c'hoazh e

veze kavet brav ha saourus kement bramm a veze lezet gant ar strolladoù brezhonek ha pa ve brammoù a-dreuz e ve. Bremañ avat eo figusoc'h an arvesterien ha war figusaat ez aint, ha gwell-a-se... Ma ouezomp-ni ober diouto e wellaimp kalz hor c'hoariva broadel. N' eo ket fall kennebeut e vefe un tamm kevezerezh etre ar strolladoù c'hoarierien ; dre an hent-se ivez e vo degaset gwellaenn dezhañ. Arabat 'vat e vefe enebiezh. War ar memes tachenn emaoomp o stourm, war-du an hevelep pal, gant ma chomo sklaer kement-mañ.

(1) = evit doare.

285

Strolladoù nevez a vez savet diwar ar vuhez c'hoariva a zo er vro. Helibini a vez graet eus an dra-se e brezhoneg 'toare (1). Strollad Bro-Bagan zo ganet un tammig a-drugarez da Strollad Remi Derrien. Daou nevez all hon eus bet ar blijadur da welout war al leurennoù er bloaz-mañ. Tud yaouank Plougin o doa aozet warlene ur pezhig brav-tre e galleg diwar ur vojenn eus o bro. Hevlene eo bet trec'h ar brezhoneg. C'hoari a reont AN TADOU KOZH. N' eo ket re vat 'n holl danvez ar pezh-se na doare-c'hoari an hini-mañ-nen. Met e-keñver labour-leurenn ez eo talvoudus-bras ha skouerius. Paotred Plouziri, int o deus kempennet pezhig Y. V. Perrot E TAL AR POUILL. Yac'h eo ar yezh ha diampach ar c'hoarierien. Gant ma talc'ho an daou strollad-se da vont en-dro ha gant ma kemerint traoù modernoc'h ar bloavezh 'zeu. Strolladoù all e tle bezañ amañ hag ahont met ne vez ket kalz a drouz ganto. Lod a gavo da laret sur on : « Ganeoc'h-c'hwi yañ (1) ez eus tro-gaer a drouz ! ». N' eo ket gant ar blijadur da hejañ hor c'hloc'h e skrivan ar pennad-mañ, ha ne fell ket deomp mont dreist ar roudenn, met ret eo kas brud d' ar c'hoariva brezhonek. Reiñ d' an dud da c'houzout ez eus anezhañ, dister c'hoazh met fougennañ gant ar pezh ez eo dija ha c'hoant dezhañ braaaat ha bravaat.

Warlene (2) am boa skrivet e oa gwell ganeomp mont da c'hoari war ar maez. D' ar poent-se e soñje deomp e oa reizh-tre an dibab-se da laret eo c'hoari dreist-holl evit ar vrezhonegerien a-vihanik. N' hor boa ket santet c'hoazh marteze ar pezh a oa dispac'hel en dibab-se : digreizenañ ar c'hultur a veze gwechall o tronañ er bourc'hioù hag er c'hêrioù, e zivourc'hisaat evit e lakaat el lec'h m' emañ an dud o labourat hag o vevañ. Darn a gav dezho ez eo ar re gozh-Noe eo a zeu da welout ac'hanomp. Pa livirin deoc'h ez eo ar re-se ar re rouesañ en hon abadennoù ! A bep seurt oajoù a vez kavet, an holl rummadoù-tud bodet asamblez, hag int dispartiet e meur a lec'h all gant ar vuhez vodern. Ha ne deo ket gant ar re yaouankañ eo a vez ar muiañ a drouz. En Drenneg da skouer e oa ur vandennad vugale dirak al leurenn bamet gant ar c'hoari ha grik ebet ganto. Sur on ne gomprenent ket mat brezhoneg met chomet int reizh ha deut int da-c'houde da doullañ kaoz ganeomp p' edomp o renkañ an traoù. Strobinnellerezh ar c'hoariva !

An abadennoù-se a ro tro da labourat ha da gaout darempredoù gant tud ar vro. Hag ur souezh eo a-wechoù kejout gant tud emskiantoc'h eget n' eus forzh peseurt emsaver. Un degouezh eus ar c'hentañ eo ivez evit adreiñ buhez da draoù a oa o vont da goll : kanaouenoù, kontadennoù ha dañsoù. Lakaat an dud eta da gemerout perzh en abaden. Ha da sotal neuze gant ar festoù-nnoz floñ-floñ evel ma glasker lakaat e pep lec'h bremañ hep delc'her kont eus sevenadur a-orin an hini-mañ-lec'h. E Breizh ivez ez eus gwaskerezh a-berzh ur c'hultur breizhek standart ha kreizennet ha diaes a-wechoù d' ar re vihan klask kaout o buhez.

Huñvreet em eus un drovezh e oa deut an arvesterien da azezañ war al leurenn hag o doa ar c'hoarierien ranket mont da zisplegañ o fezh e-touez an dud. A-viskoazh ez omp bet prederiet gant an darempredoù a vez etre an arvesterien hag ar re a c'hoari. Anat eo e teu ar c'hoari disheñvel hervez ar saliad tud a zo dirak al leurenn, hag anat eo e ranker c'hoari a-wechoù hervez an dud a zo er sal. Sed aze perak e kemm an abadennoù eus ur wech d' eben. Un dra all a zo avat ha ne vez ket taolet pled a-walc'h outañ. Bez' ez eo ar voger a zisparti al leurenn diouzh an dud. Lec'hiadur al leurenn, uhelder homañ ha traoù all a zo kaoz d' ar voger-se. Ar voger-se a ranker da derriñ. E-touez ar strolladoù brezhonek ez eus bet tro da welout er bloaz-mañ ez eus unan hag en

deus lakaet ar mennoz-se da dalvezout. Hini tud yaouank Plougin an hini eo. Int-i a c'hoari ul lodenn vat eus o fezh e-mesk an dud, c'hoarierien o tifoupañ a-greiz-holl eus a-douez an arvesterien. Strollad Bro-Bagan a zo chomet lent war an dachenn er bloaz-mañ c'hoazh. A-nebeudoù ez a war-raok evelato. E MEURLARJEZ n' eus nemet ur pennad berr-tre a dremen e-maez al leurenn. E-barzh an DOGAN ez eo hiroc'h, hag ouzhpenn ne reomp ket atav kement hag hon eus bet desket e-kerz ar pleustradegoù.

(1) = da vihanañ.

(2) s.o. Al Liamm niv. 171, p. 300.

285

Eizh gwech hon eus c'hoariet betek-hen : e Gwiseni, Plougerne, Lanniliz, Pont 'n Abad, Skaer, An Drenneg, Plouziri, Plouvorn ; e Lambaol-Plouarzel e oamp ivez da c'hoari met siwazh deomp ne zeuas den ebet war hon tro. Dizale e vo boulc'het ur bloavezh all ha ret eo deomp diwar-vremañ klask pezhioù nevez da zeskiñ, diaesañ ha displijusañ tra a zo d' ober. En arvar e vevomp war al leurennoù. Grit berzh hag e vo kanet meuleudi deoc'h, grit kazeg hag e vo graet fae warnoc'h. Buhez an arzourien, petra reoc'h tudoù !

AL LEVRIOÙ

BREURIEZH-VREIZH 1790, gant Erwan AR MENGA, kentskrid ha skeudennaouadur gant Herry CAOUISSIN, 166 pajenn, embannet gant " NATURE ET BRETAGNE ", 38 ru Jeanne d'Arc, Kemper.

« Rouez ez eo bremañ al levrioù-istor a-zivout istor Breizh en hor yezh, » a skriv H. Caouissin er c'hentskrid en deus savet evit al levr-mañ.

Skridoù brezhonek a bep doare a vez embannet en hon deizioù, e stumm levrioù hag e stumm pennadoù kelaouennoù. Pleustriñ a reont war dachennoù niverus ha liesseurt. War dachenn istor hor bro ez eus nebeud a dra avat. Ur vezh eo soñjal ne gaver ket zoken da bremañ ul levr Istor Breizh.

Ur blijadur eo eta gwelout o tont er-maez ul labour a-zivout unan eus pennañ darvoudoù hon amzer dremenet : savidigezh " Breuriez Vreizh " gant Markiz ar Roueri evit difenn gwirioù ar vro a-enep an Dispac'h gall.

Pet Brezhon en amzer-mañ a oar anv Ar Roueri ? Un nebeud marteze o deus lennet levr gallek Lenotre, " Le Marquis de la Rouërie et la Conjuratation Bretonne ". Hogen chom a ra c'hoazh hogos dianav, pa vez brudet-holl tud evel Jorj Kadoudal, na oa ket brogarour rik eveltañ.

Erwan Ar Menga en deus graet, evel ma lavar, « amprestoù bras » diwar levr Lenotre. Furchet en deus ivez e levrioù ha dielloù all, ha taolet sklerijenn war dud a gemeras perzh e doare pe zoare en obererezh Breuriez Vreizh. Anat eo ne voe ket an emsav krouet gant Ar Roueri, « ar C'horonal Armant », un iriennig aozet en ur c'horn a Vreizh-Uhel. Un emsav a bouez e voe, a astennas e levezon war un emsav all, distag dioutañ, hini ar chouanerezh.

Darvoudaouek e voe buhez verr Ar Roueri, enni peadra da sevel meur a romant. Istor Breuriez Vreizh a zo ivez heñvel ouzh steuñvenn ur romant troiennoù-kaer, gant tudennoù disheñvel, a bep oad, a bep dere, a bep temz-spered. Bez' ez eus kavailhoù, emvodoù kuzh, bac'hadegoù, tec'hadennoù. Hag ivez reuzidi ha merzherien, hag evel atav torfedourien, spierien ha treitourien, en o fenn an arc'htrubard Chèvetel. Al lennerien n' o devo ket eta amzer da eneoñ, zoken mar kollont o hent gwechig pe wechig e milendall an degouezhadennoù hag e rouestladeg an anvioù.

Yezh an aozer a zo sklaer hag eeun, resis, hep gerioù nevez diezhomm. Moulet-kaer eo al levr, gant lizherennoù splann, war baper brav, leun a skeudennoù dibabet-mat gant H. Caouissin. Gourc'hemennnoù kalonek a zo dleet dezhañ koulz ha d' an ti-embann.

NOTENNOÙ

Hor Mignoned

Plijet omp o kemenn deoc'h eured Brittia, merc'h da C'houlven PENNAOD, gant Philippe LE ROY, d' an 19 a viz Mezheven.

D' ar sadorn 21 a viz Eost ez eo bet lidet en iliz Plouared eured Evelyne RAOUL ha Laorañs GUILLAUMIE.

Alan AL LOUARN hag e bried, an Ao. hag an Itr. GASTINGER a zo laouen o kemenn deoc'h eured o bugale Nolwenn ha Rens : oferenn-eured lidet en iliz Sant-Stefan (Roazhon) d' ar 4 a viz Gwengolo.

Gwellañ gourc'hemennoù dezho holl, hag hetoù a evurusted d' ar priedoù nevez.

Erwan ROSMORDUC a zo laouen o kemenn ganedigezh e c'hoarig Nolwenn e Roazhon, d' ar 4 a viz Eost 1976.

Dezhañ ha d' e dud, hor gourc'hemennoù kalonek.

Kañv

Kemennet eo bet deomp gant Emglev an Tiegezhioù keloù marv Fred MOYSE, d' ar 26 a viz Mezheven e Frankfurt-am-Mein. Ganet oa bet d' ar c'hentañ a viz C'hwevrer 1908. Koll a reomp ur stourmer kalonek ha dalc'hus, ur c'heneil karadek. D' e wreg, d' e vugale, d' e holl familh ha d' e geneiled e kinnigomp hon tristañ gourc'hemennoù a gengañv.

Profoù

Miz MEZHEVEN :

K. Riou, 15 lur ; E. de St Laurent, 15 ; B. Kadoret, 50 ; E. Leon, 15 ; A. Autret, 15 ; K. Faou, 15 ; R. Tersikel, 5 ; R. Tasel, 65 ; J. Auffret, 5 ; J. Abask, 65.

- War un dro, 265 lur.

MIZ GOUHERE :

E. ar Gag, 5 lur, J. P. D'Haese, 15 ; P. ar Meur, 15 ; N. Peyr, 15 ; J. ar Gwilhou, 65 ; Ph. Cerceau, 5 ; Yann Bizien, 15 ; Cl. Lancheg, 25 ; Y. Le Coeur, 15 ; Dr L. Dorval, 15 ; Anna er Meliner, 15 ; Dll E. Coin, 15.

- War un dro, 220 lur.

Degouezhet eo ganeomp, abaoe derou ar bloaz, 6 072,41 lur a brofoù. Bennozh Doue d' hon holl skoazellerien galonek, a gas ganeomp AL LIAMM war-raok.

Deziadur godell Al Liamm evit ar bloavezh 1977

Deziadur godell Al Liamm a zeuio er-maez e dibenn miz Gwengolo.

Ar priz a zo dek lur an 10 skouerenn. Evel bep bloaz e kaver war lod bruderezh evit Al Liamm, lod all ez eo gwenn o c'heine en doare da lezel lec'h evit skrivañ, ha war lod e kaver ar meneg " Bloavezh mat ", en doare ma c'hellont servij evit kas hetoù d' ho mignoned.

Dav eo resisaat pere a fell deoc'h kaout.

Kasit ho chekenn gant ar goulenn warni da Ronan HUON, C.C.P. 1629 14 Rennes. - Distaol adalek 50 skouerenn.

289

896 koumananter...

... a gontomp e-kreiz miz Eost, lodennet evel-hen : Aodoù an Hanternoz, 141 ; Penn ar Bed, 225 ; Il ha Gwinum, 96 ; Liger-Atlantel, 71 ; Mor Bihan, 57 ; Rannvro Bariz, 134 ; Departamantoù gall all, 101 ; Afrika an Hanternoz, 1 ; Afrika Du, 4 ; Iwerzhon, 8 ; Kembre, 17 ; Skos, 2 ; Bro-Saoz, 5 ; Bro-Alamagn, 7 ; Italia, 1 ; Spagn, 1 ; Helvetia, 3 ; Izelvroù, 5 ; Belgia, 5 ; Stadoù-Unanet, 4 ; Kanada, 3 ; Guadeloupe, 1 ; Haiti, 1 ; Polynesia, 1 ; Aostralla, 1 ; Ceylan, 1 ; Sina (Taiwan), 1.

Un tamm digresk a zo evit niver hol lennerien en estrenvro ; kresk a zo a-hend-all e Bro-Naoned, e Bro-Dreger... hag e Bro-C'hall. Dizale eta e vo tizhet an 900 koumananter ha skoazellet e vimp a dra sur da vont betek ar pal-se.

Hervez ar c'helaouennoù hag ar skingomz en deus ur paotr yaouank eus Brest savet e boelladenn brederouriezh er " bac " e brezhoneg. Gourc'hemenoù dezhañ. Piv a ginnigo dezhañ ur c'houmanant d' Al Liamm ?

Niverennoù kozh " Al Liamm " e gwerzh

Prenañ a c'heller an niverennoù meneget amañ da heul :

- 4, 6, 29, 53, 63, 65, 67, 69 betek 176 (nemet an niverennoù 98, 99 ha 100 hag a zo bet peurwerzhet).

Priz an niverennoù a zo :

- 4 : 4 lur;

- an niverennoù all : 7 lur pep hini (nemet an niverennoù 65, 116, 151 hag a goust 9 lur pep hini, an niverenn 166-167 hag a goust 14 lur).

Tu a zo a-hend-all da brenañ ar bloavezhiadoù klok-mañ hag a goust 40 lur pep hini :

- 1959 (72-77) ; 60 (78-83) ; 61 (84-89) ; 62 (90-95) ; 64 (102-107) ; 65 (108-113) ; 66 (114-119) ; 67 (120-125) ; 68 (126-155) ; 73 (156-161) ; 74 (162-167) ; 75 (168-173).

Ur skoazell a-zoare a zegas deomp ar re a bren niverennoù kozh ar gelc'hgelaouenn ; ouzhpenn, dudi a c'hellont kaout ganto rak kemer a reont, evel ar gwin mat, talvoudegezh gant ar bloavezhioù.

Ar goulenn a zo d' ober digant Per ar Bihan. An niverennoù a vez kaset kuit a vizoù-post.

Ur c'houmananter a glask...

... prenañ niverennoù 14 ha 17 Al Liamm. An neb en dije ar skouerennoù-se da zioueriñ a c'hell skrivañ d' ar gelaouenn.

Lizhiri

Digant ul lenner kembreat, o skrivañ eus Pont-Aven :

« Trugarez deoc'h evit an holl draoù dudies am eus lennet e-barzh Al Liamm e-pad ar bloaz tremenet. Evel ma welit emañ e Breizh o tremen va vakañsoù ha brav eo kavout ur chañs da implijout va zammig brezhoneg. Mat e veje koulskoude klevout muioc'h ar bobl o komz ar yezh e-barzh ar stalioù ha war ar straedoù... »

D.J.D.C.

Digant R. H., eus Kembre ivez (Aberystwyth) :

« Ho trugarekaat a ran evit al lizher ho poa kaset din ur miz bennak 'zo. Aon em eus eo tremen poent din displegañ deoc'h penaos, dre ma faot, em eus koustet deoc'h un tamm mat a boan hag a frejoù ! Koumanantet ' oan d' Al Liamm evit ar wech kentañ dindan an anv Rhisiart Hincks, met p' am eus adkoumanantet e rois ma chomlec'h nevez hag an arc'hant da unan eus mibien Ronan Huon e staj Ploveilh warlene. An anv a lakais war an tamm paper 'oa Rhisiart ap Siôr, ur stumm kembraek eus ma anv, ha n' eo ket Rhisiart Hincks. E-pad ur pennad goude-se em eus bet div niverenn eus ho kelaouenn bep daou viz. N' em eus ket skrivet deoc'h da zisplegañ ar pezh 'zo c'hoarvezet abalamour ma soñjen, ma ! echu eo va c'houmanant ha neuze ne vo ket kaset ken, homañ eo an niverenn diwezhañ a zegemeran dindan an anv Hincks.

Koulskoude, roet 'm eus an eil niverennoù da vignonezed o deus studiet brezhoneg er skol-veur. Unan anezho he deus lavaret a-benn bremañ ma 'z eo a-du da goumanantiñ d' Al Liamm (hag ur plac'h all eus Aberystwyth he deus lavaret memestra). Setu, daoust d'an arc'hant hoc'h eus dispignet marteze, a-barzh nepell ho po div goumananterez nevez.

Moien 'vo d' ober bruderezh evit ho kelaouenn e derou ar bloaz skolveuriek a zeu, ives da vare " Ffair y Glas " pa zeu ar studierien nevez da izili er c'hevredigezhioù-skolaj. Kerkent ha ma vo prest roll-abadennoù hag emvodoù ar " C'helc'h Brezhonek " amañ e kasin anezhañ deoc'h evit lakaat e-barzh Al Liamm... »

Digant T. K. :

« Pa emañ war glask koumananterien, pan deo diaes alies tapout krog en ho kelaouenn e-barzh al levr-di-mañ-levr-di, daoust ma kaver a-wechoù dastumadennoù dizudi-krenn, e kasan deoc'h arc'hant ur c'houmanant-bloaz. »

Digant P. K. :

« Kas a ran ur chekenn-adkoumanantiñ e brezhoneg, daoust deoc'h bezañ goulennet chekennoù e galleg e niverenn diwezhañ Al Liamm.

N' eus netra e-keñver al lezenn a vir ouzh an dud da skrivañ o chekennoù e brezhoneg. Ezel on eus Skol an Emsav ha kroget hon eus da gomz diwar-benn ar gudenn-se ha divizet o deus darn ac'hanomp da vihanañ, da skrivañ chekennoù e brezhoneg. C'hoant hor dije gouzout peseurt degemer a vez graet d' ar chekennoù brezhonek e Breizh. Skrivet hoc'h eus e-barzh Al Liamm e oa kaset re a chekennoù brezhonek deoc'h hag ho poa kudennoù diwar-se.

Ha gallout a rit skrivañ din pet a chekennoù a resevit dre vras, e brezhoneg hag e galleg pet a chekennoù brezhonek a zo bet nac'het, gant piv, ha peseurt abegoù a zo bet roet deoc'h evit nac'hañ ar chekennoù brezhonek ? »

Digant M. B. :

Degemer a ran niverenn diwezhañ Al Liamm skrivet warni siwazh : koumanant echu. Ken moan eo ma yalc'h ma c'houlennan deoc'h ma ne vije ket posupl gortoz betek fin miz Gwengolo a-raok kas deoc'h va adkoumanant.

Kavout a ran mat Al Liamm en abeg d' ar pennadoù a bep seurt a vez kavet e pep niverenn. Plijus eo ivez an notennoù rak reiñ a reont keloù eus an Emsav a-bezh.

Daoust ha ne vije ket posupl kaout pennadoù diwar-benn an arzoù all e Breizh, nann en ur vihanaat plas al lennegezh er gelaouenn, met en ur ober niverennoù tevoc'h ? »

Digant an Ao. Chaloni F. M., Montroulez.

« Ha pegwir e kavan tro e roan deoc'h fougou ha meuleudi evid al labour talvoudus kenañ a rit dre embannadurioù Al Liamm evid hon yez. Anez ar boan a gemerit oll ne vije ket kalz a vagadurez da ginnig da sperejou ar Vretoned. Re a c'halleg a gavont ha re nebeud a vrezoneg. »

Ur bedenn gozh

Hor c'henlabourer Yann Bouessel du Bourg en deus kaset deomp ar gerig-mañ :

« Setu amañ testenn ur bedenn a zo bet displeget din gant un den eus Benoded, an aotrou L., o chom e Saizon (e-kichen Roazhon).

Ne oar ket skrivañ e yezh met komz a ra anezhi dispar. Desket eo bet dezhañ ar bedenn gant e vamm-guñv pa oa eñ bihan-bihan. Ganet e tle bezañ bet ar vaouez war-dro 1835 ha marvet eo e 1931 en he 96 vloaz.

Savet eo bet ar bedenn-se e brezhoneg Fouenant. Ur bedenn-staoliañ eo hervezañ ur bedenn evit argas diaouloù, ha ne veze ket gwelet mat gant ar veleien a zifenne ober ganti.

L. n' en deus ket fellet dezhañ e vefe meneget e anv, rak, emezañ, n' eo ket e oberenn met hini e bobl a-bezh. Me n' on nemet ur benveg o treuskas anezhi. Bezet pe vezo, laouen e vefen ma c'hellfe unan bennak kas din diskleriadurioù diwar-benn an destenn-mañ a gavan leun a hud hag a voem ha diwanet diouzh noz an amzerioù, ken e-keñver yezh, ken e-keñver he ster kuzh.

Skrivit mar plij d' am chomlec'h : Yann Bouessel du Bourg, " Gwennargant ", 4, rue Jean-Macé, 35000 Rennes.

Goulaouig gwenn da belec'h e yez

Mont a ran da Venez Kalvar,

Menez Gwenn.

'Lec'h 'zo tri (oc'h) eskriviñ ha tri (o) lenn

Tri aelig o terc'hel ar goulou gwenn.

Mabig Jezuz 'zo bet ganet,

Staget eo bet war ar groaz

Gant an tachoù bras,

Teir vikadenn (beradenn, takenn) gwad a strinke deus neugn (nec'h ?) e benn

Tre betek seul e droad

Ar gwad be(z)et koue(zh)et war ar plad

Ha revet an Itron Varia a semplas
Be (bez ?) a zisemplas hi ha lavarat (lavaras pe lavaret) :
Homañ zo ur bedenn gaer.

D'an neb ouife hag a lavaro
Teir gwech en deiz pe teir gwech en noz
Biken 'mor na veufe (veuzfe), n'an tan na zevfe
(E) Peuch (puñs) an ifern na gouefo (gouezho) ha baradoz Doue c'hounefo
(c'hounezo). »

291

Killarne 76

Digant ur c'houmananter feal, telennour ha kaner brudet, gouneset
gantañ daou briz.

N' eus ket ezhomm lavarout e oa eürus ar Strollad Brezhon eus ar veaj betek
Killarne.

Dibabet evit ar genstrivadeg " Keltawel ", enrollad er c'henstrivadegoù telenn
ha kan keltiek, daou gentañ pris am boe.

Gwir eo koulskoude n' eo ket an traoù ken eeun hag e soñjer. C'hoant hon eus da
welout ar gouel-se en un doare diuntuek, o tiwall diouzh ar boaz da ziskar a
weler ken alies e Breizh...

N' helled ket lavarout e Killarne : « An holl a zo kelt ; an holl a zo en
abadenn ».

Ar selaouerien a oa penn-da-benn en abadenn, ya ; met selaouerien desket e oant,
hag endalc'het er gouel.

Pobl Bro-Iwerzhon a glaskemp !

Ret eo sklaeriañ an dra-se, ret eo ivez koll touelloù 'zo. Da gentañ, Iwerzhoniz
a zo saoznekaet-tre.

D' an eil, arabat disoñjal : un vro douristel eo Killarne, an dra-se o tezañ
speredelezh ur boblañs. Kerseet eo bet Bretoned ha Kerneviz gant an diouer a wir
spered keltiek.

N' eo ket dre ma kan ur plac'h eus Bro-Skos ez eo keltiek he c'hanaouenn !

N' int ket kelt an holl dud ganet en Drinded war vor !

Dibabet on bet en Oriant gant tud damantus eus keltiegezh va zro-gan ha va zro
seniñ. Er genstrivadeg " Keltawel " ur ganaouenn stumm-rik " Eurowel " a voe
trec'h.

Met strolladoù-barn all a voe disheñvel o doare...

Er c'henstrivadegoù-telenn, an delenn vras ha " klasel " a roas he flas d' an
delenn boblek ha d' ar spered keltiek. Gortoz a raed diganeomp un doare o tont
eus an Hengoun poblek ha sturiet gantañ. Ul laride hag ur rond Pagan nevez a
roas din ur priz kentañ.

E pelec'h emaoe'h c'hwi Amzerioù Barzhel er c'houlz ma oa an delenn sonet hepken
gant ar wazed ?

292

Seizh kevezerez a oa ha div vaouez er strollad-barn...

Abegadennoù ar strollad-se a oa resis ha diskleriet fraezh. Unan eus ar maouezed a oa telennevez e Bro-Amerika, eben e Bro-Iwerzhon.

En un doare iskis-tre ni a zo bet skoet dre gomzoù un arzour killarneat o lavarout e kave hon doare arzourel pinvidikoc'h eget hini Iwerzhoniz, abalamour da levezonoù gresian ha roman diwasket ganeomp...

Hep viruz, dilamm ebet...

MYRDDHIN

Sant-Malo, 30 a viz Gouere 76.

293

An Ti-embann " Dastum "

En deus e gwerzh ar pladennoù-mañ :

- niv. 2 : Bro an Oriant - an Henbont : 30 lur

- niv. 3 : ar Vro-Bagan : 30 lur

- niv. 4 : Bro-Vur-Loudieg : 34 lur

Dizale e teuo er-maez ur bladenn nevez, gouestlet d'ar Vro " Plin ".

Ar goulennoù a zo d' ober da : DASTUM, " Ti Digemer Mad "; 6, rue du Dispensaire, 29213 Plougastell-Daoulas. (Evel ma ouzer ez a paotred DASTUM war ar maez evit enrollañ ar c'hanaouennoù-pobl).

Anthinea

" Anthinea " a zo anv ur gelc'hgelaouenn o plediñ gant kudennoù ar minorelezhioù : Breizh, Okitania, Euskadi, Elzas... Deut eo er-maez an niverenn 9-10, enni skridoù diwar dorn Jean Meyer, Guy Héraud, Hervé Le Boterf ha skrivagnerien all ken anavezet. Priz ar c'houmanant a zo 35 lur : " Anthinea ", B.P. 229, 75827 Paris Cedex 17.

Diskont war levrioù diwar-benn Breizh

An ti-labour keltiek, e Plabenneg, a werzh un toullad levrioù gant un diskont. Sed ar roll anezho :

Talbennoù	Priz boutin	Priz kinniget
Le Rêve fou des soldats de Breiz Atao	33 L	30 L
Une Bretagne libre est-elle viable ?	25 L	23 L
La langue bretonne face à ses oppresseurs	36 L	33 L
Dossier Irlande du Nord	33 L	30 L
Breuriezh Vreizh, 1970	35 L	32 L
AR 5 LEVR A-GEVRET	162 L	130 L

Ar goulennoù a zo d' ober hag ar chekennoù da gas da : Jean-Claude ROUAT, 5, rue Kléber, 29200 BREST, c.c.p. 3967 70 F Nantes.

294

Ar brezhoneg er skol... e 1876

Setu amañ ul lizher e galleg a oa bet kaset d'an 2 a viz Kerzu 1876 da Brefed Penn-ar-Bed gant Ministr an Deskadurezh.

Monsieur le Préfet,

Mon attention a été appelée sur l'instituteur communal d'Ergué-Armel qui, contrairement aux instructions de M. l'Inspecteur d'Académie et malgré les dispositions formelles de l'article 28 du Règlement des écoles, continuerait à faire sa classe en breton exclusivement.

Je vous prie de vouloir bien me dresser un rapport à ce sujet et de me faire connaître en même temps les mesures que vous proposeriez de prendre.

Sinet eo gant Renner Deskadurezh ar c'hentañ derez.

Kavet e vez skeudenn al lizher-se en teuliad " Le Finistère 1800-1914 " embannet gant Dihello Penn-ar-Bed (e gwerzh e C.D.D.P. Kemper, 87, bali Léon-Blum, an Erge-Vihan).

Lizher eus Sant-Malo

Dre dalvoudegezh hag oberiantiz ar c'hevredigezhioù breizhek e c'hell bleuniañ hag en em zispakañ elfennoù ur sevenadurezh o klotañ gant spered ar Vroiz. Ret eo anzav n' o deus ket ar c'hreizennoù sevenadurel ar pouez a rankfent kaout. Gwir eo o deus harpet kanerien nevez ar vro pa oa o tiwan nerzh yaouank ar re-mañ. Hogen n' eus ket, koulz lavaret, a liammoù kenetrezo nag a zarempredoù kennebeut gant ar c'helc'hioù keltiek. Ar re ziwezhañ-mañ, bet e penn an emgann ur mare 'zo bet, ne glaskont ket peurliesañ toullañ hentoù nevez. Ar folklor mod kozh kinniget ganto n' eo ket ken prizet ken - ha meur a unan a vez fastet gantañ - dre ma 'z eo diwanet ha ma klask mont war-raok ur folklor mod nevez Izili ar c'helc'hioù keltiek a en em blij en o fourmenadennoù-sul ha ne vezont gwelet nemeur er c'hentelioù brezhoneg pe istor. (Da nebeutañ, e Sant-Malo, n' eus hini ebet ouzh o daremprediñ ha koulskoude int bet pedet a-walc'h da zont). Moarvat ivez ne vez ket urzhiet mat seurt kentelioù, hag un diouer a vruderezh, ha dreist-holl un diouer a feiz, a zo. Kement-se a zo displeget da skouer er gelaouenn **Keleier Naoned**, er pennad " Enklask war gelenn ar brezhoneg en Naoned ". Dre vras eta e chom war-c'horre labour ur c'hreizennoù sevenadurel hag ar c'helc'hioù keltiek, ar re-mañ o vont c'hoazh gant al lañs bras o doa roet goude ar brezel. Kement ha ken bihan ma 'z eo o c'heneel kevredigezhioù all. Ar strollad politikel SAV en deus savet " Plijadur o lenn ", he fal kentañ betek bremañ aozañ festoù-noz e-sell dastum arc'hant evit labourioù all. Donoc'h war a seblant e fell da baotred UDB mont ; amañ o deus krouet an " Association Culturelle des Pays de Rance ". Strolladoù all a grouont, ar gelaouenn lennegel *Bretagnes*, mont a reont e-barzh ar strolladoù sevenadurel, ha kemer ar penn anezho a wech.

295

Distreiñ a ran da zisplegañ an doareoù evit Sant-Malo. Ar Greizenn Sevenadurel a zo o vont goustadig-meurbet d' an ampoent. Ar c'helc'h **Quic en Groigne** en deus liammoù mat gant kuzul-kêr ha sonn a-walc'h e talc'h da vezañ. Koulskoude ez eo en em ziframmet meur a wech ha diwar-se ez eo bet krouet **Gwik Alet** (nebeut a vuhez ganti evit ar mare) ha kreñvaet ar bagad **Judwal** a Zol, a gont un toullad izili e Sant-Malo. Ar strollad dañs ha c'hoariva **Pamplemousse** a labour alies war an danvez keltiek ha displeget eo bet gantañ pezhioù evel " Arzur ", " Coracle ", "Troellenn ", koulz ha barzhoniezh T. Corbière, P. J. Helias... Siwazh e vank ar c'hoarierien-se, donezonet a dra sur, a arvesterien. Ur gevredigezh all a zo gant er bloaz-mañ, **Mac Law** hec'h anv, enni kalz a arzourien ; a drugarez dezhi ez eo bet graet ur mell tantad Sant Yann, ha deut eo GLENMOR da ganañ e miz Gouhere e porzh ar c'hastell. Oaled ar re Yaouank, renet gant Herve ROY, he deus prientet meur a wech abadennoù breizhek, keltiek, okitaniat. En hañv-mañ avat ez eo deut ar maout gant skipailh-gouelioù an ti-kêr, a zo deut er mogerioù dre e intrudu sonerien ha kanerien eus ar broioù keltiek, pe giz kozh, pe giz nevez. Menegomp hepken ar **Royal Irish Rangers**, an

Dubliners, ar **Gaugers**, an **Triskell**, an **Tri Yann**. Evel m' o dije dalc'het kont an aozerien eus menozioù Ronan LEPROHON, deut da gomz diwar-benn Breizh hag an ergerzh d' ar 24 a viz Mezheven. Peogwir emamp gant ar prezegennoù, menegomp hini Per DENEZ, diwar-benn al lennegezh-pobl, graet d' an 10 a viz Eost dindan baeroniezh Skol-Veur an Hañv.

Setu magadur speredel ha diduamant, o vont en enep da levezon Bariz. Ha marteze e teu Sant-Malo, gant 200 000 annezad er rannvro e-pad an hañv, d' en em santout er mare-se evel kêrbenn Vreizh.

Goude an displegadennoù-mañ, roet hep kalz urzh, e rankan reiñ va soñj e vank dreist-holl amañ, n' eo ket menozioù hogen ar perzhioù eeun-mañ : unaniezh, labour, dalc'husted.

P. A. B.

Kamp ar Vrezhonegerien

Ar bloaz-mañ ez eo bet dalc'het Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien e Breizh-Uhel, e Ti-Kendalc'h (Sant-Visant-an-Oud). Padet en deus 15 devezh, eus an 18 d' an 31 a viz Gouhere.

War-dro 30 den (en o zouez 5 Iwerzhonad pe Iwerzhonadez, unan anezho o tont eus an Alamagn, hag un Amerikan) a zo chomet a-hed ar C'hamp.

Ur c'hamp-studi eo bet : div skol izel a oa (doareoù " Crash Course " a zo bet implijet evit an deraouidi), ur skol-etre pe skol an Trec'h Kentañ, hag ur skol uhel ma 'z eus bet studiet enni testennoù a bep seurt : barzhonegoù, pennadoù politikel ha danevelloù.

An devezh a oa leuniet mat. Etre 9 eur ha 12 e oa skol evit an holl dud. En endervezh staliou-labour e-pad div eur hanter (kan, troidigezhioù, sonenrollañ, pennadoù lennet gant an neb a gare). Goude-se e oa ur bourmenadenn verr ha war-lerc'h koan e oa c'hoazh ur gentel a bade div eur.

296

Evel er bloavezhioù tremenet ne oa ger galleg ebet gant an dud ha dre-se ez eus bet graet araokadennoù bras ganto. Ar vrezhonegerien ampart n' o deus morse lezet a-gostez an deskarded pezh en deus plijet kalz d' ar re-mañ. O vezañ ma ne oa ket re niverus an dud, o deus gallet holl ober anaoudegezh.

Arnodenn an Trec'h Kentañ

Setu disoc'hoù arnodenn an Trec'h Kentañ bet tremenet e K. E. A. V. St-Visant-an-Oud, d' an 29 a viz Gouhere 1976 :

A zo bet degemeret :

Joel DONNART (eus Agen), Meneg Mat-tre,
Nelly GROUGON (eus Nanterre), Meneg Mat,
Beatriz AN HENAFF (eus Goderville), Meneg Mat,
Kristena Riou (eus Rouen), Meneg Mat-a-walc'h.

Gourc'hemennoù dezho !

Berzh " Crash Course " brezhonek Skol-Veur Breizh-Uhel

Evel ma oa bet kemennet (Al Liamm niv. 175, p. 156) ez eus bet roet e-pad ur sizhunvezh (5-10 a viz Gouhere) kentelioù stank war hor yezh e Skol-veur Breizh-Uhel. 74 a dud o deus kemeret perzh, en o zouez kelaouennourien Ouest-france ha tud o labourat e Skingomz Brest. N' eo ket didalvoud resisaat penaos e oa bet dalc'het war memes tro ur rummad kentelioù saozneg, graet bruderezh stank evito (Ouest-france, Le Monde, h.a.) hag e oa bet seizh den hepken o reiñ o anv... Ur gelaouennerez, bet heuliet ganti rummad kentelioù 1975 eo hag he deus savet ar pennad embannet war niverenn miz Eost **Sélection du Reader's Digest " Ces Bretons qui réveillent la Bretagne "**. Moarvat e ra brud d' ar yezh strivoù a seurt-se, ha se e-touez tud ha n'int ket dedennet a-hend-all gant obererezhioù an Emsav.

Stajoù studi evit ar gelennerien Stad

Bet eo kemennet e niv. 176 AI Liamm (p. 232) penaos e vefe aozet stajoù war sevenadur ar vro hag ivez war ar yezh evit ar gelennerien dedennet. Bet eo graet neuze ur staj war ar brezhoneg e Skol Vistri Gemper d' ar 6, 7 hag 8 a viz Mae. An holl brezegenoù e galleg, siwazh... (karget oa bet pennoù Kevrenn Geltiek Skol-Veur Breizh-Izel da gelenn). Er bodadegoù studi graet da heul en deus avat ar brezhoneg adkavet buhez ha plijet eo bet gant se ar stajidi, zoken ar re zizesk war ar yezh. Unan a lavar : « J'ai eu souvent du mal à suivre, mais c'est quand même une chose que j'ai bien appréciée, d'avoir tous ces discours en breton. Pour moi, répondre en breton ça me limite énormément, mais je souhaite, même si je répons en français, qu'on me parle en breton » .

297

En Naoned ez eo bet graet ivez ur staj war ar yezh d' an 9, 10 hag 11 a viz Mezheven. Per Denez Fañch Morvannou, an Doktor Tricoire, Yann an Du hag Ifig ar Berr a oa bet pedet da zegas o skiant-prenet. Hervez danevell C.R.D.P. an Naoned, « tous ont pris grand plaisir à entendre parler breton et surtout à entendre un enseignement donné dans cette langue ». E miz Here e vo graet evit Akademiezh an Naoned ur staj all, war ar " sevenadur " henezh. Sañset eo da vezañ rannet e div lodenn : unan diazezet war bro an Naoned evit lod an Akademiezh a zo darn eus bro-Vreizh, hag eben war Angers evit ar peurrest... 17 kelenner a oa er staj war ar yezh en Naoned ; en daou all e oa 60 e pep hini (ouzhpenn 100 goulenn evit unan anezho, ha dister-kenañ ar bruderezh...). Siwazh, ne vez war gont ar Stad nemet ar mizoù beaj ha lojerezh ar stajidi ; ne vez roet gwenneg ebet evit ar frejoù all (goprañ ar brezegennerien, dastum dihelladur, h.a.). Daoust pegen dister e c'hell bezañ seurt strivoù, arabat ober re a fae warno, peogwir e vez levezonet kalz ar yaouankiz gant ar gelennerien, ez eo pouezus reiñ un tammig deskadur ha keloù d' ar gelennerien o-unan...

Embannadurioù

Degouezhet eo ganeomp levrioù, kelaouenoù ha skridoù a bep seurt e-kerz an daou viz tremenet.

E brezhoneg :

BREURIEZH VREIZH 1790, gant Erwan AR MENGA, ul levr istor skeudennet. Embannet eo bet gant Nature et Bretagne. (Gwelout pennad Roparz Hemon.)

AON PE OBER TRAOU, pezh-c'hoari e daou arvest gant Yann-Baol AN NOALLEG, embannet gant Preder, 70 pajenn. Ul levr moulet kaer ez eo dindan un talbenn souezhus. Ar yezh kerkoulz hag an danvez a zo divoutin. Tennañ a ra d'ar pezhioù a-vremañ evel re v-Beckett. Tud desket eus an Emsav a fell dezho ober un dra bennak met ne ouzont ket mat na penaos. - Priz : 18 lur. Preder C.C.P. 430 20 H Paris.

EMSAV, niv. 113. Liesskrivet. Kavout a reer en niverenn-mañ ur studiadenn hir ha savet mat, diwar-benn romant diwezhañ an Italianez Alba de Cespedes " Il Rimorso ". Ar pennadoù all a zo dreist-holl diwar-benn an armerzh hag ar politikerezh. Koumanant- bloaz : 40 lur. C.C.P. 2460 10 Z Rennes.

SKRID niv. 9. Liesskrivet. Kregiñ a ra an niverenn-mañ gant ur strobard barzhonegoù (41) diwar zorn Reun ar C'halan, meur a hini anezho a zo kaer e-keñver barzhoniezh. Pennadoù berr a zo a-hend-all skrivet gant tud yaouank hag a zo alies ampart. - Koumanant evit 4 niverenn : 20 lur. C.C.P. P. Denis 1499 51 Rennes.

BARR-HEOL, niv. 89, Gouhere 76. En niverenn-mañ e kaver evel boaz brezhoneg flour an Ao. Klerg, Anjela Duval, Loeiz Andouard. Menegomp ar pennadoù en eñvor d' an dugez Anna, da sant Erwan ha da Evnig Penn-ar-Choad. Ar pajennoù burutellerezh a zo kentelius, ar saverien o vezañ peurliesañ an Ao. Klerg ha J. C.

Ur studiadenn a zo gouestlet d' ar sec'hor e Breizh. - Priz ar c'houmanant a zo 30 lur, da gas da : M. Le Clerc. Buhulien, 22300 Lannion. C.C.P. 2454 53 Rennes.

298

KELEIER AN NAONED, niv. 4, Ebrel 76. Embannet eo ar gelaouenn-mañ bremañ dre offset hag he doare dezhi he deus a dra sur. Menegomp ar pennadoù diwar-benn " Concorde " hag ar saverezh-nijerezed e Breizh, kanolioù Breizh hag ur studiadenn savet aketus-tre, a roio tro da brederiañ warni, " Enklask war gelenn ar brezhoneg en Naoned ". Tresadennoù a gaver er gelaouenn hag al lizhiri embannet a ziskouez e kav ganti al lennerien un tamm mat a zudi. - Priz ar c'houmanant (10 niverenn) a zo 25 lur, da gas da : It. Gwenola Rossinyol, 11, rue de l'Ascension, 44700 Orvault.

E galleg hag e brezhoneg :

AR FALZ, niv. 16. Moulet. Kelaouenn ar skolaerien hag ar gelennerien lik. Dedennet omp bet dreist-holl gant pennadoù Yves Person : " Pouldreuzic, son pâté... hag all " hag " Eus ar c'holonisañ galleg d' an nevez kolonialism " lakaet e brezhoneg gant F. Morvannou. - Koumanant 30 lur. C.C.P. 430 20 H Rennes.

BRUD, niv. 53-54 a zo moulet ar wech-mañ. Dindan an anv " Kan ha stourm " ez eo bet dastumet sonioù ha gwerzioù bet savet, en doare poblek hengounel, gant P. M. Mevel. Skeudennet eo gant J. J. Sevellec hag ar sonerezh a zo gant F Danno ha Pol Montjarret. - 63 pajenn, 20 lur.

Deut eo er-maez 26vet levrenn **AR GERIADUR ISTOREL** gant Roparz Hemon (Penndommet-Poazh) Preder, kaier 193-194. - Koumanant da 6 rann eus ar Geriadur Istorel : 75 lur. Preder, C.C.P. 16 093 13 Paris.

BLEUN-BRUG, niv. 208. Moulet. Kelaouenn relijiel. Muioc'h e vrezhoneg a gaver bremañ er gelaouenn divyezhek-mañ, ar pezh n' eo ket evit displeijout deomp. - C.C.P. 329 30 Nantes.

Resevet hon eus ivez ur studiadenn war zistagadur ar brezhoneg savet gant Jil Ewan ha liesskrivet gant Kreizenn Sevenadurel Gwengamp dindan an anv " Llzha war distagadur ar genyezh vrezhonek arnevez ".

E galleg :

AR SONER, kelaouenn bodadeg ar Sonerien. - Koumanant : 25 lur. C.C.P. 331 48 Rennes.

BREIZ, niverenn 214, a zo gouestlet da Ouelioù Kernev dreist-holl ha da zigoridigezh Ti-Kendalc'h. Ne gaver ket pajennoù brezhonek Dihun en niverenn-mañ. - Koumanant 20 lur. C.C.P. 144 67 Rennes.

ANNE DE BRETAGNE, gant Michel de Mauny, 58 pajenn. Embannet gant " Kanevedenn ", 10, rue Saint-Louis, Rennes. Skeudennet. 25 lur.

BRETAGNES, niverenn 3. Kelaouenn bolitikel ha lennegel e galleg. Moulet. Koumanant 4 niverenn : 40 lur. Impasse de la Fontaine-au-Lait, Morlaix. C.C.P. 3052 27 Rennes.

299

EKLITRA a zo o paouez embann un enklask " Les femmes dans la Maîtrise d'Amiens " gant Dubois-Butard. Amiens, Archives départementales de la Somme.

E nederlandeg :

DIETSLAND EUROPA a zo gouestlet d' ur pennad anvet " Het Nationalisme in Vlaanderen " gant Jos Vinks. Jordaenskaai 3, 2000 Antwerpen.

Ul levr a bouez embannet gant ar C.E.L.I.B.

Meur a levr a zo bet embannet nevez 'zo war armerzhouriezh hor bro hag ar c'hudennoù stag : Bretagne, terre d'Europe da skouer, pe c'hoazh " Le défi armoricain " ha reoù all moarvat... Gant ar C.E.L.I.B. ez eo bet embannet ul levr graet gant Yves Lainé, anavezet mat dre ar stourm kalonek kaset war-raok gantañ er strollad " B 5 " evit adreiñ da Vreizh hec'h harzoù istor. Talbenn al levr : Europe, rends-nous la mer. Istalbenn : Négoce maritime, atout majeur pour la Bretagne (war ar golo, e diabarzh al levr... " vocation majeure de la Bretagne "). Ur goulenn groñs, o tiskouez penaos e vez nac'het gant galloud Pariz sentiñ ouzh an natur, ouzh an douaroniezh, en ur zibab a-viskoazh « politikerezh an douar bras » pa n' eus evit Breizh nemet hini « an donvor » hag a zere, hiziv evel gwechall, outi. Sifrennoù, skouerioù e-leizh a ro Y Lainé en e levr, hag atav e vez studiet an traoù en un doare sellout breizhek-rik (alies e vez graet dave d'ar pezh a c'hellfe bezañ ma vefe chomet Breizh, evel Denmark da skouer, ur stad dieub...). Fent a vez santet pa lenner kentskrid al levr, savet gant R. Pleven, a-du tamm pe damm emezañ, hogen damgiriek ivez eus ar sioù grevus diskuliet brav ha nerzhus gant aozer al levr.

Pegoulz e c'hellor gwelout bremañ ul levr ken pouezus all war armerzh Breizh, hag embannet ivez gant ar C.E.L.I.B., hogen savet e yezh ar vro ?

Danvez brezhonek ar bloavezh 1974

Evel m' en devoa graet evit ar bloavezh 1973 (s.o. Al Liamm niv. 168, Genver-C'hwevrer 1975, p. 42, studiadenn hir Frañsez Kervella " Brezhoneg lakaet da zanvez studi ") en deus Fañch Broudig savet roll al levrioù hag ar pennadoù bet embannet e brezhoneg e 1974. Kavet e vez e niverenn 5 ar gelaouenn Studi. Bet eo dalc'het kont tamm pe damm eus evezhiadennoù poellek F. Kervella, koulskoude e vezer souezhet o kavout c'hoazh stummoù iskis evel « jeneraliteou, environament, h.a. » pa 'z eus en hor yezh gerioù yac'h d'ober ganto, ha pa weler o kreskiñ an doujañs ouzh ar yezh, ha se e-touez ar vrezhonegerien distag eus pep oberiantiz emsavel (er skingomz eo anat, a-wechoù). Bezet a vezo, ul labour talvoudek en deus graet aze Fañch Broudig : 930 talbenn a oa bet meneget e roll ar bloavezh 1973, 1 059 a gaver evit 1974. Salv ma talc'ho an niver-se da greskiñ, a vloaz da vloaz, hag ivez da vezañ brudet muioc'h-mui e-touez tud Breizh-Izel na savo lorc'h enno eus o yezh pemdeziek nemet pa vint kelaouet en un doare dereat diwar he fenn.

300

Ti-embann P. J. Oswald...

... a ginnig 15 levr evit 100 lur, da zibab e-touez reoù ar rollad. Deut eo er-maez e ti Oswald, da skouer, oberenoù gant Yann-Ber Piriou, Pol Keineg, Ivon ar Menn, Youenn Koig, Paol-Yann Kermarc'heg, Padrig Moazan, Kristian Keginer... koulz ha reoù skrivagnerien a Vro-Okitania, Afrika... Roll an embannadurioù a zo da c'houlenn d' ar chomlec'h-mañ : 7, rue de l'Ecole Polytechnique, 75005 Paris.

Nag ar vazh nag ar vezh !...

Evel-se ez eo bet talbennet ur film hir, e liv, graet war Vreizh hag he c'hudenoù gant Fulub Cassard (graet gantañ ives un toullad bloavezhioù 'zo ur film berr " Ti Pri " bet komzet anezhañ e niv. 162 Al Liannn, p. 56). Tennet eo talbenn ar film eus ur c'haer a varzhoneg savet gant Maodez Glanndour ; " Lun Fask " embannet e niv. 85 Al Liamm, p. 75 (Meurzh-Ebrel 1961).

Tost da ziv eur e pad ar film nevez, divyezhek eo, ha tud evel Anjela Duval, Youenn Gwernig, 3111 Servat, labourerien-douar, micherourien, stourmerien a vez gwelet ennañ.

" Lucky Luke " e brezhoneg : ezhomm 'zo sikour !

Emañ Skol an Emsav e soñj embann (gant skoazell an ti-embann Dargaud) un niverenn eus ar rummad bannoù treset brudet LUCKY LUKE : MA DALTON... e brezhoneg evel just.

Emglev ez eus bet graet gant ti Dargaud, ur gefrad a zo bet sinet, dont 'raio al levr e-maez e miz Meurzh 1977. Met ker a-walc'h eo an dra-se evit Skol an Emsav.

Setu perak e klask an aozadur-mañ sikour e daou stumm :

- Goulenn a ra digant ar re a c'hellfe prestañ 500,00 lur gall (pe ouzhpenn !) dezhañ en ober, an arc'hant a vefe rentet evel just dre ma yafe ar werzh war-raok.

- Goulenn a ra digant ar re a vefe dedennet (ha kalz a dle bezañ...) gant MA DALTON rakprenañ skouerennoù, 5 d' an nebeutañ dre c'houlenn ; 60,00 lur ar pemp skouerenn (ar pezh a ra 12,00 lur ar skouerenn), betek an deiz kentañ a viz Meurzh 1977.

Adalek ar mare-se e vo tu da gavout MA DALTON e gwerzh er stalioù, 15,00 lur ar skouerenn (evel ar re e galleg).

Spi he deus Skol an Emsav e vo klevet he galv. Trugarekaat a ra en a-raok ar re a sikouro anezhi da reiñ d'ar vrezhonegerlen ur benveg nevez d' en em ziduiñ ha da studiañ ivez...

Ar c'hinnigoù pe ar goulennoù a zo d' ober da : Skol an Emsav, B.P. 1, 22720 Plijidi.

301

Deiziataer 1977

Setu tri bloaz bremañ ma vez embannet gant Skol an Emsav un " agenda " evit ma c'hellfe an holl Vretoned (hag a zo tud oberiant-kenañ dre natur, evel ma ouzer)

heuilh en o yezh implij o amzer.

Er bloaz-mañ e teuio evel boaz er-maez Deiziataer Skol an Emsav, gant tresadennoù kaer graet, ar wech-mañ, gant Divi Kervella ; Kirill Giraudon o vezañ kiriek eus peurrest ar vaketenn. D' ar 15 a viz Here e teuio a-zindan ar wask ; memes ment gantañ hag ar bloaz tremen, 8 lur e kousto (ur golo plastik a vo gantañ ar bloaz-mañ).

Evit ar re a breno dek e vo graet un distaol : 70 lur e kousto an dek skouerenn. Evit 50 skouerenn pe ouzhpenn, an distaol a vo 33 %.

Ober ar goulennoù digant : Skol an Emsav, B.P. 1, 22720 Plijidi, 'n ur gas ur chekenn gant ar goulenn.

Goulenn 'ra Skol an Emsav e vefe kemennet skouerennoù an abretañ ar gwellañ, adalek bremañ ma 'z eus tu, evit ma vefe aesoc'h aozañ ar skignañ ha paeañ ar mouler...

Kenskriverien

Ar gevredigezh " Skingomz ha Skinwel " a glask kenskriverien barrek war ar yezh evit eskemm lizhiri. Skrivañ da : Skingomz ha Skinwel, 18 bis, rue Duguay-Trouin, 22000 Saint-Brieuc.

Kentelioù kembraek

Ma fell deoc'h heuliañ kentelioù kembraek dre lizher, skrivit da : Rhisiart Hincks, 55 Rhodfa'r Oogledd, Aberystwyth, Cymru. Ar c'hentelioù a zo diazezet war **Cwrs Cymraeg Llafar / Conversational Welsh Course**, gant Dan I. James, embannet gant Christopher Davies, met n' eus ket ezhomm da bremañ al levr-se. Ar c'hwec'h kentel gentañ hag ar gentel-adsellout kentañ a zo bet prientet dija hag a goust 40 p (3,50 lur) hag ar post a goust 50 p (4,50 lur) ouzhpenn. 70 p (6,30 lur) all a zo da baeañ an timbroù da gas ho poelladennoù reizhet deoc'h en-dro. Pe ma karit e c'hellit paeañ ar post pa resevit al lizher, pe kas neuze timbroù 10 p d' e baeañ. An arc'hant a zo da gas da R. J. Hincks.

Ar c'hentelioù 7-12 a vo prest a-benn ur miz bennak hag a gousto 45 p (4,05 lur). Ar mizoù-post a vo an hevelep re.

Ma fell deoc'h prenañ ar vandenn pe ar bladenn **Cwrs Cymraeg Llafar**, skrivit da Siop y Pethe, Ffordd y Mor, Aberystwyth. A-bouez eo kaout unan eus ar re-mañ evit an distagadur.

Ar brezhoneg er c'hoarioù

C'hoariet e vez kalz bouloù e Bro-Dreger. Nevez 'zo ez eus bet ur genstrivadeg c'hoari-bouloù daou-ha-daou da geñver pardon kêriadenn vrasañ Pederneq, Skibernerez hec'h anv.

302

E-touez ar re o deus lakaet o anv evit gounit ar maout, setu da heul anvioù un nebeut strolladoù (ar skritur a zo bet reizhet) :

- Lapined Bre (div wech).
- 'Bep taol.
- Paour kaezh plac'h.

- Pennduoù.
- Fall-ki.
- 'Vel 'to c'hoant.
- 'Vel 'kari (div wech).
- Taol-ha-taol.
- 'Vel 'c'halli.
- Seurt 'gari.

66 anv a zo bet enrollet. Bez' ez eus en o zouez 12 anv brezhonek, ar pezh n' eo ket ken fall-se marteze. Evel just den ebet ne ouie e oa unan oc'h adskrivad an anvioù dibabet gant ar c'houbladoù c'hoarierien.

Ar brezhoneg a vo trec'h an deiz ma vo implijet evit pep tra, zoken evit an traoù disterañ.

Priz Lennegel Langleiz

Adembann a reomp kemenn Priz Lennegel Langleiz.

Kinniget eo evit un oberenn, e gwerzennoù pe e komz-plaen, savet e brezhoneg. Lennet e vo ar skridoù gant ur juri a zo ennañ : Maodez Glanndour, Per Denez, Y. Bouessel du Bourg, Ronan Huon, Vefa de Bellaing ha Per Roy.

Ar skrid e komz-plaen en devo 50 pajenn (skriverezet) da nebeutañ. Evit ar varzhoniezh ne verk ar juri niver izelañ ebet evit ar pajennoù.

Ar skridoù a vo da gas da rener ar juri (Maodez Glanndour, Keresperz, 22700 Louanneg) a-benn an 30 a viz Gwengolo 1976, e teir skouerenn, skriverezet e brezhoneg unvan.

Roet e vo ar priz e miz Kerzu. Ar priz a vo 1 000 lur nevez. Ar juri a c'hell divizout chom hep reiñ ar priz. Gallout a raio ivez lakaat embann an oberenn bet ganti ar priz, goude emglev gant ar skrivagner.

Bodadegoù Koumananterien " Al Liamm "

Meur a wech hon eus bet soñjet e c'hellfe bezañ spletus-kenañ bodad hor mignoned ur wech an amzer e pep kêr ha kêriadenn. Reiñ lañs d' ur vuhez-spered breizhek a rafe ha war memes tro stardaat al... liammoù etrezomp, hag ouzhpenn marteze adc'hounit darn eus ar goumananterien bet dilezet ganto ar gelaouenn (kantadoù anezho !). Da heul un emglev graet gant Club de la Presse Roazhon e vo graet un taol-esa, moarvat e miz Du 1976, evit ar re a zo o chom er gêr-se ha tro-war-dro. Pedet start eo ar re dedennet gant ar mennoz reiñ keloù da : Andreu Latimier, 20, rue Victor-Boner, 35000 Rennes.

Pep ali a vo degemeret gant anaoudegezh vat.

303

Kuzul Etrevroadel evit difenn ar brezhoneg

War atiz an Ao. Lecuyer, pennrener Bretoned Brüssels, skoazellet gant Claude Stercks, ez eo bet krouet d' ar 7 a viz Here 1975 ur c'huzul etrevroadel a zo e bal difenn hor yezh, aozañ diskouezadegoù ha strewiñ kelaouerezh e pep stumm. Pederyezhek eo anv ar c'huzul, ha diazezet eo evel just e Brüssels :

- Kuzul etrevroadel evit kendalc'h ar yezh vrezhonek,

- International Comitee for the Defence of the Breton language,
- Internationaler Ausschuss für die Erhaltung der bretonischer Sprache,
- Comité international pour la sauvegarde de la langue bretonne,
11-13 Pavis de St-Gilles, B 1060 Bruxelles.

Ha setu pelec'h e kaver eil kuzulioù :

- Iwerzhon : Serge Cariou, 7, Terenure Road West Dublin 6.
- Alamagn : Mar Le Layec, Otto Hahnstrasse 112, 8702 Gerbrunn.
- Bro-C'hall : Marcel Texier, 8, rue du Pas-de-Calais, 78310 Maurepas.
- Luksembourg : José Lannon, O S C E Kirchberg, Luxembourg.

AL LIAMM 178

TAOLENN

Fest-noz ' ti Anjela gant JUDIKAEL	307
Ar vouezh-se ! da hini ! gant A. DUVAL	308
Meskailhez gant A. DUVAL	309
Ar peskig ruz gant VEFA DE BELLAING	310
Oc'h ober anaoudegezh gant ar c'hoad-meur gant KENAN KONGAR	318
Eñvorennoù gant YEUN AR GOW	330
Peronig gant FANCH AN UHEL	344
Istor Breizh gant LA BORDERIE (tr. Roparz Hemon)	357
Al levrioù gant E. KERVILIO ha P. BOURRELLES	366
Notennoù	370

Skeudennoù :

- Kefioù gwez okoume,
- Kozhiad bantou,
- R. Poincaré,
- Loeiz Herrieu,
- F. an Uhel gant aotre hegarat " Ouestfrance ".
- F. Debeauvais (kl. " Ar Vro ").

FR ISSN 0024-1733

Fest-noz 'Ti Anjela

Kemer 'rin an holl c'herioù
a garez
a c'han eus an douar
a hadez

Evel greunenoù gwinizh
evit reiñ deomp an hañv...

kemer 'rin deil-bleuñv
da varzhonegoù
o reiñ a rin d' an avel
reder-bro

ma 'z aint da skuilh o frond
e kalon an harluidi...

kemer 'rin da selloù
da sioulañsoù
a zeu dit eus ar gwez
o bezañs

hag ez in da gomz dezho
eus nozvezhioù an oaled

emañ fest-noz war-dro
da zaoulagad
ar gouel eo a lintr ha karantez
eo an tan

dremm a skeud hag a sklerijenn
poanioù ha douster ar maezioù

Brezhoneg gant A. DUVAL.

Ar vouezh-se ! da hini !

A ! Gloaz un devezh goullo
E goullonder va Empenn.
A ! Gloaz un empenn goullo
E goullonder un devezh !

Netra na zedenn va spered
N' eus Kened gant netra...
A ! an daou eher-se : goullo, netra ?

Poent 'n em zifretañ Anjela
'N em zispac'hañ, fuloriñ
'Forzh petra...

A ? Sell 'ta ! ar pellgomz o son,
Allo ! Piv 'zo er penn all ?
Allo ! me Bertina... O, Bennizion
Ar vouezh-se o tont eus ar goulou
Hag a leugn trumm ar goullo
O tegas d' he heul amzerioù aet e-biou
Hor bugaleaj, hor yaouankiz en-dro d' al Leger
Hon ebatou, hor c'hoarzhou
E pradoù ar vilin. Yaouankiz disoursi
Pa ne raemp ni forzh a netra.

Burzhud da vouezh Bertina
Ha burzhud ar gwagennoù
Ar goullo 'zo bremañ leunder.

Lanuon, 23.9.76.

309
A. DUVAL

Meskailhez

Kêr a zo kêr - gwechall -
Ar maezioù 'zo ar maezioù - int bet -
Perak o c'hemmeskañ ?
Petra int deut d' ober aze.
E-kreiz ar parkoù kleuziet
An druilhadr tiez gwenn-se
Ar regennadoù peulioù tredan-se
Ar peulioù pellgomz ha me oar ?
Ha petra 'ra aze c'hoazh
A nebeut gwez espernet ?
N' emaint ket sur en o aez.
Hag en o aez emaint-i
Ar buoc'henned er peurlvan
An hini nemetañ divoulc'h
Park ha saout e " sursis "
N' e dint nemet un daolenn
Hañval ouzh reoù ur saloñs
En un ostaleri cheuc'h
Ma vam outo an douristed
Foei !
Ar maezioù war ar maez
Ha kêr en kêr !
Ket a veskailhez heugus.
Pftt !

Lanuon, 21.9.76.

Ar peskig ruz

Steudañ sifroù, kontañ, kontañ, ober an holladoù, hag adarre, steudañ sifroù, kontañ, kontañ... betek 6 eur d' abardaez, 6 eur rik.

N' eo ket e tisplije da Herve Lagadeg jediñ e-giz-se a-hed an deiz, a-hed ar bloaz. Ober a rafe ar vicher-se betek kaout e leve... ma teu a-benn da vevañ betek an deiz-se. Nann, ne zisplije ket dezhañ. Goude-holl, eñ an hini eo, en doa dibabet ar stad-se. Perak ? Ne ouie ket mat. Pezh a ouie hepken eo e c'helle en ur labourat war ar vicher unton-se, soñjal e traoù kalz emsavusoc'h war e veno, ha kaout koulskoude ur gopr dereat a-walc'h evit magañ e familh.

Ma vije bet penn-konter en un afer vras, pe c'hoazh prizer evel m' en dije karet e dad, en dije gounezet kalz muioc'h a arc'hant. Ya, met penaos ober war-dro aferioù bras, dirouestlañ kontoù luziet, kaout kargoù uhel, ha war un dro aozañ dre guzh un dispac'h politikel hep bezañ e riskl da vezañ dizoloet ha flatret gant kenlabourerien warizius ? Penaos ren bodadegoù arvarus goude koan pa ne vezer ket asur da guitaat ar burev d' an eur resis ?

Setu perak en doa Herve dibabet an implij-se, sioul ha didrabas.

Sevel a reas e benn a-ziwar e sifroù, davet an horolaj tredan : 6 eur nemet 10. Poent e oa renkañ ar paperioù ha mont diwar al labour.

« Tost echu ar sizhun, » a soñjas en ur bakañ an teuliad a oa dirazañ, « hag anv ebet eus ur vodadeg. Petra 'reont er Spern Gwenn ? » Gwir eo, e oa ret d' an iriennerien teurel evezh bras er mare-mañ. Er sizhun dremenet, d' ar meurzh, o doa santet - hep gallout resisaat - e oant spiet pa oant o vont davet ar c'hastell kozh a zegemere o strollad.

Ne felle ket dezhañ bezañ tapet. Pa oa en em enrollet en Aozadur kuzh, 7 vloaz 'zo, e oa evit stourm ar muiañ posubl, ha ket evit chom bac'het e-pad bloavezhioù ! Ur wech e-barzh, ne ouzer morse pegoulz ha war betra e tigorero dor ar c'harc'har...

311

En Aozadur en doa kavet peadra da lakaat da zont da wir e huñvreoù, e c'hoant stourm evit e vro.

« Ket a vodadeg fenez eta. Gallout a rin chom er gêr da sellout ouzh ar skinwel, pe da c'hoari scrabble gant Maria. »

Houmañ a oa ivez en Aozadur kuzh. En unan eus ar bodadegoù eo o doa graet anaoudegezh, ha diouzhtu o doa soñjet unaniñ o buhezioù, broudet gant an hevelep uhel-vennadoù.

Hogen, gant ar paotrig ganet dezho 4 bloaz 'zo, e oa ret da Varia chom er gêr diouzh an noz. Un dra vat, a soñje Herve, evel-se ne vefe ket-hi paket ma c'hoarvezfe un taol fall.

Mont a rae gant straed ar C'halvar. D' an eur-se e oa ar straed leun a dud a bep seurt : implijidi o tistreiñ d' ar gêr, kampinoded echu ar skol ganto, a chome da straniñ amañ hag ahont, paotred ha merc'hed yaouank hirvlevek diouzh ar c'hiz, heñvelwisket koulz lavaret, gant o jeans hag o stammennoù liesliv a lakae un notenn joaius e tristidigezh an amzer vreïn.

Glav a rae hremañ. Herve a gendalc'has gant e hent.

*

Edo Maria er sal, o tistenn lienaj ar sizhun. Tremen a rae an houarn ingal ha didrouz war ar servietennoù-taol ruz ha gwenn a blije kement dezhi. Profet e oant bet d' an dud nevez evit o eured gant he moereb Anna a oa marv abaoe. Un eñvor diouti e oa ouzhpenn-se. Moereb Anna he doa bepred gouezet dibab traoù kaer.

Tavet e oa ar radio, dall skramm ar pellwel.

Sioul ha difiñv pep tra er sal, zoken momeder an horolaj giz-kozh lakaet amañ gant ar c'houblad yaouank « evit ober brav » ha degas soñj eus ar vamm-gozh chomet e Lannverrien.

Difiñv ivez ar peskig ruz en e lestrig gwer war ar ganastell, ha mat a rae, rak, tostik ouzh an doureg e rae bisig an ti van da vorvitellañ. Pezh na vire ket outañ da deurel gwech ha gwech ur sell grakik a-gorn war-du ar peskig. Evit ur wech ma ne oa ket tregaset gant paotrig an ti, ar bisig eürus a grogas da baterañ.

312

Dichal ha dibreder en em sante Maria. Karout a rae bezañ hec'h-unan ur wech an amzer. Herve a oa en e labour, distreiñ a rafe da 6 eur ha kard. Aozet he doa evitañ da goan, ur seurt gwastell dre goaven a gave mat-kenañ. Tremen a reas e korf ar vaouez yaouank ur gridienn vrout a blijadur, o soñjal e peseurt doare karantezus e vefe trugarekaet gant Herve en noz-mañ, pa vefe manet kousket Mikaelig, e ourz voulouz en e zivrec'h.

Aet e oa ar paotrig gant e vamm-baeron da dremen an devezh war ar maez. Un torad kelinigoù-chas nevez-c'hanet a oa da welout en he zi. Prometet he doa degas he filhor d' ar gêr evit koan.

Bremaik, ouzh taol, e vefent holl assemblez, hi, Herve ha Mikaelig. Peoc'h. Levenez.

*

Klevout a reas kammedoù en trepas, izeloc'h. Sellout a reas ouzh hec'h eurier. 5 eur hanter. D' ar poent-se e teue paotr al lizhiri. Rouez e oa koulskoude en abardaez. Peurliesañ e tegouezhe al lizhiri diouzh ar mintin. Diskennet en trepas, e welas e oa ul lizher en o boest. E gemer a reas ha distreiñ er sal evit e zigeriñ. Dont a rae eus Pariz. Kaset e oa da : Herve ha Maria Lagadeg.

« Koulz eo digeriñ bremañ, peogwir eo kaset d'hon daou. »

Anavezet he doa ar skritur, hini Laorañs, unan eus pennrenerien an Aozadur.

« Mignoned ker,

« Ret eo din skrivañ deoc'h diouzhtu, rak un dra vallus ha grevus am eus da gemenn deoc'h ; setu perak e lakaan ho taou anv war ar golo, evit ma vefe digoret kerkent ha resevet.

« Un den a zeuio d' ho kwelout, gouez dezhañ eus va ferzh. N' eo ket gwir. Degouezhout a raio hiziv pe warc'hoazh, ne c'hortozo ket muioc'h d' am soñj. Mall a zo gantañ komz gant Herve.

« Klask a raio ho touellañ, ho lakaat da grediñ eo deut mignon deomp. Ur ganaz eo. Taolit evezh. Lavaret en deus din e oa genidik eus Lannverrien evel Herve. Marteze eo gwir. E anv a zo Fañch Alaouret. Marteze ivez ez anavezit anezhañ ? Diwallit !

« A greiz kalon,

313

« G.S. - Daoust d' an diouer a amzer e kavan gwelloc'h chom hep pellgomz da Herve en e vurev. Re risklus e vefe. Spi am eus ne zegouezho ket al lizher-mañ re ziwezhat. »

Krenañ a ra al lizher etre daouarn Maria, santout a ra he dremm o yenaat.

Kentañ menoz a zeu war he spered : mont da brennañ dor ar ranndi gant an alc'houez-surentez diabarzh, sparlañ anezhi gant n' eus forzh petra, evit mirout ouzh an treitour da zont-tre. Sotoni !

Tamm-ha-tamm e tigresk hec'h enkrez. Arabat pennfolliñ. Abaoe ma oa en Aozadur he doa bet aon na c'hoarvezfe un deiz un darvoud evel hemañ. Dav e oa dezhi menel kreñv. Goude-holl, ne oant ket kement-se en arvar peogwir e anavezent ar riskl en a-raok. Tu a oa da barraat outañ.

« N' eus nemet gortoz, » a lavaras outi hec'h-unan. « Tuchantik e teuio Herve. A-benn un eur e vo distro. »

Echu e oa he feradenn. Plegañ a reas ar pallenn-feriñ ha kas ar pakad lienaj en o c'hamb, da vezañ lakaet warc'hoazh en armel. Warc'hoazh hepken. Gouzout a rae eo noazus da goad ar presoù renkañ lienaj mouest c'hoazh gant aezhenn glouar.

Ne grene ket mui. Damzinec'het e oa.

O tremen dirak ar ganastell e welas ar peskig ruz, difiñv, bepred spiet gant ar c'hazh.

« Ar pesk ! Dav e vo soñjal ennañ... »

Dres p' edo o sellout ouzh al loenig e tintas ar c'hloc'hig-dor. Ur wech, div wech.

Buan, Maria a bakas ar peskig ruz e godell he sae, ha mont a reas da sellout dre al lagad-spier sanket en nor. Un den bras, glasdu-wisket, a oa o c'hortoz digor. Un den dianav dezhi.

Eñ an hini e oa ? Dija ? Chom a reas Maria en entremar. Digeriñ pe get ?

Graet he deus he meno. Treiñ a ra an alc'houez er botailh ha lezel an den da zont-tre.

« Demat itron. Digarezit ac'hanon. Amañ 'mañ o chom Herve Lagadeg ?

- Ya aotrou. Karout a rafec'h gwelout va den ?

- Ya itron. Er gêr emañ ?

- 'Mañ ket c'hoazh. Distreiñ a raio eus e labour war-dro 6 eur ha kard.

- Daoust ha bez' e c'hellan gortoz anezhañ ? a c'houlenn an den, seven, oc'h ober ur c'hammed pelloc'h en trepas.

314

- Ya, deuit-tre, a respont Maria en ul lezel anezhañ da dremen dirazi. Azezit. Ne vo ket pell Herve o tegouezhout. »

Azezañ a reas an den en ur gador-vrec'h dirak ar siminal. Sellout a rae en-dro dezhañ, kurius, ha ne lavare netra.

Maria ne grede ket komz outañ. Peseurt emzalc'h diskouez ? Chom mut ?

Penaos toullañ kaoz gant an den gwisket cheuc'h, tres ur bourc'hiz warnañ, a vousec'hoarzhe hegarat outi ?

Ur c'hwez vat : turkantin, lore ha roumarin a leunias ar sal.

« Digarezit aotrou, ret eo din mont da deurel ur sell er gegin, » eme Maria, hag ez eas kuit.

Dindan an dar, ar voest-lastez. Kemer a ra ar peskig ruz chomet e godell he sae, hag e lakaat a ra er voest e-touez pluskennoù avaloù-douar.

Hogen, diouzhtu goude e kemm meno.

« Ur rangalon a vefe da Vikaelig, » a vouskomzas. Kemer a reas ur gib el listrier, he leunias gant dour, e lakaas ar peskig e-barzh, hag adarre ar gib e foñs al listrier. Hanter-varv e oa dija al loenig, abaoe ma oa aet er-maez eus e zoureg.

Klevet e voe Herve o tegouezhout. Diwiskañ a ra e vantell en ur vouskanañ, laouen oc'h adkavout an aergelc'h karet : e wreg, e vabig hag ar seurt tommder difetis, didermenus, na vez santet nemet en tiegezhioù eürus.

Ha dont er sal.

« Sell 'ta ! Pebezh souezh ! Fañch, te amañ ?

- Ya ! Pell 'zo n' omp ket en em welet, 'keta ?

- Petra 'maout oc'h ober amañ ? Pelec'h emhout o chom bremañ ?

- E Pariz bepred.

- Koulskoude e lavares gwechall ne felle ket dit bevañ e Pariz ? Cheñchet ec'h eus, » eme Herve.

Ar ger " gwechall " en deus o lakaet da zistreiñ war-du o yaouankiz. Azezet keñver-ouzh-keñver e-tal ar siminal, o tanañ o sigarettennoù, e krogont da varvailhat evel daou vignon a-viskoazh.

Disoñj-kaer, etre div frazenn, e tro Herve e benn davet ar c'hazh bepred war api war ar ganastell, ha sonnañ a ra gant ar from : n' emañ ket mui ar peskig ruz en e zoureg...

315

Sellout a ra ouzh e vignon, ha goude ouzh Maria. Daoulagad houmañ a bouez war e re, ez-hir. Ezhomm ebet a gomzoù etrezo. Gouzout a ra Herve petra a dalv ezvezañs ar pesk, en o c'huzhemglev : « Diwall ! Diwall ! »

Un ael a dremen er sal.

Ret eo komz, lavarout un dra bennak, n' eus forzh petra, gant ma vo torret ar sioulañs.

« Ur banne 'po, Fañch ? Maria ! Ha ma tegasfec'h deomp ur banne whisky pe Cinzano, pe un dra all ?

Degaset e vez ganti ur bladenn gant boutailhoù ha gwerennoù, war an daol etre an daou baotr.

Vat a ra da Herve evañ alkool.

« Digarezit ac'hanon, eme Maria. Ho lezel a ran ho-taou da gaozeal. D' ober em eus er gegin. »

Echuiñ a ra he gwerennad Cinzano a-raok o c'huitaat. En he c'hichen, ouzh

ar voger, e spurmant Fañch un daolenn. Sevel ha tostaat a ra outi. Diskouez a ra al livadur ur gêriadenn war un uhelenn - pemp ti hepken - anavezet mat gantañ peogwir ez eo Lanverrien e-lec'h m' eo bet ganet, hag Herve ivez.

War an diribin a vez gwelet e tu kleiz an daolenn, hag a ziskenn betek ar stêrig, nag a c'haloupadegoù o deus graet gwechall ! A-dreñv d' ar c'hleuz goloet a lann - na brav e oa en nevez-amzer ! - o doa toullet an douar ha savet ur fornig gant mein plat, a veze lakaet da boazhañ enni kachennoùigoù aozet gant o mamm, pe gwashoc'h, amprevaned tapet ganto. Bugale zrouk !

Hag eñ, ha n' eo ket drouk ? Fallakr zoken. Morc'hed a sav ennañ. Deut eo amañ da douellañ e vignon, d' e lakaat da gouezhañ e lasoù ar polis, dre drubarderezh... Paeet e vo evit se gant e vistri nevez. Paeet ker zoken. Ezhomm arc'hant en deus. Penaos ober a-hend-all ? Kalet eo ar vuhez...

Klevet e voe Maria o vont-dont er gegin.

- Dimezet out neuze ? a c'houlenn Fañch, bugale 't eus ?

- Ya, ur paotrig pevar bloaz hon eus.

- A ! eme Fañch. Soñjal a ra : « Siwazh ! », hag e chom digomz ur pennad.

Poent eo koulskoude stigmañ an trap :

- E Pariz em eus darempredoù gant tud a anaveze ac'hanout pa oas studier... Ar re-se o deus an hevelep menozioù ha te : gwelout a rez diwar-benn piv e komzan... Deut on hiziv d' az kwelout eus o ferzh... peogwir emañ bremañ a-du-krenn ganto ha ganit. Ya, a-du-krenn gant da venozioù.

316

- A-du gant petra ?

- 'M eus ket ezhomm da resisaat.

- Resisaat ? Resisaat petra ? Ne gomprenan tra...

Fañch, a vouezh izeloc'h :

- Klask kompren... Komz a ran eus... ar Spenn Gwenn...

Herve a sank don er gevier :

- O ! an istor kozh-se ! Pec'hed yaouankiz ! Piv n' eo ket bet etre 15 hag 20 vloaz en ur strollad kuzh bennak ? Bezomp sirius...

- Dilezet az pefe da venozioù a oa ken taer ?

- Bo ! Gout a rez petra eo... Ur wech dimezet, gant ur bugel, ne weler ket mui an traoù er memes doare...

- Nag un druez ! a estlamm Fañch. Ha garvoc'h : Un dever eo evidout kenderc'hel gant ar stourm. Arabat dilezel an Aozadur. N' emañ ket pell ken ar pal.

Treiñ a ra e benn en a-dreñv evit bezañ sur n' eo ket distroet Maria er sal, ha :

- Skoazellerien nevez hon eus kavet. Ur gefridi a zo bet fiziet ennon gant Laorañs : goulenn ouzhit va lakaat e darempred gant izili an Aozadur a zo o chom er gêr-mañ. Rak bez' ez eus, sur. Te ' anavez anezho gwelloc'h egedomp...

- Pa lavaran dit : n' ouzon mui netra eus an Aozadur. Pell zo !

- N'eo ket posubl !

Amgredik e sell Fañch ouzh Herve. Ha ma vije gwir ? Ha ma vije bet eñ ivez touellet gant ar re o doa e gaset betek amañ ? A c'hellje bezañ. Perak en dije Herve disfiziañ outañ ? Ne vije ket ar wech kentañ e vije aet un dispac'her feuls da gazh-born war-lerc'h e zimeziñ... Arabat d' an hini mennet da c'hoari brezel-kuzh kemer gwreg ha kaout bugale...

Ur wech c'hoazh e klask Fañch gouzout hiroc'h digant e vignon. Netra d' ober.

Anat eo ne oar Herve mann ebet ken. Ne dalv netra kenderc'hel d' e c'houlennata. Koulz eo mont dioutañ ha distreiñ toutek da Bariz, davet mistri ar polis. Tapet e vo un den all ma kaver unan war an hent.

Soñjal a ra en daou evezhier chomet war-c'hed er straed e-kichen. N' o devo servijet da netra, p' edont eno o c'hortoz heuliañ Herve evit e bakañ, kerkent dezhañ aet betek e geniriennerien. E bakañ, ha diouzh ret e lazhañ. C'hwitet an taol !

Sevel a ra Fañch evit kimiadiñ d' e ostizien. Keuz en deus ha n' en deus ket. Morc'hed ? Keuz eus ar yalc'had Juzaz ?

317

Ur c'henavo diwezhañ, ha setu eñ en trepas. Diskenn a ra gant an teir derezenn a gas er-maez. E toull an nor e kil un tamm evit lezel da dremen ur paotrig hag ur vaouez deut war an oad. Mikaelig an hini eo, sart ha laouen, ur pikol sac'had mamadoù gantañ a zistro d' ar gêr gant e vamm-baeron.

Herve a ya da zigeriñ dezho, sparlañ-krenn a ra an nor. Deut eo en-dro al levenez en ti ganto.

« O ! marv eo ar peskig ruz ! » a leñv Mikaelig o welout e vamm a zegouezh gant ar gib, enni, a-c'hwen e gein, ar paour kaezh loenig dilusk-mik.

« Ya, mignon, marv eo da beskig ruz, met bev e chomo da dad ! » a youc'h laouen Herve, oc'h ober choupik d' e vab.

TUDUAL HUON
FRI KORLOKO
bannoù treset
Priz : 13,00 lur
Embannet ha moulet e Brest
AL LIAMM

Oc'h ober anaoudegezh gant ar c'hoad-meur

Ar pennad da heul a zo tennet eus eñvorennoù an oberour diwar-benn ur rann eus e vuhez aet e-biou tost da zaou-ugent ulloaz a vo dizale. Echu gantañ e Roazhon e studioù diwar-benn an natur, e voe kinniget dezhañ mont da labourat, evel douarour-enklasker, d' ar Gabon, ur vro a greiz Afrika ha ne veze ket a anv anezhi gwall alies d' ar mare-se, met a zo deuet da vezañ kalz anavezetoc'h bremañ. Krog e oad neuze da glask petrol eno, hag ezhomm e oa tud evit sevel kartenn ar vro evit pezh a sell an douaroniezh.

Echu gantañ e bennad amzer du-hont e rankas dont en-dro evit ober e amzer-soudard. Met e-keit m' edo evel-se o c'hoari soudardig e krogas ar brezel ; hag anat eo ne c'hellje ket distreiñ du-hont. Keuz gantañ d' ar vuhez a oa bet e hini eno, e krogas da sevel un nebeud pennadoù diwar-benn an amzer en doa bevet e koadeier ar C'heider. A-benn miz C'hwevrer 1944 e voe savet ar skrid. Fiziañs a zo ennañ da c'hellout, hep re a zale, embann anezhañ dindan stumm ul levr. Da c'hortoz, setu, evit lennerien Al Liamm, un tañva eus ar pezh a vo kavet el levr-se.

Evel ma welor ez eus bet lakaet un nebeud notennoù, e fin pep pennad, da sklaeraat arroudoù 'zo eus ar skrid. Diouzh ret ez eo bet klokaet an notennoù-se diwezhatoc'h, evit sachañ an evezh war ar c'hemmoù a c'hell bezañ c'hoarvezet abaoe.

* * *

Un nebeudig devezhioù en Enez an Arc'hant evit reiñ tu d' ar re nevez degouezhet da gregiñ da ober anaoudegezh gant ar vro hag an dud. Ha peadra a oa da zastum gouiziegezh nevez evit ar paotr yaouank a oa ac'hanon.

Ar pezh am souezhe ar muiañ da gentañ a oa an temz-amzer : e-lec'h an amzer deñval ha goloet a oa bet diouganet din gant va blenier, e welan tost da vat e-pad an devezh an heol o c'hoari war al loc'h. Ne oa ket marteze ken flamm an oabl hag an hini a veze a-us da Vreizh d' ar mare ma kuitais ar vro, ha tennañ a rae kentoc'h d' ar mouk eget d' ar glas, moarvat ivez e vez un tammig morennet an dremmwel plijus e oa koulskoude ; hag e-giz ma 'm eus c'hoazh amzer vak, em bez tu da ober tro pe dro da ober anaoudegezh gant ar pezh a zo da welout, da ober anaoudegezh ivez gant gwez ha plant a huñvreer enno en hor bro : kafe ha kakao, orañjez ha sitroñs, ananaz ha gwez-bara, hep kontañ re all ha n' am boa ket zoken klevet anv anezho a-barzh neuze : mangez hag avoka, korosol ha papay... Kavout a rae din em bije bet da dremen va amzer o c'hwiziñ, ha padal, pa zeu ar mare da vont da azezañ en ti-debriñ, ar « popote » evel ma vezer boas da lavarout du-se, e kavan gras kas ganin va chupenn da wiskañ gant aon da chom da grenañ gant ar riv. Pa sellan ouzh an termometr a zo eno a-ispilh ouzh ur peul, e welen anezhañ, gwir eo, o verkañ 23 pe 25 C ; e-pad an noz e rankan avat kousket gant ur pallenn gloan tev warnon, hag ur pallenn all ouzhpenn war va zreid.

Dont a ra buan koulskoude ar mare da vont da ober anaoudegezh donoc'h gant ar vro, hag evidon ivez gant an doare ma rankin ren va labour. Ar vro Eshira, diouzh tu ar gevred, etre loc'h Fernan Vaz ha Bongo, a zo da vezañ an dachenn arnod kentañ. Diwezhat goude koan e kemeromp penn hon hent, e doare bezañ degouezhet a-benn goulou-deiz. Pevar den gwenn emamp er veaj-mañ : an tri douarour nevez, hag ar mestr-douarour V. H. hag a zo da vezañ hor blenier a-hed

an droiad-mañ ; kalz dougerien hor bo ezhomm ivez evit stlejañ bon sammoù, setu ma 'z eus ivez div vag pilprenn stag ouzh hor pinasenn dre dan. Kousket a reomp war hor golc'hedoù astennet war strad ar vag ; dindan an oabl steredennet, rak n' eus goudor ebet er vag-mañ, ha ne vez ket ezhomm kennebeut d' ar mare-bloaz-mañ. Hejet ha brañskellet e vezomp goustadik gant an avel noz e-keit ha m' emamp o treuziñ an div leviad dour dispak a zo a-barzh en em gavout er Rembo Nkomi (1).

320

Daoust da drouz ar c'heflusker e teuan a-benn da ober ur c'houk c'hwek. Ha pa savan diouzh ar mintin hon eus kuitaet ar Rembo evit mont en un adstêr dezhañ, ar Mbari, don ha geotek, ken geotek m' hon eus a-wechoù bec'h o tremen.

Kefioù gwez okoume o neuñ a radelladoù

Mont a reomp en douar e kêriadennig Yeno. Eno e tijuniomp a-raok mont en hent, rak ur c'hwistad mat a hent hor bo da ober a-barzh en em gavout er pal : daou zevezhiad kerzhout. Setu ma ran anaoudegezh gant « hentoù » ar vro ha gant an doare dougen a vez graet *tipoy* anezhañ. Ur seurt kador wial eo an *tipoy*, sterniet war ur c'hrevazh ha douget gant pevar den, ha c'hwi azezet warni. Da gentañ e vez kavet plijus a-walc'h bezañ douget en doare-se ; buan a-walc'h avat e sav bec'h war an hini a vez evit ar wech kentañ oc'h ober hent en doare-se, pa sant e benn a-dreñv o vloñsañ gant ar stroñs hag o tont da vezañ kizidikoc'h-kizidik skuizhus-meurbet eo evit ar re ha ne dint ket c'hoazh en em c'hraet. Hervez kerzhed an dougerien e vez ivez aesoc'h pe ziaesoc'h an *tipoy*, ha bez ez eus strolladoù *tipoyerien* vat hag a ya plaen hag unvan gant o hent, ha re all hag a ya an eil a-dreuz d' egile, ouzh ho lakaat da vont a lammoùigoù evel ma ra ul loen-kezeg pa ya d' ar piltrot.

321

An « hent-bras » emamp o vont drezañ a zo ur wenodennig strizh, o treiñ hag o kammigellat dre douez ar gwez. Brasañ diaester a gaver war an hent eo ar gwez kouezhet ; pa vez unan a-stlej ne gemer ket tud ar vro ar boan d' he dispenn. Ha da betra e talvezfe ? Mar demañ ar bleñchoù en hent e reer an dro evit mont e-biou, ha ne vez nemet ur gildro muioc'h gant ar wenodenn ; mar deo un droñjenn e tremener peurvuiañ dreist, ha mardeo re dev evit bezañ gaoliataet, e vez lakaet ur geuneudenn bennak evit aesaat skrimpat warni. An eil skoilh bras eo ar gwazhioù-dour : un diribin vat a vez peurliesañ evit en em gavout ganto, hag a bep tu dezho e kaver un treuziad fankigelloù a vez graet « *poto-poto* » anezho er vro. Evit aesaat an tremen e vez taolet keuneudennoù er fank pe zoken diskaret ur wezenn evit ma vo kerzhed hed-ha-hed warni. Arabat bezañ re bafalek er vro-mañ !

Ne vo ket re hir an devezhiad kentañ. Tri miz 'zo emañ an dougerien o tiskreizhañ, ha ret eo o lezel adarre da voazañ ouzh o micher. Un nebeudig devezhioù, hag e vo tu adarre da c'houlenn diganto krogadoù taer.

Goustad ez a an *dipoyerien* da gentañ, evel ma 'z eus bet goulennet outo. Dre ma tommont avat ez a tizh enno, hag ar c'han da vont en-dro. Ar pezh hor souezh-ni da gentañ eo an doare o deus evit kerzhout : ne deont morse a-zoug o c'hamm, piltrotat eo a reont, ha ni boas ouzh ar bale a gav souezhus da gentañ gwelout ur rummad tud a-bezh o vont d' ar piltrotig. Diskuishoc'h eo an doare-se da vont, emezo, ha ret a-walc'h e vez o c'hrediñ o vezañ ma kendalc'hont da vont evel-se e-pad meur a eurvezh en ur ober tost da ziv lev an eur. Hag evit kavout skañvoc'h o bec'h e kan an *dipoyerien*. Unan, anavezet moarvat evel ar rener, a grog gant un aridenn, hag ar re all a ziskan ; peurvuiañ e savont komzoù dre ma kerzhont : en taol-mañ o deus moarvat kalz traoù da gontañ diwar-benn an tri « *moutangani* » nevez degouezhet hag ar *moutangani* (2) all nevez distro. Marteze ivez o deus ur c'hlemm bennak da ober ; pe neuze ez int laouen da zistreiñ d' ar c'hoad adarre; marteze e vijent laouen da gaout kalz *nyama* (kig) da zebriñ. Kement-se holl a zo da vezañ kanet... En doare-se eo ivez moarvat e tiwane ar c'hanaouennoù pobl en hor broioù-ni gwechall, met dre ma sevena an dud ez a da goll an doareoù eeun-se. Pa ne ganont ket, marteze pa ne vez kaner ebet awenet a-walc'h, e stag koulskoude alies an *dipoyerien* da reiñ an ton gant un doare

mouskan, pe gentoc'h ur seurt termadeg. Ur garg enorus ez eo bezañ tipoyer, ha lorc'h a vez atav en ur morian o tiskouez ez eo un tipoyer mat. Tu am eus bet d'hen gwelout : unan eus an dipoyerien a oa bet roet din en deiz-se a zeuas diwezhatoc'h da vezañ « boy » din : ha fae e vije bet ennañ, diwar neuze, kregiñ en ur samm bennak (lod ar boy a oa dougen al letern !), pa zeue din avat mont e tipoy e welen anezhañ oc'h ober frapadoù dougen e-lec'h unan all, netra nemet evit ar blijadur.

322

Dre forzh mont e teu koulskoude, anat eo, an dougerien da skuizhañ, hag e teu ar c'hwezenn da redek puilh diwar o c'heinoù gelldu. An neb a vez c'hoant gantañ ober hent buan a vez ret dezhañ diskenn ur wech an amzer da reiñ tu d' e dipoyerien da zic'hwezhañ : ober da skouer ul lev war dipoy, un hanter lev war droad, hag all. Pa ne vez ket ezhomm da c'hortoz sammoù, ar pezh a rankemp-ni ober, e c'hounezer en doare-se kalz a amzer.

Nag un disouezhadenn a vez oc'h en em gaout er c'hoad meur ! Goude bezañ lennet levrioù-beaj 'zo, ha dreist-holl moarvat ar re bet savet gant tud ha n'int bet biskoazh war al lec'h o welout, e c'hortozer en em gavout en ur strouezheg hag a ranker toullañ hent drezi a daolioù strep hag a daolioù bouc'hal, dre wask ar gweennoù, ma weler marmouzien diniver o redek war ar skourroù, naered o ruzañ, ha me 'oar... Ha padal, setu ur c'hoad teñval digened, an douar distlabez, ha pep tra sioul ha divuhez da welout : sioulder ha teñvalijenn, setu ar pezh a daoler evezh outañ da gantañ holl. Hag o vezañ ma n' eus netra evit muzuliañ ar c'heñver e ranker prederiañ zoken evit dont a-benn da gompren pegen uhel eo ar gwez.

Tremen a reomp an noz en ur gêriadennig, stignet hor gweleoù dindan « veranda » ul lochenn, kuit da zisplegañ an teltoù. Hag antronoz vintin ez eomp en hent diouzhtu goude ar c'hafe, rak fellout a ra deomp mont ar pellañ ar gwellañ e-keit ha m' eo c'hoazh distan an amzer. Setu ma kroger gant ur pennad hent war droad, ur gwiskad glizh a zo, ken na ziver ar gwez el lec'hioù digor a zo tost d' ar gêriadenn. Tremén a ra an amzer hag, a-wechoù war droad, a-wechoù all en tipoy, ez eomp brav-bras en hent. Brav-bras evit tri ac'hanomp da nebeutañ ; rak, kaer hon eus sellout war hol lerc'h, ne welomp ket ar pevare o tont. Petra a c'hoarvez 'ta gantañ ? Setu ! tri den skañv ha treut omp-ni, tri gwir skarineg ; hag egile a zo bras, tev ha ponner ; hag anat eo e vez douget aesoc'h seizh-ugent lur eget ne vez graet daou c'hant lur. Ha gwashoc'h eo c'hoazh dre ma fell d' an hini tev bezañ dougenet kalz muioc'h eget ar re all. Douetiñ a ran ivez e oa bet roet dezhañ ar rummad tipoyerien disterañ pa oa bet gwelet e oa anezhañ ur gwall fougeer, evit deskiñ dezhañ e rank pep hini en em ober ouzh buhez ar c'hoad.

323

D' ur mare e oamp bet un tri c'hardeur bennak ouzh e c'hedal en ur gêriadenn en ur chaokat korz-sukr a-barzh ma voe gwelet o tont, mallozhioù gantañ war e zougerien. Adalek neuze en devoa gounezet al lesanv roet dezhañ en abeg d' e bouez : Nzao, an olifant !

Goude ehan merenn hor boa un hent ledanoc'h ha distrouezhet gwelloc'h dirazomp. Kalz stankoc'h e oa ivez ar c'hêriadennoù dre eno ; hag a ouenn eshira e oa an dud enno holl. En unan eus ar c'hêriadenn-se, un tammig en hanternoz da vBongo eo ec'h ehanomp evit an noz. Ha deuet e oa an teñval a-raok deomp bezañ degouezhet, ar pezh a roas tu deomp da welout o nijal ar c'hwibu lugernus, un dra bennak evel ma nijfe hor preñved lugernus a-us d' hor penn. Eno e krogomp gant al labour, hag en eil nozvezh tremenet eno em boe tu da welout ur veilhadenn-gañv, en-dro d' an tan, gant garmoù leñverezed. Ur plac'hig vihan daou vloaz hanter eo a oa o paouez mervel ; ha sammé e oa bet gant ur c'hleñved ha ne vezer ket boas en hor bro da gavout e-touez ar vugale.

En deiz war-lerc'h e tilezomp ar broioù darempredet hag an « hent bras » (3) evit mont a-dreuz ar c'hoad, pemp kilometr warn-ugent da ober dreizañ hep na ve kavet na sklaerien na goudor. Evit studiañ seurt tachennoù koadek n' eus nemet un dra da ober : digeriñ boulc'hennoù eeun dre wask ar gwez, ha klask en

doare-se ar stêriou hag ar gwazhioù-dour (4). Ar boulc'hennou-se avat a zo anezho hentoù dister evit ar c'herzhed ; war-eeun e tiskennont gant an diribinoù gwashañ, ha pelloc'h e ranker pignat betek beg an torgennoù ; bez ho po ivez da ziwall ouzh begoù ar strouezh bet dibennet a daolioù machete, hag a zo prest da grabiñsat deoc'h ho tivesker, pa vezont deuet da vezañ skarp dreist-holl. Kalz aesoc'h e vije, ur wech en em c'hraet ouzh ar c'hornad, kemer unan eus ar gwenodennou olifant a dreuzomp gwech ha gwech all : al loened-se a zigor a-dreuz ar c'hoad hentoù o tereout diouzh o ment, ha gouzout a reont dibab al lec'h aesañ, ha goude ma rankjent ober tro. En ur vro zianav avat e vez gwelloc'h mont gant an hent eeun, a ouezit da vihanañ da belec'h ez a.

324

En ur ober hent evel-se e teu d' hor mignon tev « Nzao » risklañ diwar ur c'hef gwezenn hanter vrein ha, ploudou-doufez, war e revr adarre ! Ha c'hoarzh d' ar pafaleg. Tri devezh goude e c'hoarveze gwashoc'h gantañ : en ur dremen ar Rembo Eshira war ur wezenn gouezhet hag a dalvez da bout, e kollas e gempouez, hag eñ da ruilhal en dour en ur sachañ d' e heul unan eus e heñcherien. Brav dezhañ c'hoazh ma oa bas a-walc'h an dour d' ar c'houlz-bloaz-se.

Diouzh an abardaez e voe savet an teltoù, daou ac'hanomp da lojañ e pep hini anezho. Ar wech kentañ a voe din kousket er c'hoad bras, pell eus pep kêriadenn. Gant an noz e tihun ar c'hoad-se, ken sioul peurvuiañ : galvoù loened, skrilhadez ar sigalenned hag ar pederezed, krignadeg ar merien-gwenn (5) o valañ ar c'hefioù kozh. Hag ul lamm-dour a zo un tammig pelloc'h o kanañ deomp e zoareoù unton.

En un taol e taolomp evezh emañ ar verregezh o vont da gouezhañ warnomp. Ne oa tremenet c'hoazh nemet pevar devezh ha setu ma vanke ar c'hafe ha pa 'z ejod da ober ur sell er c'harchedoù, e oa anat e oa aet bas pep tra ; ha diwar neuze e voe bemdez un dra bennak nebeutoc'h : gwin, fav, avaloù-douar ha, pa zeuas tro ar sukr da vankout, e veze kavet gwall c'hwerv an te, brav deomp c'hoazh pa oa bet dizoloet ar voestadig te-se e pakadoù unan ac'hanomp ; paneveti e vije bet ret tremen gant dour sklaer, rak gwall bell e vije bet kas unan bennak betek ur gêr bennak da gerc'hat geot-sitroñs (6). An hini a oa bet karget da brientiñ an traoù evit an droiad a ranke bezañ bet gwall zievezh ; boas e oa moarvat ouzh ar gont evit unan pe zaou : met evit pevar den e-pad dek devezh e vez ezhomm ul lurig voued bennak. Gwelout a raemp ivez hor c'huchenn vleud o vont bemdez war izelaat. Mall e oa warnomp eta tostaat ouzh ur gêriadenn ma vije kavet, pa na ve ken, bananez ha patatez dous da derriñ hon naon.

326

En tu-hont da se, an eil nozvezh a dremenis er c'hoad a roas din eus he c'heloù : en un taol setu me klañv gant ar gwenr hag un danavenn spontus, ken na voen dinerzhed evit eizhtez da nebeutañ. Betek neuze em boa kavet dudius-bras va zroidad, met bremañ e ranken diskanañ ha ne gaven dudi ebet ken gant ar peurrest eus an droiad : ur gwall friad a oa deuet din ivez da heul, friad hag a lakaas tost da deir sizhun da vont kuit. Ha setu ma save ouzhin en un taol droug ouzh ur vro ken ganas. Dizonet e oan bet da vihanañ diouzh ar pistachez rostet (7) hag a oa bet lakaet war an daol da c'hortoz koan, hag a damallen dezho, e gaou marteze, an droug a oa c'hoarvezet ganin.

Gant ar stad ma oan ennañ n' em boa abeg ebet da zelc'her kalz a soñj eus an devezhioù a zeuas da c'houde. Bep un tamm koulskoude e teuen adarre e-barzh hag ez ae an traoù war zresaat ganin. Pa zegouezhomp war ar Mbari ne oa eno bag ebet ouzh hor gortoz. Kas unan bennak betek Nenge Sika da glask unan a vije hol lakaat da c'hortoz daou zvezh muioc'h, setu ma vez divizet diskenn ar stêr e bag pilprenn. Evit beajiñ evel-se e vez ret kaout pasianted, ha, d' an neb n' en deus ket, e vez desket buan ar basianted er broioù-se. En deiz kentañ ez eomp betek kember ar Mbari gant ar Rembo. En deiz war-lerc'h, aet kuit da c'houlou-deiz e oa noz anezhi pa zegouezhomp er Fernan Vaz, o vezañ graet un ehan a ziv eur bennak evit hor merenn. Skuizhus eo chom e-pad eurvezhioù puchet hep fiñval, ken na zeu ar c'hilaz da gregiñ en divesker. Muioc'h a loened a zo da welout a-hed ar stêr eget er c'hoad, darn kludet war ar gwez uhel, evned all o vont da guzh e-touez ar c'horz papirus a gresk stank a bep tu.

Kudenn all avat pa 'z omp degouezhet : kollet hon eus un devezh ! Betekhen e c'helled koll e gontell pe goll e yalc'h, bez e oa tud zoken hag a golle o fenn, ha kalz a golle o amzer, met n' em boa ket c'hoazh bet klevet e vije bet kollet un devezh hep gouzout pelec'h e oa tremenet. Da sul da noz e kav deomp emaomp distro, ha padal e lavarer deomp emañ al lun da noz. Kaer hon eus kontañ, adkontañ, klask ar pezh hon eus graet bemdez, ne zeuomp ket a-benn da adkavout an devezh diank. Er marvailhoù bugale e konter a-wechoù e vez bet kiliet unan bennak, hag e tihun hemañ seizh vloaz goude. Ni ne oamp ket chomet e-pad seizh vloaz da gousket, met peadra a oa d' en em c'houlenn hag-eñ ne oa ket chomet hor bagad tud en e bezh da gousket e-pad div nozvezh hag un devezh diouzh renk.

327

NOTENNOU WAR AR PENNAD-MAÑ.

(1) **Rembo** (pe gwelloc'h Orèmbo) a dalvez kement ha «stêr» er yezhoù galoa ha nkomi. Er vro a gomzan amañ anezhi e reer an diforc'h etre ar Rembo Nkomi a ziskenn eus ar reter war-du loc'h Fernan Vaz (anvet ivez Loc'h Nkomi) hag ar Rembo Eshira hag a ya, pelloc'h er Su, da gas e zourioù da loc'h Nkovie pe Igela. Eus ar gouennoù tud a zo o poblañ ar vro ma tremenont drezi eo ez eo bet roet dezho o anv.

O chom emañ an dud Eshira etre an Ngounie, adstêr vras an Ogowe, ha loc'hioù an arvor. O c'hreizennoù pennañ a zo a-hed an Ngounie : Sindara ha Fougamou. Er c'hantved tremenet e oa anezho brasañ marc'hadourien dent-olifant ha prenn-ebena a oa er vro, hag anv a vez atav eus " Hent an Eshiraed " a gas da lennoù bras an Ogowe ma kavent war o ribl fred d' an danvez a zegasent.

328

Ar ouenn Nkomi a zo kreizennet en-dro da loc'h Fernan Vaz. E Nenge Sika en em gavemp eta er vro nkomi. Ur boblad tud speredek ha neuziet kaer eo, daoust ma lavarer ez eo aet kalz war zisleberañ dre vezañ bet re bell amzer e darempred gant Europiz. An « alougou » (gwin-ardant) hag o likentez o deus graet gaou bras outo e-pad ar c'hantvedoù tremenet. Mar deo difennet bremañ gwerzhañ hini kreñv d' ar vorianed, ne oa ket moarvat marc'hadourien sklaved an amzer wechall ken sellus-se. (Skrivet e 1975 : abaoe m'eo deuet ar vro da vezañ dizalc'h eo bet moarvat dilezet an difenn-se. Marteze o deus a-benn bremañ desket an dud ober un implij dereatoc'h gant ar pezh a brenont.)

Ur rannyezh omyene eo an hini a gomzont, rannyezhoù all ar rummad o vezañ : hini an Oroungou (en-dro da bPort-Gentil), hini ar Galoa (Lambarene ha Lenn Azingo), hini an Adyoumba hag an Enenga (lennoù bras an Ogowe), ha dreist-holl yezh ar Mpongwe hag a zo diazezet war ar Gabon (Libreville). Deuet eo ar gaboneg (mpongwe) da vezañ yezh an darempredoù etre kalz pobladoù. Ur yezh heson-meurbet ha plijus da glevout eo ; an anv « omyene » roet dezhi gant tud ar vro a zeu eus **myè né** (« me 'lavar ») a zo ur ger hag a zeu ganto alies evit digeriñ kaoz. Evit un abeg heñvel e vez lesanvet alies ar Fang, pe bPahouined, **mazouna** dre ma 'z int techet da gregiñ o frezeg gant ar poz-se.

(2) Moutangani (an ton war an eil silabenn) eo an anv a ro an Eshiraed d' an den gwenn. E mpongwe hag e nkomi e vez lavaret Otangani (an ton war an eil hag an trede silabenn). Er yezh mfang (pahouin) e kaver mintangha (ton war an eil silabenn diwezhañ), ar pezh a vez distaget evel ma vije skrivet « mintañc'ha » e brezhoneg. En holl c'herioù-se e teu war-wel ar wrizienn **ntang** (gwenn).

(3) Ne vez distrouezbet peurvuiañ ar gwenodennoù gant ar vorianed nemet a daolioù machete (seurt falz eeun) dre ma 'z eont. Anat eo e teuont buan da stankañ pa ne vezont mui darempredet. En tu-hont d' ar gwenodennoù ordinal e kaver c'hoazh ar re a c'heller ober anezho an « hentoù bras » hag a vez distrouezhet gwelloc'h war urzh ar Gouarnamant evit ma c'hellje ar c'h« komandant » ober drezo e dro war dipoy eus un eil kêriadenn d' eben. (1975 - Gant ar c'hemmoù deuet abaoe an amzer ma tremenen drezo ez eus bet moarvat meur a hini eus an hentoù-se hag a zo bet digoret bremañ evit ma vije tu da dremen warno

gant ur jeep, en diavaez eus marevezh ar glaveier bras.)

(4) Goloet eo bet ar vro a-bezh, evit doare, d' ur mare bennak, gant ur gwiskad traezh ha pri melen. Evit sevel kartenn douaroniel ar vro e ranker mont da glask ar vein el lec'hioù ma vezont gwelet, da lavarout eo er gwazhioù-dour hag a zo deuet a-benn da dreuziñ ar gwiskad liñvaj-se. Evit gouzout e pelec'h emañ ar gwazhioù a vo da studiañ ar gwellañ eo, pa ne vez ket stank a-walc'h ar gwenodennoù, digeriñ boulc'henoù eeun a-dreuz ar c'hoad. An droc'herien goad a ra ivez kement-se evit bevenniñ ar rann o devez bet aotre da labourat enni, koulz hag evit klask ar gwez a vo da ziskar.

329

(5) N' o deus ar « merien-gwenn » netra da welout gant ar merien gwirion. Anavezet int ivez dindan an anv **termited**. Al loenedigoù-se eo gwellañ saverien krugelloù a gaver er bed. Gwall grignerien int ivez ha gouennoù a zo hag a c'hell ober kalz droug en tiez, ma ne daoler ket evezh mat. Ne gaver ket a grugelloù bras savet ganto e koadeier ar Gabon, ar re vrasañ, dezho stumm kabelloù-touseg pe duellennoù fornigell gant un tok, ha ne zeuont ket kalz ouzhpenn daou droatad er-maez eus an douar. Ar savadurioù bras a reont a vez kentoc'h er broioù geotek eget er c'hoad. Brudet eo krugelloù merien-gwenn an Angola, pe re Aostralia an Norzh.

(6) **Andropogon muricatus**, anvet « citronnelle » gant ar c'hallegerien. Evet e vez alies un doare te pe dizan graet gant an delioù ; devet e vez ivez evit ober moged da gas kuit ar c'hwibu hag ar moustiked. Evel ma krog ken aes ha treuzgeot e vez plantet alies a-hed alezioù al liorzhoù e-kichen an tiez ha zoken a-hed an hentoù evit mirout ouzh an dour da zispenn ar riblennoù. Aes-tre int da naetaat pa vez krog an delioù da zisec'hañ : evel ma tev aes-tre an danvez a ro d' ar blantenn he c'hwezh-vat, ne vez nemet lakaat an tan en ur penn, hag hemañ a ya penn-da-benn ar riblennad en ul lezel un tammig ludu hepken war e lerc'h. Ur pennad goude e sav adarre geot glas diwar ar c'hef.

(7) « Pistachez » a reer du-hont eus frouezh an **Arachis hypogea**. Anavezet gwelloc'h e vez ganeomp ar frouezh-se amañ dindan an anv « kakaouët ». Un nebeud plant Arachis a vez hadet peurvuiañ e pep keriadenn er Gabon, n' eo ket evit tennañ eoul diouto, met evit debriñ e-giz frouezh rostet. E ti an dud wenn e vezer boas da lakaat pladadoù pistachez rostet war an daol e-keit ha ma vezer gant an « aperitif », pe da c'hortoz pred evel ma vez lakaet pladadoùigou avaloù-douar fritet war daolioù kafedioù Europa.

Ar maiz a vez debret ivez rostet e bennoù. Biskoazh n' em eus gwelet e zornañ nag ober bleud gantañ.

EÑVORENNOÙ

(kendalc'h)

Nijet e oa diouzh Breizh ar garantez a dle ar binvidien d' ar beorien, ha tamallet e voe groñs o c'hrizder a galon d'ar re gentañ gant an eskopti. Met graet e oa an droug a zigore an hent d' an divroañ.

Ur gudenn all a oa ouzhpenn, hini an atantoù na gaved mui da feurmiñ war ar maez. Daoust da niver an dud en oad da labourat da vezañ digresket gant ar brezel, e oa deuet hor bro da vezañ re vihan, eus an eil devezh d' egile, pa ne gave ken darn eus hor c'henvroiz lec'h d' en em ziazezañ enni. Ar berc'henned a labourere un atant kent a zalc'has div pe deir war un dro, ar pezh a viras ouzh an dud nevez-fortuniet da vont da diegezh ha da gavout douar da lakaat da dalvezout.

Un diskoulm a voe kavet d' ar gudenn gant ar pennoù kevredigezh ar sindikadoù labour-douar savet e Landerne : kas an dud dizouar da vaezioù kreisteiz Bro-C'hall dilezet eno gant ar gouerien ha didudet koulz lavarout. Bras kenañ e voe an niver eus ar re a yeas di met, e-lec'h o bodañ en takad a roje tu dezho d' en em zaremprediñ, e voent skignet a-dreuz un tolead frank meurbet hag en em astenne war dri departamant bennak, al Lot-et-Garonne, an Dordogne hag ar Gers. Dastumet en ur c'hornad hepken, o dije gellet bevañ evel en o bro, en em skoazellañ da gas o labourioù en-dro ha komz o yezh kenetrezo. Evel-se o dije savet ur Vreizh Nevez ha n' eo ket en em gavet en harlu, e-giz ma c'hoarvezas gant kalz anezho, dreist-holl gant ar re aet war an oad pa zivrojont. Doaniet ha gwasket o c'halon eo ez ajont d' ur vro dianav na ouient netra anezhi nag eus perzhioù he douar hag he foblañs.

Un aluzener a gasas eskopti Kemper ha Leon ha labour en devoa ar beleg-se o weladenniñ hag o kennerzhañ e barrezianiz nevez diazezet eno, hiviziken, evit mat. Evel harluidi Babilon o ouelañ da vro Israel e keuzient da Vreizh e-lec'h ma oant ganet ha ma kouske o c'herent en douar benniget. Hogen endra ma 'z ae an amzer e-biou e timeze o bugale d' an estren o lakaat da c'henel ur ouenn breizhat ha gwaskon.

* * *

331

Eil pennad

VA BUHEZ ETRE AN DAOU VREZEL

Bremañ pa 'z eo echu ar brezel, a soñjen, e tihuno ar Vretoned moarvat. Siwazh ! Netra na den ne fiñvas d' o dizallañ ha da reiñ atiz dezho.

Ne gredas ket Jaffrenou-Taldir dazorc'hiñ Ar Bobl, e gelaouenn ken anavezet kent, na seveniñ ar mennad en devoa bet, a-raok ar brezel, da sevel ur gevredad yaouankizoù tuet d' ar vro dindan an anv a Gendirvi Breiz. Ar mare a vije bet, koulskoude, da gas al labour-se da benn.

An aotrou Perrot, avat, ken oberiant ha biskoazh, a adembannas *Feiz ha Breiz* a voe kevredet, da c'houde, gant *Arvorig*, kannadig Erwan ar Moal. Laouen e voen o kavout adarre brezhoneg fresk da lenn, met, d' am meno, e oa dister ar pezh a raed evit kenteliañ hor c'henvroiz war o gwirioù a bobl wasket hag o sevenadurezh ken disheñvel diouzh hini ar C'hallaoued.

N' edon ket o c'hortoz donedigezh Arzhur, met hini un den a ouezje kaout levezon war ar bobl ha reiñ fiziañs dezhi. A drugarez Doue e oa bev mat ar yezh koulz er gêr, en iliz hag e darempredoù an dud kenetrezo, daoust ha ma veze kontammet bemdez muioc'h-mui gant ar galleg. Techet e oa, da skouer, ar soudarded kozh da ober gant *kuzun evit kegin, kuzunier evit keginer, secteur evit tolead*, hag all.

Hogen an den meur edon war-c'hed anezhañ ne zeuas ket hag, en e lec'h, paperioù gallek eo a ziruilhe war ar vro, paperioù da veuliñ nerzh-kalon ha kolloù bras ar Vretoned er brezel ha d' o lakaat da grediñ e oant ar vegenn eus ar C'hallaoued. E-skoaz nerzh ha beli ar skridoù-se, petra a oa labour an aotrou Perrot na glevet e vouezh nemet ur wech bep miz hag hep gwaskañ re war an takad kizidik ma 'z eo ar gudenn vroadel a roe disfiziañs d' an eskopti.

332

Ma chomas pell c'hoazh ar gouerien hep dilezel o micher da vont e kêr, ne rae ket heñvel ar bourc'hadennoù. Kalz yaouankizoù, micherourien anezho pe baotred hep micher, a yeas da labourat d' an takadoù dismantret gant ar brezel pe da labouradegoù bras Bro-C'hall. Un darn vras eus Pleiben a gemeras an hent da Vandeville, er C'halvados, e-lec'h ma raed war-dro an houarn, hag e kavent sav evel darbarerien. « Pa n' eus netra d'hon derc'hel er vro, » e lavarent, « e rankomp mont da lec'h all da c'hounit hor bara. »

Hor gizioù kozh a oa ivez o kemmañ, ha, daoust ha ma oa feal atav ar merc'hed d' o c'hoefoù, e tileze ar wazed o dilhad breizhat evit gwiskamant ar c'hêrioù. Gwir eo, avat, n' en devoa ket bet an toker tokeier boulouzennet a-walc'h da werzhañ dezho pa zistrojont diouzh ar brezel, ha ma voe ret dezho en em dreiñ war-du ar c'habelloù giz kêr. Keuz am boe d' an neuz a golle Breizh evel-se, met, o soñjal e trec'hje, abred pe ziwezhat, ar gizioù nevez war ar re gozh, ec'h en em frealzen o vezañ ma oa bev-buhezek lavar va c'henvroiz. Gwelloc'h a dra sur, emezon, ar yezh a zo merk ar vroadelezh eget gwiskamantoù tonius ha kran o wiskañ tud ankouaet ganto o orin hag o yezh.

War-dro ar mare-se eo e klevis anv, evit ar wech kentañ, eus ur gelaouennig anvet *Breiz Atao*. War a lavared, e oa en he fenn un nebeudig Breizh-Uheliz yaouank a glaske reiñ hec'h emrenerezh d' ar vro. Evit huñvreerien diboell e oant kemeret ha goap a raed anezho, evel just. Tra iskis, me am boa hirnezh da dud kalonek da hejañ ar Vretoned motet en o c'houisk, n'em boe ket ar soñj da skrivañ dezho pe da dostaat outo. Dre leziregezh e voe, moarvat, pe gentoc'h dre an abeg ma oan prederiet diwar va amzer-da-zont, rak dav e oa dibab etre chom da labourat douar pe adkemerout va micher gozh a gloareg noter. En em blijet e vijen bet e penn un atant war ar maez, met al labour-douar a skuizhe kalz va gar fall. Neuze, goude bezañ ruilhet diruilhet kalz soñjoù em spered, e ris ar menoz da vont a-nevez war-dro ar paper-timbr. Ha setu ma 'z is kuit un deiz diouzh ar gêr, mennet da zeskiñ ar vicher evit bezañ barrek da dremen ervat an arnodennoù a c'houlenner digant un deskadour noter evit reiñ testeni eus e ouiziegezh.

*

333

En ur studi vat eus ur gêr a Vro-Dreger em boa kavet labour. Bourc'hizien e oa holl dud kêr, koulz lavarout, Gallaoued vat anezho. Gallekaet e oa ivez ar genwerzhourien hag ar vicherourien, ha n' en em blijen nemet e kavandenn unan eus kloareged ar studi, ur paotr yaouank a-ziwar ar maez. Un deiz, da geñver fest an hoc'h, em c'hasas gantañ da atant e dud, e-lec'h ma ne gomzed nemet brezhoneg. Degemeret mat e voen eno, e-kerz ar pred, pedet ganto da ganañ, her gris a youl-vat, ar pezh a blijas dezho, war a seblantas din. Ne voe ganin nemet kanaouennoù brezhonek, na petra 'ta, ha didu a gavis o rannañ kaoz ganto hag o keñveriañ va safar gant o hini. Ne oant ket diaes din da intent, rak un nebeut anaoudegezh am boa eus rannyezh Treger o vezañ m' am boa lennet Pipi Gonto, levr *Dir-na- Dor*.

A-benn un nebeut mizioù, o welout na c'hellen ket en em glevout gant ar

c'hloareg bras, un den gouiziek met otus, e ris va menoz da vont pelloc'h da glask va chañs, ha da Vreizh-Uhel ez is ar wech-mañ. War-dro pevar bloaz e chomis da labourat er studi nevez am boa kavet ha daou vloaz goude ma oan aet dezhi e tremenen ervat an arnodenn a gentañ kloareg.

Ne oa ket displijus bevañ en tolead-se e-lec'h ma kaven e-leizh a lec'hioù o tougen anvioù brezhonek, hogen chom hep komz yezh va c'havell a rae diouer din. Alies e-ser komz gant ostizidi ar studi, e tistagen bommoù brezhonek na gomprenent ket, evel just. Doujañs o devoa em c'heñver ar gouerien a rae briz Vretoned outo o-unan, ha lesanvet e oan ganto *le grand Berton* !

Un deiz ec'h en em gavis gant ur paotr yaouank eus Roazhon a oa o klask koumananterien da Vreizh-Atao. Goude bezañ taolet ur sell war ar gelaouenn, e lavaris dezhañ, ken diboell ha tra, na oa ket ar gazetenn-se diouzh va doare pa ne oa enni nemet galleg. Ne zeuas ket em soñj e oa ouzhpenn brezhonegerien e Breizh hag e tleed ober gant ar galleg evit skignañ ar menoz broadel e Breizh-Uhel hag ivez, siwazh ! e-touez gallegerien Goueled Breizh. Ne feukas ket ar paotr hag, hegarat dezhañ, e c'houlennas ouzhin hag-eñ e oan a-du gant ar pal a venne ar vroadelourien yaouank tizhout. Va respont a voe « ya » ha, daoust da se, hen laoskis da vont kuit hep bezañ koumanantet d' e gelaouenn. Diwezhatoc'h em boe keuz d' am digasted e-keñver ar brogarour-se a roe brokus e amzer vak evit ar vro ha d'ar gazetenn a zeuas a-barzh-pell, da vezañ anavezet ha brudet dre Vreizh a-bezh.

334

Un deiz e kuitais va studi a Vreizh-Uhel da zont d' ar gêr da dremen ur miz evit pleustriñ war an arnodenn noter a c'hoantaen mont dezhi hag a dremenis, nebeut goude, gant berzh e Kemper. Ne blije ket din chom pell er gêr, ha, dizale, ez is da gloareg bras da Bondi. Ne ouie va mestr nep brezhoneg ha talvezout a raen dezhañ p' en deveze tro da ober gant ar gouerien diouiziek war ar galleg. Eus ar re-mañ e kaved c'hoazh meur a hini hag, ur wechad ma 'z is gant va mestr da ober un ivantor, ne voe gouest da reiñ netra da intent d' an intañvez na ouie ket ur poz galleg. Drouk-laouen ha mezhek e chomas da bilpasa war leurenn an ti, evel ul leon en e gaoued, endra ma rannen kaoz gant ar vaouez. Ar c'homiser-prizacher, un den eus ar vro, a veulas va ampartiz da gomz brezhoneg Pondi a zistagen, war e veno, gant un taol-mouezh disheñvel diouzh hini an tolead, ar pezh na oa ket souezhus pa 'z on-me ganet ha savet e Kerne !

Ne oamp ket graet, va mestr ha me, evit en em glevout e-pad pell amzer, ha setu ma lavaris kenavo da Bondi hag ez is da Blouidiern davet ur mestr all a oa en oad din-me. Un den hegarat e oa ha buan e teujomp da vezañ gwir vignoned.

Un tolead pinvidik e oa parrez Plouidiern, tud a-zoare enni, koulz er vourc'h ha war ar maez. Brezhoneg gant an holl koulz lavarout, nemet gant merc'hed yaouank ar vourc'h a oa techet da c'hallegañ. Bep sul em beze plijadur oc'h arvestiñ, war-lerc'h an oferenn-bred, ouzh Plouidierniz en o dilhad kaer, ar wazed gant o chupennoù glas hag ar merc'hed e koef ha gwisket evel priñsezed. Ar mor ne oa ket pell hag alies e vezen o kouronkañ ennañ. Dudius, eta, e oa bevañ el lec'h-se bevennet, diouzh tu an hanternoz, gant Menez C'homm, gant ar mor diouzh tu ar c'huzh-heol ha, diouzh tu ar c'hreisteiz, gant douaroù strujus ar Porze.

.....

Bep sadorn ez aen d' ar gêr da dremen ar sul gant va mamm. An tren bihan am c'hase betek Kastellin hag eno e veze dav gortoz an hini a yae war-du Pleiben. Hemañ, en em gavet war-dro an hevelep eur gant va hini a chome da c'hedal beajourien an tren bras a gerzhe etrezek Kemper.

335

Evel-se eo e ris gwelloc'h anaoudegezh gant Jord Arzel a ouien e oa deskadour-kontroller hag e veze e burevioù ar mererezh-se o terc'hel lec'h ar gontrollerien a gemere an devezhioù diskuizh a dleed dezho. D' an ampoent edo e penn burev Pleiben ha, bep sadorn, ez ae da Gemper da dremen ar sul da di e dud.

Un eurvezh bennak en deveze da c'hortoz a-barzh pignat en tren bras hag, e-ser mont ha dont dre ar gar, ec'h en em gave ganin.

Un deiz a lavaras din e oa sekretour Strollad Emrenerien Kemper hag e klaske prezegerien evit ober kaozeadennoù da izili ar strollad. Laouen e voen o klevout ec'h en em vode Bretoned yaouank e kêrbenn Bro-Gerne da bleustriñ gant kudennoù Breizh hag hec'h amzer da zont. O c'houzout e oan brezhoneger a-vihanik, e c'houlennas ouzhin hag-eñ e plijfe din ober ur brezegenn vrezhonek da baotred ar strollad. Respont a ris dezhañ ne oan ket helavar ha na ouien ket diwar-benn petra komz. « Kement-se ne vern, » emezañ, « met ret eo boazañ broadelourien kêr Gemper ouzh ar brezhoneg. » Va asant a rois, met en aner avat, rak morse ne voen pedet da nep bodadenn.

War a lavare Arzel, e tisplije kalz e venozioù breizhat da bennadurezhioù ar c'hontoroll, ar pezh na oa ket souezhus, hag e vije kaset eus Breizh d' an Alpoù en abeg da se, kerkent ha ma vije anvet da gontoroller d' e dro. Ne oa ket drouklaouen, emezañ, da rankout mont e pinijenn war zigarez e oa gwir Vreizhad, rak tu a gavje, evel-se, da zrouk-komz eus Bro-C'hall na oa ket evit gouzañv e oa deuet soñj da Vreizhiz da glask mad o bro. Ur jiletenn drandoue broudet ha neudet kaer prenet gantañ e Pont-'n-Abad, edo e soñj gwiskañ e-doug e harlu er vro estren, evit diskouez da c'henaouerien an tolead-se, evel ma rae outo, kened ha splannder gwiskamantoù Breizh.

.

D' ar mare-se edo ar C'hallaoued, renet gant ar marichal Pétain, o vrezeliñ, er Rif, ouzh Marokaned Abd-el-Krim. Ur sadornvezh, e gar Kastellin, e tiredas Arzel davedon kerkent hag em gwelas. Un niverenn eus Breizh Atao a oa gantañ en e zorn, ha fouge ennañ, he diskouezas din. « Gwelit. » emezañ, « an destenn eus ar pell-lizher hon eus kaset da benn an emsavidi varokan ! »

N' em eus ket soñj, ger evit ger, eus ar pezh a oa er skrid-se, met setu amañ dre vras, ar pezh a c'hellis lenn.

336

« Kevrenn Gemper Strollad Emrener Breizh d' ar pennvrezelour kalonek Abd-el-Krim :

Gant he gourc'hemenoù estlammet dirak ho stourm evit frankiz ho pro, e kas ar Gevrenn, deoc'h ha d' ho soudarded ken kadarn, he gwellañ hetoù a drec'h war an alouberien. Ra vezoc'h gouest da skarzhañ ho touar eus ar C'hallaoued ha d' ho zeurel er mor ! Evit ar Gevrenn : ar Sekretour. »

N' en devoa ket sinet Arzel e anv, kuit, moarvat, da gaout droukrañs mistri e vererezh, rak eñ war a lavaras, a savas e-unan hag a gasas ar pell-lizher.

Triwec'h vloaz diwezhatoc'h, p' edo en e garg nevez a sekretour ar prefed, ec'h heskine ar vrogarourien, e vignoned kozh, a gase da doull-bac'h Sant-Charlez, en devoa ankouaet, a dra sur, e oa bet enep-gall o reiñ kennerzh da Abd-el-Krim. Koulskoude eo bet talvezet dezhañ e drubarderezh, rak e dregont diner en deus bet gant ar garg a brefed un tu bennak e Bro-C'hall, a zo bet roet dezhañ e garedon.

*

N' edon ket e soñj kuitaat Plouidiern diouzhtu, pa zeuas noter Gwezeg da ginnig din e studi da brenañ. Va c'hoant a oa kaout unan vrasoc'h, met ne zisplijas ket din ar c'hinnig hag e komzis anezhañ d' am mamm. Houmañ, gant ar menoz na dajen ket pell diouti, va alias da ober afer. Sinet e voe ar marchad hag, e miz Gouhere 1927, e oan anvet da noter e Gwezeg.

Brav e gavis bevañ en ur barrez e-lec'h ma oa ar brezhoneg yezh pemdeziek an holl, war bouez hiniennoù, evel ar mestr-skol, ar sekretour ti-kêr, hag ar

veleien. Ar c'hure, galleg a-vihanik, a oa bet anvet eno evit kaout an tu da zeskiñ lavar an holl, met e-lec'h brezhonekaat ouzh ar re yaouank, e lamme war ar galleg kerkent ha ma kave tro. Ar person, avat, brezhoneger eus an dibab ha prezeger helavar, ne c'houzañve ket ar galleg en e iliz. D' an itron de Legge, maouez devot a ouenn vreziliat ha madoberourez ar barrez, a c'houlennas outañ prezeg e galleg, e respontas na oa ket evit asantiñ d' ur seurt tra anez ober gaou ouzh eneoù e barrezianiz. Dezhi e oa da zeskiñ safar ar vro ma karje entent e gelennadurezh.

Ma ne oa ket bras ar barrez, e kaved enni atantoù mat ha pinvidik. Doare o devoa an holl da vezañ en o aes, rak an avaloù-douar hadañ a saved eno a oa brudet hag a werzhed ker. Ar boblañs, war-dro c'hwezek kant den, a oa bet niverusoc'h tregont vloaz bennak kentoc'h. Abaoe he devoa kollet ur c'hwec'h kant a dud, tost da vat, a rankas divroañ pa voe serret darn eus mengleuzioù mein c'hlas Pont-Koblant. Meur a hini anezho a gavas labour e mengleuzioù Trélazé, tost da Angers, e Bro-C'hall.

337

Nebeud goude m' en em gavis e penn va c'harg, e timezis gant an hini a voe va gwreg kentañ. Ur plac'h eus ar vourc'h e oa, bet desavet e galleg gant he mamm, ur vaouez da Vro-C'hall ha chomet intañvez a-bred. M' en dije bevet he gwaz e vije bet disheñvel, rak eñ, mestr mengleuzier ha perc'henn d' e vengleuz, a oa ur Breizhad gredus douget d' e vro. Daremprediñ a rae ar Varzhed, hag un deiz ez eas da Vrest, gant un nebeut eus ar re-mañ, da c'houlenn ouzh ar prezidant Loubet ma vije digoret ar skolioù d' ar brezhoneg. Va gwreg, daoust dezhi da vezañ gallegerez a-vihanik, a oa troet gant yezh he c'henvroiz hag he c'homze kerkoulz ha n' eus forzh piv. Bep sizhun e rae katekiz brezhonek da baotred ar skol lik ha diwezhatoc'h e teuas barrek da skrivañ hor yezh a raemp implij anezhi bepred, mamm-gaer hag all.

Un deiz, goude koan, diouzh an hañv e oa, e teuas un den da c'houlenn komz ouzhin. Galleg a oa gantañ hag, oc'h en em reiñ da anaout, e lavaras e oa Frañsez Debauvais, rener ar gelaouenn Breiz Atao. Ur gwaz mentet mat e oa, blev du-pod dezhañ ha daoulagad lemm ha birvidik en e benn. Entanet e oa e vouezh hag e komze ken gredus hag ur misioner o kelenn an Aviel d' ar re n' o devoa ket an eurvad d' e anavezout. Hogen e aviel a oa hini ar garantez a dle pep Breizhad kaout ouzh e vro gwasket ha goapaet gant gouarnamant Pariz. Respont a ris dezhañ edon tre a-du gantañ diwar-benn ar gudenn a zisplege hag e rois dezhañ ur prof a-zoare evit e skoazellañ en e labour. En em zispartiañ a rejomp evel keneiled vat ha, da c'houde, e teuas din niverennoù ar c'houmanant-bloaz da Walarn en devoa lakaet war va anv diwar-goust ar guchennad am boa profet dezhañ. En em ezelañ a ris e Strollad Broadel Breiz hag e kasis va skodenn da Gevredad-kreataat evit adsevel Breizh.

Pa brenas ar Strollad ur stal moulerezh e Roazhon, e tremenas dre C'hwezeg Debauvais hag Anna Youinou, e wreg, un Douarnenezadez e koef. Edont o klask arc'hant evit paeañ priz ar brenadenn. Daoust ha ma ne oan ket pinvidik, e rois dezho a pezh a c'hellen diouerout, da lavarout eo, seizh mil lur a oa neuze un tammig a skoazell pa geñverier outi an distaol a zaou c'hant dre gant deuet war al lur gall abaoe *.

.
339

Skarzhet o devoa an amprestoù brezel an holl arc'hant laosk eus ar vro, ha, dre se, e oa diaes kas an aferioù da benn. Ne gave ar bresterien nep gwerzh d' o zitroù-amprest ha ne zouge ar re-mañ nep priz e marc'hadoù ar Yalc'h e Pariz. Pa reas Poincaré ar c'hentañ digresk war dalvoudegezh ar arc'hant, e voe aesoc'h kavout sav d' ar paperioù-amprest. Hogen spontus e oa ar c'holl, rak an ugent real leve a oa bet koustet seizh lur ha pevar-ugent ha dek gweneg ne dalvezent mui nemet tregont lur. Daoust da se e oa niverus ostizidi ar studi o tont da c'houlenn gwerzhañ o faperioù-amprest ha, pa lavaren dezho war-c'hed pe goll e tleent bezañ, e kavent da respont e oant bet aliet gant an aotrou Mañson (unan eus va diaraogidi er garg a noter) da gaout fiziañs er Frañs hag e oa ul

laeroñsi a raed diwar o c'houst. P' he devoa gounezet Frañs er brezel, evel ma lavarent, ne oant ket evit kompren penaos e oa deuet an distaol war an arc'hant o devoa prestet d' ar vro evit trec'hiñ an Alamagn. Ha me neuze dezho : « Bleud an diaoul, c'hwi 'oar, a ya atav da vrenn. Bremañ e welit petra eo talvezet deoc'h prestañ arc'hant d' ar gouarnamant ».

.....

War-dro ar mare-se e reas paotred Breiz Atao ur vodadenn abostolerezh e bourc'h Pleiben evit brudañ o mennadoù broadel. War a glevis e vije bet didrouz paneve d' ur Pleibenad, marc'hadour gwin eus e vicher, ha pañsionad-brezel, a zeuas da hegal ar brezegerien ha da glask tabut outo. Un tok giz ar barrez gantañ war e benn, e c'harme hag e rasailhe, endra ma c'helle, e oa gwelloc'h Breizhad eget an danvez-dispac'herien-se na ouient ket brezhoneg hag a glaske dispartiañ Breizh diouzh Bro-C'hall, ur vro ken karet gant ar Vretoned. Ar vrogarourien, miret outo da gomz, a rankas en em dennañ kuit hag a zeuas da gomz da Bont-Koblant da genderc'hel gant o bruderezh.

* Daou c'hant dre gant ma konter dre lurioù « pounaer» , evel just. Mod all e rankfed lavarout ugent mil dre gant. Ar skrid-mañ a zo bet savet abaoe ma 'z eus anv eus al lurioù nevez. (Notenn an embanner.)

340

Bet am boa anaoudegezh eus bodadenn Pont-Koblant a zo ur gêriadennig mengleuzerien war ribl ar stêr Aon hag hanter-hent etre bourc'h Pleiben hag hini Gwezeg. En ur vagazin da lakaat an ed a veze kaset d' an Naoned dre ar stêr eo en em zastumas an dud da selaou ar re a grede difenn gwirioù Breizh, un dra iskis na oa ket bet klevet anv anezhañ morse kent. Ur burev a voe savet hervez al lezenn hag em lakajod er penn anezhañ.

A-vec'h e oa deraouet ar c'hentañ prezeger da gomz ma welis ar marc'hadour gwin kintus e-touez ar selaouerien. Ruz e glipenn ha brouezet dezhañ, e krie war an drubarded a grede aliañ ar bobl d' o skoazellañ da seveniñ o zorfed euzhus. Kaer em boe lavarout dezhañ e komzfe d' e dro pa blijfe gantañ, e voen boud gantañ ha dirollet holl, e harzhe gwashoc'h-gwashañ. En desped da se e chomas sioul a-walc'h ar saliad tud hag hiniennoù zoken, war-lerc'h an abadenn, a anzave e oa plijet dezho menozioù an emrenerien. Un itron eus Kemper, avat, ur bilpouzenn anezhi, a daolas un teodad bilimus : « N' eo ket fall, a dra sur, ar soñjoù displeget gant ar re-se, met ne gredan ket e wellafe hor stad e Breizh, ma vefemp renet ganto, pa anavezan un darn vat anezho a zo paotred a vuhezegezh fall !» .

.....

Prim da c'houde, e talc'has Breiz Atao ur c'hendalc'h bras e Kastellin. Di ez is gant ur paotr yaouank eus Gwezeg, lenner d' ar gelaouenn ha broadelour entanet, war e veno. Kentañ tra a welis, en ur zegouezhout e kêr, a voe tok boulouzenet ar marc'hadour gwin a oa bet oc'h ober reuz e Pleiben hag e Pont-Koblant. War-du ennon, e-ser chilgamm, e kerzhas e berc'henn da damall din va diskiantegezh da heuliañ ar gostezenn fallakr a venne distagañ Breizh diouzh ar Vammvro C'hoant en devoa bet, emezañ, da lakaat e dreid e sal ar c'hendalc'h, met, anavezet kerkent gant paotred eus ar strollad, e oa bet taolet er-maez er straed. Ne dalveze ket chom da dabutal ouzh an oristal hag e trois kein dezhañ da vont etremek al lec'h dibabet gant an emrenerien evit o labourioù. E-keit-se ez ae ar marc'hadour gwin gallgar d' un davarn da evañ, e-ser chupennañ war an otonomisted daonet-se ha, war a gredan, e reas kemend-all e holl davarnioù Kastellin.

341-342

War-dro hanter ar Ru Vras edo lec'h ar c'hendalc'h ha, d' hen diskouez, e oa ur mell banniel gwenn-ha-du a-us da zor an ti a roe degemer dezhañ. A-dreñv e oa ur sal vras fichet gant bannieloù breizhat, skiñvier en he c'hreiz, gant un daol er penn uhelañ dezhi. En-dro d' ar sal, ha war bep a gador, e kemere kelaouennerien notennoù evit o c'hazetennoù. War unan eus ar skiñvier ec'h

azezis gant va c'havandad hag, e-touez ar vrogarourien a oa e penn ar vodadenn, ec'h anvezis Frañsez Debauvais. Ar wech kentañ a oa din gwelout ar re all ha ne vefen ket gouest d' o envel bremañ. Diouzh tro, pep hini gant ur gudenn disheñvel, e tisplegent dienez hag ezhommoù Breizh, o c'houlenn a-barzh klozañ, an digreizennañ ha muioc'h a frankiz dezhi da verañ he danvez hec'h-unan. M' am eus soñj, ne voe nep kaozeadenn vrezhonek ha kerse am boe d' un dra ken pouezus a-berzh difennourien hor broadelezh. Marteze, evit gwir, ne oa ket ar wechad-se, tro ur brezhoneger da gomz, pe e oa graet ar prezegennoù e galleg hepken evit reiñ tu d' ar gelaouennerien d' o entent. Moarvat, e-pad ar c'hendalc'h, a badas meur a zevezh, e voe unan bennak oc'h ober implij eus ar yezh vroadel da zibunañ e soñj e-keñver ar gudenn.

Piv en dije kredet en devoa ar Strollad Broadel ur gevrenn e New-York ? Unan eus ar gendalc'hidi a zisklerias e oa deuet en anv e genvroiz vroadelour a labourer er gêr vras-se, ar pezh a gavis sebezus kenañ. Levezon a dlee kaout an den-se war e genvroiz divroet, dizesk war draoù Breizh ha chalet hepken da c'hounit o bara, evit bezañ deuet a-benn d'o bodañ ha d' o unaniñ en ur gevredad a oa he fal reiñ d' o bro c'henidik ar gwirioù he devoa kollet. Abaoe, avat, ne glevis morse ober meneg eus kevrenn emrenerien New-York.

War-lerc'h ar vodadenn, ez ejomp d' un davarn, gant pennoù ar gostezenn, da gemerout bep a vanne a-barzh distreiñ d' ar gêr. Anaoudegezh a ris eno gant Loeiz Herrieu, rener an dastumadenn Dihunamb, ha gant un toullad paotred all a zeuas da vezañ brudet da c'houde. En o zouez e oa dileuridi iwerzhonat bet o stourm ouzh ar Saozon e ti-post Dublin, da vare emsavadeg Pask ar bloaz 1916. Darn anezho, mac'hagnet ha gwall-aozet, a gerzhe war vizhier loaek pe flac'hoù. Ouzh o gwelout e voe tizhet ha fromet va c'halon gant an doujañs a dleed dezho evit ar pezh o devoa gouzañvet evit frankiz o bro.

.

343

Evit brudañ Breiz Atao, e tegased din bep sizhun eus Roazhon un nebeud niverennoù anezhi da vezañ skignet e-touez an dud. O lakaat a raen e ti ar barver e-lec'h ma kave e ostizidi tro d' o lenn pe d' o c'has ganto. Da gentañ e kerzhas mat an traoù rak ar gelaouenn he devoa doare da blijout d' an holl. Met, a-barzh pell, e lavaras ar barver din ne oa mui evit ingalañ an niverennoù a gasen dezhañ, en abeg d' an difenn a oa bet graet outañ gant ar c'hure. Hemañ, graet gantañ ar brezel er bloavezhioù 14-15, a oa ur Gall rik hag un enebour touet da Vreiz Atao. Kement e trouk-komzas eus ar gelaouenn ma kemeras an dud kasoni outi ha ma kemerjont ar boaz da lavarout ; « Breizh Atav, mat da lao ! » Hogen lao dre amañ, a zo un distresadur eus ar verb lac'hañ pe lazhañ.

Gant tudigoù dizesk war stad dister o bro, met hiset hep mar gant mignoned ar c'hure, eo e klevet ar gunujenn hekus ha goapaus. Peadra a oa da goll kalon dirak dallentez ar c'hodiserien baour na dalveze ket ganto zoken selaou abegoù ar re a glaske o sklêrijennañ. Meur a hini all oc'h anzav e vije talvoudus da Vreizh bezañ gouest d'en em emellout hec'h-unan ouzh kement a sell outi, a sponte rak an trubuilhoù o dije da gaout a-berzh ar gouarnamant. Ne raen, eta, nemet prezeg er gouelec'h hag e chome va c'homzoù hep heklev.

(da vezañ kendalc'het.)

DEIZIADUR GODELL 1977
An dek 10,00 lur
Ne vez ket gwerzhet a-unanoù
Distaol 1/3 evit un niver bras
Kasit ho chekenn gant ho koulenn da R. HUON
2, Venelle Poulbriquen, Brest - C.C.P. Rennes 1629-14

Peronig

Evit ma vije aesoc'h d'an holl kompren pennad an Uhel hon eus lakaet un nebeut notennoù da heul ar skrid. An Uhel ne skrive ket bepred ar memes ger heñvel, da skouer e kaver a bep eil " de" ha " dez " evit deiz. A-hend-all, e Treger an anv-verb hag eil gour-lies an doare gourc'hemenn a zo heñvel, da skouer : sellet a dalvez sellit ha sellout.

Peurvuiañ ne lakomp ket div wech ar memes notenn.

Ur wezh e oa un intañvez paour o chom er Groaz-Houarn, en Plouared, ha n' he devoa evit holl vadoù nemet un ti-plouz, ur mab hag ur vuoc'h. Nezañ a rae tammoù neud 'vit o gwerzhañ er C'hozh-Varc'had, hag ar paotr a veze (1) bemdez o vesa ar vuoc'h war an hentoù, pa n' o doa park ebet d' he lakaat. Peronig e oa e anv. Un de (2) pa oa gant e vuoc'h war an hent, sklaer an amzer ha tomm an heol, e teuas en un taol da vezañ teñval, hag e voe souezhet ar paotr o welet ur c'harroñs o tiskenn eus an neñv en e gichen, hag un dimezell gaer e-barzh.

« Dont a raes (3) ganin da vevel, ma faotr, emezi ?

- N' hallan ket mont, ha dilezel ma buoc'h ha ma mamm, eme Beronig.

- Kae da laret d' az mamm dont amañ, ma komzin ganti. » Ha Peronig da redek d' ar gêr.

« Mamm, mamm, du-mañ a zo un dimezell gaer ha ma goulenn da vont da vevel ganti ; c'hoant komz ouzhoc'h he deus, mamm ; deut prim ! »

Mont a ra an hini gozh gantañ.

« Kontant e vec'h, mamm gozh, a laras dezhi ar briñsez, a oa en he c'harroñs, da lezel ho mab da zont ganin da vevel ? »

An hini gozh keizh (4) ne ouie petra da laret.

« Setu amañ daou c'hant skoed en aour evidoc'h, ha kant skoed ar bloaz o roin d' ho mab »

Biskoazh n' he doa gwelet kemend-all a arc'hant ; ma laras : ya. Neuze e kimiadas Peronig eus e vamm hag ec'h eas er c'harroñs gant an dimezell, hag e savjont en aer uhel, uhel. Ma tegouezhjont en un ale vras, gant ur c'hastell kaer er penn, hag un nor houarnet warnezhañ. Antren a reont.

345

An dewarlerc'h (5) ar beure e laras an dimezell dezhañ :

« Bremañ me ac'h a un tammig en hent, hag e chomi da-unan amañ met ne vanko netra dit. Deus ganin, ma tiskouezin dit petra az po da ober. »

Hag hen kasas da gentañ d' ar marchosi :

« Sell aze ur gazeg hag a vo ret dit kaout outi pep damant, reiñ dezhi foenn, melchon, hag he bale div wezh bemde. Sell aze un' all, ha n' az po ket ezhom da ober van outi. Sell amañ bremañ holl alc'houezioù ar c'hastell ;

gallout a ri bale ha mont lec'h ma kari, nemet en ur gambr hepken, an hini a vez digoret gant an alc'houez-mañ. Sell mat outañ, 'vit m' hen anavezi, ha wazh (6) a se dit mar ne sentes ket !

- Ma ! met mar n' am bez (7) netra da ober nemet se, en em enoein prest amañ ; roet (8) din un dra bennak da dremen an amzer.

- Petra a fell dit ?

- Ur c'hoari bennak ; ur c'hilhoù hag ur voull arc'hant, avat.

- Ma ! sell aze ur c'hilhoù hag ur voull arc'hant.

- Trugarez ! Met mar am bije ivez ur c'hilhoù hag ur voull aour !

- Sell aze c'hoazh ur c'hilhoù hag ur voull aour ; kontant out bremañ ?

- Ya sur ; met estr evit c'hoari c'hilhoù a rin ivez, me oar vat ?

- Petra a c'hoantaes c'hoazh eta ?

- Mar am bije ur voualc'h aour avat, da ganañ din da zañsal, pa 'n em enoein o c'hoari c'hilhoù !

- Hag az po, sell aze c'hoazh ur voualc'h aour. Ha bremañ ec'h an kuit ; n' ouzon ket kaer pe e vin pell pe ne vin ket. »

Hag e savas neuze en aer gant he c'harroñs.

Mont a ra neuze Peronig da reiñ boued d'ar gazeg ; ha goude ec'h a da vale anezhi ; buan e oa evel an avel. Pa zistro :

« Arsa, emezañ, ret eo din ivez gwelet ar c'hastell, p' am eus an holl alc'houezioù. » Digoriñ a ra ur gambr, hag e tigor daoulagad bras, o welet eno bernioù aour hag arc'hant.

« Hola ! emezañ, mestrez ar c'hastell-mañ n' eo ket ur baourez bennak ! »

346

Digoriñ a ra un' all pelloc'h, hag ez eo souezhet o welet anezhi leun a bep seurt dilhad, re gaer ha re dister (9), dilhad rouanez, dilhad priñsed, markizien, ha memes re peizanted.

« Daoust pelec'h 'on-me amañ ivez, emezañ ? Da ziwall am eus. »

Ur gambr all a oa leun a lien moan, un' all a c'hoarioù hag a benvioù-muzik (19). Bemde (11), p' en dije baleet ar gazeg, ha pa vije skuizh o c'hoari c'hilhoù, pe o selaou e voualc'h arc'hant o kanañ, e teue da welet an traoù kaer a oa er c'hambroù, ha bep gwezh, pa dremene e-biou ar gambr a oa difennet outañ da zigoriñ, e lare dezhañ e-unan : « Daoust petra a zo aze ivez ? » hag en doa c'hoant bras d' he digoriñ.

Pa voe bet eno eizh dez (12) evel-se, 'vel na gave den neblec'h, e oa enoeet-mat, hag e tigoras ar gambr difennet. Ma welas eno ur marc'h ker treut, ker treut, m' en doa poan o chom war e zivesker, ha dirazañ e oa ur fagodenn spern, hag unan melchon a-dreñv.

« Jezuz ! loen paour, emezañ, prest out da vervel gant an naon : me 'c'h a da reiñ dit ar melchon-mañ. »

Ma voe souezhet mat neuze o klevet ar marc'h o komz evel-hen :

« Me a zebr ar seurt boued a zebrez-te ivez. Te n' ouzout ket pelec'h ez

out amañ. Ar briñsez kaer he deus da zegaset ganti eo mestrez an holl sorserezed. Me a zo amañ pell a zo dalc'het ganti dindan gazelge, ha te, mar ne garez diwall, a c'hoarvezo ganit evel ganin-me ha kalz a re all a zo amañ ; met koulskoude mar karez sentiñ ouzhin hag ober evel ma larin dit, e teufomp marteze a-benn da 'n em dennañ ac'han.

- Me ne c'houlennan ket 'well' ; laret din petra a zo ret da ober evit se, hag e rin holl evel ma larfet.

- Ma ! met hastomp buan neuze, rak ar briñsez a oar dija a 't eus digoret warnon, ha prestik ec'h arruo (13). Kerzh prim da gambr al lien, kemer eno ul liñsel a deir gwalenn ; kerzh neuze da gambr an aour hag an arc'hant, degas ganit ac'hane ar muiañ ma c'halli, hag o laka war ma c'hein, gant ar c'hilhoù arc'hant hag ar c'hilhoù aour : ar voualc'h aour a laki 'barzh da c'hodell. Neuze e vridi un dogez bras a zo aze e-tal an nor (kousket eo bremañ), 'vit na c'hallo ket hon harzañ da vont kuit. Met gra prim-ha-prim ! »

Ober a ra Peronig holl evel ma zo laret dezhañ, bridañ an dogez ha degas gantañ e vec'h a aour hag a arc'hant, hag hen lakat war ar marc'h.

347

« Kerzh c'hoazh, a lar hemañ dezhañ, da gambr ar briñsez, ha degas ganit ul levrig ruz a weli eno, ha gant al levr-se, me ' gred, e teufomp a-benn eus hon zaol (14). »

Mont a ra Peronig, ha degas gantañ al levrig ruz.

« Pign bremañ war ma c'hein, hag eomp kuit, ha d' an daoulamm ruz, rak an dogez a dorro he chadenn hag a zeuio war hon lerc'h, rak c'hoar eo d' ar briñsez, ha pa gar ec'h a ivez en plac'h. »

Mont a reont e-maez ar porzh goustadikañ ma c'hellont ; ha d' an daoulamm ruz neuze !

« Sell war da lerc'h, a laras ar marc'h da Beronig ; ne welez netra o tont ?

- Eo, gwelet a ran unan hag a zeu evel ar foeltr.

- An dogez eo ! Dre nerzh al levrig, ma vo amañ ur feunteun, ha div ranig e-barzh. »

Ha kerkent setu ur feunteun, ha Peronig hag ar marc'h e-barzh evel div ranig.

An dogez a arru kerkent, ha droug enni ! Sellout ha klask a ra.

« Pelec'h ar foeltr int-i aet ? Amañ, e oant koulskoude ! Ha ne welan netra nemet ur feunteun, ha div ranig enni ! Ret eo din mont da laret d' am c'hoar. »

Ha d' ar gêr, ha da redek.

« Petra, eme ar briñsez, p' he gwel o tont, hag e tistroez evel-se da-unan ?

- Ne ouzon petra int deut da vezañ ; degouezhet el lec'h m' am boa o gwelet, n' am eus gwelet netra nemet ur feunteun, ha div ranig e-barzh.

- Ma mallozh ! ar re-se e oant ! »

Kerkent ha ma voe aet kuit an dogez, Peronig hag e varc'h a zistroas d' o stumm kentañ, hag en hent arre (15).

« Sell war da lerc'h, a laras en-berr ar marc'h, ne welez netra o tont ?

- Eo, an hini gozh, hag hi kounnaret !

- Dre nerzh al levrig ruz, ma savo amañ ur chapel, ha ma vefomp troet en daou sant, unan a bep tu d' an aoter ! »

Ha kerkent, setu ur chapel, ha Peronig hag e varc'h troet en daou sant, unan a bep tu d' an aoter.

Arruout a ra ivez ar sorserez kozh, hag hi fuloret ! Klask a ra, tripal ha mallozhiñ ; ne gav netra. Distreiñ a ra d' ar gêr o yudal.

Kerkent an daou-mañ a zistro d' o stumm kentañ, ha kuit d' ar red ! Setu-int aet e-maez a zouar ar sorserez kozh, n' he deus ken galloud ebet warne ! Poent e oa ! Rak pa arruas er gêr ha pa welas e oa laeret dezhi he levr bihan ruz, e oa retornet, wazh fuloret evit biskoazh :

348-349

« Ma mallozh warnout, Peronig ! a grias eus an tu all d' ar rivier, rak n' halle ket mont pelloc'h, - aet ganit ma levr bihan ruz, ha gantañ ma holl ouiziegezh ha ma holl c'halloud ! »

Hag e tripe hag e yude evel ul loen gouez klañvet. Met Peronig a rae goap hag a save al levrig ruz en aer, o laret :

« Sell, sell, sorserez kozh an Diaoul ! »

Kemer a rejont neuze hent Pariz. Pa voent degouezhet tost da gêr, e laras ar marc'h da Beronig :

« Bremañ e vo ret dit ma lazhañ.

- Ho lazhañ ! N' am bo biken ar galon da ober se.

Ret e vo ober, pa laran dit, evit ma mad ha da hini, ha goude-se ma c'hignat : neuze e weli petra a c'hoarvezo. »

Lazhañ a ra Peronig e varc'h, hag e gignat, hag ec'h eo souezhet-bras o welet ur priñs kaer o sevel anezhañ, hag o laret dezhañ :

« Ma bennoz dit, Peronig ! rak ma salvet a 't eus : ha n' eo ket me hepken a 't eus salvet, met kalz a re all. An holl zilhad a 't eus gwelet duhont en ur gambr vras, a oa dilhad tud dalc'het evel don dindan gazelge gant ar sorserez villiget, hag a 't eus saveteet anezhe evel don, rak holl int deut kuit war hon lerc'h. Me a zo mab da roue an Turki : deus ganin hag e vi eureujet d' am c'hoar, hag ar gurunenn a vo dit goude marv ma zad.

- Trugarez ! met ne c'houlennan ket dimeziñ bremañ ; c'hoant am eus da vale bro un tammig a-raok ; diwezhatoc'h marteze en em gavfomp c'hoazh, ha neuze e vo gwelet. »

Ma kimiadjont an eil eus egile.

Peronig oc'h arruout en Pariz ac'h eas da lojañ en un ostaleri tost da balez ar roue, hag e laras d' e ostiz klask dezhañ ur mestr-skol, ur mestr-dañs hag ur mestr-armoù. Ma voe graet evel ma laras, hag a-benn tri miz ez oa deut da c'houzout kement hag e vestroù, rak ur paotr a skiant kalz e oa. Neuze ec'h eas da balez ar roue, hag e c'houlennas ha ne oa ket ezhomm a ur mevel jardiner. Ma voe laret dezhañ mont da gomz gant mestr ar jardinerien, hag e voe kemeret, dre ma oa ur paotr stummet-mat. A-gichen c'hwec'h eur eus ar beure, bete c'hwec'h eur da abardaez, e veze (16) o labourat er jardinoù, ha plijout a rae kaer d' ar

mestr.

350

War-dro tri pe bevar miz abaoe ma oa eno, e c'houlennas un de digant ar
mestr :

« Petra, ne vo ket prestik ivez gouel ar jardinerien ?

- Eo sur, prestik e vo, a-benn teir sùn (17) amañ.

- Ba ! perak gortoz teir sùn ? Ma hen graemp (18) raktal ? Me am eus
arc'hant hag a baeo ; ha neuze mall am eus da anavezout holl jardinerien ar vro.
»

Setu ma voe savet tinelloù ha taolioù en ale vras jardin ar palez, ha
pedet holl jardinerien kêr. Ha ma voe eno ur fest ar c'haerañ. Pa voe savet an
dud eus taol, e laras Peronig :

« Arsa, paotred, ur c'hoari bennak a vo ret dimp da ober, a-raok kimiadiñ.
»

Ma 'c'h ejont neuze darn da c'hoari boullou, darn da c'hoari galoch, ha
darn all da c'hoari c'hilhoù. Peronig a gerc'has e gilhoù hag e voull arc'hant,
hag en em lakas da c'hoari c'hilhoù, gant ur pemp pe c'hwec'h all. Ar briñsez
yaouank a oa o sellet oute e prenestr he c'hamb, hag a voe souezhet o welet
kilhoù ker kaer ; ne skuizhe ket o sellet oute. Ma c'hoantaas o c'haout, hag e
laras d' he flac'h ar gambr (19) ;

« It da c'houlenn digant ar jardiner-se ha gwerzhañ a rae (20) din e
gilhoù. »

Ar plac'h ar gambr a ziskenn kerkent, hag ac'h a da gavout Peronig, hag a
c'houlenn digantañ :

« Ar briñsez yaouank he deus gwelet ho kilhoù, hag he deus c'hoant d' o
c'haout ; kontant e vec'h d' o gwerzhañ dezhi ?

- Ya sur, evit ober plijadur dezhi.

- Ha pegement a c'houlennet oute ? (21)

- Ne c'houlennan nag aour nag arc'hant.

- Petra a c'houlennet eta ?

- Ur pok digant ar briñsez, netra ken.

- Penaos e kredet (22) komz evel-se ? Goulennet (23) aour hag arc'hant hag
ho po ; met 'vit ar pezh hoc'h eus laret, n' ho po biken.

- Marteze ; it da laret d' ar briñsez bepred. » Retorn a ra ar plac'h ar
gambr da gavout he mestrez : « Ac'hanta ! petra en deus laret ?

- Ne gredan ket laret dec'h (24), ma mestrez.

- Perak eta ? Laret bepred.

- Laret en deus ne roio e gilhoù nemet evit ur pok diganec'h (25).

- Ma ! degemennet (26) dezhañ dont amañ. »

351

Retorn a ra ar plac'h ar gambr da gavout Peronig, hag e lar dezhañ :

« Deut da gavout ma mestrez d' he c'hambr, ha degaset ganec'h (27) ho kilhoù. »

Mont a ra Peronig.

« Petra, jardiner, a lar dezhañ ar briñsez, hag e vo ret dec'h kaout evit ho kilhoù ar pezh hoc'h eus goulennet ?

- Ya 'vat, Priñsez ; met sellet (28) kaerañ traoù ! Ne garfec'h (29) ket o far war an douar.

- Ma ! pa eo ret koulskoude. »

Hag e kemeras Peronig ur pok, hag e lezas ar c'hilhoù ganti.

Teir sùn goude, pa voe degouezhet an dro-mañ gouel ar jardinerien, e laras arre Peronig d' e vestr :

« Ma raemp gouel ar jardinerien, mestr ?

- Arre ?

- Ya sur, pa 'n em gav hirie (30) an de.

- Me a zo kontant, mar paeet (31) arre ?

- Ya, ya, me a baeo. »

Ma voe graet gouel ar jardinerien un eil gwezh. Goude lein, ec'h a arre pep hini d' ar c'hoari a blije dezhañ, darn da c'hoari boullou, darn da c'hoari galoch, darn all da c'hoari c'hilhoù. Peronig, gant un toullad re all, a oa o c'hoari c'hilhoù gant ur c'hilhoù hag ur voull aour. Ar briñsez yaouank a oa arre en prenestr he c'hambr, ha pa welas ar c'hilhoù hag ar voull aour, e laras :

« Jezuz ! Kaerañ da gilhoù ! It prim, ma flac'h ar gambr, da c'houlenn hag i a vo gwerzhet din. »

Mont a ra ar plac'h ar gambr da gavout Peronig, er jardin.

« Kontant e vec'h (32) da werzhañ d' am mestrez ho kilhoù hag ho poull aour ?

- Ya sur.

- Pegement a c'houlennet (33) evite ?

- Ne c'houlennan nag aour nag arc'hant.

- Petra eta ?

- Gwelet penn he glin, hepken.

- O ! den divezh ! evit se ne welfet biken.

- Marteze ; it da laret dezhi bepred. »

Distreiñ a ra ar plac'h ar gambr da gavout he mestrez :

« Ac'hanta ! emezi, petra en deus laret ?

- Mezh am eus o laret dec'h, ma mestrez.

- Laret bepred.

- Ne c'houlenn nag aour nag arc'hant, nemet gwelet penn ho klin hepken.

- Ma ! laret (34) dezhañ dont, ha degas gantañ e gilhoù hag e voull aour.
»

Degemennet eo da Beronig, hag e teu da gambr ar briñsez gant e gilhoù hag e voull aour.

« Ar pezh a c'houlennet, jardiner, n' hall ket bezañ ; met goulennet kement ha ma karfet (35) a aour hag a arc'hant, hag ho po.

- Nann, nann ! se, pe netra.

- Ma ! pa eo ret koulskoude. »

Hag e savas buan, buan he robenn betek he glin, hag he lezas da gouezhañ kerkent.

« Gwelet hoc'h eus ? emezi.

- Ya, met re vuan kalz hoc'h eus graet.

- N' ho poa ket laret pegeit, hag ho kilhoù hag ho poull a zo din.

- Gwir eo. »

Hag o roas dezhi.

Eizh de goude e laras arre Peronig d' ar mestr jardiner :

« Div wezh am eus pedet holl jardinerien kêr da leinañ, met o gwiragez, o c'hoarezed hag o bugale a oa chomet er gêr, hag am eus c'hoant d' o gwelet ivez, ha d' o fedañ da leinañ.

« Se a zo mat a-walc'h, » a laras ar mestr jardiner.

Setu ma voe graet un drivet fest, kalz kaeroc'h evit an daou all, ha pedet holl gwiragez, c'hoarezed ha bugale jardinerien kêr. Goude lein, e laras Peronig :

« Eomp da zañsal bremañ !

- Ya, ya, a lare an holl gwiragez ha merc'hed ; met n' eus soner ebet.

- Bezet hep morc'hed, me a gavo unan. »

Ha Peronig da glask e voualc'h aour, hag he lakat war vranc ur wezenn orañjez, hag o laret (36) dezhi :

« Gra da zever, ma moualc'hig aour ! »

Ha setu kerkent ur muzik ker kaer, ker kaer, ma ne ve (37) ket klevet kaeroc'h er Baradoz.

Ar briñsez a oa arre en prenestr he c'hamb, ha pa glevas, e laras d' he flac'h ar gambr :

« O Doue ! kaerañ da vuzik ! Met ne welan soner ebet ; sell ! sell ! ur voualc'h aour war vranc ur wezenn orañjez, hag honnezh a ra ar muzik kaer-se ! It prim, ma flac'h ar gambr, da brenañ din ar voualc'h aour-se, rak ret eo din he c'haout, kousto da gousto ! »

Mont a ra arre ar plac'h ar gambr da gavout Peronig.

« Kontant e vec'h (38), emezi, da werzhañ ho moualc'h aour d' am mestrez ?

- Ya sur, met ker e kousto.

- N' eus forzh, laret a zo din reiñ dec'h aour hag arc'hant kement ha ma c'houlennfet (39), rak ma mestrez he deus c'hoant bras d' ho moualc'h aour.

- Ba ! ba ! n' eo ket nag aour nag arc'hant a c'houlennan.

- Petra eta ?

- Kousket teir nozvezh gant ar briñsez !

- O ! den divergont ha divezh ! ret eo dec'h bezañ den fall, pe diskiant holl evit komz e-giz-se ! Ma ouife ar roue !...

- N' oufen petra da ober, evel-se e vo, pe e virin ma moualc'hig aour. »

Dont a ra ar plac'h ar gambr da gavout he mestrez : « Ac'hanta ! emezi, petra en deus laret ?

- O ! ma mestrezig paour ! an den divergont ha divezh ! Ma ouife ho tad petra en deus laret !

- Met petra eta ?

- Ne gredin biken laret ar pezh a c'houlenn an den fall-se.

- Laret (40) bepred ; petra a c'houlenn-eñ ?

- Kousket teir nozvezh ganec'h (41) ! pa eo ret din hen laret (42).

- Ma ! degemennet dezhañ dont d' am c'havout, ha degas gantañ e voualc'h aour. »

Distreiñ a ra da gavout Peronig, soublet he fenn ganti, hag e lar dezhañ :

« Laret a zo dec'h dont da gavout ma mestrez, ha degas ganec'h ho moualc'h aour. »

Dont a ra Peronig, gant e voualc'h aour.

« Petra, jardiner, a lar dezhañ ar briñsez, ret e ve laret e ve kollet ho skiant-vat ganec'h evit ober ur goulenn evel-se ; goulennet diganin aour hag arc'hant ar pezh a garfet, ha kement a c'hoantafet eus ar palez, hag ho po ; met 'vit ar pezh hoc'h eus goulennet n'ho po biken, kredet (43) mat se.

- Ma ! Priñsez, n' am eus netra da ober nemet kas ganin ma moualc'hig aour, rak n' he roin 'met 'vit an dra am eus goulennet. »

Ar briñsez ne respontas netra, ha Peronig a zeuas e-maez ar gambr. Met pa oa o tiskenn ar viñs, ar plac'h ar gambr hen galvas da zont da gomz c'hoazh ouzh he mestrez.

« Ma ! emezi, pa eo ret koulskoude !... Roit din ar moualc'h aour. En-berr da noz, pa vo aet an holl dud da gousket er palez, e teufet (44) goustadik, goustadik da doull ma dor, hag e vo digor. Met diwallet (45) mat da vezañ gwelet pe glevet !... »

Ar briñsez a vije (46) neuze o vale bemde dre ar palez hag ar jardinoù, he moualc'hig aour ganti war he biz, ha stad enni ; ha kement a gleve ar voualc'h o kanañ, a vije boemet o c'halonoù !

Met un deiz e chomas klañv war he gwele. Klasket e voe medisin ar palez war he zro ; n' halle ket he gwellaat. Klasket e voe re all, bet e oa holl medisined kêr ouzh he gwelet, hag hini ne anaveze he c'hleñved, pe ne grede hen diskleriañ. Setu morc'hed d' ar roue, rak karout a rae e verc'h. Peronig, hag a ouie un dra bennak eus he doare, ac'h eas da gavout ur c'hereour kozh 'barzh en kêr, hag a laras dezhañ :

« Mar karet (47), paeron, me ho lakaio da c'honit ho puhez aes, ha n' ho po ken ezhomm da dammañ kozh votoù evit bevañ.

- Me ne c'houlennan ket gwelloc'h.

- Ma ! selaouet (48) mat, ha gret (49) 'vel ma larin dec'h. Me a roio dec'h ul levitenn aotrou hag un tog hag a vo skrivet warnañ : " Mestr surjian ". It sevel-se da gavout ar roue en e balez ha laret dezhañ ez oc'h den da yac'haat e verc'h ; met goulennet ur varrikenn arc'hant 'vit ho paeamant, ha gret (49) dezhañ sinañ dec'h a-raok. N' ho po droug ebet, n' eus forzh petra a larfet (50). »

Ober a ra penn-da-benn ar c'hereour kozh evel ma eo laret dezhañ gant Peronig ; ar roue a sin en devo ur varrikenn arc'hant mar gwella d' e verc'h, ha ne vo graet droug ebet dezhañ, n' eus forzh petra a laro. Mont a ra neuze da gamhr ar briñsez, tastornat a ra he brec'h, sellet he dour...

« Ac'hanta ? eme ar roue.

- Ho merc'h, sir, n' eo ket gwall glañv ; c'hoarzhin a ra he c'hleñved outi.

- Penaos, penaos, eme ar roue, petra eo se ? » Ha droug ennañ ! ha da damall e verc'h !

« Ha piv a zo kiriek ?

- Peronig, emezi, hag ar voualc'h aour.

- Piv eo Peronig ?

- Ar jardiner en deus roet din ar voualc'h aour.

355

- Ur jardiner ! Ma ! bremañ e vo ret dec'h hen kemer da bried.

- Ne c'houlennan ket gwelloc'h, ma zad.

- Ha me, a zo intañv ha kozh, hag a eureujo ivez e vamm ! »

Ma voe graet kerc'hat an hini gozh raktal. Ha setu penaos e voe dimet (51) Peronig da verc'h ar roue Frañs, hag e vamm d' ar roue Frañs e-unan.

Eno avat e voe festoù neuze !

Ne vanke na manj-pain na manj-karo,
Na krampouezh tev, na krampouezh tanav,
Yod poazh, na yod da boazhat,
Yod en go, ha yod da lakat ;
Unan en-dro gant ur gloge,
O c'houlenn : « yod a vank aze ? »
Bet' ur porc'hell a oa eno,
Poazh ur penn, ur penn all bev !

Me 'oa ivez gant ma beg fresk,
Am boa naon, hag a grogas prest ;
Ur c'heginer bras a oa eno,
Gant e votoù « bec Sant Malo »,
Skoas ganin em diadre, (52)
Am stlapas war lein Mene-Bre,
Ha ma 'z on deut eeun ac'hane
Evit kontañ dec'h ma doare.

Kontet gant Marc'harid FULUP,
eus a barroz Pluned. - Kerzu 1868.
Eilskrid gant Y. E. ABALAN.

NOTENNOU :

1. vije, er skrid.
2. de = deiz.
3. raes = rafes.
4. keizh = kaezh.
5. dewarlerc'h = deiz-war-lerc'h.
6. wazh a se = gwazh a se.
7. be, er skrid.
8. roet = roit.
9. re dister = re zister.
10. a benvioù = a vinvioù.
11. bemde = bemdez.
12. dez = deiz.
13. arruo = erruo, er skrid a-bezh.
14. hon zaol = hon taol.
15. arre = adarre.

356

16. e vije, er skrid.
17. sùn = sizhun.
18. graemp = grafemp.
19. plac'h ar gambr = plac'h a gambr.
20. rae = rafe.
21. pegement a c'houlennet oute = pegement a c'houlennit dioute.
22. kredet = kredit.
23. goulennet = goulennit.
24. dec'h = deoc'h.
25. diganec'h = diganeoc'h.
26. digemennet = digemennit.
27. degaset ganec'h = degasit ganeoc'h.
28. sellet = sellit.
29. gavfec'h = gavot.
30. hirie an de = hiziv an deiz.
31. paeet = paeit.
32. vec'h = vefec'h.
33. c'houlennet = c'houlennit.
34. laret = lavarit.
35. karfet = karot.
36. laret = lavarout.
37. ve = vez.
38. vec'h = vefec'h.
39. c'houlennfet = c'houlennot.
40. laret = lavarit.
41. ganec'h = ganeoc'h.
42. laret = lavarout.
43. kredet = kredit.
44. teufet = teuot.
45. diwallet = diwallit.
46. vije = veze.

- 47. karet = karit.
- 48. selaouet = selaouit.
- 49. gret = grit.
- 50. larfet = lavarot.
- 51. dimet = dimezet.
- 52. diadre = diadrefñv.

Da ginnig hag aes da lenn :

UL LEVR KEGIN E BREZHONEG

135 meuz, 80 pajenn, ment 21 dre 13,5 sm,

gant lavarennoù fur, o reiñ da anaout doare-gwelout ar Vretoned evit ar pezh a
sell ar bevañs

15 lur dre ar post :

REVUE BARR-HEOL, Buhulien

c.c.p. 2 454 53 Rennes

ISTOR BREIZH LA BORDERIE

troet gant ROPARZ HEMON

Brezel Bleaz ha Monforzh

EIL MAREAD

EMZISPLEGADUR HA BEVDER AR STOURM
(1343-1352)

Stad an daou duad, Bleaz ha Monforzh, e dibenn kentañ maread ar stourm (1341-1343) a ziskouez, - n'eo ket en un doare resis, pezh a vefe dic'hallus, hogen anat a-walc'h, - o stad an eil e-keñver egile evel ma tlee chom betek an diwez.

E dalc'h Bleaz e oa Roazhon ha Naoned. Mestr e oa war C'horre-Breizh a-bezh ha, gant domani bras Penteür, war aod an hanternoz betek e-kichen Montroulez, a oa kevezerezh etre an daou duad d' he c'haout.

Leon a-bezh, an darn vrasañ eus Kernev, an aod hogozik penn-da-benn e kornog hag e kreisteiz al ledenez betek genou ar Wilun, gant porzhioù Konk-Leon, Brest, Kemper, Kemperle, Henbont, Gwened, a oa dindan banniel Monforzh.

Kemmet e voe an traoù tamm pe damm hervez an darvoudoù. Kemper, evel ma welimp bremaik, a gouezhas buan etre daouarn Bleaz. Monforzhiz a reas toulloù bras e domani Penteür, da skouer e-kichen Ar Roc'h-Derrien, hag ar Saozon en em ziazegas start e kreñvlec'hioù eus Breizh-Uhel, evel Bekerel, Plouarzel, Felgerieg, Kastell-Gwenn. Daoust da se, dre vras e chomas heñvel rannadur ar vro etre an daou duad a-hed ar brezel : Breizh-Izel hogos a-bezh, aod ar c'hreisteiz hag ar c'hornog gant Monforzh ; aod an hanternoz ha Breizh-Uhel gant Bleaz.

Breizh-Uhel, gallek he yezh ha gall he boazioù, a dlee dre natur harpañ mignon ar Frañsizien, ha dre an hevelep abeg, an darn vuiañ eus tiegezhioù meur ar c'hladdalc'helezh vrezhon a dlee ober ivez. Hogos holl e choment e Breizh-Uhel, ereet e oant dre zimezioù gant tiegezhioù gall, hag e tarempredent lez roue Frañs.

358

Er c'hontrol, Breizh-Izel, pa ne vije bet nemet abalamour d' he yezh, a yae a-enep da levezon Frañs. Aon he doa, gant gwir abeg, na vije krignet tamm-ha-tamm gant Frañs, euvret ha diskaret an emrenerezh. Dre redi en em droe eta ouzh ar Saozon, hogen ne oa nemet dre ma lakaent nebeutoc'h en arvar, rannet evel ma oant diouzh Breizh gant ar mor, bezoud broadel an dugelezh kozh.

A zo muioc'h, evit trec'hiñ, zoken evit chom a-blom, o deveze an daou duad ezhomm eus galloudoù estren : Bleaz eus Frañs, ha Monforzh eus Bro-Saoz. Ma vije bet gouest an eil tuad da vizout na vije skoazellet egile eus an diavaez, e vije bet mestr a-grenn war e enebour.

Dre belec'h e teue ar skoazell ? A-berzh ar Frañsizien dre Roazhon ha Naoned, a-berzh ar Saozon dre Vrest, Henbont ha Gwened. Serriñ an dorioù a leze pourvezioù ar skoazellerien diziouerus-se da dremen e kamp an enebourien a dlee bezañ atav pal kentañ pep tuad.

Da lavarout eo, e-pad ar brezel-se, ar pal strategek merket gant natur an traoù oa, evit Bleaz lemel ar porzhioù-mor digant ar Vrezhoned-ha-Saozon, evit Monforzh lemel Roazhon ha Naoned digant ar Vrezhoned-ha-Frañsizien.

Edouarzh III, evel hon eus lavaret, pa zeuas e Breizh e 1342, a gerzhas eeun war-zu ar pal-se.

Diwar neuze evelato, er mareadoù a studiomp bremañ, e-touez an oberiadennoù-brezel a zo bet dalc'het koun anezho, ur pal eo na zeu ket a-wel alies. Diaes-tre eo zoken kavout en oberiadennoù-se un heuliad hag ur raktres. An dielloù istorel a zo diglok a dra sur. Koulskoude, ma vije bet gant un tuad pe egile pezh a c'hallfed envel ur raktres strategek, ur mennad spis eus ur pal pennañ, ur pal da dizhout evit mat, ur pal a vije chomet splann dre liested ar munudoù ha rouestl ar skoilhoù, spurmantet e vefe da nebeutañ ur wech an amzer.

Anat eo ar pal en ergerzhadeg veur bleniet gant Edouarzh III. En darvoudoù a zeuas war-lerc'h, en enep, ne weler dreist-holl nemet dizurzh. Lavaret e vefe tammoù distag tennet eus un Ilias dianav, a vije bet kollet ar benndanevell anezhi, na c'haller mui adsevel ar raktres hag ar steuñvenn a oa e-kreiz.

Daoust avat ha seurt raktres a zo bet biskoazh ?

359

Torridigezh Treverz Valastreg (1343-1344)

A-boan sinet treverz Valastreg, e c'halled rakwelout diwar meur a arouez ne oa ket evit padout pell.

D' ar 26 a viz Genver ha d' ar 1-añ a viz C'hwevrer 1343, roue Bro-Saoz a roe urzh da aozañ pep tra e Portsmouth evit lestrañ un arme vras, renet gant Richarzh Arundel ha Gwilherm Clinton, a dlee loc'hañ etrezek Breizh d' ar 1-añ a viz Meurzh.

Ne c'hoarvezas netra avat. Roue Bro-Saoz ne greskas ket niver ar soudarded en doa e Breizh. Hag evel ma welimp, e termas anezho e miz Gouere.

Evit pezh a sell ouzh ar Vrezhoned-ha-Frañsizien, ne seblantent ket kenneheut ober kalz. E-tro dibenn miz Ebrel, dres d' ar mare mat evit kregiñ gant ar stourm, Charlez Bleaz a rae pourvezioù bras a armoù hag a armadurioù. Marteze nemet evit kemer e ziarbennoù, hag anat eo n' en dije ket addigoret ar brezel drezañ e-unan.

Muntridigezh Olier Klizun.

Roue Frañs an hini eo a dorras treverz Valastreg en un taol trumm.

E-doug ergerzhadeg Edouarzh III e Breizh e 1392, unan eus pennañ baroned an dugelezh, Olier Klizun, evel am eus lavaret, a oa tremenet tost a-ouez d' an holl eus tuad Bleaz da duad Monforzh. Un nebeut mizioù goude, o fiziout e talvoudegezh an dreverz graet, ez eas da Bariz, e-tro dibenn miz Gouere 1343 evit kemer perzh e c'hoarioù-joentrou. War a zo bet lavaret, e oa bet pedet zoken da zont. Harzet e voe « gant kalz ampartiz », hervez " Kronikoù Meur Bro-Frañs ", da lavarout eo dre drubarderezh, ha neuze, « dre varnedigezh ar roue », da lavarout eo, hep barnedigezh ebet, dibennet er C'hoc'hu war ur chafod d' an 2 a viz Eost : ur stign hag ur vuntridigezh.

Hervez tud lez Frañs, Olier Klizun eo en doa ijinet an taol-treituriezh graet gant Naonediz, a oa aet da fall, evel am eus kontet uheloc'h. E benn a voe lakaet a-wel d' an holl, sanket e beg ur pik, dirak an nor Sauvetout e Naoned « evel penn an treitour a vennas gwerzhañ kêr ». Ne oa prouenn ebet eus an trubarderezh-se, ha zoken e Frañs e veze diskredet gant kalz tud.

360

Kablus pe digablus, Klizun ne dlee ket bezañ kastizet, hervez divizoù treverz Valastreg, da vihanañ evit ar mare. Anat eo e oa daleet ar gwir en doa ar roue da gastizañ ar re eus e wizien a harpe pe o doa harpet Monforzh : anez e vijent en em gavet dizifenn dirak kleze o fennaotrou. A zo muioc'h, skrivet-

splann eo e feur-emglev Malastreg : « an aotrounez a ra an arsav-brezel-mañ (da lavarout eo, roueed Frañs ha Bro-Saoz hag an daou c'houlenner d' an dugelezh), o c'hevredidi, o harperien hag o eilerien, ne vern piv int, a c'halla keit ha ma pado an arsav-brezel mont e pep surentez eus an eil bro d' eben ».

Lazhañ Klizun oa gwallañ ar pennad-se eus an dreverz en un doare ganas ha divergont. Fulub, dismegañser divezh gwir an dud, ne felle dezhañ implijout divizoù peoc'hus Malastreg nemet evit skrapañ aesoc'h, e Breizh pe e lec'h all, atizerien an tuad enep d' e hini, hag o muntrañ hep truez.

An dra-se evitañ oa seveniñ en emglev.

Uhelidi a Vreizh lakaet d' ar marv.

Pevar miz goude marv Olier Klizun, e roas un testeni euzhusoc'h c'hoazh eus e bal. O vezañ paket krog e c'hwec'h marc'heg ha pevar skoedour eus koshañ tiegezhioù Breizh, - Malastreg, Menez-Alban, Kaezilieg, Ar Genkiz, Brieg h.a. - an holl anezho a-du gant Monforzh, e reas o lakaat d' ar marv, d' an 29 a viz Du 1343, er C'hoc'hu, evel Klizun, hep barnedigezh, ha zoken o vezañ lamet o c'haoz digant lez-varn ar Parlamant, rak al lez-varn-se, a oa ar gaoz dirazi a-benn neuze, he dije daskoret o frankiz dezho en abeg d' an dreverz.

Seurt taolioù gwadek hag argarzhus a skignas spont ha kounnar e Breizh. Roue Bro-Saoz, a glevas ar c'heloù diwezhat marteze, ne reas netra e-pad ur pennad. Distroet oa da Londrez e derou miz Meurzh 1343, goude lezel bagadoù mat ha stank a soudarded e Breizh dindan renerien ampart ha kalonek, Yann ha Tomaz Beauchamp, Herri Lancaster, Yann Arcy, Gwilherm Fitzwarin h.a. Diwar miz Gouere avat e voe tennet darn anezho, ha betek miz Here, ne seblantas ket Edouarzh III kompren e oa ret aozañ ur brezel nevez, na zoken klask kaout digoll, o c'hortoz gwell.

361

Janed Belleville, ar rederez-vor.

Intañvez kalonek Olier Klizun evelato, Janed Belleville, a lakae ar brud da redek dre Frañs ha Breizh e oa o vont d' en em zic'haouiñ. Dre un taol-gwidre e kemeras unan eus kreñvlec'hioù Charlez Bleaz, o lazhadegañ ar gwarnizon a oa ennañ. Neuze e tastumas ur strollad-listri hag ez eas war vor, en ur redek war-lerc'h an holl listri gall hag en ur zistrujañ didruez ar re a c'halle tizhout. Kement ha ken bihan ma savas ar Pab Klemañs VI, war c'houlenn roue Frañs, d' an 21 Gwengolo, klemm dirak roue Bro-Saoz, o lavarout e oa ar brezel-se war vor un dorridigezh eus an dreverz gant e zalc'hidi, hag o c'hourc'hemenn dezhañ o lakaat da echuiñ. Ar Pab avat n' en doa ket zoken rebechet da Fulub Valois muntridigezh Olier Klizun, hag Edouarzh III ne reas van ebet eus e vuilh. Er c'hontrol, d' ar poent-se end-eeun e lakaas e soudarded da vont e Gwened, hag e letanant e Breizh, kont Northampton, a bakas krog, e-giz distro-gwall, en ur baron breizhat a-du krenn gant Charlez Bleaz, hag en doa stourmet e-pad ergerzhadeg 1342 en arme c'hall.

Raoul Monforzh.

Raoul Monforzh e oa baron Gouezel-Vonforzh. Edo o kemer e blijadur en unan eus e gestell gant tudjentil all, gall ha brezhon, e genvrezelourien. Ur rener saoz, Huon Wrocelesse, kaset gant Northampton evit e bakañ, a reas an taol ampart-tre. Mont a reas er c'hastell gant un nebeut tud-armoù e-pad an noz, dre un tun bennak. Kouezhañ a reas warno, hag int en noazh pe en o roched en o gweleoù. Hep ober dezho an disterañ droug, e kasas anezho da gont Northampton, a zalc'he anezho hag a nac'he reiñ dezho o frankiz, en desped d' ar werzh-daspren vras kinniget gant Raoul Monforzh.

Nebeut a dra e oa e-kichen muntridigezh Olier Klizun. Ar Pab Klemañs VI, na oa bet tamm ebet fromet gant ar muntr-se, a gasas, d' an 9 Here 1343, ul

lizher-klemm a-zivout skrapidigezh Raoul Monforzh da roue Bro-Saoz. Respont hemañ e voe kas (6 ha 19 Here) bagadoùigoù soudarded da Vreizh, hag ur pennad goude ur skrid-diskuliadur d' ar re bennañ eus e zalc'hidi er vro-mañ, ouzh o meuliñ hag o zrugarekaat evit an harp emrous o doa roet da duad Monforzh, hag o prometiñ dezho kas soudarded niverus dizale. Muioc'h a vunudoù, emezañ, a glevjent digant Amaouri Klizun, galvet evit se da Vro-Saoz ha prest da zistreiñ da Vreizh gant kemennadurioù ar roue.

362

Kemper kemeret gant Charlez Bleaz.

D'ar 24 a viz Kerzu 1343, Edouarzh III a c'hourc'hemennas d' e amiral Yann Montgomery dastum a-benn an 2 a viz Genver e porzhioù Darmouth ha Southampton 24 a listri evit kas d' an douar-bras ur bagad tud-armoù ha gwaregerien. E derou ar bloaz 1344, n' eo ket d' an 2 a viz Genver, hogen eus ar 16 a viz C'hwevrer betek an 3 a viz Meurzh, e kasas da Vreizh soudarded all renet gant Richarzh Totesham, Gaoven Corder hag Edouarzh Pulter. Ne oant ket niverus avat, mil den d' ar muiañ. Kas a reas ivez d' ar mare-se pourveziou armoù ha bitailh. Pezh a ziskouez e roe nebeut a bouez d'an ergerzhadeg-se eo e lezas e letanant-meur e Breizh, kont Northampton, da guitaat ar vro-mañ ha da lakaat un etrekargad, Yann Hardshill, en e lec'h.

Gwallreuz a c'hoarvezas da heul. Roue Frañs a roas un armead kaer da Charlez Bleaz, hag hemañ a yeas ganti, e derou miz Ebrel 1344, da sezizañ Kemper. Hardshill a glaskas enebiñ. Bihan e oa niver e soudarded. Faezhet-krenn e voe hag e vab lazhet. Eñ e-unan a voe paket, kaset da Bariz, - a-raok an 11 a viz Ebrel, - ha Charlez Bleaz a gendalc'has gant ar seziz hep truhuilh ebet eus an diavaez. Ar sezizidi koulskoude a zalc'has penn, rust ha nerzh, e-pad ur miz.

En diwez e voe kemeret Kemper gant ar Frañsizien-ha-Brezhoned d' ar 1-añ a viz Mae. Diskaret ganto ar murioù e meur a lec'h, ez ejont e-barzh kêr dre an toulloù-freuz o doa graet goude un arsailh a badas eus c'hwec'h eur betek kreisteiz. Argadiñ a rejont diouzh an tu ma sav ar mor er stêr Oded da bep lanv. En deiz-se e tlee an dour bezañ uhel da c'hwec'h eur. Izel e chomas betek kreisteiz, pezh a dremenas gant an dud evel ur burzhud.

Er Grennamzer, pa veze kemeret ur gêr-greñv, e kave d' an arsailherien e c'hallent lakaat d' ar marv mar karent ar gwarnizon hag annezidi. E Kemper, hervez ur c'hronikour enebour da Charlez Bleaz, e vije bet lazhet 1.400 a dud, ha n' o dije paouezet ar vuntreierien d' ober o reuz nemet o welout ur bugel war gorf marv e vamm, o sunañ gwad e-lec'h laezh diouzh he bronn. Hep mar ez eus un tamm faltazi amañ, hag ez eer eta en tu all d' ar wirionez. Direizh e vefe lakaat ar bec'h war Charlez Bleaz. M' en dije klasket herzel ne vije ket bet sentet outañ. N' hallas ober netra muioc'h eget bodañ en iliz-veur an holl dud-a-Iliz, ganto o zraoù priziusañ, ha gourc'hemenn groñs d' e soudarded ha d' e zalc'hidi kaout doujañs outo hag ouzh o madoù.

363

Kemer Kemper a oa bet un taol brav evit deraouiñ ar stourm. Ret e oa bremañ sezizañ Brest pe Wened, lemel a-dre daouarn Monforzh porzhioù ar c'hornog, ken aes evit degas da Vreizh ar skoazell a zeue eus Bro-Saoz.

Charlez er c'hontrol a skoas etrezek ar reter, hep mar evit ar blijadur nay d' en em fichañ gant dibourc'h e gevezer, da lavarout eo e zomani prevez. Mont a reas da sezizañ Gwenrann, a oa kouezhet adarre dindan c'halloud Monforzh, goude bezañ bet kemeret gant Loeiz Spagn. Edo eno d' an 18 Eost 1344. Ne ouzer ket petra a c'hoarvezas. Evelato e c'haller krediñ e teuas a-benn, rak roue Bro-Saoz ne oa ket mall gantañ seveniñ ar bromesa en doa graet d' ar Vrezhoned e miz Kerzu ar bloaz diagent : kas skoazell dezho.

Amaouri Klizun, a dlee displegañ dezho ar c'heloù mat dre ar munud, a oa c'hoazh, e mizioù Mae ha Gouere 1344, e Bro-Saoz. E Bro-Saoz e oa ar soudarded a dlee mont gantañ, hag eveltañ ne flachent ket.

Kannaded tuad Monforzh kaset da Vro-Saoz.

D' ar mare-se (Gouere 1344) ne weled roud e Breizh eus obererezh ar Saozon ha tud Vonforzh. Tuad hag armead Charlez Bleaz a c'houneze dre-holl. Bagadoù Edouarzh, an nebeud a chome anezho, a oa sparlet en o c'hreñvlec'hioù hep lakaat o fri er-maez. Ar re a gare Monforzh a oa rannet o c'halon o welout o zudad o teuziñ hag o vont da get, koulz lavarout drezañ e-unan.

E derou miz Gwengolo e kasjont da Vro-Saoz tri c'hannad, Gwilherm Derrien senesal Kernev a-berzh dug Breizh kont Monforzh, un den en doa fiziañs Edouarzh III, ha daou zominigad, evit diskleriañ d' ar roue penaos e oa ar stal gant tu Monforzh. Kollet eo bet ar c'hemennadurioù roet dezho, hogen aes eo gouzout peseurt klemmoù o doa d' ober.

Lavarout a rejont ne oa ket a-walc'h a soudarded saoz e Breizh. O renerien ne oant ket evit o lakaat da selaou ouzh o urzhioù, ha n'hallent ket mirout ouzh darn anezho da breizhañ, da wastañ, da dangwallañ, pezh a bellae ar Vrezhoned diouzh tuad Monforzh hag o lakae da dostaat euzh tuad Bleaz.

Goulenn a rejont ma vije kaset da Vreizh gant ar roue, hervez e bromesa, un armead bras a-walc'h da herzel ouzh nerzhioù an tuad gall-ha-brezhon ha da virout an urzh.

364

En diwez e c'houlennjont ma tistroje da Vreizh an dugez vrudet ha kalonek Janed kontez Vonforzh, o lavarout, gant reizh sur-mat, e talvezje he donedigezh kement hag hini un arme, hag hi gouest da zastum en-dro dezhi dalc'hidi stank, emroüs ha birvidik.

War ar poent kentañ, Edouarzh III a roas hep termal d' ar re bennañ eus ar renerien saoz ha monforzhat e Breizh, - Tangi ar C'hastell, Yann Gatesden kabiten Brest ha Gaoter Bently, - galloud a-walc'h da gastizañ an dizurzhioù a oa bet meneget dezhañ.

War an eil poent, e prometas adarre kas Amaouri Klizun dizale da Vreizh, gantañ soudarded karget da zifenn ar vro. Kas a reas zoken un nebeut bagadoù tud-armoù ha gwaregerien, en o fenn kabitened kadarn : Bentley, evel am eus lavaret bremaik, Tomaz Bradeston Yann de l'Isle h.a., hag ivez listri ha martoloded eus Baiona. Kement-se avat ne rae ket un arme gouest da genderc'hel gant ar stourm, da seveniñ traoù a bouez na da virout ouzh traoù a bouez da c'hoarvezout.

Janed Monforzh.

War an trede poent koulskoude e oa diaesoc'h hep mar da Edouarzh III reiñ respont. Harozez Henbont, Janed Flandrez kontez Vonforzh, a oa aet gant he bugale da Vro-Saoz, - al lenner en deus soñj eus an dra-se, - pa oa distroet Edouarzh e-unan eus e ergerzhadeg e Breizh e derou miz Meurzh 1343. Hogos an holl istorourien a lavar groñs e oa aet ar gontez da Vreizh adarre er bloaz-se. Ur fazi eo. Kontoù ren Edouarzh III a ziskouez e chomas e Bro-Saoz betek dibenn 1343, hag e oa e Londrez adalek an 8 a viz Eost betek an 18 a viz Du, d' ar mare end-eeun ma oa deuet Gwilherm Derrien, senesal Kernev, d' ober e gefridi. Penaos neuze mirout ouzh hemañ d' he gwelout ? Ar Brezhon leal-mañ a c'houlennas start sur a-walc'h an aotre d' ober e c'hourc'hemenoù d' e zugez ha da gomz ganti a-zivout aferioù ar vro.

Edouarzh a rankas termal pell amzer, daleañ an etreweladenn muiañ ma c'halle... Ar briñsez kalonek kaezh a oa aet he skiant diganti !

Follentez Janed Flandrez, un darvoud pouezus-bras e heuliadoù er brezel etre Bleaz ha Monforzh, a zo chomet dianav betek bremañ d' an holl istorourien.

Ret eo eta reiñ diskleriadennoù.

Yann-Kel

Aet out betek penn an hent az poa dibabet.

Stourmer, morse ne oa bet evidout a ziforc'h etre dieubidigezh ar Vretoned evel pobl hag o hini evel labourerien.

Brezhoneger, e oas unan eus izili oberiantañ SAE.

Labourer, ez poa dibabet chom er vro koustet a gousto hep plegañ da lezenn ar C'hapital. O paouez bezañ skarzhet eus da labour e oas peogwir e felle dit diskouez n' o doa ket c'hoant labourerien hor bro degemer forzh peseurt kevredigezh.

A-enep pep korvoerezh ha pep gwaskerezh ez peus lakaet splann ne c'houzañe ket hor pobl gwelout he bro troet da dachenn dourista pe da dachenn embregiñ evit an arme.

Ra dalvezo da varv da gas buanoc'h war-raok diskar ur bed n' hell bevañ nemet dre gorvoiñ ha gwaskañ.

Evidomp, e chomo bepred da galonegezh ha da vousfent un tamm kevrinus evit hor c'hennerzhañ er stourm a gendalc'homp, da hini.

Kenavo...

SKOL AN EMSAV.

AL LEVRIOÙ

Eflamm gKERVILIO

UN DOUELLADENN DANJERUS : " Une Bretagne libre est-elle viable ? " - ul levr bet skrivet gant Leopold KOHR, troet ha kempennet evit Breizh gant P. BOURDELLES ha Yann FOUERE - Les cahiers de " L'Avenir de la Bretagne " n° I, embannet gant Nature et Bretagne, 38, straed Jean-d'Arc, Kemper, Kerzu 1975.

N' em eus ket klevet komz kalz eus al levrig-se, deut er maez e fin 1975 daoust ma vefe, d' am meno, pouezus-kenañ e lenn ha dreist-holi e vurutellañ ken arouezius ez eo eus un toullad mojennoù a zalc'h d' ober o reuz en Emsav. Un douelladenn eo peogwir ez eo kinniget evel « respont an ekonomiezh vodern » da gudennoù Breizh pa n' eo diazezet war dielfennadur sirius ebet ha ne ra dave nemet da skouerioù hag a ya war an tu kontrol eus ar pezh a c'hortozfed. Dañjerus eo peogwir e kuzh an diouer a zielfennadur hag an diskoulmoù faos dindan ur gwiskamant a venozioù reizh (d' am meno d' an nebeutañ...).

* * *

Ar fazi kentañ, an hini a zo diazez ar re all, eo e kemer Leopold Kohr, ar frouezh evit ar wrizienn. Tchet e vefen, zoken, dasoñjal ne fell ket dezhañ diskouez gwrizien an droug en abeg da zibaboù politikel evel ma ro rak-ger Yann Fouere da grediñ.

Diskouez ment diboell an aozadurioù ekonomikel a-vremañ evel pennabeg kudennoù ar bed ha mammenn an diorroadur dizingal a zo un tamm souezhus... Souezhus c'hoazh pa z' eer betek reiñ d' an " dielfennadur " -se stumm brizhskiantel ul " lezenn " - na petra 'ta - " dilezidigezh an tachenoù pellañ " : digreskiñ a ra ar pled taolet gant ar gouarnamant war lodenoù ar vro hervez keneiliad an hent a zo etre al lodenoù-se hag ar gêrbenn (!) ...

Un dra all anavezet mat daoust ma ne weler roud dioutañ el levr a-bezh a zo koulskoude : « Berniit, berniit, setu al Lezenn hag ar Brofeted, » a lavare Karl Marks. Aze an hini eo ez eo ret klask gwrizienn an droug. Met hag-eñ n' eo ket reizh e nac'hfe ar re n' o deus evel huñvre nemet dont da vezañ bernierien vihan, lakaat en arvar ur reolenn a gemeront evel ger-stur 'n ur damall nemetken d' ar breizerien vras bezañ kemeret re ! rak peseurt pal peseurt skouerioù a vez roet da Vreizh ha da Gembre el levr-mañ ?

367

« ... da lavarout eo, hag-eñ e c'hello bevañ en ugentvet kantved-mañ, sofistiket ha c'hoantaüs... » (p. 35) ; « ... ret evit tizhout doare bevañ sofistiket an ugentvet kantved ? » (p. 41) ; « Diaesoc'h e veje difenn an emwasterezh (auto-suffisance) ma c'houlennfe eñ e vefe aberzhet ul live bevañ uheloc'h, a vefe tu da dizhout en un doare all » (p. 93).

Un uhelvennad : ober eus Breizh un aozadur « manageable » er bed evel m' emañ, hep lakaat en arvar elfenn diazez ebet eus ar stumm ekonomiezh a gas ar bed a-bezh d' an islonk hag a laka evit ar mare, an tric'hard eus an dud da vevañ en dienez, pa n' eo ket da vervel gant an naon. Un huñvre : reiñ da Vreizh ur plas pilpous ha mezhus a vevel e bed ar gorvoerien hag ar vac'homerien.

Sklaer eo, en ur frazenn evel honnezh : « Evit komz sklaer, n' eus eta abeg ebet evit anzav e veje ur Vreizh dieub re vihan evit profitañ eus kement a vez kinniget e pep lec'h a zo dindan an heol gant hor c'hantved, e-keñver araokadur teknologek, aezamantoù personel pe madoù boutin (équipement) » (p. 49). Spi 'm eus n' eo ket ur frazenn ken kriz, ken dall e-keñver stad an darn vrasañ eus pobloù ar bed, ken leun a emgarantez kornogad, asked gwirion ar re o deus troet al levr...

Sklaer eo c'hoazh dre ar plas roet d' an douristelezh ha d' an ijinerezh " arbennikaet ", sklaer eo dre ar skouerioù roet da Vreizh. N' anavezan ket Porto-Rico, nemet dre niver an dud eus ar vro-se a zeu da ren ur vuhez reuzeudik e banlevioù kêrioù bras ar Stadoù-Unanet e ve. Met evit ar pezh a sell ouzh Iwerzhon ha Suiss, nann ! Dreist eo " frankiz " Iwerzhon e-lec'h ma varv ar yezh en ur vro hec'h ekonomiezh renet gant an hevelep tud ha gwechall ! Petra eo Suiss ma n' eo ket unan eus ar broioù ar muiañ kilstourmer en Europa, ha dreist-holl kreñvlec'h ar marc'hadoù euzhus, an aferioù arc'hant kuzh...

Daoust ma klask e-pad un toullad pajennoù Leopold Kohr diskouez ez eo e " ziskoulmoù " diouzh ar c'hiz, n' eus gante nemet c'hwezh ar c'hozh hag an emgarantez, met gwisket alies gant livioù hoalus.

* * *

Rak, petra neuze a c'hellfe bezañ kavet dedennus el levr-se gant ar re n' int ket trubuilhet gant an doareoù da zedennañ dre ar " peoc'h sosial " ar bosterien arc'hant etrevroadel ; evit ar re n' int ket re chalet gant reiñ e Breizh bod da " drustoù " evel Nestlee hag en deus lakaet evit gounid arc'hant kantadoù a vugale Afrikan da vervel, pe, evel an ti Suiss all a brodue evit an Amerikaned peadra da zistruj koadeier ar Viet-Nam ha da gontammiñ an dud war memes tro.

Kalz eus ar re-se a oar e vo ret diskar an aozadur ekonomikel a ren bremañ warnomp evit gellout, ma 'z eus tu c'hoazh, eseañ krouiñ ur bed nevez. Kalz ac'hane a sant e vo ret troc'hañ krenn ha krak gant boazioù ar bed kozh, treiñ kein dezho. N'hell ket an diskoulm diwanañ un tamm pelloc'h war memes hent ; ne vo kavet nemet gant ar re a gredo klask un hent all.

Bez' ez eus, dres, el levr-se traoù hag a c'hellfe mont war an hent-se ma ne vefent ket lakaet aze evit treuzwiskañ an hent kozh. Ar vurutelladenn graet eus ar c'hêrioù bras ; ar frazennoù a-bouez war ar skeul o tereout ouzh mab-den ; an aozadurioù hag ar c'humuniezhoù bihan ; ar bommoù a skiant-vat a gaver ur wech an amzer, evel diwar-benn ar c'h-Concorde da skouer ; al lec'hioù ma vez komzet eus an teknikoù etre (ur menoz hag a seblant din bezañ emprestet digant Illitch) ; h.a.

368

Dudius a-walc'h eo ivez an aroudennoù eus " Réflexions pour 1985 " hag ar c'hartennoù lakaet er fin gant an Ao. Bourdelles. N' em eus ket komprenet c'hoazh penaos ez ae, e gwirionez, al levr a zo araoze a-enep da raktresoù an deknokrated...

Aze emañ an dañjer : en tammoù mad a gaver el levr, peogwir e lakaont pe e klaskont lakaat e servij menozioù kamm, reoù hag a zo reizh, o sikour evel-se ar re na fell dezho cheñch netra da gaout abegoù liesseurt evit kenderc'hel ; ar re-se en em blij er fuilhadez hag er veskailhez.

* * *

Evidon-me n' hell al levr-se degas un dra bennak da stourm ar Vretoned nemet dre ar burutelladennoù start a vo graet diwar e benn. Un dra vat eo rak n' eo nemet evel-se e sklaeraer e vennozioù. Met evit ar pezh a sell ouzh kavout ar mel a vago anezho e vo ret d' ar stourmerion klask un askorn all, ar re, d' an nebeutañ, a soñj evel don, n' en deus hon stourm un dalvoudegezh nemet ma 'z eo un darn eus ur stourm hollvedel, ur griadenn e teñvalijenn ar bed, un dorn astennet davet an holl bobloù suj hag an holl dud korvoet dre ar bed a-bezh, ur galv d'an dispac'h ha n' eo ket goulenn mezhus aluzon ur plasig blot e-touez ar Farizianed.

* * *

Respont an Ao. BOURDELLES

Al levrig " Une Bretagne libre... " (daoust hag e c'hell Breizh bevañ en e frankiz ?) ne guzh ket e bal : daoust ha Breizh a c'hell bevañ en he frankiz... Sklaer, a gredan.

Perak neuze lavarout ez eo graet evit « sikour ar re na fell dezho cheñch netra » ? graet « evit goulenn mezhus ur plasig blot e-touez ar Farizianed » ? Perak ? Pa 'm eus kinniget treiñ al levr-se, e galleg hag e brezhoneg, ha diskleriet e prezegennoù brezhonek an danvez a zo ennañ, ne oa ket, sur ha surmat, evit ma ne vije kemmet netra ! Eflamm Gervilio a gomz un tammig re vuan, hep gouzout ervat eus petra e komz, am eus aon.

Keuz en deus n' eo ket bet savet al levrig war un danvez all ! : penaos « krial en deñvalijenn », penaos « astenn an dorn d' an holl bobloù-suj », penaos « ober an dispac'h dre ar bed a-bezh ». Honnezh a zo ur gudenn all, hag unan ziaes ; ha ne c'heller ket lakaat pep tra en ul levrig. Ne lavaran ket ne vefe ere ebet etre an div gudenn ; ha ken lies gwezh ma kavan sklerijenn war gudenn an dispac'h da zont, hag ar perzhioù-mat ret evit bezañ ur gwir zipac'hour evit mad ar bobl, e lennan, e selaouan, e studian... N' on ket c'hoazh evit displegañ ar gudenn o c'houzout asur petra da lavarout.

369

Kement-mañ avat ez on gouest da lavarout dinet'h :

1. - Krial en deñvalijenn ne dalv ket da galz tra... dreist-holl pa vez C.R.S-ed war-dro hag a vouge deoc'h ho kriadenn en ho kouzoug. En deñvalijenn ez eo gwelloc'h degas un tamm goulou. Setu ar pezh en deus klasket al levrig ober. Ha setu moarvat perak ez eo bet " kollet " gant ar Post an droidigezh c'hallek kentañ anezhañ.

2. - Astenn an dorn ne dalv, kennebeut, keit ha ma vez dinerzh ha goullo an dorn... Breizhiz bremañ o astenn o daouarn ? Da ziskouez petra ? Dismantroù kaer hon amzer dremenet ? Hon madoù hag hon yaouankiz o tivroañ evit dont dindan Mistri-Meur etrevroadel ? Greomp da gentañ un dra bennak evit hon Pobl, ha diskouezomp neuze, d' ar re o deus ezhommoù skoazell, petra ' omp gouest d' ober evito ivez !

3. - Ober an Dispac'h dre ar bed a-bezh ? Emañ warnomp pell 'zo Dispac'h an Ijinerezh bras, bet krouet ha ledet gant ar vourc'hizien. Emañ o tont moarvat dispac'h diskaridigezh an injinerezh bras. Ha ne vezo ket diskaret gant politikerien ; emañ o n' em ziskar e-unan...

En dispac'h a zo o tont, ne vo gwir zispac'herien nemet an adsaverien. Krial en noz nag astenn an dorn ne dalvezint ket nemeur : ret e vo labourat.

Lavarout a ra Eflamm Gervilio ne gompren ket traoù zo el levrig. Ra gompreno d' an nebeutañ kement-mañ : evit kemer lod en dispac'h da-zont, e vo ret bezañ BEV : er beredoù ne vez ket a zispac'hioù. Setu perak e oa mat studiañ « daoust hag e c'hell Breizh bevañ » hep ma vefe ar Galloudoù-gwask o herzel ouzh he buhez hag o herzel outi a gemer lod er stourmoù a-du gant ur bed nevez.

AN TROOUR, P. BOURDELLES.

Keleier an Naoned
kelaouenn vizek embannet e Naoned
koumanant : 25 lur
79, Quai de la Fosse, 44000 NANTES

NOTENNOÙ

Hor Mignoned

Sylviane GUYOMAR ha Jean-Luc GRAVOT a zo laouen o kemenn deoc'h ez int bet euredet en iliz-parrez Treou-Tregigneg, d' ar sadorn 4 a viz Gwengolo.

Yann-Ber TILLENON ha Geneviève COQUELLE a zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh o merc'h Gwenn, e Landernev d' ar 16 a viz Eost.

Alan PRIGENT ha Mikaela MOSTINI a zo laouen o kemenn deoc'h ganedigezh o mab Gwenc'hlan, e Gwidel, d' ar 1añ a viz Gwengolo.

Yann BOUESSEL DU BOURG hag Erwana DE RAGUENEL a zo laouen o kemenn deoc'h dimeziñ o mab Yann gant Brec'hed de Moulins de Rochefort, e Eskoblag (Bro-Wenrann) d' an 20 a viz Du 1976.

Klevet hon eus gant plijadur ez eo bet euredet Youenn KAOUISSIN hag Esyllt RAUD, d' ar 15 a viz Here, e Kistinig.

Yann ha Mari-Elen MORTIER a zo laouen da gemenn deoc'h ganedigezh o mab Erwan, d' ar 17 a viz Gwengolo en Naoned.

Ganet zo ur paotrig, François-Marie e anv, e ti Annaig hag Herve ROY e Sant-Malo.

Erwan VALLERIE ha Claire CASTELLAN e wreg a zo laouen da gemenn deoc'h eo kresket an dud en ti d' an 31 a viz Eost.

Guillaume Meriadeg a reer ar c'hrouadur ha zo breur da Even, Gwenola (en Neñv) ha Gwenn. Gwened.

Hor gwellañ gourc'hemennoù.

Gwall-daol Dineol : Marv truezus un emsaver yaouank

Mervel a rin un noz war hentoù Breizh,
Laouen, ha start em c'halon kan hon trec'h,
Pa vo pep kanenn skornet war va gweuz,
Un soudard glan, diskaret, sonn 'n e lec'h,
Astennet, gwenn e dal, e don ar c'hleuz.

Roparz HEMON, " Kanenn vrezel, "
Breiz Atao, niv. 87, Meurzh 1926, p. 655.

Buan-tre eo bet gouvezet gant an holl an taol spontus c'hoarvezet diouzh an noz d' an 29 a viz Gwengolo - deiz gouel sant Mikael - gant Yann vMikael Kernalegenn - Doue d' e bardono - unan eus izili pennañ Skol an Emsav. War an darvoud e-unan, ha dreist-holl war gudenn ken diaes implij ar feulster evel respont da feulster pilpous ar gwaskerezh gouzañvet a-berzh ur stad didruez ha fallakr, da bep hini ober e venoz ; lavaromp hepken en devoa " Yann-Kel " dibabet un doare stourm hollek ha diazezet war ur gadarnded c'hlan hag ur fealded divrall d' e uhelvennad. Marv eo, da 22 vloaz, en ur brouiñ e oa c'hoazh e-touez ar Vretoned tud barrek da sevel o fenn, gant-se ez eo dellezek eus

doujañs an holl ha, moarvat, e vo dalc'het e-pad pell amzer bev an eñvor anezhañ. Siwazh dezhañ, er skridoù embannet war ar c'helaouennoù hag e diskleriadurioù 'zo embannet war-lerc'h an drama euzhus ez eus barnedigezhioù hag a ra poan ha doan d' ar re o deus anavezet mat anezhañ ha bet mignoniezh en e geñver, ar gwashañ dismegañs o vezañ bet graet gant beleien e barrez, p' o deus nac'het lidañ an oferenn vrezhonek a oad holl o c'hortoz, hag a oa bet ouzhpenn se, goulennet groñs gant e dud. Koulskoude, er vered, en deus gallet an Ao. Klerg - Bennozh Doue dezhañ - en ur brezegenn fromus hag entanet reiñ d' ar merzher an enorioù a oa dleet dezhañ, ha dreist-holl adlec'hiañ reizh ar giriegezh pounnerañ, hini ar Stad c'hall hag an doareoù dizonest a laka da bouezañ war ar Vretoned abaoe keid-all. Ha n' eo ket alies e vez kanet Bro gozh va zadoù gant kement a feiz hag a siriusted hag a oa bet graet da c'houde ! Anat eo ez eo en ur ober labour spletus a-wel d' an holl, pep hini hervez e demz-spered hag e bennvenozioù e tiskouezimp n' eo ket marv Yann-vMikael Kernalegenn evit netra. E-pad an obidoù e c'helled merzout, ouzhpenn ar fromadeg hag ar " glac'har mut " ur seurt unvaniezh sioul ha nerzhus e-touez ar re, niverus ha liesseurt deredet da enoriñ anezhañ. Evel ma lavare O. M. warlerc'h marv Jakez Riou : « Une fois de plus un mort nous a rassemblés avec plus d'autorité qu'un vivant ».

Salv ma pado seurt burzhud, evit brasañ mad an emsav ha dazont ar Vro !

A. L.

Profoù

MIZ EOST :

A. ar Barzh, 15 lur ; H. Latimier, 5 ; Gw. Omnes, 65.
- War un dro, 85 lur.

MIZ GWENGOLO :

R. Tassel, 10 lur ; dizanv, 10 ; A. Le Marouille, 15 ; H. Rivoallan, 5 ; G. Kervella, 5 ; It. T. ar Bozeg, 15 ; J. ar Yaouank, 15 ; It. D. Lueg, 15 ; E. Bouessel du Bourg, 50 ; Gl. Henry, 15 ; G. Latimier, 17 ; Dr A. Bourrouet, 30.
- War un dro, 202 lur.

Profet eo bet d' Al Liamm abaoe derou ar bloaz 6 359,41 lur. Gwall-anaoudek omp e-keñver an donezonerien.

931 koumananter

... hon eus kontet e kreiz miz Here, lodennet evel-hen : Aodoù an Hanternoz, 152 ; Penn ar Bed, 244 ; Il ha Gwinum, 98 ; Liger Atlantel, 71 ; Mor Bihan, 56 ; Rannvro Bariz, 133 ; Departamantoù gall all, 106 ; Afrika an Hanternoz, 1 ; Afrika Du, 4 ; Iwerzhon, 8 : Kembre, 17 ; Skos, 2 ; Bro-Saoz, 4 ; Bro-Alamagn, 7 ; Italia, 1 ; Spagn, 1 ; Helvetia, 3 ; Izelvroioù, 5 ; Belgia, 5 ; Stadoù-Unanet, 4 ; Kanada, 3 ; Guadeloupe, 1 ; Haiti, 1 ; Polynesia, 1 ; Aostralia 1 ; Ceylan, 1 ; Sina (Taiwan), 1.

Kresket en deus niver hol lennerien dreist-holl e Penn ar Bed hag en Aodoù an Hanternoz, a drugarez da skoazell keneiled 'zo. Menegomp dreist-holl strivoù an tad Pleyber (o chom e Sri Lanka) ha Daniel Personnig eus Sant-Brieg. Un tamm striv c'hoazh hag e vo mil koumananter d' Al Liamm.

Niverennoù kozh " Al Liamm " e gwerzh

Prenañ a c'heller an niverennoù meneget amañ da heul :

- 4, 6, 29, 53, 63, 64, 67, 69 betek 177 (nemet an niverennoù 98, 99 ha 100 hag a zo bet peurwerzhet).

Priz an niverennoù a zo :

-4 : 4 lur;

- an niverennoù all : 7 lur pep hini (nemet an niverennoù 116 ha 151 hag a goust 9 lur pep hini, an niverenn 166-167 hag a goust 14 lur).

Tu a zo a-hend-all da brenañ ar bloavezhioù klok-mañ hag a goust 40 lur pep hini :

- 1959 (72-77) ; 60 (78-83) ; 61 (84-89) ; 62 (90-95) ; 64 (102-107) ;
65 (108-113) ; 66 (114-119) ; 67 (120-125) ; 68 (126-131) ; 69 (132-137) ;
70 (138-143) ; 71 (144-149) ; 72 (150-155) ; 73 (156-161) ; 74 (162-167) ;
75 (168-173).

Ar goulennoù a zo d' ober digant Per ar Bihan. An niverennoù a vez kaset kuit a vizoù-post.

Lizhiri

Setu amañ al lizher hon eus bet digant J. K., ar paotr yaouank en deus savet e boelladenn brederouriezh e brezhoneg evit arnodenn ar vachelouriezh :

« Ya, gwir eo en deus ur paotr yaouank eus Goueled Leon, savet e boelladenn brederouriezh er bac e brezhoneg. Ezel eus BYV eo ar paotr-se, ha laouen tre o welet ez eus bet kaoz diwar e benn war Al Liamm. Ne vo ket kresket kalz gantañ niver lennerien Al Liamm rak koumanantet eo dija. Trugarez deoc'h da vezañ bet soñjet en dra-se memes tra...

Ma 'z eo bet savet ar boelladenn-se e brezhoneg eo evit meur a abeg :

- da gantañ, un afer evit brudañ hor stourm ;

- goude evit diskouez e fell deomp mont pelloc'h war hent adsavidigezh Pobl Vreizh. N' eo ket gant an " disterachoù " (digarezit, met ne welan ger all ebet) roet gant ar gouarnamant war dachenn ar sevenadur breizhek, e vimp savetaet ;

- hag erfin, 'vit heuliañ un hent politikel breizhek resis : « Ni hon unan ! » Menoz diazez BYV n' emañ ket e lec'h all. War bep tachenn ha war ar pemdez eo emañ ar stourm da ren - micherour pe labourer-douar, kelenner pe studier, pep hini en deus e lec'h en hor stourm evit Breizh.

Evit pezh a sell ar bac. ma vije reoù all o dije c'hoant kenderc'hel gant an hent digoret er bloaz-mañ, bez e vijen laouen tre da zaremprediñ anezho, rak ar soñj 'zo gantañ mont pelloc'h.

Gwellañ gourc'hemennoù d' Al Liamm a gavan mat-tre e pep keñver. »

NOTENN : Ur c'houmanant a zo bet paeet gant unan eus hol lennerien feal. Lakaet eo bet en anv ur plac'h yaouank war ali J. K. Trugarez d' ar mignon brokus.

373

Digant Herve ha Lena Petton eus Lokournan o c'houlenn embann o lizher :

« Tri bloaz 'zo bremañ emamp o stourm e Bro Lokournan (Goueled Leon) evit

hor sevenadur hag ez-resis e-vit ar brezhoneg.

ñE-keit-se hon eus klasket diazezañ da gentañ-penn, ur seurt frammadur da badout. Nevez 'zo eo hon eus soñjet e vije poent ober al liamm gant ar pezh a vez graet e lec'h all e Breizh war an dachenn-se.

Ober gant spered ar c'horn-bro. Lokournan a zo ur gêr vihan, 4 700 a dud o chom enni. Betek-hen ne oa bet netra ebet war dachenn ar brezhoneg nemet afer ar skolaer Arzel (a oa bet barnet e 1937 evit besan kelennet brezhoneg er skol publik) hag an enklasker Loeiz Dujardin (1892-1968) diwar-benn istor ha yezh Leon.

Ret eo kompren neuze, ouzhpenn un endro fallig a-walc'h (12 km eus Brest), edomp war un dachenn ouez evit pezh a sell ouzh danvez Breizh. Al labour kentañ a oa eta, difraostañ, hag evit gellout bezañ efedus a-walc'h e oa ret deomp en em ziazezañ war ur frammadur a vije degemeret mat gant an dud. Evit se, dre m'emaomp Lokournaniz a orin (anaout a reomp mat ar grennarded a oad ganeomp) hon eus gallet kenlabourat gant a bep seurt tud evit sevel ur frammadur a zo bet roet dezhañ an anv a d- " Ti ar re Yaouank ". Al labour aozadur a zo bet kroget e miz Genver 73 hag evit miz Gouere e oa solut a-walc'h an traoù dija. Hor soñj a oa diazezañ Ti ar re Yaouank war oberiantizoù sevenadurel liesseurt a vije kinniget d' ar berzhidi. Setu, kinniget hon eus ar brezhoneg e-touez an oberiantizoù-se, hag hon eus labourer evit m' en dije ur plas dereat e Ti ar re Yaouank. Ret eo gouzout ez eus ivez bremañ un 10 bennak ac'hanomp er c'hevredad sevenadurel Brezhoneg Yezh Vev.

Sevel ur vuhez sevenadurel e brezhoneg.

Un dra eo kompren spered tud e vro, un dra all eo gellout sevel goude ur vuhez sevenadurel e brezhoneg enni. E-giz e meur a lec'h hon eus kroget en un doare boutin : gant kentelioù brezhonek (a zo un dra ret koulskoude). Goude hon eus kinniget dibennoù-sizhun studi, pourmenadennoù, oferenoù e brezhoneg (a zo an dra poblekañ a bell hon eus graet betek-hen !), beilhadegoù. Klasket hon eus kaout darempredoù gant tud o labourat war dachenn ar brezhoneg er vro, tud Skol an Emsav da skouer. Kenaozet zo bet meur a dra ganto evit brasañ gounid tud pep strollad. En ur labourat war al lec'h eo e vo gallet kendeuziñ da vat. Ouzhpenn-se, kroget hon eus da gemer karg stajoù BYV a vez aozet er c'horn-bro. D' hor soñj ez eo pouezus kenañ e vije kemeret, a-benn ar fin, al labour-se gant tud ar vro. E 1975 ez eus bet ur staj e Lokournan hag e Ploumagoar, e 1976 unan e Plouarzel, e Lok-Maria Plouzane hag e Lokournan. E-giz-se e laker da glotañ al labour a vez graet a-hed ar bloaz gant al labour da ren dindan paeroniezh ofisiel BYV. Da echuiñ, e c'hellomp menegiñ daou dra : ret e vo labourat, hervezomp, 20 vloaz da nebeutañ war ar c'horn-bro (2 ganton, 20 parrez) evit gellout dastum frouezh al labour. Ouzhpenn, laouen bras e vefemp da skoulmañ darempredoù gant tud all oc'h ober ar memes labour e lec'h all e Breizh. »

374

*

Digant D. P., Sant-Brieg :

« Skolidi eil bloavezh kentelioù brezhoneg Oaled Abherve o deus divizet kemer Al Liamm evel levr diduamant e-pad ar bloavezh-skol-mañ. Kinniget eo bet dezho dibab e-touez meur a levr, met gwelloc'h eo bet ganto reiñ o gwennelen d' ho kelaouenn, dreist-holl en abeg da zisheñvelder he danvezioù.

Klask a raomp eta lenn asamblez lodennoù 'zo eus Al Liamm, en ur gregiñ gant ar re aesañ, ha kenderc'hel marteze gant ar re un tamm diaesoc'h a-raok penn diwezhañ ar bloavezh-skol-mañ.

Goulenn a ran diganeoc'h eta koumanantiñ an dud meneget war ar roll-mañ da heul.

Marteze e vefe tizhet buan a-walc'h muioc'h eget 1 000 koumananter ma tivizfe skolioù all ober evelomp. »

*

Digant A. G. :

« Laouen-bras on o welout ez a mat an traoù gant ar gelc'h-gelaouenn. Mat a rit reiñ ul lodenn a-zoare d' an " notennoù ". Savet e vezont en un doare plijus hag aes da lenn d'an holl hep striv ebet. Kendalc'hit da vezañ evezhiek war al lodenn-se eus ar gelaouenn, rak hi eo an hini a vez lennet da gentañ gant an darn vrasañ eus ho koumananterien.»

Digant Rhisiart Hincks, Aberystwyth :

« Trugarez deoc'h da vezañ lakaet un notenn diwar-benn ar c'hentelioù kembraek e-barzh niv. 177 Al Liamm. Prometet em boa deoc'h roll-bodadegoù Kelc'h Brezhonek ar skolaj amañ. Aman emañ, met siwazh n'omp ket deut a-benn da c'houzout deiziadoù resis kalz a emvodoù. Moarvat e vo diaesterioù e miz C'hwevrer da skouer gant pleustradegoù evit Eisteddfod ar Skol-Veur. Setu, forzh penaos, ar pezh hon eus aozet :

- 15 a viz Here, 9.00 pm. Bar Pantycelyn, Fest-noz.
- 17 a viz Du, Beilhadeg Kernevveurek.
- 10 a viz Kerzu, Fest-noz.

Miz Genver 1977 :

- 1) Fest-noz ;
- 2) Kaozeadenn gant Humphrey Lloyd Humphries (Llanbedr),
- 3) Kaozeadenn gant an. Ao. Diverres (Abertawe).

Miz C'hwevrer :

Strollad-c'hoariva ar Vro-Bagan (marteze).

375

Miz Ebrel :

Prezegenn gant an Ao. J.E. Caerwyn Williams.

Miz Mezheven :

Fest-noz. »

Ma 'z eus unan bennak a soñj dont da Gembre hag a fellfe dezhañ gouzout an titourioù, n' en deus nemet skrivañ da :
Sandra Worthing, Sekretourez ar C'helc'h Brezhonek,
22 Morfa Mawr, Aberystwyth.

*

Digant P. H. :

« Dre ma 'z eo dija koumanantet ma breur d' Al Liamm, e lennan anezhi abaoe ur bloavezh. Met bremañ e kavan dereatoc'h bezañ koumanantet ma-unan, rak ezhomm hoc'h eus a lennerien hag a sikour. Talvoudus eo kement hag a zo e-barzh Liamm, daoust ma n' eo ket, marteze, dispar an holl bennadoù. Met an dra-se n' eo ket da rebech d' Al Liamm, met kentoc'h d' ar skrivagnerien, ma vefe tu da rebech dezho skrivañ e brezhoneg. Forzh penaos, chañs vat deoc'h da gaout mil a lennerien. »

*

Digant M. K. ;

« Mar deo posupl e karfen gwelout war golo kein ar gelaouenn ouzhpenn " Kloer, studierien, soudarded , un dave d' an dud dilabour emañ o niver o kreskiñ muloc'h-mui, dreist-holl e-touez ar yaouankizoù.

Ur wech dre vare e tegouezh d' ar c'hazetennoù gallek sevel pennadoù dedennus diwar-benn yezh ha sevenadur Breizh. Mat pe fall e vefent, talvout a

rafe ar boan o menegiñ hag ober un diverrañ anezho, respont d' an traoù a c'heller abegiñ dezho. Se a blijfe moarvat d' ar Vretoned harluet gouzout. Ha pa vefe politikel. »

*

Digant H. R. :

« Dedennet-tre on bet gant troidigezh " Skol Summerhil " ; mod all e kavan kasaus furchal er geriadur pa rankan lenn pennadoù 'zo. Plijet e vijen gant pennadoù diwar-benn diorroadur ar vugale e brezhoneg er gêr. Tu a vije da c'houlenn d' an tiegezhioù gant peseurt doare o deus lakaet o bugale da gomz brezhoneg ha penaos o deus ar vugale-se bevet e-touez ar galleg. Menegiñ a ran d' ar re a zo dedennet gant an divyezhegezh ul levr a-bouez, " Le bilinguisme précoce ", skrivet gant Denzo Tikone ha moulet e ti Dessart. »

Digant B. A. N. :

« Gant kalz plijadur, evel boaz, em eus degemeret ha lennet niverenn diwezhañ Al Liamm. Mat-tre eo ar mennoz lakaat luc'hskeudennoù da vont gant ar pennadoù. Spi am eus ne vo ket un taol-esa hepken... Aon am eus hepken e vefe diaes moulañ luc'hskeudennoù en un doare fraezh e-barzh Al Liamm peogwir eo moulet e " typo " (da skouer, luc'hskeudenn ar bajenn 282). Kalz gwelloc'h ha kalz fraeshoc'h eo lakaat tresadennoù (graet gant ur bluenn) evel da skouer hini Tudu en niverenn diwezhañ (pajenn 222) ... »

376

Digant Jilberz Foix (e koun Fred Moysse):

« Fred Moysse, e adwelout a ran dirak burev ar P.N.B., straed Voltaire, en Naoned, kuñv ha peurzivezh, emc'hraus ha gouzañvus ; hon dizaliañ a rae (ni, un toullad re yaouank ma oan ar birvidikañ anezho) da implij komzoù re c'hwezhet, diouzh ar c'hiz evit mat e 1943. Un tog louet, daouvidig louet gantañ, warnañ ur gwiskamant louet hag en e gerc'henn ar seurt mistred landreant a vez gant Saozon 'zo.

Alies en em serre en e di devezhioù ha nozvezhioù-pad da studiañ testennoù kozh, digejañ pajennoù sonerezh. Dezhañ e plije ar menozioù, al lennegezh, ar sonerezh. Dre e levezon on bet douget d' ar romant saoz. Gouzout a rae pep tra, Fred. Gant teir frazenn e rae tro ur gudenn, e tiskare brizhidoloù (den ne ouie en em ziskouez dizoujañs eveltañ), o tielfennañ an darvoudoù e Bro-Ejipt pe e Kembre. Ha kement-se gant hegarated, dilorc'h ha dizamant.

N' am boa ket gwelet anezhañ abaoe 33 bloaz, met kenskrivañ a raemp abaoe un nebeut bloavezhioù. M' en doa dibabet chom en a-dreñv, ne oa ket dre emgarantez ha ne oa ket gantañ spered ur bourc'hiz kennebeut. Doujañ a rae d' ar geneilded.

Fred Moysse : un den denjentil ha ne zismegañse ket an dud vunut, an dud uvel. Kemer a rae e amzer evit respont d' al lizhiri. Nemet ur wech, warlene. Skrivet am boa dezhañ en abeg d' un darvoud ma oan o paouez da vezañ bet paket ennañ : « Je m'étonne de ma candeur ». Ar respont a zeuas buan. Tri devezh goude e tegemeren ur gartenn : « Restez candide, Nom de D... Ne voyez-vous pas que c'est cette candeur qui vous a permis de surmonter tant d'épreuves ».

Ni ' raio hor seizh gwellañ, Fred, prometet eo.

Kenavo. »

Digant H. E. :

« Ar mintin-mañ eo degouezhet em zi " Asteriks e Breizh " - embannet gant Dargaud, Pariz - evit " Preder ". War niverenn diwezhañ Al Liamm e c'houlenne SAE sikour evit embann " Lucky Luke " e brezhoneg er memes ti e Pariz. N' on ket a-du tamm ebet gant seurt embannadurioù ha souezhet bras on e rafec'h bruderezh

evito. Bez hon eus e Breizh tresourien yaouank barrektre war an tresañ ha barrek ivez war ar brezhoneg. Soñjal a ran e Divi hag Erwan Kervella a vez gwelet a-wechoù o zresadennoù war gazetenn-mañ-kazetenn. Soñjal a ran dreist-holl e Tudual Huon hag en deus treset ken brav " Fri Korloko ". An istor ne blij ket din kement hag an tresadennoù met ne damallan netra d' an oberour yaouank o paouez kregiñ el labour (ar ganaouenn bobl a zo dreist !). An dud yaouank-se a vije - a zo - gouest d' ober traoù kaer ha laouen e vijent ivez emichañs da gaout ur gwenneg bennak evit o labour - met evito ne vez ket goulennet arc'hant gant ar Vretoned. Evidon, embannadur " Fri Korloko " 'zo kalz pouezusoc'h eget hini " Asteriks e Breizh " pe " Lucky Luke " Evel just n' eo ket bet embannet e liv (kudenn arc'hant evidoc'h emichañs). Mat e vije d' ar Vretoned deskiñ ober gant ar pezh o deus ha n' eo ket mont dalc'hmat da heul ar C'hallaoued - ha gwashoc'h zo, reiñ a reont labour da diez moulañ gall bras pa n' eus ket labour e Breizh evit ar Vretoned ! An dra-mañ a dalvez evit al levrioù all embannet e Pariz - Assimil, Omnivox, 10/18 hag all ».

377

Deiziadur godell Al Liamm

Deut eo er-maez abaoe miz Gwengolo deiziadur godell Al Liamm evit 1977. Ar priz a zo 10 lur an 10 skouerenn. Un distaol a vez graet adalek hanter-kant skouerenn.

Ret eo resisaat war ho koulenn pere a fell deoc'h kaout : reoù gwenn o c'hein, reoù gant Bloavezh mat pe gant bruderezh evit " Al Liamm"
Kasit ho chekenn da Ronan Huon, 2, Venelle Poulbriquen, 29200 Brest - c.c.p. 1629 14 Rennes.

Kristenien Breizh : marksouriezh ha kelennadurezh kristen

Pedet omp da gemenn e reno an Ao. Bourdelles daou zevezh-studi war ar Varksouriezh hag ar Gelennadurezh kristen ar merc'her 29 hag ar yaou 30 a viz Kerzu 1976, e Ti-parren Kistinig. Evit al lojeiz hag ar boued skrivañ d' an Ao. Blanchard, person Kistinig, 56310 Bubri. Priz an devezh : 20 lur.

Kemennadur ar PSU

Bodet en Oriant d' an 3 a viz Here en deus Kevredad Breizh ar PSU divizet a-unvouezh war bouez 2 n' o deus ket laret o soñj, goulenn digant e izili hag e mignoned nac'hañ diwar-vremañ paeañ 10 % eus ar skodenn d' ar ORTF, evit enebiñ ouzh al lec'h dister a vez roet a-enep da bep gwir, d'ar yezh ha d'ar sevenadurezh vreizhat er radio hag er skinwel gant ar Stad c'hall.

Boikot ar brezhoneg er skolioù

Krog eo ar skol abaoe daou viz hag en desped d' al "lezennoù " e kendalc'h boikot ar brezhoneg el liseoù. Bez' ez eus bremañ kalz a gelennerien varrek da gelenn hor yezh, daoust da se avat ne vez ket lakaet ar brezhoneg en o roll labour. Ma fell dezho e c'hellont kelenn brezhoneg en tu-hont d' o eurioù hag e reont evel-se eurioù hag a c'helife bezañ roet d' ur c'helenner yaouank dilabour, hag ez eus e Breizh !

Ar brezhoneg a servij da stouvañ an toulloù pa 'z eus ezhom. Piv avat a zo

kiriek da stad an traoù ? Ar gouarnamant, ar rektor pe mererezh ar skolioù ?
Diaes eo gouzout.

378

Ar brezhoneg er gêr

Digor eo A.B.E.G. d'an holl a ra gant ar brezhoneg er gêr. Savet eo bet ar strollad evit dudi ar vugale. N' eo stag ouzh strollad all ebet, na relijiel, na politikel. Ar brezhoneg eo ar yezh nemeti implijet er gevredigezh. Evit bout ezel, kas ar skodenn (30 lur) d' an deñzorerez : Annaig Gelleg (A. Guellec, c.c.p. Rennes 27 40 56).

An emvod da zont a vo e Langoned (Kernev Uhel) d' ar sul 24 a viz Here. Emgav adalek 10 eur 30 e ostaleri " Le Corre " er vourc'h. - Da 11 eur e krogo an emvod. Roll-labour : Ur sell war daou gamp an hañv-mañ, hini Lañruen hag hini Kombrid ; aozañ ar Wezenn Nedeleg da zont (sul 19 a viz Kerzu). E-keit-se e vo graet war-dro ar vugale e liorz vras an ostaleri gant monitourien ha lod eus o zud. - 12 eur 30 : pred e ti-debriñ hevelep lec'h : 15 lur evit ar re war an oad hag hanter briz evit ar bugale.

War-lerc'h merenn : " Pedalo " war lenn Priziag, 5 km ac'hane en tu all d' an Elle, e Bro-Wened (eno eo bet graet kamp miz Gouere 75). Ha da c'houde : gweladenn Zoo An Harlay e-tal Abati Langoned. Ma vez re fall an amzer e vo bannet filmoù ha gweladennet traoù all goudoret er vro.

Ar re a fellfe dezho kousket e Langoned d'ar sadorn pe d' ar sul noz n' o defe nemet pellgomz da ostaleri " Le Corre " 23 05 05 (priz ur gambr 2 blas : 18 lur).

Adalek bremañ e vefe mat reiñ da c'houzout niver an dud, da di-kêr Priziag evit ar " pedalo ", ha d' an ti-debriñ evit ar pred. Respontit neuze ar buanañ-gwellañ da : Garmenig Ihuellou Ar Menn, 15, alezenn " Frégates ", 22000 Saint-Brieuc, pe pellgomzit : 33 66 13.

Oaled Sant Erwan 1976-1977

Oaled Sant Erwan, 28, straed Charles Berthelot, Brest, a zo ur greizenn sevenadurel, katolik he spered, brezhoneg he yezh hag a ginnig deoc'h kentelloù brezhoneg digoust, kaozeadennoù, ur sal hag ur witrin, enklaskoù, tud da vrezhonegañ ganeoc'h, levrioù da amprestañ hag oberoù sevenadurel forzh pegement.

Digor bep meurzh (17 eur - 19 eur 30). Bep merc'her (14 eur - 15 eur). Bep yaou (18 eur - 20 eur). Bep gwener (18 eur - 19 eur). Bep sadorn (16 eur 30 - 18 eur 25).

Skol vrezhonek :

- deraouidi d'ar meurzh eus 18 eur 30 da 19 eur 30 ;
- eil derez d'ar yaou eus 19 eur da 20 eur ;
- evit ar vugale e vezo graet skol digoust bep merc'her eus 14 eur da 15 eur.

Enskrivañ a c'heller a-benn bremañ pe dre lizher pe o tont da Oaled Sant Erwan bep merc'her eus 14 eur da 15 eur.

Emglev an Tiegezhioù, katolik e spered, a zo ennañ familhoù ha tud o klask sikour ar vugale da vezañ barrek war ar yezh.

379

Embannadurioù ha levrioù

Evel warlene en deus Yann Desbordes liesskrivet poelladennoù gwellañ e skolidi e skol Sant-Frañsez eus Lesneven.

Resevet hon eus abaoe daou viz ur bern niverennoù eus **Hor Yezh**. An niverenn 106-107 anvet " Labour ar foenn e Plogoneg " gant L. Kergoat a zo ur mell labour peogwir ez eus anezhañ 139 pajenn gant tresadennoù brav-tre. An niv. 108 a zo adarre ur skrid eus Kernev " Ur vuhez e Douarnenez " gant Anna, komzoù dastumet gant Gwendal Denez. An niverenn 109 a zo gouestlet d' ar geriadur gant " Tro geriaoua e Bro-Lanuon " hag anvioù loened " Dizoloadur hor Bed " gant M. Briant ha kendalc'h geriadur Ernault. Kavout a reer ivez an niverenn 109 ur roll (gant an danvez) eus pep niverenn adalek an hini kentañ. - Koumanant 30 lur, 4 niverenn roneoskrivet. - P. Denis, c.c.p. 1499 51 Rennes.

Degouezhet eo ganeomp ivez :

- **Ecoles primaires de Frise**, diwar-benn ar gelennadurezh divyezhek en Izelvroioù gant Kr. Boelens.

- **L'agriculture en Bretagne**, ur studiadenñ hir embannet gant Ar Falz (niv. 13-14-15).

E miz Here e tle dont er-maez ul levr gant hor mignon kembreat Meic Stephens " **Linguistic minorities in Western Europe** ". Al levr a bleustr war stad sevenadurel ha politikel ouzhpenn 50 minorelezh e 16 Stad eus Europa ar C'hornog. - 15 kartenn a vo el levr. War-dro 750 pajenn. Priz : 9 lur saoz 50, Gomer Press, Llandysul, Dyfed, Wales.

- **Prêtres de demain ?** gant C. Y. Kerboul, embannet gant " Nature et Bretagne ". Kontañ a ra C. Y. Kerboul e vuhez a veleg hag e zimeziñ. Ijinour e oa pa 'z eo aet d' ar c'hloerdi da 23 bloaz. Da 30 vloaz ez eo bet beleget. Anvet eo kure e Kemperle hag aluzener er skolioù. Nav bloaz goude e krog en-dro gant e studioù, en em gavout a ra gant ur plac'h hag e c'houlenn bezañ diveleget evit gallout dimeziñ en iliz. Koll a ra neuze e garg a gelenner hag e kont pegen diaes eo d' ur beleg dimezet kavout labour.

Ne zianzav ket C. Y. Kerboul e stad a veleg, er c'hontrol, fellout a rafe dezhañ chom beleg en ur vezañ dimezet evel en Iliz anglikan. N' eo ket deut da vezañ marksour na danvezelour kennebeut (tamall da ra d' ar JOC kas tud d' ar strolladoù danvezelour ha dizoue).

Al levr a zo dedennus da lenn, un tammig digempouez a-wechoù. Diskouez a ra kudenn ar veleien dimezet a vez lakaet er-maez eus ar gevredigezh ma karfent chom enni. Rak hervezañ an darn vuiañ eus ar re a guita ar velegiezh n' eo ket dre ma ne gredont ket mui er velegiezh pe en o c'halvedigezh hen greont met hepken dre ma fell dezho dimeziñ.

O vezañ ma 'z eus nebeutoc'h-nebeutañ a veleien e soñj hag e kred an oberour e vo aotreet un deiz d' ar veleien dimeziñ evel ma veze graet betek an 11-vet kantved.

Ur gudenn boanius eo marteze ha diaes da ziskoulmañ, arguzennoù a-du hag a-enep a zo evel just, met ret e vo, anat eo, d' an Iliz katolik diskoulmañ un deiz kudenn an diouer a veleien.

380

Bodadeg-veur Kuzul ar Brezhoneg

e Sant-Brieg, d' ar sadorn 4 a viz Gwengolo 1976

Ar c'hrafoù-mañ, bet lakaet war ar roll-labour, a zo bet studiet :

Goulenn-skoazell K.E.A.V. - War greskiñ kalz ez eo aet priz an devezh e K.E.A.V. abaoe un nebeut bloavezhioù. Kuzul ar Brezhoneg a asant reiñ ur yalc'had 1 000 lur da G.E.A.V. evit gallout izelaat priz an devezh evit ar re yaouank, treut o yalc'h.

Ar brezhoneg hag ar re yaouank. - Divizet e vez sevel kentelioù istor Breizh, dre lizher e framm Skol Ober, hag ivez sevel ur skrid berr diwar-benn istor ar yezh a vo kaset d' ar skolidi a grog gant o studi.

Ezhomm a zo da embann skridoù evit ar re yaouank. Emañ Embannadurioù Al Liamm o paouez embann tri levr nevez evit ar vugale

Penaos broudañ ar skrivagnerien da skrivañ ? N'eus ket a-walc'h a skrivagnerien hiziv ha ne vez ket kinniget kalz skridoù talvoudus d' an embannerien. Marteze n' eo ket techet ar re yaouank da lenn na da skrivañ kalz hiziv ?

Ar c'hevredigezhioù bodet er c'huzul. - Goulennet ez eus bet ur skodenn 100 lur digant pep ezel eus ar C'huzul evit talañ ouzh ar frejoù post hag all.

Buhez ar C'huzul. - Emvodoù-labour a zo bet graet warlene bep daou viz gant Burev ar C'huzul ha kaset ez eus bet meur a wech pennadoù d' ar c'helaouennoù. Sevel a ra kudenn ar sekretouriezh, met gant harp div sekretourez a youl vat e vo marteze dirouestlet ar gudenn-se.

An emvod da zont a vo d' ar sadorn 6 a viz Du e Pondivi moarvat.

Ar stourm evit ar brezhoneg er skingomz hag er skinwel - Ar C.A.R. en deus goulennet ma vefe lamet 10 % eus ar skodenn da baeañ d' an O.R.T.F. ha bremañ ez eus dija 50 den oc'h ober se e Breizh. N' eus ket riskloù bras peogwir 10 % eus 130,00 lur n' eo ket kalz tra met hegasus eo evit ar melestradur ha diskouez a ra splann youl ar vrezhonegerien da gaout ur plas dereat evit o yezh er skingomz hag er skinwel.

Skourr Breizh ar C'hendalc'h Keltiek. - En Enez Vanav eo bet dalc'het hevlene ar C'hendalc'h Keltiek. Talvoudus-tre eo bet e labourioù war an danvez-mañ " Va bro en dek vloaz a zeu ".

Ar c'hendalc'h da zont a vo aozet e Bro-Skos, e Stirling adarre, eus ar 15 d' an 20 a viz Eost 1977. Ur bern savadurioù nevez a zo bremañ er Skol-veur ha tu a vo da lojañ tiegezhioù, da ziskouez filmoù, hag all. Bez' e vo un dachenn-gampañ bras dres e-kichen hag un dachenn-garavanennoù. Degemeret mat e vo ar C'hendalc'h gant ar Skol-veur hag an Ti-kêr.

Bodet e vo Skourr Breizh ar C'hendalc'h Keltiek e Pondivi d' ar sadorn 16 a viz Here eus 14 eur 30 da 18 eur evit prientiñ mat Kendalc'h Stirling.

Darempredoù gant kevredigezhioù all. - Alies e vez goulennet ouzh ar C'huzul kemer perzh er vodadeg-mañ-bodadeg ha diskouez pezh a ra, er gouel-mañ-gouel. Diaes eo kas unan pep taol, rak sammet eo pep hini. Goulennet e vo digant unan boas da aozañ diskouezadegoù mont e lec'h ma vo ezhomm.

381

Obererezh an izili :

- EMBANNADURIOU AL LIAMM : Emañ Al Liamm o paouez adembann **Yezhadur** Kervella, hag embann tri levr nevez evit ar vugale. **Ti Vatriona** gant Soljenitsyn a zeu er-maez en deizioù-mat. Embannet e vo hep dale **Emgann Kergidu** ha da c'houde **E skeud tour bras Sant Jermen** gant Yeun ar Gow, a oa diviet. Anv a zo da advoulañ **Kan an Douar** gant Anjela Duval, ha marteze oberennoù all skrivet ganti. Diwezhatoc'h e vo adembannet marteze **Itron Varia Garmez** gant Youenn Drezen. Prientet en deus Roparz Hemon ur **Yezhadur bihan** e brezhoneg.

- BARR-HEOL. : Kreskiñ a ra nebeut ha nebeut niver ar goumananterien. Berzh-mat en deus graet levr-keginerezh Soaz an Tieg, peogwir eo bet gwerzhet dija ouzhpenn 600 skouerenn anezhañ war vil. Goulenn a ra Soaz an Tieg skoazell an

holl evit gallout embann un eil levr gant ur bern segredoù-kegin nevez ennañ.

- AL LIAMM : Ouzhpenn 900 c'houmananter a zo bremañ, ha mat e vefe mont en tu all da 1 000 a-benn an niverenn 200.

- HOR YEZH : Embannet eo bet nevez 'zo labour Lukian Kergoat diwar-benn Labour ar foenn e Plogonneg (Niv. 106-107) ha labour Gwendal Denez diwar-benn Anna - Ur vuhez e Douarnenez (Niv. 108).

Da heul e vo embannet un dastumad-gerioù dastumet gant Mikael Briant, un dastumad-gerioù dastumet gant Fañch Elegoet, ur skrid bet kavet e Bro-Wened, un dornskrid gant Meven Mordiern, kanaouennoù-pobl war follennoù-distag, h.a.

- SKOL : Div niverenn dev (romantoù gant Paol Feval) a zeuio er-maez a-benn nebeut. Adembannet e vo ivez **Re Bennavel** ha **Ur prenestr a oa digor** en ul levrig moulet.

Muioc'h-mui a draoù a vez embannet e brezhoneg bremañ, ha dre-se eo diaes a-wechoù adkavout ur pennad lennet. Kinniget e vez ma vefe embannet gant ar c'helaouennoù a vare da vare, un niverenn a-ziforc'h, gant roll an holl bennadoù bet embannet enno e-pad ur prantad amzer.

Echu eo Menez Kamm

Krog e vezer eta da sevel ar c'hazarn e Ti Vougeret. E-keit-se ez eo ret da Venez Kamm, e Spezed, serriñ dre ziouer a arc'hant evit lakaat ar greizenn sevenadurel da vont en-dro. Ur sikour 1 400 lur o doa ar renerien digant Kuzul Penn-ar-Bed ha teir pe beder skodenn digant kumunioù a-ziwar dro (eus 50 da 200 lur pephini). Ret e oa kaout 300 000 lur evit lakaat an ti da vont en-dro.

Ur galv a zo bet graet d' ar c'hevredigezhioù ha da holl guzulioù-meur Breizh-Izel. En aner, daoust ma oa lec'hiet en ul lec'h ma oa ezhomm anezhi. N' eus ket bet tu da gaout tra na digant " Jeunesse et Sport " na digant an Aferioù Kulturel. Setu dilezet eta Kreiz Breizh evit pezh a sell ar sevenadurezh.

382

Bloaz-ha-kantved Yann-Vari Perrot

An Aotrou Yann-Vari Perrot a voe gant e Plouarzel d' an dri a viz Gwengolo 1877. Moarvat e vo lidet seurt bloaz-ha-kantved en un doare dereat ! Da gentañ ez eo bet embannet gant Emglev an Tiegezhloù skeudennoù bihan kaer, warno diouzh un tu poltred an Aotrou Perrot ha komzoù ar c'hantik brav " Pedenn evit Breizh " savet gentañ, diouzh an tu all un dresadenn arouezius-kenañ digant X. V. Haas ha gwerzennoù doujus e-keñver Yann-Vari Perrot sinet V. S. D' o c'haout, degas timbroù da Emglev an Tiegezhioù, 30, place des Lices, 35000 Rennes. Eno e chom ivez un toullad skouerennoù eus poltred bras Yann-Vari Perrot bet meneget e niv. 172 Al Liamm, p. 404.

Ouzhpenn se ec'h ouzomp e vo embannet studiadennoù a-bouez hag ivez ul levr gant Herri Kaouissin, ennañ skridoù diembann diwar dorn ar merzher.

Dalc'homp soñj !

E miz Here 1876 e varve en ospital, e Pariz, Yann-Vari ar Yann, barzh Eostig Koad an Noz. Donezonet-kaer e oa Yann-Vari ar Yann ha glan-kenañ e vrezhoneg ; moarvat e talvezfe ar boan adembann darn eus e oberoù.

Kenvreuriez ar Brezoneg

Kenderc'hel a ra en un doare sioul ha kalonek **Kaieroù Kenvreuriez ar Brezoneg** da ginnig testennoù brezhonek evit ar skridoù sakr. Nevez deut er-maez an 42-vet niverenn. N' heller nemet hetañ gwelout beleien niverus oc'h ober gant an testennoù-se, kalz muioc'h a dalvoudegezh speredel enno peurvuiañ eget er sulpiserachoù a vez re alies klevet en ilizoù ar vro... Goulenn digant Job Seite, Skol an Aod, 29249 Gwiseni.

Almanak mat al loened (1977)

Setu anv ul levrenn da vezañ embannet bep bloaz, enni rolladoù anvioù da reiñ d' al loened.

Da lakaat an almanak bihan-mañ da vezañ degemeret aesoc'h gant an desaverien loened e vo displeget ennañ an doareoù eeun hag an troioù micher evit magañ kempenn, louzaouiñ al loened doñv, hag al loened gouez ivez marteze.

Un druez eo re alies pa weler anvioù ar c'hezeg, ar saout, ar chas... kaset war al leurenn pa vez kenstrivadeg. Da lakaat un tamm gwellaenn war an dachenn-mañ eo ret lakaat aesoc'h an dibab anvioù d' ar re a ra war o zro. Setu pal " Almanak mat al loened "

Da c'houzout hiroc'h, goulenn digant Yann-Erwan Rolo, Ti-kezeg ar Sav Heol, Kervaria (Ste-Marie-de-Redon) 35600 Redon.

383

Ur priz lennegel nevez

Kemennadur digant Kuzul Etrevroadel evit kendalc'h ar yezh vrezhonek, 11-13 Parvis de Saint-Gilles, B 1060 Bruxelles :

« Evit kenderc'hel gant e stourm hag a zo reiñ nerzh d' ar brezhoneg ha d' ar sevenadur breizhek, hag evit reiñ da c'houzout dre ar bed a-bezh ez eo bev mat hor yezh hag hol lennegezh, en deus Kuzul Etrevroadel evit kendalc'h ar yezh vrezhonek, divizet krouiñ ur priz lennegel, bep bloaz, evit un oberenn embannet e brezhoneg.

Evit diskouez talvoudegezh etrevroadel al lennegezh-se e vo roet ar priz gant ur juri lennerien ma vo kavet ennañ Bretoned ha brezhonegerien estren.

Goude barnadenn ar juri e profo ar C'huzul Etrevroadel an oberenn d' an dek levraoueg brasañ estren : Deutsche Bibliothek (Frankfurt am Mein), British Museum (Londrez), Levraoueg roueel Albert I-añ (Brusel), Biblioteca Nazionale Centrale (Fiorenze), State V. I. Lenin Library of the USSR (Moskov), Library of Congress (Washington), National Library (Ottawa), Egyptian National Library Dar ul-Kutub (Kaero), Levraoueg Vroadel (Pekin), Rijksbibliotheek (Leyde).

En doare-se e vo krouet e pep hini eus an 10 bro un dastumad levrioù brezhonek. Reiñ a raio a vloaz da vloaz un testeni eus buhez ha nerzh lennegezh Vreizh.

Skignet e vo an oberenn c'hopret e-touez izili ha mignoned ar C'huzul e pep Kuzul broadel a ya d' ober ar C'huzul Etrevroadel.

Brudet e vo an oberenn e pep seurt doare ha dreist-holl er werzh-diskouezadeg levrioù ha kelaouennoù brezhonek a vez aozet hep bloaz gant ar C'huzul Etrevroadel e Brusel.

Pedet eo ar skrivagnerien hag an embannerien o defe c'hoant kinnig un oberenn, kas ur skouerenn anezhi a-raok an 31 a viz Meurzh 1977 da Guzul Etrevroadel evit kendalc'h ar yezh vrezhonek, 11-13 Parvis de Saint-Gilles B 1060 Bruxelles.

An disoc'hoù a vo roet d' ar c'hentañ a viz Mezheven 1977. »

Petra eo " Barr-Heol " ?

An hini buhezekañ eus hor c'helaouennoù brezhonek. Evit daou abeg moarvat ; plediñ a ra gant holl gudennoù ar Vro ha dre m' eo aozet an holl bennadoù en ur yezh vev, pinvidik, leun a droioù-lavar hag a c'herioù eus ar yezh pemdeziek. Barn a ra an darvoudoù en un doare dichipot.

D' an hini a glaskfe sevel un istor an Emsav e-pad an 20 vloaz e rofen an ali da gregiñ gant BARR-HEOL.

Setu perak n' hell emsaver ebet tremen hep BARR-HEOL. Morse ne voe douget gwelloc'h hec'h anv gant ur gelaouenn.

Na gontit ket war ar re all evit ober un dra bennak ! - An holl vrezhonegerien vat a lenn BARR-HEOL.

Embannadurioù BARR-HEOL :

- Leksionaloù ar sulioù hag ar gouelioù (A. B. C.)
pep hini 18,00 lur
- o-zri war un dro 50,00 lur
- Ritual ar Briedelezh (klok, liesskrivet) 6,50 lur
- Ritual ar Vadeziant (offset) 5,50 lur
- Pedennoù ar sulioù ordinal (liesskrivet) 5,00 lur
- Levr-oferenn evit Gouelioù ar Sent (166 p.) gant ur gerladurig latin-brezhonek
25,00 lur

384

Embannadurioù all. Un nebeut skouerennoù a chom c'hoazh eus :

- Otello, Seurez Kerwenan, Aviel Sant Lukaz, Mervel evit bevañ (pep hini) 12,00 lur

Ul Levr-kegin e brezhoneg. - Abaoe 15 vloaz 'zo, e kaver e BARR-HEOL pennadoù diwar-benn an doare da ober kegin. Gant Soaz an Tieg eo bet savet an darn vrasañ anezho, ha setu m' he deus kavet mat ober ul levrig ganto ha gant meur a hini all embannet gwechall e kelaouennoù brezhonek. Al levrig-se, ment 21 X 13,5 sm, 80 p., 135 meuz, a zo embannet evel stagadenn da VARR-HEOL. Priz al levr : 15 lur.

Koumanant da VARR-HEOL :

- Koumanant ordinal, 30,00 lur - Koumanant estren, 32,50 lur
- Studierien, 25,00 lur. - K.R.P. 2 454 53 Rennes.

Merkit war ho chekenn-bost ar pezh a vennit hag e viot servijet kerkent hep mizoù all.

AN HOLL VREZHONEGERIEN VAT A LENN BARR-HEOL
(Kemennadur)

Skol Ober

Ar vodadeg kelennerien/skolidi aozet warlene e Roazhon he doa graet berzh bras, ha divizet eo bet ober div vodadeg all er bloaz-mañ, e korn-broioù disheñvel.

Dalc'het e vint ar wech-mañ :

- e NAONED, d' ar Sul 14 a viz Du

er " Centre Jean Macé ", 90, rue du Préfet-Bonnefoy (e-kichen ar prefedi), 44000 Nantes. Pellg. (40) 74-47-85 ;

- e PARIS, d' ar Sul 21 a viz Du

er " Foyer International d'Accueil de Paris ", 30, rue Cabanis, 75014 Paris (Métro Saint-Jacques, pe Glacière), Pellg. 589-89-15.

Priz an devezh : 20 F (priz ar pred e-barzh) e hini pe hini eus ar bodadegoù.

Roll an devezh a vo, evit pep hini eus ar bodadegoù :

- da 12 eur 30, merenn a-gevret,

- adalek 2 eur 30 goude kreisteiz, bodadeg hollel etre kelennerien ha skolidi.

Diouzh goulennoù ar berzhidi, e vo tu da ouestlañ un eurvezh e derou an endervezh, evit reiñ alioù diwar-benn implij ar yezh.

Digor eo ar bodadegoù-se d' an holl o defe c'hoant dont : hor skolidi, hag o mignoned a garfe ober anaoudegezh ganeomp.

Gant spi ho kwelout niverus en deizioù-se, kas a reomp deoc'h hor gwellañ gourc'hemennoù,

SKOL OBER, 20, rue des 3 Frères Le Goff,
22000 Saint-Brieuc.

AL LIAMM 179

TAOLENN

Tarzhadenn ar marv gant ABALAN	387
Barzhed arc'hoazh gant PER DIOLIER	388
Un den d' e c'her gant L. ANDOUARD	390
Petra a c'hoarvezas en noz-se e Malnoe ? gant YANN BOUESSEL DU BOURG hag ERNEST AR BARZHIG	399
Eñvorennoù gant YEUN AR GOW	405
Teir barvenn aour an diaoul gant FANCH AN UHEL	413
Istor Breizh gant LA BORDERIE (tr. Roparz Hemon)	419
Touellerezh dañjerus ! gant J. M. TILLY	423
Roll ar Pennadoù bet embannet war AL LIAMM etre 1966 ha 1975 gant ANNA-GWENOLA KERVELLA ha HERVE LATIMIER	425
Notennoù	462
Roll ar pennadoù embannet e 1976	470

Skeudennoù :

- Breizh daoulinet dirak Bro-C'hall,
- Fañch an Uhel gant aotre hegarat Ouestfrance.
- ar 7 a viz Eost 1932 (kl. ar Vro).
- Yann-Kel Kernalegenn (kl. A.L.).

FR ISSN 0024-1733

Tarzhadenn ar marv

Diouer bras am eus d' ur c'hamalad
Bet drailhet gant e vombezenn diwezhañ.
Korf tarzhet, aet a dammoù
Strewet war vaezioù e vro ;
War an tamm douar-se
Na felle ket dezhañ gwerzhañ.
Kouezhet ar glav. Mesket gwad ha pri.
Er gwezennoù tro-dro e klever huanadennoù
Klemmgan ur vuhez en he daou vloaz warn-ugent.
Dalc'het o deus don en o rusk
Merkoù teñval ur sell spouronet.
Daoulagad na vo c'hoarzh ebet ken enno.
Mouezh torret. Echu gant tonioù laouen ar vombard.
Tavet eo sonennoù lirzhin ar gompiri.
Kollet am eus ur c'hamalad mat ;
Kernalegenn e oa e anv.

Harcourt Street, d' an 30 a viz Here.

Barzhed arc'hoazh

Ni ' zo tud digor,
gredus hag hegreidik zoken,
ponner-mat hor boteier prenn,
ha gwell a se, ha gwell a se.

Kaer ha liesstumm eo diazez
hor sevenadur evelkent
ha ni ' venn e ganañ d' ar bed,
devet hor c'hreiz gant c'hoant-imbroudiñ
ha lidañ an dishualded
gant tonioù nevez
ha mouezhioù dianav d' an estren
hor c'hrede marv, ha deomp zoken.

Niverus ar Gelted yaouank
'vel en -ur park ar pennoù-ed
a vo o sevel adarre.

Gouez, garv, hor sevenadur
a anavez ar minc'hoarzh hael,
setu pezh a ra e nerzh-plaen.
Donezon hor pobl
dezhi ni klok a zaskoro
ha lorc'h dihesk da vont a-raok.

Ni ' venn kanañ nerzh ar c'horfoù,
an natur. kened ar merc'hed,
ni ' venn kanañ ar varzhoniezh,

diskuliañ erfin da bep un,
d' an hini uvelañ ouzhpenn

389

ez eo lufrus he flammenn
ennañ zoken.
Sevenadur, levenez-krouiñ
ne vint ken prevesañ lodenn
ur renkad-tud.

Ni hon eus ar menoz didres,
na pegen diaes,
d' en em gavout en hor c'hlokted
er-maez eus ar c'henreizhadur,
kanerien hor gouenn,
kanerien ar bed.

Sant-Servan, 3.2.73.

Un den d'e c'her

Berrdanevell

" ... Is beart de réir ár mbriathar
Osborn O hAimhirgin

« Un den d' e c'her. Setu petra em eus klasket bezañ a-viskoazh, » a lavaras din va mignon, Alan Mazeo, kabiten a vor o vevañ diwar e leve, un deiz m' edomp en ostaleri, oc'h evañ ur banne asambles, evel ma reomp alies p' en em gavomp. Bet en deus bet ur vuhez avanturus hag e plij dezhañ komz anezhi. Hag, en deiz-se, goude bezañ prederiet ur pennadig 'n ur sellout pizh ouzh foñs e werenn e kendalc'has evel-henn : « N' oufen ket lavarout pegoulz em eus kavet pe, gwelloc'h, santet e don va c'halon, talvoudegezh ar gomz. Ar Gomz Vev, 'vel ma larer. Pezh a zo sur, bev eo bet bepred evidon ha klasket em eus a-viskoazh lakaat va oberoù da glotañ gant va c'homzoù. Kement tra lavaret, kement tra graet, setu petra eo bet va fal em buhez. Ya, » emezañ goustadik, evel en ur bouezañ e gomzoù, « bet am eus bet, hag am eus bepred, ar soñjezon e talvez ur gomz kement hag ur skrid hag e lavarfen muioc'h zoken. Douget e vezan d' ober fae war ar skridoù. Ur wech m' en deus un den roet e c'her, a-walc'h eo, d' am soñj. Petra ober ouzhpenn ? Ha, padal, ne vez ket e-giz-se gant an darn vrasañ eus an dud. Prometiñ a reont a-walc'h, ya ! Derc'hel d' o fromesa, d' o ger, se 'zo un afer all... »

Brudet mat eo Alan Mazeo dre ar vro. Koulskoude, e oan souezhet gant an dro a gemere hon diviz ha ne ouien ket re petra lavarout rak ne blij ket din klevout an dud o kanañ o meuleudioù. « Kozh gi 'n em veul, » a lavar Gwenediz.

391

Evel p' en dije divunet va soñjoù e savas va mignon e sell a-ziwar foñs e werenn ha gant ur mousc'hoarzh lentik ha goapaus un tamm, a deneraas va c'halon, e lavaras :

« Anat eo on bet tapet meur a wech hag alies zoken am eus bet mezh, goude, da vezañ bet ken hegedik, nemet, petra ' fell dit, evel-se e vezan, douget da fiziout en dud... »

Hag, evel ma oar ervat e vourran ouzh e glevout o tanevellañ pennadoù eus e vuhez war vor, e kontas din an istor-mañ

*

D' ar mare-se, edon letanant-kentañ war vourzh ar Sant-X. hag o verdeiñ war aod kornog Afrika pe, war an " aod ", evel ma lavaremp-ni, eeun-hag-eeun. Te a anavez mat al listri-se peogwir ac'h eus merdeet, e-pad ur pennad, war ar Sent, evel ma raemp anezho, nemet war ar re vihan out bet bepred, ar re a zaremprede porzhioù Aljeria nemetken. N' eus forzh, klevet ac'h eus sur-mat, komz alies, er " c'harrez ", eus ar vuhez a renemp war ar re vras. An nebutañ a c'hellan lavarout diouti eo e oa garv-kenañ. An devezhiad eizh eurvezh n'oa ket anezhañ. E mod ebet. Ur wech tizhet Tabou ganeomp, war Aod-an-Olifant, ha lestret eno ur bagad mat a baotred Krou, e veze labouret noz-deiz. Hag evel-se, o vont a borzh da borzh, a-hed aod pleg-mor Gwinea, en ur verdeiñ e-pad an noz hag en ur gargañ-diskargañ marc'hadouriezhioù e-kerz an deiz, e tapemp erfin Beg-Du, er C'hongo gall, pe Vatadi, er C'hongo belgiat, hag int ar penn pellañ eus hor beajoù. Kemend-all a veze graet war hent an distro.

Un noz, edomp o vont eus Libreville da Gribi, ur porzhig, ma c'hellan komz e-giz-se, a zo e kreisteiz ar C'hameroun. An noz a oa du-pod ha ne welemp berad. Da beder eur hor boa kroget da dostaat ouzh an douar hag e c'hortozemp an deiz gant mall. Kerkent hag an tarzhig kentañ anezhañ, avat, ez en em gavjomp en ur vrumenn dev, ur seurt brumenn wenn en em lede war ar mor evel ur goumoulenn. Ken stank e oa al lusenn ma oa bet glebiet bep tra ganti. Tamm-ha-tamm, avat, e kreskas an tommder. Gouzout a raemp ervat ne badfe ket al lusenn hag e vije bet gwell ganeomp chom pell diouzh an aod ken na vije savet, nemet kabitened ar Sent a veze bepred c'hwen en o loeroù, ha neuze e klaskomp hon hent gwellañ ma c'hellemp met kentoc'h evel gozed dindan an douar.

392

Bep ar mare ar martolod karget da deurel ar plom a hope a-ziwar ar pont pennañ ar sondadennoù a oa o tigrskiñ goustad = « 12 metr !... 11 metr !... 10 metr !... ». Edomp holl war an dreuzell, kabiten hag ofiserien, a-zevri o sellout pishañ ma c'hellemp war-du an aod. Ne oa, avat, tra ebet war wel... Hogen, a-sav-taol, e voe klevet an eil gabiten o youc'hal : « Emaomp ganti ! ». Ar vrumenn a oa atav ken stank ha ken stank en-dro deomp nemet en nec'h, a-us dezhi, e weled en oabl o c'hlasaat, ur vogedennig voan o sevel sonn. Sederaat a reas dremm ar c'habiten war an taol. Ya, edomp ganti, rak eno edo ul lestr war ar chadenn hag eno edo ivez an eorva edomp o klask.

Prestik goude e voe gwelet a-dreuz d' ar vrumenn a oa o sevel gorrek stumm dispis ul lestr-kenwerzh, warnañ e siminal o tivogediñ. Tremen a reas ar Sant-X. e-biou dezhañ hag, ur pennad goude, e voe klevet " ploup " hon eor o kouezhañ en dour ha storlok ar chadenn o vont a-dizh er-maez eushe fuñs.

Erru edomp e Kribi.

*

Un devezh iskis a dremenjomp neuze. Rak e-lec'h trouz ha cholori an traouilhòu o treiñ dibaouez ne voe klevet nemet taolioù morzhol hor martoloded o tiverglañ ar c'houc'h. Kaset hor bagoù-kargañ en aod, hini ebet ne oa deuet en-dro.

Gwelet e voe neuze ar Grouidi o sevel eus goueled al lestr hag o vont-dont vak war e c'horre. Santout a reas an holl, neuze ar re wenn hag ar re zu, e oa c'hoarvezet un dra dic'hortoz bennak.

Ne blije ket kement-se, anat eo, d' hor c'homandant. Gwelet e oa bet, meur a wech, o tont er-maez eus e doull hag o sellout pizh ha pell en e lunedoù-hirwel da welout hag-eñ e teue ur vag bennak war hon tu. Helibini a veze etre kabitened-listri an " aod " evit gouzout piv an hini a rafe ar veaj verrañ. Den ne voe souezhet eta pa redas ar c'heloù ez afe ar " pacha " en aod goude merenn.

Un darvoud meur e oa se en untoded hor buhez a labour dibaouez. Pep hini eta en em gavas war ar pont evit arvestiñ outañ. Sebezet e chomjont holl, avat, o welout ar c'homandant o tiskenn eus an dreuzell m' edo e gambr. Gwisket en e gaerañ e touge ur roched gwenn-kann, berr e vilginoù hag ur bragoù berr ken gwenn-all a oa bec'h gantañ ober tro e gof hag e feskennoù. Un tog-heol saoz a oa war e benn hag en e dreid e oa botoù izel melen ha loeroù gwenn strizh a save betek e zaoulin.

393

Petra souezhus e kement-se a lavarot-c'hwi ? Ket, kalz a dra, marteze. Ret eo diskleriañ, avat, ne veze ket ar boaz, neuze dougen bragoù berr war al listri gall. O c'habitened a yae, peurliesañ, en aod gwisket dereat-tre gant ur porpant, bragoù hir hag ur gravatenn en-dro d' o gouzoug. Ret din menegiñ ivez ne oa ket hor c'homandant un den ordinal. Ma oa uhel e vent e oa lart ivez dreist muzul. A-ziwar nebeut a labour-korf ha chervat e oa savet ur pikol kof dezhañ. Bezañ gwisket, neuze evel ur c'havadenner-broioù pe ur " sportman " ne zeree tamm ebet outañ. Gwell e vije bet dezhañ, a dra sur, kuzhat e zivorzhed hag e zivrec'h tev blevek. Meur a hini a soublas e benn evit mirout a vezañ

gwelet o vousec'hoarzhin pa dremenas ar " pacha" dre an " troc'h " a oa el listenn da ziskenn en e ganod. Pa voe hemañ war bellaat e youc'has rok d' an eil-gabiten : « Ha ra vo pep hini prest da labourat rak emañ o vont d' o hejañ-dihejañ du-hont ! ».

*

Ma ! ken iskis bennak hag e voe, den ne voe hejet-dihejet du-hont rak ne voe gwelet bag ebet o skeiñ war-du ennomp. An endervezh a dremenas dres evel ar beurevezh. Didrouz e chomas hol lestr hag e talc'has hor morianed pe da vont-dont, unan hag unan, pe da safariñ a-strolladoùigoù hag int azezet en o fuch en ur c'horn bennak disheol.

Evidon-me, mont a raen bep ar mare war an dreuzell da sellout ouzh an aod. En em gavout a raen eno gant an " eil ", anezhañ un den treut ha nervernek-kenañ a veze atav war ar bale eus ur penn d' al lestr d' egile hag eus ar mintin betek an noz. A-hend-all n' eo bet biskoazh ur garg dilabour hini un eil-gabiten war ul lestr-marc'hadourezh. Ne gomprenne ket, evel just, pezh a c'hoarveze hag e kreske e zihabasketed dre ma tremene an deiz.

Kouezhañ a reas an noz a-benn ar fin ha, goude koan, pep hini en em dennas en e doull.

Laouen edon-me o soñjal en abardaevezh sioul a dremenfen a-gevret gant va levrioù hag er pennad kousk hir a c'hellfen kaout goude. Edon, avat, o paouez azezañ ouzh va zaolig hag o kregiñ da lenn pa santistrumm e oa unan bennak ganin. Treiñ a ris va fenn ha petra 'welis nemet an " eil ", en e sav, e toull dor va c'hambrig. Edo o sellout ouzhin, hag e chomas ur pennad dilavar.

394

- « Va digarezit d' ho tirenkañ, » emezañ, « nemet e komprenan nebeutoc'h-nebeutañ perak eo bet dalc'het ar " pacha " hag hon tud en aod. Ha n' en doa ket lavaret, en ur gimidiñ, ne vefe ket pell ha setu m'eo tost da nav eur ha n' eo ket deuet en-dro. Biskoazh kemend-all ! » ha, goude ur pennadig tav, « Ha ne garfec'h ket mont en aod da welout petra 'ra ? Ret eo din gouzout ! Me n' on ket evit padout ken!»

Soñjal a ris ne oa ket tu, moarvat, d' en em dregasiñ kement, met gant aon, moarvat, da vezañ lakaet da zen aonik, ken yaouank e oan neuze, e lavaris dezhañ ez afen. Va zrugarekaat a reas, hag ez eas kuit da lakaat aozañ ar vag am c'hasfe d' an aod.

*

Pa 'z is er-maez eus an trepas ma tigare hor c'hambroùigoù warnañ e voe skoet va c'halon gant an noz du-pod, diloar ha distered ma oa, hag ar c'hevrin goloet ganti. Un nebeut kammedoù diasur a ris war ar pont hag e stokis ouzh an " eil ".

- « C'hwi 'zo aze, » emezañ, « mat eo ! Emañ ar vag ouzh ho kortoz e traoñ ar skeul-troc'h ha prest da loc'hañ. An danvez-ofiser a zo o vont ganeoc'h. Ha, mar plij, arabat deoc'h ober evel ar re all. Na chomit ket en aod en an' Doue ! Deuit en-dro buan ! Mall 'zo ganin kaout keloù ! »

Prometiñ a ris dezhañ ober va zro ker buan ha ma c'hellfen.

Diskenn a ris gant ar skeul ha mont e-barzh vagig hag azezañ en he c'hreiz. An danvez-ofiser a oa dija eno en e goazez war ur bank, al letern war elum gantañ etre e zivhar. Ar Grouidi pevar a bep tu, a oa hanter-azezet war al listenn. Edo ar c'hakatoa bihan en e sav en aros, hag eñ krog er roeñv-stur. Un den laosk a oa anezhañ hag, evit gwir, ne blije nemeur din. P' edon o vont e-bourzh e oan en em harpet warnañ ha klevet c'hwezh ar gwin-ardant a oa gant e anal. « Deomp dezhi ! » a lavaris dezhañ hag e krogjomp da bellaat eus hol lestr. Seul zuoc'h e hañvale deomp an noz ma ne oa ket boazet c'hoazh hon

daoulagad ouzh an deñvalijenn. Hor goulou-lutig ne sklerijenne nemet un tamm bihan eus goueled hor bag. Tremena a rejomp e-biou d' al lestr hollandat a ziskoueze bezañ seul vrasoc'h ha seul visteriusoc'h ma ne oa kargamant ebet en e vourzh, ha ne weled nemet un darn anezhañ, sklerijennet ma oa nemetken gant ar c'houlouenn o tiskouez edo war ar chadenn. War hor bourzh, den ne lavare ger ha ne voe klevet e-pad ur pennadig nemet roeñvigoù hor C'hrouidi o skeiñ an dour. N' emañ ket ar boaz ganto, avat, da vezañ ken didrouz hag emberr, e krogas ar c'hakatoa da ganañ e-unan : « Yolo- o-o... ! » hag an holl da ziskanañ a-gevret : « I-a-tsa, i-a-tsa, i-a-tsa... » buanoc'h-buanañ ha da bep « tsa », e souble o c'hein war al listenn hag e klevet o roeñvigoù o skeiñ an dour ken e seblante hor bag damnial a-us d' ar mor. Pegeit e padas hor merdeadennig ? Ne oufen ket hel lavarout resis, tamolodet ha moredet ma oan, moarvat, war va bank.

395

A-daol-trumm e voe dibradet hor bag gant ur pikol gwagenn a ziskouezas bezañ seul-vrasoc'h m' edo ar mor sioul ha kompez evel ur poullad eoul. Tremena a reas en ur zifarleañ warnomp. En em gavout a rejomp holl e-pad ur frapadig-amzer en dour o virviñ, o ruilhal hag oc'h eonenniñ spontus. Lazhet-mik e voe hor c'houlouenn. Klevout a ris an danvez-ofiser o leuskel ur youc'hadenn skiltr. Me a oa aet em sav. A-drugarez Doue, hini ebet ac'hanomp ne oa bet sammet gant ar mor. Ne oamp ket tapet moarvat nemet gant kein uhelañ an houlenn. Hor C'hrouidi hag o doa pleget o c'hein evit tremena a-dreuz dezhi, a zalc'has da skeiñ an dour mibinoc'h-mibinañ da reiñ tizh adarre d' hor bag. Ar c'hakatoa, chomet sonn war e sichenn, a boueze gant e holl nerzh d' he lakaat en-dro en he hent reizh. Ne oa ket, enta, ken mezv ha ma kreden pe neuze e oa bet divezvet war an taol. M' en doa dre e zievezhted stlapet ac'hanomp en dañjer ar brasañ gouezet en doa ivez derc'hel hor bag en he sav. Erruet e oamp war ar varrenn hep gouzout dimp, hag hor boa graet ar pikol fazi da vont dezhi gant moñsell hor bag ha neket gant he fri. Ker buan all e vije bet troet war he genou, ha Doue a oar petra a vije c'hoarvezet ganeomp. Hiviziken e oamp dihunet-mat ha war evezh. An eil hag an trede gwaz a skoas hor bag war he staon ken e lammas skañv warno evel ur marc'h-red arroutet-mat a-us d' ur gloued. Dres goude e voemp souezhet 'n em gavout ken trumm all o risklañ war ur mor lenkr ha sioul, ur bam ! Edomp e genou ur stêrig, etre div riblennad wez a dostae muioc'h-mui an eil ouzh eben ken en em gavjomp dindan ur volz teñval ha meurdezus, evel hini un iliz-veur. Kaeañ a rejomp nebeut goude, ha degemeret laouen gant un toullad mat eus hor C'hroumen.

396

*

Kaset e voemp ganto da di Merour an Trevadennoù e-lec'h m' edo hor c'habiten. Un ti uhel e oa e-kreiz ur bod gwez palmez a fiñve o delioù ledan, a-zioc'h hor penn. Sevel a rejomp gant un diri simant a gasas an danvez-ofiser ha me war ur pondalez ledan, digor-bras war an diavaez. Er penn anezhañ e oa ur vaouez ha daou waz en o c'hoazez war geder-brec'h aozilh. Edont en-dro d' un daol grenn, karget a veuzioù hag a ziedoù, sklerijennet kaer gant ul lamp izel a-istribilh ouzh al lein, hag a leze en deñvalijenn kement tra a oa a-us d' e dog ledan.

Unan eus an daou waz a oa, anat eo, hor c'homandant. En e vleud edo aze, a-hervez, rak ne fiñvas ket an disterañ pa welas ac'hanomp. Degemeret seven e voemp gant ar Merour hag e wreg, hag int aet en o sav raktal. Ur wech azezet e tisplayis perak e oamp deuet. Sellet e voemp kentoc'h a-gorn gant ar pacha " a zigoras e c'henou neket d' hor saludiñ, met da ziskleriañ ne oa ket erru ar varc'hadourezh e oamp deuet da gargañ, ez errufe e-pad an noz, hag e c'hellfe al labour kregiñ antronoz, abred diouzh ar mintin.

E-keit-se e rae gwreg ar Merour war hon tro. Merzout a reas e oa gleb hon dilhad hag e tisplayjomp neuze pezh a oa erru deomp p'edomp o treuziñ ar varrenn. Kinnig a reas deomp dilhad sec'h, boued hag evajoù.

Ur vaouez yaouank kaer e oa anezhi. Un drugar e voe deomp he gwelet o kerzhout skañv en-dro d' an daol. A-wechoù, pa souble warni da ziskenn un died fresk bennak d' he ostizidi e teue he dremm er sklerijenn hag he mousc'hoarzh

hegarat a rae vad d' hor c'halon. Ni hag a oa o paouez tremen tost da dri mizvezh war vor e-mesk gwazed c'harv ne oamp ket evit mirout ouzh hor selloù da barañ warni ken heneuz e kavemp he c'horf mistr ha ken plijus c'hoari he divrec'h noazh betek he divskoaz. Lavaret ho pije gouzoug daou alarc'h o plegañ-diblegañ koantik war ul lenn boull sklerijennet gant al loargann. Abaoe keit-all ez adwelan c'hoazh ken splann em eñvor skeudenn ar vaouez hegarat-se evel m' en em ziskouezas deomp en noz-se.

Ar gaoz a yeas en-dro e-pad un hanter- eurvezh ken e ris an neuz da sevel.

397

« Petra a rit-hu ? » eme ar Merour. « N' emac'h ket brav amañ ? Perak mont kuit ken abred ? N' eus labour ebet war ho lestr hag e c'hellfec'h zoken chom amañ betek ar beure. Neket 'ta, komandant ? » Hemañ, avat, ne rannas ger. Kenderc'hel a reas ar Merour : « Gwelet hoc'h eus hoc'h-unan pegen risklus eo tremen ar varrenn e-pad an noz, dreist-holl pa vez du evel en noz-mañ. Gant ar c'houmoul o kargañ an oabl ne viot ket evit gwelout fri ho pag zoken. Meur a hini o deus kavet o marv warni. Chomit 'ta ganeomp ! »

E wreg a gomzas a-du gantañ. Arabat e oa deomp kaout aon d' o direnkañ rak kustum e vezent da reiñ bod da dud o tont eus diabarzh ar vro hag oc'h en em gavout zoken e-kreiz an noz. N' eo ket ar gweleoù a vanke en ti nag ar rideozioù a-enep ar c'hwibu. Bez' e c'hellemp chom eta...

Ken brav ez en em gavemp eno, ken seven ha ken hegarat e oa ar Merour hag e wreg, ma chomis e-pad ur pennad etre daou venoz. Gwelout a raen daoulagad an danvez-ofiser o parañ warnon hag anat e oa ar bedadenn a lennen enno. « Chomomp ! O, chomomp 'ta ! » a lavarent. « Pe... mont ! » a lavare ur vouezh kuzh em spered. Ya, eno 'oa ar gudenn. Pa soñjis, avat, er paour kaezh eil-gabiten ilinet war al listenn gant e sell o furchal an noz, mall gantañ hor gwelout o tont en-dro, neuze e ris va menoz da vat. Mont a rafemp en-dro ha pa ne vefe nemet evit seveniñ va fromesa.

Hor c'homandant n' en doa ket digoret e c'henou e-keit-se. E sell, avat, a oa helavar a-walc'h.

Sevel a rejomp da gimiadiñ. Lavarout a reas ar Merour e kasfe ac'hanomp betek hor bag, hag ez afe goude, gant e garr-tan, war ribl ar mor da sklerijennañ deomp an hent gwellañ da vont kuit eus ar porzh. Pezh a reas hag a-drugarez dezhañ e c'helljomp tremen ar varrenn dizrouk ha dont en-dro didrabas.

Sioul, ur bam, e oa pep tra e-bourzh ar Sant-X. pa savis war e c'horre. Ne gleved nemet an dour o stlafikat goustad ouzh kouc'h al lestr ha boudig un adkeflusker o treiñ ingal e traoñ sal ar mekanikoù. Mont a ris rag-eeun en trepas diabarzh ma tigore kambroù an ofiserien warnañ. Teñval e oa ar " c'harrez ", ken teñval all kambroù an eil letanant hag an ofiserien-vekanikerien. N' oa nemet unan a gement a oa sklerijennet c'hoazh : hini an eil-gabiten hag eñ, moarvat, ouzh hor gortoz. N' edo ket avat. Gwisket penn-da-benn hag e gozh gasketenn zoken war e benn e oa en em daolet war e wele hag eno e oa manet kousket. E c'hervel a ris : « Distro omp, kabiten ! ». Ger ebet. « Erru omp en-dro ! Dihunit ! ». Derc'hel a rae da roc'hal ken na rae. Kregiñ a ris en e skoaz. Fiñval a reas hag e troas war an tu all. Hejañ-dihejañ a ris anezhañ e-pad ur frapadig-amzer ken e laoskas din, a-benn ar fin, ar ger end-eeun eo sañset hor c'henvroad Kambron da vezañ youc'het d' ar Saozon e Waterloo.

398

Kompren a ris, neuze, e oa anezhañ eus an dud-se na c'heller ket dihuniñ p' emaint en o hun kentañ hag e oa gwell ganin zoken chom hep e zihuniñ.

En ur vont em gweleig, nebeut goude, dipitet un tamm, ez adwelis ti ken degemerus ar Merour hag e soñjis, ken yaouank ha m' edon neuze, em boa kalz a skiant da brenañ c'hoazh a-barzh anavezout an dud.

NOTENNOÙ :

adkeflusker : ur c'heflusker-sikour.

trepas : " cursive ".

" karrez " : sal-debriñ an ofiserien war al listri ; " carré " e galleg.

" kakatoa " : un dilerc'h eus al listri-dre-lien

Ar bagadoù morianed, a veze kemeret gant al listri-kenwerzh, war aod Afrika, evit ober al labour kargañ-diskargañ, a veze en o fenn ur rener ha daou isrener. Graet e veze " kakatoa bras " eus an hini kentañ ha " kakatoa bihan " eus an daou all.

Petra a c'hoarvezas en noz-se e Malnoe ?

Ar brezel diwezhañ a oa o ren ur pennad 'zo ha ne oa ket c'hoazh war echuiñ, lakaomp se eta keit-ha-keit etre an derou hag an dibenn.

Siwazh ne oa ket va breur Alan ha me er gêr evit ober hor mad eus an darvoud diordinal ez an da gontañ deoc'h. Va zad ha va mamm a oa o tremen an nozvezh-se eus dibenn ar sizhun e Malnoe, e-lec'h ma felle dezho adgwelout lizheroù-feurm hag ivez dastum peadra da zegas ganto da Roazhon, evit gwellaat ar geusteuenn bemdeziek hag ez ae bepred war dreutaat.

Souden, e-kreiz an noz, setu va zad dihunet trumm gant un dourni spontus. Fraoñvadur ur c'harr-nij n'eo ken, met ken tost ha ken kreñv ma soñj dezhañ emañ ul lestr o tanzen kouezhañ war an ti.

« Va Doue, emezañ d' am mamm, warnomp emañ o tont ! »

Tremen a reas koulskoude ar c'harr-nij, met kerkent goude e tarzhas un trouz ponneroc'h c'hoazh, un trouz-ifern, unan !... Peadra da lakaat un nen da vouzariñ ha da drelatiñ. Met va zad n' o doe ket amzer da jezuzal war ar pezh e oant o paouez klevout, rak trellet e voe o daoulagad gant ur pikol luc'hedenn, met unan iskis he liv, unan c'hlas, glas-gwer, a sklerijennas betek ar penn all eus ar gambr.

Pellaat a rae sardonerezh ar c'harr-nij pa dremenas unan all (pe re all) a-rez an ti, gant tizh ha kement a dodion hag an hini kentañ. Peadra da dreiñ gwad tud 'zo e dour.

Va zad ne oa ket den da chom pell da grenañ. Eñ da brederiañ ha setu menozioù o tont (un tammig re vuan marteze) war e dro. Da gentañ toud, e-pad ur pennadig da vihanañ, e soñjas dezhañ he doa an nijerez kentañ laosket ur samm kouezhet dre zegouezh war doenn an ti. Krog e oa d' ar c'houlz-se ar Saozon da bourveziñ armoù, boued hag a bep seurt, gant harz-lammerien, da baotred ar strouezh. Hervez ar menoz-se eta e oa ur " paipluad " traoù ponner war an doenn hanter-zifoeltret. Ha koulskoude e oa souezhet va zad gant ar stroñs en doa santet an ti a-bezh, evel p' en defe krenet an douar.

400

Un taol fall bennak a oa bet, sur. Tamm-ha-tamm e sellas va zad en-dro dezho er gambr sklerijennet brav gant ul loar-gann skedus, ul loar sioul o vont d' ober he zro war he fouezig-kaer, ur minc'hoarzh goapaus dezhi. Soñjit pegen sebedennet e c'hell bezañ priedoù a zo manet kousket en ur gambr eus ar c'haerañ, klet, naet, hag urzhiet rik ha strizh, hag a zihun goude m' eo bet tanfoeltret pep tra gant ur barr korc'hwezh pe ur bagad hoc'hed gouez lammet dre ar prenestroù hag aet kuit dre an nor. Ken gwazh da vihanañ e oa c'hoarvezet, ken en em c'houlenne va faour kaezh tud hag-eñ ne oant ket o huñvreal. Bez' e oa a bep seurt a-dreuz leur ar gambr : arrebeuri kouezhet war o genouioù, tammoù gwer torret ar prenestroù ha bitrakoù a bep seurt. 'Zo kaeroc'h, ar gwele a oa ivez kemend-all a stlabez warnañ.

Sevel a ra va zad hanter vadaouet, hag eñ d' en em wiskañ, pe dreuzwiskañ. Ne zeu ket a-benn da gavout an alumetez nag al lamp, unan kaer, bet bruzunet. Ret e oa da vestr Malnoe gouzout hiroc'h...

Mamm, ouzhpenn ma ne grede ket chom hec'h-unan, e oa mall warni ivez gouzout ar penaos hag ar perak. Lakaat a reas he mantell-noz en-dro dezhi ha setu hi o tiskenn ar viñs vras, krog e brec'h he gwaz.

Kompren a reot e oa peadra bezañ spontet ha nec'het p' em bo lavaret deoc'h e veze klevet, dre ar prenestroù hanter zistaget diouzh o stern, kri-forzh o tont eus ar vereuri. Eno ez a va zud war-eeun. Digor-bras eo an nor, hag ar prenestroù a zo ken difoeltret ha re ar c'hastell. Mari-Loeiza, ar venajerez, a oa o youc'hal a-bouez-penn en he gwele :

« Va listri-taol ! Torret eo din va listri ! Bruznet int tout !

- Feiz, va flac'h, marteze a-walc'h, eme va zad en e bart e-unan... Ha goude, kreñv da Vari-Loeiza : Mari-Loeiza, daoust ha bet ez oc'h gloazet ? »

Respont ebet. Derc'hel a rae... penaos e lavarin ?... da vlejal pe gentoc'h da yudal gant ur vouezh skiltrus eston :

« Finfontet o deus din va listri ! »

401

Kenkoulz e oa komz ouzh ur votez-koad ! Ur c'holl amzer e oa goulenn un dra bennak diganti, pennfollet evel ma oa ar paour-kaezh, hi atav ken dereat. Pezh a gomprenas buan va zad... Hag o welout ne oa ket fesonet fall ar vaouez ha ne oa ket e parezon ar marv gant he mouezh barrek da zihuniñ ur c'hoadad brini kludet ha bouzar lech gant ar gozhni, eñ da vont gant mamm a zalc'he kloz dezhañ, betek " Ti ar Chapalan ".

Eno e oa o chom kent, stok ouzh ar chapel, aluzener ar c'hastell. An traoñ a oa deut da vezañ kraou saout. Aze e veze kemeret ar viñs vaen evit pignal da ranndi Yann-Vari Gicquel (1). A-us e oa c'hoazh ur solier hag un tammig kloc'hdi e lec'h ne oa kloc'h ebet ken pell 'oa.

Du evel ur sac'h e oa " Ti ar Chapalan ". Ma c'halvas va zad ar mevel kozh :

« Aze emac'h, Yann ? »

Grik na fiñv ! Pa voe kustumet daoulagad va zad ouzh an deñvalijenn, e voe anat dezhañ e oa bet freuz ha reuz ivez e-barzh an tamm lojeiz-se, ne wele ket c'hoazh petra a oa c'hoarvezet just a-walc'h, met sklaer e oa n' edo ket an holl draoù 'n o flas.

Va zad da c'hervel adarre :

« Yann... Yann... Pelec'h an diaoul emac'h ? » Klevet e voe ur vouezh evel o tont diouzh pell, pe da vihanañ eus a-zindan un dra bennak :

« Amañ ez on, Aotrou.

- Ma ! me bepred ne welan ket ac'hanoc'h, na ne ran... Didiac'h, lavarit din pelec'h...

- Em gwele, Aotrou... Neuze 'ta, Aotrou, n' omp ket marv ?

- Ne soñj ket din... Setu aze siklezonoù ! »

Met ne gav ket va zad Yann gozh hag erru eo nec'het. A-benn ar fin, dre sellout pizh ha tastornat, e wel petra a zo c'hoarvezet. Ar pleñchod a oa a-us da benn Yann a oa bet cheket warnañ ur seurt priañ. Dispeget e oa ur gwiskad mat a bri ha kouezhet en e bezh o c'holeiñ al lodenn vrasañ eus gwele ar c'hoziad. Da c'hras Doue, n' en doa poan ebet hemañ, met ne gomprens ket ur siseurt er pezh a oa c'hoarvezet gantañ, met seurt ! Hanter interet e oa, e gwirionez, ha pell e oa eus bezañ en e aezamant, se 'zo sklaer.

(1) s.o. " Ar banniel ", war Al Liamm, niv. 177, pp. 264-270.

402

Ma krogas va zad prim-ha-prim en ardilh poultrennek evit dieubiñ ar paour-kaezh kozh. Ur wech tapet e vragou gant hemañ ha lakaet e votoù-koad chouket en e dreid, e oa sampar adarre hag eñ da heul e vistri. Distreiñ a reas va zud d' ar vereuri e-lec'h ma oa bepred kement a griadeg. Goude bezañ adkalonekaet ar paotr saout kavet ganto hanter wisket e-kreiz al leur, ez ejont en-dro da Vari-Loeiza. Dont a rejont a-benn d' ober dezhi serriñ he forn hag he lakaat da sevel, sедераet pep hini anezho o welout n' he doa ket evelkent kollet he skiant.

P' en doe enaouet Yann ur gleuzeur, ez eas ar vandennig d' ober tro an atant. Ne oa ket bet distrujet re-re a draoù en-dro d' an ti eñ e-unan, met muioc'h o doa bet ar c'hrevier da c'houzañv. Toennoù a vefe da zresañ ha zoken marteze da adober.

An hini en doa tapet e begement, avat, e oa ar c'hastell ! Met gant petra ? Den ne ouie c'hoazh.

Digor eo an holl brenestroù (hag un toullad brav a zo anezho !). Ar pezh a zo, siwazh, ul lodenn vras anezho o devo ezhomm eus an amunuzer. Lavaret em eus ne oa ket gwer warno ken.

Ha diabarzh an ti, va Jezuz ! Podoù kozh, un tamm brav a briz dezho, a oa bet daouhanteret, un niver souezhus a vitrakoù a bep seurt, traoù a dalvoudegezh ar peurliesañ, a c'holoe pep leurenn eus krec'h betek an traoñ. Poltredoù ar gendadoù a oa bet holl distaget ha meur a ankadr a oa bet torret pe skalfet. An Den Enorus Nataniel (1) a oa en ur stad truezus, kouezhet e oa war e benn ha chomet evel-se war an tu gin, met bepred e oa ken parfet ha difrom.

Hogen ne ouie den c'hoazh peseurt korventenn he doa c'hwezhet war Valnoe. Dont a ra da soñj d' am zad eus ar "paipluad " hag an dud d' an nec'h, 'vat ! Met, selaouit 'ta, an doenn, dre chañs, n' he deus netra. Un tamm berv a zo marteze el logod dall, met ne deus netra a nevez da welout er grignolioù.

A-benn neuze, va zad en doa prederiet ha krog e oa evelato da gompren ; war benn Yann e welas, sklaer evel en ur melezeur, e soñje eveltañ. Ur serr-lagad a reas dezhañ a dalveze kement ha :

« Klozomp war hor beg fenez. »

(1) Nataniel Appleton a oa ur pastor protestant dezhañ un dremm yen ha dic'hoarzh.

403

Hag eñ d' an holl :

« Ba ! dont a raio an deiz, tudoù. N' hoc'h eus ket sec'hed ? Me ez eo ken kras va gourlañchenn hag ur bern foenn... Azezit ha klaskit pep a werenn, emichañs n' int ket torret holl. »

Va zad o tiskenn d' ar c'hav hag o tistreiñ gant unan eus ar boutailhadoù champagn pignet gantañ araok ar brezel. Ober a reas d' e dud evañ betek an diwezhañ takenn ha pep hini a adkavas e wele sедераet.

*

Alo ! a-walc'h a gaozioù, ma lavarinn deoc'h bremañ berr-ha-berr ar pezh hoc'h eus kavet hoc'h-unan.

Ur bombezer saoz - un tamm brav a dumporell e tlee bezañ - a oa en em gavet " Messerschmitt "-ed war e lerc'h, evel ur bleiz degouezhet gant ur bagad chas. Ret dezhañ nijal izel ha skarzhañ gant ar foeltr goude bezañ en em zisamm.

Ar prof graet gantañ dimp a oa ur vombezenn un tamm pouez en he c'horf,

div donenn a-hervez. Kouezhet e oa e-barzh unan eus ar parkeier nesañ d' ar c'hastell, war-hed pevar c'hant metr bennak.

Ur c'helc'h ledan a voe kavet e-kreiz ar park hag ar c'helc'h-se a oa ur pezh pikol toull don heñvel a-walc'h ouzh toull-diskarg ur menez-tan. Adalek ma voe leun a zour, e voe gwelet kannerezed diwar-dro o tont da skaotañ o c'houez ennañ.

Evel just, ma vefe bet kouezhet ar vombezenn tostoc'h ouzh hon ti kozh, e vefe bet berraet e istor dezhañ ha krennet war un dro buhez ar re a oa ennañ.

A-benn ar fin, ne oa ket bet re ifomet hon domani, peadra hepken da reiñ labour d' an doerien ha d' an artizaned-koad. Ne gontin ket deoc'h pegeit e voe ezhomm evit adkempenn, skubañ, diboultrennañ, lakaat urzh, dastum tammoù a bep seurt, adpegañ bitrakoù. Ar gendadoù gaezh, sebedennet-mik o welout e oa bet diskennet o c'halite dezho, a chomas pell a-walc'h harpet ouzh traoñ ur speurenn hanter zifoeltret.

Ha listri ar vereuri, al listri e oa ken nec'het Mari-Loeiza ganto ? Ac'hanta, ne oa torret netra ; 'zo kaeroc'h, ne oa brechet na faoutet nag ur plad (Chezuz, va Doue, evuruzamant !) nag un asied, nag un tas, pezh a vo aes a-walc'h da grediñ, p' am bo lavaret deoc'h e klenke kloz Mari-Loeiza anezho en hec'h arc'h koad derv, he bank-tosell m' eo gwelloc'h ganeoc'h. Ha setu ma ne soñjas ken ar venajerez peseurt bec'h a oa bet war he c'halon.

404

Ne voe kaoz er vro nemet eus bomhezenn Valnoe. A bemp lev tro-war-dro e teue tiegezhioù a-bezh betek du-mañ, gant charabañioù pe war varc'h-houarn, rak ne veze ket gwelet ken nemeur a girri-dre-dan war an hentoù. Tud a veze dreist-holl d'ar sul gant ar rouez e oa an diduamantoù d' ar mare-se.

Tremen a raent dirak an toull kleuzet ken trumm er park ha pep hini da lavarout e venoz war bouez ha ment ar vombezenn diaoulek-se. Perak i'e 'ta e oa bet taolet eno ? Hag ac'han hag alesont... Me lavar deoc'h e kemere darn o amzer ! Gwir eo, gwelloc'h eo genaouata evel-se eget dispenn an nesañ. Hag evel-se a-hed meur a sizhun...

Erfin, koazhañ a reas ar weladennerien ; tapet en doa evelkent darvoud Malnoe barv gwenn : kerse war vat evidomp, dreist-holl evit ar venajerien a oa tremen skuizh o welout mac'hañ o douaroù hag ober noaz ouzh an traoù.

Met, siwazh evidomp hag evit ar re all, ne oa ket echu ar brezel.

EÑVORENNOÙ

(kendalc'h)

O vezañ ma kare ar bobl ar c'hoariva brezhonek, e kinnigis d' ar c'hure sevel ur strollad c'hoarierien da zibunañ, er Patronaj, pezhioù an aotrou de Carne. Asantiñ a reas d' am goulenn hag e lavaras e raje war-dro ar c'hoarierien c'hallek.

Er rummad paotred a zibabis e oa daou zen yaouank eus Pont-Koblant, bet o labourat e Pariz, e-lec'h m' o devoa roet skoazell da werzhañ ar gelaouenn vreizhat *War-Zao*, techet d' an tu kleiz. Unan anezho en devoa kollet e dad er brezel hag a veve e ti e vamm, chomet intañvez gant pevar bugel yaouank c'hoazh.

Ur c'hoarier all am boa, konchaouer eus e vicher, deuet da vezañ emrener da heul ar c'hentelioù en devoa bet er skolaj gant an aotrou beleg Batany a oa eno kelenner. E vreur, yaouankoc'h egetañ, a vage en e galon kalz karantez e-keñver Breizh.

Ar re all eus ar c'houch a oa micherourien, paotred a-zoare, met diseblant ouzh ar politik.

Kentañ gwech o dastumis holl a-gevret, e kemennis dezho e vije strizh an urzh ganin : an hevelep eur hor bije bepred, ken da zeraouiñ, ken da echuiñ gant ar pleustradoù deskiñ. Div wech bep sizhun e stagemp ganto, e-pad div eurvezh, adalek eizh eur diouzh an noz. Butun a zalc'hen d' ar baotred e-doug ar bleustradeg ha, pa guitaemp ar patronaj, e paeen dezho bep a vanne gwin tomm en un davarn didrouz.

E kouch ar c'hure, war a glevis, e oa laoskoc'h an urzh. Ar baotred a oa ennañ, holl a-ziwar ar maez, a yae, goude bezañ studiet o fezhioù-c'hoari gallek, d' un dvasn bennak da evañ betek un eur pe ziv diouzh ar mintin.

406

Barrek war ar c'hoari e oa deuet va zud da vezañ ha pep hini a ouie e roll ervat. Neuze eo e teuas ar c'hure da lavarout din e kave e vije bet re a vrezhoneg e-kerz an abadenn a oa da vezañ hag e venne lemel kuit darn eus ar pezh o devoa desket va c'hoarierien. Nac'h a rejomp sentiñ outañ pa 'z eo gwir e oa bet dibabet a-unvouezh, gantañ ha ganin, ar pezh en dije pep kouch da studiañ. Moarvat e soñje e raje gwelloc'h berz va fezhioù brezhonek eget e re c'hallek, un dra gasaus evit enor e c'hoarierien. Hep nec'h da hiraat an abadenn a gaven dija gwall fetis, e rankas deskiñ d' e baotred un eil komedienn droch diwar-benn buhez ur rummad soudarded en o c'hazarn.

Derc'hent an abadenn, p' en em vodas va c'houch evit ar bleustradeg diwezhañ, e weljomp daou vanniel tri liv, unan a bep tu d' al leurenn c'hoari. Raktal e savas paotred *War-Zao* o mouezh da ziskleriañ na c'hoarijont ket antronoz ma ne lamjed kuit an daou vanniel a-raok. Va fediñ a rejont, zoken, da gemenn o mennad d' ar c'hure ha da c'houlenn outañ distagañ an arouezioù. Respont a ris dezho n' eo ket din e oa da reiñ an urzh-se d' ar beleg anez dezhañ bezañ kemeret gantañ evit un dispac'her. « It warc'hoazh a-bred d' e gavout, » emezon, « ha lavarit dezhañ petra a vennit e rafe. »

Nec'het e oan o vont da gousket hag, antronoz vintin, gwashoc'h c'hoazh rak anaout a raen pegen aheurtet e oa va daou benn kalet ha pegen feuket e vije ar c'hure gallgar gant ur goulenn hag e wallskouerfe.

D' an eur divizet evit an abadenn, e oa leun tenn sal ar Patronaj ha neuze

hepken e lavaras paotred War-Zao d' ar c'hure na c'hoarijant ket e-keit ha ma chomje ar bannieloù war-wel. Drouk ruz a yeas er beleg a damallas dezho bezañ tud a zizurzh, komunourien ha Gallaoued fall. « Penaos, » emezañ da unan anezho, « e kredez te mab d' un den marv evit Bro-C'hall, dismegañsiñ da vammvro evel ma rez ? »

« Va vammvro, » a zichekas ar paotr, « a zo Breizh ha n' eo ket Bro-C'hall, ha va zad n' eo ket marv evit houmañ, met en abeg dezhi. Ma karjed bezañ e laosket er gêr, n' eo ket a-youl vat e vije aet da lakaat e vuhez en arvar ! »

« Neuze, » eme ar beleg, « pa ne fell ket deoc'h c'hoari, e vo ret din lavarout perak d' an arvestourien hag e kouezho warnoc'h ar vezh ! »

407

An dud, o kavout hir o amzer er sal, a oa ganto talabao o c'houlenn ma vije kroget gant an abadenn pe daskoret dezho gwerzh o flasoù. P' edo an trouz en e washañ, e teuis a-benn, gant poan, d' ober d' ar baotred furaat hag evit mirout e vije rebechet din taol ar bannieloù, ec'h asantjont sevel war al leurenn c'hoari. A-hend-all ne vije ket bet kavet dour a-walc'h er stêr vras d' am beuziñ hag em bije kollet un darn vras eus va ostizidi ken kredik e oa tud ar barrez d' ar c'hure en dije graet e seizh gwellañ evit teurel ar bec'h war va chouk.

N' em boa abeg ebet mui da gaout aon rak teotadoù nep piv bennak hag ez is dibreder da evezhiañ war-dro va c'houch a c'hoarias difazi hag a reas kement a berzh ma lavare an arvestourien e oa bet trec'h ar c'hoarierien vrezhonek d' ar re c'hallek.

Hogen ar c'hure, ken sorodenn hag ur wrac'h kozh, a hastas dozviñ da sekretour an ti-kêr, graet ivez ar brezel gantañ, an darvoudig a voe darbet dezhañ lakaat an abadenn-c'hoariva da vont da fall. Un digarez, d' am meno, da reiñ tro d' ar sekretour a oa kenskriver an *Dépêche* da gas d' e gelaouenn ur pennad da veuliñ brogarantez ar beleg ha fallagriezh an emrenerien. Nebeud goude ec'h embanne an *Dépêche* ur pennad flemmus ha leun a zispriz e-keñver ar re-mañ ha meulus meurbet d' ar beleg brogarour.

.

Hogen diaesterioù am boe da c'houde a-berzh ar c'hure. Evit abegoù ha n' o devoa netra da welout gant tabut ar bannieloù tri liv na gant politikerezh gall pe vreizhat, nemet gant emzalc'h ar beleg hepken, ez eas tud da ober klemm d' ar person-kanton. N' ouzon ket petra a damalled dezhañ, met grevus a-walc'h e oa ar rebech pa 'z eo gwir e voe galvet d' an eskopti. Eno e klevas e setañs ; lamet e oa diouzh e garg ha pedet d' en em zerc'hel e gourc'hemenn an aotrou 'n eskob da c'hortoz bezañ kaset da lec'h all.

Kerkent ha distroet d' ar gêr, ez eas, gant an droukrañs a oa ennañ, d' am zamall, dre ar vourc'h, da vezañ iriennet evit e gas kuit eus ar barrez, hag an holl e gredas war e gomz. Kement-se a c'hoarvezas ur sadornvezh ha n' em boe ket amzer d' e zislavarout, rak, antronoz, ez aen, gant va c'hoarierien da reiñ un abadenn c'hoariva brezhonek da Sant-Wazeg, war c'houlenn an aotrou Saout, ar beleg santel a oa eno. Un devezh diverrus-kenañ a dremenjomp er barrez-se hag hon abadenn c'hoariva a blijas kalz d' ar barrezianiz. Laouen e oamp o tistreiñ ac'hano ha goude bezañ laosket va faotred e Pont-Koblant, ec'h en em gavis vanan er vourc'h.

408

P' am boe lakaet va c'harr-tan em c'harrdi, e klevis ur vouldinell o tont eus un toullad mat a wazed en em vodet war an hent bras, pelloc'h eget an iliz. War a seblantas din e kleven ganto va anv hag ar gerioù, « Breiz Atao ! mat da lao ! ». A-barzh en em gavout er gêr, e tleen tremen e-biou dezho ha, dispont, e kerzhis raktal war o zu. Doare o devoa da vezañ evet hag an hini a oa en o fenn, mezv dall, a youc'he traoù hep penn na lost, e-ser hejañ ur mell banniel tri liv. P' en em gavis en o c'hreiz, e tavjont da gomz, nemet an douger banniel a

c'harme e ziotachou en ur brizh galleg bennak. Meneg a oa gantañ eus ar c'hure, met ne gomprenen ket ar pezh a felle dezhañ breugeudiñ. Daoust d' ar selloù kintus a welen o parañ warnon, e ris un harp dirak paotr e vanniel ha, kroaziet va divrec'h ganin, e c'houlennis outañ : « Hag a nevez, va den ? ».

E skodeget ha divarc'het em boa, rak ne gavas netra da respont nemet ur c'hrougnadenn bennak hag, o treiñ e seulioù e sammas e vanniel da vont d' ar penn all d' ar vourc'h gant ar re a oa en-dro dezhañ.

Er gêr e klevis gant va gwreg e oa savet un doare reveulzi er barrez an deiz-se, goude m' en devoa lakaet ar c'hure kemenn, e pep korn anezhi, e oa dizornet hag en devoa urzh d' he c'huitaat. Kerkent e oa diredet ur bern gwazed d' ar vourc'h da reiñ testeni d' ar beleg eus o mignoniezh en e geñver hag eus ar c'heuz o devoa d' e goll. Degemeret e voent gantañ e ti ar c'hloc'her kozh e-lec'h ma talc'has kuzul gant un nebeut anezho, ar re ar muiañ kerseet gant e zroukverzh. E-kerz ar c'huzul e voe divizet ez aje un toullad dileuridi da ambroug ar beleg betek an eskopti da c'houlenn ma vije laosket ganto da gure, pa ne oa den all ebet par dezhañ da blijout d' ar barrezianiz.

E-pad an amzer-se, en em zastumet en ur vandennad, e kerzhe ar wazed all a-dreuz ar vourc'h da ziskouez o drougiezh ouzh ar mestaol a oa bet roet d' o mignon. Dirak va zi e oant bet tremenet meur a wech en ur hopal " Breiz Atao ! ", met hep krediñ ober an hu d' am zamall, daoust ha ma soñjent e oan kablus, hervez mouskomzoù damguzh an hini a heskined e gaou, war a lavarent.

« Gant asant an aotrouig-se, eta, » a lavaris d' am gwreg, « eo e teuer d' am dismegañsiñ evel-se. Mantrus eo, evelato, ar gwall-skouer a ro. Ha ma 'z afen da c'houlenn outañ prouiñ din hag-eñ ez eus un dra bennak en e deotadoù ? »

409

« Nann, » emezi. « Furoc'h e vo dit chom en ti rak gouest e vefe e vezvierien d' az kannañ. Setu m'o c'hlevan o tont war o c'hiz ha dinec'hoc'h e vin p' am bo alc'houezet an nor. »

Ober a reas evel ma lavare hag ez eas ar bagad e-biou, bepred o harzhal war " Vreiz Atao ", met hep kunujennañ nep den.

Antronoz vintin ez ae ur c'harrad dileuridi d' an eskopti da c'houlenn ma vije laosket ganto o c'hure, met, pa voe gouezet perak e teuent, ne voent ket degemeret hag e rankjont distreiñ d' ar gêr, ken mezhek ha ma oant tagnous hag otus an derc'hent. Kouezhet e oa o meud en o dorn ha, dizale, ec'h ankouajont buan an hini a oa kiriek d' ar reuz divalav-se.

.....

Kerkent ha ma laoske va micher ganin ur mareadig amzer vak, e pleustren da lenn brezhoneg ha da studiañ hor yezh. E deraou ar bloaz 1932, war ali an aotrou More, medisin e Brieg, ez is da Roazhon da dremen arnodenn an testeni war ar studioù keltiek am boa c'hoant da c'hounit. War-dro miz Mezheven e oa ha laouen bras e voen oc'h e en em gavout, er Skol-Veur, gant va c'heneil Remont Delaporte deuet ivez evit an hevelep abeg.

Ne oamp nemet hon daou dirak an aotrou kelenner Per ar Rouz a roas deomp, da gentañ, ur pennadig tennet eus " Mojenn ar marv " Anatol ar Bras da dreiñ e brezhoneg ha, da c'houde, darn eus ur skrid gwenedek da lakaat e yezh KLT.

E-ser reiñ deomp ar poelladennoù e komze ar c'helenner galleg ouzhomp, padal p' hor beze un dra bennak da lavarout kenetrezomp a raemp, evel boaz, gant ar brezhoneg. Un dra fentus, neketa, da skolidi o klask gouiziegezh war ur yezh a dlee ar c'helenner gouzout gwelloc'h egeto. Hogen mat e tremenas an abadenn hag e voemp diskleriet barrek da gaout an testeni.

O tistreiñ ac'hano ha p' edomp o vont e-biou da skeudenn Unvaniezh Breizh gant Bro-C'hall, e kavjomp un toullad studierien hag a anaveze va c'havandad.

Chom a rejomp ganto da doullañ kaoz hag e lavarjont deomp n' he devoa ken ar skeudenn pell amzer da chom en he sav pa dlee bezañ diskaret gant ar vroadelourien da geñver pevare kantved deiz-ha-bloaz stagidigezh Breizh ouzh ar vro estren.

412

« Oc'h ober fent ganin emac'h, » emezon dezho diskredik. « D' am meno ne vo ket aes pilañ ar mell tolzennad vein-se ha, ma klev ar polis anv ez eo mennet Breizhiz 'zo da ober an taol, e vo diwallet an delwenn. »

« Kement-se a c'hoarvezo koulskoude, » a ziouganas ar studierien. « An holl a oar eo re sot ar polis evit bezañ war evezh da geñver pevare kantved deiz-ha-bloaz hor sujedigezh. »

« Ma ! chañs vat neuze d' ar baotred a dle kas an taol da benn ! » emezon en ur gimidiñ diouto.

Bep vloaz e kasen va wreg ha va bugale da dremen ur mizvezh d' an aod, e-kerz an hañv. E miz Eost, ar bloaz-se, edon e Lestreved, e parrez Ploudiern, war ribl mor Douarnenez. Bep sul ez aen d' o gwelout hag e kemeren didu, o c'hoari war an traezh gant ar vugale. Hogen, da zeiz ar pevare kantved deiz-ha-bloaz, e oa prederiet va spered gant ar pezh a lavaras din studierien Roazhon. Met, allas ! da sul ne gaved e Lestreved nep kelaouenn da brenañ, ha ne oan ket evit gouzout hag-eñ edo atav an delwenn en he sav.

E-ser troidellat war an aod, ec'h en em gavis gant va c'heneil Yann an Doare, noter e Ploudiern. A-greiz rannañ kaoz, e c'houlennis outañ hag-eñ en devoa ur gelaouenn da brestañ din, pa ne gaved nep hini, da sul, er stal ispisiri. Ne oa gantañ nep kazetenn. « Met, » emezañ, « lennet em eus, ar mintin-mañ, ur c'heloù hag a ray plijadur dit kement ha ma ra din ma-unan. Selaou ! paotred Breiz Atao, da vignoned o deus lakaet da darzhañ skeudenn vezhus Breizh ouzh Bro-C'hall. Set' aze un dra hag a zelleze bezañ graet pell 'zo. »

Evel-se e oa deuet an taol da vat ha ne baden ket gant al levenez. Va gwreg ivez a voe ken laouen ha me hag e lavaremp an eil d' egile : gant ma ne vo ket diskoachet ha tapet an darzherien gant ar polis ! Da heul an darvoud, e tirollas euzhus an Ouest-Eclair var an dorfetourien o devoa kredet ober ur seurt viloni d'ur vro a oa en em roet a-youl vat d' ar gaerañ ha brokusañ rouantelezh eus ar C'hornog. An toullad broadelourien yaouank a voe harzet ha toullbac'het ne oant ket mat da deurel d' ar chas, war a lavare, ha darn anezho, evel Jeusset na gavjod netra da damall dezho, a voe dalc'het ha hirvoudiñ er prizon e-pad mizioù hir. Boud e oa bet ar polis da lakaat an dorn war ar re gablus hag, hiriv an deiz, n' eus mui nep meneg da adsevel ar skeudenn evel ma oa neuze.

(da vezañ kendalc'het)

Teir barvenn-aour an Diaoul

Hemañ a oa jardiner ur roue. Met 'vel ma oa deut da vezañ kozh, ne laboure ken nemeur, na rae nemet eveshaat ar jardinerien all. Ar roue kozh a zeue alies da gaozeal gantañ. Ma laras dezhañ un de :

« Da wreg a zo dougerez arre.

- Ya sur, sir, ha pemp bugel all am eus c'hoazh. Met ar pezh ma laka ar muiañ nec'het eo dre ma ne ouzon pelec'h mont da glask ur c'homper.

- Na gemer ken a nec'hamant gant kement-se ; pa vo ganet ar bugel, deus d' am c'haout, ha me a gavo dit ur paeron. »

Eizh de goude, ec'h a ar jardiner betek ar roue hag e lar dezhañ :

« Setu ganet din ur mab, sir !

- Ma ! me a vo paeron dezhañ. »

Notenn. - A-benn mirout he saour gant ar gontadenn ez eo bet kavet gwelloc'h lezel ar stummoù rannyezhel (hag isrannyezhel) a zo enni. Da skouer : a refomp = a raïmp ; arre = adarre ; arru = erru ; bannec'h = banne ; de = deiz ; dec'h = deoc'h ; dimiñ = dimeziñ ; ec'h et = ez it ; en = e ; en-bev = ez-vev ; geno = genou ; gret = grit ; gwelet = gwelout ; laret = lavarout ; pinvik = pinvidik ; sùn = sizhun.

414

Setu graet ar vadeziant, ha goude e voe ur pred kaer en palez ar roue. En difin ar pred, ar jardiner kozh, en doa evet kaer, dre ma kave mat, a savas, e werenn gantañ en e zorn, hag a laras :

« D' ho yec'hed, sir ! ha Doue da reiñ ar c'hras d' ho merc'h ha d' am mab da 'n em gavout un de !

Ar roue a oa a-nevez-c'hanet dezhañ ivez ur verc'h, hag a oa bet badezet an deioù-se. Ne voe ket kontant eus a gomzoù ar jardiner, hag hen kasas kuit. Kemeret e voe da jardiner en un ti pinvik en kêr.

Ar roue a zeuas keuz prestik goude, hag a c'houlennas arre e jardiner kozh. Mont a ra arre d' ar palez. Goulenn a ra c'hoazh digantañ e vab, evit hen sevel hag hen deskiñ. Degaset eo ivez ar bugel d' ar palez. Met ne oa ket 'vit e vad en devoa goulennet ar roue ; n' en devoa ket ankouaet komzoù ar jardiner kozh en pred ar vadeziant, hag e klaske an tu da 'n em zizober eus e vab. Ne oa ket bet ur bloaz er palez, ma voe laketa en ur c'havell gwer war ar mor, ha lezet en gras Doue.

Ar roue a oa ur pennad a oa en gortoz a ur vatimantad-win eus a Vourdel, hag e varc'hadour-gwin a zlee dont e-unan gant ar gwin. Pa oa ar marc'hadour-gwin o tont war e lestr, e welas ar c'havell gwer a oa ar bugel ennañ. An heol a bare warnañ, hag e lugerne evel an heol. Ober a ra lakaat ur vag war ar mor, da vont da welet petra a oa. Degaset eo dezhañ ar c'havell, hag ar bugel ennañ.

« Mat ! emezañ pa welas ar bugel, me n' am eus bugel ebet, hag e fell din magañ ha deskiñ hemañ, evel pa vije din. Mil joa he devo ma gwreg outañ. »

Hag ec'h ankouaas ar roue a oa o c'hortoz e win, hag e tistroas raktal da Vourdel. Maget e voe ar bugel, evel pa vije mab an ti, gant ar marc'hadour hag e wreg. Badezet e voe, kaset d' ar skol, pa voe deut en oad da vont, hag o galve e dad hag e vamm, rak ne ouie netra.

Ar roue a zeuas ivez un dro bennak da Vourdel, hag ec'h eas da welet e varc'hadour-gwin. Pa welas ar bugel, hag en devoa feson-vat kaer, e c'houlennas digant ar marc'hadour ha dezhañ e oa. Hemañ a laras dezhañ penaos en devoa kavet anezhañ en ur c'havell gwer, war ar mor, hag en devoa maget ha desket anezhañ evel e vugel e-unan, pa n' en devoa roet Doue hini ebet dezhañ. Ar roue a anavezias neuze ar bugel, hag hen goulennas digant ar marc'hadour evit ober anezhañ e sekretour. Degouezhet e oa neuze gant e seitek pe driwec'h vloaz. Ar marc'hadour n' en devoa ket a c'hoant da reiñ ar paotr, met ne gredas ket koulskoude hen refuz d' e roue.

415

Ar roue ne felle ket dezhañ distreiñ raktal d' ar gêr, hag e kasas ar paotr a-raok, hag e roas dezhañ ul lizher 'vit reiñ d'ar rouanez, hag en doa merket warnañ ober lakat d' ar marv, kerkent ha ma tegouezhje, an hini a roje dezhi al lizher-se. « Me a arruo ivez diwezhatoc'h, a lare c'hoazh, hag a-barzh neuze e vo ret d' an dro bezañ graet. »

Mont a ra ar paotr a-raok, hag e c'houlenn lojañ en ur gêrig vihan war an hent.

« Ya sur, a laras an ostizez, met e vo ret dec'h koaniañ gant tri maltouter a zo amañ.

- N' eus ket a forzh ; en em ober a-walc'h a rafomp. »

Koaniañ a reont o-fevar asambles, ha goude koan en em lakaont da c'hoari c'hartoù. Koll a ra e holl arc'hant, hag ouzhpenn e vontr. Hag e oa gwall drist, rak penaos ober bremañ. Mont a reont da gousket. Ar valtouterien a oa o-zri er memes kambr, ha filhor ar roue a oa e-unan en ur gambr all e-kichen. Ne oa nemet ur speurenn etreze, hag e klevae anezhe gant o c'haoz.

« Ar paotr kaezh ! a lare unan, kollet en deus e holl arc'hant ; penaos e raio bremañ evit paeañ e ostiz, ha mont en e hent ? Truez am eus outañ. Ma rofemp e arc'hant dezhañ, paotred ?

- Ya, a laras an daou all, roomp dezhañ e arc'hant. »

Hag ec'h eas unan anezhe, goustadik, da gas e arc'hant dezhañ en e gambr. Kousket e oa, ha war un daol en e gichen e oa ul lizher - al lizher a oa bet roet dezhañ ar roue da gas d' ar rouanez. Ar maltouter hen digoras hag hen lennas, hag e voe souezhet-bras o welet ar pezh a oa merket ennañ :

« Ar paour kaezh ! emañ o tougen e varv, ha ne oar ket ! »

Degas a ra al lizher d' e zaou gamrad, hag e skrivont ul lizher all da lakat en e lec'h hag e lakont warnezhañ degemer mat an hini a zouge al lizher-se, hag ober stad anezhañ. Neuze e voe sinet evel sin ar roue, ha kaset al lizher-mañ lec'h ma oa egile.

An tri maltouter ac'h a kuit beure mat, an de war-lerc'h, a-raok ma oa savet filhor ar roue. Hemañ a savas ivez, war-dro eizh eur, hag e voe souezhet o kavout e arc'hant hag e vontr en e c'hodelloù. Paeañ a ra e ostiz, hag ec'h a arre en hent. Bale a ra, bale a ra, hag e tegouezh ivez en palez ar roue. Reiñ a ra e lizher d' ar rouanez, hag e tegemer anezhañ eus he gwellañ. Bemdez e vije o vale ganti ha gant ar briñsez, hag e tebre ouzh ar memes taol evelte.

416

Degouezhet a ra ivez ar roue er gêr, ur pennad goude, hag ec'h eo souezhet-bras o welet e filhor gant e wreg hag e verc'h, ha droug ennañ.

« Petra, a laras d' ar rouanez, n' hoc'h eus ket graet ar pezh a laren dec'h da ober war ma lizher ! Eo sur, setu aze ho lizher ; n' eo ket hennezh ? »

Ar roue a welas neuze e oa bet bourdet ; met ne ouie ket gant piv.

Laket eo ar paotr da soudard en arme, hag e ra ur soudard ar gwellañ. Ne oa hini ebet en arme da dalvoud anezhañ. Dre holl e trec'he war e enebourien ; ha setu na oa kaoz nemet anezhañ en arme hag en kêr. Ma teu ar briñsez yaouank da garout anezhañ hag hen goulenn da bried digant he zad.

« Biken ! » a laras ar roue.

Setu ma tegouezh ur brezel bras, hag e oa ar roue Frañs o vont da goll, pa arruas e filhor gant e soudarded. Kerkent e traos ar chañs, hag e chomas gantañ an trec'h.

Ma c'houlennas arre ar briñsez digant he zad lezel anezhi da zimiñ d' ar brezelier yaouank en devoa laket anezhañ da c'honit.

« Ya, a laras neuze, met a-raok e vo ret dezhañ, pa eo ur paotr ken terrupl, degas din teir barvenn-aour diwar genou an Diaoul. »

Laret eo dezhañ petra a c'houlenn ar roue a-raok reiñ dezhañ e verc'h.

« Ha pelec'h ar foeltr, emezañ, mont da glaskan Diaoul-se ?

- D' an Ifern sur ! pelec'h eta ?

- Met dre belec'h mont d' an Ifern, piv a laro din ? »

En em lakaat a ra bepred en hent, en gras Doue. Bale a ra, bale a ra, ne oar en pe tu mont. Degouezhout a ra e-kichen ur menez uhel, hag e wel ur wrac'h kozh bet o kerc'hat dour er feunteun, gant un hanter varrikenn war he fenn.

« Pelec'h ec'h et-c'hwi evel-se ma den mat ? a lar dezhañ. Amañ ne zeu ket a dud vev : ma mab eo an Diaoul.

- Hennezh end-eeun a glaskan ; lakit ac'hanon da gomz gant ho mab, mamm gozh.

- Met ma faotrig kaezh, hennezh da lazho pe da lonko en-bev pa welo ac'hanout.

417

- N' am lonko ket ken aes-se : gret din gwelet anezhañ, pa laran dec'h.

- Ma ! n' out ket ur paotr aonik, war a welan : met petra a 't eus-te da ober gant ma mab ?

- Ar roue Frañs en deus laret reiñ din e verc'h da bried, mar deuan a-benn da zegas dezhañ teir barvenn-aour diwar genou an Diaoul : ha me oar vat, mammig kozh, ne youlfet ket ober din mankout un dimiñ ker kaer evit teir barvenn.

- Ma ! deus ganin bepred : plijout a rez din, ha neuze e vo gwelet. »

Mont a ra gant ar wrac'h kozh d' ar c'hastell. Homañ en em laka da ober krampouezh d' he mab war ur gleurc'h brasoc'h evit ur maen-milin. En-berr e klevjont un drouz ar foeltr.

« Ma mab ! a laras an hini gozh : deus amañ m' az kuzhin dindan ma gwele. »

Laket eo dindan ar gwele, ha kerkent mab an hini gozh a zeu en ti, o laret

:

« Naon am eus, mamm ! naon bras am eus !

- Ma ! ma mab, debr eta ; sell aze krampouezh mat. »

En em lakaat a ra da zebriñ krampouezh, hag hini hag hini e lonke anezhe. Met en-berr e laras :

« C'hwez ar c'hristen a santan. Hag hen debriñ a rankan !

- Ez out arre o sodiñ, ma mab kaezh ! Debr krampouezh, ha ro peoc'h, amañ n' eus ket a gristenien. »

Ha setu-eñ da lonkañ krampouezh arre. Met ur pennadig goude e lar arre :

« C'hwez ar c'hristen a santan. Hag hen debriñ a rankan !

- Ro peoc'h din gant da gristenien ! Debr krampouezh, pe kae da gousket, mar eo leun da gof.

- Ya, mammig kaezh, gwall skuizh on hag ec'h an d' am gwele. »

Mont a ra en e wele, ha kerkent en em laka da ziroc'hal. An hini gozh a dosta outañ neuze, hag a denn dezhañ ur varvenn. En em grafignat a ra, met ne zihun ket. Tennañ a ra un' all, ur pennadig goude, en em grafignat a ra startoc'h, treiñ en e wele, hag e lar :

« Amañ avat a zo c'hwen ! N' hallin ket kousket gante. »

Ur pennadig goude e oa arre o tiroc'hal, hag an hini gozh a denn dezhañ an deirvet barvenn. Dilammat a ra e-maez e wele, ha droug ennañ, hag e lar :

418

« N' hallin biken kousket amañ, ma mamm, me ac'h a d' ar marchosi.

- Ma ! kerzh eta, ma faotrig, warc'hoazh e vo kannet liñselioù da wele. »

« Deus amañ bremañ buan, a laras an hini gozh ; sell aze an teir barvenn-aour, ha kerzh buan gante d' ar gêr !

- Trugarez, mammig kozh ! »

Ha kuit kerkent. Pa zegouezhas er gêr, e oa ar rouanez hag he merc'h o vale 'barzh ar jardin, ha p' hen gweljont, o devoe ur joa vras, dreist-holl ar briñsez :

« Hag an teir barvenn-aour ? a laras kerkent.

- Emaint ganen ; setu-int amañ ! »

Hag ar briñsez da c'hervel he zad :

« Ma zad ! ma zad ! hastit dont ; setu deut gantañ teir barvenn-aour an Diaoul ! »

Pa arruas ar roue kozh ha pa welas an teir barvenn-aour, ec'h eas kement a zroug ennañ, ma plantas e gontell-lazh en e galon, hag e varvas war al lec'h.

« Kerzh gant an Diaoul ! »

Neuze ne oa netra o terc'hel oute a zimiñ. Skrivet e voe da varc'hadour-gwin Bourdel da zont buan. Hemañ a zisklerias holl an traoù 'vel ma oant c'hoarvezet, hag e voe gwelet neuze penaos e oa mab ar jardiner ha filhor ar

roue, hag e oa degouezhet ar pezh a vennas ar jardiner kozh en fest ar vadeziant, pa laras : « D' ho yec'hed, sir ; ha Doue da reiñ ar c'hras d' am mab ha d' ho merc'h da 'n em gavout un de!»

Neuze e voe graet an eured, hag e voe festoù, c'hoarioù ha dañsoù bemdez, e-pad pemzek de.

Me ' oa eno keginerez,
Am boe un tamm hag ur bannec'h,
Un taol kloge war ma geno,
Hag abaoe n' on ket bet eno.

Met gant pemp skoed hag ur marc'h glas,
'Vijen aet da welet warc'hoazh,
Pe gant pemp skoed hag ur marc'h brun,
'Vijen aet warc'hoazh ar penn-sûn.

Eil skrid gant Y. E. ABALAN.

ISTOR BREIZH LA BORDERIE

troet gant ROPARZ HEMON

Brezel Bleaz ha Monforzh

EIL MAREAD

TONKADUR JANED VONFORZH

Diwar studi un nebeut dielloù embannet en 18-vet kantved e dastumad saoz bras Rymer, e oan deuet da grediñ, pell 'zo, ne oa biskoazh dugez Vreizh, kontez Vonforzh, deuet en-dro eus he beaj da Vro-Saoz, graet e miz Meurzh 1343, hag e oa bet taget, etre 1344 ha 1370 da vihanañ, gant ur c'hleñved diremed na c'halle bezañ nemet ar follentez. Dre se ne oa ket bet, goude darvoudoù 1341 ha 1342, evit kemer perzh er brezel renet dindan he anv hag anv he mab.

Kadarnaet-krenn eo bet ar gredenn-se gant imbourc'hioù unan eus va c'henistorourien yaouank eus Skol an Teulioù, ur c'henvroad ivez, Yann Lemoine. Kroget en deus ganto, un nebeut bloazioù 'zo, e Dielloù Bro-Saoz, hag ar vadelezh en deus bet da reiñ din an titouroù en deus kavet, gant an notre d' o embann amañ berr-ha-berr. An dielloù ma 'z int tennet diouto a zo kontoù ren Edouarzh III, anavezet dindan an anv a "Issue Rolls". Janed Flandrez a vez graet anezhi enno atav " Dugez Vreizh ".

E 1343, edo o chom e Londrez. He zeñzor e Breizh a oa diwallet-mat e kastell Brest, ha prestet e veze dezhi gant roue Bro-Saoz kement a oa ret evit bevañ ha paeañ dispignoù he c'hoskoriad.

Setu amañ da gentañ ar yalc'hadoù arc'hant lakaet ez reizh etre daouarn ar briñsez :

(8 Eost 1343). « Da zugez Vreizh, o chom e Bro-Saoz dindan warez ar roue, e dinered prestet dezhi evit he dispign, dre lizher dindan ar siell roueel prevez, 80 lur. »

420

(18 Du). « Da zugez Vreizh, evit paeañ keodediz eus Londrez, he doa prenet diganto traezoù evit he ostel, 95 lur ha 2 ziner. »

Amañ, an dugez an hini eo a vez roet arc'hant dezhi, a ra dispignoù he-unan hag en he anv, a c'haller krediñ.

D' ar c'hentañ a viz Kerzu avat e kaver ur meneg disheñvel : « Da Wilherm Frank, marc'heg, konestabl (da lavarout eo, kabiten ha merour) kastell Tykhull, evit dispignoù prevez dugez Vreizh, a chom er c'hastell-se dre urzh ar roue, 40 lur. Dezhañ ivez, evit charre irc'hier ha traoù all piaouet gant al lavaret dugez eus Londrez da gastell Tykhull. »

Tykhull, pe Tykhill, a oa gwall bell diouzh Londrez, en hanternoz Bro-Saoz, e kontelezh York, er c'horn pellañ er gevred d' ar ranngontelezh anvet West Riding, tost da gontelezh Nottingham, war-hed 8 km er c'hreisteiz da gêr Doncaster.

« Tykhill, » a skriv Camden, « a oa ur gêr gozh, war he zro ur foz ledan, murioù, hag enni ur c'hastell kelc'hiek war un uhelenn. »

Di e voe kaset, d' ar c'hentañ a viz Kerzu 1343, dugez Vreizh, n' eo ket dre he youl he-unan, hogen dre c'hourc'hemenn roue Bro-Saoz, gant he holl

arrebeuri, hag eno e tlee bevañ dindan warez konestabl pe gastellad al lec'h-se, Gwilherm Frank. Da hemañ, ha n' eo ket dezhi, e veze roet an arc'hant rekis evit he bividigezh. Merket eo spis en ur c'hemennadur digant ar roue Edouarzh III, savet d' an 10 a viz Gouere 1344, hag a ziskler kefridi ar c'honestabl :

« Gouezit hon eus gourc'hemennet ergentaou, hervez ali hor C'huzul, e chomje hor c'heniterv ker dugez Vreizh e kastell Tykhill, hag e vije roet gant an den karet ha feal Gwilherm Tykhill, konestabl ar c'hastell-se, an urzhioù ret evit mizoù al lavaret dugez hag he c'hoskoriad. » Dre se « e vennomp ma vezo roet d' al lavaret Gwilherm bep sizhun pemp mark arc'hant evit mizoù an dugez hag he c'hoskoriad, keit ha ma chomo er c'hastell. »

N'eo ket d' an dugez eta na d' un ofiser bennak dilennet ganti ma fizier an arc'hant rekis evit he bividigezh. D' ar c'honestabl eo, da lavarout eo an den karget gant ar roue da ren ar c'hreñvlec'h. Eñ hepken en deus ar gwir da zivizout penaos implijout an arc'hant-se. Evel ur c'hrouadur, evel un den re wan e skiant evit bleniañ e youl, lakaet e gwardoniezh ur c'hulator, Janed Flandrez a zo fiziet etre daouarn konestabl Tykhill, ur marc'heg kalonek hep mar hogen un den a eil renk koulskoude.

421

Hag he daou vugel, Yann ha Janed, a oa falvezet dezhi kas ganti da Vro-Saoz evit beilhañ warno, tener ha karantezus, pelec'h edont ? Petra oa bet graet ganto ? Digant ar vamm dispar, ar vamm nerzhek, " kalon leon ", a oa en em ouestlet dezho, eo bet lamet ar gwir da ren anezho, zoken ar gwir d' o c'haout en he c'hichen. Ar vamm a oa e Tykhill, ar vugale e kastell an Tour, e Londrez, dindan evezh ur c'homis, karget ivez da aozañ o dispignoù.

Hag ar briñsez-se, a lamer diganti he bugale hag a lakaer e gwardoniezh gant un ofiser izel, an hini eo a veze anvet ez doujus gant roue Bro-Saoz er bloaz diagent (1342) « an itron hollvrudet, an dugez hollvrudet ». Bremañ n' eo mui nemet ur vaouez kaezh, na c'hell ober mann, na c'hell ket mont hervez he youl, divarrek zoken da reizhañ dispignoù he zi. Ret eo, evit he mad, lakaat he c'horf dindan warez ur c'hargad a eil renk.

N' eus nemet un abeg d' ar c'hemm, d' an diskar-se, un abeg hewel avat : ar follentez.

Hag e gwirionez, goude bezañ douget bec'h stourm 1342, sammus evit he c'horf hag he ene, e-pad c'hwec'h miz, he-unan-penn, goude skuizhderioù spontus, fromadennoù brevus, enkrezioù grevus seziz Henbont ; goude saouzan ha gloazioù ar gorventenn euzhik, hejet-dihejet etre ar vuhez hag ar marv, e-pad eizh deiz, hag hi o treizhañ ar mor da vont da Vro-Saoz, - ne c'haller ket kavout souezhus e vije bet roget, dispennet gant kement a reuzioù ar framm nervernek ha bresk, hini ur vaouez, a c'holoe an ene meur-se, ar galon start ha taer-se, hag e vije bet strafuilhet ar spered en doa ranket gouzañv kement, taolet en islonk ar follentez.

Janed Flandrez eta he doa kollet he skiant-vat. Dizale e welimp heuliadoù an drougeur-se war blanedenn tuad Monforzh. Lavaromp da gentañ berr-ha-berr ar pezh a ouzer a-zivout planedenn an harozez-se. Ar reuz a echuas he huhez ne ra nemet reiñ ur sked marzhusoc'h ha fromusoc'h d' ar briñsez-se, a zo leun ar pevarzekvet kantved gant he brud, a splann c'hoazh he anv en istor. Hag ar brud-se he deus gounezet e nebeutoc'h eget daou vloaz !

An testennoù dastumet gant Yann Lemoine e dielloù Bro-Saoz a ziskouez e chomas an dugez e Tykhill betek miz Meurzh 1346, evel merket uheloc'h, dindan wardoniezh Gwilherm Frank.

422

E 1346, Frank a yeas da Frañs da heul ar roue Edouarzh III d' ober ergerzhadeg-vrezel Crécy. En e lec'h evel rener kastell Tykhill ha diwaller an dugez e voe lakaet ur marc'heg saoz all, Tomaz Haukeston, a chomas eno e-pad dek vloaz, betek 1356 pe 1357, oc'h ober e garg evel e ziaaraoger.

War e lerc'h evel diwaller an dugez, hep bezañ marteze rener Tykhill, e teu ur marc'heg saoz all c'hoazh, anvet Yann Delues pe Delves, meneget evit ar wech kentañ d' ar 4 a viz Kerzu 1357 evel-hen :

« Da Yann Delves, evit dispignoù dugez Vreizh, a chom en e goskoriad, dre lizher dindan ar siell brevez, 55 lur. »

Lakait evezh ouzh an dro-lavar-se « en e goskoriad », a gaver er c'hontoù diwar neuze. Gwall zismegañsus eo e-keñver an dugez. Keit ha ma voe dindan warez Delves, ne voe mui anv eus Tykhill nag eus ur chomlec'h stabil. Ha gward he c'hase gantañ d' e heul da gement lec'h ma 'z ae. E 1360, edo e kontelezh Chester. Eno eo ez eas he mab Yann Monforzh, a oa c'hoazh dindan wardoniezh Edouarzh III, hogen hogos deuet d' e oad, d' he gwelout er bloaz-se end-eeun, e miz Gouere.

Dek vloaz goude, Delves a varvas. D' an ampoent e oa maner roueel Walton, war ar stêr d-Trent, en e gerz, e kornig pellañ kontelezh Derby, er c'hreisteiz e-tal harzoù kontelezh Stafford. Hep mar edo an dugez gantañ.

War-lerc'h marv Delves, e voe diwallet ar briñsez gant Jafrez Foljambe, marc'heg evel an tri diwallour kentañ. Izabel, intañvez Delves, he doa kendalc'het da ziwall an dugez ur pennad-amzer goude marv he fried. Lizher a voe kaset dezhi gant ar roue, o lakaat maner Walton e kerz Foljambe diwar ar 25 a viz Du 1370, hag o verkañ penaos tlee kemer ar garg eus Janed Flandrez.

« Gourc'hemennet eo da Izabel, » eme ar roue, « fiziout e Jafrez Foljambe al lavaret dugez, he servijerien, he dilhad, he bravigoù, he harnezioù, he madoù-annez hervez ar renabloù a vo graet. Hag ar roue a venn ma vezo diskarget Izabel diouzh gwardoniezh an dugez. »

Paour kaezh Janed, kaset a zorn da zorn, hogozik evel ur pakad !

Ne vevas ket pell goude « kasadur » 1370. Ar meneg diwezhañ a gaver anezhi hag eus he diwaller Foljambe a zo eus ar 14 a viz C'hwevrer 1374. Ha neuze, mann e neblec'h ! Er bloaz-se eo hep mar e varvas.

Touellerezh dañjerus !

Savet oa bet ar pennad " Utopia " evit Al Liamm (1) gant Eflamm Gervilio ur bloavezh hanter 'zo bennak, ha kavet em boa anezhañ mat-tre. Ne roe ket un diakoulm evit kement kudenn o trubullhañ hiziv ar bed, anat eo, met unan eus ar c'hudennoù brasañ a vremañ, hini dazont ar bed en e bezh, oa sklerijennet mat a-walc'h. Menozioù a veze kavet er pennad-se, menozioù da brederiañ warno, danvez da vont war-raok. Setu perak em boa lakaet ur berr-skrid anezhañ war *L'Avenir de la Bretagne*, hep burutellerezh ebet, rak d' am soñj e oa mat ar menozioù, dre vras.

Pegen souezhet on bet neuze o lenn war Al Liamm diwezhañ pennad E. Gervilio diwar-benn levr Leopold Kohr, " Une Bretagne libre est-elle viable ? "

Feiz, n' em eus ket bet ezhomm da vont gwall bell gant ar pennad evit kompren da belec'h en doa c'hoant E. Gervilio da gas al lenner : « Karl Marks emezañ, e vez kavet gwrizienn an droug. Ma ! Ne chom neuze da L. Kohr, P. Bourdelles, Y. Fouere ha milionoù a " douellerien " all, evel doc'h marteze, evel don a dra sur, da chom peoc'h, peogwir pep tra zo bet dielfennet gant Karl Marks, ha hep fazi ebet, evel ma oar pep hini. Aze emañ ar gudenn en e bezh, a seblant din. Rak an hini en devez kavet ur wirionez bennak a zeu a-wechoù da grediñ ne dalv ket ar boan dezhañ klask pelloc'h ken. Dont a ra neuze tamm-ha-tamm da sellout ouzh ar wirionez-se evel AR wirionez, hep kompren ez eo e wirionez-eñ en deus savet evit gwir. Gwelet e vez neuze un doare bodad o sevel tamm-ha-tamm etre ar re a zo bet kavet ganto ar memes gwirionez, dre zegouezh ar vuhez an aliesañ, bodad hag a vez graet dioutañ e galleg « groupe d'appartenance », gant an dud desket, sañset, war an danvez-se. Adalek neuze e vez bras an dañjer ha gouezhañ en un dogmaterezh bennak, da gentañ, ha prestik goude e weler ar « manikeism » o tiskouez e fri.

War un poent eus pennad E. Gervilio ez on a-du gantañ : mat e vefe da bep hini, emezañ, lenn levr L. Kohr. Mat e vefe ivez, evel ma lavar c'hoazh, burutellañ al levr. Met goude se, neuze, e sav un diforc'h etrezomp. E. Gervilio a soñj anezhañ, ma 'm eus komprenet mat, eo mat burutellañ al levrioù evit distrujañ menozioù 'zo e-barzh. D' am soñj-me e vefe gwelloc'h o diverrañ evit magañ ar speredoù gant pezh a vez kavet a nevez e-barzh, kalz pe nebeut, ne ra forzh, met tennañ un dra bennak pa vez tu, ha lezel ar peurrest. Rak al levrioù zo graet evit se : kompren an traoù tamm-ha-tamm ; hag evel ma ne vez kavet levr ebet, koulz lavaret, a vefe klok ha difazi penn-da-benn, ar pezh a vez talvoudus e pep unan anezho a ranker e gemer e-lec'h m' emañ, ha mont pelloc'h neuze da glask ar peurrest.

Ma 'z eus un dra displijus e pennad E. Gervilio, ar spered a ren anezhañ penn-da-benn an hini eo : seblantout a ra stourm a-enep d' ar pezh n' eo ket rik diouzh e venozioù-eñ. Klask a ra an distruj krenn ha krak e-lec'h esaeañ gwelout petra a vefe pouezus ha talvoudus gant menozioù ar re all. Abalamour da se em eus divizet skrivañ ar pennad-mañ. Abalamour ma tiskouez pennad E. Gervilio bezañ ur flemmskrid polltikel, ha tamm ebet ur vurutelladenn wirion. Rak aliesoc'h-aliesañ e vez kavet bremañ dielfennadurioù eus ar seurt se. Stankoc'h-stankañ eo ar re a gred dezho ez eus daou rummad-tud : ar re emañ ar wirionez ganto, penn-da-benn, hag a oar, na petra 'ta, kement a zo da c'houzout diwar-benn pep tra, hag ar re all, ar re a fazi bep taol hag a zeu dezho ar c'hoant, abat koulskoude alies a-walc'h, da zigeriñ o beg. Met n' eo ket a-walc'h. War ar marchad e vez renket ar re-mañ evel « touellerien dañjerus » dre m' emaint, anat eo, o harpañ ar c'hapitalism etrevroadel, hini Frañs, hini Breizh - solud ha yac'h-pesk evel ma oar an holl - ha memes hini ar baradoz hag hini an ifern, pa chom c'hoazh un tamm amzer ganto...

Pa oan bugel, 5 pe 6 vloaz bennak din marteze, em eus soñj e oa deut person Plouared da weladenniñ ac'hanomp. Mamm (Doue d' he fardono), ar paour-kaezh anezhi, he devoa prenet ul levr gwerzhet gant protestanted a oa o chom d' ar c'houlz-se, a gredan, er C'hozh-Varc'had. Mamm, ur gristenez vat anezhi, n' he doa ket kredet, d' am soñj, nac'hañ prenañ al levr gant ar paour-kaezh paotr all, a oa marteze ken nec'het all en e greiz, o werzhañ e varc'hadourezh. Ma ! Laret e oa bet dezhi gant ar person deviñ al levr-fazioù-se an abretañ ar gwellañ. Hag evel-se e oa bet graet, bountet al levr raktal e tan glanaus ar fornigell. Aze, 'vat, e oa bet graet prim-ha-prim, ha kuit a re a werinelezh, ur c'hammed bras war hent diaes ar wirionez...

Kalz diwezhatoc'h, pa oan o labourat e rannvro Bariz, paotr yaouank o c'hounit ma zamm kreun evel ma c'hellen, ha me un tamm ezel kintus ac'hanon eus ar strollad komunour gall, e veze goulennet diganimp, da lavarout eo gourc'hemennet dimp, disfiziout start diouzh kazetennoù 'zo, evel " Le Monde " da skouer, ken dañjerus ma oa lenn seurt torch-bourc'hiz...

Setu perak ne biij ket din ken, ugent vloaz goude, gwelout burutellerien o tifenn o menozioù-int, ha tagañ an oberourien, war zigarez displegañ da lennerien kazetennoù evel Al Liamm petra a vez kavet e levrioù 'zo.

(1) " Al Liamm " niv. 169, pp. 118-127.

FRANSEZ KERVELLA
YEZHADUR BRAS AR BREZHONEG
503 pajenn
Eil mouladur reizhet
Priz : 50,00 lur
EMBANNADURIOU AL LIAMM
Mlle J. QUEILLÉ, 47, rue Notre-Dame, 22200 Guingamp
- C.C.P. 1136 82 Rennes -

Roll ar Pennadoù bet embannet war Al Liamm etre 1966 ha 1975

UR GERIG EN A-RAOK

Menez al labour-mañ a zo deuet dimp dre m' hon eus bet alies da glask pennadoù e-barzh Al Liamm ha bet rediet bep tro d' ober un hir a enklask...

Kalz a dud o deus bet, kazi sur, d' ober gant seurt skoilh. Ouzhpenn e teu soñj alies d' ar spered eus ur pennad bet lennet pe gwelet gwechall hep ne c'hellfer resisaat pelloc'h eget « Sur 'z eus bet savet ur pennad diwar-benn an dra-se el Liamm ! ».

Poent 'oa, d' hor meno, kregiñ gant ul labour a aesafe an enklaskoù, a ziskouezhfe ivez pegen liesseurt eo an danvez bet meret gant ar gelaouenn hag a zegasfe eñvor eus pennadoù pouezus a oa bet kollet ar soñj anezho.

Perak kregiñ dre ar penn diwezhañ ? Daou abeg eeun a zo : an niverennoù-se eo ar re a anavezemp ar gwellañ ; n' hon eus ket un dastumadeg klok eus Al Liamm, Kened ha Tir Na N-og, ar pezh a zo ret evit gellout kregiñ adalek ar penn kentañ.

Ar pezh a soñjemp eo e teufe tud d' hor skoazellañ ha d' ober ar peurrest ur wech kaset en-dro al labour, n' eus forzh dre beseurt penn 'vefe bet boulc'het da gentañ.

426

Ret eo deomp anzav ez omp bet broudet gant un nebeut sikourioù : al labour bet graet gant G. BERTHOU, e niv. 131 ha 140-143 Gwalarn ; labourioù pouezus F. BROUDIC, " *Roll al leoriou hag ar pennadoù bet embannet e brezoneg e 1973* " ; Studi, niv. 1) hag e 1974 (Studi, niv. 5). Skoazellet omp bet ivez gant ar rolloù savet bep bloaz gant Al Liamm ; gant pennad V. de BELLAING war ar renkennañ pennadoù (Al Liamm, niv. 166-167) ha burutelladenn F. KERVELLA war " *Roll al leoriou hag ar pennadoù embannet e brezoneg e 1973* " (Al Liamm, niv. 168)*

Klasket hon eus renkañ da gentañ ar pennadoù dre zanvez, o reiñ da bep hini un niverenn. Evel just e c'hellho bezañ kavet obeg en doare renkañ hon eus dibabet. Diaes vefe dimp, a-wechoù, displegañ perak hon eus lakaet pennad-mañ-pennad er rann-mañ e-lec'h e lakaat 'n ur rann all. Ur gudenn gwall ziaes eo ha n' hell diskoulm ebet bezañ gwelet evel an hini nemetañ.

Gant anaoudegezh vat 'vo degemeret an evezhiadennoù hag ar burutelladennoù, ma n' eo ket bepred gant plijadur...

Ar roll-se, an hini diazez, a zo evel just savet hervez urzh al lizherenneg. Anv an oberour eo a vez kemeret nemet ne vefe anv oberour ebet, neuze, e kaver titl ar pennad renket e-touez anv an oberourien. Pa vez meur a bennad gant an hevelep oberour ez int bet renket dre urzh al lizherenneg nemet evit troidigezh Istor Breizh LA BORDERIE, aze hon eus kavet gwelloc'h renkañ dre urzh embannadur ar pennadoù.

Ne dalc'homp ket kont eus ar ger-mell evit renkañ ar pennadoù : un anv den evel Bernez an NAILH, a vo kavet da : NAILH, ha n' eo ket da : AN. Un titl evel AR WIZ OUEZ a vo kavet er plas a vefe bet hini GWIZ OUEZ, ha n' eo ket da : AR... Pa ne oa nemet lizherennoù evel berradur, hon eus gwelet anezho evel un hollad : G.P. a vo kavet da : G.P., ha n' eo ket da : P. (G.) ; memestra evit P.

ar M. hag evit N. a. R., ne vint ket kavet da : M. (P. ar) pe da : R. (N. a.)
met da : P. ar M. ha da N.a.R.

Da c'houde eo bet klasket sevel roll an dud o deus savet pennadoù, roll ar
re m' eo bet troet pennadoù savet ganto, roll ar re o deus troet pennadoù, roll
ar re o deus dastumet gwerzioù ha kontadennoù pobl, rolloù an dud, al lec'hioù
hag oberennoù m' eo bet savet pennadoù diwar o fenn.

Lezet hon eus a-gostez an notennoù a gaver e dibenn pep niverenn. D'hor
sonj ez eus aze, peadra ober un hir a studiadenñ hag ur roll ispisial diwar-benn
an notennoù fonnus-se.

Fazioù a vo kavet, anat eo. Ul labour hirbadus eo bet, dreist-holl ma
vezer rediet, evel an darn vrasañ eus ar re a skriv e brezhoneg, d' ober seurt
labourioù war-lerc'h un devezh leuniet mat dija...

Goulenn a reomp e vefe digarezet ar mankoù hag ar fazioù-se met ra vint
meneget evit sikour ar re a savo rolloù 1946-1955 ha 1956-1965.

Un evezhiadenñ c'hoazh a-raok echuiñ.

Kalz muioc'h a lennegezh a gaver e-barzh Al Liamm eget a studiadennoù,
daoust da dud 'zo ober van krediñ ar c'hontrol. Plas 'zo c'hoazh, eta, evit
studiadennoù ha pennadoù a bep seurt, kement a zanvezioù n' o deus ket bet
c'hoazh an enor da gavout ur pennad gouestlet dezho en hor c'helc'h-
kelaouenn...

* N. ar R. - Mat eo menegiñ ivez labour Herve KONAN " Roll ar pennadoù embannet
gant an dastumadenn SAV ", Al Liamm' niv. 38, pp. 46-59 - Mae-Mezheven 1953.

428

TAOLENN AR ROLLOÙ

I. - Roll ar pennadoù renket dre zanvez 430

A. - Dre vras...

A/I	- Buhez Al Liamm	430
A/II	- Kelaouennoù ha tiez-embann brezhonek all	430
A/III	- Ober war-dro levrioù ha pennadoù	431
A/IV	- Strolladoù, kendalc'hioù	431
A/V	- Pennadoù savet evit kinnig un oberenn pe un droidigezh	431

B. - Politikerezh, studiadennoù ha prederiadennoù war ar gevredigezh,
ekonomiezh, gizioù pobi, pedagogiezh.

B/I	Politikerezh	432
B/II	Dielloù politikel	432
B/III	Prederiadennoù	432
B/IV	Kevredigezh	433
B/V	Pobloù o stourm	433
B/VI	Ekonomiezh	433
B/VII	Deskiñ kelenn	433

C. - Brezhoneg ha yezhoù all.

C/I	Evezhiadennoù diwar-benn ar brezhoneg	433
C/II	Danvez a wechall	435
C/III	Kelenn ha deskiñ ar yezh	435
C/IV	Stourm evit ar brezhoneg	435
C/V	- Yezhoù keltiek all	435
C/VI	- Yezhoù all	436

D. - Arzoù, diduamantoù.

D/I - C'hoariva 436
D/II - Firmoù, pellwel, skingomz 436

E. - Lennegezh.

E/I - Barzhoniezh 436
E/II - Barzhoniezh troet 441
E/III - Pezhioù-c'hoari 444
E/IV - Pezhioù-c'hoari troet 444
E/V - Romantoù, danevelloù, kontadennoù 445
E/VI - Romantoù, danevelloù, kontadennoù troet 448
E/VII - Gwerzioù ha kontadennoù pobl 449
E/VIII - Eñvorennoù, deizlevrioù 451
E/IX - Skridvarnerezh 452
E/X - Studiadennoù a lennegezh 455

429

F. - Istor ha douaroniezh.

F/I - Istor dre vras 455
F/II - Istor Breizh 456
F/III - Istor ar broioù kelt 457
F/IV - Istor ar broioù all 457
F/V - Boazioù kozh 458
F/VI - Lec'hioù kozh 458
F/VII - Broioù kelt 458
F/VIII - Broioù all 458
F/IX - Danevelloù beaj 459

G. - Diwar-benn an natur 459

H. - Diwar-benn tud 'zo 459

DA VEZAÑ EMBANNET E-BARZH AN NIV 180

II. - Roll ar re o deus savet pennadoù.

III. - Roll ar re o deus dastumet gwerzhioù pe kontadennoù-pobl.

IV. - Roll ar re o deus troet pennadoù.

V. - Roll ar re m' eo bet lakaet e brezhoneg pennadoù savet ganto en ur yezh all.

VI. - Roll an dud m' eo bet skrivet ur pennad diwar o fenn.

VII. - Roll ar broioù, lec'hioù, pobloù, rummadoù tud, luskadoù m' eo bet savet pennadoù warno.

VIII. - Roll an oberoù hag ar c'helaouennoù bet savet ur pennad diwar o fenn.

BERRADURIOU BET GRAET IMPLIJ ANEZHO

niv. = niverenn.

p. = pajenn

pp. = pajennoù.

dwb. = diwar-benn.

tr. = troidigezh.

kemp. = kempennet.

gt = gant.

br. = brezhoneg.

ABK = Ar Bed Keltiek.

AL = Al Liamm.

HY = Hor Yezh.

BH = Barr-Heol.

R.a.r.A. = Romant ar roue Arzhur.

KEAV = Kamp etrekeltiek ar vrezhonegerien.

SADED = Strollad an deskadurezh eil derez.

Niverennoù kozh AL LIAMM : s.o. niv. 178, p. 372.

430

I. - Roll ar pennadoù renket dre zanvez

A. - DRE VRAS...

A/I - BUHEZ " AL LIAMM "

1. Ur bloaz 'zo dija eo he dije an niverenn-mañ... - 1967 - niv. 120, p. 3.
2. Evel an holl gelaouennoù... - 1974 - niv. 166-167, p. 343.
3. UR GERIG. - 1974 - niv. 165, p. 263.
4. HUON (Ronan). - Al Liamm kelaouenn lennegel. - 1968 - niv. 127, pp. 83-84.
5. HUON (Ronan). - An niverenn 150. - 1972 - niv. 150, pp. 3-4.
6. HUON (Ronan). - Sav-boent un embanner. - 1972 - niv. 150, pp. 54-55.
7. Ul lodenn vras eus pennadoù an niverenn-mañ - 1967 - niv. 121, p. 135.
8. Priz Al Llam. - 1967 - niv. 125, p. 463.

A/II - KELAOUENNOÙ HA TIEZ EMBANN BREZHONEK ALL.

9. BODMAEL (G.) - Ar gelaouenn "Emsav" - 1967 - niv. 123, pp. 367-374.
10. ETIENNE (G.). - Preder e 1970. - 1971 - niv. 144, pp. 65-70.
11. GLANNDOUR (Maodez). Lec'h Gwalarn en Emsav. - 1970 - niv. 142, pp. 325-333.
12. GWALARN. - 1975 - niv. 170. p. 163.
13. HEMON (Roparz). - " Gwalarn "... ha goude. - 1975 - niv. 170. pp. 164-170.
14. LANGLEIZ. - Ar seizh avel (ur pennad skrid e brezhoneg bemdeiz !) [gant " Skrev ar C'homandant Charcot " evel skouer]. - 1973 - niv. 161, pp. 438-446.

431

A/III - OBER WAR-DRO LEVRIOÙ HA PENNADOÙ.

15. BELLAING (Vefa de). - Penaos renkennañ levrioù ha pennadoù. - 1974 - niv. 166-167, pp. 410-416.
- Gwelout ivez : 591.

A/IV - STROLLADOÙ, KENDALC'HIOÙ.

16. DENEZ (Per). - Kendalc'h keltiek 1968 (20-24 a viz Eost). -1968 - niv. 126, pp. 47-50.
17. DENEZ (Per). - 20-25 a viz Eost Kendalc'h keltiek Foujera. -1968 - niv. 127, pp. 142-144.
18. DENEZ (Per). - Kendalc'h keltiek Bangor. - 1972 - niv. 154, pp. 385-389.
19. P. D. - Kendalc'h keltiek Foujera. - 1968 - niv. 128, pp. 205-206.
20. SADED. - Danevell gwazva ar genurzh (pempet bodadeg vloaz SADED). - 1967 - niv. 122, pp. 262-267.
21. SADED. - Danevell gwazva ar c'helenn (pevare bodadeg vloaz SADED). - 1966 - niv. 115, pp. 135-141.

A/V PENNADOÙ SAVET EVIT KINNIG UN OBERENN PE UN DROIDIGEZH.

22. ABERZEL. - Troet diwar an iwerzhoneg : amañ e-kreiz an draonienn. - 1971 - niv. 144, pp. 225-226.
23. ANDOUARD (L.). - E penn kentañ ar bloaz-mañ... [a-raok arroudennoù eus I Promesi Sposi]. - 1970 - niv. 143, p. 483.
24. Barzhonegoù Vladimir Holan. - 1972 - niv. 153, p. 312.
25. BERR (Alan E. ar). - Un teskad skridoù (Friedrich Hölderlin 1770-1843). - 1970 - niv. 142, pp. 355-356.
26. DENEZ (Per.). - Notenn [dwb " Nozvezh arkuz e beg an enezenn " gant Youenn Drezen]. - 1972 - niv. 151, p. 85.
27. DENEZ (Per). - Yann Ezel. - 1967 - niv. 123, pp. 305-306.

28. EVENOU (Erwan). - Barzhonegoù berber. - 1969 - niv. 132, pp. 9-10.
 29. F. K. - Daou bennad eus " Lemenik, skouer ar varzhed " - Danvez a-wechall. - 1969 - niv. 131, p. 438.
 30. GLANNDOUR (Maodez). - Ar Suis bras. - 1973, niv. 154, pp. 293-294.
 31. HEMON (Roparz). - E miz Kerzu 1965 ez embannis war Ar Bed Keltiek... [evit kinnig " Kroaz an Diaoul "] - 1968 - niv. 129, p. 229.
 32. HEMON (Roparz). - Kentlavar [d' " Ar Maskl Satin ", o tisplegañ menoz ar Barzhaz Dianav]. - 1969 - niv. 135, pp. 243-245.
 33. KLER (Jord). - Setu ar pezh a skrive Abeozen... [evit kinnig ur pennad gant Loeiz ar Floc'h]. - 1968 - niv. 127, pp. 125-127.
 34. LATIMIER (Andrev). - Un toullad gerioù en a-raok [Digoradur da eñvorennoù Teofil Jeused]. - 1967 - niv. 123, pp. 348-350.
 35. MENN (Herve ar). - Ul liver gall en Hañveg kant vloaz 'zo. -1970 - niv. 149, p. 106.
 36. N. ar R. - Ar pezh a vez anvet lennegezh... [a-raok " An nevez-amzer 'zo deuet en-dro war ribl ar stêr Ton Kiang "]. -1974 - niv. 164, pp. 225-226.

432

37. Notenn [diwar-benn troidigezh Istor Breizh La Borderie]. - 1971 - niv. 146, p. 190.
 38. TURIIV (Breur). - Salmoù Ernest Cardenal. - 1970 - niv. 142, pp. 365-366.

B. - POLITIKEREZH, STUDIADENNOÙ HA PREDERIADENNOÙ WAR AR GEVREDIGEZH, EKONOMIEZH, GIZIOÙ POBL, PEDAGOGIEZH.

B/I. - POLITIKEREZH.

39. ABERWAN. - Kleiz ha Breizh. - 1967. - niv. 121, pp. 180-193.
 40. BOURDELLES (Per). - An Istor hag ar vro. - 1969 - niv. 132, pp. 44-51.
 41. DENEZ (Per). - Ar skrivagner en ur vro drevadenet. - 1970 - niv. 141, pp. 290-298.
 42. ETIENNE (G.) ha LEMOINE (L.). - Lennegezh ha dispac'h. (Displeget da geñver kendael an 22 a viz Eost 1988, Devezhioù Studi an Deskadurezh Vroadel). - 1969 - niv. 135, pp. 281-287.
 43. HEUSAFF (Alan). - Skoilh d' ar c'hresk armerzhel. - 1971 - niv. 146, pp. 198-205.
 44. KERVILIO (Eflamm). - Utopia ? - 1975 - niv. 169, pp. 118-127.
 Gwelout ivez : 62, 588, 613, 617, 670.

B/II DIELOU POLITIKEL.

45. CONNOLLY (James). - Goanag Erin (tr. Eflamm gKERVILIO). - 1975 - niv. 172, pp. 377-380.
 46. CONNOLLY (James). - Goanag Erin (tr. Eflamm gKERVILIO). - 1975 - niv. 173, pp. 456-462.
 47. MALMANCHE (Tangi). - Bezomp " Ni hon unan " (Pennad digeriñ Spered Ar Vro). - 1973 - niv. 160. pp. 364-369.
 48. SKRIDOÙ TEST : Brec'hiad komzoù evit ur stourm (Arroudennoù eus Emil Masson, James Connolly, Yann Sohier, Meven Mordiern, Youenn Olier, Per Denez, Tim O'Shenco, Abanna). - 1967 - niv. 121. pp. 194-198.
 49. SINN FEIN. - Notennoù : A-enep an emezelañ d' ar c'henvarc'had (tr.). - 1967 - niv. 120, pp. 121-122.
 50. TALBENN SEVENADUREL TCHEC'HOSLOVAKIA. - Diskleriadur a-berzh al labourerien spered e Tchec'hoslovakia (tr. Per DENEZ). - 1969 - niv. 134, pp. 207-209.

B/III PREDERIADENNOÙ

51. ABANNA. - Ar paradozioù kollet (Gouel Lili, An natur c'hlas, Gwalarn). - 1970 - niv. 142, pp. 345-351.
 52. GLANNDOUR (Maodez). - Kultur ha sevenadur. - 1974. - niv. 166-167, pp. 396-409.
 Gwelout ivez : 542, 543, 564, 565. 566. 567, 568, 569, 570.

433

B/IV - KEVREDIGEZH.

53. BRISSON (Rojer). - Popoff Verne. - 1970 - niv. 138, pp. 4446.
54. COMMITTEE OF CONCERNED ASIAN SCHOLARS. - Kudenn an drammm (tr. Ifig SKIRIOU). - 1974 - niv. 165, pp. 305-321.
55. IHUELLOU - AR MENN (Garmenig). - Ar wall-grennardiezh e Breizh. - 1970. - niv 138, pp. 37-43.
56. KERHOAZ (T.). - Labouradegoù Doux, ur wech e oa un draonienn sioul. - 1974 - niv. 162, pp. 63-64.

B/V POBLOU O STOURM.

57. GAK (Ivon) ha KERRAEN (Mark). - An Indianed er Stadoù-Unanet. - 1972 - niv. 152, pp. 251-255.
58. HEUSAFF (A.). - Jahinet. - 1972 - niv. 152, pp. 241-250.
59. HEUSAFF (A.). - Norzh Iwerzhon : diskoulm ebet war wel. -1972 - niv. 150, pp. 59-64.
60. HEUSAFF (A.). - Harpomp NICRA. - 1972 - niv. 150, pp. 56-58.
Gwelout ivez : 594, 617.

B/VI - EKONOMIEZH.

61. MAENOUR (P. ar). - Berregezh ha keraouezh. - 1974 - niv. 163, pp. 146-150.
Gwelout ivez : 43, 44.

B/VII -- DESKIÑ KELENN.

62. KELENNERION DEVEZHIOU STUDI AN DESKADUREZH VROADEL. - Notennoù evit kelenn an istor. - 1969 - niv. 133, pp. 108-123.
63. KONAN (Jakez). - En em gelenn diwar lenn. - 1966 - niv. 117, pp. 270-275.
64. NEILL (A. S.). - Skol Summerhill. Pennad I, Menoz Summerhill (tr. D. BOURDINIÈRE). - 1975 - niv. 173, pp. 441-450.

C. - BREZHONEG HA YEZHOU ALL.

C/I - EVEZHIADENNOÙ DIWAR-BENN AR BREZHONEG.

65. AbENNEZ. - E sigur lec'hanvadurezh Bro-Ereg. - 1967 - niv. 122, pp. 268-272.
66. AbENNEZ. - Goude-skrid (da " E sigur lec'hanvadurezh Bro-Ereg "). - 1967 - niv. 122, pp. 274-275.
67. AbENNEZ. - Skoueriekadur lec'hanvioù Bro-Ereg (Kreizenn Imbourc'h Sturvezhoniezh SADED). - 1966 - niv. 117, pp. 291-307.
68. DENEZ (Per). - Yezh ar bobl : Pinvidigezhioù o vont da goll. - 1968 - niv. 126, pp. 42-46.

434

69. DRESSLER (Wolfgang). - Evit un ereadoniezh eus ar brezhoneg (Evezhiadennoù a-zivout amsav ar verb, an argouezh ha gelladur arc'hwelel ar frazenn) [troidigezh]. - 1970 - niv. 142, pp. 412-418.
70. GUYONVARC'H (Christian J.). - Diwar-benn ar brezhoneg **agentaou**. - 1969 - niv. 132, pp. 64-65.
71. GUYONVARC'H (Christian J.). - Ergerzhadenn e bro ar brezhoneg beleg (Evezhiadennoù diwar-benn yezh ar c'hCatholicon). - 1970 - niv. 138, pp. 60-66.
72. HEMON (Roparz). - A-zivout " Notennoù yezh ". - 1970 - niv. 139, pp. 145-147.
73. KERVELLA (F.). - Deskiñ ar brezhoneg. - 1975 - niv. 168, pp. 40-41.
74. KERVELLA (F.). - Notennoù yezh war zigarez lenn [I - **Eus Gwarizi Vras Emer da vMari Vorgan** (F. Kermoal, " Preder " 91) ; II - **Stered ar Prad** gant Añjela Duval, " Ar Bed Keltiek ", Ebrel 1968]. - 1968 - niv. 128, pp. 198-204.
75. KERVELLA (F.) - Notennoù yezh war zigarez lenn [I - ABK Gouere 1968 ; II - Ogam 113-114, Kerzu 1967, Brezhoneg Agentaou gant Ch. J. Guyonvarc'h]. - 1968 - niv. 130, pp. 355-357.
76. KERVELLA (F.). - Notennoù yezh war zigarez lenn [I - ABK Du 1968 ; II - AL

- 130, Gwengolo-Here 1968 ; III - A bep seurt]. - 1968. - niv. 131, pp. 432-437.
77. KERVELLA (F.). - Notennoù yezh war zigarez lenn [VIII - ABK 120, Kerzu 1968 ; IX - " O sellout war ma c'hiz ", trede levrenn gant Youenn Olier ; X - HY 54, Genver 1969]. 1969 - niv. 132, pp. 52-64.
78. KERVELLA (F.). - Notennoù yezh, war zigarez lenn [XI - BH 59, Meurzh 1969 ; XII - Barzhonegoù gant Y. Olier, " Gevred ", Roazhon 1969]. - 1969 - niv. 133, pp. 136-143.
79. KERVELLA (F.). - Notennoù yezh, war zigarez lenn [XIII - BH 60, Mezheven 1969 ; XIV - AL 134, Mae-Mezheven 1969]. - 1969 - niv. 136, pp. 350-359.
80. KERVELLA (F.). - Notennoù yezh, war zigarez lenn [XV - ABK 132, Kerzu 1969 ; XVI - BH 62, Kerzu 1969 ; XVII - HY 55 ha 56-57 ; XVIII - Geriadur Istorel ar Brezhoneg (Kaier 103-104 " Preder ") mui ABK 133]. - 1970 - niv. 138, pp. 51-59.
81. KERVELLA (F.). - O klask ar vouedenn. - 1968 - niv. 130, pp. 352-354.
82. KERVELLA (F.). - Ur pikig pe zaou... - 1971 - niv. 149, pp. 434-438.
83. KERVELLA (F.). - Respont (da Ch. J. Guyonvarc'h). - 1969 - niv. 132, pp. 66-67.
84. KONAN (Jakez). - Al lavar reizh. - 1966 - niv. 114, pp. 29-32.
85. KONGAR. - Evezhiadennoù diwar-benn " Skoueriekadur lec'hanvioù Bro-Ereg ", AbEnnez. - 1966 - niv. 119, pp. 453-456.
86. PENNAOD (G.). - Adnotennoù yezh (dwb AL 133). - 1969 - niv. 134, pp. 214-218.
87. PENNAOD (G.). - krKn. Keth, Ke - krBr. quez. - 1970 - niv. 142, pp. 402-411.
88. PENNAOD (Goulven). - D'an Ao. Guyonvarc'h. - 1970 - niv. 138, p. 67.
89. PENNAOD (Goulven). - Dianskrid da evezhiadennoù AbEnnez. - 1967 - niv. 122, pp. 273-274.
90. PENNAOD (Goulven). - Notennoù war an niveriñ. - 1966, niv. 114, pp. 55-62.

Gwelout ivez : 578, 584, 585, 586, 593, 599, 603, 604, 608, 610, 612, 614, 615.

435

C/II - DANVEZ A WECHALL (pennadoù kinniget gant F. Kervella evit reiñ un tañva eus ar yezh skrivet gwechall).

91. GUEGEN (J. F.). - Ar garantez e Breizh (Feiz ha Breiz 1908, pp. 271-278). - 1968 - niv. 129, pp. 272-278.
92. KALEDOULC'H (Erwan BERTHOU). - Daou bennad eus Lemenik skouer ar varzhed (" Stourmou ha paourentez bepred " ha " Ne 'z eus ken ha ziskenn "). - 168 - niv. 131, pp. 439-443.
93. THOER (F.). - Penaos e vez kutuilhet ar bezhin e Pagan (Feiz ha Breiz 1909). - 1968 - niv. 130, pp. 347-351.

C/III - KELENN HA DESKIÑ AR YEZH.

94. A. ar B. - Ur staj war ar maez. - 1974 - niv. 164, pp. 243-246.
95. ANDOUARD (L.). - E Breizh hiziv... Ur sizhunvezh e Kamp etrekeltiek ar vrezhonegerien. - 1972 - niv. 155, pp. 504-512.
96. ANDOUARD (Loeiz). - Bloaz hanter o kelenn ar yezh e Pariz. - 1969 - niv. 133, pp. 129-135.
97. NOGUCHI (Makoto). - Perak e studian brezhoneg. - 1972 - niv. 152, pp. 216-217.
98. OLIER (Youenn). - Raktres kempennadur ar studioù brezhonek. - 1969 - niv. 137, pp. 451-454.
99. PENNEG (Per). - Ur sell war arnodenn an trec'h. - 1966 - niv. 119, pp. 445-452.

Gwelout ivez : 592.

C/IV - STOURM EVIT AR BREZHONEG.

100. ABANNA (G. E.). - Ur gefridi bolitikel : diorren ar yezh resis. - 1967 - niv. 124, pp. 434-439.
101. OLIER (Youenn). - Ar brezhoneg er c'hêrioù. - 1967 - niv. 124, pp. 418-422.
102. X... - A-benn treuziñ ar gouelec'h. - 1966 - niv. 128, pp. 189-197.

C/V - YEZHOUÛ KELTIEK ALL

103. HEUSAFF (A.). - E koun 1916 : Yun enebañ. - 1966 - niv. 116, pp. 194-199.
104. HEUSAFF (Alan). - Nerzh politikel an iwerzhoneg. - 1967 - niv. 120, pp. 4-7.
105. L. A. - An anvioù-lec'h en Iwerzhon. - 1972 - niv. 150, pp. 65-66.
106. MAC AN BHEATHA (Proinsias). - Stad an iwerzhoneg : « Hogen, aet omp war-raok » (tr. L. A.). - 1971 - n)v. 146, pp. 206-207.
107. NOTENNOÛ : Evit deskiñ iwerzhoneg. - 1967 - niv. 120, p. 123.
108. ROBERTS (Elan Cross). - Ar stourm evit ar yezh (tr. P. Penneq dwb Welsh Nation, Genver 1968). - 1968 - niv. 129, pp. 264-271.

Gwelout ivez : 602, 609, 621, 630.

436

C/VI YEZHOUÛ ALL.

109. GWEGEN (Jord). - An euskareg er skolioù. - 1975 - niv. 169, pp. 128-134.

D. - ARZOÛ, DIDUAMANTOÛ...

D/I - C'HOARIVA.

110. ANDOUARD (L.). - Ar c'hoariva brezhonek e Pariz, kentelioù un taol esa (gant 2 skeudenn). - 1972 - niv. 151, pp. 163-171.
111. ANDOUARD (L.). - C'hoariva : " E-kreiz gouelec'h Breizh " (gant 1 skeudenn). - 1973 - niv. 160, pp. 377-379.
112. KERVELLA (Goulc'hen). - C'hoariva brezhonek e bro bagan. - 1975 - niv. 171, pp. 300-306.

D/II - - FILMOÛ, PELLWEL, SRINGOMZ...

113. EVENOU (Erwan). - Fiñvskeudennerezh : Aljeria gwelet ganti hec'h-unan. - 1967 - niv. 124, pp. 440-444.
114. MAENOUR (Per ar). - Ar bloavezhiad brezhoneg er radio hag er pellwel. - 1975 - niv. 168, pp. 33-39.
115. MAENOUR (Per ar). - Skingomz ha skinwel : Toud ! Toud ! Prest ar youd ! pe : Un tammig doujañs mar plij. - 1974 - niv. 162, pp. 60-62.
116. ROC'H. - Ar film Ti pri. - 1974 - niv. 162, pp. 56-59.

E. - LENNEGEZH.

E/I - BARZHONIEZH.

117. ABANNA. - Gouelioù. - 1970 - niv. 143, pp. 444-445.
118. ABERHEL. - Harlu du. - 1966 niv. 114, pp. 6-7.
119. ABERHEL. - An ti war an tevenn. - 1966 - niv. 118, p. 327.
120. ANDOUARD (L.). - Enezenn va ene. - 1971 - niv. 145, pp. 128-130.
121. AN TOUSEG - Diaspora. - 1973 - niv. 156, p. 4.
122. AN TOUSEG. - An emzivadeg. - 1973 - niv. 158, p. 180.
123. AN TOUSEG. - Livioù. - 1972 - niv. 154, p. 362.
124. AN TOUSEG. - Pedenn. - 1973 - niv. 160, p. 368.
125. AN TOUSEG. - Planedenn. - 1972 - niv. 155, p. 454.
126. AN TOUSEG. - Treuzvuhezioù. - 1972 - niv. 154, pp. 360-361.
127. BENEAD. - Kozhni. - 1967 - niv. 124, pp. 387-388.
437
128. BOTREL (Atan). - Evel galv un ene mut. - 1974 - niv. 164, p. 179.
129. BROHAN (Yann-Vari). - Marvnad. - 1973 - niv. 160, pp. 324- 325.
130. DENEZ (Gwendal). - Dit. - 1972 - niv. 152, p. 283.
131. DENEZ (Gwendal). - E-kichen an noz - 1973 - niv. 161, pp. 416-417.
132. DENEZ (Gwendal). - Ar glizh... - 1973 - niv. 161, p. 415.
133. DENEZ (Gwendal). - Hurlink e skeud an dremmwelioù merglet. - 1974 - niv. 163, pp. 96-100.
134. DENEZ (Gwendal). - Iwerzhon 74. - 1974 - niv. 169, p. 86.

135. DEVI. - Sonedenn da V... - 1974 - niv. 165, p. 266.
 136. DIOLIER (Per). - An amzer. - 1974 - niv. 166-167, pp. 350- 351.
 137. DIOLIER (Per). - Arnev. - 1966 - niv. 119, pp. 399-400.
 138. DIOLIER (Per). - Azeulerezh. - 1966 - niv. 115, p. 84.
 139. DIOLIER (Per). - Bisig. - 1974 - niv. 162, p. 6.
 140. DIOLIER (Per). - Ar vugale. - 1966 - niv. 119, pp. 395-396.
 141. DIOLIER (Per). - Chal. - 1966 - niv. 117, p. 244.
 142. DIOLIER (Per). - Dibab. - 1972 - niv. 155, p. 453.
 143. DIOLIER (Per). - An distro. - 1966 - niv. 119, pp. 397-398.
 144. DIOLIER (Per). - An divroad. - 1973 - niv. 159, pp. 243-244.
 145. DIOLIER (Per). - Ec'hoaz. - 1966 - niv. 116, p. 165.
 146. DIOLIER (Per). - Eñvorad. - 1966 - niv. 117, p. 245.
 147. DIOLIER (Per). - E Pennamenn. - 1968 - niv. 127, p. 85.
 148. DIOLIER (Per). - Ar foeter hent. - 1973 - niv. 160, p. 323.
 149. DIOLIER (Per). - Gwech a vez. - 1974 - niv. 166-167, p. 352.
 150. DIOLIER (Per). - Hañvoù brezel. - 1975 - niv. 168, pp. 3-4.
 151. DIOLIER (Per). - Hon amzerioù. - 1974 - niv. 162, p. 5.
 152. DIOLIER (Per). - Jonaz. - 1968 - niv. 130, pp. 303-304.
 153. DIOLIER (Per). - Kanenn e dibenn miz Mae. - 1967 - niv. 122, pp. 215-216.
 154. DIOLIER (Per). - Kanevedenn. - 1973 - niv. 153, p. 3.
 155. DIOLIER (Per). - Ar c'hannad. - 1968 - niv. 128, p. 158.
 156. DIOLIER (Per). - Ar gêr. - 1968 - niv. 129, p. 227.
 157. DIOIJER (Per). - Kest. - 1973 - niv. 161, p. 411.
 158. DIOLIER (Per). - Klač'h on. - 1975 - niv. 172, p. 331.
 159. DIOLIER (Per). - Korventenn. - 1966 - niv. 116, pp. 163-164.
 160. DIOLIER (Per). - Mammig kozh a Lanndubedu. - 1966 - niv. 116, p. 166.
 161. DIOLIER (Per). - Me a(r) garfe. - 1966 - niv. 117, p. 246.
 162. DIOLIER (Per). - Nozvezh trist. - 1966 - niv. 116, p. 167.
 163. DIOLIER (Per). - Ar re drec'het. - 1966 - niv. 114, p. 3.
 164. DIOLIER (Per). - Ar rener bras. - 1973 - niv. 161, p. 412.
 165. DIOLIER (Per). - Tonkad. - 1974 - niv. 163, pp. 86-87.
 166. DIOLIER (Per). - Trema 'n blein. - 1975 - niv. 173, p. 415.
 167. DIOLIER (Per). - An tren noz. - 1966 - niv. 118, pp. 325-326.
 168. DIOLIER (Per). - Turmud. - 1974 - niv. 164, p. 180.
 169. DIOLIER (Per). - Va zad. - 1973 - niv. 158, p. 179.
 170. DREZEN (Youenn). - A vaouez, trugarez dit. - 1966 - niv. 118, pp. 323-324.
 171. DREZEN (Youenn). - Lilienn wenn da galon aour... - 1966 - niv. 115, p. 83.
 172. DREZEN (Youenn). - Nozvezh arkuz e beg an enezenn. - 1972 - niv. 151, pp. 86-102.

438

173. DREZEN (Youenn). - Setu melionennoù ! - 1966 - niv. 114, P. 8.
 174. DUVAL (Añjela). - Ki bihan ar feunteun. - 1972 - niv. 152, p. 189.
 175. DUVAL (Añjela). - Labour an estren. - 1967 - niv. 125, p. 473.
 176. DUVAL (Añjela). - Petra dalv ? - 1966 - niv. 119, p. 403.
 177. FRELAUT (Lukaz). - Aloubet kêr, gwall-daget ar maezioù... - 1974 - niv. 165, p. 283.
 178. FRELAUT (Lukaz). - Arabat din boureviañ ma spered... - 1974 - niv. 165, p. 282.
 179. FRELAUT (Lukaz). - Askoun. - 1974 - niv. 165, p. 281.
 180. FRELAUT (Lukaz). - Da zilezet em eus, Barzhoni... - 1974 - niv. 165, p. 283.
 181. FRELAUT (Lukaz). - Engalv. - 1974 - niv. 165, p. 281.
 182. FRELAUT (Lukaz). - Garm. - 1974 - niv. 165, p. 280.
 183. FRELAUT (Lukaz). - Glav. - 1974 - niv. 165, p. 282.
 184. FRELAUT (Lukaz). - Soñjenn. - 1974 - niv. 165, p. 282.
 185. FRELAUT (Lukaz). - Tud yaouank... - 1974 - niv. 165, p. 282.
 186. GALL (Per ar). - D' an Ao. P... - 1972 - niv. 154, p. 363.
 187. GLANNDOUR (Maodez). - Barzhonegoù berr (Kalanna / Kan ar mor / Skreved noz / Nevez-amzer / Ar bod kamelia / Balafenned / Ar roudour / Miz Here / Miz Du / Lennezhioù bihan / Kerse / Avel ar spered / E koun an Aotrou Kalvez). - 1972 - niv. 154, pp. 357-359.
 188. GLANNDOUR (Maodez). - Meulgan Simeon. - 1970 - niv. 142, p. 352.
 189. GLANNDOUR (Maodez). - Tan ha ludu. - 1967 - niv. 124, pp. 383-385.

190. GLANNDOUR (Maodez). - Tan ha ludu. - 1968 - niv. 126, pp. 3-4.
 191. GLANNDOUR (Maodez). - Troiadurioù war un hevelep danvez. - 1970 - niv. 142, pp. 353-354.
 192. GLENMOR. - Keuz karantez. - 1966 - niv. 116, p. 170.
 193. GLENMOR. - Pedenn ar serr-noz. - 1966 - niv. 117, p. 249.
 194. GRUG (Joran ar). - Kredet em eus. - 1972 - niv. 153, p. 383.
 195. GWALEREG (Even). - Ha peoc'h war an douar. - 1967 - niv. 125, p. 474.
 196. GWALEREG (Even). - Karantez ar barzh. - 1967 - niv. 125, p. 475.
 197. GWALEREG (Even). - Toutouik Lalla. - 1969 - niv. 137, pp. 393-394.
 198. GWEGEN (E.). - Koantenn koad ar c'houk. - 1966 - niv. 117, p. 248.
 199. GWERNIG (Youenn). - Aet eo an den da anaon... - 1969 - niv. 132, p. 5.
 200. GWERNIG (Youenn). - Anavezet em eus... - 1970 - niv. 140, p. 165.
 201. GWERNIG (Youenn). - Beaj. - 1969 - niv. 133, pp. 84-86.
 202. GWERNIG (Youenn). - Chomet on meur a wech... - 1969 - niv. 132, p. 6.
 203. GWERNIG (Youenn). - Un deiz ha ma oan o vale er prad... - 1969 - niv. 133, pp. 83-84.
 204. GWERNIG (Youenn). - An diri dir. - 1967 - niv. 125, pp. 464-470.

439

205. GWERNIG (Youenn). - Diskar-amzer. - 1975 - niv. 170, pp. 174-175.
 206. GWERNIG (Youenn). - E kreiz koroll ar bed foll-mañ... - 1969 - niv. 134, p. 167.
 207. GWERNIG (Youenn). - Er geoded (" This side of paradise " / Sav heol / 125vet straed / El barrio / Er bignerez). - 1968 - niv. 130, pp. 299-302.
 208. GWERNIG (Youenn). - Gant va bag aet d' ar strad... - 1969 - niv. 132, p. 4.
 209. GWERNIG (Youenn). - Identity. - 1966 - niv. 119, p. 401.
 210. GWERNIG (Youenn). - Karantez. - 1967 - niv. 124, pp. 389- 391.
 211. GWERNIG (Youenn). - Kouviadur orbidus. - 1969 - niv. 132, P. 3.
 212. GWERNIG (Youenn). - 'Peus ket skrivet kalz 'dra c'hoazh, Youenn. - 1975 - niv. 173, pp. 411-412.
 213. GWERNIG (Youenn). - Rimadelloù evit an deiz kentañ a viz Mae. - 1974 - niv. 163, pp. 83-85.
 214. GWERNIG (Youenn). - Setu ar pont 'n eus met treuziñ ha mont... - 1969 - niv. 132, p. 5.
 215. GWERNIG (Youenn). - Skeudenn ar goantenn-vlev hir Izold... - 1969 - niv. 132, p. 6.
 216. GWERNIG (Youenn). - Tenn, nann, na tenn eo kavout dremm... - 1969 - niv. 134, pp. 167-168.
 217. GWERNIG (Youenn). - Tiig ar barzh. - 1966 - niv. 117, p. 247.
 218. HEMON (Roparz). - Diwezhañ Pantekost Arzhur (Barzhaz dianav). - 1969 - niv. 137, pp. 396-400.
 219. HEMON (Roparz). - An estren. - 1968 - niv. 129, p. 228.
 220. HEMON (Roparz). - Flemmigan a-enep brizhdevedezed Rekourañs gant Jord Helori (1700-1782) (Barzhaz dianav). - 1971 - niv. 145, pp. 100-103.
 221. HEMON (Roparz). - Ar goañv e-barzh an hañv. - 1968 - niv. 130, pp. 305-306.
 222. HEMON (Roparz). - Int (Barzhaz dianav). - 1970 - niv. 138, pp. 8-9.
 223. HEMON (Roparz). - Ar gambr (Barzhaz dianav). - 170 - niv. 138. pp. 7-8.
 224. HEMON (Roparz). - Ar maskl satin (Barzhaz dianav). - 1969 - niv. 135. pp. 245-257.
 225. HEMON (Roparz). - Ar meleour. - 1967 - niv. 124, p. 386.
 226. HEMON (Roparz). - O kerzhout da serr-noz (Barzhaz dianav). - 1970 - niv. 138, p. 7.
 227. HEMON (Roparz). - Pajennad ar breurig Tudal (gant Loeiz Kersanton, 1853-1912) (Barzhaz dianav). - 1971 - niv. 144, nn. 3-6.
 228. HEMON (Roparz). - Va unan-penn (Barzhaz dianav). - 1970- niv. 138, p. 8.
 229. HUON (Tudual). - Un deiz. - 1975 - niv. 169, p. 85.
 230. HUON (Tudual). - Kerzhed am eus. - 1975 - niv. 168, p. 5.
 231. HUON (Tudual). - Rambre. - 1974 - niv. 165, p. 267.
 232. JOUET (P. H.). - Kasadenn. - 1974 - niv. 166-167, p. 354.
 233. KALVEZ (Tugdual). - Doue-galleger. - 1973 - niv. 160, p. 329.
 234. KALVEZ (Tugdual). - Dishualadur. - 1975 - niv. 171, p. 298.
 235. KALVEZ (Tugdual). - Mona. - 1969 - niv. 137, p. 395.

440

236. KALVEZ (Tugdual). - An nevez-amzer war Menez Arre. - 1972 - niv. 148, p. 341.
237. KEINEG (Paol). - Nomenoe. - 1967 - niv. 121, p. 141.
238. KEINEG (Paol). - Rouantelezh. - 1967 - niv. 121, pp. 142-146.
239. KERVAHE (Soaz). - Ene dianav... - 1966 - niv. 119, p. 402.
240. KERVAHE (Soaz). - Buhez kent. - 1970 - niv. 138, P. 5.
241. KERVAHE (Soaz). - Distro. - 1966 - niv. 114, p. 4.
242. KERVAHE (Soaz). - Joa d' hon Anaon. - 1969 - niv. 137, pp. 391-392.
243. KERVAHE (Soaz). - Memento. - 1966 - niv. 117, p. 243.
244. KERVAHE (Soaz). - Pedenn. - 1966 - niv. 114, p. 5.
245. KERVELLA (Erwan). - Teñzor. - 1973 - niv. 159, pp. 245-246.
246. KERVELLA (Erwan). - Yud. - 1973 - niv. 157, p. 107.
247. KERVENDAL (Frañseza). - Bugale Aberfan. - 1966 - niv. 119, pp. 432-433.
248. KIDNA (Sten). - Biafra. - 1969 - niv. 135, pp. 259-260.
249. KIDNA (Sten). - Gwerledan. - 1975 - niv. 173, p. 414.
250. KIDNA (Sten). - Me 'zo dindan dec'h. - 1967 - niv. 122, pp. 219-221.
251. KIDNA (Sten). - 'Peus soñj Blaza ? - 1969 - niv. 135, p. 258.
252. KIDNA (Sten). - Va gwaz 'zo aet d'an Indochin. - 1967 - niv. 121, pp. 147-149.
253. KLOAREG (Gwion). - Gwerzh ar re skuizh. - 1975 - niv. 172, pp. 332-333.
254. KONAN (Jakez). - Evnig, allas ! - 1968 - niv. 126, p. 5.
255. LANGLEIZ. - Bleunioù nevez (1934). - 1975 - niv. 171, pp. 264-265.
256. MOAL (ar), DIRNADOR. - An droug-hirnez. - 1966 - niv. 116, p. 168.
257. M.L.G. - Goañv. - 1966 - niv. 114, p. 9.
258. NOGUCHI (Makoto). - Peder mogedenn. - 1973 - niv. 159, pp. 247-250.
259. PHILIPPE (Jef). - An hader ludu. - 1975 - niv. 172, p. 334.
260. PHILIPPE (Jef). - Gant ma genou digor (me 'fell din komz...). - 1975 - niv. 172, pp. 335-336.
261. PHILIPPE (Jef). - Nez. - 1975 - niv. 173, p. 413.
262. PIRIOU (Yann-Ber). - Bezit mezo. - 1975 - niv. 169, pp. 83-84.
263. PIRIOU (Yann-Ber). - Hadañ. - 1975 - niv. 170, p. 171.
264. PIRIOU (Yann-Ber). - Ma daou barzhoneg karetañ. - 1975 - niv. 171, p. 299.
265. PIRIOU (Y.B.). - Emaint o talmiñ c'hoazh. - 1974 - niv. 162, p. 3.
266. PIRIOU (Y.B.). - Kudenn. - 1974 - niv. 162, p. 4.
267. RICHARD (Jean-Daniel). - Milin vihan. - 1970 - niv. 140, pp. 166-167.
268. RICHARD (Jean-Daniel). - Pirc'hirinaj. - 170 - niv. 138, pp. 3-4.
269. TRELLU (Anna-Mari). - Daerou. - 1973 - niv. 161, n. 414.
270. TRELLU (Anna-Mari). - Ha ma 'z afemp. - 1974 - niv. 166-167, p. 353.
271. TURIIV (Breur). - Deuet gweur ar beure. - 1971 - niv. 145, p. 93.
272. TURIIV (Tad). - O c'hoarzh. - 1971 - niv. 149, p. 447.

441

E/II - BARZHONIEZH TROET.

273. ARNOLD (Matthew) [1822-1888]. - Grae Dover (tr. Roparz HEMON). - 1968 - niv. 131, pp. 379-380.
274. ASTURIAS (Miguel Angel). - Ya, hogen hud ebet (tr. Goulvea PENNAOD). - 1968 - niv. 126, pp. 6-9.
275. BECHER (Johannes Robert). - Adeiladouriezh (tr. G. ETIENNE). - 1970 - niv. 138, p. 6.
276. BECQUER (G. A.). - Ar gouskerez (tr. Roparz HEMON). - 1968 - niv. 131, pp. 381-382.
277. BENN (Gottfried). - Dic'hoanag (tr. G. ETIENNE). - 1969 - niv. 135, pp. 261-263.
278. CARDENAL (Ernesto). - Salm 114-115 : Pa zeuas Israel eus ar getoioù (tr. Breur TURIIV). - 1970 - niv. 142, p. 371.
279. CARDENAL (Ernesto). - Salm 137 : E tal stêrioù Babilon (tr. Breur TURIIV). - 1970 - niv. 142, p. 372.
280. CARDENAL (Ernesto). - Salm 130 : E c'harman er gambrvoueviañ (tr. Breur TURIIV). - 1970 - niv. 143, p. 447.
281. CARDENAL (Ernesto). - Salm 9 : Brudañ a rin, Doue, Da vuzhudoù (tr. Breur TURIIV). - 1970 - niv. 142, pp. 369-371.
282. CARDENAL (Ernest o). - Salm 5 : Selaou va arbennadenn (tr. Breur TURIIV). - 1970 - niv. 142, pp. 367-368.

283. CARDENAL (Ernesto). - Salm 4 : Ro skouarn din (tr. Breur TURIIV). - 1970 - niv. 143, p. 446.
284. CARDENAL (Ernesto). - Salm 7 : Pella diouzhin, Aotrou (tr. Breur TURIIV). - 1970 - niv. 142, p. 368.
285. CARDENAL (Ernesto). - Salm 1 : Gwenn e ved an den (tr. Breur TURIIV). - 1970 - niv. 142, p. 366.
286. COMBETTAS (Andre). - Ma bro n'ec'h eus nemet tud varv... (tr. Makoto NOGUTI). - 1974 - niv. 163, p. 90.
287. DADIE (Bernard). - Ho trugarekaat a ran, va Doue (tr. Yann TALBOT). - 1967 - niv. 122, pp. 217-218.
288. DADIE (Bernard). - Kan da Afrika (tr. Yann TALBOT). - 1971 - niv. 144, pp. 29-30.
289. DADIE (Bernard). - Ma kanin Afrika (tr. Yann TALBOT). - 1970 - niv. 143, pp. 480-482.
290. DHINGRA (Baldoon). - Barzhoniezh bro-Indez (tr. Añjela DUVAL). - 1969 - niv. 132, p. 7.
291. DHINGRA (Baldoon). - Kanenn-bobl a vro-Gambodj. (tr. Añjela DUVAL). - 1969 - niv. 132, p. 8.
292. DIOP (Birago). - Kan an roeñverien (tr. Yann TALBOT). - 1969 - niv. 134, pp. 170-171.
293. DRUMMOND DE ANDRADE (Carlos). - Dorn ouzh dorn (tr. Zavier ar C'HOSEG). - 1971 - niv. 147, p. 239.
294. DRUMMOND DE ANDRADE (Carlos). - E-kreiz an hent (tr. Zavier ar C'HOSEG). - 1971 - niv. 147, p. 237.
295. DRUMMOND DE ANDRADE (Carlos). - Jose (tr. Zavier ar C'HOSEG). - 1971 - niv. 147, pp. 240-241.
296. DRUMMOND DE ANDRADE (Carlos). - Kendalc'h etrevroadel an aon (tr. Zavier ar C'HOSEG). - 1971 - niv. 147, p. 238.
297. DRUMMOND DE ANDRADE (Carlos). - Koroll-pevarigoù (tr. Zavier ar C'HOSEG). - 1971 - niv. 147, p. 238.
- 442
298. ELUARD (Paul). - Al lezenn (tr. Y. B. PIRIOU). - 1967 - niv. 121, p. 137.
299. ESPIEUT (Enric). - Ankounac'haet int bet, ar gerioù a fell din kaout... (tr. Loeiz GWILHOU). - 1974 - niv. 162, p. 8.
300. ESPIRITO SANTO (Alda do). - Emen emañ an dud argaset gant an avel diskiant (tr. E. E.). - 1976 - niv. 121, pp. 139-140.
301. FERNANDEZ RETAMAR (Roberto). - Ma soudardez (tr. Riwanon KERVELLA). - 1973 - niv. 161, p. 413.
302. FERNANDEZ RETAMAR (Roberto). - Skrivañ 'reer ur varzhoneg... (tr. Riwanon KERVELLA). - 1972 - niv. 153, p. 384.
303. GARCIA LORCA (Federico). - Gwerz ar guardia civil española (tr. Riwanon KERVELLA). - 1973 - niv. 157, pp. 110-113
304. GELEVE (Roger). - Breizh (tr. ur skoliadez eus Cours Fenelon Kersteers, Brest, OBER). - 1974 - niv. 163, p. 91.
305. GHEARAILT (Maire Aine Nic). - Dilezet (tr. ?). - 1971 - niv. 145, pp. 131-132.
306. HOLAN (Vladimir). - C'hoant direzon (tr. A.-M. TRELLU). 1972 - niv. 153, p. 318.
307. HOLAN (Vladimir). - Dibaouez (tr. A.-M. TRELLU). - 1972 - niv. 153, p. 314.
308. HOLAN (Vladimir). - An diskar-amzer e Vsenory (tr. A.-M. TRELLU). - 1972 - niv. 153, p. 315.
309. HOLAN (Vladimir). - Emgav en ur saverez (tr. Per DENEZ). - 1972 - niv. 153, p. 319.
310. HOLAN (Vladimir). - Goude hañv bihan Sant Mikael I (tr. A.-M. TRELLU). - 1972 - niv. 153, p. 318.
311. HOLAN (Vladimir). - Goude hañv bihan Sant Mikael II (tr. A.-M. TRELLU). - 1972 - niv. 153, p. 314.
312. HOLAN (Vladimir). - An heol da ouel Maria ar Goulou (tr. A.-M. TRELLU) - 1972 - niv. 153, p. 316.
313. HOLAN (Vladimir). - Hi, pe, An heol zoken a zeu da vezañ daou a-wechoù hag a ziskouez al lec'h n'emañ ket mui (tr. A.-M. TRELLU). - 1972 - niv. 153, p. 317.
314. HOLAN (Vladimir). - Koun II (tr. A.-M. TRELLU). - 1972 - niv. 153, p. 313.

315. HOLAN (Vladimir). - Non cum platone (tr. A.-M. TRELLU). - 1972 - niv. 153, p. 316.
316. HOLAN (Vladimir). - Sorserez an anjeluz (tr. A.-M. TRELLU). - 1972 - niv. 153, p. 317.
317. HOLAN (Vladimir). - Ya ? (tr. A.-M. TRELLU). - 1972 - niv. 153, p. 315.
318. HOELDERLIN (Friedrich). - Da Ziotima (tr. Alan E. ar BERR). - 1970 - niv. 142, p. 356.
319. HOELDERLIN (Friedrich). - Gouelvan Menon diwar-benn Diotima (tr. Alan.E. ar BERR). - 1970 - niv. 142, pp. 358- 362.
320. HOELDERLIN (Friedrich). - Kan-tonkad Huperion (tr. Alan E. ar BERR). - 1970 - niv. 142, p. 357.
321. KAPLINSKY (Jaan). - Ha Verkingetorix a lavar (tr. Y. B. PIRIOU ha Paol KEINEG). - 1973 - niv. 157, pp. 108-109.
322. Kevarc'h d' an hini en deus krouet ar broadoù [barzhoneg berberieg sk. 1943] (tr. Erwan EVENOU). - 1969 - niv. 132, pp. 11-15.

443

323. LARZAC (Joan). - Arabat mont ken buan ! (tr. Sylviane GUYOMARC'H). - 1974 - niv. 163, p. 88.
324. LARZAC (Joan). - Gant petra eo marv ? (tr. Sylviane GUYOMARC'H). - 1974 - niv. 163, pp. 88-89.
325. Latar ha koumoul ouzh an neñv [barzh. berberieg war-dro 1871] (tr. Erwan EVENOU). - 1969 - niv. 132, p. 11.
326. LEITVIK (H.). - Skeiñ 'ra 'n avel (tr. L. ANDOUARD, gant un notenn dwb ar skrivagner). - 1970 - niv. 140, pp. 168- 169.
327. LYSOHORSKY (Ondra). - Beurevezh nevez-amzer (tr. Ronan HUON). - 1972 - niv. 150, p. 8.
328. LYSOHORSKY (Ondra). - D' an heol (tr. G. P.). - 1967 - niv. 123, p. 294.
329. LYSOHORSKY (Ondra). - An Evn (tr. R. HUON). - 1967 - niv. 123, p. 298.
330. LYSOHORSKY (Ondra). - Gwerzh an iliberenn (tr. Ronan HUON). - 1967 - niv. 123, p. 297.
331. LYSOHORSKY (Ondra). - Hamlet (tr. G. P.). - 1967 - niv. 123, pp. 295-296.
332. LYSOHORSKY (Ondra). - An nadoz-aer en diskar-amzer (tr. R. HUON). - 1967 - niv. 123, p. 298.
333. LYSOHORSKY (Ondra). - Prometheus (tr. G.P.). - 1967 - niv. 123, p. 291.
334. LYSOHORSKY (Ondra). - Re zon eo va doan (tr. G.P.). - 1967 - niv. 123, p. 292.
335. LYSOHORSKY (Ondra). - An ti (tr. G.P.). - 1967 - niv. 123, p. 293.
336. MAC FHEORAI (Sean). - Amañ e-kreiz an draonienn (tr. ABERZEL). - 1971 - niv. 144, p. 64.
337. MAC PHERSON (James). - Kad Luina (aozet en bzh gant Ernest ar BARZHIG). - 1974 - niv. 164, pp. 181-186.
338. MARIA (Manuel). - Kanaouenn da ganañ bemdez (tr. Mark KERRAEN). - 1973 - niv. 160, p. 327.
339. MARIA (Manuel). - Kartenn anv (tr. Mark KERRAEN). - 1973 - niv. 160, p. 326.
- 340 Marv an emsaver [kanaouenn iwerzhonek] (tr. Jord KLER). - 1966 - niv. 116, p. 171.
341. MORDREL (O.). - Ul liorz [tennet eus " de viris "] (tr. Ren' SKEREN). - 1972 - niv. 151, pp. 83-84.
342. NICHOLS (Robert). - Mamm (tr. Gwenael ha Tudual HUON). - 1975 - niv. 170, pp. 172-173.
343. O DIREAIN (Mairtin). - Ali d'ar barzh yaouank (tr. ?). - 1967 - niv. 120, pp. 11-12.
344. O DIREAIN (Mairtin). - Hor c'hedern (tr. ?). - 1967 - niv. 120, pp. 9-10.
345. O RIORDAIN (Sean). - En ezvezañs (tr. ?). - 1967 - niv. 120, pp. 15-16.
346. O RIORDAIN (Sean). - Louc'h an treid (tr. ?). - 1967 - niv. 120, pp. 17-18.
347. O RIORDAIN (Sean). - Yezh hanter din (tr. ?). - 1967 - niv. 120, p. 19.
348. PETIT (Joan-Maria) - Pa grogas da gomz e yezh (tr. Loeiz GWILHOU). - 1974 - niv. 162, p. 7.
349. PEARSE (Padraig). - Ar vamm (tr. Jord KLER). - 1967 - niv. 120, p. 8.

444

350. PREVERT (J.). - Evidout va c'harantez (tr. Ren' SKEREN). - 1972 - niv. 150,

p. 9.

351. QUINTREC (Charles le). - An amzer o tizreiñ (tr. ?) - 1966 - niv. 116, p. 169.
352. QUINTREC (Charles le). - Ar bleiz a welis (tr. ?). - 1966 - niv.115, p. 85.
353. REES (Eluned). - Paotred kozh (tr. Mikael MADEG). - 1974 - niv. 165, p. 268.
354. RILKE (Rainer Maria). - Araokaat (tr. ABANNA hag Alan ar BERR). - 1968 - niv. 131, p. 383.
355. RILKE (Rainer Maria). - Mervel a ranker p'o anavezher (tr. ABANNA hag Alan ar BERR). - 1968 - niv. 131, p. 384.
356. ROQUETA (Ives). - Dindan an armoù (tr. Job KOTEL). - 1969 - niv. 163, p. 89.
357. ROSSETTI (Christina) (1830-1894). - Ar galver (tr. Roparz HEMON). - 1969 - niv. 134, pp. 165-166.
358. SOLEY CETO (Ramón). - Barzhoneg evit ur vamm (tr. Añjela DUVAL). - 1970 - niv. 142, pp. 363-364.
359. TAGORE (Rabindranath). - An denig bras (tr. Gwihen STEVEN). - 1967 - niv. 124, pp. 392-393.
360. THOMAS (R.S.). - Ur vro (tr. Y.B. PIRIOU). - 1967 - niv. 121, p. 136.
361. TIROLIEN (Guy). - Ne fell ket din mont d' o skol (tr. Yann TALBOT). - 1969 - niv. 136, pp. 172-173.
362. WHITMAN (Walt). - Barzhed da zont (tr. Jord KLER). - 1966 - niv. 117, p. 250.
363. YEVTUSHENKO (Yevgeny). - Dieub da lazhañ (tr. Youenn GWERNIG). - 1968 - niv. 128, pp. 155-157.

E/III - PEZHIOÙ-C'HOARI.

364. AbENNEZ - Tad ar vro (e gwerzennoù). - 1969 - niv. 133, pp. 95-107.
365. GOW (Yeun ar). - C'hoar soudard Kiberen. - 1969 - niv. 115, pp. 95-131.
366. LANGLEIZ. - Koroll ar marv hag ar vuhez. - 1975 - niv. 171, pp. 266-277.
367. LANGLEIZ. - Sul Fask ar Gelted. - 1975 - niv. 171, pp. 278- 297.
368. MALMANCHE (Tangi). - Gwreg an toer (4 sk.). - 1973 - niv. 157, pp. 84-102.
369. ROHAN-CHABOT (B. de). - Kevrin Kerbrug. - 1966 - niv. 117, pp. 251-269.
370. ROHAN-CHABOT (B. de). - Kevrin Kerbrug. - 1966 - niv. 118. pp. 345-377.

E/IV - PEZHIOÙ-C'HOARI TROET.

371. GUEL (Alan). - Mikael hag an ael (tr. E. EVENOU). - 1966 - niv. 116, pp. 172-186.
372. NOGUCHI (Makoto). - An houlen (tr. Makoto NOGUCHI). - 1972 - niv. 152, pp. 218-231.

445

E/V - ROMANTOÙ, DANEVELLOÙ, KONTADENNOÙ...

373. ABASQ (J.). - Planedenn. - 1974 - niv. 166-167, pp. 372-373.
374. ABASQ (J.). - War ar skaoñ. - 1972 - niv. 153, pp. 385-388.
375. ABGRALL (Giza). - Ar ribouladenn. - 1973 - niv. 158, pp. 190-195.
376. An arnodenn. - 1970 - niv. 141, pp. 277-279.
377. BARZHIG (Ernest ar). - Goleron. - 1973 - niv. 161, pp. 426-437.
378. BARZHIG (Ernest ar). - Markiz (Eñvoradenn). - 1975 - niv. 169, pp. 96-102.
379. BARZHIG (Ernest ar). - Ar seblant. - 1974 - niv. 166-167, pp. 363-368.
380. BARZHIG (Ernest ar). - Ar yezhadur. - 1972 - niv. 150, pp. 31-37.
381. BELLAING (Vefa de). - Brezel. - 1970 - niv. 141, pp. 269-276.
382. BRISSON (Rojer). - Brezel ar sivi. - 1971 - niv. 146, pp. 170- 182.
383. BRISSON (Rojer). - Brezel ar sivi. - 1971 - niv. 147, pp. 242- 256.
384. DENEZ (Gwendal). - Ambren. - 1972 - niv. 154, pp. 377-379.
385. DENEZ (Gwendal). - Un den evit ar marv. - 1972 - niv. 153, pp. 295-301.
386. DENEZ (Gwendal). - Mentadur ar vuhez. - 1973 - niv. 160, pp. 358-361.
387. DENEZ (Gwendal). - Pa varv an avel er straedigoù didud. - 1975 - niv. 169, p. 87.
388. DENEZ (Per). - Daoulagad glas dinamm. - 1966 - niv. 119, pp. 408-413.
389. DIDROUZ. - Un den a urzh vat. - 1973 - niv. 160, pp. 351-357.

390. DIDROUZ. - Al lizher meur. - 1969 - niv. 133, pp. 87-94.
 391. DUBOURG (Gwilherm). - An teir rozenn ruz. - 1968 - niv. 128, pp. 174-181.
 392. DUVAL (Añjela). - Distruj. - 1975 - niv. 169, pp. 92-95.
 393. EVENOU (Erwan). - O jelkenn vara. - 1967 - niv. 121, pp. 150-154.
 394. FAVEREAU (F.). - En hent. - 1974 - niv. 166-187, pp. 386-395.
 395. FAVEREAU (Frañsez). - Du-mañ, hiziv... - 1973 - niv. 161, pp. 420-425.
 396. FAVEREAU (Frañsez). - Gwagenn - 1971 - niv. 147, pp. 257-265.
 397. FOIX (Jilberz). - Harlu 46. - 1972 - niv. 153, pp. 289-294.
 398. FOIX (Jilberz). - Deut on da lavarout dit. - 1975 - niv. 172, pp. 359-361.
 399. GALL (Per ar). - Ur barr-amzer fall. - 1970 - niv. 143, pp. 489-491.
 400. GALL (Per ar). - Un dra vurzhus. - 1974 - niv. 165, pp. 269-272.
 401. GALL (Per ar). - An ti kozh. - 1974 - niv. 163, pp. 92-95.
 402. GRUG (Joran ar). - Danvez romant. - 1975 - niv. 173, pp. 424-426.

446

403. GWALEREG (Even). - An nor morailhet. - 1966 - niv. 119, pp. 414-431.
 404. GWERNIG (Youenn). - Kleier an trec'h. - 1969 - niv. 132, pp. 16-27.
 405. GWERNIG (Youenn). - Koukou. - 1966 - niv. 119, pp. 404-407.
 406. GWERNIG (Youenn). - Servij ar bloaz. - 1967 - niv. 125, pp. 471-472.
 407. GWERNIG (Youenn). - Straed Santez Katell. - 1967 - niv. 122, pp. 222-226.
 408. HEMON (Roparz). - Hañvig foar an nec'h. - 1975 - niv. 172, pp. 339-358.
 409. HEMON (Roparz). - Nenn Jani (Pennad 1). - 1972, niv. 154, pp. 364-376.
 410. HEMON (Roparz). - Nenn Jani. - 1972 - niv. 155, pp. 469-479.
 411. HEMON (Roparz). - Nenn Jani (Pennad 2). - 1973 - niv. 156, pp. 44-54.
 412. HEMON (Roparz). - Nenn Jani. - 1973 - niv. 157, pp. 114-123.
 413. HEMON (Roparz). - Nenn Jani (Pennad 3) - 1973 - niv. 158, pp. 181-189.
 414. HEMON (Roparz). - Ar pezh aour. - 1968 - niv. 127, pp. 86-100.
 415. HUON (Tudual). - O arc'hant brein. - 1975 - niv. 173, pp. 413-423.
 416. IONA. - Al liamm ene. - 1972 - niv. 152, pp. 190-194.
 417. JOSSE (Henri). - " Ha setu penaos Breizh 'voe salvet da viken ". - 1969 - niv. 136, pp. 331-337.
 418. Kammedoù war ar mor. - 1970 - niv. 140, pp. 198-200.
 419. KERGOAT (Lukian). - Blaz ar champagn (polis). - 1974 - niv. 164, pp. 235-242.
 420. KERGOAT (Lukian). - Ar vleunienn melen-ruz. - 1974 - niv. 166-167, pp. 358-362.
 421. KERGOAT (Lukian). - Distro eus ar skol. - 1975 - niv. 168, pp. 6-13.
 422. KERGOAT (Lukian). - Fañch. - 1974 - niv. 166-167, pp. 355-357.
 423. KERMOAL (Joelle). - Ar gwez el latar. - 1969 - niv. 134, pp. 189-194.
 424. KERMOAL (Joelle). - Ha brav eo ar skol-veur. - 1970 - niv. 143, pp. 451-457.
 425. KERMOAL (Joelle). - He se eo a fell din ? - 1970 - niv. 142, pp. 373-378.
 426. KERMOAL (Pierrette). - Er Stellac'h. - 1969 - niv. 134, pp. 186-188.
 427. KERMOAL (Pierrette). - Roazhon, bepred. - 1970 - niv. 143, pp. 448-450.
 428. KERMOAL (Pierrette). - Roazhon, 8 eur 05. - 1969 - niv. 135, pp. 264-268.
 429. KERVELLA (Riwanon). - Glav ha daeroù - 1975 - niv. 169, pp. 88-91.
 430. KERVENDAL (F.). - Kêrbenn. - 1972 - niv. 155, pp. 458-468.
 431. KIVIJER. - Kirri-gwint ha kestell-eostek. - 1975 - niv. 170, pp. 176-191.

447

432. KLER (Jord). - Digenvez. - 1971 - niv. 146, pp. 158-169.
 433. KLER (Jord). - Ar prizoniad. - 1973 - niv. 159, pp. 274-287.
 434. KOILH (Donan). - An doug-sigaret laeret (polis fent). - 1971 - niv. 144, pp. 19-28.
 435. KONAN (Jakez). - Ur beurevezh kaer a viz Ebrel. - 1970 - niv. 143, pp. 439-443.
 436. LANGLEIZ. - Feunteun Varanton (darn R.a.r.A.). - 1973 - niv. 158, pp. 196-202.
 437. LANGLEIZ. - Kastell al lagennoù (darn R.a.r.A.). - 1974 - niv. 164, pp. 187-193.
 438. LANGLEIZ. - Romant ar Roue Arzur : ganedigezh Marzin. - 1966 - niv. 114, pp. 24-28.
 439. MENEZ KELDREG (Reun). - Añjela. - 1974 - niv. 162, pp. 9-32.
 440. MENEZ KELDREG (Reun). - Evit netra. - 1967 - niv. 125, pp. 483-498.

441. MENEZ KELDREG (Reun). - Gwelloc'h eo lazhañ ar goulou, Tin ! - 1967 - niv. 124, pp. 394-404.
442. MENEZ KELDREG (Reun). - Holl dristidigezh ar bed. - 1968 - niv. 130, pp. 307-318.
443. MENEZ KELDREG (Reun). - Mona. - 1971 - niv. 145, pp. pp. 88-92.
444. MENEZ KELDREG (Reun). - Ret eo plegañ. - 1971 - niv. 144, pp. 7-10.
445. MENEZ KELDREG (Reun). - Tildi. - 1968 - niv. 131, pp. 385-410.
446. MENEZ KELDREG (Reun). - Tonkadur. - 1966 - niv. 114; pp. 10-23.
447. MIKAEL (Yann). - Dial an dogan. - 1973 - niv. 152, pp. 195-207.
448. MIKAEL (Yann). - Peoc'h an aour-avaloù c'hwerv. - 1970 - niv. 140, pp. 191-197.
449. MIKAEL (Yann). - Ur sizhunvezh dispac'h. - 1970 - niv. 142, pp. 379-393.
450. MIKAEL (Yann). - Tonkad harki. - 1969 - niv. 132, pp. 28-37.
451. OLIER (Ernest). - Vakañsoù bras. - 1972 - niv. 154, pp. 380- 384.
452. OLIER (Youenn). - Nedeleg. - 1967 - niv. 125, pp. 476-482.
453. PENNANEC'H (Jaklin). - O tont bras. - 1972 - niv. 155, pp. 455-457.
454. PENNAOD (Goulven). - Ar c'hloareg. - 1970 - niv. 139, pp. 93-105.
455. RIVALEN (Yann-Ber). - Ur gontadenn Nedeleg. - 1974 - niv. 166-167, pp. 369-371.
456. ROUZIG (Renea ar). - Un dro er foar. - 1970 - niv. 143, pp. 488-489.
457. SKIRIOU (Ifig). - Levenez. - 1972 - niv. 153, pp. 302-306.
458. SURZHUR (Rollen E.). - An dremm. - 1971 - niv. 145, pp. 94-99.
459. SURZHUR (Rollen E.). - Ar skrapadenn. - 1971 - niv. 147, pp. 266-273.
460. YELLEN. - Brud fall war ar menez. - 1970 - niv. 141, pp. 255-268.

448

E/VI - ROMANTOÙ, DANEVELLOÙ, KONTADENNOÙ TROET.

461. BECQUER (G. A.). - Kroaz an diaoul (tr. Roparz HEMON). - 1968 - niv. 129, pp. 230-244.
462. BOELL (Heinrich). - Kenedusañ daoudroad ar bed (tr. B. an NAILH). - 1970 - niv. 141, pp. 280-288.
463. BRADBURY (Ray). - Ar falc'h (tr. J. HABASK). - 1969 - niv. 135, pp. 269-277.
464. BRADBURY (Ray). - An hini a c'hortoz. (tr. Mark KERRAIN). - 1975 - niv. 170, pp. 198-204.
465. CAMPION (Arturo). - Tabouliner diwezhañ Erraondo (tr. Youenn DREZEN). - 1974 - niv. 164, pp. 215-224.
466. CERVANTES (Miguel de). - Nerzh ar gwad (tr. Roparz HEMON). - 1968 - niv. 131, pp. 411-424.
467. DEPAUW (Valère). - Un dornad douar (tr. Ernest ar BARZHIG). - 1971 - niv. 148, pp. 309-340.
468. DICKENS (Charles). - Esperañsoù kaer [Pennad I ha III] (tr. Frañsez FAVEREAU). - 1974 - niv. 166-167, pp. 454- 463.
469. GILFORD (G. B.). - Spontet (tr. : ur bodad re yaouank e KEAV). - 1975 - niv. 172, pp. 362-371.
470. GREENE (Graham). - Gwrizioù kement droug (tr. : ur strollad re yaouank e KEAV). - 1971 - niv. 149, pp. 386- 399.
471. HAWTHORNE (Nathaniel). - David Swansa (tr. Roparz HEMON). - 1971 - niv. 146, pp. 183-189.
472. HEMINGWAY (Ernest). - Dek Indian (tr. Ronan HUON). - 1969 - niv. 132, pp. 38-43.
473. HOELDERLIN (Friedrich). - Huperion Thalia-Fragment (tr. Alan ar BERR). - 1971 - niv. 144, pp. 41-61.
474. HONG CHAN. - An nevez-amzer 'zo deuet en dro war ribl ar stêr Ton Kiang (tr. Herve ar BEG). - 1974 - niv. 164, pp. 226-234.
475. IRVING (Washington). - An eured er bed all (tr. Roparz HEMON). - 1968 - niv. 128, pp. 159-173.
476. ISTRATI (Panait). - Askol ar Varagan (tr. X.). - 1968 - niv. 129, pp. 247-250.
477. LEACOCK (Stephen B.). - Kevrin Lord Pennejen [ur romant ur chabistr hepken ennañ] (tr. Jakez KONAN). - 1973 - niv. 157. pp. 124-130.
478. LEACOCK (Stephen B.). - Penaos gounit ur milion a zollarded (tr. Jakez KONAN). - 1973 - niv. 157, pp. 131- 135.

479. MANZONI. - Danvez priedoù [XXvet Pennad : An naonegezh e Milano] (tr. MAEN TAN). - 1970 - niv. 143, pp. 484-487.
480. MATHESON (Richard). - Ganet eus ur gwaz hag ur vaouez (tr. M. KERRAIN). - 1975 - niv. 173, pp. 437-440.
481. MOORE (George). - Kleñved ar gêr (tr. Ronan HUON). - 1970 - niv. 143, pp. 462-475.
482. O CADHAIN (Mairtin). - Douar ar vered [kentañ rann - arroudad] (tr. ?). - 1967 - niv. 120, pp. 24-33.
483. O CONNOR (Frank). - Lazhet 'm eus va zad (tr. Frañsez FAVEREAU). - 1969 - niv. 136, pp. 338-349.
484. O FLAHERTY (Liam). - Gwall dapet (tr. Kenan KONGAR). 1969 - niv. 137, pp. 419-426.

449

485. O FLAHERTY (Liam). - An tri oan (tr. Ani KEREMBELLE). - 1973 - niv. 159, pp. 288-292.
486. O FLAITHEARTA (Liam). - Marv ar vuoc'h (tr. Youenn OLIER). - 1967 - niv. 120, pp. 20-23.
487. ORWELL (George). - Kêr al loened, ur vojenn (tr. ha kempennet gant Per BOURDELLES) - 1972 - niv. 152, pp. 208-215.
488. PAYN (James). - War skaoñ al lezvarn (tr. Ronan KERMENE). - 1967 - niv. 123, pp. 299-334.
489. RAY (Jean). - Doue, te ha me... (tr. Kenan KONGAR). - 1975 - niv. 168, pp. 14-23.
490. SAKI. - Ar chaseourien (tr. Rollen E. SURZHUR). - 1975 - niv. 169, pp. 108-111.
491. VIAN (Boris). - An alumetez (tr. Vefa de BELLAING). - 1970 - niv. 143, pp. 476-479.

E/VII - GWERZIOÙ HA KONTADENNOÙ POBL.

492. BELZ (Jorj). - Sonenn ar " Jowised ". - 1973 - niv. 161, pp. 418-419.
493. Kergustetin kemeret gant an Durked [gwerz-pobl a vro-Hellaz] (tr. Alan R. CHAOVEL). - 1969 - niv. 134, p. 169.
494. KERVARKER. - An Aotrou Nann hag ar gorriganed (kemp. gt R. HEMON). - 1969 - niv. 135, pp. 237-240.
495. KERVARKER. - Bosenn Eliant (kemp. gt R. HEMON). - 1969 - niv. 134, pp. 175-177.
496. KERVARKER. - Ar bugel laeret (kemp. gt R. HEMON). - 1969 - niv. 135, pp. 240-242.
497. KERVARKER. - Buhez Sant Ronan (kemp. gt R. HEMON). - 1970 - niv. 143, pp. 458-461.
498. KERVARKER. - Diougan Gwenc'hlan (kemp. gt R. HEMON). - 1969 - niv. 134, pp. 183-185.
499. KERVARKER. - Ened Rosporden. - 1974 - niv. 166-167, pp. 344-345.
500. KERVARKER. - Ar goulenn eured. - 1972 - niv. 153, pp. 277- 281.
501. KERVARKER. - An ifern. - 1971 - niv. 149, pp. 303-304.
502. KERVARKER. - Jenovefa Rustefan. - 1974 - niv. 166-167, pp. 346-349.
503. KERVARKER. - Kan ar beorien. - 1974 - niv. 165, pp. 264- 265.
504. KERVARKER. - Kan bale Arzhur (kemp. gt R. HEMON). - 1969 - niv. 134, pp. 174-175.
505. KERVARKER. - Kanaouenn an Anaon. - 1971 - niv. 147, pp. 235-236.
506. KERVARKER. - Kimiad an ene. - 1971 - niv. 147, pp. 231-234.
507. KERVARKER. - Klemmvan Itron Nizon. - 1971 - niv. 146, pp. 383-385.
508. KERVARKER. - Ar gorred. - 1972 - niv. 150, pp. 5-7.
509. KERVARKER. - Ar baradoz. - 1971 - niv. 148, pp. 305-308.
510. KERVARKER. - Ar rannoù (kemp. gt R. HEMON). - 1969 - niv. 134. pp. 177-183.

450

511. KERVARKER. - Sant Eflamm hag ar Roue Arzhur. - 1971 - niv. 145, pp. 83-87.
512. KERVARKER. - Son an daol. - 1971 - niv. 172, pp. 337-338.
513. KERVARKER. - Tour an arvor. - 1971 - niv. 146, pp. 151- 157.
514. UHEL (Fañch an). - An Aotrou ar C'hont. - 1969 - niv. 136, pp. 314-318.
515. UHEL (Fañch an). - An Aotrou Koadriou. - 1970 - niv. 141, pp. 246-250.

516. UHEL (Fañch an). - Ar Barbover hag ar Priñs a gollas e benn o c'hoari hag a c'honzas anezhañ adarre. - 1974 - niv. 163, pp. 101-121
517. UHEL (Fañch an). - Ar bleiz gris. - 1975 - niv. 170, pp. 192-197.
518. UHEL (Fañch an). - Bosenn Elliant. - 1969 - niv. 137, pp. 414-415.
519. UHEL (Fañch an). - Dom Yann Derrien. - 1969 - niv. 137, pp. 407-410.
520. UHEL (Fañch an). - Fañch ar C'halvez. - 1970 - niv. 141, pp. 251-254.
521. UHEL (Fañch an). - Fontanella. - 1970 - niv. 139, pp. 84-87.
522. UHEL (Fañch an). - Frañsoazig ha Perig. - 1969 - niv. 137, pp. 416-418.
523. UHEL (Fañe) an). - Garan ar Briz. - 1969 - niv. 137, pp. 402-406.
524. UHEL (Fañch an). - Gwilhaouig Kalvez. - 1970 - niv. 139, pp. 88-92.
525. UHEL (Fañch an). - Ar wiz ouez. - 1974 - niv. 165, pp. 273- 275.
526. UHEL (Fañch an). - An intañvez paour. - 1969 - niv. 136, pp. 328-330.
527. UHEL (Fañch an). - Izabel ar Yann. - 1970 - niv. 138, pp. 11-16.
528. UHEL (Fañch an). - Janed ar Wern. - 1969 - niv. 136, pp. 319-324.
529. UHEL (Fañch an). - Janedig ar sorserez. - 1969 - niv. 136, pp. 325-327.
530. UHEL (Fañch an). - Kervegan hag an tourello. - 1970 - niv. 141, pp. 242-245.
531. UHEL (Fañch an). - Ar c'horf hep ene. - 1975 - niv. 173, pp. 427-436.
532. UHEL (Fañch an). - Mari Derrienig. - 1970 - niv. 140, pp 187-190.
533. UHEL (Fañch an). - Mari hag Ivonig hag ar Vari-Vorgan. - 1974 - niv. 164, pp. 194-203.
534. UHEL (Fañch an). - Markiz Traonlavane. - 1970 - niv. 140, pp. 172-181.
535. UHEL (Fañch an). - Matelina Troadeg. - 1969 - niv. 137, pp. 411-413.
536. UHEL (Fañch an). - Paotr e bod-houarn. - 1975 - niv. 169, pp. 103-107.
537. UHEL (Fañch an). - Pennhêrez Keroulaz. - 1970 - niv. 140, pp. 182-186.
538. UHEL (Fañch an). - Priñsez ar Velandinenn. - 1974 - niv. 166-167, pp. 417-428.
539. UHEL (Fañch an). - Ar ramz Kolevran. - 1973 - niv. 161, pp. 447-459.
540. UHEL (Fañch an). - Seziz Gwengamp. - 1970 - niv. 138, pp. 17-20.
541. YANN (Yann-Vari ar). - Ar Jouis bras. - 1973 - niv. 159, pp. 295-300.

451

E/VIII - ENVORENNOÙ, DEIZLEVRIOÙ.

542. BENEAD - Breizh bemdez Doue. - 1967 - niv. 122, pp. 227-237.
- 543 BENEAD. - Breizh bemdez Doue. - 1968 - niv. 126, pp. 23-31.
544. EZEL (Yann). - Bugaleaj war an aod. - 1967 - niv. 123, pp. 313-314.
545. EZEL (Yann). - An ened e Douarnenez. - 1967 - niv. 123, pp. 332-336.
546. EZEL (Yann). - Gant an higenn hag ar vuzhugenn : daou enebour : an toenn hag an dalc'h. - 1967 - niv. 123, pp. 319- 320.
547. EZEL (Yann). - Gant an higenn hag ar vuzhugenn : glizigoù bae Douarnenez. - 1967 - niv. 123, pp. 330-331.
548. EZEL (Yann). - Gant an higenn hag ar vuzhugenn : keined ha stronk. - 1967 - niv. 123, pp. 324-325.
549. EZEL (Yann). - Gant an higenn hag ar vuzhugenn : kranked, chevr, legistri. - 1967 - niv. 123, pp. 326-327.
- 550 EZEL (Yann). - Gant an higenn hag ar vuzhugenn : meskl. - 1967 - niv. 123, pp. 328-329.
551. EZEL (Yann). - Gant an higenn hag ar vuzhugenn : un devezh pesketa war ar Garreg Wenn. - 1967 - niv. 123, pp. 321-323.
552. EZEL (Yann) - Gant an higenn hag ar vuzhugenn : ur besketadenn... gouelini. - 1967 - niv. 123, pp. 337-338.
553. EZEL (Yann). - Gant an higenn hag ar vuzhugenn : va fesk kentañ. - 1967 - niv. 123, pp. 315-316.
554. EZEL (Yann). - Linenn, garved, petis. - 1967 - niv. 123, pp. 317-318.
555. JEUSED (Teofil). - Hor bara pemdeziek (Tremenvan ur vroad). - 1967 - niv. 123, pp. 350-366.
556. JEUSED (Teofil). - Hor bara pemdeziek (Tremenvan ur vroad). - 1967 - niv. 124, pp. 405-417.
557. JEUSED (Teofil). - Hor bara pemdeziek (Tremenvan ur vroad). - 1967 - niv. 125, pp. 509-524.
558. JEUSED (Teofil). - Hor bara pemdeziek (Tremenvan ur vroad). - 1968 - niv. 126, pp. 10-22.
559. JEUSED (Teofil). - Hor bara pemdeziek (Tremenvan ur vroad). - 1968 - niv.

127, pp. 101-108.

560. JEUSED (Teofil). - Hor bara pemdeziek (Tremenvan ur vroad). - 1968 - niv. 128, pp. 182-188.

561. KIVIJER. - Tourist dre heg 1945. - 1973 - niv. 159, pp. 251-267.

562. MENN (Herve ar). - Du-mañ gwechall. - 1973 - niv. 159, pp. 268-273.

563. MENN (Herve ar). - Torfed kentañ. - 1969 - niv. 135, pp. 278-280.

452

564. OLIER (Youenn) - A-hed an deizioù : Sul Fask 2 a viz Ebrel. - 1972 - niv. 151, pp. 140-147.

565. OLIER (Youenn) - A-hed an deizioù : Mezheven 1972. - 1972 - niv. 153, pp. 330-337.

566. OLIER (Youenn) - A-hed an deizioù : Genver 1973. - 1973 - niv. 177, pp. 146-156.

567. OLIER (Youenn) - A-hed an deizioù : Eost 1973. - 1974 - niv. 162, pp. 47-55.

568. OLIER (Youenn) - Ehanoù hañv 1970. - 1970 - niv. 141 pp. 299-304.

569. OLIER (Youenn). - Evezhiadennoù a-hed hag a-dreuz : Here 1970. - 1970 - niv. 142, pp. 419-424.

570. OLIER (Youenn). - Evezhiadennoù a-hed hag a-dreuz. - 1971 - niv. 145, pp. 122-127.

E/IX - SKRIDVARNEREZH.

571. ABANNA (G. E.). - Eil tezenn vrezhonek ar c'hantved : eus Gwarizi vras Emer da Vari Vorgan, gant P. KERMOAL. - 1968 - niv. 126, pp. 51-62.

572. ABENNEZ - Enez ar vertuz (roneoskrivet). - 1966 - niv. 115, pp. 147-149.

573. ABENNEZ. - Al levrioù : Tom BARRY : Victoire pour l'armée secrète. - 1966 - niv. 116, pp. 222-223.

574. ABERHEL. - A-dreuz lenn : Alan MOOREHEAD, " Cooper's Creek ". - 1968 - niv. 128, pp. 213-216.

575. ABERHEL. - Al levrioù : Jeneral Moshe DAYAN, " Deizlevr taol-brezel ar Sinai ". - 1966 - niv. 116, pp. 223-225.

576. A. L. - Al levrioù : Youenn OLIER : Enez ar vertuz. - 1966 - niv. 119, pp. 457-458.

577. ANDOUARD (L.). - " Cheticamp " (" Cheticamp, histoire et traditions acadiennes " gant an Tad Anselm Chiasson). - 1970 - niv. 140, pp. 215-219.

578. ANDOUARD (L.). - Al levrioù : Ichtyonymie bretonne, gant Alan Gwenog BERR, Levrenn I. - 1970 - niv. 141, pp. 305-308.

579. ANDOUARD (L.). - Al levrioù : Farming the edge of the sea, gant E. S. IVERSEN. - 1969 - niv. 134, pp. 210-212.

580. ANDOUARD (L.). - Al levrioù : " Ishi e daou ved ", gant Teodora KROEBER. - 1971 - niv. 148, pp. 367-369.

581. BELLAING (Vefa de). - Ul levr nevez gant Ronan HUON : An Irin glas. - 1966 - niv. 116, pp. 217-221.

582. DELAPORTE (R.). - " Le Problème national catalan " (kudenn vroadel Gatalonia) [Tezenn J. ROSSINYOL]. - 1970 - niv. 139, pp. 148-153.

583. EVEN (Arzel). - Skridoù nevez : Roparz HEMON. " Tangi Kerviler, romant - Ho kervel a rin en noz ha marvailhoù all - War ribl an hent, marvailhoù ". - 1971 - niv. 149, pp. 439-443.

584. G. P. - A-dreuz lenn : JACKSON (Kenneth Hurlstone). - " A historical phonology of Breton ". - 1968 niv. 128, pp. 208-212.

585. G. P. - Al levrioù : A-zivout embannadur ar c'hCatholicon. - 1969 - niv. 136, pp. 360-362.

453

586. G. P. - Al levrioù : Pierre TREPOS. " Grammaire bretonne ". - 1968 - niv. 130, pp. 358-360.

587. HEUSSAFF (Alan). - Al levrioù : Levr-bloaz ar c'hevrenn keltiek, 1966 : " Recent developments in the Celtic countries ". - 1966 - niv. 118, pp. 380-382.

588. HUON (R.) ; MARTIN (I.) ; OLIER (Y.) ; PENNEG (P.). - A-dreuz lenn : LEWIS (Saunders) " Cymru fydd " - PARRY (Gwenlyn) " Saer Doliau " - BREKILIEN (Yann) " La révolte des tracteurs " - BARZHIG (Ernest ar) " Loeiz Lezongar " - FOUERE (Yann) " L'Europe aux cent drapeaux ". - 1968 - niv. 129, pp. 279-283.

589. HUON (Ronan). - Skridoù nevez : Un dibab barzhonegoù divyezhek (" Défense de cracher par terre et de parler breton ", Y. B. PIRIOU). - 1971 - niv. 149, pp. 444-446.
590. I. M. - Nenn Jani. - 1974 - niv. 165, pp. 322-324.
591. KERVELLA (F.). - Brezhoneg lakaet da zanvez studi (F. BROUDIC, " Roll al leoriou hag ar pennadoù bet embannet e brezoneg e 1973 ", STUDI I). - 1975 - niv. 168, pp. 42-50.
592. KERVELLA (F.). - Al levrioù : Deskiñ brezhoneg (Fañch MORVANNOU : " Le Breton sans peine "). - 1975 - niv. 171, pp. 307-312.
593. KERVELLA (F.). - Ur studiadenenn diwar-benn anvioù-lec'h Breizh (Bernard TANGUY : " Les noms de lieux bretons. I. Toponymie descriptive ", STUDI niv. 3). - 1975 - niv. 173, pp. 463-467.
594. KLER (Jord). - Al levrioù : Le Kurdistan ou la mort, R. MAURIES. - 1967 - niv. 125, pp. 525-526.
595. KLER (Jord). - Al levrioù : " The great hunger " (La grande famine), Cecil WOODHAM-SMITH. - 1966 - niv. 117, pp. 309-311.
596. KONGAR (Kenan). - Diwar-benn un toullad skridoù nevez (AL 114, " Enez ar vertuz " gant Y. OLIER, ABK). - 1966 - niv. 115, pp. 142-146.
597. KONGAR (Kenan). - Lennadennoù 1974 (Skol louarn Veig Trebern III- Preder, kaier 161-162 Douaroniezh - Skrid 1, 2, 3 - Ar mallozhioù ruz, Y. B. PIRIOU - Kanenn d' ar vuhez, Sten KIDNA - Frañsez DEBAUVAIS de Breiz Atao et les siens, I, Anna YOUENOU). - 1974 - niv. 166-167, pp. 443-453.
598. KONGAR (Kenan). - Oberoù Mabig Eflamm (skridoù Mabig Eflamm embannet gant an Ao. GALL, person Evias). - 1975 - niv. 172, pp. 393-394.
599. LAOUENAN (R.). - Al levrioù : " Le trésor du breton parlé ", Jules GROS. - 1966 - niv. 117, p. 311.
600. AL LEVRIOÛ : Da Goadmoc'han gwitibunan, YELLEN - 1966 - niv. 118, p. 380.
601. AL LEVRIOÛ : Hor Yezh (niv. 52-53, 54, 55, 56, 57). - 1969 - niv. 136, pp. 362-363.
602. AL LEVRIOÛ : Irish for the people, gant Proinsias MAC AN BHEATHA. - 1967 - niv. 120, p. 124.
603. MENN (Gwennole ar). - Diwar-benn an anvioù lec'h (levr Bernard TANGUY, s.o. 593). - 1975 - niv. 173, p. 467.
604. MENN (Gwennole ar). - Diwar-benn an anvioù tud (5 000 patronymes bretons francisés, gant Marcel DIVANAC'H). - 1975 - niv. 173, p. 468.
- 454
605. OLIER (Youenn). - ABEOZEN, " Pirc'hirin kala-goañv ". 1969 - niv. 133, pp. 124-128.
606. OLIER (Youenn). - A-dreuz lenn : KERMOAL (P.), " Eus gwarizi vras Emer da vMari Vorgan ". - 1968 - niv. 128, pp. 207-208.
607. OLIER (Youenn). - Al levrioù : MAC AMHLAIGH (Donald) " Saol saighdiura ". - 1966 - niv. 114, p. 66.
608. O paouez dont er-maez (Dictionnaire étymologique du Breton ancien, moyen, moderne, gant Ch. J. GUYONVARG'H). - 1974 - niv. 165, pp. 325-326.
609. P. D. - Al levrioù : Gerald MORGAN, " The dragons tongue ". - 1966 - niv. 119, pp. 460-461.
610. PENNAOD (G.). - Adnotennoù yezh. " Les fragments de la Destruction de Jérusalem et des Amours du vieillard " (texte en moyen-breton) traduits et annotés par Roparz HEMON et supplément établi avec la collaboration de Gwennolé Le MENN - 1968 - niv. 134, pp. 219-224.
611. PENNAOD (Goulven). - Al levrioù : Barzhaz-hud ur gwenedour, gant AbENNEZ - 1966 - niv. 118, pp. 378-379.
612. PENNAOD (Goulven). - Al levrioù : G. Esnault, " Danvez geriadur ". - 1966 - niv. 119, pp. 458-460.
613. PENNAOD (Goulven). - Al levrioù : Istor ha politikerezh (Hervé le BOTERF, " La Bretagne dans la guerre " - Ronan CAERLEON " La Révolution Bretonne permanente " - Yann BEUZEC " Le Dossier Breton "). - 1969 - niv. 133, pp. 144-148.
614. PENNAOD (Goulven). - Al levrioù : Margaritas ante portos - Roparz HEMON, Geriadur istorel ar Brezhoneg, levrenn 10 Ganedigezh-Gouelañ. - 1966 - niv. 114, pp. 63-65.
615. PENNAOD (Goulven). - Al levrioù : Roparz HEMON A historical morphology and syntax of Breton. - 1975 - niv. 171, pp. 313-316.

616. PENNEG (Per). - Un Alarc'h, un Alarc'h tre mor... : Ur sell nevez ouzh politikerezh an dug Yann IV (Michael JONES "Ducal Brittany 1364-1399, relations with England and France during the reign of Duke John IV "). - 1973 - niv. 157, pp. 136-139.
617. PENNEG (Per). - Dek broad " berzet " e kornog Europa (Le Nazioni proibite, Guida adieci colonie " interne " dell Europa occidentale), Sergio SALVI. - 1973 - niv. 160, pp. 380-383.
618. PIRIOU (Yann-Ber). - Al levrioù : La vie quotidienne des paysans en Bretagne au XIXe siècle, gant Yann BREKILIEN. - 1966 - niv. 118, p. 383.
619. PLOURIN (Y.-E.). - Skol louarn Veig Trebern. - 1972 - niv. 1955, pp. 513-515.
620. P. P. - Al levrioù : Preder, kaier 88-90. - 1968 - niv. 126, pp. 63-66.
621. ROC'H-VUR. - Al levrioù : " The story of the Cornish language " (E.G.R. HOOPER). - 1969 - niv. 134, pp. 212-213.

455

E/X - STUDIADENNOÙ A LENNEGEZH.

622. EVEN (Arzel). - Faltazi Roparz HEMON (Tem an dec'hadenn). - 1970 - niv. 142, pp. 334-344.
623. GLANNDOUR (Maodez). - " Kanoù en noz ". - 1975 - niv. 171, pp. 252-259.
624. GLANNDOUR (Maodez). - Barzhoniezh maread Gwalarn. - 1967 - niv. 124, pp. 423-433.
625. KERMOAL (Joelle). - " An dour en-dro d'an inizi ", Y. DREZEN. - 1972 - niv. 151, pp. 148-151.
626. KERMOAL (Pierrette). - NIKOLAEVA : " An ijinour Baxirev ". - 1971 - niv. 145, pp. 104-116.
627. KERVELLA (Riwanon). - Ar romantoù polis. - 1968 - niv. 131, pp. 425-431.
628. KONGAR (Kenan). - Lennadennoù (I. - A. Even, R. Hemon ; II - J. Riou, J. Kerrien, Y. Drezen, Y. ar Floc'h, I. Kraf, A. Kristof Jezegou, Y. V. Henou ; III - J. Riou, Y. Drezen ; IV - Barzhaz Gwalarn 1934, Kerverziou, J. Riou, Y. Drezen ; V - Koun Y. Drezen). - 1972 - niv. 151, pp. 128-140.
629. Oberoù Youenn DREZEN. - 1972 - niv. 151, pp. 113-116.
630. O GLAISNE (Ristead). - Talvoudegezh al lennegezh iwerzhonek. - 1967 - niv. 120, pp. 47-56.
631. OLIER (Erwan). - E ser oberenn Lan Inizan " Emgann Kergidu ". - 1971 - niv. 148, pp. 342-350.
632. OLIER (Youenn). - Displegadenn : Lennegezh ha deskadurezh. - 1966 - niv. 116, pp. 204-210.
633. OLIER (Youenn). - Prederiadennoù e-sigur un nebeut skrivagnerion vrezhonek ; Jarl PRIEL : e c'hoariva. - 1972 - niv. 114, pp. 42-45.
634. OLIER (Youenn). - Prederiadennoù e-sigur un nebeut skrivagnerion vrezhonek ; Jarl PRIEL : e eñvorennoù. - 1966 - niv. 119, pp. 434-439.
635. P. ar M. - Adarre Barzhaz Breizh. - 1974 - niv. 162, pp. 44-46.
636. Ur skoliad eus SADED. - ABEOZEN gwelet gant skolidi SADED. - 1966 - niv. 116, pp. 211-216.
637. Ur skoliad eus SADED. - LANGLEIZ gwelet gant skolidi SADED. - 1968 - niv. 128, pp. 189-197.
638. Ur skoliad eus SADED. - Maodez GLANNDOUR gwelet gant skolidi SADED. - 1966 - niv. 114, pp. 46-50.
639. Ur skoliad eus SADED. - Meven MORDIERN gwelet gant skolidi SADED. - 1970 - niv. 138, pp. 47-50.
640. Ur skoliad eus SADED. - Youenn DREZEN gwelet gant skolidi SADED. - 1970 - niv. 139, pp. 139-144.

F. - ISTOR HA DOUARONIEZH.

F/I - ISTOR DRE VRAS.

641. DUBOURG (Gwilherm). - An desavadurezh. - 1968 - niv. 127, pp. 132-141.
642. KERNEVE (Ronan). - Ar Menez-Gwenn trec'het. - 1967. - niv. 122, pp. 238-247.
613. ROPARZ (Dr). - Ur sell war istor ar margodennoù. - 1968 - niv. 130, pp. 319-326.

644. FRELAUT (LUkaz). - Prederiadennoù (Diskleriadur ar Strollad Broadel). - 1973 - niv. 165, pp. 284-285.
645. KLER (Jord). - Kadoudal pe distresadenn an istor. - 1971 - niv. 149, pp. 419-425.
646. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : An Dugiezh gant lignez Penteur : Ar Saozon o stourm ouzh Breizh, 1148-1213 (tr. Roparz HEMON). - 1971 - niv. 146, pp. 191- 197.
647. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : An Dugiezh gant lignez Penteur : Mac'homerezh Berri II hag eneberezh ar Vretoned (tr. Roparz HEMON). - 1971 - niv. 147, pp. 274-282.
648. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : An Dugiezh gant lignez Penteur : Ren an dug Jafrez II, 1181-1186 (tr. Roparz HEMON). - 1971 - niv. 148, pp. 351-356.
649. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : An Dugiezh gant lignez Penteur : An dugez Konstanza hag an dug Arzhur II, 1186-1203 (tr. Roparz HEMON). - 1971 - niv. 149, pp. 426-433.
650. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : An Dugiezh gant lignez Penteur : Ar Saozon argaset diouzh Breizh ha Frañs (tr. Roparz HEMON). - 1972 - niv. 149, pp. 38-45.
651. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : Pempvet marevezh : Ar remziad gall, kresk beli an duced, 1313-1364, Per Dreux lesanvet Brizhkloareg, 1213-1237 (tr. Roparz HEMON). - 1972 - niv. 152, pp. 232-240.
652. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : Pempvet marevezh : An dug Per Dreux lesanvet Brizhkloareg, 1213-1237 (tr. Roparz HEMON). - 1972 - niv. 153, pp. 320-329.
653. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : Pempvet marevezh : An dug Per Dreux lesanvet Brizhkloareg, 1213-1237 (tr. Roparz HEMON). - 1972 - niv. 154, pp. 418-426.
654. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : Pempvet marevezh : An dug Per Dreux lesanvet Brizhkloareg, 1213-1237 (tr. Roparz HEMON). - 1972 - niv. 155, pp. 493-503.
655. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : Hêr Per Brizhkloareg, an dug Yann Rous, 1237-1286 (tr. Roparz HEMON). - 1973 - niv. 157, pp. 140-145.
656. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : An dug Yann Rous, 1237-1286 (tr. Roparz HEMON). - 1973 - niv. 158, pp. 203-206.
657. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : An dug Yann Rous, 1237-1286 (tr. Roparz HEMON). - 1973 - niv. 159, pp. 301-310.
658. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : An dug Yann Rous, 1237-1286 (tr. Roparz HEMON). - 1973 - niv. 160, pp. 370-376.
659. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : Warlerc'hidi Yann Rous, an dug Yann II, 1286-1305 (tr. Roparz HEMON). - 1973 - niv. 161, pp. 460-468.
660. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : Warlerc'hidi Yann Rous, an dug Yann II, 1286-1305 (tr. Roparz HEMON). - 1974 - niv. 162, pp. 33-43.

661. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : Warlerc'hidi Yann Rous, an dug Yann II, 1286-1305 (tr. Roparz HEMON). - 1974 - niv. 163, pp. 139-145.
662. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : Warlerc'hidi Yann Rous, an dug Arzhur II, 1305-1312 (tr. Roparz HEMON). - 1974 - niv. 164, pp. 204-214.
663. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : Warlerc'hidi Yann Rous, an " Dug Mat " Yann III, 1312-1341 (tr. Roparz HEMON). - 1974 - niv. 165, pp. 295-304.
664. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : Warlerc'hidi Yann Rous, an " Dug Mat " Yann III, 1312-1341 (tr. Roparz HEMON). - 1974 - niv. 166-167, pp. 429-442.
665. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : Brezel Bleaz ha Monforzh, 1341-1364 (tr. Roparz HEMON). - 1975 - niv. 168, pp. 24-32.
666. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : Brezel Bleaz ha Monforzh, 1341-1364 (tr. Roparz HEMON). - 1975 - niv. 169, pp. 112-117.
667. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : Brezel Bleaz ha Monforzh, 1341-1364. Kentañ maread : derou ar stourm, 1341-1343 (tr. Roparz HEMON). - 1975 -

niv. 170, pp. 205- 216.

668. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : Brezel Bleaz ha Monforzh, 1341-1364. Kentañ maread 1341-1343 (tr. Roparz HEMON). - 1975 - niv. 172, pp. 381-392.

669. LA BORDERIE (Arthur de). - Istor Breizh : Brezel Bleaz ha Monforzh, 1341-1364. Kentañ maread 1341-1343 (tr. Roparz HEMON). - 1975 - niv. 173, pp. 451-455.

670. LEC'HVIEN (J.). - Gwirioù Breizh ha kelennadur ar babed. - 1969 - niv. 135, pp. 288-295.

671. MENN (Herve ar). - An avaloù-douar dre zu-mañ. - 1972 - niv. 150, pp. 46-53.

672. Skolidi eus SADED. - An eil emsav sevenadurel gwelet gant skolidi SADED. - 1968 - niv. 140, pp. 210-214.

Gwelout ivez : 597, 613, 616, 618.

F/III - ISTAR AR BROIOÙ KELT.

673. CHEREL (Gab). - Ar verdeadurezh vrezhon ha kelt. - 1969 - niv. 134, pp. 199-206.

674. HEUSAFF (Alan). - Un alberz eus Istor Iwerzhon. - 1967 - niv. 120, pp. 62-88.

675. O SNODAIGH (Padraig). - Notennoù diwar-benn an emgann evit an dieubidigezh el lennegezh iwerzhonek. - 1967 - niv. 120, pp. 34-46.

676. O SNODAIGH (Padraig). - Republik Iwerzhon (1914-1922). - 1967 - niv. 120, pp. 89-104.

Gwelout ivez : 573, 595.

458

F/IV - ISTAR AR BROIOÙ ALL.

677. KLER (Jord). - War roudoù ar Fenikianed. - 1968 - niv. 129, pp. 251-260.

678. PENNEG (Per). - Dre ar youl, ar c'hwezenn hag ar gwad : Ur sell war istor an emsav sionour. - 1972 - niv. 154, pp. 390-410.

679. PENNEG (Per). - Ur bobl dizouar : Planedenn griz Tartared Krimea. - 1973 - niv. 158, pp. 207-219.

Gwelout ivez : 574, 575, 577, 580, 582, 617.

F/V - BOAZIOÙ KOZH.

680. BLACKBURN ha CALDECOTT. - Pardon Sant Yann Plougastell (tr. Herve ar MENN, tennet eus Breton Folk 1878). -1966 - niv. 117, pp. 289-290.

681. DREZEN (Youenn). - Karnag : kredennoù ha boazioù kozh. -1966 - niv. 117, pp. 286-288.

F/VI - LEC'HIOÙ BREIZH.

682. BARZHIG (Ernest ar). - Mur e Breizh-Izel. - 1968 - niv. 130, pp. 337-346.

683. BIHANIG (Loeiz). - An troc'hañ-tali war aodoù Bro-Leon. - 1968 - niv. 126, pp. 38-41.

684. EZEL (Yann). - Ur porzh mor : Treboul. - 1967 - niv. 123, pp. 339-341.

685. EZEL (Yann). - Ur ouenn a dud : Douarneneziz. - 1967 niv. 123, pp. 310-312.

686. EZEL (Yann). - Ploare. - 1967 - niv. 123, pp. 346-347.

687. EZEL (Yann). - Un tour kaer : Ploare. - 1967 - niv. 123, pp. 342-344.

688. EZEL (Yann). - Lec'hioù Breizh : Douarnenez. - 1967 - niv. 123, pp. 307-309.

689. GARGADENNEG (Roje). - Ar C'hab-Sizhun. - 1969 - niv. 137, pp. 427-438.

690. MEE-CHEREL (Nannig ar). - Ar Merzher. - 1970 - niv. 142, pp. 400-401.

F/VII - BROIOÙ KELT.

691. ANDOUARD (L.). - Ur vroig eus Iwerzhon : " Korka-Givne ". - 1968 - niv.

127, pp. 109-124.

692. HEUSAFF (Alan). - Douaroniezh Iwerzhon. - 1967 - niv. 120, pp. 112-120.

693. SANZ JORDANA (P.). - Kalaikia, douar kelt e Bro-Spagn (tr. Per ar BIHAN). - 1966 - niv. 115, pp. 132-134.

F/VIII - BROIOÙ ALL

694. THIBAULT (Pilan). - Bro-Gebek e kroaz an hentoù. - 1972 - niv. 153, pp. 307-311.

695. THIBAULT (Alan). - Skandinavia : Un taol arnod sokialour deut da vat ? - 1971 - niv. 145, pp. 117-121.

459

F/IX - DANEVELLOÙ BEAJ.

696. ANDOUARD (L.). - E Breizh hiziv... "The light that failed " pe Danevell ur veaj da enez Eusa. - 971 - niv. 148, pp. 357-366.

697. ANDOUARD (L.). - E Breizh hiziv.. : War Kent Bulad. - 1971 - niv. 147, pp. 283-289.

698. BEAUGRAND (Agnes). - E Larzac. - 1974 - niv. 165, pp.293-294.

699. BOUDIN (Eugène). - War an hent da Vreizh (gant un notenn), - tr. Herve ar MENN. - 1970 - niv. 139, pp. 107-125.

700. CHOQUER (F.). - Gouelec'h Doue. - 1974 - niv. 165, pp. 286-292.

701. DRED (Y. an). - Un droiad e Jerze. - 1971 - niv. 144, pp. 11-18.

702. HEMON (Roparz). - Eñvorennoù eus Breizh-Veur (1919-1920). - 1973 - niv. 160, pp. 330-350.

703. HEUSAFF (Alan). - Donemat d' an estrañjourien. - 1971 - niv. 149, pp. 400-418.

704. KERVELLA (Erwan). - Un dro-vale. - 1971 - niv. 144, pp 31-40.

705. KLER (Jord). - Pask e Dulenn. - 1966 - niv. 118, pp. 328-336.

706. MADEG (Mikaeg). - Un veaj e Bro-Skos. - 1969 - niv. 134, pp. 195-198.

707. MENEZ KELDREG (Reun). - Va zroidad e Perou. - 1974 - niv. 163, pp. 122-138.

708. NAILH (Bernez an). - Daou-ugent mil kilometr e Su-Amerika. - 1972 - niv. 154, pp. 411-417.

709. NAILH (Bernez an). - Daou-ugent mil kilometr e Su-Amerika. - 1972 - niv. 155, pp. 480-492.

710. OLIER (Youenn). - Un dro e Kembre. - 1970 - niv. 140, pp. 201-209.

G. - DIWAR-BENN AN NATUR.

711. DRED (Y. an). - Al loened gouez e Breizh chaseet evit o c'hrec'hen. - 1966 - niv. 117, pp. 276-285.

712. FLOC'H (Loeiz). - Ar yec'hed dre al louzoù (aozet gant J. KLER). - 1968 - niv. 127, pp. 127-131.

713. GELLEG (Andrev). - Renkañ al laboused. - 1975 - niv. 170, pp. 217-223.

714. KIVIJER. - Eñvorennoù ur c'hlaser-neizhi (& geriadur al laboused). - 1974 - niv. 166-167, pp. 374-385.

Gwelout ivez : 579.

H. - DIWAR-BENN TUD 'ZO.

715. ARRUE (Antonio). - Ur barzh euskarek a-vremañ : Jon Mirande Aypharoso (tr. G. P.). - 1966 niv. 116, pp. 200-203.

716. AbENNEZ. - Gandhi. - 1966 - niv. 118, pp. 337-344.

460

717. ABERWAN. - Un diouganer. - 1967 - niv. 121, pp. 155-167.

718. BARZHIG (Ernest ar). - Marvailhoù Andersen. - 1969 - niv. 137, pp. 439-445.

719. BELLAING (Vefa de). - Paol Ladmirault. - 1966 - niv. 116, pp. 190-193.

720. BELLAING (Vefa de). - Ar beder flac'h roet dezho priz Nobel al lennegezh. - 1967 - niv. 122, pp. 248-258.

721. BELLAING ~ (Vefa de). - Samuel Becket. - 1969 - niv. 137, pp. 446-450.

722. BENEAD. - Itron Sant Per. - 1968 - niv. 128, pp. 32-37.

723. BENEAD. - Piv a skrivo buhez an Tad Presse ? - 1966 niv. 114, pp. 52-54.
724. BIHAN (Per ar). - O vont davet an eñvorennoù. - 1975 niv. 171 - pp. 260-263.
725. BOURDELLES (Per, beleg). - Ur gwir veleg. - 1972 - niv. 150, pp. 25-30.
726. CORMERAIS (Yann). - Yeun ar Gow : An den hag ar brezhoneger. - 1966 - niv. 115, pp. 86-92.
727. Deiz-ha-bloaz. - 1973 - niv. 157, p. 83.
728. DENEZ (Per). - Arzel Even. - 1973 - niv. 156, pp. 5-43.
729. DENEZ (Per). - Ur breur. - 1974 - niv. 165, p. 276.
730. DENEZ (Per). - Diwar-benn Fañch an Uhel. - 1969 niv. 136, pp. 309-313.
731. DENEZ (Per). - Emily Dickinson. - 1967 - niv. 125, pp. 499- 508.
732. DENEZ (Per). - Walter Scott romantour keltiek. - 1968 - niv. 130, pp. 327-336.
733. ETIENNE (G.). - Ankou Arzel Even. - 1972 - niv. 150, pp. 20-24.
734. EVENOU (Erwan). - Alda do Espirito Santo, barzhez afrikat. - 1967 - niv. 121, p. 138.
735. FLEURIOT (Leon). - Arzel Even, Armañs ar C'halvez. - 1972 - niv. 151, pp. 152-154.
736. FOIX (J.). - Ur c'hamalad am boa. - 1968 - niv. 129, pp. 261-263.
737. FRELAUT (B.). - Lukaz Frelaut (1944-1972), tr. Y.-E. ABALAN. - 1974 - niv. 165, pp. 277-279.
738. GARGADENNEG (R.). - Labourat evit Breizh... e Breizh. - 1970 - niv. 138, pp. 34-36.
739. GLANNDOUR (Maodez). - Tangi Malmanche ha " Spered ar Vro ". - 1973 - niv. 160, pp. 362-364.
740. GWEGEN (Andrev). - Treiñ da wir huñvre ur bed marzhus (br. gant A. LATIMIER). - 1973 - niv. 157, pp. 103-106.
741. GWILCHER (A.). - Eñvorennoù war Youenn Drezen. - 1972 - niv. 151, pp. 126-127.
742. HEMON (Roparz). - Va c'heneil Langleiz. - 1975 - niv. 171, pp. 248-251.
743. HEMON (Roparz). - Youenn Drezen (14 Gwengolo 1899 - 15 C'hwevrer 1972). - 1972 - niv. 151, pp. 103-112.
744. HEUSSAFF (Alan). - O'Donnovan Rosa : Diouzh ar marv e tiwan ar vuhez. - 1970 - niv. 139, pp. 126-138.
745. HUON (Ronan). - Va c'henlabour gant Langleiz. - 1975 - niv. 171 - pp. 243-247.
746. Irish Times. - Sean O Riordain. - 1967 - niv. 120, pp. 13-14. 461
- 461
747. Kañv (e koun A. Even, A. ar C'halvez, Y. Drezen). - 1972 - niv. 150, pp. 10-11.
748. KERDAAON (Mikaela). - Tangi Malmanche. - 1968 - niv. 114, pp. 33-41.
749. KERMOAL (Pierrette). - James Baldwin (skrivagner amerikan). - 1970 - niv. 142, pp. 394-399.
750. KERVENDAL (Frañseza). - Mervel. - 1970 - niv. 151, pp. 155-162.
751. KERVENDAL (Frañseza). - Ar renour kadarn Martel Guieysse. - 1967 - niv. 121, pp. 199-201.
752. KERVILIO (Eflamm). - Ur gerig diwar-benn James Connolly ha " Goanag Iwerzhon ". - 1975 - niv. 172, pp. 372-376.
753. KONGAR. - Yeun ar Gow hag ar brezhoneg. - 1966 - niv. 116, pp. 187-189.
754. KONGAR. (Kenan). - Kerlann evel ma 'm eus e anavezet. - 1970 - niv. 138, pp. 21-33.
755. LANGLEIZ. - E koun Youenn Drezen skrivagner ampart ha mignon feal. - 1972 - niv. 151, pp. 117-125.
756. LAOUENAN (Rojer). - Ugent miz e-kichen Yeun ar Gow. - 1966 - niv. 115, pp. 93-94.
757. NAILH (Bernez an). - Heinrich Böll. - 1970 - niv. 141, pp. 288-289.
758. NOTENNOU. : Frank O Connor, Sean O Riada, Liam O Flaithearta. - 1967 - niv. 120, p. 123.
759. OLIER (Youenn). - E koun ur mignon. - 1972 - niv. 150, pp. 12-19.
760. O SNODAIGH (Padraig). - Padraig Mac Piarais. - 1967 - niv. 120, pp. 105-110.
761. PENNAOD (Gaid). - Ich hatte einen Kameraden. - 1967 - niv. 122, pp. 259-261.

762. PENNAOD (Goulven). - Ondra Lisohorsky barzh ha dasorc'her al lacheg. - 1967 - niv. 123, pp. 287-290.
763. PIATT (Don). - Padraig Pearse barzh ha speredeg. - 1967 - niv. 120, pp. 57-61.
764. PIRIOU (Y.-B.). - Kan ar skrilhed e Traon an Dour. - 1967 - niv. 121, pp. 168-179.
765. X... - Panait Istrati. - 1968 - niv. 129, pp. 245-246.

Gwelout ivez : 645.

NOTENNOÙ

Hor Mignoned

Laouen eo Riwanon JESTIN o kemenn ganedigezh he breurig Gurvan, Derrien, e Landernev d' an 8 a viz Eost 1976.

Bernez KADORED hag Odile KOZHIG a zo laouen o kemenn ganedigezh o mab Mael, d' ar 16 a viz Here 1976 e Montgeron (91230).

Ernest ar BARZHIG a zo laouen o kemenn ganedigezh e vab-bihan Ronan, Yann-Vari, Erwan, Dominig MAGON de SAINT-HELIER e Sant-Brieg, d' an 31 a vlz Here 1976.

Youenn hag Anna PHILIPPE a zo stad enno o kas keloù eus ganedigezh o c'hoar Katell, e Karaez, d' an 30 a viz Du 1976.

D' hon holl vignoned, hor gourc'hemennoù kalonek, ha gwellañ hetoù d' ar re vihan.

Kañv

Klevet hon eus keloù marv Job BERTHO, Drouiz Ab ALBE, e Roz-en-Arvor. Ne oa nemet 55 bloaz, hag ur skoazeller feal d' Al Liamm e oa adalek derou ar gelaouenn.

Skoet eo bet ivez Ronan GUIOMARD, un emsaver taer anezhañ, gant ur marv trumm en Evry (91000) d'an 28 a viz Here, 52 vloaz dezhañ hepken. Douaret eo bet e Sant-Konan. E-touez hon harperien e oa ivez.

D' an 8 a viz Gwengolo e voe lidet ur servij-kañv e koun an tad HERRY, e Sizhun. Aet eo da Anaon e Kameroun, 51 bloaz dezhañ. Bez' e oa un den hegarat ha feal d' ar brezhoneg : koumanantet e voe d' Al Liamm ha da vBarr-Heol.

D' an tiegezhioù glac'haret, hor mantrusañ gourc'hemennoù-kañv.

Profoù

MIZ HERE :

J Martini, 5 lur ; Yann Mouton, 3 ; G. Monroy, 5 ; R. Treger, 10 ; Padrig Herve, 65 ; P. Lemoine, 15 ; L. Guillaumie, 10 ; Ch. Gaonac'h, 15 ; Y. Bouessel du Bourg, 40 ; M. Aodig, 15 ; A. Gwilhou, 115 ; Pat. ar Rouz, 15 ; R. Ansker, 35 ; J. Keineg, 15 ; M. ar C'ham, 50 ; Yvon Herve, 35 ; L. Le Breton, 5 ; It. Langleiz, 15 ; Per an Digerc'her, 5 ; G. Rolland, 65 ; G. Boivineau, 50 ; F. Marker, 15 ; Gab Mer, 15 ; H. Piette, 5 ; A. Moreau, 15 ; Job Morvan, 15.
- War un dro, 723 lur.

Mis DU :

Yann Tillenon, 100 ; Yann Bouessel du Bourg, 50 ; Per Denez, 10 ; Loig Chapel, 400 ; Roje an Du, 10 ; Per Jegou, 5 ; Yann Jord Konan, 30 ; Jozef Kotel, 5 ; J. B. an Deunff, 15.
- War un dro, 625 lur.

Anaoudek-bras omp e-keñver hor skoazellerien.
Degemeret hon eus, abaoe derou ar bloaz, 7 707,41 lur a brofoù.

463

Priz ar c'houmanant

Rankout a rimp kreskiñ priz ar skodenn-vloaz e 1977. 40 lur e kousto ar c'houmanant, ha 30 lur evit ar studierien, kloareged, tud dilabour, tud oc'h ober o c'hoñje.

Daoust da vezañ kavet lennerien nevez, n' eo ket dreist c'hoazh stad ar c'hef. Priz ar moulañ a zo uheloc'h-uhelañ bepred, kresket ivez priz ar mizoù-post, ha warlene hor boa endeo sammet un tamm dle...

Lizhiri

Digant K. P., Brest :

« Deskiñ a ran brezhoneg er skol (lise Kerichen, Brest) ha c'hoant am eus en em varrekaat war va yezh : setu perak e kasan deoc'h va c'houmanant evit ho kelaouenn Al Liamm. »

Digent A. J., Pluguen :

« Plijout a ra din Al Liamm abaoe pell 'zo. Setu perak e kasan deoc'h ur chekenn evit daou goumanant, unan evidon hag unan all evit ma c'hoar. »

Digant P. G., Brest :

« Brezhoneger " nevez " ma 'z on, lenn a ran bremañ ho kelaouenn penn-da-benn, pe dost, setu perak e kasan deoc'h va c'houmanant. Al Liamm a blij din abalamour d' an testennoù lennegel a gaver enni evel just, met ivez, abalamour d' ar vouezh pobled a vez klevet enni muioc'h-mui bremañ, me 'gred. »

Digent D. B., Nizza :

« Ul live uhel a sevenadur en deus Al Liamm, mat-tre, met kentelioù war ar yezh a garfen kaout ivez pe ur geriadur mareadek, alioù resis war ar yezh komzet. »

Digent an Tad A. P., o chom e Sri Lanka :

« ... A-barzh nemeur, dre an Tad J. C., e vennis paeañ dek koumanant-bloaz muloc'h d' Al Liamm ; setu war-dro 30 bennak hag o devo degemeret ar gelaouenn. Ma rafe pep brezhoneger emskiantek kemend-all e vije milieroù a goumananterien d' ho kelaouenn. »

Digant D. J. :

« Gant plijadur e resevan Al Liamm bep daou viz. Ha pezh a blij din eo e vez kavet enni un tamm a bep tra. Siwazh em eus keuz e vez graet gant ar skritur " hengounel ". Ma vije degemeret gant Al Liamm ar poentoù emglev, e harpfe marteze da welout diskoulm " brezel " an doareoù-skrivañ. »

464

Digant Y. T. :

« Kevret e kavot ur chekenn 100 lur evit talvezout da brof d' Al Liamm. A-benn ar fin e chom ho kelaouenn unan eus ar re rouez-kenañ a zo lennadus e

brezhoneg ! Ken evit a sell ouzh ar yezh hag an doare ma 'z eo kinniget.

Pouezus-kenañ eo ar c'hinnigadur. Tu 'zo d' en em c'houlenn ha n' eo ket ober goap ouzh ar boblañs ar pezh a vez embannet gant tud 'zo er vro.

Ar pezh a vank e-barzh Al Liamm koulskoude, ez eo un nebeut pennadoù damkanel a c'hellfe ober eus ar gelaouenn unan un tammig emsavel ! »

Digant J. M., Plounevez-Lokrist (lakaet e K.L.T.G.) :

« Ne gredan ket ez eo hepken ur gudenn a zoare-skrivañ hag a laka hor yezh da vervel, met ivez menozioù politikel a gleiz hag a vez embannet er c'hazetennoù ha kelaouennoù skrivet e brezhoneg penn-da-benn.

Da skouer :

Koumanantet on da " Bobl Vreizh ". Skrivet mat eo ar gelaouenn viziek-mañ ha brezhoneg mat a zo enni. Siwazh ez eo breinet gant ar gomunisted. Ar beizanted e Bro-Leon n' int ket komunisted ha n' hellont ket degemer mat na " Pobl Vreizh " nag " Evid ar Brezhoneg "

Ur wech da skouer em eus klasket lakaat ur raklabourer bennak en un atant e Bro-Leon. Goulennet em eus digant an ozhac'h hag-eñ vije ur plas. Respontet eo bet din diouzhtu : « Mann ! N' on ket komunist ».

Dec'h er P.A.C. e Brest em eus gwelet ar film " Nag ar vazh, nag ar vezh ". Memes komzoù am eus klevet gant an dud : « breinet eo gant ar gomunisted » (un itron a 70 vloaz, brezhonegerez a-vihanik, un tenner-dent, brezhoneger a-vihanik, hag ur glañvdiourez a oa ganin).

Pa oan yaouank, e-pad ar brezel diwezhañ, e veze rebechet d' ar re a glaske difenn hor yezh : « Alamanted int !... » Hiziv e klevan : « Komunisted int !... » Atav war an tu fall emaint.

Digarezit ac'hanon ma 'm eus ho feuket un tammig, met klask a ran ober ar gwellañ posupl evit hor bro hag evit hor yezh. »

Digant L. B., 29170 Pluwen :

Setu amañ ar bedenn gozh bet embannet e notennoù niverenn 177 Al Liamm (p. 290), hervez stumm va mamm-gozh ha desket ganti war barlenn he mamm-gozh dezhi - ganet war-dro 1830, 'kichen Benole (Benoded) - ; goût 'ran ez eus c'hoazh ul lod gwerzennoù all n' em eus ket bet tu da zastum betek-hen.

Doe da ma gwele ez an
Tri ael mat a saludan
Daou da ma c'heñver
Un all em penn
Jezuz, Mari, ma c'herent,
Sant Mikael ma ael mat
Lakait ma ene e stad vat
Ene ma mamm, ene ma zad
Ene kement den en deus graet ma droug ha ma mad.
Me 'wel ur c'houlouennig wenn
O vont a-dreist ma fenn
Me 'c'houl ganti pelec'h 'tiskenn
Hi 'ziskenn war Per, war Paol, war Andreu
Santez Mari Madalen
Daouzek gwerz'hez gwisket gwenn
Teir o skrivañ teir o lenn
Teir o lar't chapeledoù,
Teir o sell't ouzh Jezuz 'tremen
Jezuz-Krist 'zo er bed
Staget eo bet gant tachoù dir

Foetet gant foetoù plom
Ken e strinke ar gwad betek an troad.
Mamm a Zoue hag a semplas
Dre ma tisemplas hi a laras :
An hini a ouife hag a larfe
An orezon teir gwech bemdez
Birviken e puñs an ifern ne gouezfe
Nag er mor 'n 'm veuzfe
Nag en tan n'en em zevfe
Nag 'n dour 'n em gonfontafe
Met d'ar baradoz gant Doue 'yafe.

Dastumet e ti Maian al Lae,
ganet er bloaz 1889,
ha chomet e Fouesnant.

Reizhadenn

Dre fazi hor boa skrivet e niverenn 177 Al Liamm (p. 298) e oa bet troet gant Fañch Morvannou pennad Erwan Person " Eus ar c'holonisañ galleg d' an nevez kolonialism ", bet embannet war Ar Falz (niv. 16).

Graet e oa bet un tamm kempenn hepken d'ar brezhoneg gant Fañch Morvannou. Pediñ a reomp Erwan Person d' hon digareziñ.

Embannadurioù Al Liamm

Dont a raio er-maez a-benn nebeut eil embannadur barzhonegoù Ronan Huon " Evidon va-unan ". Embannet e oa bet al levr evit ar wech kentañ e 1955. Klokaet hag adwelet eo bet an dastumad. Ar rakskrid a zo gant Maodez Glanndour. Tu 'zo d' e rakprenañ betek ar 15 a viz C'hwevrer 1977.

Ar priz a zo : 14 lur (12 lur + 2 lur mizoù kas) e-lec'h 16 lur + mizoù kas. War baper kaer niverennet : 20 lur (18 + 2) e-lec'h 23 + mizoù kas.
Goulenn digant Janed Queillé, 47, rue Notre-Dame, 22200 Guingamp - c.c.p. 1136 82 Rennes

Al levrioù all dindan ar wask a zo : " Emgann Kergidu " levrenn I, un dastumad barzhonegoù gant Añjela Duval hag " Itron Varia Garmez " romant brudet Youenn Drezen, ha skridoù all c'hoazh...

466

Priz lennegel Langleiz 1976

D' an 2 a viz Du. ez eo en em vodet juri ar gevredigezh " Priz lennegel Langleiz " e stal labour al livour ha skrivagner breizhat. En-dro d' e wreg ha d' e vab Gaetan edo izili ar strollad-barn ennañ : Maodez Glanndour, Per Roy, Per Denez, Ronan Huon ha Yann Bouessel du Bourg. Vefa de Bellaing ha ne c'helle ket dont he doa roet hec'h ali dre lizher.

Peder oberenn a oa bet kaset, div e komz-plaen ha daou zastumad barzhonegoù.

Ar priz 1 000 lur nevez a zo bet roet da C'houlven Jacq evit e levr (150 pajenn bennak ennañ) " Pinvidigezh ar paour ". Oberenn Goulven Jacq, unan eus hor c'henlabourerien, a zo un testeni fromus ha gwirion war ar baourentez e-tro ar

brezel-bed kentañ. Tremenn a ra e Plougastell.

Ar priz a vo roet d' an oberour d' an 3 a viz Genver 1977, hag al levr a vo embannet moarvat er bloaz a zeu.

Hor gwellañ gourc'hemennoù a gasomp d' hor mignon.

Embannadurioù ha levrioù

Er mizioù diwezhañ eo degouezhet ganeomp :

Emsav niv. 117 (liestennet). Kavout a reer enni, evel boaz, studiadennoù politikel. Notet hon eus en niverenn diwezhañ-mañ ur studiadenn glok ivez diwar-benn romant Abeozen " Hervelina Geraouell ". Pouezañ 'ra saver ar pennad war gudenn ar romant hag e c'hwitadenn (gouez dezhañ) en hol lennegezh.

Niverenn 52 **Brud** a zo anezhi ur strobard barzhonegoù e brezhoneg gant an droidigezh e galleg gant Daniel Trellu. An niverenn-mañ a zo liestennet ivez tra ma oa moulet an niverenn 51 (Kanaouennoù gant P. M. Mevel). N' eus ket mui kalz stumm ur gelaouenn gant "Brud ", peogwir ne gaver enni na studiadenn na notennoù peurvuiañ.

En niverenn 15 ar gelaouenn **Carn** (moulet) hag a zo ul liamm etre ar broadoù keltiek, e kaver pennadoù diwar-benn pep bro geltiek. Skrivet int peurvuiañ e saozneg, met ivez e brezhoneg, iwerzhoneg, kerneveg ha manaveg. Embannet eo gant ar Gaelic League Ar sekretour evit Breizh a zo Jakez Derouet, 89, Bd des Anglais, 44100 Nantes-en-Bretagne.

Deut zo er-maez ivez ul levr barzhonegoù gant Youenn Gwernig, " **An diri dir** ", e brezhoneg, e saozneg hag e galleg, evel m' emañ ar c'hiz. Ul lodenn vat eus ar barzhonegoù-se (An diri dir en o zouez) a zo bet embannet war " Al Liamm ".

Skridoù nevez embannet gant " Imbourc'h "

Nevez deuet er-maez eo an niverenn 77-78-79 a zo gouestlet d' ar Bibl * : 10 lur eo an niverenn-se.

Div stagadenn a zo bet moulet er miz tremennet : un droidigezh eus **Antigone**, eus Sofokles, lakaet e brezhoneg diwar ar gresianeg kozh gant Youenn Olier, hag ur reuzc'hoari diwar bluenn an hevelep skrivagner : **an Diskoulm diwezhel**.

467

Ur ster prederouriezhel ha politikel en deus ar reuzc'hoari-se ha kinniget eo gant ar skrivagner evel ur rakskrid d' e romant " Enez ar Vertuz " embannet dek vloaz 'zo.

A-hend-all ez eo deuet er-maez niverenn 80 (Eost), 81 (Gwengolo), 82 (Here), enno ur bern pennadoù ha notennoù politikel ha yezhoniel : da skouer, Yann-Kel Kernalegenn, Mao, levr Fañch Morvannou, Paol VI, kendalc'h Istor an Emsav, Loeiz Lebret, krouer " Economie et Humanisme " h.a.

Koumanant-bloaz : 35 lur - c.c.p. Y. Ollivier 1534 25 Rennes.

Priz Antigone : 10 lur. - Priz an Diskoulm diwezhel : 20 lur.

* Embannet gant Al Liamm : ar Pevar Aviel, Oberoù an Ebestel, Lizheroù, Diskuliadur hag ar Salmoù (Renerezh : Maodez Glanndour).

Kendalc'h keltiek etrevroadel

Dalc'het e vo ar C'hendalc'h keltiek etrevroadel e Stirling, Bro-Skos, adalek ar 15 a viz Eost 1977 betek an 20. Lojet 'vo an dud er Skol-Veur. Tu, 'vo ivez da lojañ war an dachenn-gampiñ. Ma vez trawalc'h a dud e vo aozet ur veaj e karr-boutin gant Skourr Breizh ar C'hendalc'h.

Diskleriadurioù hag enskrivadurioù : Loig Chapel, Roc'h ar Bleiz, 29210 Morlaix.

Stourm war an dachenn

Brudet eo obererezh ar strollad Radio-Tele-Brezhoneg renet gant Youenn Gwernig, hag a bed ar Vretoned emskiantek da zerc'hel 10 % eus priz o zailh-pellwel da ziskouez pegen feuket int gant al lec'h dister lezet d' hor yezh e skinvaoù ar vro-mañ. Kuzul ar Brezhoneg a en em ziskouez a-du gant an doare-se d' ober, evel just, hag ouzhpenn a c'houlenn petore kefridi resis a zo bet fiziet er c'huzulier dibabet nevez 'zo gant rektor Akademiezh Roazhon d' ober war-dro kelennadurezh ar yezh. War un dachenn all, Glaoda Herri, en anv Evid ar Brezhoneg, en deus gallet diskouez e oa e skol Serval ouzhpenn an hanter eus izili kevredigezh ar pennoù tiegezh a-du gant ur gelennadurezh dereat eus ar yezh. Nebeut goude en deus en ur vodadeg e Lanuon goulennet digant strolladoù ar gostezenn gleiz petra resis ec'h asantfent ober evit ar yezh ma teu an trec'h ganto er botadegoù da zont.

" Lucky Luke... " adarre

Un toullad tud o deus dija roet o sikour da SAE evit ma c'hellfe hi embenn troidigezh vrezhonek MA DALTON. Ra vezint trugarekaet.

N' eo ket trawalc'h, siwazh, evit ma vefe tu da welout an dazont hep re a nec'hamant. Fellet en deus da SAE gwerzhañ an droidigezh-se an hevelep priz hag an destenn orin e galleg, n' hell eta ober tost gounid ebet war ar werzh. O vezañ ma 'z eo ur gevredigezh savet hervez lezenn 1901, he deus SAE diaesterioù evit skignañ he zraoù en tiez-koñvers.

Setu neuze ma ra un eil galv.

Goulenn 'ra dreist-holl ma vefe rakprenet (betek an deiz kentañ a viz Meurzh 1977) skouerennoù, 5 da nebeutañ dre c'houlenn, 12 lur ar skouerenn, ar pezh a ra 80 lur.

Ma c'hell tud 'zo sikour en ur brestañ 500 lur gall (pe ouzhpenn) evit kas a-benn al labour-se, e vo graet dezho al laouenañ degemer.

Goulennoù ha kinnigoù a zo da vezañ graet da : Skol an Emsav, B.P. 1, 22720 Plijidi (chekenoù-bank), pe war ar gont-red post, Skol an Emsav c.c.p. 2844 17 Rennes.

468

Timor. Petra a c'hoarvez er vro-se ?

Petra eo Timor ? unan eus inizi ar Sounda eo, en Okeania. E daou eo bet rannet : ul lodenn dindan veli Indonezia, dezhi 11 900 km², 420 000 a dud o chom warni ; eben, 14 925 km², 520 000 a dud, dindan veli Bortugal. Dont a reas avat, n'eus

ket pell, mare an didrevadenniñ er rann bortugalat da heul ar c'hemm gouarnamant er vro-se. Goude ur brezel diabarzh berr etre daou strollad e teuas buan ar maout gant unan, ar " Frelitin " (Talbenn dispac'her evit dieubiñ Timor).

Petore strollad eo ? « Hon emsav n' eo ket ur strollad politikel, un emsav broadelour ne lavaran ket, e bal unaniñ an holl a c'houl bezañ dizalc'h. Bodañ a reomp tud disheñvel o soñjoù, o c'hredennoù relijiel hag o mennozioù evit diorren an armerzh, » eme Ramos Horta, penn ar Frelitin, e-kerz ur veaj e bro-Aostralia. Eeun eo raklun ar Frelitin : dizalc'hidigezh, dilennadegoù digabestr, frammoù armerzhel, kevredigezhel ha politikel nevez. E soñj emañ ar Frelitin lakaat al labourerien-douar da gompren ez eo ar vroadelouriezh un doare d' en em ziyevañ diouzh an drevadennelezh. Sevel a raer skolioù : skrivet eo al levrioù-skol e tetumeg, ar yezh graet ganti ar muiañ war an enezenn. A-hend-all ec'h aozer kevelourioù, e touller hentoù hag e tiffraoster douar.

Kristen eo an drederenn eus an dud. A-du gant ar reizhiad trevadennel e seblant chom pennoù an Iliz. Hervez un danevell savet gant daou gannad aostrallat e oa 95 % eus ar vro reoliet gant ar Frelitin pa oa bet embannet, d' an 28 a viz Du 1975, krouidigezh Stad Werinel Timor ar Reter. Gwarantet eo gant ar vonreizh ar frankiz relijiel, ar gwir da sevel aozadurioù politikel ; gwirioù par a zo roet d' ar baotred ha d' ar merc'hed, ha d' ar c'henelioù ivez.

Met aon a savas e pennoù ar broioù tro-dro rak kleñved ar werinelezh... Neuze e teuas al lu indoneziat da emellout en abadenn. Bez' ez eus gant ar re-mañ ur skiant-prenet fonnus tapet o stourm a-enep ar gomunourien e Java hag e Bali. Deut eo Indonezia da vezañ " archer " ar c'horn-se, a-du gant ar Stadoù-Unanet (425 milion a zolaroù roet e 1975 evit pourvezañ al lu indoneziat...). En tu-hont da se emeur e sell da gavout eoul-maen hag aezhenn-douar e strad ar mor war-dro Timor.

Evit gwir eo dazont ur vro c'hoant ganti bezañ gwerinel ha dizalc'h da vat hag a seblant bezañ war var bremañ ; koulskoude goude ur mizvezh aloubiñ ne oa deut al lu indoneziat a-benn da vestroniañ nemet un drederenn eus ar vro.

469

Diskouez a ra an darvoudoù-mañ e vez bepred an Impalaerouriezh o klask mougañ pep taol arnod e sell da zieubiñ ur vro da vat, da laverout eo e-keñver politikerezh, armerzh ha sevenadur.

Bet eo savet ar pennadig-mañ diwar daou bennad bet embannet war " Le Monde diplomatique ", niverennoù mir Here 1975 ha miz Meurzh 1978.

L. G.

ROLL ar Pennadoù

Embannet gant AL LIAMM

- Bloavezh 1976 (174-179)

Anvioù an oberourien renket hervez urzh al lizherenneg

(179/887 a dalvez : niverenn 179, pajenn 387)

ABALAN

Tarzhadenn ar marv, 179/387

ANDOUARD (L.)

Un den d'e c'her 179/390

BARZHIG (Ernest air)

Petra a c'hoarvezas en noz-se e Malnoe (s.o Y. Bouessel du Bourg)

Langleiz (s.o. Kervorc'h)

BELLAING (Vefa de)

Ar peskig ruz 178/310

BENEAD

Mari Vorgan 174/059

BIHAN (Per ar)

E koun ur stourmer 175/111

BOTREL (Alan)

Ar bevig 177/240

BOUESSEL du BOURG (Yann)

Ar banniel 177/264

Ar pezh a c'hoarvezas en noz-se e Malnoe ? 179/399

BOURDELLES (Per)

Al levrioù : Une Bretagne libre est-elle viable ?

(Leopold Kohr) 178/366

BOURDINIÈRE (D.)

Skol Summerhill (s.o. A.S. Neill)

CONNOLLY (James)

Goanag Erin (tr. Eflamm gKervilio) 174/042

DIOLIER (Per)

N' eo nemet nr pallenn indezat 174/003

Imbourc'h 177/236

Barzhed arc'hoazh 179/388

DUVAL (Añjela)

Fest-noz 'ti Añjela (s.o. Judikael)

Ar vouezh-se ! va hini ! 178/308

Meskailhez 178/309

GLANNDOUR (Maodez)

Vijeled an Deiz diwezhañ 175/083

GLEVAREG (Yann)

Yezh (Al levrioù : J. Gros - le Trésor du Breton parlé) 176/214

GOW (Yeun ar)

Eñvorennoù	174/012
Eñvorennoù	175/115
Eñvorennoù	176/196
Eñvorennoù	177/253
Eñvorennoù	178/330
Eñvorennoù	179/405
GRUG (Joran ar)	
Digor an nor	176/163
Sevenadur	177/248
GUILLAUMIE (Laorañs)	
Gouennoù loened doñv e Breizh (s.o. Erwan Rouger)	
HEMON (Roparz)	
Ar c'hensonennoù dibenn ger	174/054
Yezh komzet ha yezh skrivet	175/122
Al levrioù : Breuriezh-Vreizh 1790 (Erwan ar Menga)	177/286
Istor Breizh (s.o. La Borderie)	
JUDIKAEL	
Fest-noz "ti Añjela (tr. Añjela Duval)	178/307
KERVELLA (Anna-Gwenola)	
Roll ar pennadoù bet embannet war Al Liamm etre 1966 ha 1975	179/425
KERVELLA (Fransez)	
Paourkaezh brezhoneg	174/061
KERVELLA (Goulven)	
C'hoariva brezhonek	177/280
KERVELLA (Rivanon)	
Taolennig iwerzhonat	175/099
Selaou, den gwenn (s.o. Atahualpa Yupanqui)	
KERVILIO (Eflamm)	
Goanag Brin (s.o. James Connolly)	
Un douelladenn dañjerus (Al levrioù : Leopold Kohr Une Bretagne libre est-elle viable ?)	178/366
KERVORC'H	
Langleiz (tr. Ernest ar Barzhig)	176/173
KIVIJER	
Dreistbevañ	175/100
KLOAREG (Gwion)	
Marvoret	177/238
KONAN (Jakez)	
Tri brezeliad	174/004
KONGAR (Kenan)	
Oc'h ober anaoudegezh gant ar c'hoad-meur	178/318
LA BORDERIE	
Istor Breizh (fr. Roparz Hemon)	174/030
Istor Breizh (tr. Roparz Hemon)	175/137
Istor Breizh (tr. Roparz Hemon)	176/204
Istor Breizh (tr. Roparz Hemon)	177/271
Istor Breizh (tr. Roparz Hemon)	178/357
Istor Breizh (tr. Roparz Hemon)	179/419

LATIMIER (Herve) Roll ar pennadoù bet embannet war Al Liamm etre 1966 ha 1975	179/425
NEILL (A. S.) Skol Summerhill (tr. D. Bourdinière)	174/020
OLIER (Youenn) Al levrioù : Diazerc'h (Guy Etienne)	176/212
PENNEG (Per) Ar bonedoù ruz	175/144
PHILIPPE (Jeff) Boudoù ar c'houmanant lusennek, spontadenn Burtul, ar suner gwad	176/164 177/243
ROUGER (Erwan) Gouennoù loened doñv e Breizh (tr. Laorañs Guillaumie)	175/142
SKEREN (Ren') Trokadenn	177/242
SKOL an EMSAV Yann-Kel	178/365
TILLY (J. M.) Touellerezh dañjerus !	179/423
UHEL (Fañch an) Peronig Teir barvenn aour an diaoul	178/344 179/413
YUPANQUI (Atahualpa) Selaou, den gwenn (tr. Rivanon Kervella)	177/235